



**HAL**  
open science

# THE SPIRIT-MOTHER IN "BUILE SUIBHNE": romance in middle-Irish of the XIIth century

Gilles Boucherit

► **To cite this version:**

Gilles Boucherit. THE SPIRIT-MOTHER IN "BUILE SUIBHNE": romance in middle-Irish of the XIIth century. Humanities and Social Sciences. Université Européenne de Bretagne, 2009. Breton. NNT: . tel-00630524

**HAL Id: tel-00630524**

**<https://theses.hal.science/tel-00630524>**

Submitted on 10 Oct 2011

**HAL** is a multi-disciplinary open access archive for the deposit and dissemination of scientific research documents, whether they are published or not. The documents may come from teaching and research institutions in France or abroad, or from public or private research centers.

L'archive ouverte pluridisciplinaire **HAL**, est destinée au dépôt et à la diffusion de documents scientifiques de niveau recherche, publiés ou non, émanant des établissements d'enseignement et de recherche français ou étrangers, des laboratoires publics ou privés.



**THESE / UNIVERSITÉ RENNES 2**  
*sous le sceau de l'Université européenne de  
Bretagne*

pour obtenir le titre de  
**DOCTEUR DE L'UNIVERSITÉ de RENNES 2**  
*Mention : Celtique*

**Ecole doctorale Arts, Lettres, Langues**

présentée par

**Gilles BOUCHERIT**

Préparée à l'Unité Mixte de recherche  
n°3205 CRBC Rennes

Centre de Recherche Bretonne et Celtique

L'esprit-mère dans  
*Buile Suibhne* :  
romance en moyen-  
irlandais, du XIIe  
siècle

**Thèse soutenue le 18-12-2009**  
devant le jury composé de :

**Pierre-Yves LAMBERT**  
Directeur de recherche, EPHE, Paris

**Hervé LE BIHAN**  
Professeur, Rennes 2

**Claude STERCKX**  
Professeur, Université Libre, Bruxelles

**Francis FAVEREAU**  
Directeur de thèse, Professeur, Rennes 2

**SOUS LE SCEAU DE L'UNIVERSITÉ EUROPÉENNE DE BRETAGNE**

UNIVERSITÉ RENNES 2

École doctorale – Arts, Lettres, Langues

CRBC Rennes

**L'ESPRIT-MÈRE DANS *BUILE SUIBHNE* :  
romance en moyen-irlandais, du XIIe siècle.**

Thèse de Doctorat

Celtique

Volume 1

Présentée par : Gilles BOUCHERIT

Directeur de thèse : Francis FAVEREAU, Professeur, Rennes2

Soutenue le 18 décembre 2009

Jury :

Monsieur Pierre-Yves LAMBERT, Directeur de recherche, Paris (rapporteur)

Monsieur Hervé Le BIHAN, Professeur, Rennes 2 (rapporteur)

Monsieur Claude STERCKX, Professeur, Bruxelles (rapporteur)

**TRUGAREKAAT**  
*REMERCIEMENTS*

Que soient remerciés tous les personnels de la Bibliothèque de l'Université, en particulier les magasiniers de la Bibliothèque Centrale et sa Directrice, et surtout les personnels du service du Prêt Entre Bibliothèques, Claire, Hélène, Laetitia. Merci aussi au Service des Périodiques, du Livre Ancien et de la Numérisation, ainsi qu'à la Directrice du S.C.D.

Trugarekaat a ran evit o divizoù kentelius Gwenaël An Dug ha Gwenole Ar Menn aet o daou da Anaon n'eus ket pell. Ne zisoñjan ket an Ao. Léon Fleuriot nag ar gelennerien all am eus desket kement ganto.

Penaos bezañ hep ober meneg amañ eus studierien ar Gevrenn Geltieg deuet da vezañ an Departamant Brezhoneg ha Keltieg, nag eus Per Denez ?

Trugarez da zanvez klaskerien an Departamant evit o c'hendivizoù deskonius.

Trugarez da Natalia Kirlig evit he skoazell treiñ diwar ar ruseg, ha da Eamon O'Ciosain evit e skoazell diwar an iwerzhoneg.

Anaoudegezh vat am eus d'ar Sioued (Arapahoe) ha da Laurie Ihm o deus lakaet ac'hanon da zizoleiñ o sevenadur. Hepto ne vije ket deuet din ar menoz sevel ul labour e-giz hemañ.



## TAOLENN AN DANVEZIOÙ

<b>TAOLENN AN DANVEZIOÙ .....</b>	<b>4</b>
<b>DIGORADUR.....</b>	<b>9</b>
<b>I - BUILE SUIBHNE .....</b>	<b>28</b>
<i>Diverradur</i> -----	28
<i>Benn</i> -----	33
<i>Mamm Veur, Loen mamm, Loen spered</i> -----	36
<b>II - AR BED SKUTHEK-SIBIRIAN .....</b>	<b>38</b>
<i>Ar Skuthed</i> -----	39
<b>III- AR GUDENN .....</b>	<b>43</b>
<b>IV - AN AROUEZELEZH.....</b>	<b>46</b>
<b>RANN GENTAÑ:.....</b>	<b>55</b>
<b>AN HANTERZOUAR KLEIZ .....</b>	<b>55</b>
<b>1.1 - AN DEN .....</b>	<b>55</b>
A. HOMO HABILIS .....	55
B. HOMO ERECTUS .....	57
C. HOMO SAPIENS .....	60
<i>Mongoloided</i> -----	61
<i>Mousterian</i> -----	62
<b>1.2 - AMERIKA .....</b>	<b>65</b>
A. BERING .....	65
B. BIZON .....	71
<i>Reder touell</i> -----	71
<i>Gwareg seniñ</i> -----	76
<i>Relijion hag hemolc'h</i> -----	82
<i>Merc'hed hag hemolc'hiñ</i> -----	90
<i>Ezkwregiezh</i> -----	93
<b>1.3 - SIBIRIA.....</b>	<b>98</b>
A. TOUNGOUSED.....	98
B. KLANIOÙ HA RELIJION.....	102
<i>Solvez dizanvez</i> -----	103
<i>Les Figurines</i> -----	106
C. HENVAMM .....	109
<i>Togo ha bugady</i> -----	111
<i>Bugady</i> -----	112
<i>Sengi-mama</i> -----	113
<i>Pester</i> -----	115
<i>Venus</i> -----	116
D. BUGADY MUŠUN .....	122
<i>Mammlignezelezh - Tadmignezelezh</i> -----	125
<b>1.4 - SPEREDELEZH .....</b>	<b>129</b>

A. CHAMANIEZH .....	129
<i>Dasparzh al labour</i> -----	130
B. KEMM SOSIAL, KEMM RELIJIEL.....	135
C. HEMOLC’HIÑ .....	141
D. MERC’HED .....	145
<b>1.5 - TOTEMIEZH .....</b>	<b>149</b>
A. BUGADY ENINTYN .....	149
<i>Buga</i> -----	155
B. FER BENN.....	158
<b>1.6 - CHAMANIEZH.....</b>	<b>164</b>
A. AMZERONIEZH .....	164
B. ORIN AR GER “CHAMAN”.....	168
C. CHINA-BAÏKAL .....	173
D. MELEZOUR AREM <i>TOLI ~ E</i> .....	176
K. ABADENN CHAMANIZAÑ .....	179
<i>Animouriezh</i> -----	179
<i>Ar Speredoù</i> -----	181
<i>An eneoù</i> -----	184
<i>Taboulin</i> -----	186
<i>Idakon</i> -----	188
<b>EILVET RANN:.....</b>	<b>194</b>
<b>EURAZIA .....</b>	<b>194</b>
<b>2.1 - STEPINIER .....</b>	<b>194</b>
A. AFANAS'EVO .....	196
<i>Ar Sevenadur</i> -----	196
<i>An dud</i> -----	197
<i>Okunev</i> -----	205
<i>Skeudenn ar c’harv</i> -----	207
<i>Andronovo</i> -----	210
B. EUROPA GOZH .....	212
C. KOURGANIZ .....	222
<i>War-varc’h</i> -----	224
<i>Maesa loened</i> -----	225
<i>Kelteminar</i> -----	227
<i>Botai</i> -----	229
<i>Kreiz Azia</i> -----	233
<i>C’houeorvezh</i> -----	238
<i>Altai-Sayan</i> -----	241
D. KETED .....	246
<i>Yezh</i> -----	246
<i>Marzhoniezh</i> -----	248
<b>2.3 - AREMVEZH .....</b>	<b>250</b>
A. GOBEDOÙ KLOC’H .....	252
<i>Sevenadur</i> -----	255

B. MENOZIADOÙ RELIJIEL .....	259
<i>Karv, buoc'h, marc'h</i> .....	259
<i>Doueez Vamm</i> .....	262
C. UNETICE .....	273
D. KELTED hag INDEZ-IRANIZ .....	277
<i>Ouralianeg pe Finnez-Ougreg</i> .....	287
<i>Tokarianeg, Afanasievo, Repin</i> .....	289
E. KARVEG / EJENEG .....	293
<b>2.4 – MAIKOP .....</b>	<b>298</b>
A. KARVEG MAIKOP .....	298
<i>Svobodnoe</i> .....	303
<i>Gwezenn-vuhez: kengoun Mezopotamia</i> .....	306
<i>Gwezenn-vuhez : hengoun Sibiria</i> .....	314
B. KOURGANIZ MAIKOP .....	322
<i>Orin</i> .....	322
<i>Divroadeg Repin</i> .....	325
<b>2.5 - HITTITED .....</b>	<b>329</b>
A. PALEOLITIK HA NEOLITIK .....	329
B. ARZ .....	340
<i>Ar c'harv, loen totemek</i> .....	343
<i>Karv, ger Indez-Europek</i> .....	356
C. USATOVO .....	359
D. INDEZ-IRANIZ .....	365
E. FINNEZ-UGRIANIZ .....	368
<b>KLOZADUR .....</b>	<b>371</b>
<b>TEIRVET RANN: .....</b>	<b>384</b>
<b>EUROPA .....</b>	<b>384</b>
<b>3.1 - SKANDINAVIA .....</b>	<b>384</b>
A. MURENGRAVADURIOU .....	384
B. KARR TRUNDHOLM .....	393
C. AR VAG .....	400
<i>An arouezelezh</i> .....	400
<i>Karv</i> .....	405
<i>Strettweg</i> .....	408
<b>3.2 - VAL KAMONIKA .....</b>	<b>410</b>
A. MURENGRAVADURIOÙ .....	410
<i>An doare dan-naturelour</i> .....	413
<i>Karv Kamonika</i> .....	422
« <i>Hud ar chase</i> » .....	425
<i>Goularz hag Unetis</i> .....	434
<i>Livenn-gein Aremvezh Europa</i> .....	438
<i>Cernunnos</i> .....	444
<i>Heol ha Karv</i> .....	451

<b>3.3 – LEDENEZ IBERIA .....</b>	<b>458</b>
A. GALISIA .....	458
B. LUZITANIA .....	465
<i>An tarv</i> .....	476
<i>Hemolc’hiñ</i> .....	478
<b>3.4 - KELTED .....</b>	<b>479</b>
<i>Hungaria</i> .....	479
<i>Cernunnos Galia</i> .....	481
<i>Harappa</i> .....	486
<i>Skuthed</i> .....	490
<b>3.5 - INIZI BREIZH VEUR .....</b>	<b>494</b>
A. BREIZH VEUR .....	494
<i>Ragistor</i> .....	494
<i>Uheldirioù bro Skos</i> .....	497
<i>Kaledonia</i> .....	498
B. HEN-GELTED .....	502
<i>An aloubadennoù</i> .....	504
<i>An alouberien</i> .....	508
C. SKOS RAGISTOREL .....	513
D. NEOLITIKED-A ha BEZIOÙ-TREPAS .....	519
<i>Mane Vihan</i> .....	520
<i>Skara Brae</i> .....	527
<i>Epipaleolitik Europa</i> .....	529
<i>Portugal ha Kantabria</i> .....	532
E. PIKTED .....	535
<i>Orin</i> .....	535
<i>Yezh ha poblañs Kaledonia hag Iwerzhon</i> .....	537
<i>Lignezelezh</i> .....	548
<b>3.6 - AZEUL KARV KALEDONIA .....</b>	<b>557</b>
A. CAILLEACH .....	557
<i>Síde</i> .....	560
<i>Sentainne Bérrí</i> .....	563
<i>Dana, Ana</i> .....	566
B. KIRVI an UHELDIRIOÙ .....	572
<i>Mammlignezelezh hag hemolc’hiñ</i> .....	581
C. FINN .....	592
<i>Demne</i> .....	592
<i>Vosegus Silvestris</i> .....	601
<i>Kirvi, gwez, ha Doueez kornek</i> .....	605
<i>Mabinogion</i> .....	608
D. SUIBNE .....	612
<i>Moling</i> .....	616
<i>Kristeniañ</i> .....	621
<i>Atebegezh</i> .....	623
<i>Dál Riata</i> .....	629
<i>Magh Rath</i> .....	630
<i>Cenn Faelad</i> .....	636

<i>Chamaniezh Suibhne</i> .....	637
<i>Ene, eneoù</i> .....	638
<b>KLOZADUR</b> .....	<b>644</b>
<b>RÉSUMÉ</b> .....	<b>649</b>
<b>SOUTENANCE</b> .....	<b>680</b>
<b>LEVRENNADUR</b> .....	<b>690</b>
<b>MENEGER</b> .....	<b>712</b>
<b>TAOLENNOÙ-AMZER</b> .....	<b>734</b>
<b>TAOLENN AR SKEUDENNOÙ</b> .....	<b>740</b>
<b>TAOLENN AR C’HARTENNOÙ</b> .....	<b>742</b>
<b>TAOLENN AR PLANKENNOÙ</b> .....	<b>743</b>
<b>TAOLENN AN TAOLENNOÙ-AMZER</b> .....	<b>744</b>

## DIGORADUR

Deuet on da gregiñ er studiadenn-mañ dre zegouezh peogwir edon e soñj ober war-dro tem an Den Gouez da zigentañ. En ur bleustriñ "Gwerz Skolan", pennad brudet Donatien Laurent e-touez studierien Kevrenn Geltiek Roazhon 2, on bet hentet dre hir-ober da bleustriñ un oberenn hollvrudet all, tenergan Iwerzhoneg an daouzekvet kantved, anvet "Buile Suibhne". N'em eus ket gallet herzel ouzhin da lenn poz seizh hag hanter-kant rannbennad daou-ugent m'eo chomet a-sav ma spered war ar werzenn gentañ: "*A mathair na groidhi-si*" troet gant Joseph O'Keeffe evel-hen: "O mother of this herd<sup>1</sup>".

N'eus ket da souezhiñ diwezhatoc'h, o tont en arbenn d'ur pennad gant Esther Jacobson en un notenn e traoñ ar bajenn n'em eus ket dalc'het koun pelec'h, a oa talbennet evel-hen : "The stag with bird-headed antler tines", hag a rae war-dro karv ar Skuthed, ma'z eo deuet koun din en-dro eus ar werzenn diagent. War am eus desket e veze treset al loen bras ganto gant poentoù kern oc'h echuiñ evel pennoù evned begek hir zoken a-wezhioù. Hag an dud-se a vije deuet eus kreisteiz Sibiria pell zo. Ul levr a-bezh a zo bet savet ganti a-hend-all anvet "The Deer Cult of Ancient Siberia", am eus dizoloet prestik goude hag am eus implijet evel oberenn ziazez a-hed ma labour.

A-bouez lenn hag adlenn diwezhatoc'h eo em eus komprenet e oa ezhomm kregiñ gant an derou rak diwar-benn *Homo Sapiens* eo al labour-mañ en diwezh, hep mont re bell war gil evelato na re hir amzer rak n'eo ket hor pal amañ an denoniezh. Re wir eo evit a sell ouzh ar preder relijiel, da lavaret eo an hini a vez o eren an daou ved gantañ, hemañ hag an hini all. Pa soñjer ervat n'eus ken en Eurazia met meuriadoù Sibiria a zo bet test eus emdroadur an eren-se abaoe an derou, peogwir e vefe eus an dToungoused ar meuriad nemetañ didorr e emdroadur pe dost abaoe dont war wel *Homo sapiens* mongoloek. An temz-amzer eo en deus torret chadenn pobladur *Homo Sapiens* en Europa, ha pa gomzer eus tud Star Carr, Teviec, pe ar Val Kamonika ez eo atav un adpobladur reterel a vez meneget eus ur mare bennak, Maglemöse, Tardenois... nemet evit Kantabria e vefe.

---

<sup>1</sup> A mamm ar bagad-se!

Met un darvoud meur zo c'hoarvezet e-kerz emdroadur poblador Europa hag a zo bet lakaet war ziskouez gant Marija Gimbutas, hini ar Gourganiz an hini eo, da lavaret eo tud o tont eus ar reter c'hoazh, hini ar stepinier ar wezh-mañ. Met a-gent an darvoud-se e oa deuet gounideien eus Anatolia da drevadenniñ an douaroù gant o frierezh mui o zeknikoù nevez da zougen o boued dezho o-unan hep bezañ rediet da vont da hemolc'hiñ. An emdroadur kentañ-se en deus lakaet war e gemend-all skeudennadurioù ar bed relijiel kent en ur reiñ al lec'h uhelañ d'an Doueez Veur aroueziet gant an Douar hiviziken, an Douar-Mamm. Padal er bed kent e veze pourvezet boued d'an hemolc'herien gant ur Spered-Mamm, e stumm loened da chaseal da skouer, en o zouez ar c'harv evel-just, loen-mamm a-douez re all, da lavaret eo a-berzh o Mamm-spered, hini ar meuriad. Siwazh ar bed-se zo aet da get hag ar roudoù kirvi a zo bet kavet war prierezh Europa Gozh a zo hervezomp aspadennoù eus ar bed kent-se goude ar reverzi. Berr-ha-berr, Spered-Mamm an hemolc'herien o pourveziñ loened-mamm dezho a zo bet kemeret he lec'h gant an Doueez Veur emziskouezet en Douar Mamm pourvezerez boued hiviziken. Gant ar Gourganiz enta, anezho mesaerien chatal eo deuet betek Europa Gozh menoz nevez Doue-Meur an Taran o strujañ an douar, emziskouezet e stumm ul loen gourel an tarv o strujañ ar greadoù, met ivez an Douar... Met dre vurzhud e oa gant an Hittited un Doueez-Vamm emziskouezet e stumm ur c'harveg a oa dreist ar re all er penn kentañ avat rak, gant an amzer o tremen, lakaet e voe a du, gourelaet ha digresket da zoueelezh al loened gouez hag ar maezioù. Hogen ne varvas ket koun dreistoni al loen karv e-touez ar werin en Anatolia nag ivez e-touez an Indez-Europiz kentañ rak kavet e vez roudoù kirvi murengravet e Skandinavia, er Val Kamonika, e Galisia, ha zoken e Skos war a greder. N'eo ket al loen e-unan a vern met ar pezh zo aroueziet gantañ. A-hend-all anavezet eo pouez al loen kornek-se e-touez Kelted Iberia, Galia, Skos, Breizh-Veur hag Iwerzhon. Evel e lec'h all eo bet tuet an azeul-se nemet e-touez ar werin m'eo chomet bev a-walc'h da vare ar Romaned evit bezañ stourmet outañ hardi diwezhatoc'h gant an Iliz.

Ni a zo gouest da skrivañ an dra-se trugarez d'ur siell kavet en ur bez e Maikop, amzeriet gant an arkeologour rusian Nekhaev war-dro 3.000 bloaz Kent Krist, hag a ziskouez ur c'harv e-tal ur wezenn. Hervez hon enklask e tlefe ar wezenn-se bezañ ur wezenn-vuhez diouzh an hengoun Sibiriek - gwezenn-vuhez

Mezopotamia o vezañ kentoc'h ur wezenn-luc'h - hag a vije deuet betek amañ adalek sevenadur Afanasievo lakaet da sevel goude divroadur Repin lec'hiet war ar stêr Don, a gasas Europoided da vro ar vMongoloided kerkent ha 3.700 K.K. Muioc'h a ziogeladurioù arkeologel eus Kreisteiz Sibiria a vije deuet mat koulskoude<sup>2</sup>.

Anadurioù eus an azeul-se a vez kavet o peuliatañ hent emdroadur ha divroadurioù an Indez-Europiz adalek Maikop hag Anatolia betek Usatovo ha murengravadurioù Skandinavia, ma weler eo bet kemeret lec'h ar c'harv hag ar vag tamm-ha-tamm gant ar marc'h sterniet ouzh karr an heol hep na vije tu da douiñ e veze stlejet gantañ, dres evel e kêr ar vBouriated ma weler c'hoazh mirc'hi war rodoù sterniet ouzh kirri, a zlefe bezañ o stlejañ un doue bennak. Murengravadurioù ar Val Kamonika ivez hag a vo studiet ganeomp, a ziskouez an daou azeul, karv ha tarv o tont war wel a-gevret e derou ar milved diwezhañ K.K. Hep komz zoken eus Cernunnos, e vo adkavet an daou azeul e Galia degaset eno gant an alouberien Indez-Europek a veze ganto ur yezh keltiek. En Iberia ivez e vo kavet roudoù anat eus an azeul-keltiek-se met e Galisia ergentaou, murengravadurioù c'hoazh a-berzh al Listri-Boued eus an Aremvezh kentañ tro ar bloavezhioù 2.000 K.K. E Breizh-Veur ivez e vo douget azeul ar c'harv ken abred hag ar milved diwezhañ K.K. betek Skos gant meuriadoù evel ar c'hCoritani, Cornovii ha Dumnonii ha betek norzh Iwerzhon diwezhatoc'h dre ar Wigtonshire

A-gent degouezhout betek eno e vo bet ret deomp diskouez pe anadiñ ar pezh a vennomp reiñ da intent. Ni neuze ha studial sevenadur ha speredelezh Toungoused Sibiria, azeul an hendud ne ve ket tu heptañ da c'houzout diouzh an dotemiezh. N'omp ket hep anavezout oberenn vrudet Sigmund Freud : “Totem et tabou<sup>3</sup>“, met ni zo pell eus teorienn zoujadus ar bredelfennerezh. Hon anaoudegezh eus an dotemiezh a zesk deomp ez eo hounnezh damheñvel ouzh azeul an hendud en Aostralia da skouer, a yeas dindan an douar goude aet da vale bro ouzh e stummañ. E Sibiria e oa loenneñvel emziskouezadur an hendud goude dezho dont da vezañ denheñvel bep a nebeut e-ser gant doñvaat al loened diwezhatoc'h.

---

<sup>2</sup> S.o. notenn 134, p. 195.

<sup>3</sup> Interprétation par la psychanalyse de la vie sociale des peuples primitifs



Anisimov a gav dezhañ eo kevatal pe kenstur gwelloc'h preder relijiel an dToungouzed ouzh hini henvroidi Aostralia, met gwir pe get e tiskouez ar re gentañ un emdroadur all. Ouzhpenn an dra-se, arabat disoñjal eo heñvel neuz loen ar vamm varzhel e-touez an dToungoused studiet, ouzh al loen pourvezet dezho ganti, da lavaret eo un eln pe karv gouez<sup>4</sup>, stumm emziskouezet ar vamm an hini eo, hag a van stag ouzh « totem » tolead ar meuriad m'emañ o chom. An hevelebiezh-se a hañval bout anat e Skos ivez, pa skriv MacKay a-zivout an 'douezzed-karv' kozh, emaint o chom er menezioù (kreizenn dotemel ar meuriad<sup>5</sup>) hag-i perc'henn war greadoù kirvi. Met arabat disoñjal orin ar ger *totem*, a vefe a-hervez :

« Le mot totem a été introduit sous la forme *totam*, en 1791, par l'anglais J. Long, qui l'a emprunté aux Peaux-Rouges de l'Amérique du Nord » (Freud, [s.d.], p. 11, n. 2).

Ur peul n'eo ken sanket en douar e-touez an Amerindianed-se avat. Ur peul enta, hag a vije bet gouest *Homo Habilis*<sup>6</sup> da fardañ e gwirionez peogwir e oa evit tailhañ ur wezenn gant ur maen. Padal, n'eo nemet kalz diwezhatoc'h gant ar metal degaset dezho gant alouberien Europa eo bet krog kentidien Norzh Amerika war a lavarar da gizellañ dremmoù war bester.

Met skeudenn emziskouezet goshañ anavezet ar vamm varzhel n'eo ket hini an eln(ez) pe ar c'harv<sup>7</sup>, met hini an tan damesaet<sup>8</sup> bete gouzout, stag ouzh an oaled, ar merc'hed o vezañ mestrezed warnañ hag ivez da heul, e penn azeul ar Vamm (varzhel). N'eus ket tu da rannañ an eil azeul diouzh egile ouzh o lakaat en ur geñver : an tan da skouer a zo da dostaat ouzh an heol, gwregel er penn kentañ e-touez an dToungoused, ouzh an oaled hag ouzh ar Vamm varzhel pourvezerez gouzeri da dud he c'hoskor. Evidomp-ni ez eo an holl azeulioù-se nemet dremmoù disheñvel un hevelep preder pe prantadoù disheñvel un hevelep emdroadur o paotaat tamm-ha-tamm eus *Homo Sapiens* e Sibiria. Ar

---

<sup>4</sup> Michael, 1963, p. 179

<sup>5</sup> « Si, au contraire, les cérémonies relatives à un animal n'ont pas eu lieu aux centres totémiques traditionnels, et à la saison voulue, ils s'attendent à ce que ces animaux ne se montrent pas en aussi grand nombre que d'habitude, demeurent petits et malingres, ou même fassent tout à fait défaut » (Lévy-Bruhl, 1963, p. 154).

<sup>6</sup> Etre -2.5 ha -1.6 Million vloaz zo

<sup>7</sup> Karv amañ a dalvez evit ar par koulz hag evit ar barez (karv hag heizez). Gant an elnez e vez douget banhezioù.

<sup>8</sup> -460.000 bloaz zo

spered-mamm ne c'hell bezañ diskouezet nemet dindan ur stumm bennak : tan en oaled da skouer, evn, struzh, loen pe den diwezhatoc'h. Ar stummoù-se zo liesseurt ha kemmus. Un hen-spered gwregel o en em ziliasaat dre werc'hgeneliezh eo ar Vamm varzhel gouez da L. Ja. Šternberg<sup>9</sup>, a ro buhez d'an hemolc'herien evel an dToungouzed dre bourveziñ loened dezho evit en em vevañ. E stumm un erer pe ur vran da skouer e c'hell ar spered-mamm en em ziskouez pe un tigr na zebtrer ket, pe un arz a save an Ainoued frikoioù gantañ daoust d'al loen-se bezañ e-giz un den evito. Met ul loen gouez eo atav mamm-loen<sup>10</sup> ar meuriad, stag ouzh he zachennad dre ar greizenn dotemel e lec'h m'emañ o chom. Ar greizenn-se e stumm ur peul anvet 'totem' gant kentidi norz Amerika en deus roet e anv d'ar preder relijiel kentañ. Evit ober ul lamm dreist ar c'hantvedoù ez eus tu da lavarout n'emañ ket gwall bell ar skeudenn-se ouzh hini gwezenn nevet ar Gelted da skouer, e kreiz kompezenn pe frankizenn ar meuriad er c'hoadoù, stag ouzh doueelezh ar meuriad met ivez an hollved marteze. Gwir eo an dra-se ivez gant Slaved Rusia:

« Profondément ancré chez les habitants des régions boisées de Russie, le culte de la Grande Déesse se célébrait dans les bosquets sacrés et auprès des sources. Ces pratiques ont survécu en quelques lieux isolés jusqu'au début de la dernière guerre. Les participants célébraient les rites auprès d'un bouleau isolé dans une clairière. L'arbre symbole de la déesse, était revêtu d'une robe de femme; puis on accrochait à l'une des branches une serviette réservée au culte, sur laquelle était brodée en rouge une représentation de la Déesse et de ses attributs. Lorsqu'on ne trouvait pas d'arbre remplissant les conditions requises, c'est une jeune fille, à la chevelure ornée de rameaux de bouleau, qu'on plaçait au centre d'une clairière » (Rice, 1958, p. 190).

Kement-se a aotre ac'hanomp da zenzen neuze e vije bet gwregel orin ar bed e spered *Homo sapiens* marteze ?

Lennet hon eus ivez oberenn vrudet Claude Lévi-Strauss : « La pensée sauvage ». Met pell a vezañ dedennet da zigentañ gant tro spered ar gentidien,

---

<sup>9</sup> Nahodil, O. Mother cult in Siberia, in *Diószegi*, 1978, p. 467

<sup>10</sup> Mother-animal

al levr-se a zo bet savet gant an oberour evit lakaat war sav pe kadarnaat marteze un deorienn anvet « frammaduroniezh » hag a vije gouest da rentañ kont eus preder an dud dre vras, kentidien pe nevezidi n'emañ ket pell tro-spered an eil re diouzh hini ar re all erziwezh. Ur menoz kaer enta, ar preder gouez o vezañ an hini a zo bet gouest da ober e zreuz a-hed ar milvedoù e-touez an holl dud-se hep bezañ gounezet gant ar fonn.

A-fed totemiezh avat ez eo disheñvel ster Lévi-Strauss ar ger diouzh hini Anisimov da skouer. Evit hennezh ez eo an dotemiezh : « un système héréditaire de classification<sup>11</sup> ». Hemañ avat a ra gant<sup>12</sup> « the first religious system of primitive society », ur bomm n'eo ket disheñvel diouzh hini Pierre-Yves Lambert<sup>13</sup> : « Une première forme de pensée religieuse ».

Ni a gav deomp ivez ez eo an dotemiezh « stumm kentañ ur preder relijiel » peogwir ez empleg ar preder ur c'henvell menozioù. Ha gwir eo en dotemiezh e kaver daou dra d'an nebeutañ e-touez re all : un azeul an hendud ouzhpenn ar pezh a vez anvet *totem* a denn da venoziad ar bodlec'h, da lavaret eo al lec'h m'emañ Mamm varzhel pe hen Mamm ar goskoriad, o chom :

« Ces mythes, comme ceux des primitifs actuels, devaient relater les aventures, les hauts faits, et sans doute aussi les « créations » d'êtres supérieurs, mi-humains, mi-animaux. peut-être parfois les considéraient-ils comme des ancêtres ? Ces mythes auraient alors été totémiques » (Lévy-Bruhl, 1963, p. 153).

N'eo ket diaes kompren pegen disheñvel eo an daou zoare danzen menoziad an dotemiezh dre ma pled hini Lévi-Strauss gant an amzer hiziv e-giz pa vije manet digemm tro-spered an dud a-viskoazh, pa bled an eil hini er c'hontrol gant ur menoziad ne anavezer anezhañ hiziv met ar pezh eo deuet da vezañ hervezomp.

---

<sup>11</sup> Lévi-Strauss, 1962, p. 277

<sup>12</sup> Anisimov, A.F. Cosmological concepts, in MICHAEL, Henry, 1963

<sup>13</sup> Lambert, Pierre-Yves in *pré-rapport de jury de thèse* (Boucherit, 2009)

N'omp ket souezhet enta o lenn e levr an antropologour<sup>14</sup> :

« Nous ne croyons pas, expliquait un Osage, que, comme le disent les légendes, nos ancêtres étaient réellement des quadrupèdes, des oiseaux, etc. Ces choses sont seulement *wa-wi'-ku-ska'-ye* (des symboles) de quelque chose de plus haut. » (J.O. Dorsey *I*, p. 396.) » (Lévi-Strauss, 1962, p. 180).

Adkavout a reomp amañ menoziad stumm emziskouezhet ar Vamm varzhel e stumm pevarzroadeged pe evned : dre ma'z eo speredel ar Vamm, ne vez ket gwelet, gant ma n'en em ziskouez ket d'an dud e stumm un heizez evel ma ra er vojenn « the widow's son<sup>15</sup> » da skouer, rak e-giz ma lavar an Osaj, un dra bennak uheloc'h hag arouezel eo, elese ur spered evit ober gant gerioù.

E-barzh levr Lévi-Strauss « La pensée sauvage », e hañval deomp bed an antropologour bezañ unan hep trehont ebet. Meur a wezh e teu ar ger-se<sup>16</sup> war wel :

« Tout sens est justiciable d'un moindre sens, qui lui donne son plus haut sens ; et si cette régression aboutit finalement à reconnaître « une loi contingente dont on peut dire seulement : *c'est ainsi*, et non autrement » (Sartres, p. 128), cette perspective n'a rien d'alarmant pour une pensée que n'angoisse nulle transcendance, fût-ce sous forme larvée » (Ibid., p. 304-305).

Anat deomp n'eo ket trehontus ar bed gwirion, ma ne verzh an den met tud all pe loened, gwez, dremmwelioù, h.a. hep disoñjal ar bed dreistdouarel ne hañval ket bout dreist diraez skiant an dud. Bed an dud hervez an oberour a c'hell bezañ bruzhunet e tresoù renkañ savet diwar enebiezhoù astal<sup>17</sup>, rummoù, elfennoù, niveroù... N'eo ket disheñvel an istor diouzh ar marzhoù : an istorour

---

<sup>14</sup> Lévi-Strauss, 1962, p. 180, n. 1

<sup>15</sup> Campbell, John Francis, 1890, p. 564.

<sup>16</sup> Nemet er ster roet gant J.-P. Sartre d'ar c'heal-mañ, (Lévi-Strauss, 1962, p. 294).

<sup>17</sup> « Il nous semble pourtant que Boas effleurait là une importante vérité. Pour la reconnaître, il aurait suffi que, contrairement à une position souvent affirmée, Boas ne réduisît pas le conte ou le mythe à un simple récit, et qu'il acceptât de rechercher, derrière le discours mythique, le schème fait d'opposition discontinues qui préside à son organisation » (Lévi-Strauss, 1962, p. 165).

eo a sav an istor<sup>18</sup> e sell da ober eus an istorouriezh bod diwezhañ un denoniezh trehontus war dachenn an ni neket hini ar me<sup>19</sup> :

« Il suffit de reconnaître que l’histoire est une méthode à laquelle ne correspond pas un objet distinct, et, par conséquent, de récuser l’équivalence entre la notion d’histoire et celle d’humanité, qu’on prétend nous imposer dans le but inavoué de faire de l’historicité l’ultime refuge d’un humanisme transcendantal : comme si, à la seule condition de renoncer à des moi trop dépourvus de consistance, les hommes pouvaient retrouver, sur le plan du nous, l’illusion de la liberté » (Lévi-Strauss, 1962, pp. 312-313).

N’omp ket chalet gant dinac’h an trehont er “frammaduroniezh”, un deorienn a glask lakaat urzh er rouestl sevenadurel ha lakaat dreist menoz ar preder gouez. Pa ya ken pell ha neuronoù an empenn zoken evit diazezañ e deorienn dalvoudus ez eomp a-du gant Claude Lévi-Strauss. Eno n’emañ ket an dalc’h, met hon hendud, hag edo o vevañ milvedoù ha milvedoù diagent, a grede e oa trehontel o huñvreoù, ha ma ne vezomp ket ken egisto abaoe, arabat e vefe ober dezho meizañ egistomp hiziv. Kompren a reomp ivez eo gwall zistreset a-wezhioù stad sevenadurel hiziv diskennidi an dotemourien gentañ. Ret eo bezañ gouest da adsevel o reizhiad menozioù kentañ e kement ma’z eus tu hen ober en ur zoujañ d’o c’hredoni en trehont, petra bennak n’eo ket gwir bremañ ken evidomp. Kement-se ne vir ket a ziroudañ an elfennoù a ya da sevel framm ar vojenn.

Evit ober anaoudegezh gant an dToungouzed hon eus lennet gant gounid ivez oberenn vrudet Sergeï Mikhaïlovich Shirokogoroff : « Psychomental complex of the Tungus » m’hon eus dizoloet ur preder skiantel ouzh hon tostaat da dro-spered wirion an dud-se a dremenomp-ni hiziv marteze a-gevret gant tud all da unan eus gwriziennoù pellañ hendud a zlefe dont da vezañ kalz diwezhatoc’h

---

<sup>18</sup> « Chaque épisode d’une révolution ou d’une guerre se résout en une multitude de mouvements psychiques et individuels ; chacun de ses mouvements traduits des évolutions inconscientes, et celles-ci se résolvent en phénomènes cérébraux, hormonaux, ou nerveux, dont les références sont elles-mêmes d’ordre physique ou chimique... Par conséquent, le fait historique n’est pas plus donné que les autres ; c’est l’historien, ou l’agent du devenir historique, qui le constitue par abstraction, et comme sous la menace d’une régression à l’infini » (Ibid. p. 306).

<sup>19</sup> Ibid., p. 312-313

d'an Aremvezh Europek, Kelted. Bezet-a-vezo gwirheñvel e chome roudoù eus amzer ar speredoù e-touez ar gKelted - diaes eo komz evit an holl - d'ar mare m'hon eus graet anaoudegezh ganto etre divroadeg Yamna hag an aremvezh e derou an eilvet milved K.K. N'eo ket dic'hallus e vije an doueelezh ur menoziad "skianteloc'h" o tont da heul hini ar speredoù<sup>20</sup>:

« Je ne dirai pas donc pas, comme l'a fait Durkheim dans son célèbre ouvrage, que les sociétés australiennes nous présentent les « formes élémentaires de la vie religieuse », mais plutôt que l'ensemble de croyances et pratiques qui a pris corps dans leurs mythes et leurs cérémonies constitue une « pré-religion ». [...]. je ne donnerai donc pas le nom de religion à l'ensemble de croyances et de cérémonies, exprimé par les mythes, qui a été décrit et analysé ci-dessus. C'est seulement quand certains éléments de ce complexe s'affaiblissent et disparaissent, quand de nouveaux éléments y prennent place et se développent, qu'une religion proprement dite se forme et s'établit » (Lévy-Bruhl, 1963, pp. 216-217).

E sevenadur Yamna e kaver Kourganiz ha tud Afanasievo mesk-divesk, anezho kent-Indez-Europiz e mesk gant Mongoloided Serovo<sup>21</sup> a gavomp furoc'h menel hep bezañ resisoc'h war o fenn. Ne hañval ket bout diwir stagañ menoziad an doueelezh ouzh ar gounid-douar peogwir adalek ar mare-se e vez gounezet o boued gant an dud. Skiantekoc'h eo an ober-se eget hemolc'hiñ loened gouez, a vez o tont en-dro bep bloaz pe get a-berzh ar Vamm varzhel. Arabat ankouaat ez eo c'hoarvezet ar maenvezhadur (kemm etre hemolc'hiñ ha gounid) er reter nesañ evit ar wezh kentañ da vare an Natoufiz (tro Jericho) etre 12.000 ha 8.500 K.K., abalamour d'an temz-amzer hervez lod :

« Jusque là chasseur, pêcheur, cueilleur, bref prédateur, le voici métamorphosé en producteur, maître d'une alimentation qu'il peut multiplier à sa guise. Pour en arriver là, il s'est d'abord sédentarisé, a fondé les premiers villages, a décidé de ne plus se séparer de ses ancêtres, symboles de l'appropriation d'un

---

<sup>20</sup> « Puis, ces ancêtres-animaux eux-mêmes tendent à changer de caractère, à prendre une personnalité de traits plus ou moins accusés, à devenir enfin, avec le temps, des « divinités » » (Lévy-Bruhl, 1963, p. 216).

<sup>21</sup> Bobrov, 1988, p.30.

territoire et justification de l'emprise de la communauté sur cet espace » (Guilaine, Coppens, 2007, p. 14).

Adalek ar mare-se ez eus tu da c'houlakaat dont war wel an doueelezh(ioù)<sup>22</sup> o'n em ledañ tamm-ha-tamm betek Europa gozh m'edo sevenadurioù diwezhañ hemolc'herien (Maglemöviz, Tarnedoaziz) o vont da get evel e Star Carr, Hoedic, Teviac, Skandinavia h.a., heuliet e Breizh da skouer daoust ma n'eo ket kevrenn en Europa gozh Marija Gimbutas, gant prantad maen-azeul Mane Vihan da skouer.

An *totem* evel kreizenn enta a oa evel ur bodlec'h evit Mamm varzhel ar c'hlan. Ur gudenn gant ar speredoù a oa pa veze digempouezet buhez pemdeziek an dud. Ar c'hleñved da skouer a zo displeget evel drougemell ur spered e korf an den.... Hevelep menoz hag ur viruz o poreañ an hini eo.

Klemm a ra Shirokogoroff eus denoniourien<sup>23</sup> pa glaskont sevel reizhiadoù sosial a live gant emdroadur an Den ha luziañ diabeg kudenn peuzplaen an dotemiezh<sup>24</sup>:

« The zeal of ethnographers brought them to the unintentional distortion of facts actually recorded in order to suit them to the theories » (Shirokogoroff, 1982, p. 10).

Erziwezh, hep azeul an hendud, ned eo an totem met un tamm koad sanket en douar. N'eus na kevrinelezh, nag enevuhezouriezh, na hud zoken gant ar gentidien. Ar re-se n'int nemet gerioù implijet gant an denoniourien a zo kevrenn e kemplez bredspered ar c'hornog na welont nemet neuz diavaez ar bodlec'hioù hep klask kompren peurliesañ an dalvoudegezh o deus evit an dud a vennont studial.

---

<sup>22</sup> Daoust ha totemiezh a veze kent ar maenvezhadur en toleadoù-se, n'omp ket evit lavarout. Hendud avat, douetañs ebet.

<sup>23</sup> evel E. Durkheim da skouer

<sup>24</sup> Shirokogoroff, 1982, p. 10

Met evit klozañ gant poent-mañ hon digoradur, penaos bezañ hep ober anv eus Mircéa Éliade, evit degas da goun un dra a oa bet displeget mat tre gant Van Gennep e 1903. Brudet eo bet ar ger “chamanisme” trugarez da oberour al levr brudet : “Le chamanisme et les techniques archaïques de l’extase”, ma ranker kompren ez eo ar chamaniezh un teknik kozh d’ar goursav, e-touez re all. Gant ar chaman(ez) ez eus teknikoù evit dont a-benn da c’hoursevel na vije chamaniezh ebet hepto, met estreget an teknikoù-se ha kalz muioc’h egeto eo perzh ar chaman er meuriad. An termen “chamaniezh” eo a vez dalc’het hiviziken evit envel an teknikoù goursevel a c’heller merzout un tammig e pep lec’h war an douar abaoe an neolitik kredapl pe abretoc’h. Bezañ m’eo bet testeniekat ar ger “chaman” e eil hanterenn ar milved diwezhañ kent hon amzer, evit ur perzh sosial resis er meuriad, e kavomp diaes ober gant ar ger-se evit an neolitik pe zoken ar paleolitik, ma vez implijet kemblac’h gwezh a vez gant “sorser”. Da ziwall zo d’ober koulskoude rak un dermenadurezh war var ez eo diaes dezhi goloñ un dachennad a zo war glask bout skiantel. Evit ar mare enta, ar ger “chaman” eo a ra berzh, trugarez da istorour brudet ar relijionoù. Evelato evit a sell ouzhimp, pa vennomp embregañ teknikoù “goursevel” dre vras, e kavomp-ni gwelloc’h ober gant an termen “goursaver(ez)” eget an hini “chaman(ez)”.

Evel displeget gant L. Krader<sup>25</sup> e kaver daou verzadur e-touez ar skiantourien o deus studiet ar chamaniezh : da gentañ ar re a gav dezho eo dasparzhet ar chamaniezh war ar bed holl evel un darvoudenn relijiel glassel, d’an eil ar re a gav dezho en tu hont d’an darvoudenn relijiel e talv ar chamaniezh dre he elfennoù preder, naturour kentidik pe kent-skiantel, ha mezegel. Ar gudenn o vezañ hini ster ar ger *relijion* a c’holo un darn hepken eus chamaniezh ar vBouriated da skouer met a dalvez da vat evit ar relijionoù hollvedel: Boudaegezh, Kristeniezh hag Islam<sup>26</sup>. Ne zispleg ket Krader e tere kentoc’h ar relijionoù hollvedel-se ouzh ur gevredigezh gant stad eget ouzh unan n’he deus

---

<sup>25</sup> Shamanism : theory and history in Buryat society / L. Krader, in *Shamanism in Siberia* / Ed. by V. Diószegi and M. Hoppal. Budapest: Akadémiai Kiadó, 1978.

<sup>26</sup> Diószegi, 1978, p. 210.



biskoazh tizhet al live stadel, dres evel an drouizelezh evit kemer ur skouer anavezet :

« In earlier times he [ar chaman] was the law-giver, the religious leader, the expression of the laws of the universe and of the social laws, even their legislator (Dioszegi, 1978, p. 185). Met [with the Russian administration] the shaman gradually lost his role as sustainer of the cosmic and moral order during the course of the 19th century (Ibid., p. 188).

Da zigentañ e ranker gouzout n'eo ket bet studiet ar chamaniezh kent ha m'eo bet dizoloet er 17vet kantved. Da lavaret eo, daoust ha ma 'z eus testenioù koshoc'h, ne anavezer stumm bev ebet hag a vije koshoc'h eget ar 17vet kantved, hag evit a sell ouzh chamaniezh hiziv, e ranker gouzout lakaat kemm etre ar pezh a zo nevez hag a pezh a zo hengounel enno :

« Durkheim had projected the polarity of the sacred and profane onto a screen of synchronic time, without taking into account the period of historic development of the society in question. [...]. The role of the Buryat shaman changed from one period to the next » (Dioszegi, 1978, p. 218).

Istor an diorren el labour-mañ a grog gant an Den a vo studiet ganeomp adalek *Homo Habilis* betek *Homo Sapiens* (a c'hell bezañ troet evel an “Den Arnodet”). Peogwir ez eus bet kavet darempred etre doareoù hemolc'hiñ Indianed Norzh Amerika ha tresadennoù war speurinier mougevioù Kornog Europa ar paleolitik, e vo klasket kompren donoc'h ar speurtresoù diwar an doareoù tapout bizoned. Ha pa ouzer e teu an Indianed-se eus Sibiria dre strizhmor Bering, ez eeün e vo studiet an dToungouzed betek derou ar chamaniezh omp deuet a-benn da amzeriadañ en eil hanterenn eus ar milved kentañ Kent Hon Amzer. Sede evit ar rann gentañ.

An eil rann eus hol labour a zle kalz da Marija Gimbutas an arkeologourez Lituaniek (1991-1994) arbennigourez war sevenadurioù Maenvezh hag Aremvezh “Europa Gozh”, un termen a zo bet goveliet ganti. Dediet eo d'an Indez-Europiz da lavaret eo kejadenn ar gKourganiz eus stepinier Azia gant

gounidien Europa Gozh. Dre ar ger-se e venner er penn-kentañ (7<sup>vet</sup> milved K.K.) al lodenn eus al ledenez Balkaniek trevadennet gant gounideien Anatolia. Met an darvoud bras en degouezh-se diouzh savboent hor studi eo divroadeg Repin a vastañ ac’hanomp gant un diskoulm skiantel da gudenn orin siell bez Maikop, a c’hoari enta mard eo gwir a c’houlakaomp, perzh an hanterenn etre sevenadur sibiriek Afanas’evo hag hini indez-europek an Hittited e Kappadokia, o skourrañ diwar Kourganiz Maikop n’emañ ket gwall bell eus Repin war ar stêr Don. Ur wezh degemeret hon kavaden n’eus mui met heuliañ astennidigezh an Indez-Europiz war ar gartenn bonnet gant skeudennoù kirvi a zo kevrenn el lidoù beziañ, adalek an Añforennoù Boul (3.400-3.200 K.K.), ar Priaj Kordennet pe Bouc’hal Emgann (2.600-2.200 K.K.) etre ar Menez Karpat ha kompezennoù Norzh Europa, Yamna (3.300-2.500 K.K.), ar c’hKevioù-Beziañ (2.800-2.200 K.K.), Usatovo (3.300-2.800 K.K.) hag Usatovo/Babino (1650-1600 K.K.) e Krimea ma n’eo ket disheñvel arouezelezh ar bezioù diouzh hini Skandinavia pe ar Val Kamonika :

« The bull and stag were the chief animals in burial rites » (Gimbutas, 1965, p. 498).

Ma esever skeudennoù kirvi Europa Gozh treset war bri-poazh, omp deuet a-benn da wiriañ e-kerzh hor studiadenn e tiskouez ar skeudennoù kirvi en Europa abaoe sevenadur kourganiz Maikop-Novosvobodnaya (3.850/3350-2550 K.K.). An diskoulm poellek nemetañ hon eus kavet eo hini divroadeg Repin-Afanasievo (3.700/3.500 – 2.400 K.K.) o eren an daou ved Europek hag Aziiek, hag a vo empleget ennañ Mongoloided mesk-ha-mesk gant Europoided. Dleout a rafe bezañ an darvoud-se penn abeg d’hon azeul karv diwezhatoc’h en Europa gant an Hittited da gregiñ ganti, seul vui ma n’eo ket an divroadeg-se diere diouzh hini Yamna (3.100 – 3.000 K.K.) ma vezo o c’horin an henrannyezhoù Indez-Europek. Kement-se kent disrann an Indez-Iraniz gant sevenadur Sintashta (2.200-2.000 K.K.) a verko dibenn ar gKent-Indez-Europiz.

Tolead sevenadur Afanasievo a vo penn orin d’ar Skuthed gwir eo, hogen kalz diwezhatoc’h goude Andronovo (1.800-1.200 K.K.) hag ivez mare Kantreerien

Gentañ kreisteiz Sibiria er c'hentañ milved K.K. gant o skeudennoù kirvi mil anavezet oc'h echuiñ alies o foentoù-banhez gant pennoù evned. Un tres n'eo ket hep dec'hervel poz nav hag hanterkant ranbennad daou ugent *Buile Suibhne*:

« A dhoim do[g]ni an fogharán  
chugum tar an nglenn,  
maith an t-ionadh foradhán (?)  
i mullach do bhenn.

Thou stag that comest lowing  
to me across the glen,  
pleasant is the place for seats  
on the top of thy antler-points » (O'Keeffe, 1913, p. 80-81).

Un dispred bennak teorikel hervezomp a zo neozh etre amzeriad siell vMaikop/Novosvobodnaya hag hini livadurioù Karakol e kreisteiz Sibiria, a zo amzeriadet gant Esther Jacobson etre dibenn an trivet milved ha derou an eilvet hini. Un dispred ha n'eo ket didrec'hus marteze bezañ ma pad an epipaleolitik e Sibiria betek kreiz an trivet milved K.K. Ret eo lavarout memestra eo an eln loen meur an neolitik<sup>27</sup> ha bete-vremañ, nebeutoc'h a girvi a zo bet kavet er prantad arkeologel-se eget pelloc'h en eneolitik, koueorvezh<sup>28</sup> pe aremvezh kentañ. Displegañ a ra houmañ e veze divanhez ar skeudennoù eln war vein, da lavaret eo mammoù, betek an aremvezh ma voe lakaet banhezioù dezho<sup>29</sup> ha diskouezet a-gevret gant kirvi ha chatal, hag ivez bagoù (Jacobson, 1993, p. 96). Bezañ istor poblador kreisteiz sibiria, ez eus tu da venel war amzivin da c'hortoz gouzout muioc'h dreist-holl pa ouzer an dra-mañ :

« La période entre le paléolithique supérieur (14e-12e mill.) et la culture d'Afanasevo (3e mill.) reste un tache blanche » (Sher, 1994, p. IV).

---

<sup>27</sup> Serovo, 4vet-3vet milved K.K., gouez da Okladnikov (Jacobson, 1993, p. 91). Lod a lavar ivez epipaleolitik.

<sup>28</sup> Kitoy, eil hanterenn an 3vet-derou an 2vet milved K.K. (Ibid.)

<sup>29</sup> Koulskoude, an elnez a zoug banhezioù evel an tad-elne met bihanoc'h eget e re.



**Skeudenn 1: Marija Gimbutas by Kerbstone 52, at the back of Newgrange, Co. Meath, Ireland, in September 1989**

[[http://en.wikipedia.org/wiki/Marija\\_Gimbutas](http://en.wikipedia.org/wiki/Marija_Gimbutas)]

Koulzadet eo bet teknik ar siell granek tro 3.300 K.K. e kreisteiz Mezopotamia,<sup>30</sup> ha siell granek Novosvobodnaya adalek 3.000 K.K. gant Nekhaev, n'hell ket bezañ gwall yaouankoc'h hervezañ rak bresk eo danvez an dra.

Evit bezañ e-tailh da studial an Hittited, eo ret dastum un anaoudegezh bennak eus an Indez-Europiz. Studiet eo bet ganeomp enta geneliezh ar gKourganiz

---

<sup>30</sup> Moorey, 1994, p. 103-104

adalek sevenadur Keltiminar(sk) o aroueziañ an tremen eus ar gounid-douar d'ar mesañ loened hag ivez mont war varc'h, goude klasket tennañ hor mad eus an tabutoù a zo bet a-zivout al loen-pouezus-se evit Kourganiz Kreiz Azia. War-lerc'h ar bazenn-mañ ez eus tu da dremen da oadvezhioù ar metal, da gregiñ gant ar C'houeorvezh. D'ar mare-se hon eus tapet skouer ar gKeted ur meuriad Sibiriek<sup>31</sup>, evit reiñ da intent o dije gallet seurt tud kemer perzh e divroadeg Repin met eus Karakol da vMaikop ar wezh-mañ, da lavaret eo tud hag a zo bet ur Vamm-loen e-kerz kredennoù o meuriad hag ul loen-mamm par da hini an dToungoused. Gouzout a reer ouzhpenn o deus an dud-se kemeret perzh en eil divroadeg tramor war-du Amerika tro 8.000 K.K. Anat eo koulskoude n'eus ket tu da lavarout pe meuriad resis en dije ermaeziet darn eus e izili etrezek ar c'hornog, met ne c'heller ket ken arvariñ a-vremañ war un hevelep degouezh.

Daleet e vo ur pennadig war menoziad an Doueez-Vamm, a denn da zaou ved, an hini Indez-Europek dre implij menoziad an doueelezh (gourel), hag hini an neolitik gant implij menoziad ar vammelezh (doueel). Kement hag anadiñ ne vefe hennezh hervez doare met adstumm dianavez menoziad Mamm varzhel an hemolc'herien, bev mat met azasaet da ezhommoù ar sevenadurioù nevez<sup>32</sup> difluket dre emdroadur teknikoù nevez dizoloet gant labour hag ijin an dud. Hag a zo ken, tadlignezelezh Skuthed ar stepinier a zo gwriziennet en ul loen marzhel a oa gwregel er penn kentañ. Kement ha ken bihan ma ne dalvez ket pikol reizh gwirion al loen, kontrol d'e zalvoudegezh marzhel e spered an dud. Ur ger a vo lavaret diwar-benn an Indez-Iraniz hag imbourc'hiñ roudenn ar Finned-Ougriz rak an dud-se a oa empleget en ur sevenadur Sibiriek met adalek koulzad Andronovo dreist-holl.

Da heul studiadenn an holl dachennoù-se ne chomo mui deomp da ensellout met Europa Indez-Europek, da gregiñ gant ar murengravadurioù m'eo bet kavet skeudennoù kirvi e Skandinavia, er Val Kamonika hag ivez e Galisia ha Kaledonia marteze. N'eo ket tres ar skeudennoù ez omp dedennet ganto met dreist-holl an talvoud int tremenet da daolennañ. An talvoud-se a sav diwar diskuliadurioù all evel ar vag, an heol, ar marc'h, ar c'harr... a zo kevrenn eus

---

<sup>31</sup> A zo hiziv en arvar gant e yezh. S.O. [<http://pandora.cii.wvu.edu/vajda/default.htm>]

<sup>32</sup> S.O. maen azeul Mane Vihan da skouer.

ar sevenadur studiet amañ e Skandinavia, hag a c'heller kavout e-kichen ar c'harv. Da eo diwall ar sevenadurioù amezek all war an douar pe an amzer rak darn eus an arouezioù a c'hell bezañ levezonet ganto ivez. War brioù Skandinavia e weler tem ar c'harv o vont da get ha bezañ kemeret e lec'h gant arouezioù all da heul emdroadur ar gevredigezh, kontrol d'ar Val Kamonika en em gav pelloc'h diouzh kavell an Indez-Europiz, ma tiskouez ar c'harv diwezhatoc'h met ma talc'ho d'e lec'h ha ma emdroio e Cernunnos da heul red ar sevenadur keltiek eno, gouez da Anati. Gant ar Gelted e vo kavet an daou azeul, karv ha tarv o kenvevañ adalek derou ar milved kentañ er Val Kamonika, met ivez e Galia hag e ledenez Iberia. Deuet ar mare enta da dreñ hor selloù ouzh ar Gelted hag adkavout ar perzh bras c'hoariet ganto e Aremvezh Europa. Un dra vat eo kregiñ gant Hungaria rak eno, goude divroadeg Yamna ez eus tu d'o digenveziñ a-douez meuriadoù all da zont, evel an Italiked da skouer. Met ivez ar Gobedoù-Kloc'h heuliet gant al Listri-Boued tro ar bloavezhioù 2.000 K.K. en Iwerzhon, a verko dibenn an neolitik ha derou ar C'houeorvezh pe an Aremvezh. Ar re-mañ a vo kavet roudoù anezho e Galisia ma kaver tresoù kirvi war speurinier, ha marteze ivez e Kaledonia. Kement-se a ro deomp ur skeudenn ledan a-walc'h ha kendrec'hus ivez eus talvoudegezh hol lavar. Met n'eus ket anv evidomp amañ da ober kregiñ azeul ar c'harv en Inizi Breizh-Veur gant al Listri-Boued, peogwir eo re danav an anadurioù met en enep, hag un dra gaer eo, kadarnaet e vez ganto gwirheñvelder an azeul da zont. Hervezomp e teuio an azeul-se da gKaledonia gant an tri meuriad kentañ anavezet gant arbennigourien, kent bout divroet en Iwerzhon an Hanternoz ha pelloc'h zoken da heul : Coritani, Dumnoni, Cornovi." "Coritani" a roio "Cruthin" kerkoulz ha "Priteni" diwezhatoc'h hervez an deorienn wellañ ganeomp. Met aze n'emañ ket an dalc'h evit a sell ouzh azeul ar c'harv. Evelato, e ranker plegañ d'an holl redioù arkeologel, denoniel ha yezhoniel evit kaout spi tostaat ouzh ar pezh zo c'hoarvezet e gwir. Ar gefridi-se a glaskimp seveniñ en ur ober war-dro Kaledonia hag ar bPikted, o yezh(où) hag o reizhiad dimeziñ, kent dont a-benn d'an azeul-karv e-unan. D'ar mare-se en em gavimp e-tal ur rouestlad hengounioù disheñvel a vo ezhomm diluziñ ma vennomp adkavout poell neudenn hon azeul-karv. Aloubet eo bet Kaledonia er 5vet-6vet kantved H.A. gant Dál Riadiz Iwerzhon hag o azeul *Cailleach*, hag a c'hellfe bezañ kenstrolladur un hengoun kentidien

eus an Neolitik gant un hengoun keltiek eus eil aloubadenn an enezenn tro 600 K.K., tostoc'h enta ouzh mesaerien-gounidien eget ouzh hemolc'herien. Met arabat ankouaat el luziadell-se aspadennoù burzhudus hengoun dre gomz hemolc'herien Iwerzhon bev c'hoazh hag entoueziet moarvat e kelc'h Finn, anezhañ un aridennad kontadennoù advuhezekaet gant skribed ar sevenadur nevez Kristen, elese lakaet dre skrid ganto da heul tañva tud ha mennadoù galloudeien ar mare, an haroz Finn ha kempouezañ war un dro sked Cuchulainn, haroz an Uladiz.

Hervez a zo bet studiet ganeomp e vije anat a-walc'h pouez bras skourr pennañ Uí Néilled an Hanternoz, a zo Colum Cille kar dezho gant e gengevredad manatioù. Goude torret emglev Druim Cett gant an Dál Riadiz o kevrediñ gant an Dál nAraidi, ez a da fall an traoù hag an digempouez a dro a-du gant kostezenn Padraig daoust dezhañ, hag Iliz Roma. Tanager Buile Suibhne a gont en un doare plijus ha gant ur spered a unvaniezh hollvedel istor koll kostezenn Uladiz Dál Riata en emgann Moira, ha kristenidigezh Suibhne, tudenn faltaziet stag ouzh Suibhne mab Colman Cuar lazhet en emgann, lesanvet *Fer benn*, a varv er stad a c'hras etre daouarn Moling, goude dianzavet dre empleg e gredenn gozh e Mamm varzhel ar c'harv.

Setu displeget e berr gomzoù danvez hon tezenn, ne oa ket splann en hor spered pa vezemp o kregiñ ganti. N'eo nemet oc'h echuiñ eo deuet deomp splann a-walc'h ster istor prantad-se hor c'hendirvi eus Iwerzhon ha Skos.

## KUDENNEREZH

Al labour emamp o vont da gas da benn a zo diwar-benn dremm ar Spered Mamm e 'Buile Suibhne', un tengeran krenn-iwerzhoneg aozet etre '1200 ha 1500', embannet evit ar wezh-kentañ gant J.G. O'Keeffe e 1913 : « *buile suibhne* (The frenzy of Suibhne), being The adventures of Suibhne Geilt, a middle- Irish romance », adembannet gant ur rakskrid nevez gant J.F. Nagy e 1996.



## I - BUILE SUIBHNE

Kontañ a ra follentez ‘Suibhne’ a zo meneget er Book of Aicill aozet kerkent hag an navet pe an dekvet kantved d’ar muiañ.

### *Diverradur*

Sant Ronan Finn (the Fair), Abad of Druim Ineasclainn (Drumiskin, Co. Louth)’ a zo o vevennañ un takad evit e iliz ‘Cell Luinne in Dal Araidhe’ a oa Suibhne roue warnañ. En ur barrad kounnar, daoust d’e wreg a sach anezhañ dre e vantell, noazh-bev eta, e taol e dour al lenn nepell, levr ur c’hloareg yaouank edo o kanañ e salmoù gantañ, ha kas Ronan er maez. Antronoz all eo degaset anterin al levr-salmoù da Ronan gant un dourgi. Milliget eo Suibhne gant Ronan.

Keloù brezel a oa etre ‘Domnall son of Aodh, and Congal Claon son of Scannlan’. Da goulz an emgann e vale Suibhne war-du Ronan gant e eizh psalmour hag e laz unan anezho gant un taol goaf. Goude-se e toull kloc’h ar c’hloareg gant un taol dared. Milliget eo gant ar c’hloareg.

Treiñ a ra Suibhne da foll gant ar braouac’hus m’eo trouz an emgann hag e nij kuit eus an dachenn evel ul labous :

« Ral eo ma stokfe e dreid ouzh an douar met pa rae ne hejfe ket glizh ar c’heotenn, skañv ha mibin ma oa e gammedoù » (O’Keeffe, 1913, p. 15).

betek Ros Beraigh, in Glenn Earcain, en un ivinenn. Kavet e vo aze gant un den kar dezhañ Aongus the Stout, met Suibhne a nij kuit betek Cell Riagain e Tir Conaill ma klud war wezenn gozh an iliz e lec’h m’eo bet gwelet gant Domnall, mab Aedh ha tud e arme. Pa glev Suibhne you hag hemolc’h al lu bras e nij etrezek an oabl betek Glen Bolcain, ma kave bod an dud foll goude o bloavezh follentez. Diwezhatoc’h ez a da Cluan Cille war lez Tir Conaill ha Tir Boghaine. Mont a ra betek Snamh dha En ar Shannon, Cluain Boirenn hiziv. E-pad seizh bloaz eo bet Suibhne o kantren dre Iwerzhon betek Glen Bolcain

p'emañ Loingseachan, un den kar, o kousket en un ti distro skuizh ma 'z eo o redek war e lerc'h. Mont a ra Suibhne da vilin Loingseachan diwallet gant ur vaouez a ro un tamm dezhañ, met ne deu ket a-benn Loingseachan d'e dizhout ar wezh-mañ daoust d'e droioù gwidre. Mont a ra Suibhne da welout e wreg Eorann. Komz a reont ken na deuas en-dro arme Guaire, gwaz nevez Eorann. Suibhne a nij kuit da ivinenn iliz Ros Bearaigh e-lec'h e oa en em gavet goude Magh Rath. Anavezet eo gant maouez erenach an iliz met nijal a ra betek Ros Ercain. Noblañs Dal Araidhe a garg Loingseachan da dapout Suibhne. Kontañ a ra hennezh dezhañ eo marv e familh. Kouezhañ a ra Suibhne eus e wezenn gant ar glac'har. Tapet eo. Staget eo ken na vo deuet e skiant vat dezhañ. D'ar mare-se eo lezet dieub en e gambr gant maouez ar vilin a gomz gantañ pa ne dlefe ket. Goulenn a ra da Suibhne diskouez dezhi penaos e lamme ha mont d'e heul. Setu en em gavont e Glenn na nEachtach in Fiodh Gaibhle. Pa glev Suibhne ur c'harv o vlej al e lavar ur son [§ 40]. Goude-se e lamm Suibhne eus tornaod Dun Sobairce en Ulster o klask tec'hout diouzh ar vaouez en em lazhe er mor en ur glask mont d'e heul. Kuitañ a ra Suibhne Dal Araidhe en aon da vezañ lazhet rak marv maouez ar vilin. Mont a ra da Ros Comain e Connacht. Ur vaouez a laer e veler digantañ. Kantren a ra ur pennad amzer en Iwerzhon ha lavarout ur son kent dezhañ mont da Breizh Veur ma kej en ur c'hoad gant Ealladhan, un diskiant all aon gantañ bezañ tapet gant tud ar roue. Pep hini a gont d'egile penaos eo deuet da vezañ en e stad. Dont a reont da vezañ mignoned, met Ealladhan a dle mont da Eas Dubhthaigh m'eo bet tonket dezhañ mervel. Distreiñ a ra Suibhne en Ulster da Magh Line. Goude lavaret ur son all ez a Suibhne da Glen Bolcain ma kej gant ur follez a dec'h dirakañ. Distreiñ a ra da welout Eorann e wreg a ra fae warnañ. Goude lavaret ur son ez a da Benn Boirche er c'hreisteiz, ma n'em blij ket. Mont a ra da Bile Tiobradain e Connaught ma ra erc'h. Kanañ a ra e boanioù. Mennet eo da zistreiñ da Dal Araidhe ha diskuliet eo ar menoz-se da Ronan a villig Suibhne dirak Doue a glev anezhañ rak war e hent e Sliabh Fuaid e teu war wel da Suibhne klopennoù euzhus ouzh e heskinañ. Ur son a lavar ha chom a ra ur bloavezh e Fiodh Gaibhle. Diwezhatoc'h e Druim Iarainn e Connaught e tebr beler hag e ev dour an iliz. Dilaouen eo ar c'hloareg anezhi en deus e welet. Mont a ra da All Fharannain e Tir Fhiachrach Mhuaide a blij dezhañ kenañ. Erfin ez a Suibhne da Teach Moling. Hañval a ra Suibhne da vezañ awenet

gant Doue, a anavez Moling hep bezañ e welet a-raok Anv a vez graet etrezo eus marv Suibhne. Moling a zisklaer da Suibhne emañ o vont da echuiñ e vuhez amañ. Kemenn a ra ma vo servijet dezhañ ur c'hortozenn bemdez da goulz ar gousperoù gant Muirghil gwreg Mongan mêsaer-moc'h Moling : en un toull er beuzel graet gant seul e droad betek an ufern e ver laezh fresk evit Suibhne. C'hoar Mongan a ro da grediñ d'e vreur ez a e wreg da welout ur gwaz all. Gant an oaz-kren emañ hennezh outi ha gant un taol goaf en e vruched e torr e gein da Suibhne. (Pe e vefe kouezhet Suibhne war pik korn ur c'harv bet lakaet aze gant ar mêsaer evit noazhañ dezhañ.). Kement-se a vo merzet gant Enna Mac Bracain edo o seniñ ar c'hloc'h hag a ya da gemenn da Moling. War e dremenvan emañ Suibhne pa ro Moling anv Puñs ar Foll da bez Suibhne. Goude-se e sav Suibhne eus e fallaenn ha ez eo ambrouget gant Moling en iliz ma ya e spered d'an neñv.

Echu gant abadennoù Suibhne mab Colman Cuar, roue Dal Araidhe.

Diverradur J.G. O'keeffe a grog diouzhtu gant prantad an istor goude emgann Magh Rath, a-raok distreiñ d'ar skrid, rannbennad dre rannbennad (p. [ix]). Evitañ neuze, abadennoù Suibhne a grog gant e follentez e-giz pa ne vije eus Ronan met un dudenn a eil renk. En e verradur c'hoazh e tispieg fraezh un dra bennak all e-giz pa vije neuze pep gwellañ an istor er varzhoneg pe er son:

« Then follows the longest and, in many respects, the most interesting poem in the story ; it opens with a description of the trees of Ireland, after which Suibhne recounts his own sorrows and sufferings<sup>33</sup> » (O'Keeffe, 1913/1996, p. xi).

A-zivout aozadur Buile Suibhne dre vras, e lavar J.G. O'Keeffe kement-mañ:

« As a work of art it must be admitted that the Buile Suibhne is marred by a certain lack of unity. [...] occasionally in the verse one is brought face to face with sudden and violent changes of subject. The long poem (§ 40) which opens with a description of the trees of Ireland furnishes a good instance of this lack

---

<sup>33</sup> Lakaet hon eus ar varzhoneg en he hed er stagadennoù.

of artistic coherence. It is possible that this may be due to an incomplete text, or it may be the author's way of representing the incoherent mind of the madman » (Ibid., p. xxxvi-xxxvii).

Ne grog ket ar rannbennad 40 gant deskrivañ gwez Iwerzhon avat. Kregiñ hag echuiñ a ra en resis ar varzhoneg gant ar memes div werzenn:

« 'O little stag, [thou] little bleating one,  
O melodious little clamourer, » (Ibid., p. 63)

Ma 'z eus digendalc'h er varzhoneg eta ne c'heller ket komz eus diampartiz an oberour, a lak e holl varregezh da ginnig deomp ul loen nevez : ar c'harv. Gant ampartiz c'hoazh e oa bet lakaet endeo gant an oberour skeudenn ur bagad kirvi kevatal gant hini ur bagad kadourien er pajennoù kentañ e-pad an emgann :

« Thereafter, when both battle-hosts had met, the vast army on both sides roared in the manner of a herd of stags so that they raised on high three mighty shouts » (Ibid., p. 15).

Hiziv e vefe komzet eus skeudennoù danemskiant, a ra ma ve degemeret e gwir an traoù gant an dud hep gouzout dezho : anavezet int. N'eur ket souezhet eta o lenn eus ar c'harv, met ne ouzer ket (mui) perak. Aozet mat eo an tenergan. Diouzhtu war-lerc'h bezañ em lakaet da lammat diwar atiz eben Loingseachan, e vez klevet gant Suibhne you hag hemolc'h un engroez war lez ar c'hoad<sup>34</sup> hag e kav dezhañ ez eo lu bras Ui Faelin o tont evit dialañ Oilill Cedach, roue an Ui Fealain, bet lazhet gantañ e emgann Magh Rath. Peurzorn eo (ha derou ar chaseal). Ar gwidre droukveskañ brezel gant chase n'eo ket diaes da lakaat war anv Suibhne rak evit e skiant vat da vezañ deuet dezhañ endro e chom diasur e yec'hed. En abeg da se e oa bet difennet d'ar geben komz dezhañ evel-just. Ha setu penaos ez eo kinniget deomp ar c'harv en danevell evit ar wezh kentañ e ser gant Suibhne. Disoñjet e vo al loen diouzhtu war-

---

<sup>34</sup> O'Keeffe, 1913, p. 63.

lerc'h, koulz lavarout, nemet e pennad diwezhañ an tenergan, pa vo ouzhpennet deomp an displegatur pouezus-mañ :

« (Some say that it is the point of a deer's horn the herd had placed under him in the spot where he used to take his drink out of the cowdung, that he fell on it and so met his death). » (Ibid., p. 145).

An digempouez a ziskouez eo bet staget ar rannbennad 40 d'an istor a-ratozh-kaer e-giz pa vije bet penn-abeg an istor a-bezh. Digempenn a-walc'h eo ar varzhoneg he unan hag a grog gwir eo met goude ar poz kentañ, gant deskrivañ gwez, ha distreiñ war walleurioù Suibhne. Er son-mañ evit an eil gwezh e vez meneget ul loen-korn er poz-mañ :

« O little fawn, O little long-legged one,  
I was able to catch thee  
riding upon thee  
from one peak to another.» (Ibid., p. 69).

Gouest eo bet Suibhne Geilt da dizhout ur c'harvig ha da redek a gern da gern war e geiñ. Un tremenadur gwirheñvel eo peogwir e oar al lenner eo gouest Suibhne da vont war gein al loenig dre herrder pe dre lammat. Evit ar wezh kentañ e lenner pevar arouez pennañ eus azeul ar c'harv bodet en ur poz hepken: Suibhne a-chaoliad war ur menn-karvez o vont a lein da lein menezioù ar vro. N'eo ket ur skeudennoù a zo aes da lakaat en un destenn hep souezhiñ al lenner, diskredik emichañs. Goude deskrivañ c'hoazh al lec'hioù m'eo en em gavet ha tabutal un tammig gant ar geben a-zivout mont war varc'h ar wezh-mañ:

« O hag, O round-headed one, (?)  
Wilt thou go on a steed?' » (Ibid., p. 73),

e tistro Suibhne ur wezh ouzhpenn da istor e walleurioù a dremen en natur gant ar gwez hag al loened.

*Benn*

A-greiz-holl a-raok dibenn ar son e kaver pevar poz n'eus enno follentez  
ebet daoust dezho bout digomprenus a-walc'h, hag a ro deomp zoken anv gour  
Suibhne : "Fer Benn"

« O mother of this herd,  
thy coat has become grey,  
there is no stag after thee  
without two score antler-points.

Greater than the material for a little cloak  
thy head has turned grey ;  
if I were on each little point,  
there would be a pointlet on every point.

Thou stag that comest lowing  
to me across the glen,  
pleasant is the place for seats  
on the top of thy antler-points.

I am Suibhne, a poor suppliant,  
swiftly do I race across the glen ;  
that is not my lawful name,  
rather is it Fer benn.<sup>1</sup> »

<sup>1</sup> i.e. man of the peaks.

Ar ger *Benn* a zo troet e saozneg gant gerioù ken disheñvel ha "peaks, horns,  
antler-points, points":

« *Damh dá fhiched benn* (of twice twenty peaks) (Ibid., p. 79)

*Gach damh ina freislighe* (each stag at rest

*A mullach na mbenn* on the summit of the peaks) (Ibid.)

*Ag dúnadh a mbenn* (closing round their horns) (?) (Ibid.)

*Damh Bairni dá bhenn* (the stag of Bairenn of two peaks) (Ibid.)

*Gan dá fhichead benn* (without two score antler-points) (Ibid.)

*Beinnini ar gach mbenn.* (there would be a pointlet on every point) (Ibid., p. 81)

*I mullach do bhenn.* (on the top of thy antler-points) (Ibid.)

*I mullach na mbend.* (on the top of the mountains) (Ibid.)

*A ngabhlaibh do bhenn* (in the branches of thy crests.) » (Ibid.)

Troet eo *glenn* e saozneg gant ar ger ‘peak’:

« **PEAK** (pīk), sb.<sup>2</sup> 1530. [A later equiv. of PIKE sb.<sup>1</sup>]

II. Later form of PIKE sb.<sup>2</sup> **a.** The pointed top of a mountain; a mountain or hill having a pointed summit, or of conical form 1634. **b.** fig. highest point, summit 1784. **c.** *transf.* The pointed top of anything 1840. (Little; Onions, 1970, p. 1453).

**PIKE**, sb.<sup>2</sup> [...] **i.** The earlier form of PEAK sb.<sup>2</sup>, the conical summit of a mountain. (...) **b.** Hence, Any mountain peak; ... (Ibid., p. 1500).

En Iwerzhoneg avat n’eus kudenn ebet:

(**a**) *Mountain, crag, peak, point; crest, summit* (Quin, 1998, p. 70).

« **benn**, f. th. En –ā (aussi th. En –o-, peut-être ancien neutre) « sommet, pointe montagnaise ; pignon, pinacle, créneau ; corne ; pointe (de lance) ; crête d’une coiffure) », nom. Sg. *benn* gl. cornu Sg. 63 a 6, ... , Ériu XIII 27. 7, “objet pointu” Ériu IV 92 § 4 ... » (Vendryes, Bachellery, Lambert, 1980, pp. B-35, B-36).

Troet mat eo *benn* gant PEAK war-bouez an arliv-ster ‘korn’ na gaver ket e gwir e saozneg, daoust ma talv ivez evit ‘the pointed top of anything’. Anv kadarn Suibhne *Fer Benn*, troet ‘man of the peaks’, a ro da soñjal kentoc’h e ‘den ar c’hernioù,’ bezañ ma tremen Suibhne kalz eus e amzer en istor o vont a

gern da gern, ur wezh war gein ur c’harvig zoken, eget e hini ‘den ar pikoù-korn’ hag a c’hellfe bezañ ivez ster e anv. Pa seller ouzh an tri foz a gaver un tammig uheloc’h e komprenner ez eo mesket e troidigezh *benn* ster meur a c’her : gwezh ‘kern’, gwezh ‘pik (-korn)’ ha gwezh all ‘kornioù’:

« I love not the horn-blowing  
so boldly I hear :  
sweeter to me the belling of a stag  
of twice twenty peaks. / *Benn* (pik)

There is the material of a plough-team<sup>35</sup>  
from glen to glen :  
each stag at rest  
on the summit of the peaks. / *na mbenn* (kern)

Though many are my stags  
from glen to glen,  
not often is a ploughman’s hand  
closing round their horns. ( ?) / *a mbenn* (kornioù) » (O’Keeffe, 1913, p. 79).

Jubenniñ ar pozioù-mañ n’eo ket aes da ober. J.G. O’Keeffe e-unan a chom en entremar a-wezhioù. War gern pep menez ez eus ur c’harv e daou gorn ugent pik. Kirvi a-walc’h evit sevel ur sternad-arat, Suibhne o vezañ perc’henn warno, hag a chom diere : daoust ma ‘z eo niverus a-walc’h loened Suibhne evit ur sternad-arat, n’eus arer ebet evit sparlañ al loened en traoniennoù (not often is a ploughman’s hand / closing round their horns.(?)). Diouzhtu war-lerc’h e komz eus mamm ur bagad (brasoc’h eo eget ur sternad-arat), hag un tammig pelloc’h c’hoazh e lavar pegen plijus e kav dezhañ bezañ azezet war-benn pikoù-korn ur c’harv :

« pleasant is the place for seats  
on the top of thy antler-points. » (Ibid., p. 81).

---

<sup>35</sup> Amañ e c’heller soñjal en enebiezh etre an daou sevenadur hemolc’hiñ ha gounid-douar.



Meur a zegouezh a zo:

- Suibhne war gein ur c’harvig o vont a gern da gern
- Kirvi o zaou gorn bep a ugent pik, kement hag ur sternad arat, pep hini anezho o chom war ur gern
- Ur bagad kirvi o daou ugent pik o vont da heul ar vamm
- Suibhne (Fer Benn) an ‘den-labous’ pintet war bik pe bikoù-korn kirvi.
- (Mervel a ra Suibhne en ur gouezhañ war gorn ur stag)

Soñjal a ra deomp eta ez eo poellek dalc’her koun eus ster daoubennek ar ger *benn*, a zo splannoc’h c’hoazh e kembraek eget en Iwerzhoneg :

« [*benn*] Correspond au mgall. *bann* m. ou f. “somet, corne, pointe, coin, direction, pied (métrique)”, frequent comme nom de lieu (fém. *Y Fan, Bannau Brycheiniog*), dérivé mgall. *bannawc* « cornu, élevé », mod. *bannog, ychen bannawc* « bœufs cornus » B. Tal. 21. 2, bret. *bann* « éminence, hauteur » (dans les noms de lieux) — pour vbret. *bann* v. à part sous *bind* ; » (Vendryes, Bachellery, Lambert, 1980, p. B-36).

“Fer Benn” troet e saozneg ‘man of the peaks’ a dalvez eta kerkoulz ‘den ar c’hernioù’ ha ‘den ar c’hornioù’. Ul lenner iwerzhonegour a gompreno kentoc’h ‘den ar c’hernioù’. Ar ger-se a aotre heñvelekadur an daou ster “kern“ ha “korn“, ken pouezus e marzhoniezh Sibiria ha Kaledonia e-giz ma vo gwelet a-hed al labour-mañ.

*Mamm Veur, Loen mamm, Loen spered*

E-giz m’hon eus gwelet eo puilh ar skeudennoù hag an arouezioù e Buile Suibhne, daoust ma n’eo ket anat deomp ken ar ster anezho. Aet eo kuit Suibhne eus an dachenn emgann evel un evn en avel. Redek a rae a bikern da bikern war gein ur menn-karv. Kresket eo pluñv da Suibne, a nij evel ul labous. War bep pikern ez eus ur c’harv e vrankoù div wezh ugent beg. Perc’henn eo Suibne war darn eus al loened, petra bennak ez eus ur vamm d’ar bagad a-bezh.

Azezañ a ra war begoù brankoù ur c’harv o vusellat. Kentoc’h eget « Suibhne » e anv-lezenn, e ro deomp Suibne e anv, « Fer benn » (man of the peaks). Ar skeudenn-se eo e vimp dedennet ganti dreist-holl.

E pennad Esther Jacobson anvet: “ar c’harv e vanhez<sup>36</sup> o fennoù-evn<sup>37</sup>,” met ivez en he levr anvet : “The deer goddess of Ancient Siberia” hon eus kavet un alc’hwez d’an arouezioù-se:

« [...] it is useful to reconsider one of the most unusual images from the Scytho-Siberian world, that of the deer with bird-headed antler tines » (Jacobson, 1993, p. 240).

Ne ouzer ket mat eus pelec’h e teu ar skeudenn-se a zo da bed kanteour Sibiria forzh penaos, hag a zave d’ur wezenn vuhez ma klud war he brankoù evned an eneoù zo da zistreiñ d’ar bed. Ar skeudenn-se a zo un adskeudennadur eus ur marzh hen eus ar c’harv evel Mamm Veur ar bed Sibirian<sup>38</sup>, legadet d’ar bed Skuthez-Sibirian.

A-raok mont pelloc’h eo ret termeniñ resis pelec’h emaoamp ha pegoulz. Da lavaret eo petra eo ar bed Skuthez-Sibirian ?

---

<sup>36</sup> BANHEZ [‘bānhez-s] (h-br.) g. *Andouiller* (kmg banhydd, gw- heizes) (Favereau, 1992, p. 54).


HEIZES /-EZ [‘hejəz-s], a-w. [‘ejɛz-s] b. –ed, -i *biche*, (*fig. pers. vive... Go...*), (C. Id., Greg. Id. *sans faon*, h-br. –hed, kmg hydd stag b. –es) : me ‘n em droio en heizes er c’hoadoù don (kan. Elena, Ph...) (Ibid., p. 330).

<sup>37</sup> The Stag with Bird-headed Antler Tines : a Study in Image Transformation and Meaning. (Jacobson, 1984)

<sup>38</sup> Jacobson, 1993, pp. 240-241.

## II - AR BED SKUTHEK-SIBIRIAN

“Apart from the concrete people of the northern Black Sea area, classical authors often use that term to refer to all the inhabitants of the extensive steppe belt stretching from the Danube to the Yenisei, and also of some forest-steppe and mountainous regions. There were considerable similarities between the modes of life of the tribes inhabiting that territory, and, although the Greeks knew the names of many of these tribes (Sauromatae, Issedones, Massagetae, etc.), they called them all Scythae, using the name of the people they knew best” (Piotrovsky et al., 1988, p. 102).



### Kartenn 1 : Parzh ledanaat ar Skuthed

Clio la muse de l'histoire

[<http://www.cliolamuse.com/spip.php?rubrique28>]

Tu a zo termeniñ gwelloc'h ar bed-se ouzh e zispartiañ e div lodenn:

« Les recherches récemment menées distinguent les Scythes des steppes herbeuses du nord de la mer Noire (Scythes royaux), de ceux des steppes plus boisées au nord » (Millotte, Thévenin, 1988, p. 30).

Esther Jacobson a zispleg deomp c'hoazh :

« The Early Nomads were the South Siberian branch of the Scytho-Siberian culture. In the first millenium B.C., this culture controlled the vast steppe and mountainous regions between China to the east, Persia and Greece to the west, and north to the edge of the Siberian taiga » (Jacobson, 1993, p. 5).

Ober a ra enta an oberourez en he levr gant 'Kantreerien gentañ' evit envel ar Skuthez-Sibirianiz lec'hiet e su Siberia hag ul lodenn eus norz Mongolia, da lavaret eo war-dro Pazyryk war ar gartenn dindan Tuva (skeud. 1), etre an eizhvet hag ar c'hentañ kantved K.K.<sup>39</sup>.

#### *Ar Skuthed*

« The most western of the Early Nomads' relatives and those most familiar to the modern observer were the Scythians. They are believed to have arrived in the lands of the Caucasus, the Crimea, and the rich steppe north of the Black Sea by the sixth century B.C » (Jacobson, 1993, p. 6).

Tro ar mare-se o deus ar Skuthed graet anaoudegezh gant ar Gelted, peogwir eo bet kavet traezoù arkeologel o tont eus sevenadur Hallstatt betek Tcherkassy e kreiz Ukraina hiziv, tro ar 7vet-6vet kantved K.K.<sup>40</sup>. Mont a rae levezon Hallstatt ken pell hag ar C'hoban pe Oseti hiziv, ereet m'edo Kaokazia hag Europa gant stepenoù Ukraina o hediñ ar Mor Du. En traezoù arkeologel dizoloet n'eus dave ebet d'ar c'harv pe da varzhoniezh ebet. N'eus nemet jarloù-bez pe spilhennoù-alc'hwez eus sevenadur bras ha galloudus an houarnvezh e kreiz Europa bet o varrañ betek eno. Darempredoù all ha tostoc'h a vo kalz diwezhatoc'h etre ar Gelted hag ar Skuthed tro ar 4vet pe an 3vet kantved K.K., met un istor all eo.

Piv a oa c'hoazh ar Skuthed ?

---


<sup>39</sup> Jacobson, 1993, p. 5

<sup>40</sup> Makarenko, 1930, p. 43

« Both contemporaneous representations and craniological evidence indicate that the Scythians and Sakas were Europoid in racial stock ; it is generally assumed, also, that they were Iranian in language » (Ibid., p. 12).

Met evit an elfenn Europoidel bezañ kreñv a-walc'h e-touez ar Gantrierien Abred, n'eus ket tu da devel war an elfenn Vongoloidel ken kreñv all:

« These studies indicate that during the Scytho-Siberian period, Mongoloid peoples spread to the west and mixed with the dominant Europoid type in South Siberia and Central Asia (...) » (Ibid., p. 13).



## Kartenn 2 : Skuthed ar c'hornog (Skuthia)

Clio la muse de l'histoire

[<http://www.cliolamuse.com/spip.php?rubrique28>]

South Siberian in origin, the Early Nomads emerged out of a succession of cultural traditions which reached back through the Bronze Age to the Neolithic period” (Ibid.).

Pouezus eo notenniñ pa vint anavezet gant an istorourien a skriv ez eus bet bevet a-ziagent prantadoù ragistorel ganto a gonto kalz evit displegañ darn eus o ferzhioù dedennus evit hor studiadenn:

« Les Scythes, ..., parcourent les steppes du Nord de l’Asie centrale qui s’étendent sans discontinuer du bas Danube à l’Altaï et au Tarim. Ils y sont identifiés dès le XIIe siècle av. J.-C. et laissèrent par la suite de grands tumulus funéraires, les kourganes, contenant un riche mobilier. Leur civilisation semble issue de multiples brassages de petites populations, très mobiles à l’origine, dans un environnement relativement homogène, où certains animaux, comme le cerf et le cheval, jouent un rôle primordial. De langue iranienne, ils menaient, selon les groupes, une vie de nomades, de semi-nomades éleveurs ou de sédentaires » (Plumet, 2004, p. 23).

Gwelet hon eus eo arouezelezh ar c’harv e bennoù evn e Buile Suibhne heñvel a-walc’h ouzh an hini anavezet mat gant kantreerien edo o vevañ e kreisteiz Sibiria e derou ar milved kentañ K.K. ha neuze e aodoù ar Mor Du adalek ar 6vet kantved K.K. Hor c’hudenn a vo neuze klask dizoleiñ penaos eo deuet an arouezelezh-se betek Inizi Breizh Veur.

Gwelet hon eus e komzfe ar Skuthed ur yezh iranek. Gouzout a reer eo aet da netra skourr mamm ar yezhoù Kent-Indez-Europek adalek 2.500 K.K.<sup>41</sup>, hag eo rannet ar gKent-Indez-Europiz e Indez-Iraniz ha Indez-Europiz tro ar bloavezhioù 2.000-1.800 K.K. Gouzout a reomp ivez eo deuet ar Skuthed e-maez eus sevenadur Andronovo. Kreisteiz Sibiria enta a hañval bout lec’h boutin an arouezelezh<sup>42</sup>. Evit Pazyryk avat arabat mont da glask koshoc’h eget ar c’hwec’hvet kantved K.K.<sup>43</sup>.


---

<sup>41</sup> Anthony, 2007, p. 58


<sup>42</sup> Evel ma vo diskouezet n’eus ezhomm ebet ijinañ e vije bet an arouezelezh kent-Indez-Europek.

<sup>43</sup> Jacobson, 1993, p. 5





**Skeudenn 2: Horse headdress from Pazyryk**  
Cairn n°1. After Gryaznov, 1950  
(Jacobson, 1984, Pl. 4)



**Skeudenn 3: skeudennadur ur c'harv war c'horre ur c'hlaouier-biroù eus Akjutintsy, Ukraine. Hervez E.H. Minns, 1913**  
(Ibid., Pl. 11)

### III- AR GUDENN

Implijet e vo pennadoù ganeomp a-hed al labour-mañ un tammig evel traezoù arkeologel. Hor mammennoù e vo ar pennadoù-se, sed dre vras hon hentenn mont en-dro a-hed al labour-mañ.

Roudoù kentañ an arouezelezh a zo bet kavet engravet war speurinier :

« E Sibiria ez eo kizellet ha livet an tevinier gant skeudennoù a ro testeni da hengounioù marzhoniel ken kozh ha milvedoù kent. Ar skeudennoù-se a verk ivez kemmoù hag emdroadurioù sevenadur ar stepinier, an taiga hag an toundra » (Jacobson, 1993, p. 1).

An dedennus amañ eo ar skeudennoù engravet war tevennoù stêrioù Sibiria :

« Gwelet hag adwelet e vez ar skeudennoù c'hoazh e arz ar sevenadur Skuthez-Siberian a oa mestr war geoteier ha koadoù-geoteier Eurasia er milved kentañ Kent Hon Amzer » (Ibid., p. 2).

Displegañ ra evidomp E. Jacobson elfennoù ar goulenn emañ o vont da studial :

« Dougen a ra ar skeudennoù un arouezelezh a ro testeni eus un amzervezh resis met disteuler a ra ivez tremen an amzer hag emdroadur ar marzh. E kreiz hag andon ar reizhad kosmek e tiskouez un dremm ispisial—gwregel ha karv-heñvel, a gemm he neuz tamm-ha-tamm da heul dislavar levezon ar sevenadurioù nevez evit em ober outo hag o zeuziñ » (Ibid., pp. 2-3).

Ne vo ket ankounac'het ganeomp e toug pep traezenn arkeologel gwiskadoù sevenadurioù disheñvel kalzennet e-doug ar c'hantvedoù :

« En he enkorfadur koshañ, edo e stumm un eln (“moose“ er Bed Nevez) ramzel ha divanhez. E-doug kantvedoù ha milvedoù zoken, he stumm ma veze diskouezet a gemmas d'ul loen banhezek ha neuze d'ur stumm banhezek met



sinkretel kenañ, betek fallaen erfin he neuz er c'hantvedoù diwezhañ hon amzervezh. Pa oa bet ar c'harv andon vuhez ha varv, setu ma teuas war wel un dremm wregel, gadoriet hag enoret; he ivez a gollas he beli, evelato, ha goustadik e tigriskas he galloud hag he gwir-dreist<sup>44</sup> ».

Ar c'harv a-benn ar fin n'eo met hanterour ur chadenn arouezioù a zo deuet betek ennomp hag a dap betek neolitik Sibiria, met ar sevenadur a zere da arouez diwezhañ ar chadenn-se eo hini an hemolc'hiñ:

« Ne oa ket ar c'harv ar skeudenn heverk nemeti e arz ar gantreerien gentañ. Met, he-unan pe evel lod eus daveennoù loenneñvel luziet, ez eo skeudenn ar c'harv an alc'hwez diwezhañ evit kompren sevenadur ar gantreerien gentañ hag hini ar bed ledanoc'h Skuthez-Sibirian.

Skeudenn ar c'harv-erc'h a oa gwriziennet don e ragistor su Sibiria, o tistreiñ ken pell ha prantad an neolitik. Pa teuas ar gantreerien gentañ da vezañ hêr d'an tres, e oa c'hoarvezet dezhañ dija kemmoù bras skeudennel hag arouezel. Bout ma oa difluket en un ekonomiezh hemolc'hiñ stag d'ar c'hoadeier hag en em c'hraet ouzh redioù mesañ un aremvezh nevez, e voe entoueziet e ekonomiezh an oadvezh-houarn kentañ stag ouzh ar chatal<sup>45</sup>. Ar gantreerien gentañ a oa skourr su Sibirian ar sevenadur Skuthez-Sibirian<sup>46</sup> ».

Hemolc'hiñ mesket gant mesañ-loened enta, setu a roio ur c'hendeuzadur disheñvel diouzh hini ar Gelted pergen, a kemmesko-i gant ar sevenadurioù kent a vo kavet ganto war an trevadennoù nevez. Met distroomp d'ar Skuthed :

« Having emerged within a forest-bound hunting economy and having adapted to the requirements of a new Bronze Age pastoralism, the motif was finally incorporated into the stock dependent economy of the Early Iron Age » (Jacobson, 1993, p. 4).

---

<sup>44</sup> Jacobson, 1993, p. 3.

<sup>45</sup> Idem, p. 4

<sup>46</sup> Idem, p. 5.



**Skeudenn 4: Stag. Altay, Pazyryk II**  
(Clio La muse de l'histoire)

#### IV - AN AROUEZELEZH

Evit kregiñ ganti e c'heller tennañ gounid c'hoazh eus sav-poent Esther Jacobson ha mont donoc'h e dezrann an dremm gwregel hag karv-heñvel o tiskouez er reizhiad kosmek :

« Whatever its source, this image apparently carried an immediately comprehended meaning across the nomadic world. In an earlier study I suggested that the image of the deer, its antlers reminiscent of tree branches and its head and antler-tines transformed into birds, must have referred to a tree of life<sup>47</sup> » (Jacobson, 1993, p. 240).

Gwelout a reer n'eo ket skeudenn ar c'harv e vanhez o fennoù-evn a gaver e Buile Suibhne, unan nevez he arouezelezh met unan gozh o vont war zigresk en ur gemm e-touez ar Skuthed :

« The deer with bird-headed antler tines was a relatively late restatement of an idea already undergoing change. [...], the explicit nature of the transformation of antlers into bird heads, of deer heads into great beaked heads, and the evocative twisting of the body of the deer suggest an emerging concern for explicit representation. [...] The increasingly detailed rendition of that process points ultimately to the weakening of archaic myth and the concept of the deer as Great Mother within the Scytho-Siberian world » (Ibid., p. 240-241).

Bed ar Skuthed a zo ur bed o vont da get eta, met aze e ranker evezhiañ un dra all : un darempred a zo etre ar skeudenniñ ha nerzh ar marzh. Seul vuioc'h e kresk munodoù ar skeudennaouiñ seul wanoc'h e teu ar marzh da vezañ.

Er bed hag en amzer-se eta, emañ mojenn gozh ha menoziad an Uhel-Vamm o tisteraat en ur dreuzneuziañ. Etre daou ved emamp e gwirionez gant arouezioù ar bed Skuthez-Sibirian : hini kozh an hemolc'hiñ, hag hini nevez gounid-douar ar Mor Kreiz. Hag etre an daou sevenadur-se emañ hini ar mesañ, da

---

<sup>47</sup> The placement of such images on either side of the central axis of the man [from Pazyryk2] surely reaffirmed the location of that cyclical process of change at the center, which is ultimately signalled by the antlers of the animals, and at that center are the antler-trees in which the birds of souls to be returned to the world are perched.

lavaret eo chaseourien a oar gounid douar a-walc'h evit mesañ loened, rak evel-just, hep gounid-douar evit bouetañ loened doñv, deñved, chatal h.a., n'eus mesañ ebet. Ar Skuthed evel an holl gantreourien edo o vevañ dindan kumuniezhoù gounideien. D'ar mare pa int deuet da vezañ annezourien int bet trec'het<sup>48</sup>.

Evit krennañ al lodenn-se eus hon enklask e adkemeromp teir lodenn levr Esther Jacobson, "The Deer Goddess of Ancient Siberia". An hengoun gentañ a zo hini « prantad Neolitik Sibiria » a skeudenn ar barez-eln, divanhez peurliesañ e-pad an neolitik eta etre ar pevare milved betek an trived hini pe derou an eilved milved K.K. zoken, etre al lenn Baïkal hag ar stêr Tom<sup>49</sup>. Kevredet eo an eln gant ar vag a zo stag d'an tremen goude ar marv, ar barez eln o vezañ aspedet da geñver an obidoù<sup>50</sup>. E kreiz buhez an dud edo an eln, un andon vuhez evit loened all hag evit an dud, un tammig e-giz ur *magna mater*, a oa stag alies d'ar bagoù a oa gouest da vont war dour ar sterioù a gase d'an norzh, da bed yen ar re varv, hag a gase ivez da douaroù tomm ha pinvidik ar c'hreisteiz dindan an heol, e doare ma oa deuet an eln da vezañ stag ouzh menoz ar bevañs nevesaet.



### **Skeudenn 5: Elned**

PRIRODA Association [<http://www.priroda.net/schoolclub/rock.html>]

---

<sup>48</sup> S.o. "Clio la muse de l'histoire" (perso.wanadoo.fr)

<sup>49</sup> Jacobson, 1993, p. 91

<sup>50</sup> Ibid., p. 92.

An eil hengoun, anezhi “skeudennadur denheñvel an Aeneolitik hag an Aremvezh<sup>51</sup> abred” a ziskouez tresoù denheñvel lakaet ouzhpenn diwezhatoc’h war an tevinier, gant maskloù o kuzhat tresoù o dremm, o neuzioù-tal ivez gant kerniel pe koefoù-pluñv, buhezus, paouezet tenn, oadet etre an Neolitik hag an Aremvezh, a-gevret gant tresoù chatal o c’hornioù divent, o arat an douar kevret gant ul loen disheñvel all, a ziskouez ensiladurioù ur sevenadur nevez o tont eus ar Reter tostañ adalek an Neolitik betek an Aremvezh, pe oadvezh an Houarn zoken, pe Houarnvezh.



**Skeudenn 6: Den e benn bladenn war loen kornek**

unesco.org 2005 © ICOMOS

N’eus mui bag nag eln met stummoù-beziañ denheñvel hanter-evn, hanter-ejen da vezañ aspedet da vare ar marv. Kentoc’h eget en un Doue Heol degaset gant an Indez-Europiz, pe an Indez-Iraniz dre gultur Andronovo, e ro kement-se da soñjal en un Douez Vamm andon struj an douar hag ar greadoù, gouez da Esther Jacobson a gav dezhi e c’hellfe bezañ kevreet ar pennoù bann-heoliet gant an arat, hag e vefent stag ouzh ur prantad rak Indez-Europek, d.l.e. dibenn

---

<sup>51</sup> E lec’h “Oadvezh an Arem”

an trede pe derou an eil milved Kent Krist. Kement-se a ziskouez darempredoù etre sevenadur mesañ europoided Afanasevo hag hini mongoloided Okunev, a oa diazezet da gentañ war hemolc’hiñ loened gouez (arzh, eln, karv(-erc’h)), ha loened feur (bleizi, lern h.a.) met diwezhatoc’h war loened doñv, chatal, deñved, hag ivez kezeg, goude da dud Okunev bezañ desket an doare doñvaat gant tud Afanasevo. Afanasevo a zo anv ur sevenadur Eneolitik - etre an Neolitik hag an Aremvezh - en tolead a oa lec’hiet e Republik an Altai hag hini Tuva hiziv , hag e stêrdachenn Minusinsk<sup>52</sup>. Daoust ma ‘z eus tu da geñveriañ sevenadur Afanasievo e kreisteiz Sibiria gant hini Yamna e stepennoù ar Volga e dibenn an trived milved, n’eus bet kavet karr ebet stag ouzh bezioù Afanasevo, pa vez kavet anezho e bezioù Yamna an Dnepr izel. Forzh penaos n’eo ket sklaer an traoù etre ar gKent-Indez-Europiz ha sevenadur Afanasevo.



### Kartenn 3 : Sevenadur Yamna, 4vet milved K.K., Europa

[[http://en.wikipedia.org/wiki/Yamna\\_culture](http://en.wikipedia.org/wiki/Yamna_culture)]

Un trede hengoun “Mein-sonn kizellet stêrdachenn Minusinsk” a ziskouez e kemer ar vuoc’h lec’h an heizez lec’h ma n’eus mui eln ebet. D’ar C’houeorvezh pe d’an Aremvezh, e tiskouez an erlec’hiadur eo bet kemeret lec’h an eln gant un doueelezh den-heñvel, hanter-vuoc’h pe hanter-evn merket war mein-sonn sanket en douar o tamvenegiñ hervez lod hantererezh etre ar bed uhel, ar bed izel ha gorre an douar evel ur c’hemmadur eus menoziad holl-Eurazian ar bed-menez pe ar bed-gwez oc’h eren an tri bed.

<sup>52</sup> Jacobson, 1993, p. 113



**Skeudenn 7: Mein-kirvi**  
([www.uoregon.edu](http://www.uoregon.edu))

Doueez vuoc'h eta gant kern, war dal ar men sanket en douar hag a venne hanterouriñ etre kant uhel ha kant izel ar vuhez:

« Whereas the female elk was the central image for that earlier culture, within the new culture an anthropomorphic deity of bovine and bird characteristics — a female associated with death and with the fullness of life— personified fundamental principles of belief » (Jacobson, 1993, p. 113).

Ar menoz-se a c'hellfe bezañ lakaet da ziazez hon enklask en ur zegas da breder evelato ned eo skeudenn mamm varzhel Buile Suibhne met ur stumm diavaez – an hini diwezhañ kent ar relijion gristen – e-touez an holl neuzioù a zo hag a vo bet gwisket gant ar pezh a c'heller envel « spered-mamm » marteze. Evit gwir, e-giz ma vo gwelet diwezhatoc'h, ez eo gant ar ger « spered » e vo gwell deomp ober erziwezh a-benn termeniñ ar gwellañ ez eus tu gwirvoud istorel ar gredenn EurAzian. « Mamm » peogwir eo bet ar spered-se gwregel e-touez ar meuriadoù sibirikiek studiet ganeomp d'an nebeutañ, kent dont da vezañ gourel diwezhatoc'h. Arabat deomp ivez ober gant ar ger indez-europek « doue(ez) », peogwir eo Kent-Indez-Europek menoz(iad) ar speredoù. Soñjal a ra deomp eta e vefe eus *mathair na groidhi-si* un aspadenn eus doare meizañ ar gKent-Indez-Europiz a vije enta chomet bev e spered ha kalon Kelted Skos hag Iwerzhon, abaoe an amzer-se, da lavaret eo abaoe neolitik Sibiria emichañs, p'edo an dud o vevañ c'hoazh diwar hemolc'hiñ ha kutuilhañ. Hol labour a vo klask penaos e c'hellfe bezañ c'hoarvezet an dra-se.

Komprenet eo bet a-hend-all e reomp-ni gant Kent-Indez-Europiz pa ra(e) kalz skiantourien gant Indez-Europiz na mui na maes. Evel anv-stroll, a-gevret gant Esther Jacobson ha skiantourien all evel David W. Anthony da skouer, hon eus dibabet an termen Kent-Indez-Europiz a vo rannet etre Indez-Europiz hag Indez-Iraniz. Vera Gordon Childe a rae-eñ gant “Arianed” evel anv-stroll. Daoust ma komzomp eus an hevelep tra e kavomp skianteloc’h hiziv an deiz an termen “Kent-Indez-Europiz”<sup>53</sup>.

Setu penaos ez eus tu da staliañ al leurenn Skuthez-Sibiriek diouzh sav-poent amzeroniezh ar sevenadurioù en ur verzout e talvez un neuz disheñvel eus ar spered-mamm da bep sevenadur. Poellek eo an doare gwelout-se rak pep sevenadur a zo evel un araokadur a zegas kemm ivez e emdroadur neuz diavaez ar spered marzhel. A-bouez eo klenkañ ar skeudennoù diwanet e spered an dud e-keñver amzer hag e keñver lec’h evit ket bout kollet. Dre neudenn menoziad skiantel ar spered-mamm e c’heller komz eus neuzioù liesseurt a zo bet kemeret ganti a-hed ar c’houlzoù-amzer. Ar perzh sosial c’hoariet er gevredigezh gant ar spered-se dalc’hmat a zo talvoudus-tre: an herez er pennad kentañ, heuliet gant ar reizhiad arouezioù hag evit echuiñ an trede pennad gant an troc’h diouzh ar vammenn mui an ankounac’h.

Sevenadurioù abred war gantre an toleadoù-se, Skuthez-Sibiriek a zo hêr da hengounioù o tont eus neolitik ar Baïkal, Aeneolitik Afanasevo hag Okunev (kreiz pe dibenn an trived milved K.K. – derou an eilved hini), sevenadur Karasouk an Aremvezh, kreizet e sterva ar Minousinsk, hag sevenadur Andronovo o en em ledanañ eus kornog Sibiria ha Kazakhstan war-du ar reter, hag ivez ken pell ha Mongolia:

« Most scholars consider the Andronovo to have been the eastern extension of the Timber-grave (Shrubnaya) culture, which was centered in the lower Volga Basin and stretched southwest from there to the shores of the Black Sea » (Jacobson, 1993, p. 16).

---

<sup>53</sup> P.-I.-E. Proto-Indo-Europeans.



Tro-war-dro aodoù hanternoz ar Mor Du e vo kavet ar Skuthed. Kompren a reer gwelloc'h neuze emdroadur arouezioù ar skeudennoù a ya da heul hini ar sevenadurioù hag an divroadegoù:

« Clearly these patterns of representation were not merely ornamental in intent. They functioned as symbolic systems : that is, as systems of images and relationships which carried complex symbolic significance. The deer was the key to those symbolic systems within the age of the Early Nomads, just as it was the key to the symbolic systems of the larger Scytho-Siberian culture » (ibid., p. 26).

Evel roet da intent e vez o emdreiñ skeudenn ar Vamm varzhel :

« At that point it will become apparent that the deer image inherited by the Early Nomads and elaborated into the center of their symbolic system was a sign of the ecology of belief. It referred back not to a solar hero or to Indo-European values but rather to the emergence and gradual disappearance of a truly Siberian cosmogonic source—the Animal Mother, the source of life and death » (ibid., p. 27).

Gwelet e vez endeo o tiskouez istor emdroadur arouezelezh ar Vamm varzhel, adalek stumm emziskouezet kentañ un elnez, goude hini ur garv(ez)-erc'h, goude hini ur garv(ez), goude hini ur c'harv evit a sell ouzh ar Skuthed, ha neuze un dremm wregel.

E keñver preder ez omp degouezhet e kreiz prantad-mañ hon enklask, m'eo bet adkavet poell an neudenn a vlegn da *Fer Benn* : tu a vefe diskenn betek *mathair na groidhi-si* en ur dremen dre an holl bazennoù treuzet gant ar spered-mamm betek Buile Suibhne, pe adpignat ac'halen dreist an eln zoken, betek e roudenn bellañ a zo deuet betek ennomp, hini ar bizon marteze hep na ve tu da douiñ n'eus ket bet loened all, evel ar mamout<sup>54</sup> perak ket. Kement-se evel-just en ur chom war dachenn ar marzh, hep derc'hel kont enta eus an

---

<sup>54</sup> Ar MEN N° 151 Mars-Avril 2006

arkeologiezh nag eus an dudoniezh n'int ket evit mont war an dachenn-se. En ur ziskenn e chomer bout gant ar Skuthed. N'eus ket tu da lavarout e vije bet darempred etrezo hag an tenergan, seul vui ma n'eus azeul karv ebet ganto bete gouzout. Ar Vamm-loen-se hag a zo manet e kerz o skeudennoù arzel, e ouzomp bremañ eus pelec'h e teu.

E-giz omp o paouez gwelet, e vo dav deomp adpignat betek neolitik Sibiria evit adkavout roudoù eus andon arouezelezh ar spered mamm-se a zo c'hoazh evit ar mare e stumm un eln(ez), a c'hell pazed al loen korn-se dougen banhezioù<sup>55</sup>.

Selaou a reomp c'hoazh Esther Jacobson :

« Here it should be noted that its most important image [of the pantheon] was that of the female elk : a figure often represented in monumental size, or at least with a realism and power which was monumental in aspect. During the Baykal Neolithic period a tradition of locating sacrificial sites at the base of cliffs, in what are believed to be sacred places, was also established (...) » (Ibid., p. 14).

Ur menoz marzhoniel pouezus a gaver gant kenstroll an eln hag ar vag. War murengravadurioù Skandinavia e vo kavet ar c'harv kenstrollet gant ar vag, ar pezh a ziskouez mat al lignelezh a zo etre an daou loen.

« The boats frequently underlying or overlaying the elk refer to the passage of the dead from one world to another (...). The fact that the elk images are predominantly female would indicate that the religious beliefs in question referred to that animal as the source of life. Assuming that the boats do refer to the passage after death, one may conclude that the juxtaposition of elk and boats indicates that the female elk must also have been invoked in funerary rituals » (1993, p. 92).

---

<sup>55</sup>Ar ger *banhez* e unan a-hend-all a vefe stummet evel-hen : ANDOUILLE (vx-br.) banhez m. (cf. *bann* & *heiz(es)*...) (Favereau, 1992, p. 799). An dra-se a zegas soñj deomp eus **benn**, [...], bret. *bann* “éminence, hauteur” (dans les noms de lieux) [...].

E Tevieg ivez e vo kavet banhezioù kirvi er bezioù, hep arouez marzhoniell ebet a rofe deomp da grediñ e tra-mañ-tra, nemet marteze e perzh treizher ar c'harveg, evel ar c'hi e Sibiria da skouer.

Kement-se a ziskouez deomp talvoudegezh speredel ar gredenn ha pegen don e c'helle bezañ gwirziennet e kalonoù an dud. E gwirionez n'emaomp-ni ket gant Buile Suibhne oc'h ober war-dro neuz lennegel an oberenn, met kentoc'h war-dro ur marzh keltiek evel-just, met a zo chomet enno kredabl roudoù koshoc'h zoken eget ar meuriadoù Kent-Indez-Europek a oa o tougen al loen-se. Diwezhatoc'h e vo studiet hentad ar meuriadoù o deus douget anezho eus Sibiria betek Iwerzhon e-kerzh an Aremvezh, met evit ar mare e kavomp furoc'h ober war-dro an arouezelezh he-unan ha goude pa vo bet komprenet donoc'h emdroadur arouez ar skeudennoù e vo aesoc'h dispenn e roudoù a-hed ar ragistor hag an istor.

Gant an arouezelezh-se ez eur bannet en ur bed all, koshoc'h eget an hini Skuthez-Sibiriek, hini kozh-puzuilh an dud a yae da boblañ broioù ken pell an eil re diouzh ar re all ha Sibiria ha Norzhamerika. Aon am eus e vo ret deomp adpignat betek gouenn an dud a zo aet da boblañ Sibiria, koulz ha Norzhamerika dre strizh-mor Bering. Eomp war-du bed hon tud kozh, etre Neanderthal ha Cro-Magnon. Ne vimp ket dislavaret oc'h ober al lamm-se gant ar pennad-mañ :

« Terenojkine (1982 : 270), l'un des spécialistes de la civilisation scythe, estime que la première période scythe, dite « période d'Arjan », découverte à Touva, serait antérieure de 150 ans à celle des monuments connus sur les bords de la mer Noire. Les nombreux vestiges scythes trouvés par la suite en Sibérie font apparaître l'existence d'un monde « scytho-sibérien » et d'une « unité culturelle et historique --» dont nous retrouverons quelques prolongements artistiques jusqu'au détroit de Béring dans l'art des Esquimaux béringiens préhistoriques » (Plumet, 2004, p. 25).

Kement-se n'eo ket evit hon souezhiñ.

## RANN GENTAÑ:

### AN HANTERZOUAR KLEIZ

#### 1.1 - AN DEN

##### A. HOMO HABILIS

N'eus ezhomm ebet da straniñ war-benn an deneged o tispartiñ diouzh ar palmezeged tro 10 milion bloaz zo. Reiñ a ran anv *Australopithecus anamensis* an daoudroadek kentañ 4 milion bloaz zo hag hini *Homo habilis* 2 vilion bloaz zo, an daoudroadek kentañ bet kavet oc'h ober gant benvegou. (Coppens, 2006, Conference-coppens-audio), anezho bili-ben, pe :

« Kerioù lemm tarzhad-mein, mat da zistagañ pezhioù kig diwar relegennoù » (Bosinski, 1996, p. 7).

N'en deus ket gallet *Homo habilis* mont er maez eus e endro kentañ war lerc'h al loened bras hep kontilli maen, etre 2,0 ha 1,5 milion bloaz (Bosinski, 1996, p. 15).

Kement-se a ro dour da milin ar re a gav dezho ez eus bet « lanvadoù divroerien marteze, seul wech pa veze tu gant an temz-amzer<sup>56</sup> ». Evel-se eo splann a-walc'h kompren penaos ha pegoulz eo deuet an dud bep un tammig da boblañ ar Reter tostañ, Azia, hag Europa.

Den Wushan, *Homo Wushanensis*, dizoloet e Longgupo rannvro Chongqing, a vefe kozh 1,9 milion bloaz, da lavaret eo un *Homo habilis* dre an oad hag ivez dre ma oa gouest da zistagañ pe didroc'hañ tammoù kig diouzh relegennoù e-

---

<sup>56</sup> Coppens, in *Sciences et Avenir*, avril 2006, p. 63

giz m'hen diskouez ar benvegoù-maen bet kavet war al lec'h. A-walc'h e oa dezhañ ar re-se evit bale betek kreisteiz uhel China.

E-giz m'eo bet lavaret uheloc'h, meur a lanvez zo ezhomm evit displegañ poblatur Azia hag Europa, pa n'eo ket lanvezioù dizehan. E Renzidong ez eus bet kavet relegennoù bet didroc'het 2,2 million bloaz zo a-hervez, e Spagn ez eo eskern tud kozh 1,8 million bloaz a zo bet kavet e Orce tost da Grenada<sup>57</sup>. Kement-se ne ra nemet kadarnaat kavel afrikan an Den a zo loc'het diouzhtu da Azia ha da Europa.

« Il est possible de montrer que l'occupation des Eurasiens, depuis le début, il y a plus de 2 millions d'années, jusqu'à la fin du Paléolithique ancien, il y a environ 300 000 ans, s'est accrue de façon continue, impliquant une croissance démographique constante » (Bosinski, 1998, p. 167).

N'eus diaezamant ebet eta oc'h ijinañ e vije aet abred-tre *Homo habilis* er maez eus Afrika da Azia, m'en dije heuliet e ziorroadur distag diouzh e genouenn eus Europa hervez lod, hep mont uheloc'h avat eget Eurazia ar c'hreisteiz en ur dremen dre Israel, Kaokaz, Georgia, Spagn, ar Massif Central, ar Pakistan, China.

---

<sup>57</sup> *Sciences et avenir*, avril 2006, p.60

## B. HOMO ERECTUS

« Quant aux vestiges anthropologiques, ils attestent maintenant une présence humaine archaïque en Asie orientale et à Java au moins dès 1,8 Ma, soit légèrement plus tard qu'en Afrique, mais avant l'apparition de la taille bifaciale dans ce continent, et plusieurs centaines de millénaires plus tôt que dans la péninsule Européenne » (Plumet, 2004, I, p. 159).

Den Dmanisi e kreiz Kaokazia ( $\pm$  1,6-1,8 Ma) pe *Homo Georgicus* a zo c'hoazh un *Homo habilis*, met adalek Den Mauer ( $\pm$  600 Ka) e c'heller komz kentoc'h eus un *Homo erectus* pe welloc'h zoken *ergaster-erectus* d'ar mare p'en deus kuitaet Afrika ha kendalc'het da emdreiñ e *erectus*. Diwezhatoc'h, tro 400.000 bloaz e c'hoarvezo gantañ emdreiñ e *Homo sapiens neanderthalensis*.

Arabat ivez disgwelout temz-amzer an oadvezhioù-se, 2 vilion bloaz zo. Bep kant mil bloaz e veze heuliet ar prantadoù yen gant prantadoù yenc'h :

« De longues périodes froides séparées par de courtes périodes moins froides vont alors se succéder de manière d'abord irrégulière puis avec une étonnante périodicité de 100 000 années » (Coppens, 1999, p. 71-72).

Setu penaos ez a an douar en-dro pe hantervoull an norzh d'an nebeutañ :

En d'autres termes, l'Europe et l'Indonésie vont se comporter alternativement comme des îles ; lorsque l'Europe est fermée ou à peu près par les glaciers des Alpes et des pays Baltes et Scandinaves, l'Indonésie est attachée à son continent asiatique ; lorsque l'Indonésie est, à son tour, coupée par la mer de Java, la péninsule européenne retrouve son corps eurasiatique » (Idem.).

Emskiantegzh lusk an amzer o tremen a rank bezañ war hor spered pa vez anv eus koulzadoù ken hir :

« Mais après tout, si l'on ne compte que 50 kilomètres de progression par génération, on obtient le chiffre modeste de 15 000 années pour aller de

l’Afrique orientale aux limites les plus extrêmes de l’Europe et de l’Asie, [...] » (Ibid., p. 65).

An prederioù-se war an temzoù-amzer a aotre ac'hanomp da gompren splannoc'h emdroadur ar rummadoù tud termenet *Homo pe Den*<sup>58</sup>. Kentañ tra da vemoriñ, eo an dud a zo aet war an holl douaroù bras :

« Ces différences de peuplement montrent que les *Homo erectus*, après avoir quitté le berceau africain, ont évolué indépendamment sur les trois continents » (Millotte et Thévenin, 1988, p. 19-20).

Ar poblekaat a zo bet founnus a-walc'h etre 700.000 ha 100.000 bloaz, met *Homo erectus* Europa, disheñvel diouzh hini Azia pe Afrika, zo bet anvet rakneandertalian<sup>59</sup>. Bez e c'heller ober gant gerioù resisoc'h zoken, met ar pouezusañ eo kompren eo deuet *Homo Sapiens sapiens* eus a lec'h all, ha n'eo ket enta diskennad Neandertal :

« En Europe donc pendant le Paléolithique ancien, le substrat de la population est un Archanthropien, qui se transforme lentement mais totalement en Néanderthalien, de plus en plus classique. L’*Homo sapiens sapiens* du Paléolithique supérieur ne s’est pas formé en Europe : il est venu d’ailleurs, (...) » (Millotte, Thévenin, 1988, p. 28-29).

Met a-gent kement-se, 1 milion bloaz zo bennak, gant *Homo erectus* o terc'hel da loc'hañ, e vo graet gant an tan.

« Ce qui est très important, pour la période de 1,5 à 1,0 million d’années, c’est l’apparition des premières traces de l’utilisation du feu. [...] L’utilisation du feu est une des plus grandes découvertes de l’humanité, que l’on peut difficilement surestimer. Le feu a offert une protection contre les animaux de proie tels que les félins, alors les ennemis les plus dangereux pour notre espèce. Le feu est devenu le centre du groupe humain, incarnant une signification

---

<sup>58</sup> ‘Humain’ e galleg

<sup>59</sup> Millotte et Thévenin, 1988, p. 27

sociale importante (A. Ronen 1990). Le feu réchauffait et fut la condition indispensable pour coloniser des zones au climat plus froid » (Bosinski, 1996, p. 41).

Met roudoù tan ne dalvezont ket tan damesaet. Ezhomm zo « un oaled kempennet evit komz eus tan dre youl en ur gwelead rakistorel<sup>60</sup> ». Hini ebet eus an oaledoù-se, en Europa ar c'hreisteiz, a zo koshoc'h eget 400.000 bloaz, nemet hini Menez Dregan war-dro 465 000 bloaz zo e Breizh. Kaer zo lavarout n'en doa ket ezhomm an den eus an tan evit mont da vale, koulskoude gant e venvegoù maen n'eo ket aet kalz uheloc'hig eget « Orce nepell eus Grenade e Spagn pe Pekin e China<sup>61</sup> ».

---

<sup>60</sup> [prehisto.ifrance.com/feu]

<sup>61</sup> Sciences et Avenir, 2006, p. 63



## C. HOMO SAPIENS

Kalz diwezhatoc'h eta, eo deuet war wel en Afrika *Homo sapiens*, anezhañ un *erectus* emdroet e *sapiens*, hag a zo aet kuit eus Afrika da Azia da gentañ. Kavet e vez e Jinniushan kerkent ha 200 Ka. « Similar to Dali, Jinniushan has a combination of *Homo erectus* and *Homo sapiens* anatomical features<sup>62</sup> ». Kalz diwezhatoc'h, tro -40.000 bloaz e vo kavet en Europa o kenvevañ gant Neanderthal e-pad 10.000 bloaz bennak. An hevelep *sapiens*-se a zo aet ivez eus Azia da Amerika tro 12.000 bloaz hiziv. Tremenet eo hep glebiañ e dreid e-pad ar skornerezh diwezhañ<sup>63</sup>.

« *Homo sapiens* semblerait se manifester à Jinniushan dès 200 Ka (Chen Tiemei et al. 1994). De cette souche asiatique viendraient alors, beaucoup plus tard, les Mongoloïdes, dont une branche allait peupler une grande partie de l'Arctique » (Plumet, 2004, I, p. 140).

« 50.000 bloaz zo emañ *Homo sapiens* e pep lec'h en Afrika hag en Eurazia, ket en Europa ar c'hreisteiz pe ar c'hornog nag en Indonezia m'edo Den Neanderthal ha Den Java oc'h emdreiñ sioulik a-dreñv o skornegi pe e gwarez ar mor.

An Den a-vremañ en do c'hoant adarre d'en em astenn war ar bed. Etrezek ar biz, diveuziñ a ra Beringia da bep skornerezh ar pezh a roio dezhañ digor d'an Amerika diannez m'en em strewo buan-tre eus ar c'hornog d'ar chreisteiz; etrezek ar gevred e vo tizhet Aostralia diannez ivez gant an Den-se goude bezañ savet radelloù evit mont di; etrezek ar c'hreisteiz ez aio en-dro da Java ma kejo gant un annezer kozh, Den Java, hag etrezek ar c'hornog, o vont dre Europa, en em gavo gant Den Neanderthal a anaveze endeo peogwir a oa aet an henvroad european war e giz un nebeut amzer zo hag en em staliañ er Reter nesañ ha kreiz en e gichen. Den Wadjak e-giz ma vez graet eus an *Den sapiens*-se e Java » (Coppens, 1999, p.84-85).

---

<sup>62</sup> [www-personal.une.edu.au](http://www-personal.une.edu.au)

<sup>63</sup> Coppens, 2006, conférence-coppens-audio

« Judging by their size, the small pit dwellings equipped with hearths of which Upper Palaeolithic camp sites consisted were homes of small families which now formed the basis « molecules » of early society. This microcollective, however, never functioned independently, being part of larger groups marked by great economic and social cohesion. It is these groups that inhabited the camp sites, organised drives, and conducted ceremonies in the cave cult centres. The spontaneous ties of natural blood relationship were the actual basis for the consolidation of the social links.

The woman, who kept the home fire burning, kept house and brought up the children, was the most stable element of the primitive collective. Most Soviet researchers therefore believe that Upper Palaeolithic communities were groups linked by common descent on the maternal side. Such communities were, most likely, primitive clans of the early type » (Piotrovsky, 1988, pp. 27, 28).

### *Ezkwregiezh*

Adalek ar Paleolitik uhel e c'heller kregiñ da gomz eus ezkwregiezh :

« As ethnographic materials show, the clan organisation is closely associated with exogamy [...]. This custom apparently gave rise to the dual organisation of society — a system of two neighbouring communities linked by mutual marriages, survivals of which can be traced in many peoples » (Ibid., p. 28).

Seul gemplesoc'h an aozadur sosial, seul retoc'h bezañs un ensavadur bennak evit reoliekaat an eskemmoù, dalc'het e-barzh bed ar speredoù :

« The subjects of paintings and engravings were taken from real life, mostly from the animal world. The drawings often overlapped. Most of the paintings and engravings are found in nearly inaccessible parts deep in the caves. Even sculptures of bison and bear were sometimes modelled in these remote corners. In one such secluded spot, human footprints were found on the cave floor under a lime deposit, showing that men moved on their toes while others, on their heels—obviously a sign of cultic ceremonies.

The purpose of such ceremonies can also be surmised. Here in the dark corners of cave shrines magic rituals were performed., the pictures on the walls presenting scenes mostly connected with hunting, that prime source of Upper Palaeolithic man's subsistence. We find here wounded animals, dying animals with blood flowing in streams from their wounds, and man's weapons. These are obviously scenes of hunting magic, part of the rites intended to ensure the success of hunting expeditions. Some scenes are clearly associated with fertility cults and the female principle symbolising it. Apparently magicians already existed who were the custodians of the legends and traditions that became the prototypes of mythologies ; they also officiated at the rites » (Piotrovsky, 1988, p. 28).

Hep mont re bell ganti, ez eus tu da vartezeañ ne veze ket treset evit ober brav, met evit mont e darempred gant ar bed all evit ma n'ez afe ket a-dreuz aferioù ar bed-mañ evel just. Tra-ken d'an dra-se e c'heller komz eus 'taolennoù' o tanevelliñ enta ma n'eo ket un istor, un dra bennak d'an nebeutañ hag a zo c'hoarvezet e-pad goursav unan bennak da skouer. 'Taolenn ar Puñs' [Skeudenn 18] a zo pimpatrom d'ar menoz-se. Arabat e vefe ober gant ar ger 'chaman' rak kammamzeriek eo ar ger-se er Paleolitik. Al Latin 'anima' (anal, buhez) n'eo ket re fall evit komz eus bed sosomelel an dud-se, nemet berr eo c'hoazh evit traoù zo, soñjal a ran er gwez da skouer na analont ket. Adkavout ster an daolenn n'eo ket aezet : n'eo ket marv an den rak dihodet eo, na gloazet hervez doare. Fatet ? Stummet eo e benn evel hini ul labous ha beget penn e saezh heñvel ivez. Ar bizon avat zo bet gloazet gant taol saezh an hemolc'her ha fuloret eo outañ. Torret e hañval bezañ ar saezh e tri zamm.

Un ali ne c'heller ket dioueriñ eo hini A. Leroi-Gourhan diwar-benn ar chamaniezh da gentañ :

«On a soutenu également l'hypothèse du chamanisme sur le fait que près de l'homme du puits de Lascaux, il y a ce qui peut passer pour l'image d'un piquet surmonté d'un oiseau.

Pour nous la seule évidence, c'est que l'oiseau appartient au groupe topographique C-D et qu'il équivaut symboliquement à l'homme ou au rhinocéros qui, justement, sont ses voisins de parois » (Leroi-Gourhan, 1995, p. 151).

Renket eo bet al loened treset war ar speurinier gant an oberour. Neuze, an evn a zo heñvel renk hag an den hag ar frikorneg. Met un dra all a lavar hennzh a ya a-du c'hoazh gant red hor preder dre vras :

« D'autre part ; l'équivalence signe féminin-blessure ouvre un réseau de correspondances extrêmement intéressant. Qu'un bison puisse indifféremment porter sur le flanc une vulve ou une blessure donne, de manière inexplicite mais sensible, l'accès vers une véritable métaphysique de la mort » (Ibid., p. 154).

Adarre ar meneg eus ar wregelezh, gant gwad ar gloazh a zo stag ouzh ar marv evit al loen, met ouzh ar vuhez evit an dud a vev diwar lazhañ loened a-benn ar fin. Splann e adkaver c'hoazh amañ an darempred etre amzerioù ar merc'hed ha ar gwad o redek diouzh ar gloazh a ro e stumm da soñjal e hini ur c'hourzh. Kenderc'hel a ra Leroi-Gourhan :

« La constance extraordinaire du dispositif symbolique est la preuve qu'il existait une mythologie, constituée très tôt puisqu'à l'Aurignacien déjà, le couplage des animaux et des signes est attesté » (Ibid., p. 155).

Hep distreiñ ken pell ha mare Aorignak eus derou ar paleolitik uhel<sup>88</sup>, ez eus tu da dostaat ouzh ar mareoù omp dedennet ganto :

«, [mais] nous savons qu'entre la fin du Solutréen et le Magdalénien moyen, entre 15.000 et 12.000, [l'enrichissement progressif et les variations régionales de l'appareil mythographique] atteint son sommet » (Ibid.).

---

<sup>88</sup> -37 000 -28.000 K.H. [<http://fr.wikipedia.org/wiki/Aurignacien>]

Ar frazenn-se hervezomp a varteze bezañs ur marzherezh bennak testeniekaet e tresadenn ar Puñs e Lascaux<sup>89</sup> eus dibenn ar paleolitik uhel. Gwir eo e kaver en dresadenn evel kalonenn ur marzh o kemer stumm marteze, oc'h emplegañ an hemolc'h, ar gwad, ar gloazh hag ar goursav.

Hervez hon eus lavaret uheloc'h e tlefe ar merc'hed c'hoari ur perzh bras er reoliekadur bed ar paleolitik :

« Human representations are relatively rare, and they are almost exclusively women. Particularly expressive are figurines of women, mostly cut out of bone, which portray a strong and fertile mother—an object of special respect among all primitive peoples. On the one hand, this is yet another indication of the development of fertility cult, and on the other, evidence of the woman's special role. We seem to be faced here with the initial stages of the maternal consanguine cult. Human burials of that time are as a rule abundantly sprinkled with raddle, which also reflects rather complex ideas and symbolism : the red colour of raddle must have been associated with the colour of blood and fire—sources of life and warmth. » (Ibid.).

Dedennus ivez an doare kontañ eret marteze ouzh kresk-digresk al loar :

« The quintuples must be linked with the development of counting on the fingers, a proof of which is found in outlines of the hand with the fingers crooked in some caves. The frequency of septuples is most likely connected with the phases of the moon<sup>90</sup>. Some researchers believe that a calendar system based on the phases of the moon already existed in those times » (Ibid.).

Abalamour d'an dra-se hag evit mont pelloc'h e anien bed sosiorelijiel *Homo sapiens* ar Paleolitik emamp o vont da studial bed an dToungoused, henvroidi Sibiria e sell adkavout roudenn feal d'hon Mamm-loen.

---

<sup>89</sup> Paleolitik uhel, -18.000 -15.000 K.H. [[http://fr.wikipedia.org/wiki/Grotte\\_de\\_Lascaux](http://fr.wikipedia.org/wiki/Grotte_de_Lascaux)]

<sup>90</sup> An diwad miziek (loar) :  $4 \times 7 = 28$

Goude bezañ studiet orin an Den e oa ret deomp studial ivez e zoareoù bevañ e-pad ar mareadoù kentañ, koulz lavarout e zoareoù hemolc'hiñ. Dre studial doareoù hemolc'hiñ Indianed Amerika an Hanternoz omp deuet a-benn da ziskuliañ meur a sekred eus brioù livet mougevioù kornog Europa. Meizad pennañ hor studiadenn o vezañ bet hini ar relijion pe ar spered relijiel kentoc'h o spluiañ an hemolc'h, gant a bep seurt tud o seveniñ lidoù hoalañ gouezeri, bizoned e hanternoz Amerika, met ivez kirvi ha kirvi-erc'h e kornog Europa. Ha n'eus doare ebet da ober chamaned eus an dud-se peogwir hon eus gwelet ne oant ket evit goursevel e-giz ma ra ur chaman, hag ar re a ra, gwelloc'h e vefe o envel goursaverien. Er c'hontrol eo bet merzet perzh bras ar merc'hed en argerzh hemolc'hiñ gant o galloud mont e darempred gant speredoù al loened degaset d'an dud gant ar vamm-loen pe spered-mamm. Met kement-se a vo gwelet donoc'h bremañ gant an dToungoused.

## 1.3 - SIBIRIA

### A. TOUNGOUSED



**Skeudenn 22: Tougouzez**  
[thefreedictionary.com/Tungus]

Un nebeut roadoù diazez a zo ret gouzout evit ober anoudegezh gant ar meuriad tud-se eus Sibiria a zo o tiskenn war-eeün pe dost diouzh *Homo sapiens sapiens*. Studiet hon eus uheloc'h an doare.

Emañ annezet gant an Evenked a zo anv a-vremañ an dTougoused, tachennoù divent Taiga Sibiria, da lavaret eo koadeier avalpinegi, adalek ar stêr Ob er c'hornog betek Mor Okhotsk er reter, hag adalek ar Mor Bras Arktek en hanternoz betek Mandchouria ha Sakhalin er c'hreisteiz E-keñver gouenn e aparchant an Evenked d'ar strollad Baikal pe Hen-Sibiriek eus an doare mongol-heñvel<sup>91</sup>. [<http://en.wikipedia.org/wiki/Evenks>].

---

<sup>91</sup> *Den sapiens* Jinniushan, kerkent ha 200 Ka. [p. 61].

E-keñver yezh ez eo rannet an dachenn etre meur a familh, an hini niverusañ o vezañ hini ar yezhoù Altaek (daspegus): Turkek (Tatared, Altaied, Chored, Khakased, Tuvaed, Tofalared, Yakouted, ha Dolganed), goude Mongolek (Bouriaded) ha neuze Toungouz-Manchouek. Ar re-mañ hag a zedenn ac'hanomp, a zo rannet etre Hanternoz ha Kreisteiz :

« An Evenked (Toungoused), Evened (Lamouted) ha Negidaled eus an hanternoz, a gomz yezhoù Toungousek. Er c'hreisteiz e vez komzet yezhoù Mandchouek gant an Nanayed (Goldi), Ul'chi, Oroked, Orochi ha Udegeyed, da lavaret eo 6 % eus poblañs genidik Sibiria hiziv nemetken , met brasledet eo o zachennad, eus ar Yeniseï betek aodoù ar Mor Okhotsk ha strizh-mor Bering. A-hend-all, e Gwalarn Sibiria e vez komzet yezhoù Ougrek gant Khantek (Ostyaked) ha Mansi (Voguled)<sup>92</sup>, ha yezhoù Samoyedek gant Nentsy (Youraked), Nganasaned (Tavgined), Entsy, ha Sel'keuped<sup>93</sup>. Ar yezhoù Ougrek, a gonter enno Hungareg Kreiz Europa, a zo lod eus ar strollad Finnez-Ougrek Ar yezhoù Finnez-Ougrek ha Samoyedek, hag a ziskouez heñvelderioù da vat en o zouez, a vez unanaet gant ar yezhourien er strollad Ouralek<sup>94</sup> » (Levin, Potapov, 1964, pp. 2-3).

Ezhomm a vo eus an titouroù-se pa vo graet war-dro komzerien ar yezhoù ouralek en o darempred gant Indez-Iraniz. A-hend-all, yezhoù un niver a dud e Sibiria ar biz hag ar reter pellañ ne c'hellont bezañ lakaet e hini ebet eus ar familhoù-yezh bras meneget uheloc'h dre m'ò deus ur framm disheñvel mat, dibarderioù fonetek hag un nebeut perzhioù all. [...]. Ar yezhoù-se (Chukchi, Koryak, Itel'men, Nivkhi and Yukagir) a zo anavezet evel “Henaziat”:

« An termen-se<sup>95</sup>, hag a bouez gant gwir war gozhni ar yezhoù-se, a zo aspadennoù anienel Sibiria. A dra sur eo bet ledet ar yezhoù kozh-se war un tolead<sup>96</sup> kalz brasoc'h gwezhall.

---

<sup>92</sup> Tro da 3,1% ar boblañs henvroat hollek hiziv

<sup>93</sup> Tro da 2.6% an holl henvroidi

<sup>94</sup> A-ziagent e veze renket ar yezhoù Altaek hag Ouralek en unander Oural-Altaek

<sup>95</sup> Bet degaset da gentañ gant an Akademisian Shrenk

<sup>96</sup> Hiziv an deiz nemet 3% eus an dud c'hinidik eus Sibiria a gomz yezhoù henaziat.



Eskimo hag Aleout, kar an eil yezh ouzh eben, a vez roet o lec'h dezho e-kichen ar yezhoù Henaziat.

Tu a zo dispenn roudoù ar meuriadoù Tougousek dre o yezh o tiazezañ tamm ha tamm e reter Sibiria en ur heñvelekaat strolladoù bihan henaziat<sup>97</sup> » (Ibid., p. 4).

Peadra zo ivez da grediñ en em ledas ar yezhoù samoyedek etrezek an hanternoz adalek ar Menezioù Sayan, ma veze komzet yezhoù Henaziat gant poblañs kozh gwalarn Sibiria diagent. Anat eo diouzh lenn, ez eus bet eskemmoù etre an holl veuriadoù-se a-hed an istor, ar re nevez deuet o tilec'hiañ ar re gent pelloc'h peurliesañ.

E-keñver istor ha sevenadur bremañ, e oa rannet emledoù divent Sibiria betek nevez zo e div rannvro: hini ar c'hreisteiz, gant he mesañ-loened ha gounid-douar diazezet abred, hag hini an hanternoz, gant hemolc'hiñ, pesketañ, mesañ kirvi-erc'h da emvevañ.

Sibiria ar c'hreisteiz a voe annezet gant an Den e-pad ar Paleolitik Uhel. Diwezhatoc'h e teuas da vezañ lec'h ur sevenadur hen, diorroet uhel a-walc'h, hag a voe perzh e unaniezhoù politikel lies ha berrbad etre an Durked hag ar Vongoliz. Met diorroadur pobladoù toleadoù an hanternoz a voe un abadenn all :

« An temz-amzer rust, kresk didreuzus hogozik avalpinegi pe taiga ha toundra, displetus evit ar mesañ pe ar gounid-douar, hag an hedoù divent diouzh sevenadur toleadoù ar c'hreisteiz—an holl draoù-se a zalee ouzh an nerzhioù greantiñ da ziorren hag a zalc'he digenvez kement meuriad an hanternoz stag ouzh o doareoù bevañ kozh hag ouzh o sevenadur. Pa oa eus rann kreisteiz Sibiria pobladoù bras a-walc'h (Bouryated, Khakasy, Altayed ha Tatared Sibiria ar C'hornog) tost dre o yezh hag o sevenadur da bobladoù Mongol ha Turkek ar rannvroioù all, e oa annezet rann an Hanternoz gant un niver a bobladoù bihan, a oa o yezh hag o c'hultur pezhadoù digenvez en ur c'heñver bras.

---

<sup>97</sup> Evel ar Youkagired

Koulskoude e vefe ur fazi soñjal e oa troc'het penn da benn pobladoù Sibiria diouzh kreizennoù sevenadur ar c'hreisteiz. [...] Kalz divroadurioù pobladoù an hanternoz, n'int ket bet c'hoazh studiet don a-walc'h, a oa distaolioù barradoù-amzer istorel a save a vare da vare er c'hreisteiz » (Ibid.).

## B. KLANIOÙ HA RELIJION

Bremañ e troomp war-du an darempredoù etre an dud, ma weler, daoust ma oa torret mat ar reizhiad boutin kentidik, e vire ar chaseourien, pesketaerien ha mesaerien Sibiria roudoù darempredoù uhelvammel ar c'hlanioù kozh:

« Ar goulenn daoust hag e oa pe ne oa ket klanioù an dud diazezet war pennreolennoù uhelvamm a zo pouezus bras a-fed hentennouriezh.

E Sibiria e vez kavet roudoù eus ar c'hlan uhelvammel, o tiskouez da vat ur bazenn e diorroadur sosial an dud-se. An aspadennoù a ziskouez en dimeziñ tiek-mamm (mont a ra ar gwaz da vevañ gant tiegezh e vaouez), en eontreliezh (ur perzh bennak c'hoariet gant an eontr a-berzh mamm), hag e meur a voaz ha lidoù a zo test da bezañs un uhelvammelezh en tremen » (Ibid., p. 8).

Kudenn ar c'hlan uhelvammel a zo stag ouzh aozadur daouel evel unan eus koshañ stummoù framm ar c'hlan hag ar meuriad (Ibid., p. 9).

Relijionoù rak-kristen meuriadoù Sibiria boaz a vez renket dre vras dindan ar menoziad chamaniezh. E Sibiria e oa ledet bras ar chamaniezh, a gemere stummoù bividik-tre emzispiegañ, hag a oa abeg da implij gwiskamantoù zo (taboulinoù chamaned ha dilhad). Met chamaniezh Sibiria a oa pell da vezañ ur rummad kredennoù ha lidoù unvan. Bez e c'hell bezañ rannet e meur a batrom, pep hini o tiskouez prantadoù emdreiñ disheñvel, adalek stummoù koshañ familh pe koskoriad betek chamaniezh micherel diorroet uhel.

Ne oa ket ivez heñvel ar gwiskamantoù chamanel. Meur a stumm chamaniezh, arouezius kenañ eus rannvro-mañ rannvro a c'hell bezañ disheñvelet diouzh stumm an taboulin da skouer, pe an doare gwiskamant ha kabell. Setu m'eo pouezus neuz ar chamaniezh en skiantel, war-un-dro evit kompren perzh sosial ar chamaniezh met ivez he orin hag evit studial an darempredoù istor ha sevenadur etre an hiniannoù, pere a daol sklerijenn war orin ha ereoù kenelek meuriadoù Sibiria (Ibid., p. 10).

Setu bremañ un evezhiadenn hollbouezus evit hor studiadenn diwar-benn totemiezh meuriadoù Sibiria a lezomp amañ evit echuiñ en e stumm orin evel test rak troet endeo diwar ar ruseg :

« Despite the view expressed by certain writers that there are no traces of totemism in Siberia, indications of it can definitely be found among almost all the Siberian peoples. Examples are described in the chapters dealing with individual peoples. The cult of the bear, which was almost universal in Siberia, goes back to totemism. This cult was manifested in two forms: first, in the form of rituals involving a bear killed during a hunt, and, second, as a special cult of bear cubs, reared in captivity and ritually slaughtered later. The second form was confined to an area of Sakhalin and the Amur river (Ainu, Nivkhi, Ul'chi and Orochi). The custom of rearing a sacred animal in captivity and its subsequent ritual slaughter takes us far to the south where we also find certain other elements in the culture of the Ainu. The general form of bear-worship in Siberia seems to go back to totemism of the ancient forest hunters and fishermen, to the economic and cultural complex which is evident even in the Neolithic of the coniferous forest belt » (Levin, Potapov, 1964, p. 10).

Meneget e vo meuriad an Ainu en-dro diwezhatoc'h, pa vo graet war-dro an Hittited. Tremen poent evit neuze ober ur paouez war ar pezh a vez anvet chamaniezh gant ar skiantourien.

*Solvez dizanvez*

Anv zo bet graet buan ha buan eus 'chamaniezh', diwar-benn tud *sapiens sapiens* edo o vevañ da vare ar Paleolitik gant Paul Bahn peurgetket evit diarbenn an imlij anezhañ, ha komzet am boa eus kammamzeriadur a-zivout an termen-se er prantad-azmzer-se. Dibabet eo bet studial an dToungoused rak e kreiz frammoù sosial an dud-se ez eus ur 'chaman', hag ouzhpenn-se ez eo toungousek ar ger e-unan. Koulskoude n'eo ket ur relijion ar chamaniezh :

« Indeed, shamanism is not a religion even on the ground that it is not a fixed, stabilized system, and also absolutely lacking ethical elements » (Shirokogoroff, 1982, p. 47).

Setu ar pezh a zispleg Sergueï Mikhaïlovich Shirokogoroff deomp en e levr gouestlet d'an dToungoused : "Psychomental complex of the Tungus" :

« In this work the reader will not find the term « medicine man » sometimes applied to the shamans, for as I have already pointed out shamanism is not a « medical art » only. I have also banished from my terminology terms like “magic”, “mystic” etc. with their derivatives » (Ibid.).

Da heul ar frazenn-mañ e kendalc'h Shirokogoroff gant emzalc'h an nen a ra gant ar gerioù-se en ur lavarout e ro hennezh da intent e vo komzet eus traoù n'int na poellek na skiantel pa reont dave e gwir d'ur bed na vez ket komprenet gant an enklaskerien, pe a zo rann eus kemplezioù disheñvel keñveriet gant ar relijionoù bras pe skiant hiziv. Kentañ tra d'ober eta eo studial oberennoù ar re a zo aet e darempred gant an dud-se hag a gomz o yezh. An dra pennañ da empentiñ eo menoziad ar c'hemplez bred-spered<sup>98</sup>, hini Europa evidomp, a ra m'eo dic'hallus evit tud ar c'hemplez-se kompren hini tud a vev en ur c'hemplez bred-spered all, hini meuriadoù chaseourien Sibiria. Strivet e vo ganeomp memestra. Setu menozioù diazez a-berzh an dToungoused gouez da Shirokogoroff.

Ar pezh a vez merzet a c'hell ivez bezañ rannet e div elfenn : materi (*matter*) ha buhez (*animus*<sup>99</sup>). Kement tra a zo materi, met n'eus ger ebet evit se e Toungousek er maez eus termennoù resis : maen, koad, houarn, kroc'hen. N'eus ger ebet met ar menoz a zo. Kemer a ra an oberour skouer an *tjavun* a zo ur benveg koad a vez graet gant ar merc'hed evito derc'hel o c'hempouez pa 'z eont war garv-erc'h :

---

<sup>98</sup> Psycho-mental complex [p. 63]

<sup>99</sup> « âme, esprit » (Gaffiot, 1934, p. 129), disheñvel diouzh *anima*, « souffle » (p. 127).

« As long as it preserves its integrity, is not broken, it may be used as *tjavun* and so called. However, when it is broken into two pieces it is no more *tjavun*, but — two pieces of wood (*mo*), it is « broken *tjavun* ». The *tjavun* loses something which is proper to it and becomes simple matter — « wood matter ». This « something » is the *immaterial substance* which is liberated when the piece is broken. This is the *animus*.

The evidence of the existence of the « animus » is seen in Tungus practice, at least among some groups, of breaking the articles placed in the coffin with the corpse. Their idea is that the *matter* will not follow the *animus* of the dead, but the immaterial substance will follow the immaterial substance of the dead, and in this way the dead will have everything he needs. The liberation of the *animus* may be attained by leaving wooden and other perishable materials to decompose » (Ibid. p. 50).

O paouez omp gwelout [p. 93] e lec'hioù zo eus Europa ar reter pe kreiz Sibiria evel Pavlov, Dolni Vestonice 1 ha Kostienki 1 pe Mal'ta, delwennigoù torret aratozh pe tarzhet en tan hag a hañval bezañ test eus ul lid. Aze marteze e talc'her derou un displegadur gant hini an dToungoused, a zo hogos diskennidi an dud edo o vevañ en toleadoù da vare ar Paleolitik e-giz m'eo bet gwelet, ha chaseourien e-gisto : dieubet e veze solwez dizanvez<sup>100</sup> pe *animus* un dra evit ma 'z afe da heul hini an den marv. Mervel o vezañ bevet e-giz pa vije ar c'horf o terriñ : en daou zegouezh eo dieubet an *animus* diouzh ur golo pe ur gronnad anvet *materi* ganeomp met na vez ket termenet ganto, solwez an dra o vont da heul hini an den. Evit a sell ouzh an delwennigoù tarzhet gant an tan 27 000 pe 24 000 bloaz zo, da heul displegadur an dToungoused gouez da Shirokogoroff<sup>101</sup>, e c'heller soñjal e oa pal an deved-se dieubiñ *animus* an dra e stumm un delwennig, met el lec'hioù a gomzomp anezho n'eus *animus* korf den marv ebet da vont d'e heul. Techet e vefen neuze da soñjal e tistrofe solwez dizanvez pep delwennig d'an hen-spered (a zo merzet evel gwregel gant an Evenked). Un tammig evel moked butun an Indianed da skouer, solwez dizanvez dreist pep tra, a aspign d'ar Spered Meur. Un aberzh enta evit trugarekaat pe bediñ, elese goulenn, da geñver hemolc'hiñ, yec'hed, hag all...

---

<sup>100</sup>"Immaterial substance"

<sup>101</sup> tro 1935 eta

Setu an doare ma kinnigomp an daremprediñ a vefe etre an dud hag ar pezh a vez anvet ganeomp "ar bed all". Gwelout a reer e veze an dud-se e darempred gant ar bed all-se bemdez. Evito n'eo ket ar bed all met ar bed koulz lavarout, sebezus, hep sul na pemdez.

Gant meuriadoù all, evel Jormoned ar Japan da skouer e kaver delwennigoù pri anvet Dogū, hag a c'hell hor skoazellañ evit spisaat hor meizad :

« Les peuples Jomons constituent le peuplement originel pré-néolithique et néolithique du Japon. Leurs ancêtres descendants de l'espèce Cro-Magnon sont sans doute originaires de l'Asie du Nord-Est, ils colonisèrent le Japon dès le début de la fin de l'ère glaciaire (20 000 à 18 000 av. J.-C.). Leur présence y est attestée bien avant le XII<sup>e</sup> millénaire av. J.-C. À cette époque les terres de l'archipel étaient reliées en plusieurs points au continent asiatique, ces passages terrestres furent définitivement submergés entre 8 000 et 6 000 av. J.-C. »  
[<http://encyclopedie.snyke.com/articles/jomons.html>]

### *Les Figurines*

« Ces petites figurines en argile, ou Dogū, constituent la deuxième forme d'art des Jomons. Les premières sont apparues au VII<sup>e</sup> millénaire av. J.-C., elles sont de formes humaines (souvent de femmes) et animales, et constituent les premiers témoignages de la sculpture japonaise. Leurs fonctions étaient vraisemblablement liées à des cérémonies funéraires (offrandes), à des rites de fécondité, à des formes primitives d'agriculture et à des rites de guérison. Elles sont souvent retrouvées brisées, ce qui devait constituer la fin de la cérémonie, le mal y ayant été transféré<sup>102</sup> » [<http://fr.wikipedia.org/wiki/Jomons>].

Mont a rae kuit an droug evel-se.

Evit a sell ouzh perzh kentañ ar merc'hed<sup>103</sup> hag evit heul hon enklask ez eo pouezus notenniñ ivez, e tiskenn impalaer ar Japan eus an doueez

---

<sup>102</sup> Da eo notenniñ amañ menoziad ar bodlec'h a c'hell degemer speredoù hag a vo meneget pelloc'h ganeomp.

<sup>103</sup> N'emañ ket a-du tout an dud gant ar menoz-se.

Amaterasu<sup>104</sup>. C'hoarvezet e vefe an dra-se er bloaz 660 K.K. pa eo c'hoarvezet diazevadenn varzhel ar Japan gant an impalaer Jimmu.

Ar meizad "animus" enta n'eo ket termenet, evel "materi", rak an dTougoused n'o deus ket ezhomm hen ober<sup>105</sup>. Da lavaret eo e vez *termenet* un tamm koad graet evit un dra resis gant un *anv*. Pa vez torret ne c'hell ket an dra bezañ anvet ken. Mirout a ra "animus" (solwez dizanvez) an dra, un tamm bennak eus an dra koulskoude :

« Kozh a-walc'h e hañval bezañ ar veizadenn, koshoc'h eget unvezhioù kenelel hiziv, a zoug kemplez tudouriezhel Europa » (Shirokogoroff, 1982, p. 50).

« Gallout a rafed ober "animouriezh" eus meizad filozofel an dTougoused, met an termen a goll e zalvoud rak "animouriezh" a dalvez evit an holl strolladoù kenel, zoken strolladoù Europa » (idem, p. 50)

Gwir eo pa gomz an nen d'e jav pe d'e urzhiataer e vez "animour" anezhañ.

Arabat e vefe ivez mesk *animus* gant spered. Ret eo dezho ober, pa gomzont gant estrenien, gant ar ruseg *dux, duša* (« spered », « ene » h.a.). An diouer a dermen ne dalvez ket eo dioueret ar menoziad. Kemm a laka an Doungoused etre *materi* hag *animus*. Met ne c'hell ket *animus* talvezout kement ha 'menoz', pe 'spered'.

Ar bras eus an dTougoused a gav dezho ez eus "buhez" er plant, evel ma'z eus anezhi ivez en holl loened, met n'eus ket er mein. Buhez a vez lavaret *èrga*<sup>106</sup> Talvezout a ra ivez *érgen* dre vras evit "c'hwezh" ha troet e c'hell bezañ (dre fazi) evel *anima*. Lec'hiet eo ar "vuhez" e penn uhel ar glerenn vrennid.

---

<sup>104</sup> [<http://fr.wikipedia.org/wiki/Amaterasu>]

<sup>105</sup> Ne c'hell ket an dud-se en em lemel diouzh ar bed ma vevont ennañ, ha dioutañ ? An difetis evito, ar speredoù an hini eo.

<sup>106</sup> (Bir. Kum. Mank.), *ergan* (Lam.), *erge* (Tum), *öigön* (Neg. Sch.), *ōrgö* (Goldi) (Sch.), *èrgen* (Manchu Wr. and Sp.) (Shirokogoroff, 1982, p. 51).



Neuze ouzhpenn “animus” o deus ivez an dToungoused *èrga* na dlefe ket bezañ lakaet evit “ene”.

Gant oberiantiz al loened eo kendrec’het an dToungoused ez eus enno un elfenn a zo dioueret er plant » (Ibid., p. 51).

« The Tungus accept the idea that all plants have « animus » [...], e.g. a tree possesses « animus ». When it is cut down it becomes simple wood, good for making fire and manufacturing, so that the tree loses its animus. Besides the animus, the plants possess elements which may be called « life » manifested in growth, production of flowers, fruits etc. Therefore when the tree is cut into pieces of wood it loses its « animus » and « life » (Ibid., p. 64).

Evit krennañ, ez eus gant an dud, al loened hag ar struzh, “solwez dizanvez” hag *èrga*, elese ‘animus’ ha ‘buhez’, ez omp-ni techet da dreiñ an eil gant “ene-huñvre” hag egile “ene-korf”, zoken ma ne ra ket Shirokogoroff an dra-se e-unan<sup>107</sup>, ken mat e kenglot ar merzadòù-mañ gant ar gerioù-se a vo komzet diwarno emberr.

---

<sup>107</sup> « It may also mean “breathing”, “to breathe”, and in a wrong translation it may be rendered as “soul”. However, this translation may be accepted only in the largest sense of “soul” » (Ibid., p. 51).

### C. HENVAMM

A-walc'h a ouiziegezh hon eus dastumet diwar-benn orin ha doare-soñjal an dToungoused evel pimpatrom da veuriadoù Sibiria, evit dont d'hor poent diwar-benn al loen-mamm. En e bennad “Mother Cult in Siberia”<sup>108</sup>, e tispleg deomp Otakar Nahodil un dra bouezus, ma c'hell bezañ lakaet an tan damesaet evel Henvamm :

« In the preceding pages it has been mentioned more than once that mother cults were connected with the cult of fire and of the hearth. Recent investigations show that also fire was a feminine principle—a kind of ancestral mother. This connection is brought out more forcibly by sculptures of ancient Venuses that have been found in the vicinity of hearths or right in them, as was already mentioned<sup>109</sup> » (Nahodil, in *Dioszegi*, 1968, p. 465).

Ar menoz-se a c'hell bezañ gwiriet e-touez Kizhi an Altai da skouer evel displeget deomp gant N.P. Dyrenkova :

« Apart from the *ot änä* ‘mother fire’ there exists a very archaic conception of a supernatural mistress of fire, represented by a white fire girl called *kыз änä* ‘virgin mother’. It is referred to by L. Ja. Šternberg as parthenogenetic, anthropomorphous mother fire » (Ibid., p. 466-467).

« Since fire is anthropomorphic and is considered to be the living mother, or the ancestral mother, the behaviour of human beings in its presence is governed by a number of taboos, which are met with in one form or other also among the other Siberian peoples » (Ibid., p. 467).

Pouezañ a ranker ober adarre war an tan en oaled, a zo e-unan evel ul lec'h aberzhañ d'an Henvamm atav.

---

<sup>108</sup>Diószegi, 1968, pp. 459-477

<sup>109</sup> S.o. Plumet hag E. Jacobson

« A fire is a place of sacrifice in itself. It was a custom among the Altai Kizhi and Teleuts, in the past, to see that the fire received a part of every meal » (Ibid., p. 467).

« [...] as late as the 17<sup>th</sup> century, certain relics still survived of an ancient matriarchal clan organization which had existed among them [Yakuts] in times prior to their transition to pastoralism. Traces of the old matriarchal order are evident, for instance, in the legends about the filiation of the individual clans from women<sup>110</sup>. In the religious conception of the Yakuts the strongest reminiscence of former matriarchate is the cult of a blonde deity called *ajÿsyt*, the giver of fertility, protectress of women in labour, the same goddess from whom mothers receive their children<sup>111</sup> and in honour of whom they bring offerings after the birth » (Ibid., p. 468).

Distreiñ a reomp war ar menoz-se a ro un displegadur da gudennoù a vo kejet ganto diwezhatoc'h a-zivout ar bPikted dreist-holl. Dindan ar gwiskad uheldadel pe tatlignezhel, e kaver c'hoazh roudoù eus ur prantad koshoc'h pa veze mammlignezhel aozadur ar meuriad. Kevelet eo an Henvamm-se ouzh an tan :

« A very interesting picture of the remnants of mother cults, with rich comparative material, can be seen in the case of the minor nationalities of Eastern Siberia and the Far East, whose conception of ancestral mothers of the clans is almost invariably connected with fire.

This applies first of all to the Tunguso-Manchurian peoples of Eastern Siberia. The Evenki (the Tungus proper), as proved by A.F. Anisimov, worshipped as the chief spirit of the clan a female being called *togo mušun* which, translated literally, means 'mistress of the fire'. The Evenki imagined her to be a half-blind old woman, a grandmother (*ənəkə*), regarded as the spirit of fire, the mother of the clan, the mistress and head of the tent, and also the protectress of the souls of the members of the clan and the family.

---

<sup>110</sup> Komzet e vo eus mammlignezelezh an hemolc'herien hag ar bPikted diwezhatoc'h

<sup>111</sup> S.o. Shirokogoroff. S.o. uheloc'h

Fire was considered a symbol of the unity of the clan, every one of which, among the Evenki, had one common hearth, which was sacred.

It is no mere accident that fire, which was the symbol of collective material life in the clan was represented as a woman, as the ancestral mother » (Ibid., p. 468).

Koulskoude, da eo notenniñ ne gaver skeudenn ebet eus ar vaouez kozh nevet, emichañs peogwir e oa heñvel an Henvamm ouzh an tan<sup>112</sup>. A-bouez gouverkañ diouzhtu ez eo an tan stumm koshañ anavezet an Henvamm. Ur vaouez kozh eo, ha nevet. Kement-se a gasfe ac'hanomp en-dro ken abred en amzer ha 465.000 bloaz zo, e Menez Dregan.

### *Togo ha bugady*

Peseurt darempred a zo bremañ etre *togo mušun* ha *bugady mušun* ?

« According to the religious conceptions of the Evenki, *Bugady mušun* was another being belonging to this class. She was a female spirit, who was the protectress of the clan, the head of the whole husbandry of the clan, the mother of the animals, the mistress of the taiga, of the world and of the universe. The Evenki imagined her to be a very sensible, old, yet strong woman. It is again typical that the representations of this supernatural, ancestral mother of people and animals are rather varied. Sometimes she is anthropomorphous, at others zoomorphous. Once the *bugady mušun* is an old woman, then again she is a big female elk or a wild female reindeer. However, also in her zoomorphous, totemic form she was considered *enin-te*, i.e. a woman who is 'considered a mother'.

The Evenki believed her to be the guardian of dwellings and of people, as well as the protectress of supplies, of reindeer herds<sup>113</sup> and of the whole husbandry of the clan which she defended against the activities of evil spirits. Of great

---

<sup>112</sup> Idem, pp. 468-469

<sup>113</sup> S.o. Kehoe (h.a.). Hounnezh a zo pedet evit an hemolc'hiñ bisoned. Ar memes den eo.

importance is the fact that in every clan the shaman preserved *bugady mušun* as a common idol and that every family had in its tent a small image of this idol. Long ago the *bugady mušun* was the centre of attention and respect in everyday life.

In the case of accidents and difficulties, the Evenki considered their female spirits to be their best friends and protectors » (idem, p. 469).

Ma teurvezher distreiñ da *ot änä* pe "tan-mamm", ha da *kyz änä* pe "gwerc'hez-mamm" meuriadoù an Altai, n'hon eus ket disoñjet ez eus bet skrivet diwar o fenn e oa anezho menoziadoù kozh-bras meurbet. Da lavaret eo e c'hellfe *togo mušun* pe *bugady mušun* bezañ emdroadurioù nevesoc'h eus *ot änä* pe *kyz änä*, rak muioc'h danzeet e hañvalont bezañ. Al loened a zo en o c'herz, pezh n'hon eus ket lennet diwar-benn *ot änä* pe *kyz änä*. Gant ma vefe ar re-se evel-just met frouezhioù spered an den oc'h emdreiñ.

### *Bugady*

Met petra a dalvez *bugady* da lavarout ?

« The Evenki once worshipped sacred places of the clan, called *bugady*. These were rocks, which the Evenki regarded as living beings—animals, most often elks. The *bugady* animal was recognized as the ancestor, totem and protector of the clan<sup>114</sup>.

Due to lack of place, in this article we cannot go into greater detail in connection with the two ancestral mothers worshipped by the Evenki. However, they are of primary importance for a proper understanding of mother cults not only in Siberia but, we may say without exaggeration also all over the world » (idem, p. 469).

---

<sup>114</sup> *Totem* n'eo ket dre ret ur peul koad sanket en douar evel gant an Indianed e-lec'h m'eo bet dizoloet ar ger. D'ar mare-se e komzer eus an *totem pole*.

Ne c’heller ket bezañ a-du gant Otakar Nahodil, zoken ma kav deomp tostaat a-drugarez dezhañ d’un anv a zerefe a-walc’h da “mathair na groidhi-si” Buile Suibhne : “*bugady mušun*” an Evenki. Diskuliet eo bet deomp e stumm ur “vamm eln bras” pe ur “vamm karv-erc’h gouez”, dres e-giz m’hon eus he c’havet ivez e-barzh levr Esther Jacobson. A-raok bezañ deuet da vezañ e stumm ur c’harv (e ster anv-stroll ar ger) e oa bet tremenet menoz an “Henvamm” e stumm un eln, ur c’harv-erc’h<sup>115</sup>, met stag atav gant an tan en oaled, an hemolc’hiñ, ar boued hag all...

Da ziwall zo da ober memestra rak staliet eo studiadenn Nahodil war hini Anisimov, a zo bet burutellet koulskoude gant Laurence Delaby pergen, hag a zispleg deomp ma vez *Bugady Mušun* o vevañ evel ar Vamm-loen etre gwrizenioù gwezenn ar c’hlan pe dindan roc’hell nevet anezhañ, ne lavar ket dezhi ar chaman deuet da c’houlenñ gouezeri ganti da vare lid *šingkelavun* ez eo-hi e loen-mamm<sup>116</sup>:

« Ce qu’il ne manquerait pas de faire au cours de son long marchandage, si cela était le cas » (Delavy, 1976, p. 122).

### *Sengi-mama*

Komzet hon eus eus an dToungoused met er meuriadoù all eus Sibiria ivez e veze gant an dud hevelep kredennoù pe damheñvel :

« Here it is necessary to note that the Evenki conception of the *Bugady mušun* corresponds more or less to the Nanai (Gold) cult of the female being called *sengi-mama*—the ruler of the earth and of the world, the ruler of the taiga, of the game and, hence, of successful hunting. The Nanai hunters addressed a prayer to their transcendental<sup>117</sup> female being whenever the time of hunting approached » (Nahodil, in Dioszegi, 1968, p. 470).

---

<sup>115</sup> Ha perak ket e stumm ur bizon ergentaou ?

<sup>116</sup> Gant an dToungoused ez eo heñvel diskuliadur ar Vamm varzhel ouzh al loen pourvezet dezho ganti : karv.

<sup>117</sup> Un trehont diaes da verañ evit ur « frammadurour ».

Gant ar frazenn-mañ e adkavomp ivez menoz ar vaouez “medisin” bet gwelet uheloc’h a dreuzkas he nerzhioù spered d’ar reder e-pad al liderezh bleniañ bizoned, ha d’ar bizoned da heul. Gwelout a reer re splann pegen unvan eo bed meizadennoù meuriadoù Sibiria ha Norz-Amerika.

Ur skouerenn eus an unvaniezh-se a gaver e spered-mamm an Oudegeied anvet *Sengi-mama* ganto ivez :

« A similar cult existed also among the close relatives of the Nanais—the Udegeis. The Nanai *sengi-mama* is analogous to their *sangia-mama*, who is again a female mother spirit, supernatural ruler of the taiga, mother of animals (and people) and mistress of the earth and of the world. As the first Udegei writer, Džansi Kimonko, writes there existed certain idols of this mother and ruler of the taiga, who at the same time was the spirit of success in hunting. These idols were ‘fed’ with the blood of the sacrificed animal » (Ibid., p. 470).

Met gallout a rafed lieskementiñ ar skouerennoù en ur vont da furchal e bed pep meuriad Sibiria. E-touez ar meuriadoù Hen-Aziat zoken, bet meneget ganeomp diagent :

« Fragmentary information of this kind exists also in connection with the Paleo-Asiatic Koryaks and Chukchi. The former use a special instrument for lighting the fire; it is a wooden plate having the shape of a human body. This very important item among the household utensils was called the ‘fire-woman’. [...]

The picture is completed by ethnographic material from the Sakhalin Ainu, among whom the ancient cult of fire is connected with the cult of sacred beings called *kamui* and also with the cult of the *ináu*. Among the *kamui* of the clan an important place was always occupied by the old woman (mistress) of the fire. The *ináu* itself was nothing but a stick, cut smoothly upwards with a knife so as to form a head consisting of thin, spirally wound shavings at the top. It, thus resembles the simplified picture of a man of the Ainu tribe, remarkable in anthropology for his great quantity of hair. Usually stuck into the ground, it was originally the effigy of a supernatural woman—a mother, the ancestral

mother of the clan. This is also proved by the fact that for the mistress of the fire the Ainu used to stick the so-called *unti-ináu* into the hearth.

Ancient mother cults have survived, sometimes in small fragments, in all native Siberian nationalities » (Ibid., p. 472).

### *Pester*

Gant menoz ar post sanket en douar, e c'heller evezhiañ meur a dra. Meneget eo bet ur post gant Vladimir N. Stanko en e bennad diwar-benn "Hemolc'hiñ bizon e Ukraina ar Paleolitik Diwezhañ", da lavaret eo 20 000 bloaz zo, e lec'h ma tispieg e vez lakaet klopennoù bizoned war beulioù e reter al lec'h ma veze kaset de benn ar bras eus al lidoù. Goude e veze debret ar relegenn ha klenket an eskern en dro d'ar c'hlopennoù.

Ur post all hon eus gwelet er skeudenn anvet "ar Puñs" e Lascaux, deiziatet etre 17.000 ha 15.500 bloaz. Ar wezh-mañ n'eo ket pennoù bizon a veze lakaet war bester met penn ul labous evel hini an den goursavet ha kabellek e-kichen ar bizon gloazet gantañ. Tu a zo da soñjal en un daolenn hemolc'hiñ o teskrivañ an darempred etre ar bizon gloazet gant an hemolc'her goursavet e bed ar Vamm-spered e stumm un evn e penn ar peul totem sanket en douar.

Un trede post a zo bet meneget e pennad Shephard Krech III Native Americans and the Land, ma komz eus al lec'h kelc'hiek ma veze sanket en he c'hreiz ur peul aberzhiñ, ouzh e benn ur c'hlopenn bizon livet ha kinklet gant pluñv a veze komzet dezhañ kent al lazhadeg.

Merzout a reer diouzhtu e vez kabellek pep post gant ur penn: pe e vefe hini ur bizon e-giz en Ukraina pe e Norzh Amerika, pe hini ul labous evel e Lascaux. Lenn a reer ivez, gant Ainoued Sakhalin e oa ar post-se. O paouez omp menegiñ *unti-ináu* an Ainoued.

C'hoazh un evezhiadenn diwar-benn Indianed Amerika o tont da beurglokaat an dastumad : hini Kehoe [p. 83] adarre o komz eus ar reder touell o tastum nerzhioù spered evit kontrollañ deren ar bizoned, an nerzhioù-se o tont dezhañ a-berzh ar vaouez medisin ha kaset ganti d'ar bizoned.



Neuze, komz a reer eus medicine woman, medicine pole, totem, pester, tan, oaled. Setu ar pezh a zispleg deomp O. Nahodil :

« The West-Siberian Finno-Ugrians show quite clearly the correspondence of the image of some sort of a mythical woman—the original mother of the clan—with the image of the totem animal. They appear in figures which are, according to W. Steinitz, understood in a complex way, that is to say, both in their animal and human forms. This image shows that the mother cults have a common base with totemistic ideas. We may regard these phenomena as original forms of one and the same matriarchal cult of ancestors, which is obviously ancient—as can be clearly seen from the comparative material » (Nahodil, *in* Diószegi, 1968, p. 463).

Komzet e vo neuze eus "azeul uhelvammel an hendud<sup>118</sup>". Un tammig pelloc'h c'hoazh e c'heller lenn :

« Among the Selkups all major spirits, masters of the house, appear as feminine beings. Of great importance is the heavenly mother with her daughters, the giver of life, the old woman *lynda kota*, who sends souls to newly born people in the form of birds » (idem, p. 462).

### *Venus*

Gant an holl ziskleriadurioù-se ez eus tu da glask reiñ un displegadur hollek eus an hini ez eus tu envel da heul lavar L. Ja. Šternberg, ar "vamm tan gwerc'hgenel, den-heñvel<sup>119</sup>". Rak stag eo istor ar boud marzhus-se gant an tan damesaet a dra sur. Tu a zo da lavarout ivez ez eo an tan anien an aberzh gant ar moked a sav betek ar vamm varzhel. Debrñ a zo kemer perzh e roadur ar jiboez d'ar chaseour. An oaled a zo arouez an tiegezh, ha pelloc'h d'ar c'hlan mammlignezhel. Deraouiñ a ra an arouezelezh-se en teorikel evel-just, tro

---

<sup>118</sup> Matriarchal cult of ancestors. Hiziv an deiz e vo graet peurliesañ gant 'Mammlignezel' e-lec'h 'Uhelvammel'.

<sup>119</sup>"Parthenogenetic, anthropomorphous mother fire" (Diószegi, 1968, p. 467)

500.000 bloaz zo, pe koshoc'h zoken pa soñjer e *Homo Habilis* en Afrika, a oa evit tailhañ kef ur wezenn e stum ur peul da vout sanket en douar. Da wiriañ.

Stumm den anavezetañ Hen-Mamm, gouez deomp avat eo hini “Venus”. Met nebeutoc’h anavezet eo he stummoù loen : bizon, eln, karv-erc’h, hag ivez naer, sibelinez, gad, balafenn ... hep disoñjal an evned :

« The image of the ancestral mother is sometimes anthropomorphic, at others, zoomorphic. In certain cases it is clear that she is the mother of men and animals, and her human figure assumes also the shape of the totemic ‘animal’. It has thus been demonstrated that, in the genealogy of the religious ideas of mankind, mother cults and totemistic cults had the same basis. Through the mother cult, totemism itself becomes more intelligible. Totemism, and conceptions [like] that of the mythical ancestral mother as a supernatural protectress of the clan and of its household, the mistress of the fire, the eternal fire, as the centre and the symbol of the community of the clan, are very ancient ideas. We can assume that they go back to a period which may be called ‘Early Matriarchal Society’, or in terms of archaeology, the ‘Aurignacian Period’. Hence, it is obviously this fragmentary material which is the most suitable for drawing a parallel with the late Paleolithic cult of woman evident in the Venus sculptures » (Diószegi, 1968, pp. 473-474).

Diwar-benn Venus atav :

« Amongst the Khingan Tungus this spirit is called *golomta*. The spirit is an old female, about twenty five centimetres high, very fat, and red like fire. She must be well treated and every three years she must have a sacrifice of a domesticated buck » (Shirokogoroff, 1935, p. 129).

En arbenn da heuliad hor studiadenn e c’houverkomp e vez amzeriet an hen mammlignezelezh gant O. Nahodil e mare Aorignak, da lavaret eo 30.000 – 25.000 ans K.K. : ar c’houlzad a glot mat gant ar pezh zo bet studiet uheloc’h :

*Neanderthal* o vont da get war-un-dro gant *Homo Sapiens* o tont war wel, heuliet gant ar mongoloidi ivez diwezhatoc'h<sup>120</sup> en-dro d'al lenn Baikal.

En tu-hont d'an dra-se eo pouezus tre anaoudegezh an Henvamm evel hini an dud hag al loened. Gwelet hon eus gant Shephard Krech, diwar-benn Indianed Amerika o tisplegañ an darempredoù etre al loened hag an dud, da lavaret eo evit Indianed kompezennoù Amerika ar bizon. Pedennoù a lavarent dezho evit o gervel hag ivez kent o lazhañ e-giz pa vijent tud wiridik.

Notennet vez alies e kemer ar meuriadoù un anv ouzh o digenveziñ diouzh al loened. Kement-se a ziskouez n'eo ket bet graet an diforc'h a-viskoaz dre natur etre an dud hag al loened. D'ur mare bennak eo deuet d'an dud ne oant ket loened. Ur bazenn heverk e buhez-spered an dud, kredabl. Damesaat an tan en deus c'hoariet ur perzh bras en argerzh emichañs:

« Les Toungouses ou Evenk se donnent à eux-mêmes les noms de *Boya* (hommes) ou d'*Euveun*<sup>121</sup> »

[<http://www.cosmovisions.com/ChronoToungouses.htm>].

An doare envel-se a gaver e lec'h all ivez : kalz meuriadoù a zo anavezet diouzh an anv zo bet roet dezho gant an trevadenner, met an anv em roet gant an dud o-unan end-eeün a dalvez Den en o yezh-i alies. Da skouer *Yugit* pe *Yupigyt* e lec'h Eskimo<sup>122</sup>, *Ket* a dalvez Den, al liester *Deng* a dalvez Tud<sup>123</sup> pe broad, hag all...

Aze c'hoazh e weler ez eo forc'hellek an emskiant etre loen ha den.

Ma tistroomp bremañ da vare ar paleolitik, e vefe anat an darempred totemek e taolenn "Ar Puñs" e Lascaux, ma c'heller soñjal ez eo an evn a zo war benn ar post koulz ha war benn ar chaseour, "gronnad solwez dizanvez o tenn d'an Henvamm". Mennout a rafe an dra-se ez eo diwanet emskiant ar familh d'an nebeutañ, pe ar c'hlan marteze e spered an dud ken abred ha 17.000 pe 15.500

---

<sup>120</sup> - 200 Ka [pp. 56-57]

<sup>121</sup> (<http://www.cosmovisions.com/ChronoToungouses.htm>).

<sup>122</sup> Levin, Potapov, p. 836

<sup>123</sup> Levin, Potapov, p. 607

bloaz. Un bloaziad koshoc’h, 20.000 bloaz zo bet roet gant Vladimir N. Stanko e Paleolitik Ukraina.

Ha peogwir emamp ganti ez eus tu mont pelloc’h marteze, rak hervez L. Potapov, meneget gant O. Nahodil :

« Traces of the mother cult are discernible also in the mountain cult, which existed among the Altai until recent times. It was a pre-shamanistic tribal or clan cult, connected with a number of taboos valid for women who were taken from other tribes, in compliance with the strict principle of exogamy. The tribal mountains were represented in the anthropomorphous form of domestic spirits—the rulers of the mountains, who were imagined to be either men or women. According to L.P. Potapov, these rulers usually appeared in the shape of naked young women or girls, usually with large breasts. Altai traditions have it that these supernatural feminine mountain rulers gladly had sexual intercourse with hunters, particularly of the unmarried ones whom, in return, they endowed with luck in hunting<sup>124</sup> » (Diószegi, 1968, p. 463).

Zoken ma ne c’heller ket touiñ, ne vefe ket diskiant ijinañ ur pleg evel-se a-zivout skeudenn “ar Puñs”, a vefe diouzh doare tud ar mare-se, kentoc’h eget mont da glask displegadurioù arzel a zo kentoc’h prederioù a denn da gemplez bred-spered Europeaniz hiziv. Arabat disoñjal frazenn Shephard Krech a zlefe kemer lec’h “hud an hemolc’h”, mennout a ran : « relijion a dreuze an hemolc’h<sup>125</sup> ». Pa ne gompren ket skiantour kemplez bred-spered ar c’hornog relijion an dud a venn studial, e ra gant ar ger “hud”. Ha beleg an “hud-se” a veze anvet sorser gwezh-all, met abaoe Éliade eo deuet diouzh ar c’hiz ober gant ar ger “chaman” abalamour da ditl e levr brudet.

En Ukraina ez eus bet kavet roudoù “pester” graet gant eskern bizoned. Aze marteze e c’heller ober gant ar menoziad totem, n’en deus ket ezhomm da vezañ dalc’hmat ur peul koad evel m’hon eus gwelet uheloc’hig, zoken ma c’hell bezañ pouezus an danvez-koad gwir eo evit stagañ ar menoziad ouzh skeudenn ar wezenn ma ya an evned da gludañ war he brankoù. Koulskoude, tu

---

<sup>124</sup> Setu c’hoazh un evezhiadenn a vo tenet splet outi pelloc’h, a-zivout azeul-karv Kaledonia.

<sup>125</sup> Native Americans and the Land, p. 2

a zo komz eus ar bizon azeulet amañ evel loen-mamm, da lavaret eo al loen a ro boued d'ar c'hlan hag a zo deuet a-berzh ar spered meur a zo evel ur vamm evit an dud.

War ar marc'had e lenner “On the western plot, bison carcasses were cut up”. Ha pelloc'h : “The main part of a festivity took place on the eastern plot”. Ar c'hornog eo tu an heol o kuzhat, hag ar reter tu an heol o sevel. Anat eo, kempennet eo al leurenn gant aked evit an aberzh a zo anezhañ al lid debriñ, en doare ma teuio en-dro al loened niverusoc'h c'hoazh. Mont kuit a ra al loened [war-du ar c'hornog hag adsevel d'ar reter] ha dont en-dro e-giz ma ra bemdez an heol<sup>126</sup>, tan ar vuhez. Setu da skouer ur bedenn d'an Henvamm evit kompren donoc'h tro-spered an dud-se :

« *sangia-mama! sangia-mama!*

Hear our prayer,

Accept our offering with the blood of our animal!

For the elk which you sent us,

We bring you its head.

We all kneel

And humbly bow to you, *sangia-mama!* » (Diószegi, 1968, p. 470)

Trugarez d'an aberzhioù e oa tu da c'houlenn jiboez c'hoazh gant ar “boudig gwregel dreist<sup>127</sup>”, forzh pe anv a vije roet dezhi.

« This is for thee, *sangia-mama!*

Accept it from us, please!

Send us another elk.

May it come to the river bank

In front of my boat

And may it neither hear nor see me...! » (Ibid.)

---

<sup>126</sup> Gwregel e oa an heol gant an dToungoused, evel al loar a-hend-all.

<sup>127</sup> Diószegi, 1968, p. 470

Kevatal eo *Sangia-mama* ha *Bugady mušun* an Evenki. Aze n'eo ket bizoned met un eln a zo bet hemolc'het, ha n'eo ken kozh ha Paleolitik Ukraina. Evelato e komprenner aes a-walc'h ar prezeg : kaset e vez al loen d'ar chaseour gant ar Vamm Veur, Uhel pe Henvamm. Debret e vez al loen ha trugarekaet ar Vamm Veur en ur aberzhañ e benn dezhi e stumm un idol, a zo evel ur bodlec'h, a vo bouetaet gant e wad. E-giz-se ez eus spi e vo kaset loened all ganti.

Ar pezh a zo e kemm, evit krennañ, eo an darempred gant an Nerzh dreist, hag a c'hell bezañ danevellet evel-hen : evit ar pellañ ez eus tu da ober gant ar bomm « mamm tan gwerc'hgenel », goude er paleolitik, azeuliñ Mamm-raktud-kar (gwarezourez ar c'hlan, e diegezhioù hag an tan) = Paleolithic mother-proto-parent cult (protectress of the clan and its household and of the fire). Ha diwezhatoc'h, tostoc'h ouzhomp, ar pezh a zo bet merzet gant an dudoniourien e-touez an dToungoused da skouer, an Henvamm anvet *bugady mušun*, pe *sangia-mama*, hag anvioù c'hoazh all. Evelato e ranker paouez un tammig war *bugady mušun* rak hounnezh eo, a gav deomp, ar skeudenn dostañ evit ar mare eus hon *mathair na groidhi-si*.

An dro-spered empleget gant an doare-se gwelout ar bed a zo un emzalc'h uvel ha doujus e-tal buhez an natur.

## D. BUGADY MUŠUN

Gwelet hon eus uheloc'h e kave d'an dToungoused e oa *Bugady mušun* gwarezourez annezioù-lec'h, tud, bagadoù kirvi-erc'h ar goskoriad ha ma tifenne anezho a-enep d'an drouk-speredoù. Gwelet hon eus ivez e veze dalc'het *bugady mušun* evel azeulenn gant chamaned ar meuriadoù, ha miret ur skeudenn anezhi e pep tiegezh. Echuiñ a rae ar pennad evel-hen :

« Long ago the *bugady mušun* was the centre of attention and respect in everyday life » (Diószegi, 1968, p. 469).

Gwelet hon eus uheloc'h e oa *bugady* lec'hioù nevet ar goskoriad, a veze kevelet gant ul loen totem, henvamm. Koulskoude, hervez ur frazenn gant Nahodil e hañval an daou anv *togo mušun* ha *bugady mušun* daveañ d'an hevelep den mui pe vui :

« When sitting down to eat, the Evenki used to cut off pieces of meat and fat and throw them into the fire, saying ‘*togo mušun*, eat, be satiated, *bugady mušun*, eat, be satiated ! Eat to satiety, do not be angry with us and protect us’ or ‘make our hunting successful’, or ‘make our herd bear more reindeer’, etc. In the case of accidents and difficulties, the Evenki considered their female spirits to be their best friends and protectors » (Diószegi, 1968, p. 469).

Koulskoude, tostoc'h ouzh an tan e vefe kevelet *togo mušun*<sup>128</sup>, pa vije *bugady mušun* kevelet muioc'h ouzh douar nevet ar c'hlan enta.

E-tailh omp bremañ da ledanaat ar gaoz hag heuliañ Nahodil en e zamkanioù:

« Our material on the mother cult in Siberia goes back in many cases to remote ages and permits us to see the connections with other cults, particularly with the totemistic cults. The oldest seems to be the conception of the mythical parthogenetic mother, (ancestral parent of the clan, the ancestral mother, old woman, mother, etc.), to whom the individual clans traced back their origin, in

---

<sup>128</sup> Diószegi, 1968, p. 471

matrilinear filiation. This supernatural mother often helps women in labour, gives children their souls and sometimes even predetermines the life of a newborn child; she is represented as the protectress of children » (Diószegi, 1968, p. 473).

An evezhiadenn-mañ a zo ezhomm bras anezhi evit ket mont d'en em goll dre wenodennoù korvigellet a-wezhioù a gas d'an azeulioù totemek :

« It has thus been demonstrated that, in the genealogy of the religious ideas of mankind, mother cults and totemistic cults had the same basis. Through the mother cult, totemism itself becomes more intelligible » (idem, p. 474).

An notenn 98 e traoñ ar bajenn a zo ivez hollbouezus evidomp :

« Let us mention here that these supernatural mothers who were at the same time totems, were also, in certain cases, sacred mountains or rocks » (Ibid.)

Gwelet e vo pegen talvoudus e vo evit azeul-karv Kaledonia an notenn-se. Met evit ar mare, distroomp kentoc'h d'hor studi eus istor ar relijionoù :

« In a later period, most probably in the Neolithic, when matriarchate<sup>129</sup> flourished, further cults originated, such as the cult of earthly mother (of the clan), ruler of the earth and the world; and even the deity of the earth. Of relatively later origin are the cosmological ideas of supernatural mothers of heaven, mothers of the lower world, world of the dead, and the conception of the mother deity *torum*. Also the female shamanistic ceremonies are obviously a vestige of matriarchal ritualism » (Ibid.).

Notenniñ a reomp ez eo evit Nahodil abadennoù chamaniezh ar merc'hed, hag a zo koshoc'h e-giz ma vo gwelet eget abadennoù ar baotred, a zo aspadennoù d'ul liderezh mammlignezhel.

---

<sup>129</sup> Evel meneget uheloc'h, e vez graet hiviziken gant Mammlignezelezh e lec'h Uhelvammelezh.



Damkaniou all diwar-benn istor ar relijionoù a gavomp mat menegiñ amañ rak e taolont ur sell war krogadoù amzer ec'hon en ur zegas dezho un tammig poell ha ster :

« In that sense we can say that the cult of the Holy Virgin was not, in itself, a prerogative of Christianity, but indicates an intimate emotion which has always been, and still remains, the most important foundation of all beliefs—I refer to the universal respect of woman and motherhood, ancient as religion itself.

Matriarchate is a universal, historical stage through which the whole of mankind had to pass at the beginning of the era of clan organization before patriarchal relations evolved» (Ibid., pp. 459-460).

Ne vennomp ket lavarout emañ an holl skiantourien a-du gant ar menoiù-se<sup>130</sup>, met tachennoù enklask int evel ar re all :

« The present state of research seems to justify the assumption that the numerous Neolithic and Eneolithic female figurines represent not only the Mother Earth cult (known from A. Dietrich's monumental work) but also the cults of the mother of grain, water, mountains, etc., derived from the Paleolithic mother-*proto-parent* cult (protectress of the clan and its household and of the fire) » (Ibid., p. 460).

« Finally the cults of the oriental 'Great Mothers' (the interrelatedness of which has been demonstrated by B. Noss and A.P. Každan) definitely represent a culminating point in the evolution of earlier mother cults. It is therefore not surprising that, for instance, the cult of the old Egyptian goddess, Eset (Isis), should have been acceptable to the ancient Greeks, Romans and Germans who themselves had a number of expressions for autochthonous cults of the female principle » (Ibid., p. 461).

---

<sup>130</sup> N'eo ket hor pal el labour-mañ studial ar Vammlignezelezh dre ar bed a-bezh. A-duiñ a reomp gant an oberour evit a sell ouzh Eurazia, pe HenAzia dreist-holl.

Evit a sell ouzh tu kontrol da deorienn an Henvamm, n'eus ken prederiañ da ober : ma 'z eus bet kavet roudoù mamm-azeuliñ e-touez meuriadoù Sibiria a zo tadlignezel hiziv, e talvez an dra-se da lavarout n'eo ket bet evel-se atav, ha neuze eo deuet ar meuriadoù-se da vezañ tadlignezel goude bezañ dilezet ar vammlignezelezh, a-hed-all ne vije roudenn ebet eus an azeul-se: n'eus ket a drede hent. Ne c'heller ket ijinañ e vije diwanet a-greiz-pep tra, e lec'hioù zo, den ne oar perak un azeul-mamm, hep abeg ebet, en ur mor a azeulioù-tad.

Ret ivez chom en entremar : ne c'heller ket lavarout eo bet azeulet an Henvamm e pep lec'h kerkent ha 500.000 bloaz zo, adalek ar mare m'eo bet damesaet an tan. Derou un argerzh hir eo bet emichañs, a zo kroget abretoc'h marteze. Mat e vefe neuze en em c'houlenn petra a oa diagent, peogwir e oa anavezet an tan, hep bout damesaet ?

Dre furchal ha keñveriañ hengounioù Afrika gant re Eurazia e vefe tu tostaat d'ur wirionez bennak emichañs, an alc'hwez o vezañ *Homo erectus* pe *habilis* zoken ?

« The African finds give a vivid picture of the life and activity of primitive man. In the first place, excavations at Olduvai, where the remnants of a number of camp sites dating from different periods have been studied, have yielded an extensive collection of stone tools. [...]. These implements are called choppers and chopping tools; they were used without a handle and were gripped directly by the hand. These simple artifacts were universal chopping and cutting tools and, as special experiment have shown, could be used to cut down a tree out of which a club or a primitive spear might be made » (Piotrovsky, Bongard-Levin, 1988, p. 20).

### *Mammlignezelezh - Tadlignezelezh*

Arabat e vefe ivez komz eus “uhelvammelezh”er ster ma vez komprenet hiziv evel tu enep an uheldadelezh, met ober gant “mammlignezelezh” kentoc'h. Hen-den ar c'hlan a oa gwregel e Sibiria, da lavaret eo un henvamm, ket un

hendam evel hiziv, betek ma c'hoarvezas ar c'hemm bras, met pegoulz ha perak ?

Gwelet hon eus e oa deuet ar vaouez da vezañ e penn an oaled, an deltenn, an ti, ar c'hlan, ar meuriad, trugarez d'an tan. V. Moszyńska, en he fennad : "On Some Ancient Anthropomorphic Images from West Siberia" a zispleg deomp kement-mañ :

« In what historical period and under what circumstances could the veneration of the anthropomorphic representation of male ancestors attain such a wide expansion ?

A careful analysis of the historical development of the Ob-Ugrian clans shows that their composition changed from time to time. [...] It is remarkable that the effigies of the ancestors of the most ancient clans, and of the collateral ancestors almost invariably display zoomorphic characteristics. Among the ancestors of the more recent clans, however, zoomorphic and anthropomorphic figures can be found side by side. Sometimes certain indirect factors help us establish the age of the clans with anthropomorphic ancestors. For instance, the seven *šoχрин-ójka* brothers with anthropomorphic features are represented as blacksmiths. And we have sufficient reason to surmise that clans whose ancestors had been characterized as 'old smiths' must have originated in the early Iron Age, when blacksmiths were particularly esteemed members of a clan. [...]

From this fragmentary evidence material alone we may conclude that it was in the early Iron Age that the veneration of the anthropomorphic figures of the male ancestors became widespread<sup>131</sup> » (Dioszegi, 1968, pp. 100-101).

Da eo diwall pelec'h, pegoulz ha gant piv ? Amañ e vez komzet eus rannvro Ob-Irtysh, hag ar c'hemm-se a c'hoarvezo eno tro dibenn ar milved kentañ K.K., met e lec'h all evel e Galia da skouer, e vo abretoc'h :

---

<sup>131</sup> Gwelet e vo pelloc'h e tere mat ar menoz-mañ ouzh displegadurioù Marija Gimbutas pergen.

« The end of the first millenium B.C. was characterized, in the Ob-Irtysh region, by large-scale migrations which brought along the wide diffusion of special tools and weapons, and the growth of settlements. This was probably a period when the power of the war leaders increased, the migrations of some groups of population became more intensified, and the filial clans came into existence. It is probably with this same period that the wide distribution of the representations of the clan ancestors as human figures with metal or stone faces should be associated. We are, however, justified for more than one reason to believe that, in some cases, anthropomorphic representations of the ancestors existed already at a much earlier date. This is proved anyway by the stone sculpture of a man's head brought to light in 1957 at the prehistoric settlement Samuski IV on the Tom river, in a complex which belongs to the Bronze Age » (Ibid.).

Gwelet a reer eo deuet ar gour da vezañ e penn ar meuriad trugarez d'an tan ivez. Ar wezh-mañ n'eo ket an tan damesaet, met an tan mestroniet pe aotrouniet. Ha kement ha reiñ un deziad resisoc'h marteze, e c'heller kregiñ gant derou ar metal, rak er pennad-mañ ez eus bet graet anv eus Sibiria ar c'hornog hepken.

### *Koueorvezh*

Evit a sell ouzh ar metal e c'hellomp staliañ al leurenn. Derou labour ar c'houevr a vefe lakaet war-dro ar pevarvet milved K.K. e Mezopotamia :

« The recent English and American excavations at Ur and Kish have brought to light actual specimens and clay models of perforated copper axe-heads, dating from the IVth millenium B.C » (Childe, 1987, p.189).

Tabut a zo evel-just war deziad derou ar metal : pegoulz met ivez pelec'h ? :

« Tout le monde paraît d'accord sur le martelage du cuivre natif comme origine de la métallurgie. [...] les travaux de Renfrew en particulier inclineraient à

penser que des centres métallurgiques, au développement autonome, existaient en Bulgarie et Roumanie avant ceux d'Anatolie.

Là, les potiers capables de produire des vases de qualité maîtrisèrent très tôt le feu et produisirent des objets métalliques de qualité dès les débuts du IV<sup>e</sup> millénaire » (Milot, Thévenin, 1988, p. 260).

Amzeriad ar pevarvet milved a vo degemeret ganeomp enta evit a sell derou labour ar c'houevr er bed dre vras. Disheñvel e vo diouzh al lec'hioù ha diouzh and dud, anat. Evit a sell ouzh rannbarzh al lenn Baïkal avat eo ret mont da lenn pelloc'h.

Tremenet omp eus doareoù hemolc'hiñ tud ar paleolitik, omp deuet a-benn da gompren trugarez da vuhez Indianed hanternoz Amerika, betek an dToungoused, Mongoloidi al lenn Baïkal e Sibiria, hag o speredelezh stag ouzh o aozadur sosial, er penn anezhañ an Henvamm diskuliet en tan en oaled, stag ouzh an heol, a ro da zebriñ d'an dud. Heuliet eo bet azeul an tan gant speredoù all evel *Bugady mušun* hag a zo tost tre da *Mathair* Buile Suibhne. Anavezet ivez dindan anvioù all evel *Venus* evit an Europiz pe *Sengi mama* evit an Nanaied pe Goldi, ur meuriad all eus Sibiria. Ur stumm emdroetoc'h e vefe neuze *Bugady mušun* tostoc'h ouzh douar ar goskoriad, eget *Togo mušun* tostoc'h ouzh an tan e oaled ar goskoriad atav, ha merc'h da *ot änä* pe *kyz änä*, tan-mamm pe gwerc'hez-mamm gwezh all.

## 1.4 - SPEREDELEZH

### A. CHAMANIEZH

Evit kregiñ ganti, n'eo ket fall menegiñ en-dro frazenn O. Nahodil en e bennad “Mother Cult in Siberia” :

« Also the female shamanistic ceremonies are obviously a vestige of matriarchal ritualism » (Diószegi, 1968, p. 474).

Tu a zo da gompren e veze kent mare abadennoù chamaniezh ar merc'hed, lidoù mammligenezel, e veze ivez ar merc'hed e penn anezho. Diwezhatoc'h ez eus bet abadennoù chamaniezh a veze perzh c'hoazh ar merc'hed enno met evel aspadennoù eus an amzer gozh, peogwir e oa deuet ar baotred ar wezh-mañ da vezañ e penn framm klanel ar vuhez sosial. Neuze evit anavezout gwelloc'h petra oa al lidoù mammligenezel-se n'eus ken studial an abadennoù chamaniezh da ober, re ar merc'hed da gentañ en tiegezh pe er goskor<sup>132</sup>. An emdroadur-se en diwezh a ya da heul hini ledanoc'h ar gevredigezh o tremen eus ar vammligenezel d'an tadmigenezel. Merc'h eo an abadennoù chamaniezh d'al lidoù mammligenezel gozh aozet gant ar merc'hed er ger. Diwezhatoc'h, gant liezegezh ar vuhez kevredigezhel eo deuet war wel ur gefridi sosial nevez, an hini relijiel. ezhomm a vo hiviziken eus un den arbennik evit sevel abadennoù relijiel evit ar meuriad, a vo anvet chaman, paotr pe plac'h, hag a vezo paeet.

« According to Anisimov, the rise of shamanism thus coincides with the profound change from a matriarchal to a patriarchal social order (Anisimov 1958, 1963) » (Jacobson, 1993, p. 205).

Skoaselloù spered zo a zellez bout kompezet :

---

<sup>132</sup> Anvet eo ar prantad-se rakchamaniezh gant E. Jacobson.

« Scholars of neolithic, Bronze, and early Iron Age archaeology regularly refer to symbolic objects and systems as “shamanic”, as if one could assume that the societies of those periods were already shamanic in organization and substance. [...].

Aside from the masked images or horned figures or the battling animals of Early Nomadic art, one finds no other potential signs of shamanism anywhere within the Siberian neolithic, Bronze or early Iron Age context : no drums, no costume, none of the paraphernalia associated almost universally with “modern” shamans » (Jacobson, 1993, p. 206-207).

Deskiñ a reer diouzh lenn ar pennad kent e vez anavezet ur chaman dre e reizhoù : taboulin, gwiskamant (tog, sae), melezeur, bazh... ha ma komprener ivez diouzh lenn ar pennad n'eo ket kefridi ar chaman ken kozh hag an neolitik, seul wir a-se ne c'hell ket bezañ ken kozh enta ha “Sorserig” neved “Les Trois Frères” (Ariège) eus ar paleolitik uhel, anez kammamzeriañ ar roadoù arkeologel.

### *Dasparzh al labour*

Evit resisaat amzer genel ar chamaniezh eo ret derc'hel kont eus kemplezhadur ar gevredigezh ha spisadur al labour. Ouzhpenn an dra-se :

« The institution of shamanism thus implies a willingness to cede power to a single individual » (Jacobson, 1993, p. 207).

Pelloc'hig e teu ar penn menoz-mañ en-dro:

« Shamanic cults thus reflect a society which has accepted and reaffirmed the location of unusual power within the hands of a single individual » (ibid., p. 207).

Keit ha ma n'eo ket bet rannet al labour en aozadur sosial, ne c'hell ket ur galloud evel hini traoù ar spered bezañ fiziet en un den hepken. Daou dra zo da

wiriañ enta : prantad ar c'hemm eus ar vammignezezh d'an tadjignezezh, war-un-dro gant rannadur al labour. Selaouomp eta an arkeologour rusian A.P. Okladnikov diwar-benn emdroadur oadvezhioù arkeologel Sibiria<sup>133</sup> [S.O. Taolenn I] :

« The earliest or Isakovian stage (going back to roughly the fourth millenium B.C.) is known from material found in several graves in the Angara valley » (Levin, Potapov, 1964, p. 29).

Heuliet e vo prantad Izakovo gant hini Serovo eus ar pevare d'an trede milved K.K., ma vez kavet traezoù kevatal er bezioù ha n'eus enta na paour na pinvidik :

« In the majority of graves we find approximately the same things—a clay vessel, facings from a bow, arrowheads, polished adzes, knives, bows and arrows—usually accompanying both men and women. This is a reminder that women warriors took active part in hunting activities among a number of peoples of Siberia in the past » (ibid., p. 30 ).

An eln eo al loen muiañ taolennet:

« The burial rites of the Serovian period are an indirect indication of the close link between kinsmen and “circulation of souls”. The hunting cult of the elk was of great importance in the religion of the ancient hunters » (ibid. p. 32).

Koulskoude e dibenn ar prantad e eveshaer bezioù gant kalz madoù ha re all gant nebeut madoù:

« Alongside the burials which can be considered “average” from the point of view of the number of articles in the grave, there appear burial sites abounding in finds, and at the same time graves with very few objects.

---

<sup>133</sup> Prantadoù Okladnikov a zo bet adwelet (Michael, 1958, pp. 7-10)



The Kitoyan stage of the Baykal Neolithic (third and beginning of second millenium B.C.) is still entirely contained within the Neolithic<sup>134</sup>. No traces of metal have been observed for this period » (ibid., p. 35).

Zoken ma 'z eo disheñvel fonnusted an traezoù hervez ar bezioù, n'eus tres metal ebet, na ne gomz an oberour eus rannadur al labour ebet e derou an eilved milved K.K. e rannbarzh al lenn Baïkal.

Koulskoude, un tammig pelloc'h war an Amur izelañ tro da gKhabarovsk nepell eus kêr Osinovka e Dalc'h an Arvor<sup>135</sup>, ez eus bet kavet ha turiet gant Okladnikov lec'hiennaù pouezus :

« The most abundant and striking discoveries relating to that time were found near the mouth of the River Tetyukhe. On the high promontory at the merging point of two rivers there had once been an extensive settlement of ancient hunters and fishers.

By its cultural level this was therefore a fully developed Neolithic. It can be dated as the third or second millenium B.C. » (ibid., p. 36).

Kavet ez eus bet pripoazhadur zoken :

« The actual emergence of these settlements, in which not one but several hundreds of persons lived permanently, or at least for a long time, was due to important changes in productive forces and the economic life of the population. These tribes, one of which was located on the Tetyukhe promontory, were still not acquainted with metal and remained Stone Age people, except that they had begun showing the first signs of a new progressive form of economy—embryonic agriculture. This is shown by the numerous remains of grain mortars and pestles. Relations with neighbouring territories and countries were also strengthened and expanded. The adze, for which the semiprecious stone

---

<sup>134</sup> Pa gomz E. Jacobson eus neolitik ar Baikal e c'heller kompren, eus dibenn ar 5vet milved da derou an 2vet hini.

<sup>135</sup> Maritime province

nephrite<sup>136</sup> was used as a raw material, was brought here from the distant Transbaykal. [...] » (ibid., pp. 37-38).

Ar meuriadoù-se anavezet gant ar Chinaiz dindan an anv su-shen or hsi-shen<sup>137</sup> a veze rannet al labour kenetrezo. Pa seller ouzh ar gartenn e komprener gwelloc'h an darempredoù a c'hallje bezañ etre tud Tetyukhe e-kichen Khabarovsk, ha re an Transbaykal (d.l.e. reter Baykal) war ar ster Amur :

« The region where the ancestors of the Tungus tribes lived during the second millenium B.C<sup>138</sup>. must therefore have covered both the Baykal region and the upper reaches of the Amur, which is not surprising, incidentally, when it is considered how close these regions are and how similar are their geographical conditions » (ibid, pp.56-57).

Koulskoude ped miliad kilometr a zo etre Osinovka war beg-douar Tetyukhe nepell eus Khabarovsk ha Chita da skouer war ar stêr Ingoda e bro ar vBouriated ?

---

<sup>136</sup> Gwelet e vo pouez bras al lounezell diwezhatoc'h.

<sup>137</sup> Levin, Potapov, 1964, p. 38

<sup>138</sup> Hervez hon teorienn enta ne c'hell ket ar chamaniezh bezañ ganet kent ar prantad-se.



**Kartenn 6 : Ar stêr Amur**

[<http://upload.wikimedia.org/wikipedia/commons/thumb/f/fa/Amurrivermap.png/754px-Amurrivermap.png>]

## B. KEMM SOSIAL, KEMM RELIJIEL

Bremañ e ranker treiñ war-du istor sosial ar relijion evit kompren ar c’hemm bras zo c’hoarvezet e klanioù ar Baykal o tremen eus ar vammignezelezh d’an tadmignezelezh, rak stag eo ivez an emdroadur sosial gant menozioù relijiel, pe marzhel an dud.

Un nebeut frazennoù gant A.F. Anisimov, tennet eus e bennad « The shaman’s tent of the Evenks and the origin of the shamanistic rite » a vo a-walc’h deomp da zisplegañ ar gudenn :

« [...] it should be recalled that the concepts of the Evenks and other Siberian peoples about shamanistic spirits are derived, in our opinion, from totemism [, and] that the process of evolution of totemistic beliefs into the form of shamanistic ideology and cult was conditioned by changes in the material content of a society, and particularly in production; [...] Analysis of the norms of shamanistic ideology as a reflection of the socio-economic relationships of the society, as well as the social position and role of the shaman in the social life of the Evenks in former times, suggests that the appointment of the shaman as a specialist of the religious cult and the assignment to him of the prerogatives of “communion” with the spirits and deities were conditioned by the establishment of the patriarchal clan system and the subsequent dissolution of primitive-communal clan society, and that the consolidation of a special, privileged social position in [the person of] the shaman was, in historical perspective, the first step towards the formation of a priesthood » (Michael, 1963, p. 84).

Trugarez da zielfennadur splann an oberour<sup>139</sup>, e komprener diouzhtu eo stag kefridi ar chaman gant tremen eus ar vamm- d’an tadmignezelezh, a laka ar merc’hed dre vras da vout suj d’ar baotred mod pe vod, hag a glot gant ur c’hemm greantiñ a zo, e-giz m’eo bet gwelet a-gent, an tremen eus oadvezh ar

---

<sup>139</sup> Re splann marteze a vo kavet gant lod.

men da hini ar pri. Da skouer, en e bennad : "Early concepts about the universe among the Evenks (materials)" e komz G.M. Vasilevich eus :

« [...] the transition in Stone Age technology from stone to clay (Paleolithic to Neolithic) » (ibid., p. 74).

Adkavout a reer en e frazenn menneg an deknologiezh a gas an traoù war-raok, e-ser gant an emdroadur sosial ha bredoniel, a laka menozioù an dud da emdreiñ. Stad sosial an dud kent an emdroadur-se a oa klanel ha mammlignezhel, ha diwezhatoc'h eo deuet da vezañ meuriadel ha klanel c'hoazh met tadelignezhel, ha fiziet en un den hepken ar gefridi relijiel : ar chaman, rannet ma oa deuet al labour da vezañ, trugarez d'an deknologiezh nevez.

Studiet eo bet chamaniezh an dToungoused pe Evenki gant Anisimov. Teltenn ar shaman hervezañ n'eo ket un deltenn dister met al lec'h ma vez bev ar speredoù pe an totemoù. « E par emañ [an deltenn] da greiz totemek diagent an Evenki (*bugady*)<sup>140</sup>, [...] ».

« The mythical tree is represented as a clan tree; the concepts of the fate and life of the clan and of the welfare of the clansmen are connected with this clan tree; the clan tree is the dwelling-place of the souls of the clansmen, who, according to one variant, live in it in the form of small birds and feed on its buds, or according to another, live in a special clan nest. The clan souls form, as it were, one clan tree, the collective soul of the clan. The idea of a clan tree or a collective clan soul is connected with ideas about the ancestor-spirits, especially the ancestor-spirits of the shaman; these are thought to be beings of a dual (half-animal, half-human) nature, functionally similar to the figures of the totemic primogenitors. The "deputies" of these spirits as a rule take the form of an elk, reindeer, bear, eagle, and so on, which in this case are generalized totemic figures arising as a result of the transformation of ancient totemic cults. The shamanistic spirits (beasts, birds, fish, reptiles), subordinate

---

<sup>140</sup> Diószegi, 1968, p. 85; Michael, 1963

to the spirits of ancestors, are in origin typical totems of ancient Evenk matrilineal clans which have been changed into shamanistic spirit-helpers in the process of transformation of totemistic forms of belief » (ibid., pp. 96-97).

Hervez displegadur an oberour e komprenner ez eo ar chamaniezh un treuzneuziadur eus kredennoù totemek kozh en ur reizhiad menozioù nevez, a vez graet war o zro hiviziken gant ur shaman.

« [...] The ancestor-spirits of the shaman are imagined as living at the base of the clan tree and are associated with its base—the root, the beginning. These spirits were conceived as feminine spirits and are reflected in a generalized way in the form of the mother-mistress of the clan tree. This generalized figure is thought of in terms of a mother-beast. The passage of the shaman’s soul (at the moment he is selected by the spirits) into this tree and his reincarnation in a spirit—the animal-double—are conceived as the temporary death of the man-shaman and his transformation into a beast. His appearance on earth is conceived of as the reincarnation of beast in man » (ibid., p. 97).

Kement hag ober e c'heller mont dre ar munud en abadenn chamanizañ evit ur wezh:

« The following points are in full accord with the above : First, the idea that the shaman’s tent and the *turu* larch<sup>141</sup> standing in the middle of it, representing the shamanistic tree, are during a performance the dwelling-place of the shamanistic totem-spirits and the souls of clansmen attending it (for details on this point, see below); second, the circumstance that during the construction of the tent, this tree stands with its butt at the hearth, which is considered to be the fire belonging to the whole clan; third, the idea that the clan fire, equated with the unity of the clan hearth and the communal beginnings of clan life, is regarded as the dwelling-place of the mistress of the clan hearth (*togo mushun*, “the spirit of the fire”); fourth, that the divine mistress of the fire is thought of as the spirit [of] not only of the fire but also of the hearth, the tent, and the

---

<sup>141</sup> Gwezenn varzhel

camp, and further, as the provider for the clan and the guardian of the souls of the clansmen; fifth, that with this figure of the mistress of the clan fire and guardian of the souls of the clansmen, there is connected the concept of birth as a totemistic act of reincarnation » (ibid., p. 97).

Displegañ a ra deomp Anisimov penaos e tremen an traoù evit ar chaman e-pad an abadenn chamanizañ. Un oberezh totemel azgenel enta dre hanterouriezh mestrez an tan, an deltenn pe gwezenn ar c'hlan, da lavaret eo ar vamm-loen (eln, karv-erc'h, arz, erer) hag a zo ivez pourvezourez an eneoù d'ar groueell e kof ar mammoù a-hend-all. N'eus ken disoñjal tudenn ar "chaman" gant e abadennoù treantiñ a-benn goursevel, ha lakaat en e-lerc'h ar vamm-familh tro-dro d'an oaled e darempred war-eeün gant *togo mushun* da skouer, a zo ivez gwarezourez ar familh, evit adkavout emichañs ergelc'h lidoù mammligenezhel meneget gant Nahodil, ha miret deomp betek hiziv trugarez d'ar chamaniezh.

Kevatal eo *togo mushun* an Evenki gant *ot änä* pe marteze dreist-holl gant *kyz änä* Kizhi an Altai evel gwelet uheloc'h :

« Ideas of birth and death, understood as the result of the reincarnation of the soul, originally bore the character of purely spatial concepts : death is a journey in one direction, towards the mother, the place of birth, and a transformation into a beast. Birth is a journey in the opposite direction and the reincarnation of the totem-beast-spirit in a man. The traces of these ancient beliefs are most clearly retained in the traditional form of address to the slain bear, which the Ainus used in the rites of the bear festival. Addressing their parting words to the bear, the Ainus said that he (the bear) was about to go to the mother, by the road leading to the rising sun. There is his home. There from ancient times live people—ancestors—and from there his mother must send to men a bear like him. The words from a parting address to the bear, in which it is said that on the road leading to the rising sun, to the mother's house, his (the bear's) birds "crow-grandfathers will cry joyfully around him", bear witness to the fact that this maternal place of birth is thought of as the matrilineal settlement of a matrilineal group and that the beings living there are totems. Among the Evenks these concepts were connected, as we have seen, with ideas about the

world-tree of life, and birth, with ideas which were a later transformation of concepts concerning the totemistic centers » (Michael, 1963, p. 99).



**Skeudenn 23: Fest an Arzh, Ainou<sup>142</sup>**  
(Czaplicka, 1969, Pl. 3)

Bez e c'heller ivez treiñ war-du kentidi Aostralia evit kenveriañ gant Ainou Sibiria da skouer. Sed ar pezh a skriv Shternberg er c'heñver-se :

« The Australian considers himself a man, that is, a member of a given clan, and at the same time insists that he is the same mythical animal-ancestor from which his clan is descended; finally, besides these, he considers himself the animal which is his totem. For example, if his totem is the kangaroo, he

---

<sup>142</sup> The matting wall is hung with various implements and fetishes used at the festival. The men are eating the flesh of the slain bear. They are supposed to be the guests of the bear (*Pilsudski's collection*) (Ibid.).



considers himself in the first place a part of his clan, in the second, a kangaroo, and in the third (since both kangaroos and men are descended from mythical ancestors who were half-animal and half-human), he is at the same time a descendant of the mythical ancestor” » (Anisimov, *in* Michael, 1963, p. 98).

Deuet e vo en-dro war ar geñveriadenn etre Sibiria hag Aostralia rak hañval a ra dleout kalz d’an ideologiezh Engels-vMarksour. Arabat disoñjal n’eo ket Den Sibiria an hevelep Den hag hini Aostralia evel m’eo bet gwelet ganeomp, padal ez eo Den HenAzia an hevelep hini ha Den Amerika.

### C. HEMOLC'HIÑ

Adkavout a reomp bremañ poell hor preder diwar-benn an darempred etre al loened, a vez kaset - pe get - gant an hen-spered-mamm, ha lidoù stag ouzh an hemolc'hiñ, hag a gaver e kreiz an abadenn chamanizañ :

« The elements of the shamanistic rituals are also varied in their time of origin. The most ancient element is the magic conjuring rite of drawing the game within range of the hunter and thus ensuring its slaughter. The magical pantomimes of the shamanistic ceremonies, *shingkelevun* and *girkumki*, correspond to this. [...]. The magical pantomimes of the *shingkelevun* and *girkumki* rites are more ancient than shamanism » (Anisimov, in Michael, 1963, p. 109).


An evezhiadenn-se a gas ac'hanomp en-dro war-du pennad Shephard Krech III meneget uheloc'h :

« Certain men possessed special power or knowledge as, for example, the "chaser" or "runner" called "He-Who-Brings-Them-In" by the Assiniboins, who trolled buffaloes into a narrowing V-shaped lane and would yell and startle the animals into a panicked run toward the trap or cliff edge ».

Adkavout a reomp Anisimov a skriv ivez diwar-benn an darempred etre *shingkelevun*, hag hemolc'hiñ a vo enteuzet en abadennoù chamanizañ diwezhatoc'h :

« Carrying out the magical rites for attracting game and ensuring the success of the hunt, as we have seen, the ancient hunters strove to make themselves resemble beasts : they disguised themselves in their skins and later for the same purpose wore special ritual costumes resembling the animal in form—special caps with horns, jackets made of wild-reindeer skins, and others. In this connection the following remarkable terminology deserves attention: *samna-mi*, “to move one’s feet”; *samnasin-mi*, “to stir,” “to move”;

*samngan~khamngan*, “the skin from the legs of a reindeer”;  
*samasik~khamashik~shamashik*, “a shaman’s robe » (Michael, 1963, p. 109).



**Skeudenn 24: “Saman”<sup>143</sup>,**

[[http://hemi.nyu.edu/archive/studentwork/indigeneity/anya/final\\_paper-web.html](http://hemi.nyu.edu/archive/studentwork/indigeneity/anya/final_paper-web.html)]

Tu zo da ijinañ ne oa ket gwall bell doare “bleniañ ar bizoned en ur ganañ” (troll into) diouzh doare jestraouer hud *shingkelevun*. Kavet hon eus e veze gant meuriadoù zo Sibiria, en o zouez an Evenki pe ar Yukagir, doareoù chaseal heñvel ouzh re Indianed zo Norzh Amerika evel an Assiniboin da skouer :

« There was also a small birchbark whistle or pichavun, with which they decoyed the roe deer and musk deer. The Olekma and Amgun’ Evenks used to build fences for hoofed animals and set up self-triggering traps on them. The

---

<sup>143</sup> “A drawing entitled “Shaman or Devil-Priest”, from a seventeenth century Dutch explorer, Nicholas Witsen, portrays an Evenk shaman, performing a ritual with a drum against the backdrop of conical teepees surrounded by Siberian taiga. This is a first known drawing of a Siberian shaman (Hutton, 32).” (Performing shamanism : from wild men to businessmen / a paper by Anya Bernstein. June 2005.).

Evenks from the Podkamennaya and Lower Tunguska Basins erected long fences with disguised pits to catch elk in the gaps between them » (Levin, Potapov, 1964, p. 627).

« The Okhotsk Evenks used to hunt wild reindeer with a decoy, at the beginning of the autumn. A specially trained reindeer was allowed to join the wild ones. The decoy, with its antlers bound with a strap, used to fight the wild reindeer, which became entangled as well. The hunters lay in wait and during the fight killed the wild reindeer » (ibid., p. 628).

Bez eus ivez teknik ar buorzh a hañval bezañ muioc'h emdroet :

« In spring, the Yukagirs also hunted wild reindeer by building corrals. They selected a site somewhere on a wooded hill and surrounded it with a loosely woven net of leather strip some two meters high, leaving an opening through which the reindeer herd was to be driven in. The hunters split up in three groups. One group surrounded the corral to prevent the reindeer from scattering. Another group drove the reindeer into the area fenced off with the net, while the third and largest group of hunters ran after the reindeer and slaughtered them. Many families took part collectively in these hunts, since the net fence was put together of many parts, owned by individual households. In winter, wild reindeer were hunted with a trained decoy reindeer, behind which a hunter in clothing of whitedeer-skin stole up close to a herd of wild deer » (ibid., p. 791).

Pouezus eo notenniñ e vez graet gant buorzhoù (corrals) d'an hañv, pa vez graet gant touelloù d'ar goañv. An doare-se da douelliñ al loened hag a vez kavet en Amerika koulz hag e Sibiria, a gas ac'hanomp en-dro e-keñver kronologiezh betek 11.500 bloaz Kent Krist. N'eo ket diaes ijinañ eo bet graet diwezhatoc'h gant ur c'harv-erc'h touell embreget, kerkent m'eo bet gouest an dud da zamesaat mui pe vui al loened-se :

« Collars made of bone for decoy reindeer, dating from 2,000 to 2,500 years ago and similar to those used today, have been found on the lower Ob River.

This is evidence for the early taming of individual animals, but no excavation in the Arctic has ever found evidence for any other kind of domestication during this period » (Vitebsky, 2005, p. 28).

Ha pa n'eus ket tu dimesaat ar bizoned, ne vo ket kavet an doare hemolc'hiñ gant ul loen-touell e-touez an Indianed.

Gwirheñvel e klot al lidoù *shingkelevun* ha *girkumki* gant re an Indianed meneget uheloc'h gant Shephard Krech III, pa gomz eus : "Failure in the hunt, if not due to an impetuous hunter spoiling it for others, was easily ascribed to improperly performed ritual." (Native Americans and the Land, p. 2).

Ha pelloc'h ar frazenn-mañ ivez :

« Thus religion permeated the hunt, from ritual intended to "call buffaloes" within range, to prayers offered to the animals before they were killed » (ibid.).

## D. MERC'HED

Er meskaj etre al lidoù pe gwelloc'h etre an hoalerezh hag an hemolc'hiñ, e veze c'hoariet ar perzh pouezushañ gant ar merc'hed:

« Chez les Evenks, qui s'étendent de l'Ienisseï à la mer d'Okhotsk, la femme est l'esprit-ancêtre, gardienne du foyer et de l'abondance domestique, donc protectrice dans une certaine mesure de la chasse et des animaux (voir Abramova 1995) » (Plumet, 2004, vol. II, p. 67).

Peogwir e veze ganti ar galloud gouenniñ dre hantererezh ar spered (-mamm<sup>144</sup>) e veze ar merc'hed pilerezed an aozadur sosial, ma veze savet ar vugale ganto ha troet ar pezh a veze degaset er ger gant labour ar baotred<sup>145</sup> en ur boazhañ anezho e boued mat da zebriñ.

Trugarez d'an testeni pourchaset deomp gant Waldemar Bogoras en e levr diwar-benn ar Chukchee, ne c'heller ket mui bezañ en entremar war ar poent-se :

« An old man, one of the Eskimo at Indian Point, said to me, "It is a mistake to think that women are weaker than men in hunting-pursuits. The home incantations are stronger than those pronounced in the wilderness. In vain man walks around, searching; but those that sit by the lamp are really strong, for they know how to call the game to the shore » (Bogoras, 1904, p. 359).

Seul bouezus eo an destenabez ma ro deomp da gompren e peseurt keñver e oa ezhomm ken bras ar merc'hed er familh :

« The women prepare the sacred objects for the ceremonial, feed them with tallow, etc.: consequently the women are more expert than the men in the details of ceremonials. Even the incantations and spells which are connected

---

<sup>144</sup> Ma veze pourvezet an ene e kof ar vamm gant ar Vamm varzhel, ne veze ket engehentet ganti.

<sup>145</sup> Plumet, 2004, vol. II, p. 67

with household charms are better known by the women » (Bogoras, 1904, p. 359).

Pelloc'h :

« Among the Reindeer Chukchee, even the smallest house cannot be kept without a woman to attend to it. When a family is left without any woman, it folds up its house, and packs away the household things and the sacred objects until a female keeper of the hearth is secured by marriage » (Bogoras, 1904, p. 359).

Komprenet e vez gwelloc'h neuze perzhioù hud ar merc'hed e-keñver an tan en oaled, an hemolc'hiñ ha doare buhez an dud er paleolitik da skouer, hep disoñjal ar c'hrouelloù o eneoù pourvezet gant ar Vamm-loen, evel al loened da zebriñ da skouer. Testenioù all a zo bet roet deomp gant Bogoras, Jochelson, ha skolaerien pe skolaerezed all a gavomp mat menegiñ amañ :

« 'Women are by nature more disposed to shamanizing than men' a lavar deomp Troshchanski, meneget gant Czaplicka en he levr 'Aboriginal Siberia' » (Czaplicka, 1963, p. 198).

« 'Among the Palaeo-Siberians, women receive the gift of shamanizing more often than men. The woman is by nature a shaman.' declared a Chukchee shaman to Bogoras. She does not need to be specially prepared for the calling and so her novitiate is much shorter and less trying. Ventriloquism, however, is not practised among female shamans » (Czaplicka, 1963, p. 243-244).

An dra-se a gas ac'hanomp en-dro d'ar vammlienezhezh en tiegezh pe er c'hlan, o koll tachenn dirak an tadhignezezh douget gant emdroadur al labour e klanioù ar meuriad.

« In the process of dissolution of the matriarchal clan, the decay of old, and the formation of new tribal units, individual clan totems are raised to tribal ones and grow into spirit-lords and supreme deities, while others decline to the

status of local spirit-masters of various landmarks, rivulets, mounds, and so on. Among the generalized totemic figures, predecessors of the supreme deity among the Evenks were the Siberian stag, the elk, the bear. With the establishment of the institution of shamanism, the ancient totemic rite was transformed into a shamanistic performance and the figures of tribal totemic deities became the chief spirit-helpers of the shaman » (Anisimov, *in* Michael, 1963, p. 110).

Splann eo an emdroadur etre al liderezh familh pe vammlignezhel hag ar 'chamaniezh' a-benn ar fin, da lavaret eo un abadenn gaset da-benn gant un den gopret eus ar meuriad tadlignezhel.

« The establishment of the patriarchal clan meant the loss of mother rights<sup>146</sup>. The ideological reflection of this socio-historical process was an overthrow of the ancient matriclan deities and totem-spirits and their transfer to the world of the dead. The deities of the matriclan were transformed into mistresses of the road to the world of the dead, rulers of the subterranean world, and heads of the settlements of the dead. The ancient totemic deities—the elk, Siberian stag, bear—having become the shamanistic ancestor-spirits and beast-mothers of the shaman, moved to the roots of the shamanistic world-tree and became the shaman's spirit-helpers. The upper world was occupied by patriarchal deities, the over-all rulers of living and dead nature, with appropriate social attributes as expressions of the ideology of a patriarchal society<sup>147</sup> » (Michael, 1963, p. 110 ).

Evit galloud c'hoari perzh kozh ar vaouez en tiegezh pe er c'hlan, eo ret d'ar chaman hiviziken perc'hennañ speredoù totem, da lavaret eo dont da vezañ treantet ganto goude bezañ o galvet gant an taboulin evit gallout mont gant o skoazell dre bed ar speredoù. Mont a ra di da glask petra pe piv a zo penn-abeg

---

<sup>146</sup> Although the woman in the Sel'kup family was subordinate to the man, her status was not an inferior one; in many respects the Sel'kup woman had the same rights as the man. For example, she was able to take part in the hunting and fishing, [...] (Levin, 1964, p. 600). The Ul'chi women occupied a relatively high position in the family, although they were heavily burdened with work (Ibid., p. 730).

<sup>147</sup> Adalek Kitoy Glaskovo 1800-1300



d'an diaezamant a zo bet ret gantañ aozañ un abadenn chamanizañ evit dont a-benn anezhañ.

Er pennad-mañ eo bet adwelet meizadoù ar pennad kent en ur bouezañ muioc'h war an neuz sosial anezho, dreist-holl ar c'hemm a zo c'hoarvezet e pennoù an dud gant dasparzh al labour a c'hell bezañ lakaet da elfenn bennañ an aozadur sosial nevez dre nerzh ar vuhez o emdreñ, a laka hiviziken ar baotred e penn ar meuriad. Teknikoù nevez zo deuet war wel war-un-dro gant doareoù beziañ disparzhañ, hag ur gefridi nevez er meuriad, hini ar chaman a gemer war e chouk perzh relijiel a veze gant ar merc'hed betek-hen. Ar speredoù-mamm ivez a vo ret dezho emdreñ.

## 1.5 - TOTEMIEZH

### A. BUGADY ENINTYN

Trugarez c'hoazh d'ur pennad all gant A.F. Anisimov anvet “Cosmological concepts of the peoples of the North”, emamp o vont da dostaat d'an dudenn a zedenn ac'hanomp, hag a vefe pinpatrom gwirion *Mathair* Buile Suibhne ar wezh-mañ, da lavaret eo *bugady enintyn* :

« Among the Evenks of the Podkammenaya Tunguska, *Bugady enintyn~eninintyn* (lit. “their mother pertaining to the universe”) is imagined as the mistress of the universe and at the same time as the mother of animals and people. The Ket female deity Tomam (*am*, “mother”) is functionally similar to the *Bugady enintyn* of the Evenks<sup>148</sup>. According to Ket mythology, Tomam stands on a rock<sup>149</sup> in the spring, and, shaking her arms over the Yenisey, releases from her sleeves countless flocks of feathered birds, giving birth to them in this manner. [...]. All of these are not only mistresses of the worlds of the universe, but also mothers of animals. As V.G. Bogoraz poignantly states, even the images of such sovereign-goddesses as Cybele, Astarte, and Artemis retain these features and are always called mothers » (Anisimov, *in* Michael, 1963, p. 168).

E stumm ur vamm-eln eo bet diskuliet *Bugady enintyn* er penn kentañ :

« If the mistress of the universe, the sovereign of animal herds, and their mother, appears not only as a woman but also as an animal of a definite gender (Sedna is a walrus cow, *Bugady enintyn* an elk cow), then one may ask, wherein is the “motherhood” if each one of them retain the definite appearance of its species » (Ibid., p. 168).

---

<sup>148</sup> S.O. JACOBSON

<sup>149</sup> Menez ?

Mammelezh an hendud varzhel gentañ a zo ret evit ma ve gwirheñvel mammelezh Mamm-loen koskoriou ar meuriad :

« [...] this motif of motherhood was evidently one of the essential features of similar images in mythology and, further, [...] the image of the mother-animal at first was not applied to all animals, but only to the species of the totem-animal. And this means that concepts of the so-called mythical first ancestors, constituting the center of the entire mythology of the totemists, in all probability must have borne the image of a female spirit originally : the mythical ancestress-animal » (idem, p. 169).

Ne vo ket diaes da gompren e vo kollet he ferzh mammel gant al loen-mamm, (d.l.e. *totem* an Henvamm), kerkent ha ma vo merket an nesañded n'eo ket dre ar vamm met dre an tad.

Evit kompren gwelloc'h menoziad ar Vamm-loen, e c'heller mont da glask an displegadur war-du henvroidi Aostralia, ma vo graet anv kentoc'h eus "hendud gentañ *totemek* ", evel m'hen displeg deomp Anisimov :

« According to the mythology of the Australians, the totemic first ancestors were beings of a dual, anthropomorphic-zoomorphic nature, which they sometimes combined in themselves at the same time, and sometimes could change alternately, i.e., they could adopt completely an animal or a human form. These mythical beings; which were at the same time humans and animals, humans and birds, humans and plants [...] » (Ibid., p. 179).

Ar boudoù-se a oa daouel o anien, den pe loen, an daou zoken, hag a zo e penderou an natur hag ar gevredigezh :

« The origin of both was conceived as a natural differentiation of the primary dual nature of the first ancestor(s), which, according to the mythology of the Australians, he could change alternately. After his wanderings, each of the first ancestors descended into the ground, and the place where he entered became the totem center. From this totemic center the totem spirits emerged and

embodied themselves in the descendants of the original totemic ancestor (...) » (idem, p. 179).

Evit ma ne ve paouez ebet en heuliad adenkorfañ, e save an Aostralianiz abadennoù en o c'hreizzennoù totemek evit rediañ ar speredoù-totem da zerc'hel da adneveziñ ar vuhez.

Keñveriañ an daou sistem a zo un dra vat da ober, paneveken evit merkañ ar perzhioù zo heñvel etre an daou sevenadur. Arabat e vefe koulskoude ober e-giz pa vije kevatal an daou sistem rak bras eo ivez an diforc'h etre an daou ved, Aostralian ha Sibirian.

E Sibiria da skouer ne gaver meneg ebet eus :

« ur prantad kentidik, diagent bezañs an den, pa veze an douar annezet gant boudoù a oa kentpatromoù ar meuriadoù henvroat, met o deveze ur galloud hud kreñvoc'h eget o hini » (Lévy-Bruhl, 1963, p. 89).

Na ne gaver meneg ebet ivez eus an hendud, tadoù- pe mammoù-kozh adenkorfet. E Sibiria e kaver e-touez ar meuriadoù a zo bet studiet ganeomp emziskouezadur speredoù e stumm-mañ-stumm, loen pe struzh a zo war-un-dro henspered pe mamm-gozh an oaled, ar c'hoskor pe ar meuriad. Tadoù-kozh a gaver ivez, met ne vije ar re-mañ a-hervez met gourelekadur marzhoniezh an dud, da heul hini ar gevredigezh. Abalamour d'an dra-se e komzomp eus gwerc'hgeneliezh mamm spered ar meuriad, a gemer lerc'h prantad kentidik *Alcheringa* meuriad Arunta Aostralia. Gant an dTougoused pe ar gKeted zoken ez eo ar c'harv stumm emziskouezet ar vamm-spered-se, da heul an eln. Diaes eo lavarout e komzer eus an hevelep totemiezh.

Ober a ra dave Shirokogoroff d'ar pezh a vez anvet 'animouriezh' gant tud kemplez bred-spered Europa, goude bezañ displeget a-ziagent e oa ret kaout disfi ouzh ar c'hemplez-se en e zarempredoù gant sevenadurioù pell diouzh e zoare soñjal [pp. 74-75] . Setu da skouer ar pezh a vez lavaret gant ur skiantour all eus an hevelep kemplez bred-spered Europek:

« Une représentation « animiste » du monde est à la base du chamanisme. Elle est issue de l'expérience de chasseurs-cueilleurs vivant en symbiose avec la nature, dans des sociétés peu ou pas hiérarchisées, dont chaque unité familiale dispose plus ou moins de la totalité des compétences techniques et intellectuelles nécessaires à son existence. Il n'y a guère de division des tâches, si ce n'est entre les sexes. L'animisme projette sur les éléments de la nature ce que les hommes perçoivent de leur propre psychisme.

L'être humain, surtout s'il appartient à une société de chasseurs-collecteurs, se sent comme partie constituante de la nature au même titre que tous les autres éléments qu'il en discerne et avec lesquels il lui est donc possible de communiquer par l'esprit » (Plumet, 2004, p. 72).

Pa vo studiet sevenadur ar Val Kamonika e vo komzet adarre eus doare-gwelout ar bed gant tud an aremvezh, met diagent e c'heller evezhiañ n'eo ket stag an doare gwelout anvet "animouriezh" ouzh ar chamaniezh, met e-giz lavaret gant an oberour ouzh un doare bevañ, amañ hemolc'hiñ. An doare-bevañ-se a emdroio hag en aremvezh e kemmo. Kement-se evit lavarout adarre

e vez kavet c'hoazh hiziv doareoù animouriezhel da welout ar bed pa vez komzet gant unan bennak d'ur c'heflusker karr-tan da skouer. Kemplez bred-spered Europa a ra dave d'ur patrom a vez sellet ouzh ar bed hervezañ. Abalamour d'an dra-se e ranker kaout disfi ouzh ar c'hemplez-se evel a zispleg deomp Shirokogoroff, seul vui ma n'eo ket gwall gozh ar chamaniezh, padal evel displeget gant an hevelep oberour dindanoc'h, ar gredenn en eneoù a c'hell distreiñ betek Neanderthal. A-benn ar fin ne ziskouez ket kalz tra ar ger "animouriezh" paneve diskouezh eo disheñvel doare-gwelout ar bed gant an dud-se diouzh hon hini Europek n'eus ket ezhomm da dermeniñ zoken peogwir eo anavezet ganeomp:

« Même s'il apparaît de plus en plus que des raisons politiques et identitaires ont délibérément prévalu, au début, dans l'élaboration du monothéisme transcendant, la métaphysique sur laquelle il repose continue de se développer dans les civilisations occidentales issues du judéo-christianisme en s'opposant jusqu'en ce début de XXI<sup>e</sup> siècle aux métaphysiques premières issues du Paléolithique » (Plumet, 2004, p. 183).

Met gwelloc'h eget displegadurioù filozofel, n'eus ket gwelloc'h da ober met daveañ da oberenn vrudet ar filmaozour japanek Akira Kurosawa anvet Dersou Ouzala, ur Gol'di (Nanay) anezhañ, ma weler an daou sevenadur keñver-ha-keñver, ha ma komprener, ma vez graet "animouriezh" eus doare bevañ Dersou, e ranker ober "dianaoudegouriezh" eus hini ar Rused er film.

Ar pezh a anvomp-ni « animouriezh » en deus da ober gant ur menoziad ledanoc'h a sell ouzh bed ar speredoù e-touez an hemolc'herien. An dotemiezh a vefe an doare kentañ da frammañ kevrin an hollved-se.

### *Ar Speredoù*

Neuze, pegen kozh eo menoz ar speredoù?

« Indeed, the moment of the appearance of the first idea of spirit must be brought to the time when no Tungus as an ethical unit existed, for theoretically

it is but a short step from the idea of managing the souls of dead people to the idea of their free post-mortal existence, which makes absolutely hopeless the search for establishing the origin and consequence of hypotheses regarding the spirit complex » (Shirokogoroff, 1982, p. 119).

Koulskoude, en ur c'hoari gant hor roadoù henouennoniel, e c'heller dezastum un nebeut traoù:

« Indeed, it ought to be pointed out that the « origin », in the sense of the first creation of this idea, may be supposed to be very old since the idea of soul was known to the hypothetic ancestors of the present man—*Homo Neanderthalensis*, who did practise burial » (Ibid., p. 55).

Kement-se a redi ac'hanomp da sellout a-dostoc'h ouzh an dammenozioù-mañ:

« But what is essential is that the immaterial substances [life, reproductive power, soul] as they are manifested in the different functions of the animal (and human) organism may be exteriorated and thus returned to the bodies in which they were originally placed, or remain exteriorated for ever, or place themselves for a time in any other physical body. For the convenience of explanation I will call the body, in which the exteriorated immaterial substances of this type may be placed, *placing*, or *loculus*. When they are in such exteriorated state and the former locus is destroyed, e.g. by the decomposition of the body after the death, burning, any mechanical destruction etc. they may chose any other new locus. In such a state they become a special group of phenomena which have no general name in Tungus languages and which may be called SPIRITS » (Ibid., pp.54-55).

Ret eo lavarout diouzhtu eo amaes lakaat kemm etre speredoù hag eneoù, seul vui m' eo aet an oberour da glask ur ger e lec'h n'eus ket er yezhoù Toungousek. Speredoù hag eneoù kerkoulz a zo solwezioù dizanvez. Pourvezet e vez an eneoù d'ar grouell e korf ar vamm gant Hen-Mamm peotramant Mamm-Loen ar meuriad. Boaz ez a kuit an eneoù o-unan er bed all, hep na ve ezhomm ur treizher-eneoù d'o c'has eno:

« The souls of dead people used to reach the other world without any special intervention on the part of the shamans, [...]. The intervention of the shamans was needed only in the case of a reappearance of the souls in the form of spirits, and in the case when the souls of ancestors were already settled in the other world, but needed some attention on the part of living people » (Ibid., p. 218).

Dedennus eo evelato menegiñ an doare ma vez graet war-dro un ene e-touez ar Gold'i pa vez ezhomm an ene eus un treizher-eneoù evit mont en tu all :

« As an interesting peculiarity of the Goldi, it may be also noted that they use a dog instead of a reindeer or horse. The dog's skin is put in front of the tomb and the soul of dead person travels on it, i.e. dog's soul. However, we have already seen that the dog in its connexion with the souls is not met with only amongst the Goldi » (Ibid., p. 217).

Met muioc'h-mui ez eus ezhomm ur chaman evit ambroug an ene:

« The shaman is the psychopomp who escorts the souls of the dead to their new realm in the other life. This is a most important task in many cultures, for instance among the Goldi at the Amur river, among whom the shaman also directs the memorial ceremonies for the dead. As in the 'soul-loss' therapy the shaman dispatches his free-soul to accompany the dead person » (Hoppál, c1996, p. 11).

Ar pezh a vez anvet spered gant Shirokogoroff a zo solwezioù dizanvez o tiskouez er bed-mañ a vare da vare, hag a zo ezhomm ur chaman evit ober war o zro pa vez kudennoù, o c'has er bed all pe kavout un annez evito, anez bout hegaset ganto. Ret eo lavarout ivez, eneoù tud zo, chamaned vras da skouer pe tud veur ar meuriad, a c'hell dont da vezañ speredoù :

« According to the Tungus idea, the spirits are immaterial, they cannot be seen unless they take special form, they may influence physical bodies, they produce various sounds, they possess all human characters, including feeling of

temperature, hunger, anger, gratitude, emotional excitement, and so forth. Thus the spirit is like the human being, only it cannot be perceived with sight, touch, smell and taste. Since the spirits are supplied with all these characters they may be treated in the same way as human beings are treated » (Ibid., p. 55).

Un doare frouezhus da eskemm gant ar speredoù eo aberzhiñ dezho:

« It ought to be noted here that the Tungus regard smell, evaporation, smoke, etc. as immaterial in their nature and thus as « substances » which may be easily assimilated by the spirits » (Ibid.).

N'eus ket tu da gompren an dud-se hep un nebeut diazezoù:

« In fact, the Tungus may observe the presence of soul and its exterioration on themselves and on the other persons as well as animals. The man during his sleep may « go » to a long distance for seeing his friends or some region. The visit would appear a reality for after the « travelling » the dreamer may be « tired », yet the physiological effects and behaviour after the dream may be quite real » (Ibid., p. 117).

*An eneoù*

Hiziv an deiz eo diaes gouzout ped ene o deus an dToungoused. Gouzout a ouzer gant an enklaskerien ez eus daou ene gant Indianed Amerika an hanternoz:

« What is certain is that in its most typical form, soul-dualism demonstrates reciprocity between free-soul and life-soul, represents the oldest form of soul-belief in North America up to the Christian mission period (and frequently enough even up to our own days), and was the most general form of soul belief in North America » (Hultkrantz, 1977, p. 48).

Diaes eo gouzout ped ene a zo gant un Toungouz peogwir eo bet levezonet an dachenn-se gant kredennoù boudaek, met ur penn-ene (emskiant) en deus, un ene gouenner, hag un ene kantreour<sup>174</sup>:

« Indeed, this conception of soul [trifleg] is not originally a Tungus conception, — it is one of numerous modifications of the vulgarized Buddhistic conceptions which reached the Manchus through the Chinese and Central Asiatic groups » (Ibid., p. 52).

Bezañ ma veze pourvezet an eneoù gant ur Vamm-spered, ez eus tu da ijinañ ne oa ket ezhomm eus an ene gouennour, ha neuze er penn kentañ e veze daou ene hepken: ur penn-ene<sup>175</sup> hag un ene kantreour, evel ar reizhiad Amerikan koshañ. Setu da skouer talvoudegezh an ene kantreour<sup>176</sup>:

« In fact, before falling asleep the Tungus express their desire of seeing distant places and people. If the dream occurs the fact is interpreted as a voluntary direction of the soul. The practice of conscious loss of consciousness practised by the shamans and candidates to become shamans gives hundreds of facts which confirm the hypothesis of the existence of the soul » (Ibid., p. 118).

Evel-just evit dont a-benn da seveniñ oberoù evel ar re-se e rae ar chamaned gant a bep seurt binvioù a skoazelle anezho da goll skiant gant gouzout, dreist-holl e lec'h ma chom bev ar chamaniezh hiziv-an-deiz:

« Shamanism in its flourishing state may be observed northward from Mongolia and Manchuria. [...]. It is very insufficiently developed among the palaeoasiatics of North Eastern Asia—Gilyaks, Chukchis, Koryaks and others. Among the Turkic and Ostyako-Samoyeds shamanism is very developed, but among the Finno-Ugrian groups of Europe it is in a state of decline. At the present time there seem to be two centres of shamanism, i.e. in North Eastern Siberia and Manchuria represented by the Tungus groups and in North Western

---

<sup>174</sup>Shirokogoroff, 1982, p. 52

<sup>175</sup> Body soul

<sup>176</sup> Dream soul

Siberia represented by the Turkic and Ostyak groups » (Mironov, Shirokogoroff, 1924, p. 123).

Ne vez kavet ar melezour arem ha pezhioù all ar gitaj eta nemet e-lec'h m'eo kreñv ar chamaniezh, da lavaret eo e-touez an nevez-Sibirianiz evit ober gant termenadur Czaplicka : strolladoù Tungus Sibiria ar biz ha Manchuria, rak an ergerzourien vrudet evel Bogoraz pe Jochelson o deus studiet meuriadoù hen-sibirianiz dreist-holl : Chukchee pe Koryak.

Desket hon eus ober gant lidoù-mamm da gentañ, heuliet gant abadennoù chamaniezh, a oa ret evit o c'has da benn rikamantoù a-ratozh evel da skouer ar melezour evit an teoghun, an taboulin, ar c'hoef pe an tog. An holl draoù-se a zo deuet tamm ha tamm hag ar sammad eo eus an holl draoù a ya da ober ar chamaniezh e-giz m'eo bet dizoloet er XVIIvet kantved. Ganet eo bet tro al lenn Baïkal a-gent ar boudaegezh hag al lamaegezh, hag en em ledet etrezek an norzh hag ar c'hornog. Kreñv eo bet dreist-holl e-touez an nevez-Sibirianiz. Seul vui ez eer pell eus kreiz al lusk chamanel-se seul vui e tigrisk unvanded ar gitaj, kement ma n'eus ket tu ken hervez Shirokogoroff da ober gant ar ger chamaniezh e gwir. Seul vui e pellaer diouzh al lenn Baïkal en ur dostaat d'an hen-sibirianiz, seul vui e tiskouez a-zindan ar gwiskad chamaniezhel lidoù gwezhall renet gant ar merc'hed. Sellomp ouzh an taboulin da skouer.

### *Taboulin*

« The development of the drum as to its size and complexity of construction is evidently decreasing, if we follow it from the west to the east and from the south to the north. The centre of drums seems to lie somewhere around the Baikal Lake » (Mironov, Shirokogoroff, 1924, p.126).

Adalek ar mare ma 'z eus taboulinoù gant Indianed Norzh Amerika, nemet e vefe un taboulin disheñvel, e c'heller soñjal n'eo ket ur benveg nevez dreist-holl pa vez sonet gant ar merc'hed :

« In accordance with the dual character of the drum, as a musical instrument and as a sacred object in the household, it is not exclusively used for ritual purposes. Every member of the family may beat the drum. It is beaten for amusement, for enchantment, for propitiation of the gods, for summoning spirits, and also during family and ceremonial festivals. In every family, however, there is one particular member who becomes especially skilful in the art of beating the drum, and who officiates at all the ceremonies in the series of festivals. Women usually excel in the art of beating the drum (Plate III). [...] At the top edge of the rim are attached iron rattles such rattles to-the drum has been borrowed from the Toungus. Not all of the Koryak drums that I saw had iron rattles » (Jochelson, 1905-1908, p. 56).



**Skeudenn 27: The Koryak**  
Jesup North Pacific Expedition. Vol. VII

An hevelep talvoud a gaver e-touez an Chukchied war ar mor Habask :



« With the Kolyma Chukchee the drum is considered of less importance than the fire-board and charm-string. On the Pacific side the reverse is true. There the drum is called the “voice of the hearth”, and it is more difficult to obtain a drum which has been in use than to get a fire-board » (Bogoras, 1904, p. 359).

### *Idakon*

Kement tra ez eus tu da lavarout diwar-benn an taboulin ez eus tu ivez da lavarout diwar-benn ar ger “chaman”, n’eo met ur ger e-touez gerioù all, o stummoù disheñvel a-wezhioù, implijet evit envel ar gefridi-se. Er c'hontrol, e-touez ar meuriadoù n'eus nemet ur ger evit envel ar chamanezed :

« Among the Mongols, Buryat, Yakut, Altaians, Torgout, Kidan, Kirgis, there is one general term for a woman-shaman, which has a slightly different form in each tribe : *utagan*<sup>177</sup>, *udagan*, *udaghan*, *ubakhan*, *utygan*, *utiugun*, *iduan* (*duana*); whereas the word for man-shaman is different in each of these tribes. In Yakut he is called *oiun*; in Mongol, *buge*; Buryat, *buge* and *bö*, Tungus, *samman* and *hamman*; Tartar, *kam*; Altaian, *kam* and *gam*; Kirgis, *baksa* (*basky*); Samoyed, *tadibey* » (Czaplicka, 1969, p. 198).

« Women shamans were called "utagen" which means "hearth (or fire) woman" and indicates the original importance and probably original separate functions of the women shaman - who could be more powerful than a man » (<http://www.cosmicelk.co.uk/MedievalSiberia-1.htm>).

Kavet hon eus un displegadur ne ziglot ket diouzh an hini kent :

« [...] but *utagan* seems to be a Mongol word in origin. According to Potanin and Banzaroff, the term in question is etymologically connected with the Mongol word *Etugen*, ‘earth-goddess’ (*Etugen-eke*, ‘mother-earth’) » (Czaplicka, 1969, p. 244).

---

<sup>177</sup> *Idakon* (Mankova Nomad Tungus, South Eastern Transbaikalia) (Urulga Nomad Tungus) — the female shaman; cf. *odakon*, *idokon*, *odoyan*

Evit kompren gwelloc'h e ranker lenn an dra-mañ ivez:

« In one Tartaric dialect *utygan* means 'bear'. According to ancient Mongol and Chinese myths, the gods of certain constellations are connected with the protective spirits of the family hearth, just as they are connected with the goddess of the earth. Thus these terms for female shaman are related to the genesis of certain goddesses » (Ibid., p. 244).

Amañ e weler an daou veizad, hini an oaled hag an douar bodet e anv ar vaouez a ya e darempred gant ar speredoù. Ar gefridi-se a veze graet er goskor, er gêr, en tiegezh, padal micher chaman ar baotred a vez graet evit ar meuriad a-bezh. Ouzhpenn-se, Jochelson, an denoniour brudet a zo ali e tiwan ar chamaniezh dre vicher diouzh ar chamaniezh er gêr<sup>178</sup>. Kement-se evit lavarout ez eus tu da zigenveziñ ar pezh hon eus-ni anvet 'chamaniezh' diouzh ar 'rak-chamaniezh' evel-hen: ar rak-chamaniezh, hag a zo merc'h da lidoù koshoc'h, a veze graet er gêr gant ar merc'hed. Heuliet eo bet<sup>179</sup> gant ar chamaniezh evit ar meuriad, meret gant ar baotred, diouzh o micher.

Unvaniezh kefridi ar merc'hed a ziskouez ez eo koshoc'h eget hini ar baotred, da lavaret eo koshoc'h eget an tadrignezelezh, a zo c'hoarvezet e-pad ar prantad Glazkovian, etre 1.700 ha 1.300 Kent Krist. An hevelep menoz a gaver ivez diskanet gant G.M. Vasilevič :

« Thus, the terminology for 'shaman', 'to act as a shaman' shows :

[...] Inheritance of ancient, pre-shamanistic traditions, by the shamans (appeal to fire; eating of, and censuring with, grease; transmission of the whole tradition and folklore) and a certain southern influence in the development of Tungusic shamanism.

Attributes of the shaman, such as a scoop similar to the shaman clapper (find from Anosovsk) and anthropomorphic representations<sup>180</sup> on the chest of the skeleton (find from Ust-Udinsk) permits us to speak of a nascent shamanism in

---

<sup>178</sup> Czaplicka, 1969, p. 245

<sup>179</sup> Adalek prantad Tagar (Taolenn II) gwirheñvel. Forzh penaos adalek 200 K.K. anat.

<sup>180</sup> S.o. p. 156-157

the Glazkov period of the neolithic around the Lake Baïkal » (Diószegi, 1968, p. 341).

Ar prantad-se anvet gant Vasilevič "chamaniezh o c'henel" a ra deomp ledanaat hor sell war lidoù relijiel an amzerioù-se a c'heller krennañ evel-hen : ma c'heller komz diogel eus chamaniezh ken abred hag eil hanterenn ar milved diwezhañ Kent Krist, ne c'heller ket bezañ hep anaout ur prantad kent anvet rakchamanel ganeomp, a grog d'an nebeutañ ken abred ha prantad Glazkovo. Ar merc'hed avat a vez sellet outo c'hoazh hiziv evel 'chamanezed' dre natur :

« *The Kamchadal (Itelmen)*. Among the Kamchadal there is apparently no shamanistic garment or drum. Two early travellers to their country, Steller and Krasheninnikoff, say that everybody, especially women, could shamanize, and hence this occupation was not professional enough to demand a special dress » (Czaplicka, 1969, p. 209).

« Among several tribes traditions exist that the shaman's gift was first bestowed on woman. In Mongolian myths goddesses were both shamans themselves—like the Daughter of the Moon—and the bestowers of the shamanistic gift on mankind » (Czaplicka, 1969, p. 244).

A-walc'h e vo deomp un nebeut menegoù ouzhpenn evit adkavout ar pezh hon eus gwelet diagent a-zivout ar merc'hed, an oaled, ar bagadoù loened, hemolc'hiñ, h.a.

« All sacred objects of the household, as well as the house itself, are in the care of the women. The Reindeer Chukchee call the woman of the house the "hearth-keeper." The women prepare the sacred objects for the ceremonial, feed them with tallow, etc. : consequently the women are more expert than the men in the details of ceremonials. Even the incantations and spells which are connected with household charms are better known by the women » (Bogoras, 1904, p. 359).

Re anat eo ivez, evel m'eo bet srivet uheloc'h, e oa tiegezhel ha gwregel ar rummad lidoù-se rak-chamanel :

« Family shamanism is connected with the domestic hearth, whose welfare is under its care. The family shaman has charge of the celebration of family festivals, rites, sacrificial ceremonies, of the use of their charms and amulets, and of their incantations. Some women possess, besides the knowledge of incantations which are a family secret, that of a considerable number of other incantations, which they make use of outside of the family circle for a consideration » (Jochelson, 1905-1908, p. 47).

Evit mat hon enklask e rankomp pouezañ un tammig war an darempred etre an oaled hag al loened gouez :

« The hearth is closely connected with the herd. The chief ceremonial of the year, held early in the fall, represents the meeting of hearth and herd after the summer's separation. A large sacred fire is built, and the animals are driven to it from the leeward side, so that the breath of the fire may drive away the evil "spirits" that might come with the herd from the wilderness. For the same purpose, burning fire-brands are thrown against the reindeer » (Bogoras, 1904, p. 349).

Meneget eo bet uheloc'h "Gouel an Arz" [p. 108] :

« The Bear Festival. — When the bear is brought to the house, the women come out to meet it, dancing, with fire-brands. The bear-skin is taken off with the head; and one of the women puts on the skin, dances in it, and entreats the bear not to be angry, but to be kind to them. At the same time some meat is put on a wooden platter, and they say, "Eat, friend !" » (Jochelson, 1905-1908, p. 88).

Tu a vefe astenn niver ar menegoù hon eus kavet. Diezhomm e vefe rak kavout a ra deomp ivez, a-gevret gant Waldemar Jochelson :

« There is no doubt that professional shamanism has developed from the ceremonials of family shamanism. The latter form is more primitive, while the functions of professional shamans somewhat resemble those of priests » (Jochelson, 1905-1908, p. 48).

N'eus arvar ebet ez eus bet a-gent an daou brantad hon eus lakaet war wel, rak-chamanel (etre 1.700-1.300 ha -700) ha chamanel (adalek -700) ur prantad all a lidoù-mamm, kent-chamanel, ma veze ar merc'hed e penn al lidoù lies stag ouzh an tiegezh, an oaled, al loened, an hemolc'hiñ h.a.

E-pad ar prantad-se ma krede an dud en eneoù hag er speredoù, hag a zo diaes da dermeniñ resis met a c'hell bezañ kroget en teorikel kerkent ha m'eo bet damesaet an tan, tro 500.000 bloaz zo eta, eo deuet war wel menoziadoù henvammel ha totemek gant “mamm tan gwerc'hgenel denheñvel”, o kregiñ gant speredoù an tan hag oc'h echuiñ gant *Bugady enintyn* da skouer e-touez an dToungoused.

E dibenn ar prantad hendud dotemek-se eo, ez eus bet ur prantad all e istor emdroadur buhez relijiel ha sosial meuriadoù Sibiria, ma veze ar merc'hed o seveniñ er gêr abadennoù mont e darempred gant ar speredoù. Er mare-se<sup>181</sup> eo e c'houlakaomp, e vije bet graet anv eus suward ar vamm-loen dotemel a lonk hag a ro buhez, *Bugady Enintyn*. Ur gwaz zo bet lakaet dezhi gant an dud e-giz pa vije o kregiñ dibenn ar prantad hir mammligenezel. E-pad ar prantad-se rak chamanel, betek sevenadur Glazkov<sup>182</sup>, e lakaomp an darvoud a zedenn ac'hanomp, da lavaret eo azeul ar c'harv o tremen eus Sibiria da Europa, anavezet evit ar wezh kentañ e Maikop<sup>183</sup>.

Dougerien ar menozioù-se o dije kuitaet o bro e tro ar mareoù-se hag en em gavet kalz diwezhatoc'h evel-just en Inizi Breizh Veur, ken na vo lakaet dre skrid o c'hredennoù pagan en un tanager anvet Buile Suibhne... ar veaj-se emaoomp o vont da studial en eil rann.

---

<sup>181</sup> Kitoi a vefe deuet mat deomp

<sup>182</sup> 1.700-1.300 K.K.

<sup>183</sup> 3.000 K.K.

Goude spurmantet derou gallus ar chamaniezh abaoe m'eo bet diboufet roudoù kentañ dasparzh al labour war ar ster Amur, gant prierezh hag hadoù e-barzh kampoù ma veze lodennet al lec'hioù labour gouez da Okladnikov, hon eus gallet pleustriñ da vat ar c'hoarvoudenn relijiel-se ha klask he amzeriadañ ar resisañ m'hon eus gallet trugarez da orin ar ger "chaman", hag ivez dont war wel ar metal. Chomet omp a-du gant prizadurioù E. Jacobson hag he eil hanterenn eus milved diwezhañ K.K., met peogwir hon eus kavet ne oa ket ar plakennoù askorn kavet en ur bez eus mare Glazkov gant Okladnikov re ur chaman met un Oudagan hon eus kavet mat, da heul E. Jacobson, diawelout ur prantad kenetre rak-chamanel betek Tagar ma vije bet c'hoazh ar perzh relijiel-se etre daouarn ar merc'hed, da heul ur prantad all kent chamanel ma veze aozet lidoù gant ar merc'hed er goskoriad. Da c'houdevezh hepken hervez hor studiadenn e vije deuet ar gefridi relijiel-se da vezañ meret gant ar baotred goude bezañ dizoloet labour ar metal, efedus kenañ evit treant ar chaman en deus ezhomm kalz reizhoù, kontrol d'ar merc'hed, evit dont a-benn da c'housevel.

*Bugady Enintyn* an dToungoused enta, da lavaret eo "Mamm an hollved", a vefe rann eus ar prantad rak-chamanel deskrivet uheloc'h, e kerz ar merc'hed, met ezhomm e vije pourveziñ anezhi gant ur suward evit he bagadoù kirvi pe loened all, hag an darvoudenn-se a vije e-giz deroù-deiz ar gourelezh er bed relijiel-se meret c'hoazh gant ar merc'hed. War an amzeriadañ e c'heller soñjal e prantad Serovo-Kitoï (Taolenn 1) eus an neolitik adalek an trived betek derou an eilved milved K.K., pe ivez e prantad Serovo skol-veur Alberta (Taolenn 2). Diaes eo bezañ resisoc'h war ar pezh n'eo evit ar mare met disorc'h ur ratozh poellek, a zegouezh peurvrat evelato gant tresoù siell Maikop koulzadet gant Nekhaev e tri mil K.K. Ne oa ket echu gant ar monedonea etre Europa hag Azia d'ar mare-se rak padout a raio betek 2.400 K.K.

## EILVET RANN:

### EURAZIA

#### **2.1 - STEPINIER**

Peogwir eo bet ret da vitologiezh an dud beajiñ ganto, eo deuet ar poent deomp ensellout penaos e vije aet "suward dizanv *Bugady enintyn*", da lavaret eo Suibne lesanvet *Fer Benn* gant oberour an tenergan, betek Inizi Breizh Veur. Hep mont da glask pemp troad d'ar maout ez eus tu da ijinañ daou ziskloun d'ar gudenn. Unan a zaou, pe eo bet ganet ar mitem e kondonad Breizh-Veur, pe e vije deuet da vBreizh Veur eus a lec'h all, da lavaret eo Sibiria. Anatoc'h e hañval bezañ al lavarenn gentañ eget an eil hini, koulskoude, daoust ma'z eo c'hoazh nebeut anavezet, ez eo deuet eus ar reter Mongoloided a-vesk gant Europoided da ensilañ "Europa Gozh", hag ober dezhi treiñ da Europa Indez-Europek, kement-se ken abred ha 4.500 - 3.000 Kent Krist. Met kent tabutal diwar-benn Europa e rankomp distreiñ da Sibiria.

Da gentañ, daoust hag-eñ ez eo gwir neuze e vije aet tud eus Sibiria betek Europa? Daoust ha posubl eo ha pegoulz ? Ober ar goulenn-se a dalvez kement ha prederiañ diwar-benn kudenn an Indez-Europiz na mui na maez, zoken ma n'eo ket an divoud-se en resis pal al labour-mañ. Meur a desteni zo da gentañ diwar-benn ul luskad Europoided adalek ar c'hornog betek ar reter. Evit digeriñ an diabellwel e c'heller menegiñ ar frazenn-mañ gant J.P. Mallory :

« The eastern border of Proto-Indo-European is insecure, at least in the fifth and early fourth millenium BC. It may be that future work east of the Urals will uncover cultures genetically related to those of the Volga-Ural region, and that we will be impelled to extend our interaction sphere to the east. But, for the present, the archaeological picture suggests an expansion eastwards across the steppe and forest-steppe of western Siberia beginning in the late fourth millenium. Those who reached the far eastern periphery became the Afanasievo culture, and both their location and their isolation from other steppe

tribes indicates that they were well positioned to become the ancestors of the Tocharians » (Mallory, 1991, p. 263).

Ur yezh Indez-Europek eo an tokarianeg, hon eus komzet diouti endeo a-zivout ar ger tokarianeg "samāne".

« In short, the evidence is slowly accumulating to support the existence of a vast extension of material culture, economy, ritual behavior and physical type from the Pontic-Caspian eastwards to the Yenisey by about 3000 BC » (idem, p. 226).

Anat eo diouzh lenn ez eo stag eil penn Eurazia gant egile. Anv a vez graet gant J.P. Mallory eus "harzoù" Kent-Indez-Europiz, lec'hiet tro ar stêr Volga hag an Oural, en tu-hont ne ouzer ket, ha pelloc'h c'hoazh, en tu-hont d'an diankadenn, e kaver an Europiz bet tizhet Sibiria ar c'hreisteiz ganto, tro ar bloavezhioù 3.000 K.K.enta. Krog eo an darempredoù gant tud ar reter kalz abretoc'h e gwirionez peogwir e komz Mallory eus ar 4ved pe ar 5ved milved zoken, evit echuiñ kalz diwezhatoc'h gant kudenn Tokarianed deserzh an Tarim, e kornog China hiziv, a rae gant ur yezh Indez-Europek *centum*, ha neket *satem* evel ma vije gortozet. Orin an dTokarianed-se a vije 'ta sevenadur Afanasevo, ur meskaj Europoided ha Mongoloided. Siwazh ne oar ket an oberour penaos e vije tremenet an dud-se eus an Oural d'ar Sibiri. Zoken ma anavezer ar fedoù, n'eo ket bet roet c'hoazh an dispiegadur anezho, peogwir, ret anzavout, n'eo ket anavezet gant an oberour evit c'hoazh.



## A. AFANAS'EVO

Da c'hortoz an displegadur gortozet e c'heller displegañ peseurt sevenadur a oa hini Afanas'yevo ha savet gant peseurt tud:

### *Ar Sevenadur*

Lezet eo bet ganeomp emdroadur an d'Toungoused da vare *Bugady Enyntyn* p'emañ ar sevenadur mammlignezhel en e varr-uhel, met pa grog ivez elfennoù gourel o tiskoachañ, evel kement ha ragarouezioù eus ur sevenadur all, tadlignezhel, a vo tu dezhañ bleuniañ trugarez da rannadur al labour ha d'ar metallerezh:

« While the different tribes settling the vast expanses of the taiga regions of Siberia, the tundra and forest-tundra, and also the Maritime and Amur Districts continued living as before by hunting and fishing, at the end of the Neolithic and beginning of the Bronze Age, events of exceptional importance occurred in the neighbouring steppes, as we shall see below.

At the end of the third or the very beginning of the second millenium B.C., a remarkable culture known as the Afanas'yevo culture existed in the Minusinskiy Kray and on the Altai. In many respects it was directly connected with the culture of the Stone Age » (Levin, Potapov, 1956, p. 43).

Ar sevenadur-se a verk an tremen etre daou ved: hini ar maen hag hini ar metal, gant o doareoù kozh ha nevez:

« Just as the neolithic hunters, the people of the Afanas'yevo stage continued to adorn themselves with pendants made of animal teeth.

[...]. The dead were buried close to rivers, in holes in the ground lined with stones—it was only later that they began to construct the first barrows; red coloring-bloodstone was used during the burials » (Ibid.).

Met ouzhpenn an doareoù beziañ ez eus ivez ar mod-bevañ a gemm kalz en ur dremen eus an hemolc'hiñ d'ar mesañ-loened digantre :

« It is particularly important that the Afanas'yevo graves have been found to contain the first copper implements and remains of domestic animals, the most important being sheep, horses and cows. The Afanas'yevo people were consequently not only the first metalworkers in the steppes of southwest Siberia, but also the first pastoralists in Northern Asia » (Ibid.).

« It follows from this that with the emergence of the Afanas'yevo culture of the early pastoralists, it was precisely the steppes, as distinct from the taiga, which became the region of this economic advance and the center of the new productive economy. By taming animals and switching to pastoralism, the steppe-dwellers had moved far ahead of their neighbors, still living in the forest and tundra ». (Ibid.).

#### *An dud*

Pouezusañ holl er c'hemmoù-se bras kenañ eo an dud hag a zo disheñvel o gouenn zoken :

« Afanas'yevo man was tall in stature (about 168 cm), with a strong physique. The physical type shows Europeoid characteristics. G.F. Debets notes in it features of Cro-Magnon or, as he calls, the proto-European type widespread during the Paleolithic in Western Europe.

It is therefore highly significant that the material culture of the Afanas'yevo people contains a number of features of western and southern origin, such as, mollusk shells from *Corbicula fluminalis*, originating from the Aral Sea region, catacomb-type incense burners, traces of ornamental art found on one vessel from the Tenisa burial site, and a considerable overall resemblance between the Afanas'yevo and the Kel'teminar ceramics on the lower reaches of the Amu-Dar'ya. Fairly well developed metal working and pastoralism also relate to this period. All this shows the definite contact between the Afanas'yevo people and

the tribes of the west, i.e., Central Asia, the Ural and Volga regions, and possibly the Black Sea region » (Levin, Potapov, 1964, p. 45).

E-touez an Dud-se ez eus Mongoloided, evel-just, met an Europeoided eo an dud nevez :

« Judging by the material available, which, admittedly, is still very sparse, during the Upper Paleolithic Siberia was populated by Mongoloid groups » [...].

[...] the region west of the Yenisey had long been the scene of intermingling between the Europeoid and Mongoloid types. The latter penetrated far into Eastern Europe. In the Neolithic and Eneolithic periods, the demarcation between Mongoloids and Europeoids in Siberia can be traced fairly clearly. The population of the forest belt at this time, to judge by paleoanthropological material, has clearly marked traits of the great Mongoloid race.

During this period, the Altay-Sayan Plateau was settled by Europeoids; the anthropological type of the population, which left behind relics of the Afanas'yevo and Andronovian cultures, need give rise to no doubt.

The Europeoid groups occupied the steppes of the Altay and Minusinskiy Kray, while the forest belt both in eastern and western Siberia continued to be extensively inhabited by Mongoloid types. The boundary between them was by no means permanent. From the Altay-Sayan steppes the Europeoid groups seem to have moved fairly far east; the neolithic population of the taiga west of Lake Baïkal, in particular, shows a Europeoid admixture. In their turn, the Mongoloid elements penetrated into the steppe regions ». (Levin, Potapov, 1964, p. 99).

Mat eo pouezañ war poent-se poblañs Eurazia, rak nemeur anavezet eo, pe divrud a-walc'h d'an nebeutañ. Met gallout a reer mont donoc'h c'hoazh gant Henry Field e dezrann poblañs Sibiria ar c'hornog :

« It is far more plausible that the most ancient populations of the steppe belt of western Siberia down to the Minusinsk region originated from and belonged anthropologically to the Crô-Magnon type of western Europe.

The situation is completely different in eastern Siberia. Several dozens well-preserved Mongoloid skeletons and skulls from Neolithic burials of the Lake Baïkal area were entirely different from those of western Siberia. A.P. Okladnikov stated that this type is also present among the Tungus of Lake Baïkal. In addition to the Huns, this type extends west down to and includes Hungary » (Field, Prostov, 1942, p. 388-389).

Hag evit krennañ en ur frazenn e c'heller ober ar menneg-mañ:

« In the steppe belt from the Urals to Minusinsk we find the descendants of the Proto-European type connected with the Crô-Magnon race (in the larger sense of the world). Near Baïkal we find the Mongoloid type, extended to the west as far as the Baltic area, and in the extreme west mestized during the Neolithic period with the Europoids who migrated from the south and settled in the forest belt of European Russia » (idem, p. 390).

Anv a zo bet graet eus an dra-se a-gent, met n'eo ket diezhomm splannañ endro: tud eus ar Baïkal a zo henvroiz a zispleg deomp Roginskiï meneget gant Henry Field hag Eugene Prostov :

« [...] the "Baïkalian group is more ancient than the modern ethnic and linguistic subdivisions of northern Asia, that they did not come from any particular place, but had been formed upon the extensive expanse of the forest belt of Siberia » (idem, p. 393).

Un elfenn arkeologel eus ar pemdez, hag a ziskouez mat hender sevenadurel ar vMongoloidi, amañ Tougoused :

« The Eneolithic peoples of the Baïkal area wore clothes of the same cut as that of the modern Evenks, whose national costume differs radically from the customary garb of either the steppe-dwelling Buriats, the reindeer-raising tribes of the tundra, or the settled maritime folk of northeastern Siberia » (Ibid., p. 394).

Ar gwiskamant a vez graet anv anezhañ amañ eo hini ur chamanez, pe *idakon*<sup>184</sup> else hervezomp :

« Of particular interest was the costume of the "Shaman woman" from Burial N°.3 at Ust Ude [Skeudenn 26]. The traditional diadem, with the central nephrite ring, surrounded her cap. On her breast were placed the stone ornaments of the apron, which was also decorated with two carved anthropomorphic effigies of mammoth ivory. A similar miniature anthropomorphic effigy was found in association with a child's burial near Bratsk. Such effigies, a close counterpart of the neolithic objects, are depicted on Georgi's plates depicting Tungus in hunting dress. According to Georgi, the Tungus habitually wore tin idols upon their aprons and during the summer upon their bodies, and used them as amulets to guarantee good hunting. The parallels between the Eneolithic people and the Evenks are not limited to costume. Similar traits are also manifested in their material culture » (Field, Prostov, 1942, 394-395).

Kadarnaet e vez hon dezrann eus emdroadur al lidoù mammlignezel e chamaniezh diwezhatoc'h gant an evezhiadenn-mañ :

« The Eneolithic people had a complex and apparently highly-developed religion, having much in common with shamanism recently practised by the Evenks. Shamans in their characteristic garb were found in the burials at Ust' Uda and Anosovo » (Ibid., p. 395).

Adkavout a reomp amañ danvez hon tabut diwar-benn ar chamaniezh, a zo bet studiet diagent. Ar wezh-mañ eo lavaret splann gant an oberour : adkavet eo bet bez ur 'chamanez' - etre kromennoù eo bet lakaet an termen - ha pelloc'h eo resisoc'h c'hoazh pa gomz eus relijion tud an Neolitik he deus kalz da rannañ gant chamaniezh Evenki hiziv. Kement-se a gadarn sav-poent Esther Jacobson diwar-benn ar prantad rak-chamanel e-pad mare Glazkov, m'eo bet liesaet

---

<sup>184</sup> Ur ger mongolek a orin hag a vije stag ouzh an oaled [<http://www.sacred-texts.com/sha/sis/sis08.htm>]  
S.o. ivez : Shirokogoroff, 1982, p. 270 et 436

aozadur diabarzh ar meuriadoù ha degemeret ar metal. Ouzhpenn-se eo bez ur plac'h a zo bet kavet.

An dra-se a glot mat-tre gant evezhiadenn bouezus Michael, Czaplicka h.a. diwar-benn perzh espar ar merc'hed el lidoù mamlignezel-se...

Trugarez da munudoù ar pemdez e meuriadoù hiziv e c'heller adkavout implij an dra-mañ-tra dizoloet war an dachenn met a oa ouzhpenn d'an arkeologour ijinañ:

« Many mortuary rites of the Epipaleolithic period are explained by the recent beliefs of the Evenks. Thus the presence of ocher in graves is reflected in the Evenk legends about Kheladan, describing ocher as the blood of the dead; the eastern orientation of neolithic skeletons and invocations of guiding spirits referring to it; river orientations and the belief in a "river of the dead" among the Evenks and the curious survivals of fisherman's customs amid the deer-raising Evenks, explicable only by the place of fishing in the life of their Eneolithic ancestors.

[...] the available facts definitely connect the Evenks with their distant forefathers » (Field, Prostov, 1942, p. 395).

Kement-se hon aotren da glask displegadurioù e kredennoù an Evenki hag o hendud evit displegañ lidoù relijiel poblañsoù all deuet war o lerc'h, hag a c'hello bezañ bet levezonet ganto. Arabat disoñjal an dra-mañ : herezh an Evenki (pe Toungoused), a bad didorr abaoe atav, da lavaret eo abaoe Mare Aorignak, tost da 30.000 bloaz zo, goude ma ranker evezhiañ ez eus bet enteuzet a-galz ganto hen-Azianiz.

Met distroomp d'an darempred etre an div boblañs, Mongoloidi ha Europoidi d'ar mare-se:

« It must be observed that in the Siberian Neolithic and Eneolithic periods the Afanas'ev culture of the steppes is a radical and yet explicable exception from the general pattern.

In modern Siberia we find neither any direct descendants of the Afanas'evic peoples nor any survivals of their widespread, colorful, and original culture.

Notwithstanding some attempts to derive one directly from the other, the Afanas'evic culture is entirely alien to the Siberian forest Neolithic period, at the present time the most completely known of the Siberian Neolithic cultures. [...]

No less important is the fact that during the Afanas'evic period, coinciding with the end of the Kitoian and the beginning of the Glazkovic stages (Taolenn 1<sup>185</sup>), there can be discerned in the Yenisei the dividing line between the basically Mongoloid types near Baikal and the Europoid peoples of the steppes » (Field, Potapov, 1942, p. 398).

Amañ e vo desket e oa stag sevenadur Afanas'evic gant sevenadurioù an arem eus ar stepenoù :

« With what cultures and peoples of the west were connected the Europoid bearers of the Afanas'evic culture it is possible to decide by comparing it with the remains of the pit-and-catacomb culture on the steppes of southern Russia and in the North Caucasus, and, especially with the newly-discovered Kelteminar culture in Khwarazm on the lower Amu Darya. The Afanas'evic culture, genetically connected with the west and the Europoid peoples of the west, initiated the Bronze culture of the steppes. The development of these cultures was not rectilinear. Anthropological evidence shows that a new Mongoloid population as well as several completely new ethnic groups extended over the steppes » (Ibid.).

O paouez omp lenn eo deuet war wel war ar stepenoù ur boblañs nevez, Mongoloided :

---

<sup>185</sup> Abaev 2001, gant Skol-Veur Alberta, Canada ez eus bet savet un daolenn nevez eus prantadoù tu-mañ Baikal Sibiria. S.o. Taolenn 2. Gant an daolenn nevez-se eo deuet an amzeriad da vezañ muioc'h a-du gant Anthony ha Nekhaev. An dud eus al lenn Baikal (prantadoù Kitoi ha Serovo-Glazkovo) a veve dreist-holl diwar stag, yourc'h, eln, ha karv-erc'h (Weber, Link & Katzenberg, 2002, p. 236). E unan eus bezioù Kitoi rak-diouerenn (tro -5.000 K.B.) e Lokomotiv eo bet kavet un "talgen banhezioù" (Ibid., p. 242).

« In contradistinction to the forests, the steppes, with the emergence of animal husbandry, became the main arteries for the diffusion of cultural influences and for migrations. The processes of intensive hybridization and mixture of tribes and cultures began at a very early period on the Siberian steppes. It is therefore impossible to trace the direct connections between the ancient and modern ethnic formations, a theoretical possibility in the wilder forest regions of Siberia » (Ibid.).

O paouez omp lenn displegadur an darempredoù etre Europoided ha Mongoloided Afanas'yevo.

Diouzh lenn pennad Henry Field hag Eugene Prostov ez eus tu da lakaat e vije bet deskoniet tud an Altai hag ar Minusinsk war an arem gant tud Afanasievo. Displeget eo an dra-se e lec'h all gant Henry N. Michael en e bennad "The Neolithic Age in Eastern Siberia" a laka war wel ivez un diforc'h bras all etre Indianed Norzh Amerika troc'het diouzh diskennidi Mongoloided dibenn ar paleolitik e Sibiria, ha n'o deus ket gallet ober anaoudegezh dre-se gant teknik ar metallouriezh, kontrol d'o c'hendirvi eus Sibiria :

« The inhabitants of the Baïkal region were not separated from other peoples by such immense areas of taigan tundra, or ocean as were, for instance, the inhabitants of North America over a wide zone. To the contrary, in the relative nearness of the southern steppes of North Asia, there was developing for a long time a copper and bronze metallurgy. Easy travel down the Angara and up the Yenisei, or vice versa, would bring men, or ideas to one of the earlier metal-working cultures within the territory of the contemporary U.S.S.R.—the Minusinsk basin. The steppes east of the Lake Baïkal were even closer and in turn had ancient ties with Mongolia and China » (Mikael, 1958, p. 29).

Kement-se hon aotre da sevel darempredoù etre an holl doleadoù disheñvel-se ha pell an eil re ouzh ar re all, evel al lenn Baïkal, sterva ar Minousinsk ha Yamanaya e Ukraina hiziv :

« Cemeteries of the local Kuznetsk-Altai foragers like Lebedi II were located in the forest and forest-meadow zone higher up on the slopes of the Altai, and



contained a distinct set of ornaments (bear-teeth necklaces and bone carvings of elk and bear), lithics (asymmetrical curved flint knives), antler tools (harpoons), pottery (related to the Serovo-Glazkovo<sup>186</sup> pottery tradition of the Baikal forager tradition), and funeral rituals (no kurgans, no stone slab over the grave). As time passed, Glazkovo forager sites located to the northeast began to show the influence of Afanasievo motifs on their ceramics, and metal objects began to appear in Glazkovo sites » (Anthony, 2007, pp. 310-311).

An hevelep kensturiegezh a c'hell bout merzet ivez pelloc'h er c'hornog :

« There is, then, a basic parallelness in the origin and evolution of forms in the Baikal and Minusinsk regions during this early metal age. The Tesinsk finds and the late phases of the Glazkovo period may, in turn, be synchronized with the Catacomb, and the early group of Afanasev burials as well as the Early Glazkovo interments in the end of the period preceding the Catacomb in the south of European Russia—the Pit ("Yamanaya") » (Mikael, 1958, p. 29).

Evit ma ve peurglok hon anaoudegezh eus Afanas'evio eo dav menegiñ E. Jacobson he deus studiet ivez Kantreerien Abred er mareoù-se diouzh sav-poent ekologiezh ar gredenn :

«The Early Nomads also inherited an ancient tradition of metalworking, one which went back to the earliest copper-working culture of South Siberia, the Afanasevo » (Jacobson, 1993, p.14).

Komprenet eo bet e oa diwanet ar metallouriezh e sterva ar Minoussinsk, diwezhatoc'h evelato eget e China :

---

<sup>186</sup> S.o. Taolenn 2



38 *The Tocharians may have found their immediate origins in the eastern Andronovo or Afanasievo cultures.*

### Kartenn 8 : Sevenadur Afanasievo hag Andronovo

Mallory, 1991, p. 62

« Within the Minusinsk Basin, the Okunev culture succeeded the Afanasevo culture by the early second millenium B.C. In contrast to the Afanasevo, the Okunev people were Mongoloid of the Central Asian type (Gryaznov 1969: 51) » (Jacobson, 1993, p.15).

Goude ar c'hoarvoudoù-se a denn c'hoazh da Afanas'yevo emaoomp arru neuze d'ur prantad all, disheñvel e sav-poent rak n'emañ ket troet ken war-du Sibiria :

« In the use of wooden chambers and mounds, the Andronovo is obviously related to the Timber-grave culture of Eastern Europe, as well as to the later Scytho-Siberian culture » (Ibid., p. 16).

#### *Okunev*

Ar Skuthez-Sibirianiz a anavezomp peogwir eo bet meneget an dud-se e derou hor studiadenn. Adkavout a reomp anezho amañ ha pouezus eo heuliañ a-dost o emdroadur rak ganto eo bet ganet "arz-loen ar stepinier" brudet a-hend-all dre ar bed a-bezh, hag en deus taolennet skeudenn "ar c'harv e bikoù banhez o fennoù evn" a zo deuet da vezañ-abeg d'ar studiadenn-mañ. Eomp donoc'h e gwrizenioù an dud-se :

« This discussion leads to the general conclusion that within the Minusinsk Basin and already by the second millenium B.C., the Europoid peoples of the Afanasevo culture and the Mongoloid peoples of the Okunev culture had developed significant cultural interconnections evident in shared aspects of burial ritual, ceramic styles, and economy (Vadetskaya 1986). There were, however, significant differences. The pastoral Afanasevo were primarily dependent on cattle and sheep. Bone finds in Okunev settlements and burials indicate, by contrast, a major dependency on the hunting of wild animals, including bear, elk, deer, and fur-bearing animals such as wolves, sables, fox, and so forth » (Jacobson, 1993, p. 114-115).

Ezhomm a zo pouezañ war sevenadur Okunev (Taolenn 3) anez d'an dra-se ne vo ket priziet reizh talvoud bras al loened e arz an dud-se :

« Such changes suggest that the Okunev learned stock-raising from the Afanasevo. What is certain is that both cultures, deriving from different regions and ethnicities, achieved a degree of cultural parallelism and even ethnic interpenetration within the Minusinsk Basin by the eighteenth – seventeenth centuries B.C. » (Jacobson, 1993, p. 115).

Kadarnet eo an evezhiadenn gant Alexandre Mongait :

« Les études anthropologiques ont procuré des résultats inattendus. Somatiquement, les porteurs de la culture d'Afanaasievskaja étaient des Européides. Alors que la zone de la taïga sibérienne était le domaine de tribus nettement mongoloïdes, très semblables aux Toungouses actuels » (Mongait, 1959, p. 137).

Anat eo pouez bras evidomp meneg anv an dToungoused amañ, rak den ebet n'eus komzet eus un azeul karv e-touez ar Skuthed. Gant an dud-mañ n'eus nemet skeudennadur al loen karv o tont eus Sibiria a zedenn ac'hanomp rak test eo eus un azeul karv koshoc'h eget o sevenadur evel-just met nes ivez ouzh skeudenn *Fer Benn* Buile Suibhne, en e goazez war poentoù banhezioù kirvi ar Vamm, kement ha krediñ e c'hellje an eil skeudenn dont eus eben. Ma 'z eus

gwir er pezh a gav deomp, en em gavfemp amañ gant ar meneg eus an dToungoused en o frantad daremprediñ Europoided Afanasievo divroet eus Repin, war-un-dro gant un anadenn greñv a zo ezhomm evit ma teufe da wir orin Sibiriek an azeul karv testeniekaet e siell Maikop.

Ne boellata ket Talbot Rice disheñvel pa ra anv eus Sibiria evel lec'h orin arz ar Skuthed :

« En Sibérie, à l'époque néolithique (c'est-à-dire au cours du III<sup>e</sup> millénaire avant notre ère), on sculptait souvent en os ou en pierre des figurines d'animaux. Reproduites en taille naturelle, ces figurines servaient d'appeaux. [...]. A mesure que le style s'affine, le symbolisme associé à certaines scènes et à certaines représentations tend à disparaître » (Rice, 1958, p. 151).

Anavezout a reomp kudennerezh Esther Jacobson gant karv ar Skuthed tapet peg ennañ en ur mare eus e emdroadur a grog gant un azeul karv Sibiriek eus an neolitik.

#### *Skeudenn ar c'harv*

Al loen karv evel mammenn awen a zo un dra, met an doare e skeudennaouiñ?

« Les dessins animés auraient satisfait les exigences des Scythes, et en fait ce qu'ils ont réalisé s'en rapproche beaucoup plus que les cylindres-sceaux des Sumériens, même si ces derniers ont été pour eux une source d'inspiration.» (Ibid., p. 152)

Kemeromp ur skouer:

« L'extrémité d'un animal deviendra ainsi attribut d'un autre. Selon Frankfort, les Scythes auraient emprunté cette convention au Louristan. Mais dans ce cas, le Louristan doit lui-même l'avoir prise aux Hittites, qui n'hésitaient pas à faire de la tête d'un animal la queue d'un autre » (Ibid., pp. 152-153).

Dezrannet eo bet gant Rostovtzeff stumm ar skeudenn-mañ end-eeün. Lavarout a ra en ur zaveañ d'ur frazenn gent ma tispieg pegen hen eo aozadur kinkladur listri hollvrudet beziou Kouban Veselóvski<sup>187</sup> e Kêr Maikop:

« Such a combination of primitive methods in composition with strong naturalism in the rendering of individual animals is entirely foreign to later periods in the evolution of art » (Rostovtzeff, 1922, p. 24).


N'eus ket bet klasket kevreañ ar skeudennoù loened e bagadoù, met pa vez klasket ober ez eo kentidik kenañ. En eil regenn al lestr kentañ eo lakaet pav ar banterenn war gein an antilopenn; hag en eil lestr hag egile e kaver un evn war gein loened zo.

Echuiñ a ra gant e anatadur heverk en ur ziskleriañ krenn-ha-krak:

« Such a combination of primitive methods in composition with strong naturalism in the rendering of individual animals is entirely foreign to later periods in the evolution of art. We come across survivals of it both in early Ionian art and in the Scythian animal style, but it is sufficient to put these classes of monuments beside our vases, to be convinced that in all essentials they are totally different » (Ibid., p. 24).

---

<sup>187</sup> Rostovtzeff, 1922, p. 19



### Skeudenn 28: Engravings on the Maikop vase

Rostovtzeff, 1922

Hervezañ ouzhpenn e vefe al loen war lerc'h an tarv neket un azen gouez met ur marc'h Przhevalski... eus ar stepennoù. Ne c'heller ket bezañ hep menegiñ a-gleiz en nec'h an arz etre div wezenn, savet war e bavioù a-dreñv war-zu ar wezenn gleiz, n'eo ket hep kounaat ar c'harv hag ar wezenn war siell bez Maikop :

« The group of the bear and the tree presents the first attempt to combine tree and animal into a heraldic scheme, and remains unparalleled. The idea of giving a map, or perhaps a representation of Paradise with its rivers, lakes mountains, trees, and animals, is novel and indeed unique. The same attempt was made in Egypt with the same elements, but the methods adopted were entirely different » (Ibid., p. 28).

Evitañ n'eus arvar ebet en em gavomp gant skourr nevez un emsav arzel meur o'n em ledañ da goulz an tremen da sevenadur ar metal<sup>188</sup> e Kaokaz an hanternoz hag ivez marteze ar c'hreisteiz :

« The peculiar evolution of Hittite civilization cannot be explained without assuming a great centre of copper age civilization in Asia Minor as well » (Ibid., 32).

Evitañ n'en doa ket anavezet teorienn Kourganiz Marija Gimbutas, ne c'helle ar greizenn bezañ nemet henvroat. Ha mont da glask meuriad ar Maeosianed tro d'ar Mor Azov.

Echuet e vo amañ gant an distro-prezeg. Dont a raimp en-dro war ar gudenn-se pa vo graet anv e gwir eus siell Maikop.

### *Andronovo*

Goude Afanas'yevo, heuliet gant Okunev e teuio war wel sevenadur Andronovo (Taolenn 3) eus hanternoz kreiz Azia, na vo ket klevet anezhañ al levezon en tu all d'ar Yenisei uhel :

« By the middle of the second millenium, the Okunev culture in the Minusinsk Basin was confronted by a new and fully bronze Age culture, the Andronovo. Most scholars consider the Andronovo to have been the eastern extension of the Timber-grave (Shrubnaya) culture, which was centered in the lower Volga Basin and stretched southwest from there to the shores of the Black Sea. The Timber-grave and Andronovo cultures are also related to the Tazabag'jab culture located east and south of the Aral Sea (Chernikov 1960). Wether or not the center of Andronovo was in the region of the Lake Zaysan, in Eastern Kazakhstan, its eastern boundary was in the area of upper Yenisei. Andronovo sites have been found extensively between the Yenisei and the Ob rivers, but

---

<sup>188</sup> Ibid., p. 28

none have been found either in Tuva or in Gorno-Altayskaya A.O. » (Jacobson, 1993, p. 16).

Ha goude hini Andronovo e vo tro sevenadur Karasuk (Taolenn 3):

« The succession of Afanasevo and Okunev cultures in the Minusinsk Basin functioned as an alternating overlay of Europoid and Mongoloid populations. This pattern of ethnic overlay seems to have characterized much of the prehistory of South Siberia and northern Central Asia. It was repeated when the Andronovo culture was displaced by the Karasuk culture in the second half of the second millenium B.C. As in the case of the Okunev culture, the center of Karasuk was located in the Minusinsk and Kuznetsk valleys, with extensions indicated into Mongolia and as far as the region of the Syr Dar'ya in south-central Kazakhstan » (Jacobson, 1993, p. 17).



## B. EUROPA GOZH


A-walc'h a zeskamant hon eus dastumet diwar-benn prantad Afanasevo evit kenderc'hel gant ar pezh n'eo c'hoazh met un deorienn pe un naderezh harpet ouzh darvoudoù diazezet mat. Met digomprenus e vefe plediñ gant Aremvezh Europa a deu diouzhtu en amzeriadur da heul an aridennad sevenadurioù omp o paouez gwelout e Sibiria, hep lavarout grik diwar-benn Europa Gozh. Hounnezh eo a ya da ober ar c'hondoniad sevenadurel kentañ a droio bep-un-tammig en Europa Indez-Europek diwar-bouez gwagennoù ensilañ ar gKourganiz o tont eus ar reter, hervez teorienn Marija Gimbutas d'an nebeutañ. Un deorienn a zo bet burutellet met a chom an displegadur hollekañ betek hiziv eus an darvoudoù a zo diazez hor sevenadurezhioù-ni.

Evel on o paouez displegañ eo bet goveliet an termen Europa Gozh gant Marija Gimbutas, ha kavet eo bet pleustrek da ober gantañ rak resis eo :

« It became clear that east-central Europe reached a high level of civilization that included metallurgy and script sometime during 5500-5300 BC. In 1972, I introduced the term « Old Europe » to describe European culture before the Indo-Europeans » (Gimbutas, 1997, p. XVIII).

An termen a zo merket war dachenn an istor - kent Indez-Europek - hag ivez war dachenn ar jeografiezh peogwir ne dalvez nemet evit kreiz Europa ar reter, e lec'h ma krogas dispac'h an Neolitik, ne dalvez ket evit arvor atlantel an douar-bras. Krog eo bet gant an Neolitik en Europa gant sevenadur Starčevo :

« Amorcée dès le XIIe millénaire, la transformation des chasseurs en paysans s'étale, dans l'ancien monde, sur 8000 ans. Née dans le "croissant fertile", l'agriculture gagne peu à peu l'Occident : les voies de communication, de même que l'importance respective des inventions locales et des importations, sont difficiles à déterminer. Le nouveau mode de vie se diffuse d'une part le long des cotes méditerranéennes, d'autre part vers le nord-ouest. Ces deux courants convergent ensuite, en France et en Suisse. Région peu favorable à l'agriculture, l'Europe du Nord est touchée plus tardivement, et la nouvelle économie n'y est que partiellement adoptée » (Louboutin, 2006, pp. 16-17).



### Kartenn 9 : Ar Gounid douar en Europa

(Louboutin, 2006, pp. 16-17)


Evel on o paouez menegiñ, ne dalvez ket Europa Gozh evit Europa a-grenn :

« Des régions entières échappent pourtant à l’emprise des premiers tenants de l’économie agricole. Les îles Britanniques, la Scandinavie, le massif armoricain ou le Nord des Pays-Bas conservent leur mode de vie traditionnel » (Cauwe, 2001, p. 80).

En enep, ar Balkanioù a vez tizhet da gentañ. E Thesalia ha Bulgaria e vez diazezet kumuniezhoù gounideien kerkent hag ar seizvet milved K.K.:

« Compte tenu de sa situation économique, l'Anatolie est la seule source possible de cette migration et on suppose que les colons ont emprunté la voie maritime pour s'installer sur le continent européen au Nord de la mer Égée.

A la suite d'une séquence compliquée, on voit se dégager une culture relativement homogène, appelée Starčevo, du nom d'un site yougoslave » (Cauwe, 2001, p. 80).



**Kartenn 10 : Sevenadur Starčevo, 7000-6500 K.K.**  
(<http://perso.orange.fr/atil/atil/y20.htm>)

Hep mont dre ar munud er sevenadurioù gounidek-se ez eus ezhomm un nebeut perzhioù diazez a dalvezo da dermeniñ anezho evit an ampoent :

« The Danubian (or Spiral-meander Pottery) culture, the early phases of which in central Europe have been placed by carbon-14 dating in the 5<sup>th</sup> millennium, is most likely an extension of the Starčevo culture, the earliest ceramic Neolithic culture in the middle of the Balkan Peninsula. Both the Starčevo and Danubian cultures are ultimately linked to the early agricultural cultures in the Near East and the eastern Mediterranean. Their basic character, particularly their habitation pattern (large villages consisting of long inhabited mound settlements in the Balkans), religion (the predominance of the mother-goddess

cult), and social structure (large families living probably in a matriarchal system), has nothing in common with the mobile stock-breeding, patriarchal, and socially stratified Indo-European communities » (Gimbutas, 1997, p.21).

N'eus ket anv amañ da adober danevell Kornog Eurazia adalek *Homo Sapiens* (Crô-Magnon) betek donedigezh an Indez-Europiz. Un dra bouezus zo da c'houzout evelato : etre Starčevo ha gwagenn gentañ ar Gourganiz, ez eus bet ur prantad sioul ha mammlignezel, a sevenadur uhel a zo padet meur a vilved : adalek 7000-6500 betek 4400-4200.

Peogwir ez eus bet graet anv uheloc'h eus Marija Gimbutas, a-walc'h e vo deomp lavaret eo bet ar vaouez-se e penn ur mod nevez da welout red an Indez-Europiz o ensilañ douar bras Eurazia ar reter. Berr-ha-berr, hervezi ez eus bet tri frantad pennañ m'eo deuet tud (Kourganiz) eus ar reter (Eurazia) da ensilañ sevenadurioù kreiz reter Europa :

« The First Wave (c. 4400-4200 BC) and its Repercussions » (Gimbutas, 1997, p. 242).


« The Second Wave (3400-3200 BC) and the Formation of new Cultural Complexes » (idem, p. 249).

« The Third Wave : The Advent of the Yamna People, c. 3000-2800 BC » (idem, p. 256).

Dre vras e c'heller lavarout eo bet ensilet sevenadurioù Europa Gozh gant tud anvet "kourganiz", o tont eus ar reter, o deus levezonet dre gaer pe dre heg ar sevenadurioù-se o tiwan, ha lakaet anezho da gemm, da zilec'hiañ, pe da vont da get marteze, hag e-giz-se ez eus bet ganet sevenadurioù all nevesoc'h, un tammig pelloc'h, gant anvioù nevez, hervez al lec'hioù nevez m'int bet kavet gant an arkeologourien, stumm ar podoù pri dizoloet enno, ar beziadur, h.a.

War ar gartenn da heul e vo gwelet levezon Kourganiz ar wagenn gentañ war sevenadurioù Europa Gozh.






**Kartenn 11 : Gwagenn aloubiñ gentañ (Kourgan I, 4400-4200 K.K.<sup>189</sup>)**  
 (Gimbutas, 1991, p. 359).

Hervez Gimbutas e vije bet tizhet reter Iwerzhon gant ar wagenn gentañ :

« The emergence of single-male burials under round mounds in eastern Ireland and central England in the middle of the 4<sup>th</sup> millenium B.C. contrasts sharply with the local tradition of communal burials. This signal the arrival of the first people carrying Kurgan traditions across the Channel or North Sea from the continent, most probably coming from the Rhine basin [...]. At the same time, signs of warfare and violence appear » (Gimbutas, 1991, p. 365).

<sup>189</sup> "Figure 10-6A Kurgan thrust into east-central Europe and its influence on the Danube basin and beyond in the period between 4300 and 3500 B.C. This influence is traceable even in England and eastern Ireland in the middle of the 4<sup>th</sup> mill. B.C."

Ar gartenn-mañ a ziskouez petra eo deuet Europa Gozh da vezañ goude ar wagenn ensilañ gentañ, tro 3.500 bloaz KK, da lavaret eo tost da 2 vil bloaz bennak goude sevenadur Starčevo.



**Kartenn 12 : Europa Gozh (dibenn ar 4vet milved K.K.)<sup>190</sup>**  
(<http://en.wikipedia.org/wiki/Pre-Indo-European>)

An eil gwagenn a c'hoarvezas tro 3500 K.K. :

« The Kurgan tribal leaders of the north Pontic region turned to the Cucuteni area not later than the middle of the 4<sup>th</sup> millenium B.C. There they encountered a flourishing civilization which had survived the first Kurgan infiltration. This time it succumbed and was tranformed through a process of amalgamation with Kurgan elements. What continued of the indigenous culture was a pale reflection of earlier times.

The lords of the area can be recognized in royal or other elite tombs contained in mortuary houses covered with stone cupolas under barrows with stone rings. [...].

Around 3500 B.C., the culture south and north of the Carpathian Mountains was transformed beyond recognition. The transition from a matristic to a patriarchal era, in some territories of central Europe, was completed by the end

<sup>190</sup> Simple map of the major late 4th millennium BCE "Old European" cultures. Green is the Funnelbeaker culture (TRB). Blue is the Linear Ceramic culture (LBK). Orange is the Lengyel culture, purple the Vincha culture, red the Cucuteni culture and yellow the western part of the Yamna culture.

of the 4<sup>th</sup> millenium B.C. New cultural groups emerged, formed of Old European and Kurgan elements.

This period of transformation coincides with changes in metal technology and the beginning of the Early Bronze Age in the circum-Pontic region » (Gimbutas, 1991, p. 366-369).


E-pad an eil prantad aloubiñ e teuio war wel sevenadur an "Añforennoù Boul".

« The Globular Amphora culture emerged on the northern European plain and north of the Carpathians—the present territories of central Germany, Poland, Volynia, Podolia, and Moldavia—in the middle of the 4<sup>th</sup> millenium B.C.

The Globula Amphora culture was preceded by the Funnel-necked Beaker culture (TRB) and by the Cucuteni in the western Ukraine and Romania. In spite of a different substratum, the Globular Amphora culture was remarkably uniform » (Ibid., p. 381).

Komprenet e vo diwezhatoc'h perak e c'houverkomp ar sevenadur-se. A-walc'h eo evit c'hoazh evezhiañ an heñvelderioù etre lidoù beziañ an Añforennoù-boull ha re sevenadur Maikop:

« There is similarity between the burial rites of the Globular Amphora people and those of the Kurgans of the Maikop culture in the North Pontic region. Both used mortuary houses built of stone slabs and practiced the ritual burial of horses, cattle, and dogs, as well as human sacrifice in connection with funeral rites honoring high-ranking males » (Ibid.).



- KEY**
- Yamna in the Don-Volga basin and North Pontic Kurgan groups
  - Kurganized territories in Central Europe
  - Limits of Kurgan territories north of the Black Sea and the Volga basin
  - Kurgan Wave #2 influences from the North Pontic area
  - Numbers mark the substratum culture groups; 1. Cucuteni; 2. TRB; 3. Michelsberg

**Kartenn 13 : 2l gwagenn aloubiñ (Kourgan II, 3400-3200/3500-3000 K.K.)<sup>191</sup>**  
 (Gimbutas, 1991, p. 368).


An teirvet gwagenn a c'hoarvezo tro 3000 K.K. :

« The Kurgan Wave N°3, c. 3000 B.C., was a massive infiltration that caused drastic changes in the ethnic configurations of Europe. (FIGURE 10-32) Population shifts to western, northern, and northeastern Europe, as well as to

<sup>191</sup> "FIGURE 10-13 Culture groups c. 3500-3000 B.C. New formations in central Europe influenced by North Pontic culture"



the Adriatic region and Greece, account for the final Indo-Europeanization of Europe » (Gimbutas, 1991, p. 384).



**KEY**

- Kurgan culture c. 3000–2900 B.C. and its infiltration into east-central Europe
- Globular Amphora and Early Corded Pottery culture before Kurgan Wave No. 3.
- Vučedol culture and its extension west and south in the early 3rd mill. B.C.

Arrows indicate directions of expansion.

**Kartenn 14 : 3ved Gwagenn aloubiñ (Kourgan III, 3000-2800, K.K.)<sup>192</sup>**  
(Gimbutas, 1991, p. 385).

<sup>192</sup> "FIGURE 10-32 Kurgan Wave N° 3 c. 3000 B.C. (or soon thereafter) and its repercussions. The Late Globular Amphora-Early Corded Pottery culture shifted to the west, north, and north-east. The Vučedol shifter to western Bosnia and the Adriatic coast and ultimately reached the Peloponnese"

An dud a zo penn-abeg d'an holl wagennoù-ensilañ a zo bet anvet Kourganiz gant M. Gimbutas. Emaomp o vont bremañ da welout resisoc'h piv oa an dud-se.

## C. KOURGANIZ

Goude ma n'eo ket bet diboan ar c'hemmoù bras omp o paouez deskrivañ, emamp o arvestiñ ivez ouzh ganedigezh holladoù sevenadurioù Indez-Europek a deuo diouto diwezhatoc'h meuriadoù bras evel ar C'hresianed, ar Gelted, ar C'hermaned, h.a. Met diagent eo poent en em c'houlenn piv a oa ar Gourganiz. Ar ger "Kurgan" a zo bet implijet da gentañ gant Marija Gimbutas a zo bet arbennigourez vras Aremvezh Europa :

« The collapse of Old Europe coincides with the process of Indo-Europeanization of Europe, a complicated transformative process leading to a drastic cultural change reminiscent of the conquest of the American continent. Archaeological evidence, supported by comparative Indo-European linguistics and mythology, suggests a clash of two ideologies, social structures and economies perpetrated by trauma-inducing institutions. The Proto- or Early Indo-Europeans, whom I have labeled « Kurgan » people, arrived from the east, from southern Russia, on horseback » (Gimbutas, 1997, pp. 25-26).

Bez e c'hellomp en em c'houlenn eus a belec'h e teue an dud-se :

« The materials of the Volga-Ural interfluve and beyond the Caspian Sea prior to the 7<sup>th</sup> millenium B.C. are, so far, not sufficient for ethnographic interpretation. More substantive evidence emerges only around 5000 B.C. We can begin to speak of « Kurgan people » when they conquered the steppe region north of the Black Sea around 4500 B.C.» (Ibid.).

Bez e c'hellomp en em c'houlenn ivez petra dalvez ar ger Kourgan da lavarout :

« The Russian word « kurgan » (itself borrowed from the Turkish) means literally a « barrow » or « tumulus » and the term « kurgan tradition » was introduced by the author in 1956 as a blanket term for the culture of these seminomadic pastoralists who built round funeral mounds » (Ibid.).

Gounideien-douar, tud digantre eus un tu, marc'heien eus an tu all setu aozennoù evit ur stokadenn sevenadurel:

« The gentle agriculturalists, therefore, were easy prey to the warlike Kurgan horsemen who swarmed down upon them. These invaders were armed with thrusting and cutting weapons : long dagger-knives, spears, halberds, and bows and arrows.

The Kurgan tradition represents a stark contrast to the civilization of Old Europe which was, in the main, peaceful, sedentary, matrifocal, matrilineal, and sex egalitarian. The Kurgans were a warlike, patriarchal, and hierarchical culture with distinctive burial rites that included pit graves with tent- or hutlike structures of wood or stone, covered by a low cairn or earthen mound » (Ibid.).

Ret eo habaskaat un tammig taerder stultus ar marc'heien o tibourkañ eus ar stepinier:

« Rectangular house-graves of timber or of stone slabs under low barrows replaced flat cemeteries and large tombs with collective burials. The Kurgan people did not exterminate the endemic population. For about two or three centuries after the Kurgan appearance in Europe, archaeology shows a coexistence of different cultural elements, a process of hybridization, a degeneration and a gradual disappearance of local elements » (Ibid.).

Ne veze ket o tont holl ar gKourganiz eus an hevelep lec'h :

« Kurgan I people were from the Volga steppe ; Kurgan II, who were culturally more advanced, developed in the North Pontic area between the Lower Dniester and the Caucasus mountains ; Kurgan III people were again from the Volga steppe » (Gimbutas, 1991, p. 352).

Un elfenn all pouezus bras hervez Marija Gimbutas eo an tremen eus ar vammlignezelezh d'an tadvignezelezh, a ya gant levezon brasoc'h brasañ ar Gourganiz war an Europiz kozh. Gwelout a reer eo deuet ar gKourganiz eus steppennoù ar Volga dreist-holl hag ivez eus ar rannvro Norzh Pontek, ma vije

bet tremenet ar saverien chatal-se d'an tadhignezelezh abretoc'h eget gounideien Europa Gozh.

### *War-varc'h*

Met ne c'heller ket chom hep menegiñ ar rebech brasañ graet da deorienn Marija Gimbutas gant arkeologourien zo, da lavaret eo ne oa ket tu d'ar Gourganiz dont war varc'h e-giz omp o paouez lenn uheloc'hik<sup>193</sup> :

« The earliest unambiguous dateable textual and artistic evidence for horse domestication probably only dates back to the end of the third millenium BC (...). Evidence of horses in graves, accompanied by artefacts unambiguously associated with riding or traction is even more recent, dating to probably no later than the end of the second millenium BC (...). By the middle of the second millenium BC horses were widely used to pull chariots — for example, in the near east, Greece, and on the Eurasian steppe (...). There is apparently no reliable textual or artistic evidence for horse-riding earlier than the end of the second millenium BC (...) » (Levine, 1999, p.9).

Koulskoude gant Marija Gimbutas e c'heller lenn ivez ar c'homzoù-mañ en ur pennad "The Indo-Europeans : Archaeological problems", savet e 1963, met adwelet ganti e 1997 :

« Archaeological evidence and the earliest historic records show that these people were ruled by powerful kings and a council of nobles. They were in possession of vehicles drawn by oxen. Horse is evidenced from the earliest Kurgan phases and onwards, but apparently was used for milk and meat and as a sacrificial animal like sheep and cattle » (Gimbutas, 1997, p. 30).

---

<sup>193</sup> « The Proto- or Early Indo-Europeans, whom I have labeled « Kurgan » people, arrived from the east, from southern Russia, on horseback » (Gimbutas, 1991, p. 352).

N'eus ket anv amañ kregiñ e-barzh an tabut-se n'eo ket peurechu c'hoazh hiziv, hag a zo unan evit ar gwellañ eo, peogwir e vount war an dud da sontañ ar ouiziegezh :

« L'histoire de l'emploi des chevaux est certes cruciale pour les régions des steppes mais on a peu d'indices pour cette période d'incursions vers l'ouest dues à des cavaliers en armes : cette thèse ne commence à prendre forme qu'à partir du dernier âge du bronze » (Renfrew, 1990, p. 167)

Kerkoulz lavarout derou an eil milved en Europa :

«Les premières représentations de cavalier à cheval, preuves irréfutables de l'existence de l'équitation, datent du début du IIe millénaire » (Ibid.).

Pelloc'h c'hoazh en he levr 'The Kurgan culture and the Indo-Europeanization of Europe', e kaver ar pennad-mañ gant M. Gimbutas a zo akord a-benn ar fin gant evezhiadennoù Colin Renfrew, pezh a ziskouez eo bet gouest an arkeologourez da emdreiñ he menoz :

« Horse was locally domesticated, and the process could have been similar to what was known in the Siberian steppes in the 18<sup>th</sup> century AD : only geldings were ridden ; the main herds of horses were kept more or less wild under a stallion, control being exercised through the mares which were milked and kept hobbled near the tents (Radloif 1883) » (Gimbutas, 1997, p. 78).

Gant an arroudennoù-se ez eus tu da gompren ne oa ket bet aloubet Europa Gozh gant tud war varc'h. A-hend-all war ar geoteier-meur e oa bet chaseet al loen-se pell zo evit ar c'hig, ha doñvaet da c'houde. Dre-se eo deuet ar meuriadoù meserien-loened da vezañ heloc'h.

### *Maesa loened*

Mont war varc'h n'eo ket an dra nemetañ a c'heller ober gant al loen-se :

« L'emploi du cheval comme bête de somme permit avant tout le développement d'un pastoralisme nomade beaucoup plus mobile » (Renfrew, 1990, p. 167).

Un elfenn diazez all eo hini an darempred etre gounid douar ha mesa loened :

« [...] le pastoralisme nomade ne fut que le sous-produit d'un développement réussi de l'agriculture » (Ibid., p. 168).

Eeün-hag-eeün diwar-benn an darempred etre gounid-douar ha maesa-loened, e c'heller lakaat an traoù e-giz-mañ :

« There are basically two forms of nomadism, the first based on hunting and gathering and the second on domesticated animal herding. Nomads would not wander aimlessly, they would return whenever possible to known locations where environmental conditions provided good hunting or pasturage for their animals and/or the possible harvest of wild grains and other edibles. Pastoralists have a permanent site, usually a small village where each family unit had a house. Presently in some of these areas houses are still constructed using the same techniques of mud-brick construction that were used in prehistoric times » (Weaving Art Museum, part II, 2000)

[[http://www.weavingartmuseum.org/ex3\\_prehist.htm](http://www.weavingartmuseum.org/ex3_prehist.htm)]

E gwir emaomp aze e kreiz kudenn an Indez-Europiz, rak soñjet eo bet en dud-se evel tud war varc'h o tont eus ul lec'h hepken, a vez klask warni, en amboaz da aloubiñ Europa, meur a wech zoken. Klask a zo c'hoazh neuze war gavell pe "Urheimat" an Indez-Europiz. Ouzhpenn-se eo stag kudenn an Indez-Europiz gant hini o yezh, rak ur yezh o deus evel-just, un "Ursprach": an Indez-Europeg. Met marteze n'eo ket bet an traoù untuek evel-se.

Goude an nebeut evezhiadennoù-se ez eus ezhomm teurel ur sell war sevenadurioù Kreiz Azia.

### *Kelteminar*

Ar goulenn eus pelec'h e teue ar gKourganiz a c'hortoz ur respont emamp o vont da glask e sevenadurioù pell kantrerien ha tud digantre Kreiz Azia. Fellout a ra deomp chom gant dezoioù sichenn rak ezhomm hon eus kompren ganedigezh ar pobladoù-se, neket studial anezho a-zevri:

« Il importe cependant de distinguer deux types de peuples, les sédentaires et les nomades, dont l'opposition a marqué l'histoire de l'Asie centrale pendant près de 3000 ans. L'aridité de cette région a contraint les sédentaires à mettre en place des réseaux d'irrigation. Leurs oasis étant éloignées les unes des autres, il leur était difficile de former des États unifiés. Les nomades ont toujours vécu dans la vaste zone de steppes et de déserts située au nord de l'Asie centrale. Quand leurs tribus parvenaient à s'unir, de puissants empires se constituaient ». ( [[http://fr.wikipedia.org/wiki/Histoire\\_de\\_l'Asie\\_centrale](http://fr.wikipedia.org/wiki/Histoire_de_l'Asie_centrale)] ).

Kement-se ne ra ken met kadarnaat menoz C. Renfrew a-zivout an darempredoù etre ar gantrerien hag an annezerien.

« The pastoral economy is usually symbiotic with the agricultural one as it has been shown that a major component of the diet of these pastoralists was bread. The practice of agriculture is thus a precondition of a pastoral economy. In general a nomadic way of life may often have developed from the more limited mobility of a transhumant one » (Renfrew, 1990, p. 198).

Gant ar penn-menoñ-mañ m'eo tleour ar mesaer-kantreour d'ar gounider digantre e komprenervat e teu sevenadur ar gKourganiz da heul hini ar c'hounideien-douar en toleadoù a zedenn ac'hanomp. Gwelet hon eus uheloc'hig, en Europa eo bet krog ar gounid-douar er Balkanioù gant sevenadur Starčevo. Met war ar stepinier ivez ez eus bet sevenadurioù oc'h ober gant ar gounid-douar, ha ne c'heller ket lakaat war chouk gounideien-douar Europa Gozh doñvadur ar c'hezek. Met evel-just, an dra-se zo c'hoarvezet diwezhatoc'h, etre ar pevarvet hag an trivet milved K.K. e Botai, norzh Kazakhstan. Ret eo kempredañ an holl argerzhioù-se, adalek Starčevo er pempvet milved betek Botai evit mennout kompren resis an termen hollek



Kourganiz. End-eeün, daoust hag-eñ e c'heller bezañ spisoc'h war-benn ar mont en-dro etresevadurel-se?

« Eventually, around 5200-5000 BCE, the new herding economy was adopted by a few key forager groups on the Dnieper River, and it then diffused very rapidly across most of the Pontic-Caspian steppes as far east as the Volga and Ural rivers. This was a revolutionary event that transformed not just the economy but also the rituals and politics of steppe societies » (Anthony, 2007, pp. 119-120).

O paouez omp gwelet pegoulz eo bet dalc'het krog en argerzh sevenaat eus ar gounid-douar betek ar mesa-loened, met gouest omp ivez da vezañ resisoc'h war al lec'h m'eo bet krog. E Turkmenia hiziv emañ lec'hiet sevenadur kozh Kelteminar:

« (Most of Central Asia was dominated during the period of the Turkmenian neolithic by what has been called the Kelteminar culture, which has a characteristic range of pottery and flint types. In many cases the settlements are located on the banks of lakes and small rivers, and it has been suggested that fishing as well as hunting were of considerable economic importance) » (idem).

Adkavout a reomp amañ er stepinier, prantad an hemolc'her o treiñ da gounider-kantreer. Hervez klaskerien zo e vije aet kuit neuze ar gantrerien anvet Kourganiz eus ar mor Kaspian etrezek ar Volga dre heg rak gounideien gKelteminar :

« V. N. Danylenko a supposé que les hommes de Djebel avaient quitté le sud-est de la Mer Caspienne pour se rendre sur la Volga à cause de la pression des hommes de Kelteminar, et il a même distingué deux vagues de migrations » ([http://fr.wikipedia.org/wiki/Histoire\\_de\\_l'Asie\\_centrale](http://fr.wikipedia.org/wiki/Histoire_de_l'Asie_centrale)) (Sergent, 1995, p 434).

Aze e weler splann eo bet rediet tud zo da vont kuit... e lec'h all, hag al lec'hioù all-se a veze aloubet ganto evel-just. Uheloc'hik eo bet lennet a-berzh M. Gimbutas e teue Kurganiz ar wagenn gentañ (4.400-4.200) ha diwezhañ (3.000-2.800) eus ar Volga e lec'h ma oa aet kuit tud zo rak an dalc'h gant tud Kelteminar warno.

N'eo ket diezhomm splannañ c'hoazh n'eo ket mont war varc'h evit kontrollañ bagadoù kezeg gouez heñveldra ha marc'hegañ da vont d'ar brezel. Div vicher zisheñvel eo koulz lavarout. Setu n'eus dislavar ebet e gwirionez etre amzeriad V.F. Zaibert hag hini M. Levine pe C. Renfrew, peogwir ne komzont ket eus ar memes doareoù da vont war varc'h dispartiet mat ma vezont an daou zoare-se war skeul an amzer:

« La domestication du cheval a été effectuée dès le V<sup>e</sup> millénaire av. J.-C. par les Proto-Indo-Européens. Ceux-ci créèrent une culture dite des kourganes d'après la forme de leurs sépultures Une partie d'entre eux migra durant le IV<sup>e</sup> millénaire av. J.-C. de la Russie du sud jusqu'en Sibérie méridionale, sur le cours moyen de l'énisseï. Ils y fondèrent la culture d'Afanasievo, qui subsista durant tout le III<sup>e</sup> millénaire av. J.-C. On incline à voir en eux les ancêtres des Tokhariens. Vers l'an -2000, ils s'installèrent dans le bassin du Tarim, autour du désert du Taklamakan ».

( [[http://fr.wikipedia.org/wiki/Histoire\\_de\\_l'Asie\\_centrale](http://fr.wikipedia.org/wiki/Histoire_de_l'Asie_centrale)] ).

### *Botai*

Dont a raimp en-dro war ar poent-se a zo kreiz en hon enklask, d'ar mare pa vo graet anv eus divroadeg Repin. Pouezomp c'hoazh un tammig ma vo splann an traoù war sevenadur Botai e norzh Kazakhstan, brudet evit donvañ kezeg:

« Un site remarquable est celui de Botai, au nord du Kazakhstan. Ses outils en silex ont permis de le dater des IV<sup>e</sup> millénaire av. J.-C. et III<sup>e</sup> millénaire av. J.-C.. Les maisons étaient semi-souterraines, avec un toit en bois. Il s'agissait d'habitations permanentes. Les os d'animaux qui ont été trouvés proviennent à

99% de chevaux. Les hommes de Botai les chassaient mais ils commençaient aussi à les domestiquer. On sait aussi qu'ils les montaient » (Ibid.).


Gant ar pennad-se e weler mat da gentañ eo bet doñvaet ar marc'h kalz abretoc'h eget n'eo bet aet warnañ. D'an eil eo bet tizhet ur pal eus hon enklask rak e adkavomp amañ sevenadur Afanasievo eus ar pevarvet milved kantved K.K., a oa bet savet gant Kurganiz (koulz lavarout Kent-Indez-Europiz). Dilezet hon doa an dud-se e-pad ur mare, a-benn danevelliñ istor emdroadur Europa Gozh betek donedigezh ar Gent-Indez-Europiz end-eeün. Ha ma'z eo aet un darn eus an dud-se war-du ar c'hornog, tro ar bloavezhioù 3.000-2.800 da sevel teirvet gwagenn ensilañ Europa peuz-kourganizet endeo ken abred ha 4.400-4.200, e oa aet un darn all e-keit-se etrezek Sibiria, war ar Yenisei ma voe savet ganto sevenadur Afanasievo a badas 17 kantved bennak, betek ar bloavezhioù 2.000 KK.

Bezef a vezo, ez eus daou geal da skubañ diwar hor spered avat : skeudenn an aloubiñ<sup>194</sup> da gentañ a zo ret da lakaat "ensilañ" en e lec'h, ha d'an eil hini ar marc'hegañ kent an aremvezh.

Gwelet hon eus enta e teue ar gKourganiz a-bell vro. War ar gartenn da heul ne weler meneg ebef eus Keltiminar, koulskoude emañ lec'hiet etre ar mor Kaspian hag hini Aral.

---

<sup>194</sup> An teirvet gwagenn marteze a zo bet drastus [p. 177]



- 1. North Pontic or Mariupol culture
- 2. Transcaucasian Copper Age culture invaded by the Kurgan people in the 5th millennium BC
- 3. Kurgan culture in the lower Volga and Kazakhstan (in the east to the upper Yenisei; Afanas'jevo culture not shown on the map); arrow: expansion c. 4400-4300 BC (or before) to the North Pontic area.

**Map 1: Map of the Eurasian Steppe and Caucasian cultures of the 5th-3rd millennia BC**

**Kartenn 15 : Stepinier Eurazia hag ar C'kaokaz (5vet-3vet milved K.K.)**

(Gimbutas, 1997, p.

Pell zo e oa bet komprenet perzh bras tud a stepinier e c'hoarvoudenn ar gKourganiz e ganedigezh Yamna:

« It seems likely at present that the fully mobile pastoral economy of the Eurasian steppeland developed either in area (a) (south Russia, steppe margins) or (b) (north of the Caucasus Mountains, between the Black Sea and the Caspian Sea). We are thus talking of the range of cultures which go under the

name of *yamna* (Pit Grave) or Kurgan (burial mound) cultures » (Renfrew, 1990, p. 201-202).



**Kartenn 16 : Yamna ( 3500 K.K. )**

[[http://en.wikipedia.org/wiki/Yamna\\_culture](http://en.wikipedia.org/wiki/Yamna_culture)]

« The context there is in the early farming Tripolye and Cucuteni communities of the eastern Balkans. It was the spread, from west to east, of the *yamna* or Kurgan cultures of the first true steppe neolithic which gave the steppe lands of Europe and Central Asia their first cultural unity » (Renfrew, 1990, p. 202).

Adkavout a reomp amañ ar pezh zo bet lavaret uheloc'h diwar-benn an darempred etre sevenadurioù digantre ar gounideien hag ar sevenadurioù all o paouez hemolc'hiñ evit gounid-douar en ur zoñvaat loened, kezeg dreist-holl, hag o mesa en ur gantreal. Pep tra a c'hoarvez e-giz pa vije en em gavet ar gKourganiz etre daou sevenadur gounideien, er Balkanioù hag e Kelteminar e Kreiz Azia.

Diwar ur greizenn da vout lakaet etre Samara ha Sredny Stog (Dereivka), peotramant etre ar Volga hag an Dniepr o tinaouiñ er Mor Du, e vije lec'hiet Yamno pe sevenadur ar Gourganiz enta, hag alemañ e vije savet ivez an teir gwagenn 'ensilañ e-barzh Europa Gozh', war-bouez an eil hini tostoc'h ouzh rannvro ar Ponteg.



**Kartenn 17 : Ar stêr Volga**

[[http://en.wikipedia.org/wiki/Volga\\_River](http://en.wikipedia.org/wiki/Volga_River)]

Setu un doare all da welout gwriziennoù ar c'hoarvoudenn hervez patrom Gimbutas :

« Around 5000 BC, the Samara culture arose in the Volga region; this was followed by the Khvalynsk culture, extending through the first half of the fifth millenium. In the mid-fifth millenium BC the early Yamnaya or Pit-Grave culture kurgans appear, marking the beginning of the first kurgan phase. Gimbutas dated this period, during which warlike kurgan people made their presence felt both in the Caucasus and, subsequently, in east-central Europe and the northern Balkans, to 4400-4300 BC » (Levin, 1999, p. 60).

Arabat e vefe deomp tremen re a amzer war ar gudenn-se met bez e c'heller kemer e kont un eil andon evit ar gounid-douar o lakaat un termen d'an neolitik gant un ekonomiezh greantiñ :

« While in the steppes, the Neolithic encompasses the sixth to the middle of the fourth millenia bc, in southwest Asia it extends from the eighth to sixth millenia bc. And it is there that the foundations of a productive economy were laid ». (ibid., p. 184).

Ar gwrizenioù a zo da vezañ klasket gwall bell:

« During the neolithic in the ancient east, all kinds of cereals were cultivated, along with a considerable collection of vegetables, fruits and berries, and almost all the modern herd species were domesticated. Only the horse and a number of exotic animals were domesticated later. The domestication of the horse, which took place during the Eneolithic in the Eurasian steppes, can be regarded as one of the most important components of the 'Neolithic revolution', and the event that concludes it » (ibid., p. 185).

N'eus ket da souezhiñ e gwirionez rak ar pezh emamp o welout amañ n'eo ken met diorren ar gounid-douar neket diwar Anatolia e-giz hon eus gwelet er Balkanioù, met etrezek ar reter dre benn all stêrva an Tigr hag an Euphrate<sup>195</sup>.

« Danilenko saw the whole cultural phenomenon as originating in the east, in the zone of 'contact' between the primitive agriculturists of the Near east and the primitive pastoralists of Central Asia and the Caspian region' — a phenomenon that was 'subsequently diffused through the steppe zone of the Black Sea coast'. The westward advance was conceptualized as occurring in several waves, although these were never explicitly defined (1974, 87-91) » (Ibid., pp. 61-62).

---

<sup>195</sup>Ar greskenn strujus = Croissant fertile

« In studying the steppe Eneolithic in the Volga and Caspian regions we are currently faced with the problem of filling in the large chronological gap between the Khvalinsk culture and the early Yamnaya culture proper.

The question of the chronological interval between the Khvalynsk cemetery (and the Khvalynsk culture as a whole) and the Volga region Yamnaya culture sites therefore remains open. The problem is increasingly seen as linked to the expansion of the Repin culture outward from its forest-steppe Don origins (Sinyuk 1981; Vasilev & Sinyuk 1985; Trifonov 1996). This interpretative trend obviously threatens the assumptions of Gimbutas, Merpert and Danilenko » (Ibid., p. 68).

Bez e c'hell bezañ kavet ar respont d'hor goulenn e sevenadurioù Kelteminar evel andon da re Makhandzar hag Atbasar, ar re-mañ d'o zro o vezañ andonioù da sevenadur Botai:

« The Botai culture is characteristic of the steppe Eneolithic of northern Kazakhstan (the Ural-Irtysh interfluve) and is dated by traditional archaeological methods to the thirtieth to twentieth centuries bc, that is, it occupies the whole of the third millenium bc (...). Late Atbasar and Makhandzhar Neolithic tribes participated in the development of the Botai culture » (Levine, 1999, p. 201).


An dra-se a c'houlenn displegadurioù :

« Traditionally, the following cultures are identified; the Atbasar (Zaibert 1992); Makhandzhar (Logvin 1991); and Kelteminar (Vinogradov 1981; Tolstov 1962).

Assemblages of finds from these cultures provide evidence for a traditional 'appropriating' economy based on hunting, fishing and gathering. Hunting dominates in the forest-steppe regions, and fishing in the wide river valleys.



In their most general attributes, these cultures are similar to the Kelteminar culture in the eastern Caspian-southern Aral region, and to the south Ural Neolithic » (ibid., p. 183).



**Figure 4.2.** Geological map of the area discussed. Boxes indicate the general locations of the three main cultures. See later figures for enlargements of these areas. A) Makhandzhar culture (see Fig. 4.11); B) Atbasar culture (see Fig. 4.4); and C) Kelteminar culture (see Fig. 4.5).

### **Kartenn 18 : Kreiz Azia ( Makhandzhar, Atbasar, Kelteminar )**

Amañ e adkavomp sevenadur Repin evel andon da hini Afanas'yevo. Bez' e weler ez eus daou ved o sevel kichen-ha-kichen : bed geoteier meur ar Mor Du, hag hini Geoteier Meur Oural ar reter, ha na vefe den evit lavarout hag-eñ ez eus bet darempredoù etrezo. Prantad an trivet milved an hini eo a zo holl bouezus. D'ar mare-se n'eus dislavar ebet etre an holl arkeologourien hon eus studiet, adalek Marija Gimbutas betek Marsha Levine, en ur dremen dre Colin Renfrew hep disoñjal J.P. Mallory pe Yuri Rassamakin: e-kerz an trivet milved

eo, hini sevenadur Yamnaya hag Afanasevo, e kej an daou ved-se, da lavaret eo kavell an Indez-Europiz evit lod etre Dereivka ha Samara eus un tu, hag hini pell Mongoloided Sibiria eus an tu all, hep na ve den koulskoude evit ober anv eus tud war varc'h.

Ha pelloc'h war-du ar c'hornog ar wezh-mañ an teirvet gwagenn a gas ganti sevenadurioù all tostoc'h ouzhomp, eus ur prantad arkeologel a vo anvet C'houeorvezh, re Gobedoù Kloc'h hag ar Priaj Kordennet:

« According to Gimbutas, a third wave of kurgan people occurred between 3100 and 2900 BC, marking a massive eastward incursion into Central Europe by people who, in their homelands around the Dnepr, Don and Volga rivers, could be identified with the later phase of the Yamnaya culture. This final wave led to the formation of new cultures, notably the Bell Beaker and Corded Ware cultures ». (ibid., p. 60).

An daou sevenadur-se en deus arguzet Colin Renfrew, a zisorc'h diouzh ur rouedad oberezhioù ha eskemmoù kenetre, kentoc'h eget eus luskoù pobladoù pe begennoù tud<sup>196</sup>:

« The suggestion that the Corded Ware/Battle Axe people of central and northern Europe behaved in this way [aggressive behaviour of the mounted warrior] was based largely upon the fundamental misunderstanding of ignoring these distinctions<sup>197</sup> » (Ibid., p. 200).

Evit Renfrew, ne c'helle ket bezañ abretoc'h mare ar gwagennoù aloubiñ eget an eilvet milved, a-hend-all e komz kentoc'h eus "arallekadur kenetre war-vern" en Europa. Ar c'hounideien gentañ dreist-holl zo aet da varrañ war du ar reter m'eo ganet ur sevenadur mesaerien en toleadou-se. Komzet e vo pelloc'h eus ar pezh eo deuet an dud-se da vezañ.

Neuze, pa gomz M. Gimbutas eus Gwagennoù aloubiñ e ra anv Hawkes eus "misionerien". Met marteze ez eus tu da gavout un hent etre:

---

<sup>196</sup> Renfrew, 1990, p. 174

<sup>197</sup> Mesañ-loened er stepinier, mesañ war varc'h, ha brezeliñ war varc'h

« Que recouvre cette nouvelle koiné ? Non pas une véritable migration, mais plutôt des déplacements rapides par petits groupes porteurs d'un patrimoine matériel et spirituel qui leur permet de s'imposer en minorités dominantes, tout en s'adaptant aux cultures des milieux locaux qu'ils contribuent à transformer » (Mansuelli, 1967, p. 56).

### *C'houeorvezh*

Ar c'houeorvezh pe oadvezh ar c'houevr a verk dibenn greanterezh ar c'hailhastr:

« By the criteria of archaeological periodization, the Eneolithic should be understood as the age when copper tools were first introduced. This, generally speaking, led to the decline of flint industry as a whole and the impoverishment of stone tool assemblages. New, stable assemblages of archaeological types make a striking appearance, representing a specific material culture: flat-bottomed, richly decorated pottery, small figurines, simple dwellings with even floors. [...]» (Levine, 1999, p. 197).

Tu a zo gouzout pelec'h e veze kavet ar greanterezh nevez-se en toleadoù a zedenn ac'hanomp: e kreiz Azia, e Kaokazia hag e rannbarzh Mor Du an hanternoz, e-touez sevenadurioù gounideien ha mesa-loened<sup>198</sup>. War-un-dro gant ar metal e teu war-wel ivez traezoù nevez, madoù lorc'hañs, a-gevret gant sevenadurioù an amzer-vremañ :

« The beginning of prestige exchange was a critical moment in the life of the Pontic tribes; strictly speaking, it marked the advent of the Eneolithic as an epoch » (Ibid., p. 100).

Neuze petra soñjal eus gwagennoù M. Gimbutas? Tremenet omp eus ar menoziad aloubiñ d'ar menoziad ensilañ gant an oberourez. Hogen e kaver un

---

<sup>198</sup> Levine, 1999, p. 197.

doare all da ijinañ an darempredoù a zo bet etre an dud d'ar mare-se a zo bet deskrivet aketus gant Rassamakin :

« We are undoubtedly dealing with the burials of an élite, whose emergence must be seen in terms of the development of a long-distance prestige exchange system » (Ibid., p. 111).

Hervez doare e ranker tremen eus gwagennoù-aloubiñ da mareadoù kenwerzh:

« It may be, then, that the Early Eneolithic saw not warlike migrations of steppe peoples — a first kurgan wave — from the Volga or Caspian region, but rather the emergence of a mutually beneficial system of exchange between the steppe populations and the production centres of the agricultural world » (Ibid., p. 114).

Natur an darempredoù etre an dud e-par ar c'houeorvezh d'an nebeutañ, pell a vezañ bet brezelius a vije bet diazezet eta war eskemmoù madoù lorc'hañs, a veze stag ganto ivez, marteze, marvailhoù pe kredennoù marzhus. Peadra da doullañ kaoz e-pad ur mare ? Ar skouer-se er mare-se a c'hell bezañ ledanet da bed Europa Gozh oc'h emdroiñ diwar eskemmoù traoù nevez degaset gant tud a valee pell evel ar Gobedoù Kloc'h a vo gwelet emberr. Koulskoude, menoziad ar marvailh pe ar varzhenn a zere madig d'ar perzh c'hoariet gant an dud-se, a rafemp a-walc'h marvailherien anezho, en ur werzhañ pe eskemm kentoc'h o marc'hadourezh panaveken. Un tammig evel ar chaseourien wechall o tont en-dro, goude ur prantad pell eus o ziegezh pe eus o c'hlan, ha marvailhat diwar-benn al loened souezhus o dije kejet ganto. Forzh penaos eo ret mat ensilañ un dra bennak e-barzh Europa Gozh, ha ma n'eo ket alouberien kig ha gwad, d'an nebeutañ traezoù. Neuze, war gartennoù teir gwagenn Marija Gimbutas, ma n'eo ket gouennoù nevez a weler o tiskouez, ez eo d'an nebeutañ anoioù sevenadurioù nevez o emdreiñ, levezonet ma vezint pep hini diouzh e du gant sevenadur o teredek eus an tolead a vo anvet diwezhatoc'h : "kavell an Indez-Europiz", e-giz ma oa bet levezonet tolead ar Balkanioù o tont da vezañ anvet Europa Gozh gwezh-so gant teknikoù nevez sevenadur Anatolia. Kement-se, anat, ne vir ket ouzh traoù skrijus da c'hoarvezout. Setu dre vras

penaos e komprenomp an argerzh avat. Met n'eus ket anv amañ da studial an argerzh indez-europaat dre holl. Tu zo ouzhpennañ memestra e tle gerioù zo a-gevret gant traezoù pe loened bezañ tremenet er yezhoù komzet gant tud Europa Gozh, met ne'z aimp ket larkoc'h war an dachenn-se dre aon bezañ kaset re bell eus hor c'hazeg.

Bremañ e c'heller treiñ ouzh an trivet milved Kent Krist, hini sevenadurioù bras evel hini ar Prierezh Kordennet pe ar Bouc'hal Emgann eus hanterenn gentañ ar milved, a vo oc'h en em ledañ war rannadoù-douar divent adalek Kreiz Europa betek Gwalarn Alamagn, Reter ar Broioù Baltek ha Kreiz Russia<sup>199</sup>. Ar vouc'hal a veze e-touez an traezoù lorc'hañs er mareoù-se, hag abaoe an neolitik:

« Together with these vessels the graves contained stone implements of neolithic shape: a polished axe, flint arrowheads and a “battleax.” On the encampments, furthermore, there were found knife-shaped flakes and other small stone tool. Just as the neolithic hunters, the people of the Afanas'yevo stage continued to adorn themselves with pendants made of animal teeth » (Levin, 1964, p. 43)

Peogwir ez eo ar re-se sevenadurioù mesaerien uheldadel pe tatlignezel, gouez da Marija Gimbutas, e c'heller muzuliañ pegen don eo bet levezon hor marc'hadourien pe marvailherien war ar sevenadurioù kent. Kemmoù bras a zo bet degaset gant an dud-se ivez el lidoù stag ouzh ar bed all. Donder ar c'hemmoù-se a c'hell bezañ displeget gant ar vegenn eus an dud pinvidik a-walc'h evit gallout prenañ pe eskemm an traezoù nevez hag en em gavout e penn lidoù-douarañ nevez.

Gouzout a reomp ivez ez eo mare sevenadur Yamna, da lavaret eo mare an darempredoù etre takad ar Pont ha Sibiria ar Yeniseï, dre c'heoteier meur Kreiz Azia.

An holl dud-se kredabl, a zo bet roet dezho o idantelezh kentañ gant tud Yamna pe ar Gourganiz, harvez sav-poent Colin Renfrew. An arguzenn-se, embannet e 1987 d'an nebeutañ, a oa a-walc'h da wanaat teorienn Marija

---

<sup>199</sup> GIMBUTAS, 1991, p. 420

Gimbutas d'ar mare-se. Gallout a reer hiziv an deiz resisaat luskoù meuriadoù er mareoù-se dre bouezañ war sevenadur "Kelteminar", ken abred hag ar 6<sup>vet</sup> milved KK betek ar pevarved hini, da lavaret eo a-gent ar gwagennoù "aloubiñ" deuet de vezañ "ensilañ", Europa Gozh".

### *Altai-Sayan*

Evit Yamna da verkañ derou an aremvezh e bed stepinier kornog Europa, e verk ivez dibenn an neolitik pe ar maenvezh en un doare trumm a-walc'h zoken ma n'eus ket tu gouzout ha dont a rae an dud-se eus ul lec'h resis :

« The appearance of the Yamanaya culture (c. 3000/2900-c. 2300/2200 BC) marks a dramatic advance in the cultural development of the steppe (Rassamakin 1995). The Yamanaya culture or culture-historical province — extends over a vast territory and gives the impression of being a unified entity. At first glance, it seems to have little connection with the preceding period, especially in the Azov-Black Sea steppes » (Levine, 1999, pp. 125-127).

Ar c'hemm a verk un troc'h sevenadurel:

« It follows from this that with the emergence of the Afanas'yevo culture of the early pastoralists, it was precisely the steppes, as distinct from the taiga, which became the region of this economic advance and the center of the new productive economy. By taming animals and switching to pastoralism, the steppe-dwellers had moved far ahead of their neighbors, still living in the forest and tundra ». (Levin, 1964, p. 43).

gevred hag ar reter gant sevenadur Sintashta pe ar "Bezioù-Prenn"<sup>215</sup>. D'ar mare-se, e-pad dibenn an trived milved e vefe divroet Kent-Indez-Europiz Yamna war-du traoñienn an Danub ha kejañ gant tud ar Priaj Kordennet, hag ar re all, e-kerz derou an eilvet milved K.K. Indez-Iraniz, pe Arianiz a vije aet war-du ar reter (Sintashta) pe ar gevred, betek an Indus zoken evit darn:

« There is, however, no doubt that the Afanasjevo and Bronze Age cultures of the Siberian steppes, the Andronovo and Tazabag'jab in the Aral Sea area, belong to the same Kurgan family and are represented by the same physical type of people<sup>216</sup> » (Gimbutas, 1970, p. 177).

N'eus abeg ebet ne vije ket bet ar Gobedoù Kloc'h eus an hevelep rummad tud hag ar re deskrevet gant Gimbutas. Komzet hon eus anezho endeo uheloc'h. Kavout a ra deomp bezañ diszouezet sklaer an darempred etre Kourganiz geoteier Sibiria hag ar Gobedoù Kloc'h. Ne vefe ket falloc'h reiñ un diazez kronologel eus tud ar prantad-amzer-se ha merzout e tegouezhont dres da vare divroadur Yamna, ha sevenadur Sintashta, da lavaret eo disrann ar gKent-Indez-Europiz:

« For the beginning of the Bronze Age the dates of the Bell Beaker in Germany obtained by carbon-14 dating are of importance. They fall between ca. 2200-2100 and 1800-1700 B.C.» (Gimbutas, 1965, p. 29).

---

<sup>215</sup> Timber-Grave

<sup>216</sup> Amañ e kaver un unvaniezh etre Cernunnos Gundestrup ha « Tres e gern bual » Harappa, pp. 462 ha d.h...

### C. UNETICE

Ret eo deomp mont war-raok ha tremen diouzhtu da vare Unetice a verk derou an Aremvezh en Europa :

« The Únětice culture in central Europe, with which a real metal culture starts, immediately succeeds the Bell Beaker and the Corded period » (Gimbutas, 1965, p. 29).

Met arabat ken gwelout Unetice evel distag diouzh ar prantadoù da heul :

« The Únětice-Tumulus-Urnfield culture with its very rich Bronze Age materials, obtained from thousands of hoards, graves, and from habitation sites, certainly is the backbone of the European Bronze Age chronology outside Greece. The Únětice-Tumulus-Urnfield chronology is applicable to many cultural groups adjacent to central Europe because they belong to the central European sphere of influence » (Ibid., p. 30).

Ne c'heller ket dioueriñ un amzeriadur evit skorañ outañ ar prantadoù amzer anavezet. Berr-ha-berr setu ar re a gemeromp digant M. Gimbutas<sup>217</sup> : Aremvezh kentañ (tro 1800 B.C. – 1450 B.C.), Aremvezh krenn (tro 1450 B.C. – 1250 B.C.), hag Aremvezh diwezhañ (tro 1250 B.C. – 750 B.C.).

A-zivout Aremvezh trifleg Europa ez eus tu da zegemer deskrivadur M. Gimbutas a zo unan eus arbennigourezed gwellañ ar prantad e kreiz ha reter Europa :

« This bloc was formed in the early second millenium B.C., developed vigorous metallurgical centers in the Early Bronze Age (from the eighteenth to the fifteenth B.C.) expanded over a large expanse of central and eastern central Europe toward the end of the fifteenth century B.C., or around 1400 B.C. and finally, after the adoption of cremation as a form of burial, became an

---

<sup>217</sup> 1965, p. 31

"Urnfield" culture. The early Urnfield people at the end of the thirteenth century B.C. began a great expansion movement to the Apennine and the Balkan peninsula and to the eastern Mediterranean. After 1400 B.C., the influence of the central European culture reached all Europe with the exception of Russia proper and the far north » (Gimbutas, 1965, p. 245).

An doareoù beziañ a zo heñvel e-pad sevenadur Unetice ha re ar gKourganiz e stepennoù Eurazia, pezh a ziskouez mat orin gouennel ha sevenadurel an dud-se, a oa perzh bras enno azeul an heol, pe d'an nebeutañ bras ar perzh c'hoariet gant an heol enno, e steppoù ar Pont kement ha gant ar re Gordennet. Met c'hoant hon eus pouezañ war un dra all a zo tostoc'h ouzh hon danvez, komz a reomp eus luskoù divroañ ar meuriadoù a ya da sevel an Indez-Europiz, a zo evel-just an dud a gomz yezhoù Indez-Europek, hag a c'hell bezañ a-bouez penn evit kompren gwelloc'h emdroadur ar rannyezhoù, dre-se e vennomp dreist-holl ar rannyezhoù Keltiek :

« Early Urnfield expansion, linguistic evidence, and later historic developments definitely prove that the people of the Unetice-Tumulus-Urnfield culture were Indo-European speakers. The nuclei of the Celtic, Italic, Illyrian, Venetic, Phrygian, and Armenian linguistic groups are to be looked for within the limits of the central European Early and Middle Bronze Age, their formation and destiny are connected with expansions to eastern central Europe and to eastern France at the end of the fifteenth century B.C., to Italy, southern Yugoslavia, Macedonia, Greece, Anatolia, and the eastern Mediterranean area in the last quarter of the thirteenth century B.C., and to southern France and Catalonia around the middle of the eighth century B.C. » (Ibid., p. 339).

Tro hon do da zistreiñ war-se pa vo klasket termeniñ pegoulz eo en em lakaet Kelted zo da zistagañ ur *p* diouzh re all manet gant o distagadur *q*. Evit muzuliañ gwelloc'h perzh sevenadurel ar Gelted e-par Aremvezh Europa n'eus ken menegiñ frazenn-mañ an arkeologour Jacques Briard a zisplege :

« A partir d'Unétice surgiront maintes cultures et il est bien étonnant qu'on n'ait pas essayé plus souvent de voir, dans la "Koiné" unéticienne, un phénomène "protoceltique" » (Briard, 1976, p. 96).

E-pad ar prantad kent-Keltiek-se a vefe enta eus aremvezh Europa, e c'heller stadañ kemm bras relijiel dilez an azeulioù neolitik stag ouzh strujusted ar Speredoù-Mamm-Douar, met ivez dalc'h ar c'herniel stag ouzh diorroadur ar sevel chatal:

« Comme tous les autres centres du Bronze Ancien, Unétice verra l'abandon des vieux rites néolithiques et du culte de la fécondité, symbolisé par les Déesses-mères, mais conservera parfois le symbole des cornes, lié au développement de l'élevage. Les structures sociales, qu'on décèle par l'étude des nécropoles, dénotent une société peu hiérarchisée, mais non matriarcale ni collectiviste. Naissance d'un monde plus individualiste, plus violent aussi, la multiplication des armes aussi bien que l'apparition de villages de hauteur fortifiés l'attestent » (Ibid., p. 97).

Diouzh lenn e ranker kompren eo manet arouez ar c'herniel, a oa anezhañ agent, a vije deuet neuze da vezañ arouez n'eo ket ken eus al labour-douar met ar sevel chatal o tiorren e-pad an aremvezh diwar levezon ar gKourganiz mesaerien-loened o tont eus ar stepinier. Adkomzet e vo eus se diwezhatoc'h.

Pa tremener da sevenadur ar parkoù-jarl<sup>218</sup>e stader ur wezh ouzhpenn braster ar perzh c'hoariet gant ar Gelted e-pad ar prantad-amzer-se:

« The western Urnfield people, who in the eighth century B.C. occupied almost all of southern France and parts of Spain and established trade with the Greeks via the Mediterranean Sea, became the largest and strongest Urnfield unit and created the fabulous Celtic Hallstatt and La Tène culture » (Gimbutas, 1965, p. 355).



Splann eo enta an darempred etre Unetice hag ar Gelted, ken splann hag an darempred etre ar Gurganiz ha sevenadur Unetice, hag a c'hellfe bezañ lakaet da gKent-keltiek koulz lavarout.

#### D. KELTED hag INDEZ-IRANIZ

Henry Hubert en doa labouret kalz diwar-benn an darempredoù kozh a oa bet etre Kelted zo gant ar pezh a zo deuet da vezañ hiziv sevenadurezh India. An darempred a zo bet etre ensavadurioù Keltiek hag Indian n'eo ket da anatañ ken, nag etre an Drouized hag ar vBrahmaned. En em gavout a reomp amañ e-kreiz tachenn triflegezh Georges Dumézil. Hubert a skrive an dra-mañ da skouer:

« [...] la civilisation de La Tène ne correspond effectivement qu'à l'un des groupes de Celtes, ceux-ci s'étant divisés bien avant le Ve siècle avant Jésus-Christ. Elle est celle des Brittons continentaux, qui prirent ensuite la tête des autres groupes. Elle n'est pas celle des Goidels d'Irlande » (Hubert, 1974, I, p. 92).

Arabat e vefe ankouaat eo bet kemeret skouer ar C'halianed gant Dumézil evit keñveriañ gant an Iwerzhoniz en e studi eus kealoniezh trifleg an Indez-Europiz<sup>219</sup> hag o darempredoù gant India Vedaek.

Nemet evit komz eus ar gumuniezh-se e c'heller dont en-dro d'ar pezh edomp o tisplegañ tuchant, da lavaret eo argerzh disrann ar gKent-Indez-Europiz, o kregiñ gant divroadur Yamna davet an Danub e-pad hanterenn gentañ an trivet milved (2800-2600 BCE<sup>220</sup>) hag a roio dre gejañ gant sevenadurioù all koshoc'h, ganedigezh d'ar yezhoù Indez-Europek, padal en tu all, un tammig diwezhatoc'h (2400-2200 BCE<sup>221</sup>) etrezek ar reter, e teuo war wel sevenadur Abashevo, heuliet gant hini Sintashta (2100-1800 BCE<sup>222</sup>) hag Andronovo, a roio ganedigezh d'ar yezhoù Indez-Iranek. An holl luskoù-se a zo rann eus an hevelep emsav, n'eo ket bet unan trumm tamm ebet. Ret eo kontañ niver ar c'hantvedoù, kant bloaz pep hini, ha skubañ diwar hor spered skeudenn alouberien war varc'h evit lakaat en o lec'h gwagennoù ensilañ, zoken ma 'z eus bet freuz ha reuz gwezhioù zo. Hervez hor sifroù e c'hellomp jediñ e oa c'hoazh eus ar gumuniezh kent-Indez-Europek betek hanterenn gentañ an trivet milved

---

<sup>219</sup> Dumézil, 1958, pp. 11-12

<sup>220</sup> Anthony, 2007, p. 368

<sup>221</sup> Idem, p. 382

<sup>222</sup> Idem, p. 390

K.K. Met ne glaskomp el labour-mañ nemet kaout menozioù diazez, abeg et mat, war an amboaz skoaziañ hon goulakadur.

Un amzeriadur dre vras evel hon hini kent a dleomp da David Anthony, a c'houesta kerentiezh an tokarianeg hag ar c'heltieg, hag ivez hini ar c'heltieg hag ar yezhoù Indez-Iranek:

« Les affinités des dialectes désignés actuellement sous le nom de tokharien et du celtique sont de nature grammaticale, comme celles du celtique et de l'italique. [...] »

Ce système d'analogies, fort différent de celui que le celtique forme avec l'indo-iranien, fait penser, toutes proportions gardées, à une parentée comparable à celle de l'italo-celtique, mais effacée par le temps » (Hubert, 1974, 84-85).

Reiñ a reomp da lenn ur pennad all gant Henry Hubert a zilez an traoù dres d'ar mare emamp erru ganti:

« Les comparaisons qui ont été faites entre le celtique et les langues orientales de l'indo-européen, indo-iranien et tokharien, ouvrent des vues sur un passé plus lointain, sans permettre de reculer outre mesure la séparation des groupes extrêmes, et invite à déplacer vers l'Orient, où je n'essaierai pas de les retrouver, le point de jonction des groupes voisins » (Hubert, 1974, pp. 85-86).

Trugarez d'an deskamant gounezet abaoe oberenn Hubert embannet e 1974 emamp o vont da ergerzhout un tammig an dachenn-se. Al lec'h emamp o klask bevenniñ eo hini ar meuriadoù a gomze c'hoazh Indez-Europek boutin. Setu hini ar rannyezhoù :

« [...] le nombre des groupes indo-européens conservés ne prête nulle part à contestation. Ce sont : le hittite, le « tokharien », l'indo-iranien, l'arménien, le baltique et le slave, l'albanais, le grec, le germanique, l'italique (latin et osco-ombrien) et le celtique » (Meillet, 1964, p. 53).

Met, ne ro Meillet amzeriad ebet evit ar rannyezhoù.

Setu ar gartenn a gemeromp digant Anthony evit diskouezh pelec'h e vije bet o vevañ an dud a veze o komz ar yezh kumun-se :



**Kartenn 21 : Kavell ar Gent-Indez-Europiz (3500-3000 K.K.)**

(Anthony, 2007, p.84, Fig. 5.1)

Gwelet hon eus dre vras pevare eo bet krog disrann ar gKent-Indez-Europiz, met n'hon eus ket lavaret pegoulz e oa kroget. Hervez Gimbutas e vije bet deraouet tro 4400-4200, goude un istor hir dija o kregiñ etre 7000-6500 en Anatolia, met dreist-holl adalek sevenadur Starčevo e Serbia hiziv, tro 5.000 bloaz K.K., a zellez bout anvet Europek kozh, betek ar wagenn ensilañ gentañ. Adalek ar wagenn-se e c'heller kregiñ da gomz eus yezhoù Indez-Europek boutin hag eus ur gavel d'ar yezhoù-se, en ur zerc'hel koun evelato eo bet ar

gavel-se o kreskiñ dibaouez betek he ment ziwezhañ a welomp amañ war ar gartenn adalek ar Bug enta, eeün-hag-eeün, betek ar Volga. Evidomp-ni eo deuet mat displegadur Renfrew pa skriv:

« It was the spread, from west to east, of the *yamno* or Kurgan cultures of the first true steppe neolithic which gave the steppe lands of Europe and Central Asia their first cultural unity. I suggest that the language of these early steppe pastoralists, who were not yet driving chariot or perhaps riding horses, was already Indo-European. [...]. The language must indeed have been derived from that of those Cucuteni and Tripolye peasants who, with their mixed farming economy, were at the beginning of the transition to named pastoralism on the steppe margins » (Renfrew, 1990, p. .202).

Goude ar c'henstok pe an darempred kentañ eo deuet war lerc'h ur sevenadur nevez o kellidañ en ur fiñval war-du ar reter :

« The second process of importance is the development of nomad pastoralism in the steppe lands of Russia, and the wider spread of such nomad pastoralism. The evicence at the moment seems to show that the domestication of the horse took place at the western extremity of the Russian steppes, and that the spread of the nomad pastoral economy took place from west to east. [...]. At present it is possible to consider a nomad pastoralist presence in central Asia from the third millennium BC as a result of this second process » (Renfrew, 1990, p. 208).

Betek-hen e kave d'an arkeologourien e oa ar c'hantreerezh hanter hent etre hemolc'hiñ ha gounid-douar :

« It should be stressed, however, that the nomad pastoral economy always requires the co-existence of agriculture : the pastoral nomads may not cultivate plants themselves (although in practice they quite often do) but they certainly need bread and other plant products, which they exchange for their own animal produce » (Ibid., p. 138).

Gant un amzeroniezh hag un douaroniezh war gemm e c'heller meizañ aesoc'h dezrann Dani:

« According to recent linguistic and archaeological investigations, Indo-European represented already a widely ramified group of languages at the very beginning of the Neolithic. The separation of the Indo-European groups of languages had to take place at a time when agriculture began to develop, in eastern Europe, that is, in the beginning of the sixth millennium B.C. as shown by the fact that the western Indo-Europeans and the eastern group (represented mainly by the Indo-Iranians) have no common agricultural terminology » (Dani, 1996, p. 359).

Evit "separation" e ranker kompren disheñveliñ, ket disrann. An hevelep ton 'vez roet gant Bruce Lincoln, goude ma n'eo ket ken flamm e skridoù ha re Dani :

« As best we can piece together, the Proto-Indo-Europeans, the direct ancestors of the Indo-Iranians, flourished on the South Russian steppes during the fifth, fourth, and third millennia B.C. » (Lincoln, 1981, p. 3-4).


Da heul, e tanevell evidomp an doare :

« From this home, various groups migrated westward and south-eastward, beginning in the third millennium. The westward-moving groups became the various European tribes : Greeks, Italo-Celts, Germans, and so on [...], while the group that moved south-eastward is known as the Proto-Indo-Iranians » (Ibid., p. 4-5).

Hervez J. Harmatta e oa bet rannet lec'hiadur ar strolladoù en resis evel-hen :

« Anatolian group, included Thracian and Pelasgian, represented in Europe by the Körös-Starčevo-Sesklo culture.

Proto-Greek-Macedonian-Phrygian group, represented by the Central European Linear Pottery Cultures.



**Kartenn 22 : Strolladoù Yamna<sup>223</sup>**  
(Mallory, 1991, p. 211)

Daco-Mysian group, represented by the Cucuteni-Tripolye culture.

Baltic group, represented by the Dniepr-Donets culture.

Proto-Indo-Iranian group, represented by the eastern European Kurgan culture (Sredniy Stog II and Pit-Grave cultures) » (Ibid., p. 359).

Sredniy Stog hag ar Beziou-Poull<sup>224</sup> (pe sevenadur Yamana) a zo eus an Eneolithic (pe ar C'houeorvezh), tro-dro ar mor Azov hag ar Volga war ar gartenn.

Dont a ra bremañ displegadurioù yezhoniel resisoc'h :

« It seems that the Proto-Indo-Iranians, the Baltic tribes and the Daco-Mysians remained in contact with each other even after the disintegration of the Indo-European linguistic community. The isogloss PIE  $\eta$ -  $m > a$  shows the presence of the Proto-Indo-Iranians in a vast linguistic area comprising beside them, the Daco-Mysian, Proto-Greek, Proto-Macedonian, Proto-Phrygian, Armenian, Venetian, Illyrian, and one part of Celtic, that is, languages which all take part in this phonemic change » (Ibid., p. 361).

Talvoudus eo an evezhiadenn-mañ evidomp pa ra meneg eus ar prantad ma veze dougerien ar yezhoù keltieg da zont, o vevañ e-kichen ar yezhoù Indez-

<sup>223</sup> The regional groups of the Yamnaya cultural—historical region.

<sup>224</sup> Pit-Graves

Iranek. Adkavout a reer an daou rummad Kelted, hep n'oufemp lavarout hag-eñ e vije ar re bet lakaet war wel gant Hubert uheloc'h, nag ivez ar pezh a lavaremp diwar-benn an aozadur sosial trifleg diskoachet gant Dumézil :

« Le cas le plus complet est celui des plus occidentaux des Indo-Européens, Celtes et Italiotes, — ce qui n'étonne pas, quand on a pris garde (J. Vendryes, 1918) aux nombreuses correspondances qui existent, dans le vocabulaire de la religion, de l'administration et du droit, entre les langues indo-iraniennes d'une part, les langues italiques et celtiques d'autre part, et elles seules.

Si l'on ajuste les documents qui décrivent l'état social de la Gaule païenne décadente qu'a conquise César et les textes qui nous informent sur l'Irlande peu après sa conversion au christianisme, il apparaît, sous le \**rīg-* (l'équivalent phonétique exact de sanskr. *rāj-*, lat. *rēg-*), un type de société ainsi constitué : 1°) dominant tout, plus forte que les frontières, presque aussi supranationale que l'est la classe des brahmanes, la classe des druides, (\**dru-uid-*), c'est-à-dire des « Très Savants », prêtres, juristes, dépositaires de la tradition ; 2°) l'aristocratie militaire, seule propriétaire du sol, la *flaith* irlandaise (cf. gaulois *vlato-*, all. *Gewalt*. etc.), proprement « puissance », l'exact équivalent sémantique de sanskr. *kṣatrá*, essence de la fonction guerrière ; 3°) les éleveurs, les *bó airig* irlandais, hommes libres (*airig*) qui se définissent seulement comme possesseurs de vaches (*bó*). [...] le tableau triparti celtique recouvre exactement le tableau, réel ou idéal, des sociétés indo-iraniennes » (Dumézil, 1958, p. 11-12).

En tu all d'ar sosiologiezh e kaver darempredoù tost etre an daou sevenadur er marzhoù hag en azeulioù, rak ar prantad-mañ a zo ivez hini azeul an tarv, al loen-meur a-gevret gant ar marc'h :

« they [cattle] form the basis of the religious system, for cattle are the sacrificial animal par excellence, and sacrifice is the central ritual in East Africa, India, and Iran. The greatest honour and service men offer their gods is the presentation of an ox (cows tend not to be used), and by this action they hope to ensure their own well-being » (Lincoln, 1981, p. 8).



En e glask eus marzh an aberzh kentañ e-touez ar sevenadurioù kent-Indez-Europek, en deus Bruce Lincoln kavet e veze diempret dalc'hmat ur boud peurbouezus hag a veze ganet an hollved diwar e gorf. Hervezañ e vije bet miret gwelloc'h ar marzh-mañ diazez gant an Indez-Iraniz eget gant an Indez-Europiz dre vras, Romaned ha Germaned pergen, war-bouez an Iwerzhoniz e lodenn ziwezhañ Táin Bó Cúalnge:

« Although the myth has been recast in epic terms as the titanic struggle of the two finest bulls that ever lived, its cosmogonic nature is evident nonetheless. A man, Bricriu (described as the most even-handed of judges), and a bull, the White-horned of Aí, are killed and dismembered, and from their bodies the world is constructed » (Ibid., p. 89-90).

En danevell goshañ, ul loen-saout, ejen pe tarv, a ya da heul an dud kentañ ha graet e vo gant al loen-mañ evel aberzhad an aberzh kentañ a-gevret gant ar roue kentañ :

« We are thus brought to the conclusion that the Indo-Iranian myth of creation, like the myth of their Proto-Indo-European ancestors, is a myth characteristic of pastoralists. It tells of the creation of the world through the primordial sacrifice of a man and an ox or a bull, and it established a pattern for all future sacrifice and all future creation. This ideology furnished the conceptual base for a sacrificial system that was understood on a more practical level as gift exchange with the gods—an exchange that regulated the flow of men and cattle through the cosmos » (Lincoln, 1981, p. 90, 91, 92).

An Indez-Iraniz a brize talvoud o loened er marzh eus an ejen kentañ ma tivere diouzh e gorf madoù diniver<sup>225</sup>. En enep, hag evit a sell ouzh hor studi eo dedennus notenniñ diwar-benn Europiz Europa gozh evel-just, an dra-mañ :

« [...] the Europeans were an agricultural society for whom the chief value of cattle was the milk-giving ability of the cow » (Ibid. p. 87).

---

<sup>225</sup> Lincoln, 1981, p. 87

Evit an Indez-Europiz ivez, e oa ar roue skeudenn an den holl, o terc'hel e-barzh e gorf anien an tri renkad sosial—beleien, kadourien ha gwerin. An tri renkad sosial o vezañ bet staliet diwar an aberzh kentañ<sup>226</sup>. Un evezhiadenn a dalvez bezañ meneget ivez da heul :

« The I-E. relationship to horses and cattle is somewhat similar to that of the North American Plains Indians to horses and buffalo : the former was highly important and much employed, but the latter was the means of subsistence. There is, of course, the major difference that the I-E cattle were domestic, while the Indian's buffalo were not » (Ibid. p. 9).

Gwelout a reer neuze an diforc'h bras a zo etre an daou rummad tud o kejañ, Europiz Europa Gozh d'eus an tu hag Indez-Europiz d'eus an tu all. Gwelet mat a reer ivez pegen tost e vo ar sevenadur keltiek daou pe dri mil bloaz diwezhatoc'h, ouzh hini Indez-Iraniz ar mare kent emamp o studial. Diouzh tu an Indez-Europiz en em gav koulskoude ar gKelted, gant gwriziennoù e bed an Indez-Iraniz evelato, muioc'h zoken eget n'eus forzh sevenadur Indez-Europek all, a c'houverk Dumézil. Penaos bloaziatañ gwelloc'h ar prantad-se ? Setu disoc'h enklaskoù Harmatta :

« The economic and social development of the Proto-Indo-Iranians took place in three phases. The first begins with the rise of animal husbandry including cattle, sheep, goats, pigs and dogs. Economy was, therefore, mainly pastoral. [...]. The second phase is marked by the domestication of the horse, about 3500 B.C. – [2000 B.C.] » (Dani, 1996, p. 367).

« The third phase is characterized by the acquisition of the practice of horse-riding which enabled the Proto-Indo-Iranians (or more correctly the Proto-Iranians because the Proto-Indians had already left for the south-east at the end of the second phase) to develop nomadic horse-breeding and to organize great armies of cavalymen » (Ibid., p. 368).

---

<sup>226</sup> Ibid. p. 79

Mat eo notenniñ diwar-benn ar c'hemm sevenadurel-se degaset gant mont war varc'h, an emdroadur kenstur degaset gant ar marc'h e-touez Indianed ar c'hompezennoù o deus dilezet ar gounid-douar evit marc'hegañ :

« Les Arapahos et les Cheyennes, les Crows et les Tetons (Sioux ou Dakotas de l'ouest) abandonnèrent leurs maisons de terre et leurs bâtons à four pour se consacrer exclusivement à la chasse » (Turner, 1985, p. 72).

Mat eo notenniñ ivez en doare-bevañ nevez ar perzh bras kemeret gant an heol e-barzh o buhez speredel:

« La nouvelle culture des Plaines se caractérisait essentiellement par l'exploitation maximum du cheval et du bison, l'utilisation permanente d'une tente en peau — le tipi —, l'institution d'une société masculine avec sa propre discipline et enfin par la Danse annuelle du Soleil » (Ibid., p. 75).

Paouez a reomp gant hor studiadenenn genlinenn eus an daou hollved pell-se rak kas a rafe ac'hanomp re bell eus hon danvez, met kalz a vefe da lavarout diwar-benn da skouer perzh ar penn, dibennet pe didonnennet er sevenadurioù-se, ar beziou gant tumulus, ar potlatch evel-just, hag all, un hollad traoù na oant ket dianavezet tamm ebet gant ar Gelted Kozh.


Met distroomp d'hor c'hazeg:

« The successive dissolution of the Proto-Indo-Iranian linguistic community is clearly marked by the exclusion of the Proto-Indians from the isogloss PIE *bh dh gh* > *b d g* [...]. This phonemic change [loss of aspiration] extended over a broad linguistic territory comprising beside Proto-Iranian also Baltic, Slavic, Daco-Mysian, Germanic, Illyrian, Macedonian and Celtic » (Harmatta, 1996, p. 361).

E-pad ur mare o deus ar Gelted, a-gevret gant Indez-Europiz all dibunet a-us, rannet an hevelep tennoù yezh hag an Indez-Iraniz, hag an hevelep marzhoù, kredennoù, aozadurioù sosial emichañs hag-i.

## *Ouralianeg pe Finnez-Ougreg*

Met n'heller ket tremen hep menegiñ yezhoù all hon do ezhomm bras anezho diwezhatoc'h evit komz eus un andon all gallus eus hengounioù Sibirian o ensilañ meuriadoù Indez-Europek. Fellout a ra deomp komz eus ar yezhoù Ouralian (pe Finnez-Ougrek) a veze komzet e kreisteiz ar Menez Oural tro-dro d'an Indez-Iraniz, hag a c'heller hevelebiñ war ar gartenn 22 mui pe vui ouzh ar goadourien. Rak a-benn ar fin ez eus tu d'en em c'houlenn hag-eñ ne vije ket bet ar goadourien-se e penn azeul ar c'harv, hini Maikop da skouer, pa vezent o vevañ diwar chaseal pe besketañ. Perak mont ken pell ha Sibiria pa vez koadeier ken tost?



### **Kartenn 23 : Yezhoù Ouralek**

(Mallory, 1991, fig. 82, p. 148)

« The homeland of Proto-Uralic was in the forest zone centered on the southern flanks of the Ural Mountains. [Many argue for a homeland west of the Urals and others argue for the east side, but] almost all Uralic linguists and Ural-region archaeologists would agree that Proto-Uralic was spoken somewhere in the birch-pine forests between the Oka River on the west (around modern Gorky) and the Yrtish River on the east (around modern Omsk) » (Anthony, 2007, p. 93).

Darempredoù yezh a zo bet, met dedennetoc'h e vez ar ouizieien gant kavell an Indez-Europiz eget gant gouzout hag azeulet e veze ar c'harv gant an Ouraliz. Hervez doare ne oa ket. Neblec'h avat n'em eus klevet meneg eus al loen-se a-zivout buhez relijiel an Ouraliz em lennadurioù, nemet adalek ar mare pa zifluko ar meuriadoù *\*Kaśva* meneget er pennad dindan, ha ma tispieg Harmatta eo bet empleget an Ouraliz e emdroadur an Indez-Iraniz adalek an trivet taolad nemetken, zoken ma vije bet eskemmoù termenoù etre meuriadoù abaoe ar pevare milved :

« Finally, the massive migrations of the Proto-Iranian equestrian nomads (Syntashta and Andronovo cultures), that is, the third wave of the Indo-Iranians, compelled the less developed *\*Kaśva* tribes to withdraw either into the hardly accessible mountainous districts or into the northern wooded steppes and the taiga zone. Later on, in the course of complicated ethnogenesis processes which led to the rise of the Samoyed peoples, they might have had some ethnic contacts with the Nenets (Yurak-Samoyeds), Enets (Tawgi-Samoyeds), Nganasans (Yenisey-Samoyeds) and Sayan-Samoyeds denoting themselves by the term *\*kaśa* 'man', which can be the continuation of the ancient term *\*Kaśva*- > *\*Kaśśa*- > *\*Kaśa*- once used by the Keltiminar tribes as a self-appellation » (Dani, 1996, p. 371-372).

Ha bremañ e tegouezhomp gant ar mare dres pa eo bet kroget gant an dud da gomz yezhoù Indez-Iraneg:

« Finally, at the end of the Middle Bronze Age, about 2200-2000 BCE, a migration stream flowed from the late Yamnaya/Poltavka cultures of the Middle Volga-Ural region eastward around the southern Urals, creating the Sintashta culture, which almost certainly represented the ancestral Indo-Iranian-speaking community » (Anthony, 2007, p. 306).

*Tokarianeg, Afanasievo, Repin*

Peogwir emañ tost a-walc'h ouzh danvez ar yezh e c'heller ouzhpennañ e verk Anthony<sup>227</sup> prantad an Tokarianeg tro 3700 K.K., da heul enta hini an Anatolieg.tro 4200 K.K.

Setu aze c'hoazh ur gudenn n'emañ ket gwall bell diouzh ar pezh a zedenn ac'hanomp. Peseurt darempred emit-hu a vije etre an Tokarianeg hag azeul ar c'harv. Hini ebet emichañs nemet e kendere deziad disrann an Tokarianeg gant divroadeg Repin a gasas Kent-Indez-Europiz betek Menez Sayan-Altay Afanasievo. E-giz-se e vije aet Europoided Kent-Indez-Europek betek sterdachenn ar Yenisei hag ar Menez Altai, kement-se eveljust kent na vije deuet war wel an Indez-Iraniz. Alese o dije ar gKent-Indez-Europiz-se diwezhatoc'h, etre 2.500 ha 2.000 dre vras, kemeret an hent davet sterdachenn an Tarim :

« Before the expansions of Andronovo tribes, there were the Afanasevo communities of the eastern steppe in the region between the Minusinsk Basin of the Yenisei River and the Altai Mountains. Dating to the period c. 3500-2500 BC, the Afanasevo culture represents an archaeological enigma as its closest cultural relations appear to lie 1,500 km (930 miles) to its west in the European steppe » (Mallory, 2000, p. 294).

Gouzout a reomp bremañ gant fiziañs a-walc'h e tlefe bezañ deuet tud Afanasievo eus Repin d'an toleadoù etre ar Minusinsk, Yenisei hag an Altai adalek 3.700 betek 2.500 :

« First, just before the Yamnaya horizon appeared, the Repin culture of the Volga-Ural region threw off a subgroup that migrated across the Kazakh steppes about 3700-3500 BCE and established itself in the western Altai, where it became the Afanasievo culture. The separation of the Afanasievo culture from Repin probably represented the separation of Pre-Tocharian from classic Proto-Indo-European » (Anthony, 2007, p. 305).

---

<sup>227</sup> Anthony, 2007, p. 100

Diwezhatoc'h, pa voe krog o sevenadur da vezañ gourdrouzet gant hini Andronovo ha sevenadurioù all eus an tolead, eo aet kuit darn eus tud Afanasievo betek an Tarim e lec'h m'eo bet kavet diwezhatoc'h roudoù eus o yezh Indez-Europek anvet Tokarianeg. Un dra all a ranker lavarout ivez peogwir eo bet aketus David Anthony evit pouezañ war an dra-se :

« [...] the process of migration and return migration that installed the early Afanasievo culture continued across the north Kazhak steppes during the Yamnaya period. In fact, it is usually discussed as an event connected with the Yamnaya horizon; it is only recently that early Afanasievo radiocarbon dates, and the broadening understanding of the age and geographic extent of the Repin culture, have pushed the beginning of the movement back into the pre-Yamnaya Repin period » (Anthony, 2007, p. 307).

Anavezet e oa ar monedonea gant Gimbutas, a zo un dra hollbouezus evidomp rak reiñ a ra un diaz skiantel a c'hellfe bezañ an displegadur eus ar siell vaen warni ur c'harv hag ur wezenn, marteze gwezenn vuhez Sibiria, dizoloet gant Nekhaev e unan eus bezioù Maikop amzeriet 3.000 bloaz K.K. gantañ :

« Two or three centuries before the Yamnaya horizon first appeared, the Repin-type communities of the middle Volga-Ural steppes experienced a conflict that prompted some groups to move across the Ural River eastward into the Kazhak steppe (figure 13.2). I say a conflict because of the extraordinary distance the migrants eventually put between themselves and their relatives at home, implying a strongly negative push. On the other hand, connections with the Volga-Ural Repin-Yamnaya world were maintained by a continuing round of migrations moving in both directions, so some aspect of the destination must also have exerted a positive pull. It is remarkable that the intervening north Kazakh steppe was not settled, or at least that almost no kurgan cemeteries were constructed there. Instead, the indigenous horse-riding Botai-Tersek culture<sup>228</sup> emerged in the north Kazakh steppe at just the time when the Repin-Afanasievo migration began »<sup>229</sup> (Ibid., p. 307-308).

---

<sup>228</sup> Etre 3700 ha 3000 BCE, p. 216

<sup>229</sup> 3500 BCE (p. 264)

Kement-se a lavaromp evit reiñ da c'houzout e c'hellfe dont karv Maikop eus Afanasievo, abalamour d'al lusk war vad etre an daou sevenadur, hini Afanasievo hag hini Yamna.

« Early Afanasievo skull types resembled those of Yamnaya and western populations. On the Ukok plateau, where the early Afanasievo cemetery at Bertek 33 was found, the Afanasievo immigrants occupied a virgin landscape—there were no earlier Mesolithic or Neolithic sites » (Ibid. p. 310).

Un dra a rankomp anzavout, n'eus bet kavet ganeomp roud azeul-karv ebet er skridoù diwar-benn Afanasyevo :

« Cemeteries of the local Kuznetsk-Altai foragers like Lebedi II were located in the forest and forest-meadow zone higher up on the slopes of the Altai, and contained a distinct set of ornaments (bear-teeth necklaces and bone carvings of elk and bear), lithics (asymmetrical curved flint knives), antler tools (harpoons), pottery (related to the Serovo-Glazkovo (Taolenn II) pottery tradition of the Baikal forager tradition), and funeral rituals (no kurgans, no stone slab over the grave). As time passed, Glazkovo forager sites located to the northeast began to show the influence of Afanasievo motifs on their ceramics, and metal objects began to appear in Glazkovo sites » (Ibid., p. 310-311).

Gwelet mat e vez dre an anvioù hon eus kejet ganto pa vezemp o plediñ gant arkeologiezh Sibiria evel Serovo, o defe tud Repin graet anaoudegezh d'ar mare-se gant loened evel an arzh pe an eln, n'eo ket hepken evel loened da chaseal emichañs, met ivez evel mammoù-loen. Siwazh evel lavaret uheloc'h n'hon eus ket kavet an disterañ anadenn a vije o a duiñ gant an hent-se. Da gentañ ez eus ezhomm gallout lenn ruseg rak rouez eo ar skridoù troet diwar ar ruseg e saozneg pe e galleg, ha d'an eil mont da enklask war al lec'h. Hag ivez, e-keñver an arkeologiezh ez eo difraost a-walc'h an dachenn, met arabat dikalonekaat rak spi a zo da ober kavadennoù diouzh lenn ar frazenn-mañ da skouer :



« Clearly also the diet of the Afanasyevskaya people depended on the meat of domestic and of wild animals in roughly equal proportions; and we can therefore conclude that as a means of procuring food for the community hunting played a no less important part in the economy than stock-rearing » (Gryaznov, 1969, p. 48).

Ar pezh a lavar Anthony a-hend-all, a gej penn-kil-ha-troad gant ar pezh a lavare A.P. Okladnikov diwar-benn meuriadoù Sibiria an Neolitik ha goude, Europoided o veskañ gant Mongoloided. Un dra all, lavaret hon doa ivez n'eus ket chamaniezh hep metal. D'ar mare-se, dibenn Afanasyevo ha derou Okunev, e vefe kellidoet disparti al labour hag dont war wel ar metal. D'ar mare-se emamp e-barzh prantad arkeologel Glazkovo (Taolenn 1), a verk derou dibenn an daou brantad kent all, Serovo-Kitoy, digemmesk m'edo o vleuniañ c'hoazh d'an ampoent spered-mamm *Bugady enintyn* an amzer gozh. Disparti al labour hag ar metal a verk ivez derou prantad hir ar rak-chamaniezh pe 'chamaniezh-ti', adalek 1.800 pe derou Glazkovo hervez Okladnikov, betek eil hanterenn ar milved kentañ m'eo bet kavet anadennoù kentañ, yezhoniell, eus an azeul nevez-se.

## E. KARVEG / EJENEG

Mat eo azlavarout e oa ar barez-eln loen-mamm an hengoun kentañ amzeriet en Neolitik, da lavaret eo tro ar pevare milved K.K<sup>230</sup>. Ar skeudennoù-se a veze engravet war speurennoù a-hed ur ster troet war-du ar c'hreisteiz e-ser gant kelc'hioù divunadellek ha bagoù. An eln hag ar c'harv, evned hag an arzh, setu al loened a veze loened skoazell ar chaman, douget gantañ gweet war e wiskamant<sup>231</sup> :

« The robe of the shaman referred to the deer or elk as a primary tribal progenitor as well as the shaman's animal ancestor » (Jacobson, 1993, pp. 175-176).

N'eo ket diaes enta ijinañ e vije kroget gant ar reizhiad marzhennoù-se kerkent hag ar paleolitik diwezhañ :

« Within the ethnographic tradition, one frequently finds a combination of elements: shamanic societies within which survive to a greater or lesser degree pre-shamanic cults of the hearth, of the deity-protectress of children and of the herd; and even bear and mountain cults » (Jacobson, 1993, p. 180).

Gant Esther Jacobson eo bet diverret mat-tre evidomp an hollad arouezioù a zo ar c'harv e kreiz anezhañ :

« The fundamental association of deer and tree and of the relationship of the deer to a female progenitor is again evident in the beliefs surrounding the fabrication of the Ket shaman's drum. According to Anuchin, the skin of the drum had be made of deer skin and the frame had to be taken from a south-facing branch of a cedar tree » (Jacobson, 1993, p. 177).

« This « tree » served as the axis which connected the land of people, the underworld, and the upper realms of the spirits. At the same time, the tree

---

<sup>230</sup> Jacobson, 1993, p. 91


<sup>231</sup> Jacobson, 1993, p. 174

referred to the clan tree and to the tribal understanding of the World Tree, or Axis Mundi » (Ibid.)

« It is ultimately the same tree—that is, the same symbol of generation and passage—as that which was said to grow from the body of the Evenk elk or deer Animal Mother, the *bugady enintyn* (Anisimov 1963) » (Ibid., p. 178).

Diwezhatoc'h eo deuet tud all o azeulioù nevez. Kavet hon eus meneg eus ur skeudennadur o kemmesk ar c'harv hag an tarv :

« [...] the representation of a deer-bovine at Kalbak-Tash may be the result of a Late Bronze Age recarving of an earlier Bronze Age image and the consequent melding of very different myths and values, so may the tale told of a shaman's journey include elements of both archaic and more contemporary development » (Jacobson, 1993, p. 171).



**Skeudenn 29: Kenaozad karv-buoc'h ha tarv, Kalbak-Tash<sup>232</sup>**  
(Jacobson, 1993, p. 279)

Anat eo, azeul ar c'houblad karv-tarv a zo diwezhatoc'h eget azeul kentañ ar c'harv. Bez e c'heller ivez keñveriañ tres kerniel karv Kalbak-Tash gant hini 'gwezenn-vuhez' siell Maikop dindan. Memes doare a gavomp ni gant an daou dres.

<sup>232</sup> e) Composite deer-bovine and bull; “embroidered” style. Kalbak-Tash; Plate IX (Ibid.)

A-hend-all, setu ster don azeul ar c'harv e-touez ar gKeted :

« For the moment it may be said that these greater entities, Khosedam and Tomam, and Khosedam's unending battle against male gods and male heroes themselves point back to an ancient and possibly unified source, female in character associated with deer and birds, and ultimately the source of life and death » (Jacobson, 1993, p. 187).

Hon teorienn en em gav mat-tre gant ar frazenn-mañ ivez diwar-benn the Kets c'hoazh :

« Indeed the Ket universe, like that of so many Siberian peoples, seem threaded through with traces of a female-centered belief or with what has been called a mother cult, with roots as ancient as the Paleolithic period (Nahodil 1968 ; Alekseyenko 1977) » (Ibid.).

Plijus eo deomp lenn ar pezh a skriv Esther Jacobson, war-bouez un draig, an amzeriadur na glot ket gant hini Nekhaev eus 3.000 K.K. (Taolenn 1 ha 2). Met lennomp kentoc'h petra he deus an oberourez da lavarout d'he zro a-zivout Afanasevo :

« Dated between 2500-1500 B.C.<sup>233</sup>, the Afanasevo culture was centered in the Minusinsk Valley, with significant extension southwest to the Altay and west to the steppes north of the Aral Sea and as far as the northeast shores of the Caspian. Because the Afanasevo people belonged to a Europoid racial type, there has been a predisposition to associate them with a Proto-Indo-European tradition. The investigations of physical anthropologists over the last few decades, however, should give one pause : throughout its South Siberian range, the Afanasevo culture appears to have been carried by a population of mixed Europoid and Mongoloid stock » (Ibid. pp. 14-15).

---

233

Koshaet eo bet an amzeriadur abaoe.

N'eo ket sur e tere menoz E. Jacobson eus Afanasievo gant hini D. Anthony da skouer, dreist-holl e keñver amzeriañ. Gwelet hon eus hervez Anthony, hag un neventi eo, e krog an divroañ a vo ganet sevenadur Afanasievo dioutañ ken abred ha 3.700 K.K. A-zivout ar boblañs avat, diskouezet hon eus diagent ez eus bet Kent-Indez-Europiz da gentañ o vesañ diwezhatoc'h gant Mongoloided sevenadur Okunev (Gryaznov, 1969).

Evit a sell ouzh pal hol labour e kav deomp eo bet graet tro ar gudenn: E sibiria eo bet kavet suward Bugady, pa eo bet kavet *Fer benn* en Iwerzhon, peotramant Suibne. Anadet eo bet ar marzh gant an arkeologiezh trugarez da skeudennoù skuthed Pazyryk eus ar c'hwec'hvet K.K. d'ar muiañ, hag a ziver hervezomp evel hon azeul-karv<sup>234</sup> eus andon Sibiria :

« The stag with bird-headed antler tines is one of the most enigmatic and least-considered motifs in the imagistic vocabulary of Scytho-Siberian art. Its normative formulation is presented by an embossed gold plate from the Crimean barrow of Ak-Mechet, dated to the second quarter of the fifth century B.C., on which appears a recumbent stag with alert head and palmated antlers, the ends of which take the form of large-beaked bird heads with pronounced ceres (...). [...]. Such images multiplied throughout the fifth century in the region of Pontic Scythia, but by the early fourth century they had disappeared » (Jacobson, 1984, p. 113).

Levr a-bezh Esther Jacobson “The deer Goddess of Ancient Siberia” a zo diwar-benn emdroadur an hengoun-se betek Skuthed Europa. Koulskoude, kontrol d'ar pezh a c'hellfe bezañ kredet, n'eo ket un neventi, pell alese, mitem “ar c'harv kabelle e bikoù banhez gant evned”, peogwir e weler d'ar mare-se derou ur c'hemplez sevenadurel o vont da get pe o testuziañ. Dont a reomp endro da gudenn ar wezenn-vuhez, diouzh ur sellboent all, ha gwelet e vo eo bet

---

<sup>234</sup> Peogwir eo bet meneget un azeul-karv (« culte ») gant ar Skuthed dre fazi ganeomp en hor pennad : « L'esprit-mère », p. 246 (in *Bretagne et Irlande : pérégrinations, Mélanges à Jean Brihault*. Roazhon : TIR, 2009.) e rankomp splannañ ur wezh ouzhpenn n'eus azeul-karv ebet gant ar Skuthed, daoust da skeudenn al loen-se bezañ bet implijet ganto e-leizh en o arz brudet. Gwell e vije bet deomp ober gant ar ger « hengoun » da skouer er pennad meneget.

roet gant Jacobson an hevelep respont hon eus roet ni a-zivout hengoun ar wezenn-vuhez e Maikop :

« Mircea Eliade has reminded us that although the Central and North Asiatic symbolism of the center (with its figuration through poles, ladders and trees) may be related to Indo-Iranian and even Mesopotamian cosmological systems, the symbolisms of the center itself is found throughout primitive societies to such a degree that it can in no way be considered to have derived, always and everywhere, from one source. [...]. Toporov considers the World Tree as the structure of hierarchy by which post-paleolithic humans established the distinction between chaos and order. Indeed, the World Tree is order, its very being as extension representing an ideal organizing system, modeling both static and dynamic aspects of existence. On an imagistic level, the World Tree is that system of hierarchies which is analogous to bird/heaven at the top; hoofed animal at the middle range; and fish/snake (chthonic images) at the base. Most critical to this discussion is Toporov's distinction between art of what he calls the World Tree epoch — of the post-paleolithic world — and art of the anthropomorphic epoch: in the former, art is charged with religious signification, while in the latter its focus is human events and human concerns. In other words, when human beings became involved with their own realm of being, rather than with that of suprahuman powers, the concept of the World Tree as organizing principle lost its meaning ». (Jacobson, 1984, p. 127-128).

Anat eo enta emaomp gant dibenn un hengoun, met ne vern ket evidomp rak diskouez ar ra e teu istor an hengoun-se eus Sibiria. Koulskoude n'eo ket skuthek skourr an hengoun a gaver e Buile Suibhne, rak penaos e c'hellfe un hengoun dre zres war zigresk eus ar pempvet kantved K.K. treuziñ Europa a-bezh evit bezañ adkavet dre gomz, da lavaret eo bev mat, ha neuze bezañ lakaet dre skrid en un tenergan Iwerzhoneg eus an douzekvet kantved G.K. ? Ni a gav gwell hent Maikop. Siwazh ne c'hellomp komz bete gouzout met eus ul lusk war vad etre Afanasievo ha Yamna evit anadiñ hor menoz. Goude Maikop, hag Usatovo, sevenadurioù all o deus douget un azeul karv, koublet gant un azeul tarv, kement-se betek an Inizi Meur. An azeulioù-se emaomp o vont da glask diouzhtu dispenn o roudoù.

## 2.4 – MAIKOP

### A. KARVEG MAIKOP

Diwar-benn « Oadvezh ha diorroadur sevenadur Maikop », ez eus tu da lenn gant David W. Anthony en e levr « The horse, the wheel and language » eo deuet anat abaoe ar bloavezhioù 1980 e oa bet savet bezioù penndiarned Maikop tro 3700-3400 K.K., e-pad prantad Ourouk e Mezopotamia, a-gent Troy II. Maikop a zeue enta da vezañ kempred gant kêrioù kentañ prantad kreiz ha diwezhañ Ourouk<sup>235</sup>, 3700-3100 K.K., souezhusaat tra.

« The radiocarbon dates were confirmed by an archaic cylinder seal found in an early Maikop grave excavated in 1984 at Krasnogvardeiskoe, about 60 km north of the Maikop chieftain's grave. This grave contained an east Anatolian agate cylinder seal engraved with a deer and a tree of life. Similar images appeared on stamp seals at Degirmentepe in eastern Anatolia before 4000 BCE, but cylinder seals were a later invention, appearing first in Middle Uruk Mezopotamia. The one from the kurgan at Krasnogvardeiskoe (Red Guards), perhaps worn as a bead, is among the oldest of the type [...] » (Anthony, 2007, p. 290).

Bez den Maikop a zo lec'hienn skouer prantad Maikop abred, amzeriet etre 3700 ha 3400 K.K. An notenn 28 a ro an div zaveenn-mañ : Nekhaev 1986 ha Munchaev 1994 [...], table 49:1-4.

Pennad Nekhaev, tennet eus Soviet anthropology and archaeology (30.3, 1991, pp. 29-34), a lenner evel-hen :

« These include burials from a mound excavated in 1983-84 by the Adygei archaeological expedition near Krasnogvardeisk village (Krasnodar territory). In the mound, around 3.5 m high, were found seven Maikop burials, one of which (grave 4) is worthy of special attention » (Nekhaev, 1991, p. 29).

---

<sup>235</sup> Anthony, 2007, p. 290

E bez ar poull 4 emañ astennet ur relegenn diwallet fall, pleget war he zu dehou, he fenn troet ouzh ar mervent<sup>236</sup>.

« In addition to the vessels, a cylindrical seal was found in the grave near the skull with engraved images of a deer and, apparently, the tree of life<sup>a</sup>. Curiously, the seal's surface was first marked with puncture points, outlining the image's contours. Then using a flint cutter, the craftsman cut out the deer and tree. The seal's height is 1.9 cm, the diameter is 1.0 cm, and the diameter of the inner opening 0.4 cm (Fig. 3, 1) » (ibid. p. 32).

Ouzhpenn-se ez eus bet kavet er bez priaj kinklet:

« The ornamentation of the four vessels with glazed zig-zag lines is of considerable interest » (Ibid., p. 33).

Betek-hen e kave d'an arkeologourien ne veze ket kinklet prierezh Maikop kentañ. An dra-se a zo heverk hag a ziskouez un darempred etre Maikop ha Mezopotamia an hanternoz<sup>237</sup>:

« An important addition to emerging notions about connections between Maikop and Northern Mesopotamia is the unique find (for the territory of the Northern Caucasus) of a cylindrical jet seal with engraved images of a deer and the tree of life. Stylistically, the closest parallels to the images on the seal from the Maikop grave are found in the glyptics of the Ubeid strata of Tepe-Gawra [...] (Fig. 3, 2, 3). Certain analogies are known in the cylindrical seals of predynastic Egypt, where images of a deer against the background of a tree are also found [...] (Fig. 3, 4). The shape on the seal from the Maikop burial and the nature and composition of the images testify to a probable imported origin of the find. The nondurable nature of the material from which the seal is made, as well as traces of functional use, suggest a relatively short period of existence from the time of fabrication until it was placed in the burial complex » (Ibid., p. 33).

---

<sup>236</sup> Ibid.

<sup>237</sup> Nekhaev, 1991, p. 33



Sielloù kranek a vez gwelet e Mezopotamia adalek dibenn ar pevarvet milved:  
« [...]. The most likely date for grave 4 is evidently the beginning of the third millennium B.C. » (Ibid.).


Setu bremañ tenor an notenn da "tree of life"<sup>a</sup> gant embanner pennad Nekhaev:

« <sup>a</sup> The tree of life, sometimes also called the world tree, is a dominant symbol occurring in the mythologies and religions of many Asian and Indo-European peoples, associated frequently with such ancient belief systems as shamanism. Its multivocal meanings encompass the idea of the tree as a connecting link among upper, middle, and lower worlds, as well as concepts of fertility, rejuvenation, seasonal cycles, fruitful harvest, and an ultimate sacred reservoir of life in the center (navel) of the world. For a gloss on various beliefs regarding the tree see Mircea Eliade, *Shamanism: Archaic Techniques of Ecstasy* (Princeton University Press, 1972), pp. 270-72; and Sir James Frazer, *The Golden Bough* (New York and London, 1951, 3<sup>rd</sup> ed., 2 vols.) » (Ibid., pp. 33-34).

War an amzeroniezh en em glev mui pe vui prantad Maikop gant hini Ourouk krenn hag izel e Mesopotamia : 3700-3100 daoust ma vez graet anv eus darempredoù etre Maikop hag Hanternoz Mezopotamia. Nekhaev an hini eo a ro derou an trivet milved, da lavaret eo adalek 3.000 KK., evel oad ar siell.

Setu da heul an taolenoù diwar Munchaev : ar memes stil Mezopotamian a zo gant an holl sielloù-se. Koulskoude, kavout a ra deomp e c'heller merzout diouzhtu ne hañval ket an niverennoù 2 ha 4 dougen kerniel karvedeg, kerniel gavreged avat ne lâromp ket. An niverenn 3 a zo diaes da dermeniñ e ouenn, e-giz pa vije stilekaet kerniel al loen karveg marteze, e stumm brankoù ur wezenn. Met daoust hag ur c'harveg ez eo? Hep komz eus ar pavioù disheñvel o hirder (niverenn 2 ha 3—Tepe Gawra)...

Nekhaev a lavar deomp ez eo ar siell-se kavadenñ nemeti ur siell e Norz Mezopotamia. Sielloù heñvel engravet warno ur c'harv hag ur wezenn-vuhez a gaver en Ejipt rak-rouanezel, a hend-all e ranker klask war-du gwiskad Ubeid, Tepe-Gawra evit kavout skeudennoù damheñvel tostañ. Dreist-holl e




1—Krasnogvardeisk, mound 4; 2, 3—Tepe-Gawra (after A. Tobler); 4—Egypt (after P. Amiet).

### Skeudenn 30: Sielloù Krasnogvardeisk, Tepe-Gawra, hag Ejipt

*Epokha Bronzy Kavkaza I Srednei Azii*, ed. Kushnareva, Markovin, 1994:

tispleg deomp eo bet enbroet ar skeudennoù emichañs hep lavarout a be lec'h, met lakaet eo bet gant an embanner un notenn diwar-benn hengoun gwezenn vuhez Azia, stag ouzh ar chamaniezh. Diaes eo bezañ sklaeroc'h.

Met ouzhpenn-se, gavreg an Ejipt niverennet 4 ne vefe ket e-tal ur wezenn met e-tal ur blantenn emañ o kalsk debriñ.



### Skeudenn 31: Sielloù karveded

Amiet, 1980, Pl. 22, p. 292

Hag ouzhpenn c’hoazh ez eus kudenn ar materi m’eo bet graet ar siell gantañ. «Agate» evel ma lavar deomp Anthony (2007, p. 290), «jet» a skriv Nekhaev (1991, p. 33). N’eo ket ar memes tra. Met peogwir e kas Anthony en-dro da bennadoù Nekhaev ha Munchaev a ra gant «jet» pe «maen-jad» e brezhoneg, e c’heller barn a-du gant ar re-mañ evit «maen-jad» pe «lounezhad», ur maen glas e zanzev hag a dremen evit parañ ar boan-gein (lounezi), a-enep da zibab yezh Anthony «agate» pe «calcédoine» e galleg, elese danvez kanetennoù ar vugale.

Ar materi «maen-jad<sup>238</sup>» a gaver c’hoazh e Sibiria kent mare ar gounid-douar :

« Its quite probable that something of the kind took place in the times when agriculture did not exist on the Lena River. The hunters for seal from Baikal could supply their neighbours, the nearest, as well as more distant, with hides and fat, for example, in exchange for jade (nephrite) » (Okladnikov, 1974, p 300).

Kement-se a gas ac’hanomp ken abred ha prantad Kitoy, d.l.e. adalek 4.000 K.K. betek hini Glazkovo (1.700-1.300 K.K.) gouez da Okladnikov (Taolenn 1). Pe welloc’h marteze, betek prantad Glazkovo Skol-Veur Alberta (Canada) 3.400/3.000-1.000 (Taolenn 2). Gant an doare nevez-se da amzeriadañ prantadoù arkeologel tolead tu-mañ al Lenn Baikal, ez eo diskoulmet hor c’hudenn amzer, war ar paper avat.

N’eo ket diezhomm menegiñ boaz beziañ sevenadur Tagar (Taolenn 3) a zo hêr ivez da sevenadur koshoc’h Afanasievo:

« Bronze images of deer have been found in many Tagar burials, laid on the bodies of the dead (female as well as male) as if to mark a significant association of forces or to call down to the dead a particular power or relationship (...) » (Jacobson, 1993, p. 25).

---

<sup>238</sup> Meneget eo bet an doare maen-se ganeomp a-zivout Sibiria meur a wezh, a veze eskemmet etre ar stêr Amur hag al lenn Baikal pergen. S.O. “*dasparzh al labour*”, “*an dud*”.

## *Svobodonoë*

N'heller ket tremen hep menegiñ ur pennad all gant Nekhaev diwar-benn Svobodonoje, nepell eus trevadenn Krasnogvardeiskoje, e kreisteiz Rusia hiziv. Er pennad-mañ anvet « The Premaikop Culture of the Northern Caucasus » e tispleg A.A. Nekhaev e verk ar prantad etre ar IVvet hag an IIIvet milved, an tremen eus sevenadur rak-Maikop (Svobodonoë), da hini Maikop, hag a vez spisverket gant ar siell vaen grannek end-eeün. Talvoudus bras eo neuze arouezelezh, n'eo ket ar siell vaen grannek, met dreist-holl ar skeudenn engravet warni. E-giz pa vije fellet d'an dud diskouez eus pelec'h e teuent? Kement-se ne vir ket ouzh tud ar sevenadur kent - rak-Maikop - e-pad e amzervezh kentañ avat, da chaseal kirvi, rak kavet eo bet eskern (3199 askorn loened doñv, ha 1835 askorn loened gouez : 31% kirvi, 20% hoc'h-gouez). D'ar mare-se e veve an dud diwar ar maez eus al labour-douar, ar chase hag ar peskerezh. Seul modernoc'h o derez diorren, seul izeloc'h tregantad al loened-gouez en o bevañs. Ober a raent ivez gant eskern kirvi pergen, evel danvez, evit fardañ o binvioù labour rak kalet eo. Delwennoù pri zo bet kavet e Svobodonoë, 18 maouez, 30 ejen. Evel an holl c'hounideien, e veze lidet, ha stummet ardigelloù diwar skeudenn al loened pouezus evito peogwir e veve an dud a-drugarez dezho, amañ ar gourejen, bet kaset dezho a-berzh an Azeulenn-vamm, hervez kredenn an dud<sup>239</sup>:

« The site dates to the Premaikop epoch and is contemporary with the AII stage of the Tripolje culture » (Nekhaev, 1992, p. 84).

Tro ar bloavezhioù-se e krog Europeiz Kozh an Neolitik da sevel mogerioù tro-dro d'o lec'h annez :

« Beginning about 4400-4300 BCE the people of the North Caucasus began to settle in fortified agricultural villages<sup>240</sup> such as Svobodonoë and Meshoko (level 1) in the west, Zamok on the central plateau, and Ginchi in Dagestan in

---

<sup>239</sup> Trugarekaat a ran Natalya Kirlig a-greiz kalon evit he zroidigezh dre gomz eus ar pennad e ruseg (ar berradur hepken a oa e saozneg), am eus kemeret diganti danvez al linennoù-mañ.

<sup>240</sup> Da geñver ar wagenn ensilañ gentañ evit en em wareziñ diouzh Kourganiz ar mare-se.

the east, near the Caspian”. [...]. Svobodonoe, excavated by A. Nekhaev, is the best-reported site (figure 12.9). Half the animal bones from Svobodonoe were from wild red deer and boar, so hunting was important » (Anthony, 2007, p. 285).

Met loened doñv a gaver ivez evel deñved ha pemoc'h :

« Female ceramic figurines suggest female-centered domestic rituals. [...]. The Svobodonoe culture differed from Repin or late Khvalinsk steppe cultures in its house forms, settlement types, pottery, stone tools, and ceramic female figurines. Probably it was distinct ethnically and linguistically » (Ibid., p. 285).

Amañ e vez pouezet war Svobodonoe evel sevenadur gounid-douar mammdroet c'hoazh, e skoaz da sevenadurioù Repin ha Khvalinsk eus ar stepinier:

« Nevertheless, the Svobodonoe culture was in contact with the steppes. A Svobodonoe pot was deposited in the rich grave at Novodanilovka in the Azov steppes, and a copper ring made of Balkan copper, traded through the Novodanilovka network, was found at Svobodonoe » (Anthony, 2007, p. 286).

Gwelet mat e vez e tremener gant Maikop d'ur sevenadur all eus ar stepinier, n'eo ket dianav dezhañ neoazh levezonioù Mezopotamia an Hanternoz. Merkañ a ra ivez sevenadur Maikop troc'h dibenn an neolitik en tolead ha derou ar c'houeorvez hag an aremvezh. An troc'h-se a zo merket en doareoù beziañ nevez, kourganizet penn-da-benn. D'ar mare-se n'eus ket tu da gompren e vefe deuet arouezelezh ar c'harv eus sevenadur Svobodonoe kar da hini Tripolje en em gav etre ar Bug hag an Dniester war ar gartenn, met en enep gwirheñveloc'h e tlefe dont an arouezelezh eus ar stepinier, pe Hanternoz Mezopotamia. N'eo ket dic'hallus en teorikel e vije bet lakaet ur c'harv e lec'h gavreg pe demm hengoun Mezopotamia pe Ejipt.




Figure 12.2 Final Eneolithic sites in the steppes and Early Bronze Age sites in the North Caucasus piedmont.

**Kartenn 24 : C'houeorvezh hag Aremvezh kentañ er stepinier ha Norzh Kaokaz**  
(Anthony, 2007, p. 268).

« The influence of Uruk even reached as far west as Egypt in the Naqada II (or Gerzean) period contemporary with the Late Uruk and Jemdet Nasr periods [about 3100-2900 BC]. Lugged and spouted jars were characteristic of Late Uruk pottery. Cylinder seals also first appeared in Egypt at that time. Some were imports from the east, but others had been made locally and used Mesopotamian or Iranian motifs » (Michael Roaf : *Cultural Atlas of Mesopotamia*, <http://www.crystalinks.com/sumeregypt.html>).

Pouezus eo kompren e ranker dispartiañ daou dra, an dra e-unan diouzh an tres a zo warnañ:

« Late Pre-dynastic (before about 2920 BC) art from Egypt also showed some influence from Mesopotamia. In particular, carved ivory knife handles and slate palettes contained Mesopotamian motifs, even though the objects themselves were typically Egyptian » (Ibid.).

Ma 'z eus tu da zispartiañ an dra diouzh an tres a zo warnañ, e c'heller ijinañ e vije enbroet an dra eus Hanternoz Mezopotamia, war-bouez an tres a deuje-ñ eus sevenadur Kourganiz ar stepinier. Met daoust hag-ñ ne vije ket kement-se mont re bell ganti? N'eo ket sur pa c'heller lavarout an dra-mañ ivez a-zivout ar siell granek:

« Curiously, the seal's surface was first marked with puncture points, outlining the image's contours. Then, using a flint cutter, the craftsman cut out the deer and tree » (Nekhaev, 1991, p. 32).

Bez e c'hellfe an oberiadenn-mañ bezañ displeget gant ar pezh hon eus studiet diwar-benn an dToungoused, da lavaret eo e c'hellfe ar siell bezañ bet douget gant an den en dro d'e c'houzoug evel ur berlezenn ardigell pa oa bev ha goude dezhañ mervel, bezañ disgraet evit lezel solvez dizanvez an dra ambroug e ene betek ar bed all.

#### *Gwezenn-vuhez: kengoun Mezopotamia*

Evit a sell ouzh ar wezenn-vuhez avat ez eus peadra da lavarout. Aet omp da furchal e oberenn Mircéa Éliade menneget gant embanner pennad Nekhaev, m'hon eus kavet e oa daou hengoun bras war an tem-se evel displeget gant an oberour:

« Le symbolisme du Pilier du Monde est familier également aux cultures plus évoluées : Égypte, Inde (p. ex. *Rig Véda*, X, 89, 4 ; etc.), Chine, Grèce, Mésopotamie. Chez les Babyloniens, par exemple, le lien entre le Ciel et la Terre — lien symbolisé par une Montagne Cosmique ou ses répliques:

*ziqqurat*, temple, ville royale, palais — était parfois imaginé comme un Colonne céleste » (Éliade, 1974, p. 214-215).

Kavet hon eus ivez evezhiadennoù gant an oberour a gas kentoc'h war-du Azia:

« L'idée d'une Montagne Cosmique = Centre du Monde n'est pas nécessairement d'origine orientale car, nous l'avons vu, le symbolisme du « Centre » semble avoir précédé l'essor des civilisations paléo-orientales. Mais les anciennes traditions des peuples de l'Asie centrale et septentrionale — qui, sans doute, connaissaient l'image d'un « Centre du Monde » et de l'Axe cosmique — ont été modifiées par l'afflux continu des idées religieuses orientales, que celles-ci aient été d'origine mésopotamienne (et diffusées à travers l'Iran) ou indienne (à travers le lamaïsme). Dans la cosmologie indienne, le Mont Meru s'élève au centre du monde et au-dessus de lui scintille l'Étoile Polaire » (Ibid. pp. 216-217).

Kent studial an hengoun sibirian, e kavan gwelloc'h sellout a-dostoc'h ouzh hini Mezopotamia hag Ejipt da heul an notenn 5 roet gant Eliade en e levr p. 218, hon kas da levr A.J. WENSINCK, *Tree and Bird as Cosmological Symbols in Western Asia* (Amsterdam, 1921), p. 25 sq.

Ar wezenn da gentañ : koshañ daveen a gaver e levr Wensinck a zo meurgan Gilgamesh, a c'heller deiziatañ, da heul Stephanie Dalley en he levr *Myths from Mesopotamia* tro dibenn an trived milved KK :

« [...] there is no evidence that any of the Gilgamesh stories were written before about 2150 BC.» (Dalley, 1991, p. 41).

Bez e c'heller menegiñ ivez war sielloù skeudennoù "Gilgamesh". Buhez an haroz a c'hell bezañ amzeriet eus an trived milved K.K.:

“Precise dates cannot be given for the lifetime of Gilgamesh, but they are generally agreed to lie between 2800 and 2500 BC.” (Ibid., p. 40).



An tremen a gKeriadenn da gKêr a c'hoarvez e Sumer etre 4300 ha 3450 K.K. Ourouk a voe Kêr gentañ Mezopotamia e-pad ar pevarvet milved K.K. (prantad Oubai), dezhi div lec'h relijiel vras:

« The city originally consisted of two separate towns on either side, probably, of a canal. In one town the chief, patron deity was the sky god An (or Anu) ; in the other it was Inanna (Ishtar) the goddess of love and war. According to traditions that emanate from Uruk, as does this epic, Inanna was the daughter of An, and the great temple which she inhabited was called Eanna, which could be translated as 'House of An (or, the sky) » (Ibid.).

Ar roudoù skrivañ kentañ kavet biskoazh zo bloaziataet tro da 3300 K.K. Evit merañ marc'hadourezh, greun, bier, chatal, e vezent implijet:

Distroomp war-du Gilgamesh:

« Gilgamesh, bewildered by the death of his friend Engidu and fearing the same fate for himself, resolves to visit his ancestor Ut-napishtim who possesses eternal life » (Wensinck, 1921, p. 1).

Mont a ra Gilgamesh war-du ar reter, da lavaret eo etrezek an heol o sevel :

« Then Gilgamesh travels in order to find the place from where he may cross over to Ut-napishtim. Drak<sup>241</sup> is the way through the mountains, but in the end he reaches light. [...] Gilgamesh, after a travel through the Northern mountains, in the way of the sun, is reaching the Eastern end of the earth » (Ibid. p. 2).

N'eo ket ur wezenn a vo kavet da gentañ met dorioù:

« So there is evidence for the conclusion that the Eastern, Western and Northern ends of the earth are marked by gates » (Ibid.).

---

<sup>241</sup> Anv-lec'h.

« There, in the Eastern end of the earth, Gilgamesh sees a tree (IX 164 sqq.) :  
Cornelian it bears as its fruit  
Bunches depend from it, beautiful to the eye;  
Lapislazuli it bears as its twigs (?)  
Fruit it bears desirable to sight.

It has a cosmological significance, for it stands at the Eastern end of the earth and marks the east. The whole tree consists of precious stones, pink and blue, the colours of the sky and of the sun rising behind the morning clouds. It is placed on the shore of the ocean where the sun begins its course; so it is the tree of light » (Ibid., p. 3).

Evit ma vo anat an diforc'h etre an daou hengoun, pouezomp war ar pezh a ra esparded gwezenn vuhez Mezopotamia :

« the tree is represented as the tree of life on account of its being the tree of light; for in the Oriental conception light and life are ideas which cannot be separated from each other » (Ibid.).

Penaos e veze labourer 'ta gant an arzourien? Gant an arzourien e veze tennet o awen diouzh ar marzhoù:

« The artist who made the numerous cylinders of the kind which will be discussed here, borrowed their data from widely spread cosmological conceptions. In other cases they sculptured scenes of religious life; or they chose the deeds of Gilgamesh and Engidu for their subject. [...]. The scenes are given by history and tradition, the persons are for the larger part given and their types are fixed by tradition. [...]. All these pictures are conventional » (Ibid., p. 6).

Tamm-ha-tamm e veze kemeret gant pep elfenn ar skeudenn ur ster dezhi he unan:

« Just because the cylinders were composed from elements fixed by tradition, these elements became beings of their own which, even when detached from their surroundings, were recognized and which might be used by themselves or in connection with others which originally had no relations with them » (Ibid.)

Sielloù a vo kavet, awenet gant arouezioù ‘relijiel’ ar meurgan enta :

“On figure 5 Shamash, again recognizable by the rays departing from his shoulders, is represented as sitting before the gate, holding in his hand the key of heaven. Behind him is the tree, again characterized by its surroundings as the tree in the east” (Ibid., p. 8)



**Skeudenn 32: Siell Shamash**

(Wensinck, 1921, p. 8, Fig. 5 )

An hengoun-se a gendalc’ho gant he buhez pelloc’h eget Gilgamesh, haroz ar meurgan brudet :

« The gate is represented by one post only, kept by one guardian. On the other side there is a seated person, whom I cannot identify, with the tree behind the person. [...]. The fore gate of heaven is placed upon a lying bull. We have observed that the gate of heaven is sometimes realistically represented by the interrupted mountains in the four quarters of the earth. These mountains rest on the earth; so it is probable that the bull on which the gate rests, is a symbol of the earth. This surmise is confirmed by the fact that the bull as a symbol of the earth is well known in Eastern cosmology. The earth is represented by the bull, the ocean by the serpent.; their mythical names are Behemot and Leviatan » (Ibid., p. 9).

Ezhomm zo gouverkañ emañ ar wezenn lec'hiet a-dreñv an dudenn, rak war siell vMaikop emañ ar wezenn en tu all d'ar c'harv pe e-tal anezhañ pa 'z eo bet didroc'het. Er pennad dindan e vo kavet ur wezenn dindan ur skeudenn:



Fig. 8

### **Skeudenn 33: Siell ur wezenn**

(Wensinck, 1921, p. 10)

« Di Cesnola in his work on Cyprus has a reproduction of a seal cylinder on which the winged disc appears above a conventionalised tree (fig. 8); the tree rests on the omphalos flanked by two serpents. The work betrays a strong Egyptian influence and it may be doubted whether the artist was doing anything else than paint heraldic emblems. But we know that the omphalos is the symbol of the earth and in this sense it is in tune with the representation as a whole. Fig. 9 is cognate to it. Here again the winged disc is above the omphalos flanked by two serpents. Above the omphalos is not the conventionalized tree, but a double image of the Egyptian sign of life. That the tree and the sign of life are interchangeable, proves that the meaning of the tree on these seal cylinders, though even so conventionalized, was once understood » (ibid., p. 10).

Diwar-benn an evn bremañ :

« Three features are prominent here. The bird is of a cosmic bulk: he reaches from the lowest earth to the highest part of the Universe, so that he can be said to represent the world. He has a solar character, as appears from his wings in East and West, his many colours, which, as in the case of the tree, are represented by jewels.

Among the solar birds a primary place is taken by the eagle. [...]. Just as the sun, it flies from the east to the West in one day. [...]. It flies higher than all other birds; it even reaches the firmament and comes so near to the sun, that it has to cool itself in the ocean; then it revives and flies up anew and returns to its youth.

It loses its feathers and recovers them again. Such a characteristic, in the popular belief, is interpreted as immortality, just as the serpent has got this reputation because of changing its skin<sup>242</sup>. Now this continual dying and reviving is also a prominent characteristic of the sun. And it can hardly be doubted that along a similar way of thought the eagle has become a solar bird » (ibid., p. 39).



**Skeudenn 34: Siell un evn evel ur wezenn heol**  
(Wensinck, 1921, p. 43 Fig. 30)

Ur siell c'hoazh :

« Fig. 30 has the same scene; but here the place of the solar tree is occupied by the bird which, to some extent, is represented in the style of the tree. To the same class of images belongs figure 31 where the bird in the centre even has the solar disc from which the tailfeathers go down. The wings are modelled in the way of twigs with leaves » (Ibid., p. 43).

---

<sup>242</sup> Kement-all ez eus tu da lavarout diwar-benn kern ar c'harv.



### **Skeudenn 35: Siell un evn heol**


(Wensinck, p. 43, Fig. 31)






Ma n'hon eus kavet siell ebet e Kornog ha Kreiz Azia o skeudenniñ kirvi er mare-se, n'eus ket da vezañ souezhet a-benn ar fin, rak pell zo n'edo ket ken an dud-se o vevañ diwar hemolc'hiñ loened gouez. Notennomp evelato war ar skeudenn-mañ un tres hag a zo tost ouzh re ar sielloù diskouezet diagent gant gavregi hag ur wezenn. Er c'hontrol zoken, leun eo o arouezioù marzhoniel gant skeudennoù o tiskouez trec'h an Den war ouezoni an Natur :

« The so-called 'Gilgamesh figure', a hero shown grappling masterfully with wild animals on cylinder seals and sculptures, is attested much earlier than any of the written Gilgamesh stories, earlier even than the putative existence of the hero as king of Uruk. Perhaps at times this powerful, traditional image was associated with Gilgamesh, but other associations, for instance with Nergal, Enkidu, or Shakkan, were probably also valid at different periods of extreme antiquity in Mesopotamia » (Dalley, 1991, p. 41).

Reiñ a reomp da heul ur gartenn a ziskouez pelec'h e kaver kirvi war hanterzouar an norz ma weler n'eus karv ebet tro-dro da Ourouk.

Gouzout a ouzomp bremañ emañ koshoc'h siell Maikop eget hengoun vuhez Gilgamesh, koshañ hengoun biskoazh e Mezopotamia. Gouzout a reomp ivez eo disheñvel gwezenn siell vMaikop diouzh hini hengoun Mezopotamia (Fig . 5, p. 300 ha Fig. 31, p. 303).



-  Domaine des cerfs (d'après Flerov, Geptner et Tsalkine)
-  Limite méridionale de l'expansion du renne (d'après Minns)
-  Limite méridionale de l'expansion de l'élan (d'après Gr. Encycl. Sov.)
-  Trouvailles isolées de représentations de cerfs scythes
-  Région de découvertes abondantes de représentations de cerfs scythes

1 Tàpiószentmárton 2 Zoldhalompuszta; 3 Garchinovo. 4 Tchastye kourgany; 5 Mastiuguino; 6 Kelermes; 7 Stavropol; 8 Naltchik; 9 Koban; 10 Ourous-Martan; 11 Touran; 12 Sakkez; 13 Blumenfeld; 14 Piatimary; 15 Oufimka; 16 Ananino; 17 Pamir; 18 Sourat-Tach; 19 Tamgaly; 20 Tchilikty; 21 Bobrovoye; 22 Touiakhta; 23 Pazyryk; 24 Ladeisk; 25 Korkino, 26 Tchastoostrovskoye; 27 Grotte d'Aidachinsk; 28 Bogotol; 29 B. Barandate; 30 Iagounia; 31 Iaia; 32 Pottchevach; 33 Ikhé-alyk; 34 Dourbeldjine; 35 Kop-Kojee.

**Kartenn 25 : Karv ar Skuthed<sup>243</sup>**  
(N.L. Tchlenova , Le cerf scythe, 1963)

Kement-se a gas ac'hanomp eta d'an eil hengoun gwezenn vuhez, hini meuriadoù Sibiria studiet gant M. Éliade da goulz ar chamaniezh, da lavaret eo hervez hon eus gwelet a-ziagent, un hengoun n'eo ket koshoc'h eget sevenadur

<sup>243</sup> Carte de la dispersion actuelle des cerfs et des trouvailles de représentations de cerfs de l'époque scythe

Tagar, 700 K.K., met a zoug ennañ un hengoun koshoc'h a c'hell bezañ ken uhel ha dibenn an eizhtegved kantved K.K. d'an nebeutañ. Daou veneg dreist-holl :

« Il [le candidat chaman] fut porté ensuite au bord des Neufs Mers. Au milieu de l'une d'elles se trouvait une île et, au milieu de l'île, un jeune bouleau s'élevait jusqu'au Ciel. C'était l'Arbre du Seigneur de la terre. Près de lui poussaient 9 herbes, ancêtres de toutes les plantes de la terre. L'Arbre était entouré des Mers et dans chacune nageait une espèce d'oiseau avec ses petits ; il y avait plusieurs variétés de canards, un cygne et un épervier. Le candidat visita toutes ces mers ; certaines étaient salées, d'autres si chaudes qu'il ne pouvait pas s'approcher du rivage. Après avoir fait le tour, le candidat leva la tête et aperçut, au sommet de l'Arbre, des hommes (3) de plusieurs nations : [...].

Le Seigneur de l'Arbre donna également des rameaux à tous les hommes qui se trouvaient au sommet de l'Arbre. Mais, prenant figure humaine et sortant de l'Arbre jusqu'à la poitrine, il ajouta : « Il n'y a qu'une seule branche que je ne donne pas aux chamans, car je la garde pour le reste des humains. Ils pourront s'en faire des habitations et pourront aussi l'utiliser pour leurs besoins. Je suis l'Arbre qui donne la vie à tous les humains. » (Éliade, 1974, p. 49).

Anavezout a c'heller ober skeudenn Geltiek vrudet, penn un den o tiskouez diouzh struzh, evel « Piler maen Pfalzfeld (Rhénanie) » un tammig evel hini Suibhne o tiskouez diouzh pluñv un evn. Hag ivez ar meneg-mañ :

« Les Goldes comptent trois Arbres Cosmiques : le premier dans le Ciel (et les âmes des humains sont posées sur les branches comme des oiseaux, attendant d'être descendues sur terre pour donner naissance à des enfants), un autre Arbre sur terre et les troisième en Enfer » (Ibid., p. 219).

Adkavout a reer amañ tem pennad 40 Buile Suibhne, met e-lec'h kern kirvi ma vez Fer Benn o kludañ warno, amañ ez eo skourroù gwez warno eneoù da c'hortoz bezañ ganet. Eus pelec'h e c'hellfe dont enta ar c'harv-se?



Adarre en em gaver dirak ar memes entremar p'edomp oc'h en em c'houlenn eus pelec'h e c'hellfe dont tem ar c'harv e Buile Suibhne. Treiñ a reomp adarre war-du Esther Jacobson evit kavout ar respont d'hor goulenn :

« At the center and source of those cosmic processes appears a particular figure—female and deer-like, an image which gradually shifted in appearance as it was contradicted by the inflow of new cultural elements<sup>244</sup> [...].

In her most ancient incarnation, she took the form of a monumental and unantlered elk (New World moose). Over centuries and even millenia, her representational form shifted to an antlered animal<sup>245</sup> and then to an antlered but thoroughly syncretic form<sup>246</sup>, until finally her animal aspect was eclipsed in the last centuries before our era » (Jacobson, 1993, pp. 2-3).

Pa gomz an oberourez eus Kreisteiz Sibiria hag eus Skuthez-Sibirianiz eo ret gouzout en em gaver gant an dud-se er milved diwezhañ K.K.<sup>247</sup>. Amañ e komz eus ardamezioù koefoù kezeg ar gantreerien gentañ :

« The axis revealed in the headdresses of the early Nomads and in the regalia of their horses was rooted in the certainty that death was a process of change that occurred along or through, or by reference to a tree (of life) or a (world) mountain. [...].

At the same time, the process or journey symbolized by axis, tree, mountain, antlers, or horns was associated with an animal-spirit, one which ruled over both life and death. [...] In its archaic stage, this animal spirit was an antlered or horned animal, cervid or caprid<sup>248</sup>. Its antlers were a metaphor for the Tree of Life while its horns may have referred to the World Mountain, or axis mundi. [...] the original animal-spirit was female in gender. Represented as a deer or caprid in the art of South Siberia and as a deer throughout much of the early Scytho-Siberian period, with the passage of time and the influx of Near Eastern

---

<sup>244</sup> Dre « new cultural elements » e klevomp-ni sevenadur Okunev (Taolenn II) goude hini Afanasievo

<sup>245</sup> Karveg (karv) pe gavreg (gavr ouez)

<sup>246</sup> Arz skuthek

<sup>247</sup> Jacobson, 1993, p. 5

<sup>248</sup> Amañ gwirheñvel, e komz an oberourez eus gavreged Kantreerien Abred kreisteiz Sibiria, tro ar milved kentañ K.K.

and Hellenic traditions of representation she gradually assumed the form of a human female. She might be seated holding a branch or represented under a tree, or she might be recreated as the dead under the tree crown. It is certain that this being was rooted in ancient Siberian traditions and that her original substance was that of an antlered or horned animal » (Ibid., pp. 86-87).

O paouez omp lenn titouroù diwar-benn istor emdroadur ar spered-mamm adalek neolitik Sibiria betek Skuthia. Gallout a reer klokaat pennadoù Jacobson gant hini Anisimov :

« To this should be added that the larch tree, figuring in the myth as a world tree-universe (at first as reaching to the very sky, giving food to the titmouse brothers; at the end of the myth as the dwelling-place of the horned mother-ruler of the lights), finds its explanation in the totemic character of Nivkh<sup>249</sup> concepts linked with the cult of this tree. In a note, Shternberg adds: "Notable is the mysterious role of the larch in all the most important moments of the tale; this is fully in harmony with the cult of this tree, to which the Gilyaks<sup>250</sup> even attribute their origin » (Michael, 1963, p. 173-174).

Ne gredan ket ez eus forc'hellegezh etre an daou hengoun, hini Mezopotamia eus ar wezenn "lufir", hag hini Sibiria eus ar wezenn "vev", evit ober gant gerioù a laka kemm anat etre an eil bed hag egile. Ha ma ne c'heller ket lavarout n'eus heñvelder touellus ebet etrezo. Ar gavreg da skouer a ziskouezh war sielloù an Ejipt a zo diaes koulskoude da veskañ gant kragvouc'h stepennoù ar Minousinsk en abeg d'an amzervezh paneveken. Evel-just eo kenstur emdroadurioù an holl bobladoù-se a ziskenn holl eus hemolc'herien ar paleolitik uhel, met eus lec'hioù ha dre hentoù disheñvel. Un dra a ranker splannañ ivez eo an tremen d'an neolitik :

« With the emergence of our earliest historical documents in the third millennium B.C. we find non-Indo-European populations occupying central and eastern Anatolia to the Caucasus and Caspian, the southern region of

---

<sup>249</sup> Nivkhied, meuriad paleo-sibirianiz war ar stêr Amur, a dalvez o anv da lavarout "den".

<sup>250</sup> An anv-se a vez roet d'an Nivkhied gant an Toungouz-Manchourianiz

historical Palestine, and much of the Zagros region including all of Mesopotamia. These areas comprise the three main centres of incipient agriculture during the 'Neolithic Revolution' (9000-6000 BC) in Southwest Asia » (Mallory, 1991, p. (64).

A-zivout ar c'harv en tolead-se, anavezet mat eo ur c'hult ar c'harv gant an Hittited, edo o vevañ eno hogen diwezhatoc'h. Peadra d'en em c'houleñ hag-eñ ne vije ket ereet mod pe vod an div c'hoarvoudenn. Evit komz eus-se e rankomp treiñ war-du Mallory a zispleg deomp an doare.




Figure 12.8 Maikop culture and selected sites associated with the Uruk expansion.

### Kartenn 26 : Sevenadur Maikop

(Anthony, 2007, p. 283)

#### *Yezhoù Anatolia*

An Anatoliz a zo testeniekat tro an naontekved kantved K.K. Ar re gentañ o komz ur yezh Indez-Europek<sup>251</sup>.

<sup>251</sup> Mallory, 1989, p. 24

« By about the mid-seventeenth century BC the Indo-European speakers are declaring themselves in several different Anatolian languages. By far the best attested of these is Hittite. With their capital at Hattusa (modern Bogazköy), the Hittites have left us over 25,000 clay tablets spanning the period from about 1650 to 1200 BC. In addition, their archives contain tablets in two other Indo-European languages, Luwian and Palaic » (Mallory, 1989, pp. 25-26).

An Hittited a oa neuze nostanted eus an aremvezh o defe enteuzet poblañs henvroat an Hattied na gomzent ket ouzhpenn-se yezhoù Anatolia :

« The Hattians were an ancient people who inhabited the land of Hatti in Asia Minor in the 3rd to 2nd millennia BC. They spoke a non-Indo-European language of uncertain affiliation called Hattic (now believed by some to be related to the Northwest Caucasian<sup>252</sup> language group). They eventually merged with or were replaced by the Hittites, who spoke the Indo-European Hittite language »

(<http://ancient-anatolia.blogspot.com/2006/09/hattians-first-civilization-in-anatolia.html>).

An Hittited a rae *nes* anezho ha *nesili* eus o yezh<sup>253</sup>. Hervez doare o dije ar yezhoù Indez-Europek anavezet evel Hittiteg, Luwianeg ha Palaeg ensilet e Anatolia e-pad an trived, pe zoken e dibenn ar pevarvet milved K.K<sup>254</sup>:

« Probably the most widely accepted case for intrusion falls at the end of Early Bronze Age II, about 2700—2600 BC, when the evidence for population movement is coupled with destruction and abandonment » (Mallory, 1991, p. 28).

Hag evel m'eo bet meneget uheloc'h a-zivout Maikop, ez eus bet kemm bras en doareoù beziañ da vare dibenn ar pevarved ha derou an trived milved :

---

<sup>252</sup> Pe ivez Kartvelianeg eus Kreisteiz Kaokazia gouez da vMallory *op. cit.*, p. 26

<sup>253</sup> Ibidem

<sup>254</sup> Ibid., pp. 27-28

« Before 3000 BC there begin to appear in the territory of the indigenous Transcaucasian (Kuro-Araxes) culture somewhat similar burials such as the royal tomb of Uch-Tepe on the Milska steppe. As tumulus burials are previously unknown in this region, some would explain their appearance by an intrusion of steppe pastoralists who migrated through the Caucasus and subjugated the local Early Bronze Age culture » (Ibid., pp. 29-30).

Un arguzenn echu eo hini ar c'hezeg a oa dianav d'ar vMezopotamiz betek-hen:

« The discovery of horse bones on several sites of east Anatolia such as Norsun Tepe and Tepecik are seen to confirm a steppe intrusion since, as mentioned earlier, the horse, long known in the Ukraine and south Russia, is not attested in Anatolia prior to the Bronze Age » (Ibid., p. 30).

« If we compare this evidence with that of the Pontic-Caspian, then the similarities involve the use of the tumulus, burial chamber, and in some cases such as Uch-Tepe, the use of ochre. In several more detailed considerations of this material, Shan Winn relates it to the later royal burials at Alaca Hüyük, Trialeti and Maykop, which brings the steppe, the Caucasus, and northern Anatolia into some form of contact relationship » (Ibid, p. 232).

Kement-se a gendere dres gant ar pezh edomp o skrivañ uheloc'hig diwar-benn al levezonioù etre Maikop hag hanternoz Mezopotamia.

Ma 'z eer da heul Mallory ez eus tu da skrivañ gant fiziañs e teu heñvelderioù etre bezioù hanternoz Kaokazia ha re kreiz hanternoz Anatolia eus darempredoù disehan etre an div rannbarzh. Kement-se a vouet teorienn gKourganek siell vMaikop:

« Continuing contacts or migrations are employed to explain subsequent similarities between the royal tombs of north-central Anatolia, such as the thirteen graves of Alaca Hüyük, with tombs formally similar or possessing related grave goods known north of the Caucasus » (Ibid., p. 30).

Rediet omp da stadañ emañ al levezon o redek eus an Hanternoz d'ar C'hreisteiz. En gwirvoudel ez eur aotreet da soñjal n'o deus ket an nostanted amprestet pep tra digant ar re-all. Miret o deus d'an nebeutañ o yezh hag o c'hredennoù e-pad ur mare.

Eeün hag eeün, sevenadur Maikop a zo test da zarempredoù nevez etre bed ar steppennoù, hini ar C'haokaz hag hini (Norzh) Anatolia, gant tud a gomze ur yezh Hen-Indez-Europek d'eus un tu ha Kartvelianeg mui yezhoù strollad Kaokazia an Hanternoz d'eus an tu all :

« Evdijk was the richest of the Maikop-Novosvobodnaya kurgans that appeared in the steppes north of the North Caucasus between 3700 and 3100 BCE. In such places, late Novosvobodnaya people whose speech would probably be assigned to a Caucasian language family met and spoke with individuals of the Repin and Late Khvalinsk cultures who probably spoke Proto-Indo-European dialects. The loans discussed in chapter 5 between archaic Caucasian and Proto-Indo-European languages probably were words spoken during these exchanges » (Anthony, 2007, p. 297).

Test e vije ar siell dizoloet e Maikop e derou an trivet milved K.K., eus an darempredoù nevez etre ar steppennoù ha Norzh Mezopotamia dre ar C'haokaz, a-hed an trived milved K.K. pe a-gent zoken.

## B. KOURGANIZ MAIKOP

### *Orin*

Kement-se evel-just ne lavar ket deomp c'hoazh eus pelec'h e c'helle dont an dud o yezh Hen-Indez-Europek a zo bet douaret e Maikop. Evit-se e ranker treiñ war-du M. Gimbutas da gentañ:

« Although earliest Kurgan materials are very scanty (most of the graves are without inventory, except for ocher and sheep and cattle bones; habitation sites are known from surface materials only), the present evidence points not to the North Pontic, but to the lower Volga-Kazakhstan steppes as the Kurgan homeland area. It is premature to say how far east the early Kurgan culture extended but at a later period it occupied almost the entire steppe belt in Siberia » (Gimbutas, 1970, p. 175-176).

Hag an oberourez ha menegiñ sevenadur Afanasjevo:

« This is supported by the fact that in the Upper Yenisei area a related culture, called Afanasjevo, which belongs to the Kurgan IV period is known. There are also "Pre-Afanasjevo" materials, but as yet no neolithic sites of respectable age have been excavated. Many archaeologically blank areas between the Volga and Yenisei make it difficult to speculate on the beginnings of the Afanasjevo culture » (Gimbutas, 1970, p. 177).

Gwelet hon eus penaos eo bet stanket an tachennoù goulo pa vezemp o studial sevenadur Keltiminar hag hini Botai. Aet eo war-raok hon anaoudegezh eus an amzer tremen abaoe ha goude ma oa anavezet sevenadur Repin, displegadur an divroadeg gant D. Anthony a gadarn hon anaoudegezh eus koulz amzer ar pevarvet milved K.K.:

« Finally, on the east, on the Ural River, a section of the Volga-Ural steppe population decided, about 3500 BCE, to migrate eastward across the

Kazakhstan more than 2000 km to the Altai Mountains. *We do not know why they did this*, but their incredible trek across the Kazakh steppes led to the appearance of the Afanasievo culture in the western Gorny Altai. The Afanasievo culture was intrusive in the Altai, and it introduced a suite of domesticated animals, metal types, pottery types, and funeral customs that were derived from the Volga-Ural steppes » (Anthony, 2007, pp. 264).

Dre ma oa anavezet ar metal gant tud Repin er bloavezhioù 3700 K.K., e c'heller diverañ n'eo ket bet dizoloet gant tud Maikop digant tud hanternoz Mezopotamia. Hag ivez un dilerc'h diazez:

« The migrants might also have been responsible for introducing horseback riding to the pedestrian foragers of the northern Kazakh steppes, who were quickly transformed into the horse-riding, wild-horse-hunting Botai culture just when the Afanasievo migration began » (Ibid., p. 265).

Arabat disoñjal an dra-mañ ivez diwar-benn ar yezhoù, a zo bet gwelet endeo:

«Most studies of Indo-European sequencing put the separation of Tocharian after that of Anatolian and before any other branch. The Afanasievo migration meets that expectation » (Ibid.).

An divroadeg-se evit hor studi a zo a-bouez penn rak e pourvez deomp gant un diskloum da gudenn karv Maikop, a c'hell dont neuze eus Sibiria, zoken ma n'eo ket bet diskouezhet c'hoazh an dra-se (S.O. *Tokarianeg, Afanasievo, Repin*, p. 290).

N'eo ket an oberour evit displegañ perak paneve kaerded eston ar vro eo c'hoarvezet an divroadeg-se:






Figure 13.2 Culture areas in the steppes between the Volga and the Altai at the time of the Afanasievo migration, 3700–3300 BCE.

### Kartenn 27 : Divroadeg Afanasievo (3700-3300 K.K.)

(Anthony, 2007, p. 308)

« The Afanasievo culture appeared in this beautiful setting [steppe-pine-forest islands in the high mountain valleys of the western Altai], ideal for upland pastoralism, probably around 3700-3400 BCE, during the Repin-late Khvalinsk period. It flourished there until about 2400 BCE, through the Yamnaya period in the Pontic-Caspian steppes » (Ibid., pp. 308-309).

Evidomp-ni ivez eo deuet mat an divroadeg-se a droio erziwezh en ur ramz a eskemmoù etre Kornog Sibiria ha steppennoù Europa, hag a bado kantvedoù. Komzet hon eus eus sevenadur Glazkovo (1800-1300 KK). Degas soñj a reomp eus frazennoù Levin-Potapov ma tisklaer fraezh e oa c'hoazh ur sevenadur Afanasievo e steppennoù Minusa hag Altai en eilvet milved. Penn kentañ sevenadur Glazkovo a zo c'hoazh en Neolitik ma ranker ouzhpennañ un nebeut traezoù metal<sup>255</sup>. Diwezhatoc'h e tiwano da vat labour ar metal er Baïkal.

<sup>255</sup> Degaset dezho emichañs gant tud Afanasievo

### *Divroadeg Repin*

« Valuables of gold, silver, lapis, turquoise, and carnelian were retained exclusively by the North Caucasian individuals in direct contact with the south and perhaps by those who lived near the silver and copper mines that fed the southern trade. But a revolutionary new technology for land transport—wagons—might have been given to the steppes by the Maikop culture. Traces of at least two solid wooden disc wheels were found in a late Maikop kurgan on the Kuban River at Starokorsunskaya kurgan 2, with Novosvobodnaya black-burnished pots. Although not dated directly, the wooden wheels in this kurgan might be among the oldest in Europe. Another Novosvobodnaya grave contained a bronze cauldron with a schematic image that seems to portray a cart. It was found at Evdik » (Anthony, 2007, p. 295).

Bezañ lec'hiadur Evdik war ar gartenn e weler mat emañ sturiet red al levezon eus an hanternoz d'ar c'hreisteiz, hag eus ar reter d'ar c'hornog, da lavaret eo eus ar biz d'ar mervent.

« At Evdik, grave 20 contained an adult male in a contracted position oriented southwest, the standard Maikop pose, stained with red ochre, with an early Maikop pot by his feet. This was the original grave over which the kurgan was raised » (Ibid., pp. 295/297).

N'eus mui arvar ebet war hor spered en em gav sevenadur Maikop berr-ha-berr war hent lusk enep divroadeg Repin evel displeget gant Anthony, etre Afanasjevo ha Yamna. An dra-se a ouzomp peogwir ez eo heñvel klopennoù kentañ Afanasievo ouzh re Yamna ha poblañs ar c'hornog<sup>256</sup>:

« Evdik was the richest of the Maikop-Novosvobodnaya kurgans that appeared in the steppes north of the North Caucasus between 3700 and 3100 BCE. In such places, late Novosvobodnaya people whose speech would probably be assigned to a Caucasian language family met and spoke with individuals of the

---

<sup>256</sup> Anthony, 2007, p. 310

Repin and Late Khvalinsk cultures who probably spoke Proto-Indo-European dialects » (Ibid., p. 297).

Ne bouezimp ket hiroc'h war an darempredoù etre tud sevenadurioù disheñvel an tolead, Evnik, Repin, Khvalinsk, Maikop, Novosvobodnaya ha Treuzkaokazia... Anat eo an darempredoù etre ar sevenadurioù-se, da lavaret eo etre tud a gomze yezhoù Kartvelian pe Kaokazian, ha re all a gomze ur yezh Hen-Indez-Europeg.

Ar pennadoù-se penn-ouzh-penn a dres deomp ur skeudenn ma spurmanter derou un diskloum da gudenn ar c'harv e Maikop. Pa seller mat ouzh ar gartenn 13.2 e verzer e penn uhel an tu dehou, goude Afanasievo, "Glazkovo culture". Kejet eo bet ganeomp endeo gant an anv-se, pa vezemp o studial prantadoù arkeologel Sibiria. Berr-ha-berr e reomp meneg eus pennad an arkeologourez K. Kris Hirst diwar-benn Glazkovo en he "Dictionary of Archaeology" :

« The Serovo-Glazkovo culture refers to a Siberian Late Neolithic to Bronze Age culture (4200-3200 BP) located in the Baïkal area. In the 1930s, Russian archaeologist A.P. Okladnikov identified three distinct, sequential hunter-gatherer societies in the Baïkal region during the Holocene: Glazkovo, Kitoi and Serovo (Pl. 1). Recent investigations by the University of Alberta suggest that a more useful description of the culture evolution of the Baïkal is Kitoi followed by Serovo-Glazkovo. Glazkovo culture sites are characterized by burial mounds and burials in stone cists, copper knives and arm rings, nephrite<sup>257</sup> rings and disks »

[<http://archaeology.about.com/od/terms/g/serovo.htm>].

Netra da lâroust e-keñver amzeroniezh, dereout a ra ken-ken. Ar metal kentañ a vo degaset gant tud Afanasievo eus Repin, adalek 3.700 pe 3.500 eta. Meneget e vo ne oa lec'hienn sevenadurel ebet war gompezenn Ukok eus ar mezolitik

---

<sup>257</sup> Siell Maikop a zo graet gant lounezhell (nephrite)

pe an neolitik a-gent tud Repin-Afanasiovo<sup>258</sup>, met loened gouez o deus kavet an divroidi en tu all d'al loened doñv a oa deuet ganto:

« Cemeteries of the local Kuznetsk-Altai foragers like Lebedi II were located in the forest and forest-meadow zone higher up on the slopes of the Altai, and contained a distinct set of ornaments (bear-teeth necklaces and bone carvings of elk and bear), lithics (asymmetrical curved flint knives), antler tools (harpoons), pottery (related to the Serovo-Glazkovo pottery tradition of the Baikal forager tradition), and funeral rituals (no kurgans, no stone slab over the grave) » (Ibid., pp. 310-311).

Diwar an holl ditouroù-se ne ouzer ket c'hoazh orin skeudenn karv Maikop. Ret eo lenn ar frazenn-mañ :

« As time passed, Glazkovo forager sites located to the northeast began to show the influence of Afanasievo motifs on their ceramics, and metal objects began to appear in Glazkovo sites.

It is clear that populations continued to circulate between the Ural frontier and the Altai well into the Yamnaya period in the Ural steppes, or after 3300 BCE, bringing many Yamnaya traits and practices to the Altai. (Anthony, 2007, p. 310-311).

Ar pezh a zo gwir evit an tremen eus Yamna da Repin hag Afanasievo a zlefe bezañ gwir ivez eus an tu all, da lavaret eus Serovo-Glazkovo da Afanasievo-Repin:

« The Evenk mythic tradition animates the powerful images of female elk and deer from the Siberian Neolithic and Bronze Ages, lending a surging vitality to the image of the female animal, to the deer wrapped around the vertical stelae, to the deer with the heads of birds and with antlers transformed into branches tipped with birds » (Jacobson, 1993, p. 243).

---

<sup>258</sup> Anthony, 2007, p. 310

Diveizus eo n'o dije bet tud Afanasievo hekleb ebet eus marzh al loen-mamm-se e-pad ar 700 kantved zo padet adalek o donedigezh d'al lec'hioù-se ha sevenadur Maikop.

Etre 3.700 pe 3500 ha 3.000 – amzeriad siell Maikop, hervez Nekhaev - o doa bet goar tud Repin da vont betek ar Yenisei ha da eskemm traoù metal enep marvailhoù kaer ha da zistreiñ gant keneiled, mongoloided pe get. D'ar mare dres tro an Neolitik hag an Aremvezh edo an eln o treiñ da garveg evel loen-mamm. Neuze, n'eus abeg sirius ebet da arvariñ groñs war an diskloum-se, evit displegañ skeudenn ar c'harveg gant ur wezenn-vuhez engravet war ar siell dizoloet e Maikop, o tont eus Hanternoz Mezopotamia ma oa bet desket an teknikoù-se emichañs. Ur gredenn nevez a c'hell bezañ broudis a-fed sevenadur ivez. Ur vartezeadenn wirheñvel eo a dalvez ar boan enta bezañ studiet.

## 2.5 - HITTITED

### A. PALEOLITIK HA NEOLITIK



**Skeudenn 36: Doueez Vamm Catal Höyük<sup>259</sup>**  
[<http://arthist.cla.umn.edu/aict/images/ancient/ant/512/002.jpg>]

Gwelet hon eus gant Mallory e oa c'hoarvezet Dispac'h an Neolitik etre 9.000 ha 6.000 e Mervent Azia. Anatolia a bourchas deomp ur skouer eus ar c'hentañ eus an dispac'h-se :

« A remarkable example of the efflorescence of cultures that made the step to agriculture and livestock-breeding is found at Çatal Hüyük, which stands on the edge of the fruitful Konya plateau in south central Turkey and dates from

---

<sup>259</sup> Mother goddess seated on feline throne (or birthing chair ?); figurine from Çatal Höyük, ca. 5750 B.C.E. c. 5,500 BC

the end of the 7<sup>th</sup> millennium B.C. or the beginning of the 6<sup>th</sup>. [...]. Apart from sheep and goats, there were herds of cows already, and 12 kinds of plants were grown in the fields, including wheat, barley and peas. [...]. Wall frescoes representing picturesque hunting scenes, geometric ornaments and cult scenes alternated with painted clay sculpture and reliefs. The cult of the aurochs, most frequently recurring in the paintings, played a special role. Clay figurines of strong-bodied women, protectresses of fertility, were very skilfully wrought » (Piotrovsky, 1988, p. 30).

Diwar-benn an hevelep savadur setu neuze displegadur M. Gimbutas :

« The main theme of these wall paintings and reliefs revolves around the Goddess of Regeneration portrayed as a frog-shaped woman giving birth. She is associated with animals, and around her are both the vulture, representing the death aspect, and the bull head, representing regeneration. [...]. In addition, there are also some half-naturalistic portrayals of deer hunts, women carrying fish nets, mountains, plants, and water with fish » (Gimbutas, 1991, p. 9).

War ar skeudenn gentañ ma 'z eus ur vaouez en he c'hoazez pe o wilioudiñ war ar pezh a vez diskouezet deomp evel un tron penn-kazh, e weler mat da gentañ e c'heller ober anv amañ a-fed penn-kizhier eus loened doñv heñvel ouzh deñved (leonezed evit tud zo), ha d'an eil ne hañval tamm ebet ar vaouez bezañ o wilioudiñ gant he fenn-daoulin stok an eil ouzh egile. Gwir eo e hañval bezañ dougerez war al luc'hskeudenn, pe d'an nebeutañ savet-dreist he begel dezhi. Un doueez-vamm e c'hell bezañ o skeudenniñ struj an Douar a vez an dud o vevañ diouti. Ar gourejen a vefe loen azeul ar c'hounideien-se.

War an eil skeudenn e weler tud o hemolc'hiñ ur c'harveg. Hervez doare ne vefe ket ur c'harv met un demm eus Anatolia gant e gerniel roeñvet. Merzet e vez pa seller a dost ouzh al livadur. A-zivout Anatolia hag an tremen eus an neolitik d'ar c'houeorvezh e ranker evezhiañ n'eo ket an hevelep toledoù a zo bet annezet hervez an eil marevezh pe egile. Ar sevenadur kozh, hini Dispac'h an Neolitik, a oa lec'hiet e kreisteiz ar vro:



**Skeudenn 37: Tud o Hemolc'hiñ un demm<sup>260</sup>**  
(Hittite Museum p. 1. - <http://www.yenigeldi.com/HittiteMuze.pdf>).

« Pour des raisons que nous ignorons, elle [cette civilisation ancienne] sombra, sinon corps et biens, du moins dans tout ce qui avait essentiellement contribué à l'originalité de cette vieille terre méridionale de civilisation » (Bittel, 1976, p. 28).

Al lañs sevenadurel a vo kavet hiviziken muioc'h en hanternoz :

« A la fin du IV<sup>e</sup> et au début du III<sup>e</sup> millénaire av. J.-C., celle-ci [sa prééminence culturelle] se trouve donc reportée plus au Nord, dans de vastes espaces qui n'ont pas jusqu'à présent livré la moindre trace d'habitats sédentaires durables pour la période précédente. [...]. A présent, au Chalcolithique récent, on voit se fonder ici les premiers habitats, qui se perpétuent au cours des siècles du Bronze ancien anatolien » (Bittel, Ibid, p. 28).

Evit termeniñ an daou brantad disheñvel-se, e c'heller soñjal e Catal Höyük e mervent Anatolia evit a-sell ouzh ar prantad kentañ, hag e Alaca Höyük evit a

---

<sup>260</sup> 000514\_0226 Fresco showing men hunting a stag. Çatalhöyük c. 5,000 BC



sell ouzh an eil hini. Dalc'het koun e vo eus an disheñvelderioù bras a zo en Anatolia etre an Neolitik hag an amzervezhioù da heul.




An daou gemplez sevenadurel-mañ a vo studiet pelloc'h. A-gent, un nebeut evezhiadennoù goude ar pennadoù kent. Ganet eo bet sevenadur Usatovo tro kreiz hanterenn ziwezhañ an trivet milved, da lavaret eo meur a gantved goude divroadeg Repin. Doareoù beziañ Usatovo a zo diouzh re ar steppennoù ; darempredoù a zo etre Usatovo ha Maikop. Skeudenn ur c'harv a zo bet kavet war ur maen-sonn e Usatovo. Kirvi n'eus ket kalz war ar steppennoù, hag ouzhpenn an dra-se e beziou zo eo bet kavet aberzhoù ha priañ torret evel e beziou Yamnaya ha re Afanasievo. Neuze, peogwir ne oa ket eus Usatovo da vare divroadeg Repin, ez eus tu da grediñ e tenn Usatovo ivez da Afanasievo e-giz ma tenn da Yamnaya hep bezañ lod nag eus an eil pe eus egile. Kement-se evit lavarout e tlefe dont engravadurioù kirvi ha tirvi eus ar reter. Met peogwir n'eus karv ebet er steppennoù ez eus tu da grediñ eta, evel gant ar Skuthed e-pad an houarnvezh, e vo degaset al loen-se gant an dud en o spered e-ser gant o marzhoù eus Sibiria, zoken ma ranker lavarout a vouez uhel ez eus kirvi e hanternoz ar Mor Du da hemolc'hiñ. Met arabat e vefe faziañ war aozadur sosial an dud-se :

« The social organization of Usatovo has been interpreted as a male-centered military aristocracy, but it could also be read as remarkably like the tripartite social system suggested by Dumezil for the speakers of Proto-Indo-European, with priest-patrons (kurgan cemetery I), warriors (kurgan cemetery II), and ordinary producers (flat graves) » (Anthony, 2007, p. 359).

Eomp pelloc'h gant divroadeg Yamna bremañ :

« The widely separated pockets of Yamnaya settlement in the lower Danube valley and the Balkans established speakers of late Proto-Indo-European

dialects in scattered islands where, if they remained isolated from one another, they could have differentiated over centuries into various Indo-European languages » (Anthony, 2007, p. 367).

O studial emañ bremañ ganedigezh hor yezhoù Indez-Europek :

« This regional group could have spawned both pre-Italic and pre-Celtic. Bell Beaker sites of the Csepel type around Budapest, west of the Yamnaya settlement region, are dated about 2.800-2.600 BCE. They could have been a bridge between Yamnaya on their east and Austria/Southern Germany to their west, through which Yamnaya dialects spread from Hungary into Austria and Bavaria, where they later developed into Proto-Celtic. Pre-Italic could have developed among the dialects that remained in Hungary, ultimately spreading into Italy through the Urnfield and Villanovan cultures » (Ibid.).

Amañ hon eus gwelet orin pell ar yezhoù keltiek evel rannyezhoù Yamna o tremen dre Hungaria. Pa skrivomp Yamna e soñjomp diouzhtu er perzh kevreeel c'hoariet gant Afanasievo. Ma vije bet Mongoloided e-touez ar Gelted da zont n'eo ket un dra souezhus.

Ret e vo gortoz prantad ar Parkoù-Jarl evit ma tarvezo emdroadur ar rak-italek e Italek. Evel-just n'eo kement-se met ul leurennadur, diazezet koulskoude war elfennoù arkeologel tabutet diwar hir amzer gant meur a arkeologour :

« [...] Usatovo belongs to the post Bell Beaker and post Corded horizons in central Europe, and in the eastern Ukraine to the period of Timber-grave expansion in the Donets River area and north of the Sea of Azov » (Gimbutas, 1965, pp. 498-499).

Taolomp ur sell ivez war reter divroadeg Yamna en e lankad peurc'hraet:

« Between 2.700 and 2.600 BCE Corded Ware and late Yamnaya herders met each other on the upper Dniester over cups of mead or beer. This meeting was another opportunity for language shift, and it is possible that Pre-Germanic



dialects either originated here or were enriched by this additional contact » (Anthony, 2007, p. 368).

Ret e vo gortoz pell amzer evit kevout ar yezhoù Indez-Europek da vezañ komzet:

« Western Indo-European languages might well have remained confined to scattered islands across eastern and central Europe until after 2.000 BCE, as Mallory has suggested » (Anthony, 2007, p. 370).

## D. INDEZ-IRANIZ

Kent ha kenderc'hel gant hon hent douarel hag amzeroniell etrezek bed ar Gelted Kozh, evit ma vo peurleuniaet hon taolenn eus ar bed-se end-eeün, ez eus ezhomm anavezout ar pezh a c'hoarvezas gant bed da zont an Indez-Iraniz, a-hend-all ne vo ket tu da gompren poell ereoù an Indez-Europiz gant sevenadurioù ar bed reterel-se ken bras :

« To understand the origins of the Sintashta culture we have to begin far to the west. In what had been the Tripolye region between the Dniester and Dnieper rivers, the interaction between Corded Ware, Globular Amphorae, and Yamnaya populations between 2.800 and 2.600 BCE produced a complicated checkerboard of regional cultures covering the rolling hills and valleys of the forest-steppe zone. To the south, in the steppes, late Yamnaya and a few late Usatovo groups continued to erect kurgan cemeteries » (Anthony, 2007, pp. 357/377).

N'eus ket anv amañ da zanevelliñ dre ar munud emdroadurioù an tablezad sevenadurioù-se:

« The source of the Andronovo horizon can be identified in an extraordinary burst of economic, military, and ritual innovations by a single culture—the Sintashta culture. Many of its customs were retained by its eastern daughter, the Petrovka culture. The language spoken in Sintashta strongholds very likely was an older form of the language spoken by the Petrovka and Andronovo people<sup>292</sup>. Indo-Iranian and Proto-Iranian dialects probably spread with Andronovo material culture » (Anthony, 2007, p. 450).

Meur a dra a zo o vont da c'hoarvezout war-un-dro, da gentañ dont war wel sevenadur an Indez-Iraniz etre 2.100 ha 1.800 K.K. gant ar c'harr, ar binvioù brezel, al lidoù beziañ, ar metal hag all, e stepennoù an hanternoz, met ivez un

---

<sup>292</sup>Peseurt darempred gant an Indez-Europeaneg-Kent o tasparzh er mare-se en Europa ?



Figure 16.1 Cultures of the steppes and the Asian civilizations between about 2200 and 1800 BCE, with the locations of proven Bronze Age mines in the steppes and the Zeravshan valley.

**Kartenn 32 : Sevenadurioù ar stepinier (2000-1800 K.K.)**

(Anthony, 2007, p. 413)

dra hag a zo dedennus-bras evit a sell ouzh tachenn an azeulioù diwezhatoc'h pa ouzer e tassono heklev sevenadurel an dud-se war Eurazia a-bezh. Komz a ran eus teuzadur harzoù bed ar c'hoadeier :

« The northern forest frontier began to dissolve east of the Urals as it had earlier west of the Urals; metallurgy and some aspects of Sintashta settlement designs spread north into the Siberian forests. [...]. And the Ural frontier was finally broken—herding economies spread eastward across the steppes. With them went the eastern daughters of Sintashta, the offspring who would later emerge into history as the Iranian and Vedic Aryans » (Anthony, 2007, p. 411).

N'eo ket hor pal studial ar sevenadurioù-se, evelkent e kavomp kentelius diskouez amañ un tammig eus menozioù don tro-spered an dud-se diwar-benn urzh an hollved :

« Common Indo-Iranian probably was spoken during the Sintashta period, 2.100-1.800 BCE. Archaic Old Indic probably emerged as a separate tongue from archaic Iranian about 1.800-1.600 BCE (see chapter 16). The RV<sup>293</sup> and AV<sup>294</sup> agreed that the essence of their shared parental Indo-Iranian identity was linguistic and ritual, not racial. If a person sacrificed to the right gods in the right way using the correct forms of the traditional hymns and poems, that person was an Aryan. Otherwise the individual was a Dasyu, again not a racial or ethnic label but a ritual and linguistic one—a person who interrupted the cycle of giving between gods and humans, and therefore a person who threatened cosmic order, *r'ta* (RV) or *aša* (AV). Rituals performed in the right words were the core of being an Aryan » (Anthony, 2007, pp. 408-409).

---

<sup>293</sup> *Rig Veda*

<sup>294</sup> *Avesta*

## E. FINNEZ-UGRIANIZ

Evit klokaat hon tro-sell eus ar bed Indez-Europek, eo dav deomp notenniñ ivez an darempredoù stank gant komzerien ar yezhoù Finno-Ugric abaoe diskar an harzoù :

« Uralic, like Indo-European, is a broad language family; its daughter languages are spoken across the northern forests of Eurasia from the pacific shores of northeastern Siberia (Nganasan, spoken by tundra reindeer herders) to the Atlantic and Baltic coasts (Finnish, Estonian, Saami, Karelian, Vepsian, and Votina<sup>295</sup>). Most linguists divide the family at the root into two super-branches, Finno-Ugric (the western branch) and Samoyedic (the eastern), [...] » (Anthony, 2007, p. 93).

Ne c'heller ket nac'hañ un darempredoù bennak etresevadurel en amzer gozh:

« [...] : the two proto-languages shared some quite ancient common ancestor, perhaps a broadly related set of intergrading dialects spoken by hunters roaming between the Carpathians and the Urals at the end of the last Ice Age. The relationship is so remote, however, that it can barely be detected » (Anthony, 2007, p. 96).

Un ere all a zo bet, sevenadurel ar wezh-mañ pa 'z eo bet amprestet gerioù d'ar gKent-Indez-Europiz, o tont eus ar stêr Dnieper [s.o. p. 192], gant ar gKent-Ouraliz:

« These two kinds of linguistic relationship—a possible common ancestral origin and inter-language borrowings—suggest that the Proto-Indo-European homeland was situated near the homeland of Proto-Uralic, in the vicinity of the southern Ural Mountains. We also know that the speakers of Proto-Indo-European were farmers and herders whose language had disappeared by 2.500

---

<sup>295</sup> Hep ankouaat ar Magyar e Hungaria abaoe an degvet kantved G.K.

BCE. The people living east of the Urals did not adopt domesticated animals until after 2.500 BC. Proto-Indo-European must therefore have been spoken somewhere to the *south and west of the Urals*, the only region close to the Urals where farming and herding was regularly practiced before 2.500 BCE. » (ibid., pp. 96-97).

Ar resisadurioù-mañ a vo graet ganto diwezhatoc'h evit anatañ hor sav-poent, dreist-holl pa vo graet anv eus murengravadurioù Bohuslän. Met diouzhtu e c'heller ober ganto ivez evit anatañ n'eus bet darempred ebet etre an Indez-Europiz hag ar Finno-Ougriz. N'eus ket tu enta lakaat karv Maikop o tont eus bed an dud-se, kalz tostoc'h evel-just eget hini Menez Altai Afanasievo. Koulskoude, evit a sell an Indez-Iraniz ne c'heller ket lavarout kement-all rak darempredoù a zo bet etrezo hag ar gKent-Ouraliz, met an darempredoù-se zo c'hoarvezet goude 2.000 KK. Diouer a rafe deomp ali Mallory ma ne vije ket meneget ganeomp :

« Consensus, therefore, situates the earliest Finno-Ugrians in the forest zone of Eastern Europe-western Siberia among a variety of hunting-gathering-fishing cultures, many of whom may be embraced archaeologically under the Comb and Pit-marked Pottery tradition. It is now for us to see if it is possible to relate the Indo-Europeans to this region.

The substantial number of loan words of clear Indo-European origin that are found across the Finno-Ugric languages suggest that they were borrowed when the latter was still a proto-language. The precise time at which these loans occurred is a delicate problem. It is generally acknowledged that many of the words were borrowed from the Indo-Iranian languages and not Proto-Indo-European; since the borrowed words have already undergone the characteristic changes expected of the Indo-Iranian languages. For example, we find that Finnish *porsas* and Votyak *pars* 'pig' are clearly derived from an Indo-Iranian *\*parsa* — and not the Proto-Indo-Iranian *\*porkos* (cf. Latin *porcus*). This, and other examples such as Finnish *sata* 'hundred' which is comparable to Indic *satam* and Avestan *satəm* (and not Proto-Indo European *\*kmtom*, cf. Latin *centum*) all suggest that these loans were made sometime during the third or second millennia BC. [...]. Consequently, we have reasonably solid evidence

to maintain that about 2.000 BC Indo-Iranians were providing a series of lexical items, pertaining particularly to agriculture (such as pig, goat, grain, grass) and technology (hammer, awl, gold), to Finno-Ugric peoples situated roughly between the middle Volga and the Ob. This would place the Indo-Iranians to their immediate south (lower Volga-Ural) [...] » (Mallory, 1991, p. 149).

## KLOZADUR

An eil rann a oa hini ar c'hevren etre daou ved, hini Azia an Hanternoz a oa bet pleustret diagent e-doug ar rann gentañ, hag hini Europa a vo studiet a-c'houdevezh e-doug an trede hini.

Un darn eus ar rann gentañ a oa dianav d'an dud dre vras nemet ar pezh a denn d'an Den, met an eil rann adalek Afanasievo hag ar Stepinier betek ar Finnez-Ougriz hag Usatovo ne vez ket komzet anezhañ alies kennebeut er studioù keltiek ha koulskoude, unan eus harzoù al labour-mañ eo, eo bet diskouezet talvoud ar bed diseurt hag ec'hon-mañ evit hor sevenadur keltiek, met zoken ha da gentañ marteze evit bed an Indez-Europiz a roio genel d'ar gKelted. Gwir eo ne bleustromp met un tu eus an danvez, hini azeul ar c'harv. Setu ma vez pouezet kalz war Afanasievo ha nebeutoc'h war ar gKourganiz, maeserien anezho ha neuze troet kentoc'h ouzh azeul an tarv. Anavezout a reomp amañ div vammenn d'an azeulioù keltiek, gant kelc'h Finn da skouer hag ivez Tain Bó Cuailnge.

Evit kompren istor emdroadur an Indez-Europiz eo ret mat lakaat er goulou an darvoud a gevreas an daou ved, mennout a ran divroadeg Repin a zispleg penaos ez eus bet tu d'ur yezh e *centum* bezañ aet ken pell hag harzoù China kent hon amzer. Erziwezh ez eus tu da lavarout bremañ e voe sevenadur Afanasievo hag hini Yamna div vammenn all a roio e stumm arnevez d'ar strolladoù tud diwezhatoc'h : Mongoloided hag Europoided ouzhpenn Kourganiz mesk-ha-mesk, en o ergerzh eus ar bed European kozh a deuio adalek Unetice da vezañ Europa an aremvezh. Ouzhpenn an tarv, ar marc'h eo loen all ar vaeserien, ne c'hellont ket heptañ mont war gantre gant o chatal. Ul loen treizhour-eneoù eo evel ar c'harv hag ar c'hi evit an hemolc'herien.

Daou vaen-bonn a sav anat d'ar spered pa daoler ur sell dre vras war ar prantad amzer-se. Hini Maikop da gentañ, heuliet gant sevenadur an Hittited a zo anavezet mat gant ar studioù keltiek met imbourc'het nemeur, deomp da c'houzout avat. Evit sevenadur Maikop alato ne oa ket tu betek-hen da empentiñ hevelep degouezh ma vije hennezh ereet mui pe vui zoken gant an Hittited pe nebeutoc'h c'hoazh gant ar gKelted, a bell koulskoude. An darn-se eus mont en-dro an Indez-Europiz a zo da vezañ lakaet e-barzh ar c'hoari e-



kichen ur skourr all kenderv deomp, mennout a ran an Indez-Iraniz. Ar c’houlzad-amzer etre Yamna (-3.000) ha disrann ar gKent-Indez-Europiz (-2.000) a zo unan birvidik kenañ da geñver ar gouennoù-tud emleget, ur gwir “podad-teuz” a vije tu da lavarout.

Kent ha tremen da lodenn ziwezhañ hon enklask ez eus ezhomm koulskoude teurel ur c’hilsell war disorc’hoù hor c’havadennoù rak puilh eo an arguzennoù. Komprenet eo bet hor martezeadenn diazezet dreist-holl war studiadenn E. Jacobson eus andon karv ar Skuthed a vefe boutin gant hini an Indez-Europiz. Setu ar pezh a skriv : loen mamm an neolitik eo an eln, heuliet gant ar c’harv-erc’h hag ar c’harv da vare an tremen d’ar c’houeorvezh ha d’an aremvezh. Prantadoù arkeologel Sibiria ar c’hreisteiz o klotañ gant emdroadur-mañ al loen-mamm a ya eus Afanasievo da Okunev, ha neuze Andronovo ha Karasouk. Goude e teu amzer ar Skuthez-Sibirianiz gant karv ar Skuthed adalek 800 K.K. Met ne gaver da vat kirvi engravet nemet adalek derou an aremvezh, ha dreist-holl diwezhatoc’h.

Dav anavezout e ra an oberourez gant prantadoù arkeologel Okladnikov ma krog oadvezh ar metal gant prantad Glazkovo (1.700-1.300) (Taolenn 1) a zeu da heul prantad Kitoi an neolitik diwezhañ (3.000-1.800)<sup>296</sup>. Pa seller bremañ ouzh taolenn nevez prantadoù ar Baikal gant skol-veur Alberta, e krog Glazkovo pe oadvezh ar metal adalek 3.400/3.000 betek 1.000 K.B. (Taolenn 2), hag hini Kitoi diwezhañ pe Neolitik kentañ, kerkent ha 5.800-4.900 K.B.<sup>297</sup> N’eus ket anv ganeomp amañ c’hoari gant ar gerioù pe ar sifroù, koulskoude da vare Glazkovo (1.700-1.300 K.K.) eo e c’hoarvezfe ar c’hemm eln—karv-erc’h—karv, da heul E. Jacobson. Skeudennaouet e vo ar c’harv da vat pa vo mesket gant ar bioù, da lavaret eo adalek ar mare ma kej sevenadur hemolc’herien Okunev gant hini mesaerien Afanasievo, tro 2.000 K.K. da lavaret eo un tammig a-gent Glazkovo Okladnikov<sup>298</sup>. Evit a sell ouzh amzeriad Nekhaev eus siell maen Maikop, 3.000 K.K. zo un tammig re abred e

---

<sup>296</sup> « Okladnikov has divided the Baykal Neolithic into a number of stages : the Isakovo stage (fourth millenium) ; the Serovo stage (fourth-third millenium) ; Kitoi stage (third-early second millenium B.C.). The geat petroglyphic representations of elk and in particular of female elk are dated to the Serovo stage; during the Kitoi, that image lost its impressive monumentality » (Jacobson, 1993, p. 91)

<sup>297</sup> Daoust ma oa anavezet ar metal gant tud sevenadur Afanasievo: « The Afanasevo culture has been most clearly identified with the regions of present-day Gorno-Altayskaya A.O. and the Minusinsk Basin. As an Aeneolithic culture it formed a transition between the Neolithic and Bronze Ages of that region » (Ibid., p. 113).

<sup>298</sup> Kerkent ha Kitoi e gwir. S.o. Soutenance

skoaz da hini murengravadurioù kreisteiz Sibiria, daoust ma n'eo ket dibosubl en teorikel pa vez sellet rik ouzh sifroù ar prantadoù arkeologel. Arabat e vefe ivez tevel war hemolc'herien ar Baikal e-pad an neolitik a veze evit pourchas krec'hin d'o amezeien en eskemm gant maen-jad (lounezell)<sup>299</sup>, da lavaret eo memes danvez hag hini siell Maikop. En hevelep danvez maen-jad e veze fardet ivez bouc'hilli e-pad prantad Glazkovo ar Baikal (2.000 K.K.). Skrivañ a ra oberourien ar pennad diwar-benn ar murengravadurioù : « There are wonderful rock-drawings of the Early Bronze Age here<sup>300</sup> » hep mui ken. Pelloc'h e c'heller lenn eus klogeoù pe pili e bezioù Kap Burkhan eus prantad Glazkovo graet gant plenk-skoaz kirvi. N'eo ket tre kreisteiz Sibiria daoust ma n'emañ ket gwall bell, hag en tu all da se arabat disoñjal ne ouzer ket re vat a belec'h e oa deuet mongoloidi sevenadur Okunev<sup>301</sup>. Ar binvioù lavaret a veze graet gwezh all gant eln :

« It is quite probable, that the beginning of worship of the cape recedes into the old times of the Stone and Bronze Ages and that it is connected in some way with presence of such striking ancient burials in their richness and ritual which were held in remembrance by generations » (Okladnikov, Konopatsiy, 1959, p. 304).

Diaes eo lakaat un termen resis en tremen eus an eln d'ar c'harv, koulskoude, etre -3.000 ha -2.000 ne vije ket re fall evidomp. Met ret eo resisaat ez eus kirvi-erc'h e-pad an neolitik a-gevret gant elned, hag ar re-se o dije gallet mouchañ deomp ar c'harv, dreist-holl peogwir emaomp o paouez lenn en doa an eln kollet eus e veurdez e-pad ar prantad-se. Daoust ha prantad ar c'hemm e vefe ?

Met n'eo ket echu rak reiñ a ra Nekhaev deomp lec'h orin skeudenn siell vaen jad Maikop da lavaret eo “Tepe Gawra<sup>302</sup> gwiskad Ubeid” da varn diouzh

---

<sup>299</sup> Okladnikov ; Konopatskiy (1974, p. 300).

<sup>300</sup> Ouf Sagan-Zaba (Ibid., pp. 300-301).

<sup>301</sup> « The Okunev culture made a sudden appearance in the Minusinsk basin, in all probability coming from somewhere in the forest zone of Siberia » (Gryaznov, 1996, p. 51).

<sup>302</sup> Nekhaev, 1968, p. 33

doare an tres<sup>303</sup>. Ma sellomp ouzh taolenn Rothman pe hini B. Lyonnet, [Taolenn 5] emañ amzeroniet ar c'houlz-se tro ar bloavezhioù 4.200 K.K. D'eus an tu all e c'heller lenn ivez a-berzh Nekhaev :

« [...] cylindrical seals appear in Mesopotamia in the late fourth millenium B.C. The most likely date for [cylindrical seal] grave 4 is evidently the beginning of the third millenium B.C. » (Nekhaev, 1968, p. 33).

Ma sellomp ouzh an hevelep taolenn [Taolenn 5] : e kreiz sevenadur Novosvobodnaya emaomp d'ar mare-se. Ret eo lavarout e oa bet amzeroniet re izel sevenadur Maikop gant arkeologourien Rusia evel ma tispieg deomp Bertille Lyonnet :

« Depuis longtemps nos collègues russes, ses principaux fouilleurs, ont montré qu'elle [la culture de Maikop] était liée aux cultures du Proche-Orient (Obeid ou Amuq F) sans toutefois la dater avant le début du IIIe millénaire » (Lyonnet, 2007, p. 133).

Daoust hag ezhomm zo resisaat ez eus etre -4.200 ha -3.000 un dra bennak evel daouzek kantved<sup>304</sup>.

Troomp bremañ war-du ur rummad arguzennoù all. N. L. Tchlenova a fell dezhi e vije orin ar skeudennoù kirvi da vezañ kavet er reter nesañ. Reiñ a ra skouer ar c'harv e bavioù aspleget skeudennaouet war gurun impalaerez "Choub-Ad eus Sumer<sup>305</sup>" (Plankenn 7). Pelloc'h e arguz en ur zisplegañ emañ lod kirvi Sumer a-gevret gant bourc'hed ha tirvi eus ur c'henaoadur ez eo ar wezenn-vuhez e kreiz anezhañ, hag a bersonela dreistoni an doueez-vamm :

---

<sup>303</sup> « Stylistically, the closest parallels to the images on the seal from the Maikop grave are found in the glyptics of the Ubeid strata of Tepe-Gawra » (Nekhaev, 1991, p. 33)

<sup>304</sup> Da lavaret eo ur c'houlzad kevatal d'an hini a vo etre le Strasbourg ha feur-emglev Lisbonne, war-bouez nebeut.

<sup>305</sup> « Les cerfs y sont représentés avec d'autres animaux — des taureaux, des boucs, dans la même pose, et ne se distinguent en rien de ces animaux » (Tchlenova, 1963, p. 63).

« Ils sont seulement les compagnons de cette déesse, animaux qui lui sont consacrés, et ils le restèrent longtemps dans le Proche et Central Orient » (Chlenova, 1963, p. 64).

Kement-se n'eo ket ur vreutadenn a-enep da azeul karv an Hittited. Er c'hontrol e lenner e Mezopotamia n'eus azeul karv ebet, met loened zo gouestlet d'an doueez-vamm (Ninhursag?). Gwir eo n'emaomp ket o klask gouzout hag-eñ ez eus skeudenoù kirvi e Mezopotamia pe get. Bez ez eus e gwir, met ne vez ket skeudennaouet kirvi hepken met loened, kirvi en o zouesk, an holl loened-se o vezañ keneiled an doueez. Netra da ober hervezomp gant karv siell bez Maikop e-tal ur wezenn.

Bremañ, kaer a zo sellout ouzh gwezennoù-sakr pe -luc'h Mezopotamia n'eus hini ebet anezho a vije heñvel en he stumm ouzh hini Maikop, amzeriadet gwir eo er memes koulz hag hini ar c'hirvi war gurun impalaerez<sup>306</sup> Choub-Ad, d.l.e. tro 3.000 K.K. Met edo “impalaeriezh” Choub-Ad lec'hiet e kreisteiz Mezopotamia pa ziskouez siell Maikop darempredoù gant hanternoz Mezopotamia nemetken e-keñver teknik avat. Ret eo lavarout e kav da Nekhaev eo bet enporzhiet ar gavadenn emichañs<sup>307</sup>, hep lavarout eus pelec'h, marteze eus Tepe-Gawra.

Ma n'eus netra heñvel e bed ar Skuthed ouzh ur c'harv gant ur wezenn-vuhez n'eo ket evit hor souezhiñ. Diskouez a ra an dra-mañ ne zeu ket karv ar Skuthed eus ar Reter Nesañ, zoken ma c'heller kavout di tresoù kirvi, gwez, ouzhpenn loened all war ar sielloù adalek prantad ar remziad kentañ (tro 3.000 – 2.340 K.K.). Nekhaev e-unan en deus diskouezet an holl sielloù a gaver engravet warno hervezañ an div arouez empleget tro an hevelep mare. N'eus nemet hini Tepe gawra na vije ket re bell diouzh hini Maikop hervezomp.

Met, en tu-hont da se ha daoust d'an elfennoù treset bezañ heñvel, n'eo ket an hevelep doare da sellout ouzh ar bed :

---

<sup>306</sup> Chlenova a ra “impalaerez” eus Chub-Ad. An oberourien all a ra “rouanez” anezhi.

<sup>307</sup> « Probable imported origin of the find » (Nekhaev, 1991, p. 33).

« But in Mesopotamia ‘mountain’ was a religious concept of many-sided significance. It stood for the whole earth, and within it, therefore, were concentrated the mysterious powers of life which bring forth vegetation in spring and autumn, and carry water to dry riverbeds. The rains, too, come from the mountains, and the Great Mother, source of all life, is named Ninhursag, Lady of the Mountain » (Frankfort, 1969, p. 6).

« Ninhursag (fourth millenium B.C.) was the first to establish the eight plants in the paradise of the gods » (Jacobson, 1993, p. 218).

Gwelet e vez anat hiviziken ar pezh a zle Artemiz da Ninhursag. Kavout a reer er reter nesañ arouezioù hon eus studiet endeo e Sibiria evel karv, gwez, menez, struzh :

« A deer moves cautiously between trees; a ewe suckles its lamb. Such subjects — a stag, a tree, a mountain, and a plant in plate 76A (Plankenn 8) — sometimes form the continuous frieze so dear to the designers of the Early Dynastic Period. [...].

But it is possible that we misinterpret the combination of stag and mountain if we see in it a mere nature scene. The fact that vegetation is caused to sprout from the mountain-side recalls the relief of plate 72, and we may well have here an allusion to the earth as the depository of the divine vitality which pervades nature; the seal would then be a rendering of a theme which was at least 2,000 years old (Plate 8A) » (Frankfort, 1969, p. 72).

« The sacredness of trees and plants or rather the belief that divinity was manifest in the vegetable kingdom, was, as we have seen, one of the oldest tenets of Mesopotamian religion » (Ibid., p. 68).

Daoust hag-eñ n’eus ket tu da skrivañ, goude bezañ lennet displegadurioù Frankfort ha Jacobson, e vije Ninhursag erziwezh kenitervez yaouank da *Bugady Enintyn* er familh *Homo sapiens* ? An tremen eus ar paleolitik d’an neolitik, da lavaret eo eus an hemolc’hiñ/pesketañ d’ar gounid douar, zo

c'hoarvezet abred er Reter Nesañ. Ha ma ne gomzer ket eus gounid douar agent sevenadur Afanasievo e Sibiria ar c'hreisteiz, an temz-amzer an hini eo a zo penn abeg da se. Evit krennañ, daoust ma vez kavet kirvi ha gwez er reter nesañ koulz hag e Sibiria, arouez ar skeudennoù a zo disheñvel bras eus an eil sevenadur d'egile. Evit hen splannañ e roomp da lenn ar pennad-mañ a ya a-du penn da benn gant hor savboent :

« The prevalence of the stag at Alaja Hüyük is also revealing. It rarely counted as a sacred animal in the near east, but it did receive worship both from the dwellers on the Eurasian steppes and from the Hittites who differed in this respect from their neighbours. There is, then, some probability that the people buried at Alaja Hüyük entered Cappadocia from the Russian or Central Asian steppes; and that some similarity existed, perhaps due to continuity, between their beliefs and those of the Hittites » (Frankfort, 1969, p. 116).

Evit distreiñ da vMaikop, rak diaes eo komz eus Alaja Hüyük hep tevel war vMaikop, e anavez an oberour levezon Mesopotamia war lestr Maikop meneget uheloc'h, met displegañ a ra ivez kement-mañ :

« The baldachin over the chieftain's body probably consisted of cloth on which were stitched figures of bulls and lions cut from gold-foil. Its four supports passed through the bodies of bulls cast in solid gold or silver (Plankenn 8). They are smaller than the figures from Alaja Hüyük and their modelling is superior. But they show the same heaviness in form (which is never found in the Mesopotamian animals cast in metal, for instance, on rein-rings (Plankenn 9); and they possess the same odd elongation of the muzzle which we observed in plate 123D (Plankenn 4). Moreover there are other similarities between the two sites. At Alaja Hüyük, too, the bodies were placed in a timbered funerary chamber; they were in some cases covered with red ochre, a custom found throughout south Russia and notably at Maikop » (Ibid.).

Anavezout a reomp amañ ar boaz ledet e-touez ar sevenadurioù hemolc'hiñ. Padal, goude bezañ lavaret kement-mañ e kavomp diaes lenn a-berzh ur glaskerez arroutet evelti diwar-benn siell Maikop en he fennad “La culture de

Maikop, la Transcaucasie, l'Anatolie orientale et le Proche-Orient : relations et chronologie," ar gerioù skort-mañ :

« Un unique sceau-cylindre en pierre, représentant un cervidé, a été découvert dans une tombe sous kourgane à Krasnogvardeskoe, non loin de Svobodnoe, associé à des pots de type 7 et 8. Les comparaisons données ci-dessus portent sur la forme et non le motif, qui lui est bien connu au cours du Chalcolithique » (Lyonnet, 23007, p. 144).

Ne ouzomp ket perak he deus an oberourez disoñjet bezañ gwelet ur wezenn war ar siell met eus an tu all, hounnezh a ro un diskoulm deomp marteze. E lec'h all en he fennad e tave da Rassamakin a-zivout priaj kordet :

« Néanmoins, on remarquera aussi que le décor cordé est une caractéristique des céramiques des steppes contemporaines » (Ibid., p. 140).

Sede bremañ ar pezh a zispleg deomp Rassamakin er pennad daveet dezhañ gant Lyonnet : d'an eneolitik eo pe koueorvez (ur prantad tremeniat etre an neolitik hag an aremvezh: 3.500/3.400 BC- c. 3.000/2.900 (?) BC), e c'hoarvezo un divroadeg :

« The final stage of this period is characterized by two waves of migration, which properly speaking conclude the development of the Eneolithic » (Rassamakin, in Levine, 1999, p. 123).

«The migrational wave that left Zhivotilovo-Volchanskoe-type burials in the steppe also linked up the forest-steppe Bug, Dnestr, and Prut regions with the Lower Don region, and, possibly with the North Caucasus, where the late stage of the Maikop culture (the Novosvobodnaya sites) continued » (Ibid.).

O paouez omp gwelout uheloc'h eo bet deiziataet siell Maikop gant Nekhaev adalek 3.000 K.K., prantad Novosvobodnaya an hini eo, ket hini Maikop ken daoust ma'z eo tostik-tost an eil prantad ouzh egile. Kavout a ra deomp en diwezh bezañ dastumet un toullad mat a anadennoù a laka ar ventell da

bouezañ war du un orin eus sevenadur Maikop da vezañ klasket diouzh tu ar stepinier. Met n'eo ket echu :

« In the final analysis, it is possible that the Kasperovkao migration facilitated the formation of those characteristics of the Late Maikop sites that define the Novosvobodnaya group. » (Ibid., p. 125).




Figure 3.2a. The Kvitjana and Dereivka cultures in relation to other sites: 1) Molyukhov Bugor (settlement); 2) Dereivka (settlement); 3) Aleksandriya (settlement); 4) Minevsky Yar (settlement); 5) Khutor Repin (settlement);

Al luskoù divroañ-se a zo da vezañ staget ouzh sevenadur Repin :

« The second migration, at the very end of the Eneolithic, is connected with the spread of the Repin culture (in its second phase) from the Middle Don. Sinyuk defined three main directions: north, to the Upper Don; southwest, into the Dniepr region; and south, to the Lower Don and the Lower Volga » (Ibid.).



Dibenn an eneolitik, da lavaret eo 3.000/2.900 K.K., dres koulzad hor siell. O paouez omp diskouez e tere dik koulzad Siell Maikop<sup>308</sup> gant ul luskad pobloù o tivroañ eus sevenadur Repin davet an Don uhel, da lavaret eo an hevelep kemplez sevenadurel en doa kaset tud adalek 3.700 K.K. betek su Sibiria ma voe savet sevenadur Afanasievo ha skoulmet darempredoù gantañ a-hed ar c'hantvedoù.

Evit klozañ gant hon arguzerezh eo dav deomp ouzhpennañ un evezhiadenn tennet eus tezenn an oberourez-mañ:

« The deer, gazelle or ibex under the Tree of Life, or eating from it, occurs in a great many variations, not last on the cylinder seals. But we are not able to arrive at a more precise notion of the significance of the motif by way of Near Eastern archaeology » (Mirjam Gelfer-Jørgensen, 1986, p. 124).

Bremañ, goude bezañ aet donoc'h e studi an arguzerezh stag ouzh siell Maikop ha sevenadur Repin e chellimp adkregiñ gant tud Yamnaya da welout pelec'h int degouezhet. Dilezet eo bet divroaderion Yamnaya e Hungaria. Gouzout a reomp ez eus en o zouez ar re a raio genel d'ar yezhoù Italek, Keltiek hag ivez, muioc'h ouzh ar biz, Germanek.

Eomp neuze da adkavout ar rak-kelted aet da Aostria ha Bavaria o tont eus Hungaria, e lec'h ma vefent manet e-pad pell.

---

<sup>308</sup> Marteze e vefe reizhoc'h bremañ komz eus siell Krasnogvardeisk eus sevenadur diwezhañ Maikop-Novosvobodnaya

## L'ESPRIT-MÈRE DANS BUILE SUIBHNE : romance en moyen irlandais du XIIe siècle

---

Cette étude se propose de montrer la parenté de *Fer benn* dans “Buile Suibhne”, avec le culte du cerf d’origine sibérienne décrit par A.F. Anisimov dans son article de 1963 “Cosmological concepts”. Cette parenté suppose une diffusion de Sibérie en Irlande par l’intermédiaire de la branche Indo-Européenne après sa séparation de la branche Indo-Iranienne à partir de -2.000, laquelle marque le fin de l’unité des proto-Indo-Européens. L’origine de ce culte pourrait bien se trouver dans la culture d’Afanasiovo d’essence proto-Indo-Européenne provoquée par la migration de Repin sur le Don à partir de -3.700, qui mettra en contact permanent l’est et l’ouest pendant des siècles. Le sceau cylindrique en jade de Maikop qui ne peut être antérieur au troisième millénaire av. n. è. d’après Nekhaev, représentant un cerf avec un arbre, pourrait être un précieux témoin précurseur du culte totémique des ancêtres chez les anciens Hittites sous forme de cerf. Nous suivons les traces de cet animal mère d’Usatovo jusqu’en Scandinavie puis du Val Camonica jusqu’en Ibérie en passant par la Gaule, avant de s’embarquer pour l’Écosse vers -1.000 d’où il passera en Irlande. Ce sont probablement des anciens *fili* devenus moines qui pour des raisons que l’on peut imaginer sauvegarderont une partie de notre patrimoine pré-chrétien, sous prétexte de christianisation.

---

**Mots-clés :** Mongoloïdes – Toungouzes – Cerf – Chamanisme – Indo-Européens – Repin – Afanasievo – Scythes -- Celtes – Calédonie – Cruthin – Fer benn – Ui Néill -- Colum Cille – Magh Rath – Église celtique -- Rome

---

## THE SPIRIT-MOTHER IN BUILE SUIBHNE : romance in middle-Irish of the XIIth century

---

This study aims at showing the relationship between *Fer benn* in “Buile Suibhne” with the ancient deer cult of Siberia as described by A.F. Anisimov in his 1963 paper “Cosmological concepts”. This relationship involves a spread of this cult from Siberia to Ireland through the Indo-European branch after its separation from the Indo-Iranian one about 2.000 B.C., which means the end of the proto-Indo-European former unity. This origin could well be the Afanasievo culture, a proto-Indo-European one due to the Repin migration starting on the river Don from -3.700 onwards, which will provide a permanent relationship between east and west for hundreds of years. The Maikop cylindrical seal in jade-stone (nephrite) which cannot be older than the third millenium B.C. according to Nekhaev, figuring a stag in front of a tree, could be a precious testimony and a harbinger of the totemic cult of ancestors among the ancient Hittites in the shape of a deer. We’ll follow the trail of the animal mother from Usatovo till Scandinavia, and from the Val Camonica till Iberia and Gaul before sailing to Caledonia around 1.000 B.C. and Ireland afterwards. It should be the former *fili* now turned into monks who for reasons we can imagine will save a part of our pre-christian patrimony undergoing christianisation.

---

**Key-words :** Mongoloids – Tungus – Deer – Shamanism – Indo-Europeans – Repin – Afanasievo -- Scythes – Kelts – Caledonia – Cruthin – Fer benn – Ui Néill – Colum Cille – Magh Rath – Celtic Church – Rome



**THESE / UNIVERSITÉ RENNES 2**

*sous le sceau de l'Université européenne de Bretagne*

pour obtenir le titre de  
**DOCTEUR DE L'UNIVERSITÉ de RENNES 2**

*Mention : Celtique*

**Ecole doctorale Arts, Lettres, Langues**

présentée par

**Gilles BOUCHERIT**

Préparée à l'Unité Mixte de recherche  
n°3205 CRBC Rennes

Centre de Recherche Bretonne et  
Celtique

L'esprit-mère dans  
*Buile Suibhne* :  
romance en moyen-  
irlandais, du XIIe  
siècle

**Thèse soutenue le 18-12-2009**  
devant le jury composé de :

**Pierre-Yves LAMBERT**  
Directeur de recherche, EPHE, Paris

**Hervé LE BIHAN**  
Professeur, Rennes 2

**Claude STERCKX**  
Professeur, Université Libre, Bruxelles

**Francis FAVEREAU**  
Directeur de thèse, Professeur, Rennes 2

**SOUS LE SCEAU DE L'UNIVERSITÉ EUROPÉENNE DE BRETAGNE**

UNIVERSITÉ RENNES 2

École doctorale – Arts, Lettres, Langues

CRBC Rennes

**L'ESPRIT-MÈRE DANS *BUILE SUIBHNE* :  
romance en moyen-irlandais, du XIIe siècle.**

Thèse de Doctorat

Celtique

Volume 2

Présentée par : Gilles BOUCHERIT

Directeur de thèse : Francis FAVEREAU, Professeur, Rennes2

Soutenue le 18 décembre 2009

Jury :

Monsieur Pierre-Yves LAMBERT, Directeur de recherche, Paris (rapporteur)

Monsieur Hervé Le BIHAN, Professeur, Rennes 2 (rapporteur)

Monsieur Claude STERCKX, Professeur, Bruxelles (rapporteur)

## TEIRVET RANN:

### EUROPA

#### 3.1 - SKANDINAVIA

##### A. MURENGRAVADURIOU

Ul lec'h all ma vo kavet kirvi, goude Usatovo, eo murengravadurioù Skandinavia. Setu an doare, hervez ar pezh a zo o paouez bezañ gwelet ganeomp.

« During the first part of the second millenium B.C. the Comb- and Pit-marked pottery culture of hunter-fishers dominated the area except for areas where the southern food-producers, the Corded or Battle-axe people, settled, as in the east Baltic era and southwestern Finland » (Gimbutas, 1965, p. 648).

Da lavaret eo tud ar Priaj Kribet ha Poull, da lavaret eo Chaseourien d'eus un tu, ha Kordenned pe tud ar Bouc'hal Emgann d'eus an tu all, elese Mesaerien. Met piv eo tud ar Priaj Kordennet ?

« The Corded Ware horizon spread across most of northern Europe, from Ukraine to Belgium, after 3.000 BCE, with the initial rapid spread happening mainly between 2.900 and 2.700 BCE » (Anthony, 2007 p. 367).

Menegomp e-touez re all un nebeut tresoù sevenadurel anavezet evel lid obidoù gant bezioù hiniennel, hag ivez lidoù evañ diwar tasoù ha gobedoù kinklet gant enlouc'hadurioù kerdin :

« The material culture of the Corded Ware horizon was mostly native to northern Europe, but the underlying behaviours were very similar to those of the Yamnaya horizon—the broad adoption of a herding economy based on

mobility (using ox-drawn wagons and horses), and a corresponding rise in the ritual prestige and value of livestock » (ibid., pp. 367-368).

Er penn kentañ ez eus tu da lavarout berr-ha-berr en em gav ar Priaj Kordennet hanter-hent etre ar sevenadur kent hini Indez-Europek an Trichterbecker (TRB) hag Usatovo-Tripolje :

« The economy and political structure of the Corded Ware horizon certainly was influenced by what had emerged earlier in the steppes, and, as I just argued, some Corded Ware groups in south-eastern Poland might have evolved from Indo-European-speaking late TRB societies through connections with Usatovo and late Tripolye. The Corded Ware horizon established the material foundation for the evolution of most of the Bronze Age cultures of the northern European plain, so most discussion of Germanic, Baltic, or Slavic origins look back to the Corded Ware horizon » (Anthony, 2007, pp. 367-368).


Hag e-keñver yezh hon eus meneget uheloc'h kejadennoù tud ar Priaj Kordennet gant reteriz divroadeg Yamna en-dro da banneoù bier diwar gobedoù hag a c'hoarias ur perzh bras e difluk ar yezhoù germanek. Met a-raok kenderc'hel da studial ar Priaj Kordennet pe Bouc'hal Emgann greomp ur paouez kentoc'h war an Añforennoù Boul a oa aze war gompezenn hanternoz Europa, kent ar re gKordennet. Klaskomp gouzout muioc'h diwar-benn an dud-se :

« At the close of the 4<sup>th</sup> millennium BC, the Globular Amphora culture of the north European plain [etre Danmark ha Lithuania] epitomized a male-dominated society. Its later development was the Corded Pottery-Battle-Axe culture, considered to be an Indo-European culture » (Gimbutas, 1997, p. 234).

En ur zegouezhout e vo kavet gant an Añforennoù Boul tud all en em gave aze araozo :

« Before its occupation by the Globular Amphora peoples, this area was occupied by the Funnel-necked Beaker (Trichterbecher or TRB) group,

affiliated with the western European Neolithic, and by the Baalberge-Salzmunde group in Germany and Bohemia, which, as we have seen, probably represents a culture of a kurganized Lengyel population, kurganized in the wake of the First Wave » (Ibid.).



### **Kartenn 33 : TRB hag Añforenoù Boul**

Mallory, 1991, p. 250

Kement-se evit lavarout e vefe neuze tud an Añforenoù boull eus an eil gwagenn hervez Gimbutas, hag evit mont betek penn hor poell, tud ar Priaj Kordennet eus an trede hini.

An Añforenoù Boul a oa anezho mesaerien war hanter gantre a bleustre ar gounid-douar ouzhpenn o ekonomiezh ma veze ar chatal a-bouezh bras evito. Sevel a raent loened-doñv hag hemolc'hiñ loened gouez<sup>309</sup>.

« The social, economic, and religious way of life of the GlobularAmphora people cannot be derived from that of the TRB » (Gimbutas, 1997, p. 254).

O lavarout an dra-mañ e laka splann an arkeologourez e tever sevenadur an Añforenoù Boul diouzh hini Kourganiz ar stepenoù, o deus trevadennet al lec'hioù-se hag an dud edo o vevañ enno :

<sup>309</sup> Gimbutas, 1991, p. 383

« We must bear in mind that the fundamental social, religious, and economic components of the Globular Amphora culture link it to the North Pontic area » (Gimbutas, 1991, p. 384)

Stag eo sevenadur tud an Añforennoù Boul ivez ouzh hini sevenadur Maikop e Kaokaz an Hanternoz:

« There is similarity between the burial rites of the Globular Amphora people and those of the Kurgans of the Maikop culture in the North Pontic region » (Ibid., p. 381).

Munudoù talvoudus a vez roet deomp c'hoazh gant M. Gimbutas diwar-benn ereoù etre an Añforennoù Boul hag Usatovo. Da lavaret eo en ur ger, darempredoù a oa etre an Añforennoù Boul ha Kaokaz an Hanternoz koulz ha gant stepennoù ha sevenadur Ponteg an Hanternoz :

« The finds from Mikhailovka I show close affinities to those from Crimea and north Caucasian stone cists as well as to the Usatovo kurgans around Odessa » (Ibid., p. 369).

« Rock engravings from Kamennaya Mogila at Melitopol, north of the Sea of Azov, depict human and horse silhouettes and yoked oxen pulling a cart. Large-horned oxen pulling a plow appear also on the wall of a cist grave at Züschen, central Germany, and on the rocks at Valcamonica, northern Italy. These engravings provide graphic evidence that plow agriculture was practised and that yoked oxen were used to pull both cart and plow » (Ibid., p. 369).

Koulskoude, er bezioù e veze kavet aberzhoù tud ha loened. Ur c'harv da skouer zo bet kavet en ur bez e Pikutkowo e Polonia<sup>310</sup>.

Diwezhatoc'h e vo gwelet doug ar gKourganiz evit ar goularz a-liv gant an heol. Met diouzhtu, e verzomp e vo kavet ar skeudennoù-se ivez war speurennoù reier Skandinavia. Zoken ma n'eo ket lavaret splann, ez eus tu enta

---

<sup>310</sup>Gimbutas, 1991, p. 369.



da geñveriañ murengravadurioù ar Val Kamonica gant re Skandinavia evit a sell ouzh tresadennoù ejened sterniet ouzh ur c'harr, met ouzhpenn an dra-se, e vo tu ivez diwezhatoc'h da geñveriañ an div rannvro evit a sell ouzh karveded treset. A-zivout an tem-se, menegomp pennad-mañ M. Gimbutas, rak darempredoù a zo bet kavet etre an Añforennoù Boul ha tud sevenadur Maikop :

« There is similarity between the burial rites of the Globular Amphora people and those of the Kurgans of the Maikop culture in the North Pontic region. Both used mortuary houses built of stone slabs and practiced the ritual burial of horses, cattle, and dogs, as well as human sacrifice in connection with funeral rites honoring high-ranking males » (Gimbutas, 1991, p. 381).

N'eo ket meneget ar c'harv e-touez al loened aberzhet, met o paouez omp gwelout ez eus bet meneget unan e Polonia. Gwir hon eus enta da gavout e c'helle an Añforennoù Boul anavezout azeul-karv Maikop, peogwir e veze ganto memes doareoù beziañ hag an dud-se.

Dedennus ivez gouzout e oa pouezus ar goularz evit an dud-se, rak, e-giz ma vo gwelet diwezhatoc'h, en em gavo sevenadur ar Val Kamonica war hent ar goularz etre ar Mor Baltek hag ar Mor Kreiz :

« The extension of Globular Amphora sites into the area of the Nemunas and Narva cultures is explained by their quest for amber to which they attached great ideological importance. Its golden hue was symbolically significant to these sun-worshipping people, and amber discs, plain or with carved solar designs (star or cross patterns), are found in important male graves » (Ibid., p. 383).

Gwelet hon eus uheloc'h n'eo ket estren arouez an heol, ouzh azeul ar c'harv e Alaca Höyük da skouer. Ar goularz ivez zo tost ouzh an heol dre e liv a ro dezhañ gwirheñvel e garg varzhel.

Bremañ un evezhiadenn a gas ac'hanomp en-dro da zivroadeg Repin erziwezh, ne ve ket meneget gant Gimbutas rak, ma oa anavezet sevenadur Afanasevo

ganti hag ar monedonea disehan etre Sibiria ha reter Europa, ne oa ket anavezet c'hoazh an divroadeg<sup>311</sup> evit doare. Koulskoude un anadenn etre re all a vo kavet da heul, hag a ziskouez an ereoù etre kornog ha reter Eurazia. Gouzout a reomp eo bet dizoloet roudoù kentañ ar wareg ha biroù e Sibiria :

« The composite bow evidenced from around the end of the 4<sup>th</sup> millenium B.C., between central Germany and the Lower Dnieper, has close analogies in central Asia, particularly in the Siberian-Mongolian steppe » (Ibid., p. 383-4).

Ar sevenadur-se o tont eus ar reter en deus trevadennet ur sevenadur all anvet TRB. N'eo ket souezhus e vije kavet neuze daou wiskad tud :

« Special burial practices of the Globular Amphora group leave no doubt that it was a "kurganized" culture. The population substrate appears to have belonged to the Funnel-necked Beaker (Trichterbecherkultur, or TRB) group » (Ibid., p. 227-8).

An daou wiskad tud-se a zo bet o vevañ e-pad eizh kantved:

« The Corded Pottery culture has two main periods. During the first, c. 3.000-2.600 B.C., the Common European Horizon, the practice of nomadic movement and the short occupation of any one spot have left very few preserved habitation sites » (Ibid., p. 393).

Diskouezet eo bet anat e kreisteiz Polonia bezañs an daou sevenadur war-un-dro, maeserien ha gounideien:

« The second period is characterized by the crystallization of local units. A number of radiocarbon dates from various parts of this culture fix this period between 2.600-2.200 B.C. » (Ibid.)

Komprenet hon eus pegen pouezus eo ar prantad-se eus emdroadur Europa Gozh e Europa Indez-Europek peogwir e vo kavet war al lec'h gant an dud all

---

<sup>311</sup> "Many archaeologically blank areas between the Volga and Yenisei make it difficult to speculate on the beginnings of the Afanasjevo culture" (Gimbutas, 1970, p. 177).

a deuio amañ diwezhatoc'h er Priaj Kordennet, diazezoù a zo heñvel ouzh o re, pa gomzer eus an heol pe lidoù beziañ hiniennel, da skouer :

« This culture was a decisive factor in the formation of the succeeding Corded Pottery culture which carried the Kurgan tradition to Denmark and across the North Sea to as far as eastern Ireland (see Herity 1981), to southern Sweden and Norway, to the East Baltic, and to central Russia (as the « Fat'janovo » branch) » (Gimbutas, 1997, p. 291).

Kement ha ledanaat hor gweled eus ar prantad-se setu un alberz eus ar c'hoarvoudoù da zont evit tremen eus an Anforennoù Boul d'ar Priaj Kordennet meneget endeo un tammig uheloc'h gant Anthony, met displeget ar wezh-mañ gant M. Gimbutas :

« The new upheaval was caused by Kurgan Wave #3, the incursion of Dnieper-Volga steppe (« Yamna ») pastoralists into east central Europe to northeastern Hungary in the west and Bulgaria in the south. The central Europeans shifted now to the northwest and northeast (the late Globular Amphora-Corded Pottery) and to the west, south, and southeast (the late Baden-Vučedol movement to Italy, Albania, and possibly along the sea as far as the Peloponnese) » (ibid., 291).

Peogwir emamp ganti eomp betek penn hor poell kement ha dastum diouzhtu evit diwezhatoc'h frouezh hor studi:

« After repeated processes of hybridization with indigenous populations, next culture units formed and eventually new linguistic branches developed. These were to become the northern and southern groups of the Indo-European speaking family : Germanic, Baltic, and Greek. The remaining population of central Europe stayed at a relatively undifferentiated level until the Middle Bronze Age (the 15<sup>th</sup> century BC) and Late Bronze Age (the 13<sup>th</sup> century BC), when it shifted to the west, south, and southeast. The formation from the central European core of Celtic, Italic, Venetic, Illyrain, Phrygian, Slavic,

Albanian, and Armenian groups probably does not precede the middle of the 2<sup>nd</sup> millennium BC. » (Gimbutas, 1997, p. 318).

An displegadur-se a hañval dislavarout teorienn H. Hubert diwar-benn aloubadennoù ar Gobedoù Kloc'h dougerien ar c'heltieg koshañ, kerkent ha 2.000 bloaz K.K. En em gavet omp en-dro neuze gant ar Priaj Kordennet :

« The Corded Pottery (also called Battle Axe) complex is known not only from the north-central European plain in Germany and Poland but also from Holland, Denmark, southern Sweden, southern Norway, and the East Baltic countries as far as southern Finland in the northeast ; the easternmost branch (Fat'yanovo) reached the Upper Volga basin in central Russia » (Gimbutas, 1991, p. 392).

Hañval a ra e vefe ar Priaj Kordennet, prantad diwezhañ sevenadur an Añforennoù Boul ma chom ar gwiskad tud diazez an TRB hag ar stepennoù Ponteg, bountet etrezek an hanternoz hag ar biz gant divroadeg Yamna en tu all da sevenadur Usatovo e Krimea hiziv. Kement-se a zo akord gant ar pezh zo bet skrivet uheloc'h gant David Anthony. Ha n'eo ket holl :

« The TRB component is predominant in the physical type of the Corded Pottery population in Germany and Czechoslovakia, with the exception of some individuals who are considered to be of the steppe type. Analysis of the skeletal material from Poland shows a steppe origin. Elsewhere the bulk of the population were indigenous remnants of the Old Europeans » (Ibid., 1991, p. 392-393).

Bremañ eo bet difraostet an dachenn, ha gallout a reomp distreiñ d'hor studi eus murengravadurioù Skandinavia an Aremvezh. En arroudenn da heul e vo komzet eus tud ar Bouc'hal-Emgann o kemer lec'h chaseourien ar Priaj Krib ha Poull, a zo bet kroget ar pennad-mañ ganto.

Tremen a reer eus ar bezioù-tremen d'ar bezioù hiniennel war-un-dro gant ma tremener eus an neolitik d'an aremvezh, pe eus ar Priaj Krib ha Poull d'ar Priaj Kordennet :

« It has been suggested that the battle-axe people were part of the great Indo-European family. As this family is defined by a linguistic criterion, and we have no idea what language was spoken in Bronze Age Scandinavia, the point must be left undecided; yet it is very easy to picture the upper classes in Scandinavia, at least in the earlier part of the Bronze Age, as the kind of aristocratic, heroic society which the Indo-European family certainly produced elsewhere—in Greece, for instance, and in Ireland » (Gelling, Davidson, 1969, p. 5).

## B. KARR TRUNDHOLM

Rannet eo bet an dachenn ha staliet an dud. Koulskoude, skoemp eo ar c'houlzadiñ rak diaes eo dielfennañ maen. Pa vez traezoù metal, evel klezeioù engravet da skouer, eo aesoc'h reiñ un deiziad d'an dra. Hep mont dre ar munud, ne c'heller ket ivez bezañ hep komz diwar benn karr heol Trundholm na sell ket ouzh ar c'harv war-eeün, met ouzh ar marc'h, hag a zo stag ouzh al loen gouez-se e-giz ma vo gwelet bremaik :

« It probably belongs to about the thirteenth century B.C., or perhaps a little later, a period when a two-wheeled chariot is likely to have been very much a novelty in northern Europe » (Gelling, Davidson, 1969, p. 19).



### **Skeudenn 47: Karr Trundholm, an daou du**

[[http://en.wikipedia.org/wiki/Image:Solvogn\\_bagside.jpg](http://en.wikipedia.org/wiki/Image:Solvogn_bagside.jpg)]

Hervez Anati e vije levezonet an doare karr-mañ gant Gres Mukeniad goude ar c'hwezekvet kantved. Skouer Trundholm a vefe unan abred a-walc'h rak al levezon-se n'eo ket bet klevet kalz a-gent 1.000 K.K<sup>312</sup>:

« Quant au char, qui était connu à Sumer dès le début du IV<sup>e</sup> millénaire avant Jésus-Christ, ce n'est qu'au début du II<sup>e</sup> millénaire qu'il fait son apparition en Europe, par deux routes : l'une passait par l'Anatolie et la Grèce, l'autre par les

<sup>312</sup> Gelling, Davidson, 1969, p. 21

steppes du sud de la Russie, d'où le char gagne les Balkans vers le XIXe siècle. Un petit char votif de terre cuite trouvé à Palaikastro, en Crète, est le plus ancien témoignage que l'on ait sur sa présence en Europe » (Anati, 1960, p. 152).

Daoust d'an amzeriadur-se uhel a-walc'h met gwirheñvel, ez eus tu evelato da resisaat e talvez ar bladenn evit an heol, stlejet gant ar marc'h, met n'eo ket splann hag-eñ e vefe an heol o ruilhal pe o vale en ur c'harr div rodek<sup>313</sup>:

« Time was conceived as an inexorable onward movement, as a « wheel track. » The horse draws the wheel of the four seasons, and of the day, from morning to night. The sky is seen as a hill : the movement of the sun is up the hill and down, as it is drawn in a vehicle (later a chariot), by horses who never tire. The sun in Indo-European languages is called « the runner, » « the tireless racer, » « the seesaw, » or « the horse. » (Gimbutas, 1997, p. 348).

Daoust ha stlejet e vez pladenn an heol gant ar marc'h, pe e ve ar marc'h o vale war ur c'harr peder rodek, o vont dirak un heol war div rod? Tu a zo da soñjal e vefe stlejet an heol gant ar marc'h. Ar gudenn a zo m'emañ ar marc'h war beder rod, hep na ve karr ebet e gwirionez. An heol war div rod en em gav a-dreñv ar marc'h neuze, a c'hell reiñ da grediñ e vefe stlejet gant ar marc'h. Met e gwirionez eo stag div rod karr an heol ouzh peder rod karr ar marc'h neket ouzh al loen war-eeün. Ouzhpenn an dra-se, n'eo ket splann ar sternaj:

« In addition there appears to have been some sort of line running between a loop under the horse's neck and a similar attachment on the forward edge of the disk » (Gelling, Davidson, 1969, p. 12).

Gwelet mat a reer ar sternaj war ar skeudenn dindan-mañ eus adempradur arkeologel karr Trundholm. Daoust hag-eñ en em gavomp enta dirak skeudennadur ur gredenn a zo hanter-hent etre ar vojenn gozh pa veze o pourmen an heol war vag pe war garr, hag ar gredenn nevez o tont war wel

---

<sup>313</sup> Ibid., p. 11-12

dirazomp, hini an heol stlejet diwar-bouez ur c'harr div rodek. Menoz kozh an ambroug, ha menoz nevez ar stlejañ. N'eus ket tu deomp bezañ resisoc'h eget ar vartezeadenn-se.



**Skeudenn 48: Karr Trundholm adgraet a nevez**

[<http://web.comhem.se/vikingbronze/sunchariot.htm>]

Un dra zo sur avat, ne c'heller ket komz eus ur marc'h o stlejañ un heol war bouez ur c'harr div rodek. C'hwec'h rod a zo en holl: peder ha div. Ha n'eo ket sur ivez e vefe stlejet an heol gant ar marc'h. Menoziad al lidambroug a vefe tostoc'h da hini Strettweg, deiziatet war-dro ar seizhved kantved K.K., ma vez o vale al leurennad a bezh war ur c'harr peder rodek. Sternaj Trundholm zo deiziatet adalek an 13vet kantved K.K. Ar menoz gwellañ evit c'hoazh eo hini displeget gant Gimbutas uheloc'hig eus an amzer evel ul lusk didrugarez war raok, en ur rollec'h.

War an eil skeudenn-mañ e weler adarre ur marc'h bras a-gevret gant daou varc'h bihan, o reiñ da grediñ e vefe hennezh o stlejañ un doue Bouriat, pe an heol gwezh all emichañs, o vale war girri rodek dres evel hini Karr Trundholm,



pa vez bountet e gwirionez gant red an amzer. Un displegadur hag a zegas ur wezh ouzhpenn orin ar marzh er bed Sibirik.



**Skeudenn 49: Karr pederrod an Doue Maydar eus Bouriated an Treuzbaikal<sup>314</sup>**  
(Czaplicka, 1969, Plate 16)

Komzomp bremañ eus un dra all a deu da gadarnaat hor menoz eus pazenn ur gredenn o emdreñ, a vefe ma ne vije ar skeudennoù kirri emamp o vont da welout met sevenedigezhioù ur marzh orin o vont da heul emdroadur sevenadur ar meuriad. Pouezus eo gouzout e c'hell an heol mont war vag ivez, met diouzh an noz, e-giz ma vije bet lakaet a du arouezioù kozh ar marzh, evel ar vag hag ar c'harv, hag erlec'hiet gant re nevez ar c'harr hag ar marc'h ganet war ar stepinier.

« As the common adjunct to a ship is undoubtedly the sun-disk, it looks as if the ship's primary function, from which its importance derived, was to convey the sun. We have already seen in the Trundholm chariot a different kind of

<sup>314</sup> Chariot of the god Maydar of the Transbaikalian Buryat (*Collection of Peter the Great Museum of Anthropology and Ethnography*)

solar conveyance, and if, as is likely, both ideas existed side by side, we may guess that the sun was believed to travel in a horse-drawn vehicle (or at least to be drawn by a horse) in the daytime, and to sail in a ship at night » (Gelling, Davidson, p. 43).

Peogwir emamp o paouez komz eus levezonioù Gres Mukeniad emamp e-tailh da amzeriañ arouez ar c'harr a veze bleniet gant tud sevenadur kentañ ar Parkoù Jarl tro 1.250 K.K.<sup>315</sup>:

« [...] since models of four-spoked wheels (undoubtedly representing chariot wheels) had appeared in the late Unetician period, it can be assumed that chariots continued to be used in Urnfield times. Also, two or four-wheeled cult wagons made of bronze or clay are known from the early and late Urnfield periods. Late Urnfield cult wagons drawn by birds, look like miniature chariots » (Gimbutas, 1965, p. 316).

Ur menoz all a gemeromp digant M. Gimbutas eo orin kreiz Europek dre ret ar c'harr stlejet gant mirc'hi, bezañ ma 'z eo Indez-Europek ar c'harr kredabl<sup>316</sup>:


« Furthermore, chariots engraved on rocks in southern Sweden and on one of the slabs of the Kivik tomb in Scåne indirectly indicate the use of chariots in central Europe, since the idea of chariot making could only have spread to southern Scandinavia by way of the central European area. Thus the central Europeans must have used war chariots drawn by horses, as well as four-wheeled wagons drawn by oxen » (Ibid., p. 316).

Peogwir ez eo perzh ar vag hag ar marc'h en hevelep reizhiad relijiel, ez omp aotreet da lakaat ar c'harv e-barzh, goude lennet an arroudenn-mañ :

---

<sup>315</sup> Gimbutas, 1965, p. 31

<sup>316</sup> Anthony, 2007, p. 18




**Skeudenn 50 : Kirvi en ur vag**  
 (Gelling, Davidson, 1969, fig. 40a, p. 83)

« Perhaps related, but clearly not identical, is the engraving shown in Fig. 40a, which is like Fig. 39c in having two prominent objects set up above the deck. They cannot be horns, and they perhaps have a slight appearance of pairs of animal heads set on the ends of U-shaped arms; but more probably they are rather unsuccessful representations of antlers. The stag sometimes replaces the horse as the sun's animal, so the appearance of antlers on a ship need cause no surprise » (Gelling, 1969, p. 82).

Neket hepken n'eus souezh ebet e vije kemeret lec'h ar marc'h gant ar c'hary, met ur skeudenn hengounel sibiriek eo en tu-hont da se :

« The repetition of images of female elk and boats along the valleys of the great Siberian rivers indicates the extent to which belief systems may be shaped by existential realities » (Jacobson, 1993, pp. 94-95).



**Skeudenn 51: Kern en ur vag**  
 (Gelling, Davidson, 1969, fig. 39 c , p. 82)

Gouzout a reer, trugarez da M. Gimbutas, ez eo orin tud ar Priaj Kordennet eus ur meskaj gounideien eus un tu ha steppennoù mui taiga eus an tu all. An Heol

a zo pennañ en tri sevenadur-se, pe gwregel pe gourel e vefe hervez ar sevenadur. Kavet hon eus war ur c'hleze eus an aremvezh kentañ ur vag:

« The ship has no sun-disk, but the fact that it is there at all is surely due to its role in the sun-cult, and this implies that these religious ideas already existed at the beginning of the Bronze Age. If they were distinct from those which involved the sun-chariot, they must at least have existed side by side with them; and it is more probable that horse and ship belonged from the beginning to the same mythological system » (Ibid., pp. 90-91).

Deuet eo ar marc'h hag ar c'harv a-gevret gant ar gKourganiz (Añforennoù Boul ha Kordenned) eus reter kreiz Europa. Kempred eo bet ar vag gant ar c'harr, d'ur mare bennak d'an nebeutañ, ar pezh ne vir ket ouzh ar vag da vezañ koshoc'h eget ar c'harr goude ma n'emañ ket lod d'ar c'hentañ sell eus buhez pemdez ar stepennoù, daoust ma 'z eo ur penn arouez e Sibiria.

## C. AR VAG

### *An arouezelezh*

Fellout a ra deomp studial bremañ hag-eñ ne vije ket deuet arouez ar vag eus sevenadurioù kentidi an hanternoz edo o vevañ diwar hemolc'hiñ ha pesketa, pell a-walc'h gwir eo war ar reter etre ar Volga hag an Ob, betek an Añforennoù Boul ha pelloc'h ar Priaj Kordennet :

« Consensus, therefore, situates the earliest Finno-Ugrians in the forest zone of Eastern Europe-western Siberia among a variety of hunting-gathering-fishing cultures, many of whom may be embraced archaeologically under the Comb and Pit-marked Pottery tradition » (Mallory, 1989, p. 149).

War an tachennoù divent-se en hanternoz avat e vo kavet murengravadurioù evel war speurinier steroù bras Sibiria hag heñvel outo :

« Finnish rock paintings are part of the Northern hunting and fishing culture. Their geographical location, motifs, forms and level of artistic creation are connected with the Stone Age » (Kivikas, 2001, p. 139).



**Skeudenn 52: Bag ha banhezioù eus Saraakallio**  
(Kivikas, 2001, p. 155)

Ar maenvezh a zo oadvezh tud ar Priaj Krib-ha-Poull :

« The sc. Elk figures display features characteristic to reindeer and elks; also, boat motifs may often resemble horn figures » (Kivikas, 2001, p. 145).

N'eo ket gwall zisheñvel emzalc'h an dud-se ouzh an elned hag ar c'hirvi-erc'h diouzh re Sibiria, ha ma n'eo ket dres an hevelep istor den :

« It appears that elks played a central role in beliefs and rituals tying the tribe together. It is possible that some explained their ancestral origin and perhaps also various customs through stories of elks or of wild reindeer. In stories both animals appear as animals of sun (Autio 1993) and the main hunting game; both were also used as names of central star constellations for determining points of compass » (Ibid., p. 149).

An eln ivez a zo stag ouzh an heol, ha ma n'eo ket hevelep menoziad hag hini heol ar gKourganiz. Anv a vez graet ivez gant an oberour eus hendud, zoken ma ne ra ket gant azeul. En em gaver adarre er bed sibiriek totemek

« The sc. Boats are one of the main motifs of rock paintings. [...]. The highest comb-like representations on rock walls are generally called horn motifs or marks resembling horn and boat motifs. [...]. Vessels with elk head fore can be associated with fishing or hunting, but also with ritual traditions: a shaman may travel by a boat, the sun and the moon cross the sky in a boat, and a boat transports the deceased. Boats were used in initiation and healing rituals as well as at funerals. Horns were associated, among other things, with growth and fertility, and were often used as symbols of elk-like animals » (Kivikas, 2001, p. 156).

Diouzh lenn ar pennad e komprenner e vez graet anv amañ gant Kivikas eus koulz-amzer ar maenvezh, etre 4.000 ha 2.000 K.K. dre vras. Ne c'hell ket enta hervez hon enklask ober gant ar ger shaman. Met hervezomp amañ e vefe kentoc'h ar vag treizhour eneoù, ar c'harr ivez, met n'eo ket heñvel tra hag ambrouger eneoù, rak n'eo ket bev ur vag pe ur c'harr, kontrol d'ar c'hi, d'ar

c'harv, met ivez d'ar marc'h pe zoken d'ar chaman diwezhatoc'h. Da lavaret eo n'eo ket ambrouget an ene gant ar vag met gant ar chaman a ra gant ur vag evit mont tu bennak. Ne hañval ket din eta « treizhour » pe « ambrouger eneoù » bezañ ar memestra.

Daou dra a fell deomp diskouez. Da gentañ e c'heller ijinañ e teufe skeudenn ar vag e Skandinavia eus hini koshoc'h hendum Finnez-Permian ar Saami gant o staon e stumm ur penn loen evel bigi ar Vikinged pe e stumm banhezioù. Banhezioù elned evel-just. Met gwir eo, souezhus eo gwelout e tenn kement skeudenn bag Skandinavia da hini FinnoSkandia. D'an eil, n'eus darempred ebet etre Eln ar Saami ha Karv ar Skandinaviz. E gwirionez, ar sevenadur hag ar yezhoù Finnez-Ougrek a zo eil hanterenn ar yezhoù Ouralek, an hanterenn gentañ o vezañ hini ar yezhoù Samoyek, e Sibiria an hanternoz. Ur sevenadur eo a sell kentoc'h ouzh ar reter. Da skouer, gant ar pezh hon eus desket diwar-benn Sibiria ne vimp ket souezhet gant frazenn-mañ Kivikas a zegas koun deomp eus an holl gement a zo bet displeget deomp gant E. Jacobson abaoe derou al labour-mañ:

« The elk motifs depict mostly antlerless females » (Kivikas, 2001, p. 149).

Met pa seller en-dro ouzh Sibiria e kaver heñvelderioù souezhus gant arouezioù bet kavet ganeomp e-touez an Hittited pergen. Kelc'hioù o aroueziañ an heol da skouer:

« Because these early and monumental elk images usually occur on south facing cliffs and because they are frequently accompanied by enigmatic circles, Okladnikov and Martynov have concluded that sun cults and solar rituals figured importantly in the life of neolithic Siberia » (Jacobson, 1993, p. 92).

Keveliñ an eln hag an heol a stourm kentoc'h evit un azeul a empleg an eln kentoc'h eget an heol. Diaes e vefe empentiñ un eln o azeuliñ an heol:

« The boats frequently underlying or overlaying the elk refer to the passage of the dead from one world to another (...). The fact that the elk images are

predominantly female would indicate that the religious beliefs in question referred to that animal as the source of life. Assuming that the boats do refer to the passage after death, one may conclude that the juxtaposition of elk and boats indicates that the female elk must also have been invoked in funerary rituals » (Ibid.).

Ar vag treizher-eneoù, a-gevret gant ar vamm-elk n'eo ket evit hor souezhiñ peogwir eo bet kevelet ivez ar stêrioù gant an tremen eus un eil bed d'egile. N'eus ezhomm ambrouger ebet peogwir ez a an ene e-unan da gavout e lec'h er bed all, un tammig e-giz notennet gant M. Gimbutas diwar-benn an heol a dro e-unan a veure da noz en ur c'houzout pelec'h mont :

« The rivers were one of the two most important lifelines of the Siberian Neolithic cultures : they were a rich source of food, they were the roads that led to the land of the sun, the south. They were, however, also the roads which led to the land of cold and darkness, the north. The forests surrounding the rivers were the natural habitat of elk, animals which must have been a primary source of food, skin, bone, and antler. It is not difficult to imagine how boats could become a metaphor for the passage of the soul after death into another world, and how elk could function as metaphor for the ever renewed source of human sustenance » (Ibid., p. 95).

A-hend-all pa vez diskouezet ivez skeudennoù tud kornek eo ret gouzout en em gaver en ur prantad all diwezhatoc'h, a vo studiet ganeomp da geñver sevenadur ar Val Kamonika, an aremvezh an hini eo :

« The appearance of horned anthropomorphic figures indicate the elaboration of belief and ritual in the ensuing Bronze Age » (Jacobson, 1995, p. 95).

Ur poent all a ranker splannañ ivez, a denn d'an darempredoù etre bed ar chaseourien hag hini gounideien ha maeserien Indez-Europa. Bed ar chaseourien da gentañ :



« The archaeological data here summarized do prove that the hunter-fisher populations of the taiga zone, however sparse, constituted a continuum for cultural transmissions all through the circumpolar zone of Eurasia and between it and the parklands and steppes of the south. They prove too that this was not a one-way traffic, but they give no measure of the relative importance of contributions from the east, the south, and the west respectively » (Childe, 1961, p. 211).

En arroud-se en em gav kudenn ar wareg, a zo e orin eus Sibiria hag a ziskouez mat ster an emdroadur eus ar reter d'ar c'hornog. Arabat disoñjal ivez diwar-benn ar Saami eo stag an dud-se ouzh ar Samoyed adalek mare Andronovo. N'eus chañs ebet e vefe orin arouezioù ar Priaj kordennet o tenn d'ar c'harv deuet a-berzh ar Priaj krib-ha-poull :

« The heavier bow introduced into Denmark by the pit-comb traders may have been of the composite type attested in Siberia by the Serovo stage and ancestral to the Turko-Mongolian type, but even the Maglemosian bows had been reinforced with sinews » (Ibid.)

E gwirionez, gant V.G. Childe e vo roet deomp ar respont d'ar goulenn a-zivout an darempred etre ar Priaj Kordennet hag tud ar Priaj krib-ha-poull:

« The cultural continuum thus constituted was disrupted by the arrival of warlike farmers and herdsmen of the Boat Axe and Fatyanovo cultures. The former occupied the East Baltic coastlands, but beyond a frontier, sharply defined in Finland, left undisturbed the hunter-fishers » (Childe, 1961, p. 211).

En ur ger o deus ar Priaj Kordennet/Bouc'hal Emgann<sup>317</sup> trevadennet an TRB<sup>318</sup> en ur lezel e-kichen tud ar Priaj krib-ha-poull, hendud ar Saami hiziv. Studiet eo bet an dra-se diouzh sellboent FinnoSkandia ivez gant Kjell-Åke Aronsson ha Sven-Donald Hedman:

---

<sup>317</sup> Boat-Axe and Fatyanovo

<sup>318</sup> Funnel Beaker pe Trichterbecker pe Gobedoù-founilh

« Northern Fennoscandia can be regarded as the westernmost component of the “Finno-Permian World”, situated in close proximity to the Proto-Germanic tribes. Not only related to the Finno-Permian cultures, the area was also inhabited by northern European cultures. In addition, long-distance contacts with Siberia would have existed. During the 8<sup>th</sup> and 7<sup>th</sup> centuries BC and onward, the economic and cultural changes that occurred in northern Fennoscandia were mainly related to links with Ananino Culture (800-200 BC) metallurgical centers to the east (...) » (Davis-Kimball, 2000, p. 186).

### *Karv*

Ret eo diwall ar skeudennoù damheñvel rak talvezout a reont ivez evel doareoù ober boutin etre tud eus un hevelep takad euraziek :

« On the other hand, the appearance of female elk images in the Ural Mountains and in parts of Karelia and Scandinavia does not necessarily indicate an actual continuity of culture ; it may rather indicate certain cultural commonalities among Neolithic peoples of the northern Eurasian forest zone » (Jacobson, 1993, p. 90).

An dra-se ivez hon eus klasket displegañ. Abegoù all hon eus kavet, hag a c'hello bezañ implijet pa vo komzet eus sevel reindeer e Kaledonia :

« Reindeer herding had probably been introduced to Siberia during the first millennium BC, but true reindeer nomadism is considered to be a much later phenomenon (...). During the 1<sup>st</sup> century AD the Roman writer, Tacitus, describes northern hunting populations that he refers to as “Fenni.” His description of the “Fenne” as hunters may be considered evidence that reindeer nomadism had not yet been established in Fennoscandia (...) » (Davis-Kimball, 2000, p. 186).

Ra vo splannet diouzhtu ez eo ar c'harv hag ar c'harv-erc'h daou loen disheñvel bras. A-hend-all e weler mat ez eus bet darempredoù gant Sevenadur Ananino

adalek an eizhvet kantved K.K. hepken. Skeudenn ar vag a zo koshoc'h. Dleout a ra ar vag bezañ ken kozh ha donedigezh tud ar Priaj Kordennet pe Bouc'hal Emgann, o deus kejet gant sevenadurioù Hanternoz Europa an TRB. Int-i eo a veze marteze e darempred gant sevenadurioù Finnez-Permia. An dud gent-se eo o dije gallet treuzkas skeudenn ar vag e stumm kerniel un eln d'ar re Gordennet, a anaveze ar vag a-hend-all. Kement-se a gas ac'hanomp da hanterenn gentañ an eil milved KK., evel m'eo bet displeget gant M. Gimbutas uheloc'h, da lavaret eo etre 2.000 ha 1.500. Deiziataet e vez Karr Trundholm adalek 1.300, hag ar c'harr-se e gwirionez a vez c'hoazh o c'hoari perzh ur vag o vale war an dour, e kement ha ma ne vez ket an heol stlejet e gwir gant ar marc'h war ar skeudenn.

Goude bezañ lennet ar pezh a zo bet skrivet gant M. Gimbutas ha D. Anthony diwar-benn tud an Anforennoù Boul, evit a sell ouzh o gwriziennoù gant Kourganiz Maikop, ha re ar Priaj Kordennet evit a sell ouzh Val Kamonika ma vo kavet karveded engravet war mogerioù<sup>319</sup>, e notennomp gant aked an titouroù a ro P. Gelling deomp diwar-benn lec'h ar c'harv e murengravadurioù Skandinavia e-skoaz ar marc'h :

« The stag sometimes replaces the horse as the sun's animal, so the appearance of antlers on a ship need cause no surprise » (Gelling, Davidson, 1969, p. 82).

Laouen eo bet ganeomp lenn an displegadur a zo aet an oberour da glask. Da gentañ e komz eus bezioù Pazirik e menezioù an Altay, o daou varc'h pourvezet gant banhezioù kirvi:

« [...] it is theoretically possible that the idea of the sanctity of the stag was only introduced into Scandinavia at this period [dibenn aremvezh Skandinavia]. [...] »

It is possible that the idea of the sanctity of the stag reached Scandinavia before this. An earlier contact between Sweden and central Asia is indicated by the Fennoscandian hexagonal socketed axes, which are related to a type which is

---


<sup>319</sup> Merzet e vo diwezhatoc'h pegen tost eo kirvi murengravadurioù Skandinavia ouzh re ar Val Kamonika.

found as far east as Lake Baïkal (Gimbutas, pp. 94 ff.) This would suggest that the advent of the idea was well before the end of the first half of the Scandinavian Bronze Age, and it would be the more likely alternative if we could point to evidence of it on decorated metalwork » (Gelling, 1969, p. 94).

Dic'hortoz eo gant ar pell m'emañ Sibiria diouzh Skandinavia, koulskoude pa brederier ervat n'eus dibab ebet all. Ne c'hell ket ur bouc'hal korzennet bezañ deuet a-berzh chaseourien pe maenvezhidi.

Gwelet e vez pouez ar c'harv e menozioù relijiel re gKordennet Skandinavia :

« Although there can be no doubt about the special position of the horse, it shared its role in the sun-cult to some extent with the stag. The best illustration of this is perhaps the engraving shown in Fig. 44a, even if not every detail of this elegant group is explicable. In Fig. 44b it seems to be a stag which draws the disk, and the same may be said of Fig. 44e, if the spiral above the animal's head is really a stylized representation of antlers.



**Skeudenn 53: Kirvi hag heolioù**  
(Gelling, Davidson, 1969, p. 93)

Fig. 44c show as clearly as could be desired that the stag was involved in the general complex of ideas which surrounded the ship, and this is confirmed by Fig. 44g. » (Ibid.).

## *Strettweg*

Kement-se a gas ac'hanomp war-du tem ar c'hirri « treizhañ » ez eus tu da lavarout marteze, rak evel hini Strettweg da skouer, tro 700 K.K., ne weler loen ebet ouzh e stlejañ, e-giz pa vije difiñv pe loc'het en ul lusk peurbadel. Kement all ez eus tu da lavarout diwar-benn ar murengravadurioù kent:



### **Skeudenn 54: Karr Strettweg**

© Copyright Österreich Werbung  
[<http://www.aeiou.at/>]

« It is noteworthy that at least three of these examples show the animal drawing a simple disk; there is no sign of a vehicle, as there is in the Frännarp group of sun-chariots. If they are interpreted literally, they are more likely to represent an idea than a real cult activity unless, as might possibly be deduced from Fig. 44*b*, the disk was dragged along the ground on its side. Perhaps we are meant to understand that there was a chariot under the disk in every case, and the possibility that stags were used on occasion to draw them need not be ruled

out. There would be a parallel in Pausanias' account of the festival of Artemis Laphria at Patrae in Greece, in which the priestess who represented Artemis travelled in a stag-drawn cart (Pausanias, bk. Vii, ch. 18, section ii ff.) » (Ibid., pp. 92-93).

A-walc'h e vo deomp el labour-mañ menegiñ en-dro al lidaberzhioù karveded d'an doueez wareziñ loened ar c'hoad (B. ARZ, p. 348) a ziogele paotadur ar ouezeri, anez bout kaset re bell diouzh hon enklask.

Ne vo ket paouezet gant ar ouezeri rak hemolc'het e veze ivez er Val Kamonika e-giz emamp o vont da welout diouzhtu.

## 3.2 - VAL KAMONIKA

### A. MURENGRAVADURIOÙ

Degouezh ar Val Kamonika a zo dibar rak anavezet eo istor al lec'h trugarez da Emmanuel Anati, en deus studiet anezhi pervezh. Hag an istor-se zo dedennus, seul vui ma 'z eo bouetaet dizehan abaoe ar pleistosen un tammig evel Sibiria, daoust ma 'z eo disheñvel mat istor an daou lec'h :

« Il y a environ dix mille ans, le Valcamonica se trouvait donc sous les glaciers du Pléistocène » (Anati, 1982, p. 25).

Setu an doare danevellet evidomp gant E. Anati:

« Les premières certitudes de présence humaine dans le Valcamonica nous sont données, pour le moment, justement par les gravures rupestres les plus antiques, qui devraient remonter à peu de temps après la fonte des glaciers. Comme nous le verrons en fait dans un prochain chapitre, les premières figures rupestres peuvent appartenir au stade climatique préboréal, huit mille ans avant Jésus-Christ. La température, au cours de cette période, s'accroît et une végétation de haut fût, composée surtout de pins et de bouleaux, envahit la vallée. C'est alors qu'arrivent des groupes de chasseurs à la recherche de proies: ce sont les auteurs des figures rupestres les plus antiques que nous connaissions dans la chaîne alpine. La faune est encore du type pléistocénique. L'élan, le plus grand des cervidés, est la figure dominante dans les figurations rupestres. Il ne sera représenté, par la suite, aucun élan parmi les milliers de figures postérieures que nous connaissons » (Ibid., p. 27).

Ret eo notenniñ diouzhtu e krog istor ar Val Kamonika abaoe ar mezolitik kentañ gant strolladoù tud o tont eus a lec'h all. An temz-amzer o kemm a zo aktour pennañ an daolenn :

« L'augmentation de la température moyenne se poursuit durant le stade suivant. Au cours de cette période boréale, les forêts de chênes et de noisetiers dominant dans la basse vallée; la faune subarctique, qui avait occupé la vallée pendant le millénaire précédent, disparaît peu à peu. Divers types de cervidés et de caprins sauvages, de petite et de moyenne taille, caractérisent le nouveau complexe faunique » (Ibid.).

Ha bremañ e c'hoarvezh un dra bennak a zo pouezus kenañ evidomp rak un troc'h a vo e dibun an emdroadur. Mont a raio ar chaseourien diwar wel ha ne vo mui den e-pad ar prantad boreal. Goude er stad anvet Atlantel adalek 5.500 K.K.e teuio ur boblañs nevez. An tremen eo eus ar prantad hemolc'hiñ kutuilh d'ar prantad gounid-douar :

« Il semble que l'homme ait abandonné la vallée lors d'une courte période de froid et de sécheresse, au cours de laquelle la vallée elle-même devait être inhospitalière et où la survie humaine devait être difficile. Ce moment silencieux, pour le moment, qui sépare le stade boréal du stade atlantique, a lieu, selon les datations actuelles, pendant quelques siècles vers la moitié du sixième millénaire av. J.-C. » (Anati, 1982, p. 154).

Prantad kemm an temz-amzer a zo anavezet hag a zo heuliet gant ur struzh anavezet mat ganeomp hiziv:

« Le stade atlantique fut une époque de grande renaissance de la nature. Des forêts de conifères envahirent, à cette époque, de vastes zones du Valcamonica ; des fruits spontanés, parmi lesquels les noisettes, les pommes sauvages<sup>320</sup>, les framboises, les myrtilles et d'autres baies comestibles, les fraises, les champignons, les herbes variées, devaient abonder dans la vallée. Des prairies étendues offraient d'excellents pâturages pour les animaux domestiques et sauvages; l'élevage comme la chasse constituaient des bases de subsistance riches pour le groupe humain » (Ibid., 154).

---

<sup>320</sup> Dont war wel ar gwez kelvez hag avaloù war an douar e-pad ar prantad Atlantel, da lavaret eo tro ar bloavezhioù 6.500 K.K., a aotre ac'hanomp da soñjal ne vije darempred ebet etre tudenn Finn pe Marzhin ha prantadoù ar Paleolitik. Krañ-kelvez a c'hoarvez e kelc'h Finn, hag avaloù e mojennoù Arzhur.



Kement-se ne c'hell ket bezañ distag diouzh bezañs an engravadurioù o-unan evel-just :

« Les périodes camuniennes I et II correspondent, grosso modo, au stade atlantique (Taolenn IV), dénommé également *Optimum climatique* (environ 5.000-3.300 av. ? J.-C.), au cours duquel l'agriculture, l'élevage du bétail et le commerce deviennent, dans toute la péninsule italienne et dans d'autres vastes aires du continent européen, des éléments essentiels de l'économie humaine » (Ibid.).

Ar c'helou-se a zo talvoudus evidomp rak lakaat a ra un termen e tolead ar Val Kamonika avat, da deorienn emdroadur dizehan an envroidi, abaoe mougevioù ar paleolitik betek azeulioù ar c'harv en Europa gristen. Ouzhpenn an dra-se e vo lakaet splann gant studiadenn Anati emamp oc'h ober ganti, eo deuet un azeul ar c'harv a-ziavaez-bro, elese eus reter Europa, ar pezh a zo dres diouzh kavadennoù Marija Gimbutas. Forzh penaos ha dreist pep tra, gant kemmoù en temz-amzer eo bet lakaet un termen da sevenadur ar chaseourien. Padal emamp o arvestiñ er Val Kamonika adalek ar prantad Boreal betek an hini Atlantel ouzh erlerc'hiadur meuriadoù chaseourien gant dastumerien, gounideien ha maeserien, hag a bado da chaseal evel-just evel e pep lec'h.

Gwelet hon eus e Skandinavia e oa ivez div boblañs disheñvel evel er Val Kamonika. Ar re a engrave eln en hanternoz, hag ar re nevez deuet er c'hreisteiz eus ar gevred oc'h azeuliñ pe o tougen bri d'an nebeutañ d'ar c'harv etre loened all. Heñvel pleg eo ouzh hini ar Val Kamonika, nemet eno eo aet diwar wel chaseourien ar mezolitik, padal er Skandinavia, trugarez d'an temz-amzer digemm evel e Sibiria, eo manet an dud-se, anavezet hiziv evel Saami er Finland pe hanter-noz an tolead, kemblac'h ouzh an dToungoused e Sibiria al Lenn Baïkal. Un dra zo anat amañ avat, n'eus ere poblañs ebet gant ar paleolitik.

War an arkeologiezh eo diazezet disorc'hoù Anati :

« Plusieurs datations obtenues par analyse au C 14 situent la culture du «Vaso a Bocca Quadrata» entre 4.000 et 3.200 av. J-C. De récentes études ont permis de corriger ou de «calibrer» les datations *C14*; cela signifie donc, en termes de datation réelle, 4.800-4.000 av. J-C. » (Ibid., p. 157).

Anavezet e vo ar Val Camonica dreist-holl evit engravadurioù an Neolitik a grog ken abred ha 4.800 bloaz hag a bado disehan e-pad pemp milved :

« Nettement en contraste avec ce qui avait lieu dans le style subnaturaliste de la période protocamunienne, les figures de gibier sont, pour le moment, pratiquement absentes des périodes I et II. Ceci malgré le fait que ces animaux abondaient dans la région et étaient chassés, comme nous l'avons su par les restes osseux retrouvés au cours des fouilles d'implantations néolithiques sur toute la chaîne alpine. Les figures d'animaux sont généralement rares dans l'iconographie des périodes I et II » (Ibid., pp. 157-158).

Al loened chaseet n'int ket dre ret ar re a vez engravet. En em gavout a reer hiviziken gant ur pleg a vo kavet dre vras e Europa ar c'hornog, gant kemmoù bras etre ar paleolitik - mezolitik eus un tu, hag an neolitik eus an tu all, an temz-amzer o seniñ glaz ar meuriadoù chaseourien, a vo kemeret o lec'h (kantvedoù) diwezhatoc'h gant tud *Homo Sapiens* all. An dra-se a zo gwir evit Tardenoazianed Tevieg hag Hoëdic Armorika, ha ken gwir all evit tud Maglemöz mezolitik Starr Carr e Breizh Veur<sup>321</sup> da skouer. Met distroet e vo war-se diwezhatoc'h.

#### *An doare dan-naturelour*

N'hon eus ket ezhomm daleañ pell war doare engravañ dan-naturelour ar prantad rak kamuniek rak n'eo ket danvez hon enklask bezañ m'eo bet annezet an dachenn gant diavaezidi er mezolitik, ha dilezet an dachenn e dibenn ar prantad Boreal abalamour d'an temz-amzer. Kregiñ a ra hon enklask enta

---

<sup>321</sup> Yorkshire

adalek ar prantad Atlantel, adalek 5.500 bloaz bennak K.K. Ar pennad-arzel-mañ a c'hell bezañ meneget daoust da se rak lec'hiet mat eo dremmwel arkeologel hag arzel ar prantadoù-se e arroud ledanoc'h Europa :

« Il existe également, outre des gravures, des peintures rupestres réalisées dans ce style; elles sont principalement connues dans les phases archaïques du «Levant», c'est-à-dire dans cet ensemble remarquable d'art rupestre espagnol qui se situe entre la province de Lerida et celle d'Almeria. Elles aussi rentrent dans le même tableau général. Mais ce sont surtout les gravures qui illustrent, d'une extrémité à l'autre de l'Europe, un style, des concepts, un niveau culturel, un mode de vie très semblables, ceux de peuples chasseurs post-paléolithiques et pré-néolithiques » (Anati, 1982, p. 150).

Hep na vije bet gouverket ganeomp uheloc'h, an eln hon eus gwelet e hanternoz Skandinavia a oa arouezius eus doare dan-naturelour engravañ deskrivet gant Anati. Arouezius eo eus ur sevenadur hemolc'herien :

« L'art rupestre alpin montre, dans toutes les phases des périodes postérieures, une continuité cohérente et une évolution conceptuelle qui vont du Néolithique à la romanisation. Il n'existe aucune autre évidence, dans l'immense documentation dont nous disposons, d'une phase de peuples chasseurs. Celle-ci pourrait bien concorder avec la position stratigraphique du style subnaturaliste. Il représente un épisode durant lequel les artistes étaient des chasseurs et où l'élan devait être un animal particulièrement important. D'après les paléontologues, c'est là, également, une donnée écologique et climatique significative » (Ibid., p. 149).

Kement-se evit lavarout n'eus doare ebet e vije henvroat azeul karv ar Val kamonika. Ar road-se a hañval talvezout evit tachennoù all en Europa :

« Le style est réaliste, les formes sont élégantes, parfois élancées, et présentent une synthèse plutôt naturaliste. Ce complexe a été défini comme «style subnaturaliste», faisant appel à un terme déjà adopté pour des complexes

analogues de la Galicie espagnole et de l'Anatolie (E. Anati, 1968-a, 1972-a ) »  
(Anati, 1982, p. 143).

N'eo ket didalvez menegiñ pouezh bras al loen-se evit an den rak-Kamunian,  
peogwir ez omp evit hen ober, e veze anezhañ ul loen a veve diwarnañ an dud-  
se :

« L'animal le plus représenté dans le Protocamunien est l'élan. Sur plus de  
170.000 figures rupestres du Valcamonica, on ne connaît aucun autre élan, si  
ce n'est ceux qui sont concentrés sur cette période. Dans la zone du Totes  
Gebirge (Autriche) également, l'élan n'est présent que dans ce complexe



152 Profil de  
cervidé dans un style  
subnaturaliste de  
Kienbachklaum,  
près du Totes Gebirg,  
Autriche.

### **Skeudenn 55: Karveg dannaturalour, Aostria**

(Anati, 1982, fig. 152, p. 141)

stylistique. On peut dire, plus généralement, que dans toute la région alpine, on  
ne connaît, pour le moment, de figure d'élan que dans le style subnaturaliste »  
(Ibid., p. 148-149).


Gwelet hon eus ivez pegen pouezus e oa an eln e sevenadur chaseourien hanternoz Skandinavia. Un dra all c'hoazh hag a zo diaesoc'h da zisplegañ, a zellez bezañ meneget, ma weler ne dalvez ket un emdroadur kenstur en doareoù engravañ, da darempredoù den dre ret :

« Le style subnaturaliste des gravures rupestres a été localisé dans la péninsule ibérique, en Italie, en Autriche, en Scandinavie, en Union soviétique, en Turquie et au Moyen-Orient. Il apparaît, dans toutes ces régions, comme un épisode culturel parallèle. Ceci ne signifie pas nécessairement qu'il y ait eu des contacts quotidiens entre les différentes populations qui exécutaient des figurations dans ce style et pas même qu'elles aient toutes été exactement de la même époque; mais les analogies stylistiques et figuratives reflètent des similitudes dans la conception, dans l'idéologie, le niveau culturel, le mode de vie et les bases économiques » (Anati, 1982, p. 149).

An dra-se ne dalvez tamm ebet e vije bet darempredoù etre an dud-se, met an damheñvelderioù a zistaol doareoù meizañ, prederiañ ha bevañ heñvel. Hag aze e komprener pegen bras e c'hell bezañ pouez an temz-amzer war sevenadur an dud.

Ar goulenn-se zo pouezus peogwir e tistreiñ an oberour warnañ:

« Pour le moment, où que se trouve le style subnaturaliste, il est le plus ancien de la série d'art rupestre en plein air: ceci est le cas en Galicie, dans les Alpes, en Scandinavie, en Union soviétique, dans le désert du Néguev. Ses artistes seraient donc les héritiers et les continuateurs de la tradition paléolithique qui s'est transformée à ce point et a abandonné les grottes-sanctuaires pour porter la figuration à la lumière du jour. Il existerait donc, en Europe, un lien direct, une tradition ininterrompue, entre l'art paléolithique des cavernes et l'art rupestre postglaciaire, dont les nouveaux sites et la distribution géographique sont dus à des contingences écologiques, économiques, sociales et conceptuelles » (Ibid., p. 153 ).



**Kartenn 34 : Murengravadurioù dan naturalour en Europa hag er Reter Nesa**  
(Anati, 1982).

Arabat faziañ, er Val Kamonika e komz Anati eus un hengoun didorr abaoe ar mezolitik : o paouez omp gwelout an dra-se gantañ e-unan, deuet eo annezidi nevez e derou ar mezolitik hag ouzhpenn eo echu gant an hengoun-se da goulz an tremen eus ar stad Boreal d'ar stad Atlantel. E lec'h all, e Kantabria ez eus bet a dra sur un hengoun poblel didorr abaoe ar paleolitik peogwir e vez komzet eus Azilianiz an epipaleolitik<sup>322</sup> a verk enta an tremen etre an daou demz-amzer meneget uheloc'h, adalek -9.000 betek -6.500 tamm pe damm, tra ma n'eus bet eno spanaenn boblañs ebet kontrol d'ar Val kamonika.

<sup>322</sup> [<http://fr.wikipedia.org/wiki/Azilien>]

Pa gomzed uheloc'h eus tud o tont eus ar reter, goude ma oa steuziet dougerien an doare dan-naturelour diastal abaoe ar paleolitik e lec'hioù all, n'eo ket kourganiz gwagennoù ensilañ Marija Gimbutas a soñjemp enno, met kentoc'h gounideien Anatolia goude bezañ trevadennet kornog Europa tamm-ha-tamm :

« L'orant stéréotypé, accompagné souvent de symboles analogues à ceux qui ont été retrouvés dans les gravures rupestres du Valcamonica, semble constituer un facteur assez unitaire, même dans l'aire du centre des Balkans. Les premières figures de ce genre se trouvent dans le cadre de la culture de Starcevo, au sixième millénaire av. J.-C. et persistent dans les cultures de Vinca, Tisza et Cucuteni, au cinquième millénaire av. J.-C. (M. Gimbutas, 1974-a). En Valcamonica, c'est l'élément typique des périodes I et II-A<sup>323</sup> » (Anati, 1982, p. 167).

Tamm-ha-tamm e vo degaset emdroadurioù en doare skeudennoù engravet war ar reier, ha tresoù nevez a deuo war wel :

« De nouveaux motifs figuratifs s'ajoutent au cours des périodes II-B (3.800-3.500 av. J.-c.) et II-C (3.500-3.000 av. J.-c.) et la figure de l'orant est graduellement en régression du point de vue quantitatif par rapport aux autres thèmes, jusqu'à devenir d'une importance secondaire à la fin de la période II » (Ibid., p. 167).

An tresoù nevez a zo deuet a-berzh tud nevez, da lavaret eo er prantad-mañ, Kourganiz eus gwagennoù ensilañ M. Gimbutas. Notennomp ivez rak talvoudus eo evit hor prezeg an dra-mañ :

« Comme dans les périodes suivantes, le cerf est le gibier le plus figuré » (Ibid. p. 169).

Ne gomz ket Anati amañ eus azeul ar c'hary, met eus ar chase.

---

<sup>323</sup> Da lavaret eo prantadoù Europa Gozh Gimbutas.

Evel n'hon eus ket kalz amzer da bleidiñ dre ar munud gant prantadoù sevenadurel ar Val Kamonika, buan ha buan ez eus tu da venegiñ an daou bennad-mañ a daolenn an degouezh e berr gomzoù :

« La période qui comprend la fin du quatrième millénaire av. J-C et le début du troisième a été, pour toute l'Europe, un moment de grande effervescence, plein de génie inventif, d'imagination et de propagation des idées. [...]. En particulier, les « faces-oculi », ces figurations d'entités surnaturelles à l'image anthropomorphe, constituent un élément précédemment répandu dans les Balkans et en Europe centrale, qui s'était infiltré avec insistance dans l'idéologie locale, au point d'en devenir un facteur fondamental. Puis, aux alentours de 3.200 av. J-C, on remarque un changement net dans le répertoire et dans le style de l'art rupestre. C'est le passage de la deuxième à la troisième période de Valcamonica. En ce qui concerne la culture matérielle, on passe du Néolithique au Chalcolithique » (Anati, 1982, p. 187).

An tremen eus an neolitik, pe maenvezh, d'ar c'halkolitik, pe c'houeorvezh, a genglott ivez gant donedigezh ar gKourganiz, hag an tremen dre vras eus Europa Gozh da Europa Indez-Europek. Gant an tremen-se e c'hoarvez ivez e psikologiezh an dud un darvoud bras na ve ket pouezet warnañ met a zo heverk hag a c'hell aesaat deomp kompren emzalc'h an dud e-pad ar mareoù-se :

« Pendant la période néolithique, l'homme partait à la découverte de la nature et de son environnement, cherchant dans le moindre signe une signification cachée. L'homme était plus soumis à la nature, plus humble devant les phénomènes et les formes qui l'entouraient. Au Chalcolithique, par contre, on remarque une nouvelle exigence de structurer la «réalité», d'en faire une réalité à sa propre mesure, déterminée par des concepts et des préconceptions » (Ibid., p. 209).

Kempred eo ar c'hemm spered-se gant neventioù teknikel evel ar rod, ar c'harr, ar c'houevr arsenek ha donedigezh ar gKourganiz gant o doareoù-beziañ hiniennel hag o azeulioù disheñvel :



« Les caractéristiques religieuses et culturelles des Indo-européens se répandent rapidement en Europe au cours de cette période et les statues-menhirs sont, probablement, les monuments religieux indoeuropéens les plus anciens que l'on connaisse en Europe occidentale » (Ibid.).

Goude marevezh ar c'houevr e teuio hini an arem, hag aze en em gavomp endro gant ur prantad a zo bet studiet uheloc'h met diouzh sav-poent Skandinavia :

« Alors que les chars d'une date postérieure ont des roues à six, huit rayons et plus - détail qui est représenté avec précision dans les gravures camuniennes - les chars de l'âge du Bronze n'ont généralement que quatre rayons ou bien ont la roue pleine. Les chars de guerre sont très légers avec une place très étroite pour un ou, au maximum, deux guerriers restant debout derrière une paire de chevaux. Il n'est pas exclu que ce type de char soit arrivé en Valcamonica à la suite de contacts avec le monde mycénien, en même temps que des courants d'idées, d'expériences et peut-être même d'importation de ces objets même, venant de la Grèce de l'époque. Pendant la même période, c'est-à-dire au XVI<sup>e</sup> siècle avant notre ère, apparaissent également dans la vallée les premières figurations d'un animal qui semblait, précédemment, être inconnu, le cheval » (Ibid., p. 261).

Adkavout a reomp ar c'harr hag ar marc'h, met er Val Kamonika ar wezh-mañ, hep gouzout pe hini eo bet ar c'hentañ o tont, ar c'harr pe ar marc'h... hag ar goularz :

« L'ambre, considérée à cette époque comme une des matières les plus précieuses, provenait du Jutland et des côtes de la mer du Nord, et arrivait en Grèce par des itinéraires que De Navarro a reconstruit à travers l'emplacement des sites archéologiques de l'Europe centrale où fut trouvé ce précieux matériaux (J.M. De Navarro, 1925) » (Anati, 1982, p. 261).

An hevelep levezonioù hon doa kejet ganto war reier Skandinavia a adkavomp er Val Kamonika :

« Comme nous l'avons dit, quelques figures d'armes du Valcamonica ont des affinités mycéniennes; pendant ce temps-là, des biges de combat et des chevaux sont figurés sur les roches camuniennes. Des figures analogues de chars de combat apparaissent également dans les gravures rupestres de la Scandinavie. A Frannarp, une roche en est entièrement recouverte. A Kivik, en Scanie, un tombeau royal du XVIII<sup>e</sup> siècle av. J.-C. montre, parmi les décorations recouvrant les dalles intérieures, un guerrier debout dans un de ces biges » (Ibid.).

Ne chomimp ket a sav gant an degouezhioù-se a zo bet gwelet a-gent, koulskoude, diouzh lenn Emmanuel Anati, kirri brezel ar Val Kamonika a c'hellfe kavout o orin e Gres, padal e teufe kentoc'h ar c'hirri peder rodek, evit lidoù kañv ha gouelioù, eus Indez-Europiz ar Parkoù-Jarl hag Hallstatt. An dra-se a zo dedennus rak karr Strettweg a zo bet kavet e Aostria tro ar bloavezhioù 700 K.K. :

« Toujours dans la phase IV, on rencontre également des éléments qui se rattachent à la civilisation de Hallstatt et qui ont des caractéristiques d'outre-Alpes. L'exemple le plus connu est celui de figurations de chars à quatre roues, probablement des véhicules pour rites funèbres et pour parade, qui trouvent leurs parallèles les plus proches dans les figures exécutées sur des urnes funéraires à Eedenburg et dans d'autres localités de la Hongrie, de l'Allemagne et de l'Autriche, dans le contexte de la culture des Champs d'Urnes et de Hallstatt » (Ibid., p. 313).

Kavout a ra deomp eo bet adkavet penn an neudenn gant derou hor studiadenn eus ar Val Kamonika. Difraostet eo bet an dachenn, dilezet e vo ar prantad rak-Kamunian en ur c'houzout petra zo c'hoarvezet e-pad ar mare-se. Gouzout a reomp ne c'hellomp ket klask orin azeul karv ar Val Kamonika er Paleolitik. Un dra gaer eo gouzout an dra-mañ gant ar splann e teu da vezañ an dachenn-studi. Par eo an degouezh er Val Kamonika er c'heñver-se ouzh hini Skandinavia, met disheñvel eo ar c'hoarvezoud, anat. Bremañ enta, emaomp o vont da zispenn roudoù azeul ar c'harv er Val Kamonika.

*Karv Kamonika*

Hon studi eus azeul ar c’harv er Valcamonica a grog gant pennad-mañ Emmanuel Anati tennet eus ul levr all embannet abretoc’h, e 1960 hag anvet “La civilisation du Valcamonica“:

« Tous ces groupes d'art rupestre, d'art mégalithique et de statues-menhirs ont vu leur début à l'époque néolithique, mais leur épanouissement, dans la plupart des cas, eut lieu à l'âge du bronze » (Anati, 1960, p. 234).

Eus ar c’hounideien e vez graet anv amañ :

« In the 4<sup>th</sup> and 3<sup>rd</sup> millenium B.C., agricultural and cattle-breeding tribes settled nearly the whole of Europe, forming a whole system of ancient cultures and their modifications, all at a more or less the same level of development yet markedly lagging behind the highly developed communities of the Balkans » (Piotrovsky, 1988, p. 37).

Ar re-se, edo o vevañ diwar an douar a oa pouezus bras an heol evito<sup>324</sup> :

« Les plus anciennes gravures du Val ayant trait au culte du soleil remontent à la fin de l'âge de la pierre, aux derniers siècles du IIIe millénaire » (Ibid. p. 164).

Pezhioù Galia a ziskouez un amzeriad eus eil hanterenn milved diwezhañ K.K. Abretoc'h gant gouklezeioù an aremvezh e adkaver an heol hag an ejen :

« Au mont Bégo, le disque du soleil est représenté tantôt avec des bœufs, autour desquels était centré le culte local, tantôt avec des armes, notamment des poignards » (Anati, 1960, p. 163).

Souezhet eo Anati gant unvaniezh an heol hag ar c'harv :

« Une rencontre curieuse est la liaison disque-cerf, très fréquente dans nos gravures » (Ibid.)

Ni a oar mar evel-just e veze kevelet an heol hag ar c'harv gant an Hittited.



**Skeudenn 66: Karv hag heol en ur vag**  
(Gelling, Davidson, 1969, fig. 44).

E menoziad ar « chase hollvedel » e kaver un displegadur eus an darempred etre an eln hag an heol, en ur zerc'hel koun evit a sell ouzh ar prantad amzer studiet ez eo bet kemeret lec'h an eln gant ur c'harveg all, goude ar c'harv-erc'h :

« In this connection, of particular interest are the Evenk concepts of the cosmic elk Kheglen (Kheglun), which are identified with the constellation of the Great Bear. Conformant with these concepts, the visible sky is nothing else but the taiga of the upper world. Within it lives the cosmic elk Kheglen. During the

day the elk goes into the thickets of the heavenly taiga, and therefore is not visible from the land of people. At night he comes out onto the mountain peaks, and being the most powerful of the dwellers (stars) in heaven, may be seen by people from the earth. Judging by the fact that the constellation Little bear is considered in these concepts as Kheglen's calf, we may conclude that the cosmic image of the elk is understood at the same time as that of a "mother-elk » (Michael, 1963, p. 161-162).

Setu c'hoazh un doare all da geveliñ an eln hag an heol:

« Once upon a time Kheglen ran out of the thickets of the heavenly taiga and saw the sun at the top of a mountain crest. Kheglen ran under the sun, impaled it on one of its antlers, and carried it into the thickets of the taiga » (Ibid., p. 162).

N'eo ket ar geveleriezh unan nevez:

« Siberian ethnographic materials show that the link of the elk-maral image with the sun is one of the most ancient elements of the cosmological concepts of the peoples of Siberia. Archaeological materials also are witness to this, especially the rock drawings in Siberia, studied in this aspect by A.P. Okladnikov » (Michael, 1963, p. 163).

Abeg an eln hollvedel a zo e-touez ar marzhoù koshañ er bed, ha talvezout a ra ar boan bezañ lennet en e hed :

« The motif of the cosmic hunt was a form of personification of the sun cycle which corresponded to and reflected the forms of economic activities of primitive man.

It is noteworthy that the motif of the cosmic hunt was in its time one of the central points of the spring religious rites of the Evenks. Every year, as soon as the first green appeared in the taiga and the first foal in the herd, the Sym Evenks carried out special rites, which, among them, bore the name of *ikenipke*, "revivals." These rites of revival, rebirth, lasted through many days,

and their basic content consisted of pantomimes, imitating the chase after the cosmic elk (maral). [...]. In the course of further development of the action, and together with it all of nature came to life: the ice broke up, the earth was freed from snow, fresh green appeared ...[...] —but in order to secure these blessings for man, i.e., to ensure the possibility of his possessing them, the participants in the ceremony performed the following rite: they shot in turn into a wooden image of an elk-maral (*beyun*, “elk,” “maral,” large ungulate animal), which was then chopped into small pieces and divided among all those who had taken part, as a guarantee of further success in hunting.

The bear Mangi pursues the sun-elk across the horizon from east to west, overtakes him, and kills him. [...]. Among the Evenks this cosmic hunter-bear is identified with the constellations Boötes and Arcturus » (Anisimov *in* Michael, pp. 163-164).

Er memes pennad gant Anisimov e kaver ivez ar frazenn-mañ o venegiñ Shternberg :

« Having in mind analogous images of Indo-European mythology, Shternberg writes further: “It is interesting to compare the similar images from Indo-European mythology, for example, depictions on votive stones of Astarte in the form of a moon between the horns of a cow, not to mention the usual personification of the sun and moon in the form of a bull and cow » (Anisimov *in* Michael, p. 173).

E-giz ma weler, daoust da Sibiria bezañ pell diouzh Europa, ez eo pouezus he marzhoniezh evit kompren gwelloc'h an hini Indez-Europek, pe zoken Kamuniek.

“Le culte du cerf divinisé, comme celui de Cernunnos dans les communautés celtiques, était un culte de chasseurs; le taureau ou le boeuf, qui étaient aussi des animaux adorés par les Camuniens, prouvent au contraire l'existence d'un culte agraire » (Anati, 1960, p. 173).

« An tarv pe an ejen », e-giz ma vije heñvel an daou loen-se e spered Anati... Gwir eo ne vez ket graet an diforc'h etrezo alies. Ar ger "ejen" a zo neptu hag great gantañ e lec'h buoc'h pe tarv alies. Pa vez ezhomm e vez resisaet al loen : tarv, buoc'h, pe ejen evit stlejañkirri pounner da skouer, hag evel-se e vez merket sevenadur an dud lavaret.

Stag e c'hellfe bezañ pep loen neuze en teorikel ouzh un doare bevañ, da lavaret eo ar c'harv gant ar chaseourien, nerzh an ejen gant ar c'hounideien, laezh ar vuoc'h gant ar saverien chatal, hag an tarv gant ar vesaerien. An diaes a sav ma kaver ur meskaj tud alies, o gwiskadoù sevenadur tolpet an eil re war ar re all. A-duiñ a reomp evel-just gant Anati evit lavarout eo hini ar c'harv un azeul chaseourien, peogwir e-touez ar monedonea etre tud Repin hag Afanasievo, elese kentidi an Altai ez eus bet chaseourien hag o deus degaset ganto kredabl o loen mamm e-ser gant o doareoù-bevañ. Ha n'eo ket azezañ met koazezañ a ra chaseourien Sibiria, ar Gelted ivez, ha Cernunnos Gundestrup c'hoazh. A-hend-all, ne gomz ket disheñvel Ann Ross :

« On the great Celtic cauldron from Gundestrup then the stag-god is portrayed in his role of 'Lord of the Animals'. Here he adopts his typical squatting posture, the so-called 'Buddhic' pose, which has been taken to show oriental influence in this Celtic cult, but which is more likely to have been the national sitting posture of the Celts, who did not, according to the classical writers, use chairs, but squatted on the ground » (Ross, 1967, p. 137).

Dre an abeg-mañ e lakaer kemm etre spered pe doueelezh kornek rak-houarnvezhel ha Cernunnos an houarnvezh "en e goazez", e-giz ma vez lavaret e brezhoneg:

« Le dieu-cerf, divinité secondaire alors, devient à l'âge du fer la plus importante; c'est le même dieu sans doute que le Cernunnos adoré par les Celtes à l'âge du fer tardif » (Anati, 1960, p. 200).

Hervez Anati e-unan e vefe ar c'hemmoù loened relijiel nemet adsked ar c'hemmoù sosial :

« C'est vers la fin du IIe millénaire que les Camuniens semblent avoir eu, pour la première fois, des contacts quotidiens avec les populations d'Allemagne du Sud, de Suisse et d'Autriche, ancêtres de celles auxquelles on allait donner le nom collectif de Celtes » (Anati, 1960, p. 89).

Tro ar mare-se ivez eo bet gwelet engravadurioù kentañ an doueelezh kornek er Val Kamonika, a zo deuet kredabl a lec'h all, gant ar Gelted. E stumm ul loen evel e Sibiria, eo bet taolennet da gentañ :

« Au début de l'âge du fer apparaît le dieu-cerf, dieu de la chasse à travers les bois et les montagnes, puis le dieu de la guerre. Le cerf divin, d'abord animal, va bientôt lui aussi s'humaniser, et vers le Ve siècle ne conserver de son ancien aspect que les bois de sa tête » (Anati, 1960, p. 209).

A-benn ar fin ez eus tu da zeverañ diouzh hon titouroù eo bet skeudennaouet ar vamm-loen e stumm ur c'harv, evel diskouezhet e Skandinavia e-pad an aremvezh, pe er Val Kamonika da skouer ken abred hag ar bloavezhioù -1000. Diwezhatoc'h en hevelep lec'h eo bet emdroet skeudenn diavaez ar vamm-loen e hini ur stumm denheñvel war-sav. Pelloc'h hag e lec'h all, eo deuet da vezañ ur stumm den gant kerniel kirvi en e goazez e-giz un doue.

Kement hag echuiñ bremañ gant hon tabut diwar-benn azeul ar c'harv er Val Kamonika, e c'heller ouzhpennañ ez eus tu da zispenn roudoù azeul ar c'harv adalek strolladoù Indez-Europiz evel ar Kelted Unetis, ar Gobedoù Kloc'h pe ar Re gKordennet betek Maikop, ha marteze zoken Afanasievo n'emañ ket gwall bell eus TOUNGUSED al lenn Baïkal m'eo bet ganet marzh ar Chase Hollvedel hag a c'hell displegañ skeudenn digomprenus evit Anati ar c'harv o stlejañ an heol engravet war brioù ar Val Kamonika, ar pezh n'eo ket hud ar chase evit ober.

### 3.3 – LEDENEZ IBERIA

#### A. GALISIA

Arz Galisia a vez kavet war mein-engravadurioù Iwerzhon eus an Aremvezh :

« But the vast majority of non-megalithic scribings in Ireland belong to what is here termed the "Galician" series, often termed "cup and ring" carvings » (MacWhite, 1946, p. 59).

Da vezañ disrannet diouzh sevenadur Bezioù-Trepas Iwerzhon eo arz Galisia :


« The paintings on the natural rock surfaces are as the Abbé Breuil has pointed out the work of the megalithic folk. For the exact origin we must look in the Southwest of the peninsula [Iberia], where evidence of certain grave goods—stone pestle-hammer beads, stone basins, as well as that of megalithic morphology points as the origin of the Irish passage Grave culture » (MacWhite, 1946, p. 65).

N'eo ket a-du Herity penn-da-benn gant MacWhite pa zispleg e kaver mein gant tres Iwerzhonek ur c'helc'h gant skinoù a-gevret gant hini Galisian an "tas ha gwalenn"<sup>342</sup> evel war an dresadenn dindan :

« Simple cupmarks and cup-and-ring motifs recur with gapped circles in both schools, and Shee and O'Kelly have recently demonstrated the similarity of a more complex and exceptional rayed circle motif having cupmarks inside the rim on one of the stones of Loughcrew Cairn T with motifs in the Irish and Galician rock-scribings (1971) » (Herity, 1974, p. 108).

---

<sup>342</sup> Cup-and-ring



**Skeudenn 67: Murengravadur, Co. Kerry<sup>343</sup>**  
 (Herity, 1974, p. 108)

Ur gudenn hepken evit arz ar Beziou Trepas eo an diouer a droellennoù en Iberia, setu n'eo ket aes ober ar vammenn anezho dont eus Malta da skouer, pa gaver kement anezho e Breizh koulskoude :

« A clear difficulty for most authorities is the absence of carved spirals on the tomb walls<sup>344</sup> (Ó Ríordáin and Daniel 1964, 129).

Many Breton tombs, on the other hand, bear a wealth of mural ornament. Gavrinis has twenty-two of its twenty-nine orthostats, and the chamber sill, completely covered with brilliant carvings » (Herity, *Ibid.*, p. 109).

Un dra all hollbouezus c'hoazh eo an darempred etre "arz Galisia" hag al Listri-Boued :

« The distribution in this area (Fig. 2) agrees well with that of Foodvessels and also with that of a flat and hammer flanged bronze axes. In a number of cases where decorated stones form the covers of burial cists they cover Foodvessels burials, and from this Childe and Hawkes have rightly counted "cup and ring" carvings an element of the North Britain Foodvessel culture » (MacWhite, 1946, pp. 68-69).

<sup>343</sup> Detail of rock art design at Staigue, county Kerry.

<sup>344</sup> Eus Iberia






**Kartenn 36 : An tres “Tas-ha-Gwalenn” e Inizi Breizh Veur (strollad Galisian)**  
(McWhite, 1946, p. 51)

Bez e c'heller keñveriañ ar gartenn gent gant houmañ hag ijinañ hent-bann an dud-se o tont eus Galisia marteze en ur dremen dre Arvorika, neuze Iwerzhon ha Skara Brae evel merket war ar gartenn. Hent-bann demdost heñvel ouzh hini ar Bezioù-Trepas :

« Passage Grave art was occasionally influenced by the Galician Group, particularly in those areas in which the two groups overlap geographically. [...]. Reflex influences of the Passage Grave culture on the Galician art are shown by the occurrence of rock-scribings of the latter group on standing stones, which are certainly inspired by the megalithic *menhir* idea » (Ibid., p. 68).



### Kartenn 37 : Murengravadurioù en Iwerzhon

(Herity, 1974, p. 108)

Alese menoz arz ar Beziouù-Trepas adgoloet gant hini al Listri-Boued. Sed evit a sell ouzh Iwerzhon. Evit Skos avat ez eus tu da zisplegañ an traoù disheñvel :

« The distinction between Passage Grave art and Galician art is of fundamental importance to an understanding of the North British scribings. These occur in great profusion on natural rock-surfaces and boulders, and also on stones in cists (usually, but not always on the cover) or incorporated into weems<sup>345</sup> and earth-houses » (Ibid.).

Da eo lavarout n'eus ket kalz roudoù arzel a-berzh ar Beziouù Trepas e hanternoz Breizh-Veur, na loened ivez. Representations of animals which occur occasionally on the Iberian carvings are not known from Ireland a zispleg deomp Eoin MacWhite<sup>346</sup> gant gwir abeg, met e Skos n'eo ket gwir ken :

« This survey [by Miss Marion Campbell of Kilberry and Miss Mary Sandeman, of an Archaeological Survey of Mid Argyll] includes two cup-and-

<sup>345</sup> [a. early Gael. *uaim* a cavern.] Applied in Scotland to a cave or underground dwelling-place used by early inhabitants of the country (Little, Onion, 1970, p. 2402).

<sup>346</sup> 1946, p. 63

ring marked rocks, Nos. 230 and 240 in the Survey, which are described as 'having gutters (unconnected with cups) suggesting outline of horned animal (stag? bull?)' (230), and joined by meandering gutters suggesting stylised figures' (240). » (Feather, 1964-66, p. 316).



**Skeudenn 68: Carvings of Galician type representing deer at Ford, Mid Argyll**

Proc. Soc. Ant. Scot. Vol. XCVIII PLate XLIII. Feather : Deer carvings

Anavezet e vez al loened-se e Galisia :

« The figures would appear to be representations of deer, differing slightly from Galician deer carvings by reason of their outline being formed by a single pecked channel, whereas in Galicia the deer are indicated by a double outline. This rock would appear to be the first find in the British Isles of animal carvings associated with cup-and-ring markings in the Galician rock art tradition (Pl. XLIII, i) » (Ibid.).


Uheloc'h eo bet lavaret e oa deuet al Listri-Boued da heul ar Bezioù-Trepas hevelep ma c'heller kavout eo deuet tres ar c'harv gant an dud-se peogwir :

« In this work over a score of plates show this association [deer carvings and cup-and-ring markings] and in most cases the deer have been carved around the

edge of the other motifs or inserted in such positions as to suggest that the deer are later in date than the other motifs. What interval of time is involved, if any, is impossible to say. This feature is notable in the Argyll example » (Ibid.).

Diskouez a reomp da heul skouerennoù Kirvi eus Galisia. War ar skeudenn 126 a ziskouez ur c'harv hag un heizez en enep an eil diouzh egile, e komprener gwelloc'h n'eo ket al loened o-unan a dalvez, met ar pezh a ziskouezont, peogwir e hañval ar barez war an tu gin bout kornek ivez<sup>347</sup>. Un asez heol a zo etrezo. An oberourien hon eus meneget n'o doa ket bet tro da lenn oberennoù Gimbutas ha diaes eo heuliañ an dud-se en o displegadurioù eus tres an droellenn na gaver tamm en Iberia, hag a vije bet o tont eus ar bed kreizdouarel.

Tab. LX



**Skeudenn 69: Kirvi engravet, Galisia<sup>348</sup>**  
(Buhigas, 2000, Fig. 122/126)

<sup>347</sup> N'hon eus ket disoñjet e tougen an elnez, loen diagentour ar garvez, banhezioù ivez. Bete gouzout.

<sup>348</sup> Figurac 122 - 125 — “Laxe das Lebres ” Cervi. Opus fusile. *Mus. Gym. Pont. Vet.* Fig. 126 — “Laxe das Lebres” Cervi, malis et femina, oppositi et pedibus coniuncti. Opus fusile. *Mus. Pont. Vet.*

Kavout a ra deomp e Skos d'an nebeutañ eo stag ar c'harv gant al Listri-Boued, evel e Galisia. Gant an dud-se hag ar Gobedoù Kloc'h eo deuet tammoù metal. Ne fell ket deomp mont donoc'h e dezrann ar prantad met klotañ a ra re vat gant ar pezh hon eus studiet e-kerz hon enklask. Ma vije stag tres an "tas-ha-gwalenn" ouzh tud ar mezolitik n'eo ket evidomp ur gudenn. Stag ez eo ivez tres ar c'harv ouzh al Listri-Boued. Kement-se a zesk deomp e vefe ken kozh azeul ar c'harv e kornog Europa hag al Listri-Boued a zo eus an aremvezh kentañ, da lavaret eo ar prantad tro 2000 K.K. a laka un termen da sevenadur ar mein-meur hag un derou da hini ar metal. Koshoc'h ez eo an amzeriadur-mañ eget murengravadurioù Skandinavia pe ar Val Kamonika. An amzeriadur koshañ gant karv eo goude an Hittited.

## B. LUZITANIA

Komzet eo bet en un doare spis a-walc'h eus ar c'harv e Maikop, en Anatolia gant an Hittited, e Skandinavia hag er Val Kamonika kement ha ken bihan ma ne vo roet da heul met un alberz eus azeul ar c'harv - hag an tarv - e ledenez Iberia da gentañ, Luzitania ve gwell, ha Galia da c'houde. An daou loen vez kavet a-gevret alies, e-giz m'eo bet gwelet endeo e-touez an Hittited, er Val Kamonika, hag e-giz emamp o vont da welout ivez e Luzitania :

« Parmi le groupe des peuples indo-européens, on distingue trois groupes qui présentent dans leurs manifestations religieuses les caractères indo-européens. Ces groupes humains sont les peuples du nord de l'Hispanie, les habitants du centre de la péninsule et enfin les Lusitaniens, qui ont opposé le plus de résistance à la présence Romaine » (Maia-Bessa, 1999, p. 37).

E-giz m'eo bet graet evit ar sevenadurioù studiet ganeomp a-gent, eo kreizel gouzout petra eo orin an dud-se, a belec'h e teuont ha pegoulz :

« Les études linguistiques mettent en évidence une série de traits archaïques qui nous poussent à considérer les Vettons comme une grande vague indo-européenne très ancienne. Mais la difficulté majeure réside dans le fait d'établir un parallèle entre les résultats de la linguistique et de l'archéologie. Selon Tovar, l'indo-européanisation de la péninsule était le fruit d'invasions successives de peuples différents et il n'existe pas de concordances absolues entre les traits linguistiques conservés et les séquences archéologiques » (Ibid., p. 51).

Ar gudenn-se a vo kavet ganeomp en-dro diwezhatoc'h diwar-benn yezhoù strolladoù Kelted disheñvel :

« Tovar avait distingué, chez les Vettons, une langue pré-celtique indo-européenne attestée par les toponymes comme *Salmantica* et *Salama(n)ti*, de la ville de Salamanque et du fleuve Tormes dont la composition avait un suffixe – nt – similaire à la forme de certains fleuves indiens et iraniens et avec

seulement le cas en Europe du fleuve Vismund en Norvège. Ce suffixe selon Tovar, appartient aux races les plus anciennes des indo-européens, antérieurs à la scission du tronc celtique dans les groupes Goidélique et Brittonique » (Ibid., p. 51).

Un displegadur damheñvel, met denoniezhel, a gaver gant Bosch-Gimpera, a ro evelato un orin a adpign ken kozh hag ar mare p' edo ar C'hermaned hag ar Gelted o vevañ kichen-ha-kichen :

« Selon Bosch-Gimpera, les Vettons étaient un groupe celto germanique qui avait fait irruption dans la péninsule vers le VII<sup>e</sup> siècle av. J.-C. – avec les Pelendones comme groupes plus important – et qui fut responsable de la construction du premier niveau archéologique des castros dans l'aire vettone et de tout le système central général » (Maia-Bessa, 1999, p. 49-50).

Venceslas Kruta ivez ne skriv ket disheñvel diouzh an daou ouizieg-se :

« Il fallait donc en conclure que le peuplement celtique de la péninsule s'appuyait sur un noyau installé dans les régions centrales au moins depuis l'âge du bronze et qu'il constituait un groupe culturellement autonome par rapport au monde hallstattien et laténien, du moins du point de vue archéologique » (Kruta, 2000, p. 320).

Bountet e vije bet ar strolladoù Hen-Gelted-se gant Kelted all Beljed anezho evel ar Bellovaked, etrezek ar Meseta pe kompezenn greiz al ledenez, tro ar bloavezhioù 650 K.K.<sup>349</sup>. Er Portugal hiziv edo annezet an dud-se :

« Les peuples lusitaniens habitaient dans l'actuel territoire du Portugal et dans la partie de l'Estrémadure espagnole. La province de la Lusitanie était habitée par divers peuples, comme les *Conii* ou *Cynettes*, les *Celtici*, *Paesuri*, *Tapori*, *Turduli Veteres*, *Lusitani* et les *Vettones*. En effet, les Lusitaniens constituaient


---

<sup>349</sup> Maia-Bessa, 1999, p. 49.



un agrégat de peuples réunis de façon circonstancielle et baptisés par un nom générique » (Ibid., p. 152).

Al Luzitaniz e gwir a oa ar meuriad niverusañ ha kadarnañ eus Luzitania, lec’hiet etre and Douro hag an Taj gouez da Tite-Live e 213 K.K.<sup>350</sup> Evel gwelet war ar gartenn n’emañ ket pell al Luzitaniz diouzh arVettoned<sup>351</sup>. An amezeien-se a zo Indez-Europiz neuze, met Rak-Keltes :



**Kartenn 38 : Ledenez Iberia e 200 K.K.**

[<http://fr.wikipedia.org/wiki/Fichier>]

<sup>350</sup> Ibid., p. 152

<sup>351</sup> Ibid., p. 153



« Les récentes études de deux importantes inscriptions rupestres de Lamas de Moledo (Castro Daire) et de Cabeço das Frâguas (Pousafoles, Sabugal) viennent confirmer que, en Lusitanie, la population partageait l'idéologie fonctionnelle tripartite de la culture indo-européenne. D'ailleurs la langue lusitanienne décrite sur les inscriptions pouvait appartenir à un dialecte indépendant issu du rameau indo-européen, semblable au dialecte parlé par les Celtibères du nord-ouest péninsulaire » (Ibid., p. 153)

Hervez Bosch-Gimpera e vefe anv amañ eus tud sevenadur ar Parkoù-Jarl, hag a c'hell hervezañ bezañ anvet Kelted. O lavarout an dra-mañ emañ a-du P. Bosch-Gimpera gant Jacques Briard ha M. Gimbutas, e-giz m'eo bet gwelet uheloc'h :

« Nous continuons à croire que les premières bandes des gens des urnes arrivèrent en Catalogne dans un moment assez reculé non loin de la fin de la période équivalente au Hallstatt A de Reinecke, et que même en tenant compte d'un prudent retard dans les territoires marginaux il peut être fixé vers 900 » (Bosch-Gimpera, 1950-51, p. 394).

An amzeriad-se a vo kounaet ganeomp pa vo studiet rannyezhoù ar gKelted da goulz o divroadegoù e Breizh Veur hag Iwerzhon. Lavaromp bremañ e kenglot mat a-walc'h gant tarzh ar skeudennoù kirvi kentañ war speurinier dibenn prantad II ar Val Kamonika.

#### *Azeul karv Luzitania*

Troomp diouzhtu war-du menozioù relijiel an dud-se a vo seul bouezus ma'z eo kozh a-walc'h o orin. Evel boaz, arabat ankounac'haat e vez anavezet an dud-se d'ur mare goude m'int bet trevadennet gant ar Romaned. Kent ha kregiñ ganti ez eus ezhomm un nebeut gerioù diwar-benn an endro sosio-relijiel d'ar mare-se :

« Cependant, les cultes purement naturalistes sur lesquels on a beaucoup glosé avaient en grande partie disparu à l'époque romaine. Seuls les noms divins des rivières et des montagnes témoignent d'une époque où chaque phénomène naturel était assimilé à une entité divine. Quelques ensembles architecturaux avaient succédé aux lieux remarquables (montagnes, grottes, sources, etc.) et les animaux domestiques étaient l'objet principal des échanges entre les dieux et les hommes. Pourtant ces lieux où la nature paraît s'exprimer plus particulièrement continuaient d'habiter l'imaginaire des hommes » (Maia-Bessa, 1999, p. 100).

Arabat e vefe neuze tennañ ar pezh emamp o vont da zisplegañ kuit eus an endro sevenadurel a denn kalz d'an amzer wezh all, ur bed enta un tammig evel hini ar re anvet Indianed e norz Amerika hiziv :

« Le culte du cerf est typiquement lusitanien. Divers témoignages de l'époque préromaine ont été conservés. Le caractère de ce culte, qui devait exister parmi les peuples peu romanisés de Lusitanie, de la Celtibère et du Nord de la Péninsule, est très bien raconté dans l'épisode du cerf [qui] a été offert par un Lusitanien à Sertorius » (Maia-Bessa, 1999, p. 111).

Setu an doare : ur menn-karv gwenn-kann a oa bet profet gant ur c'houer anvet Spanus, d'ur jeneral roman anvet Sertorius. Peogwir e anaveze aheul karv al Luzitaniz, e roas Sertorius da grediñ e oa bet roet dezhañ ar menn-karv gant an doueez Diana, a ziskulie sekredoù an trec'h dezhañ. Kredet e veze ar jeneral e-giz pa vije bet o komz a-berzh an doueez<sup>352</sup>.

Hervez Katia Maia-Bessa : «

- 1) Le culte du cerf est un culte spécifiquement lusitanien.
- 2) Le cerf est un animal sacré pour les lusitaniens.
- 3) C'est un dieu assimilé, par les auteurs classiques à Artemis-Diane.

---

<sup>352</sup> [Diwar] Plutarch. Written 75 A.C.E. Translated by John Dryden.  
[<http://etext.library.adelaide.edu.au/mirror/classics.mit.edu/Plutarch/sertoriu.html>]

4) Le caractère de son culte est oraculaire<sup>353</sup> » (Ibid., p. 111).

Ma ouzhpennomp d'ar roll a-us ar frazenn dindan n'eus mui da arvariñ war azeul ar c'harv e Luzitania rak-roman :

« Avec certitude et d'après le matériel archéologique de l'époque préromaine, on peut aisément déduire que le culte du cerf s'étendait à toute la Péninsule Ibérique » (Ibid. p. 110).

Al lavar-se gant Katia Maia-Bessa a dalvez da anadenn evidomp ha kadarnaet e vez an holl gement a zo bet studiet a-gent. Diaes eo hiviziken harpañ tezenn un azeul karv henvroat en Iberia goude gwelet emdroadur an doueelezh-karv, adalek Skandinavia hag ar Val Kamonika o emdreiñ e Cernunnos en e sav adalek ar pempvet kantved. Koulskoude, eo deuet an ampoent da venegiñ ul lec'h m'eo manet diastal ar boblañs abaoe ar paleolitik. En Iberia emañ evel-just, hag ar rannvro Frankez-Kañtabrek an hini eo, dreist-holl evel ma vo gwelet pelloc'hik<sup>354</sup>...

Met n'eo ket achu rak emdreiñ a raio ivez azeul-karv Iberia en ur zaveañ da Artemiz/Diana a zo meneget ganeomp uheloc'h a –zivout ar reter nesañ:

« En ce qui concerne la magie, il peut être fait référence aux mascarades qui avaient comme protagoniste le cerf ou les taureaux. Celles-ci étaient liées aux cultes magiques de la fécondité ; cela correspond bien à l'animal consacré à Artémis. Parfois cet animal avait un caractère funéraire, comme on peut le constater sur une pierre funéraire<sup>355</sup> lusitanienne de représentation douteuse, datée du IIIe siècle, dont la partie inférieure représente une biche avec son petit. Ces stèles perpétuent une croyance du monde Ibérique et de la Turdétanie, associant le cerf aux rites funéraires. La concentration d'une série de sculptures représentant Diane, trouvées à Mérida, semble indiquer que dans cette région l'on vénérât une déesse indigène, lusitanienne, assimilée à

---

<sup>353</sup> Kadarnaat a ra an dra-se eo dianket azeul ar c'harv gant ar Skuthed. Un tres arzel ne oa ken evito.

<sup>354</sup> S.o. p. 533

<sup>355</sup> Mein bez engravet un eln peu r c'harv warno a gaver ivez e Sibiria.

l'Artémis grecque ou à la Diane romaine, qui serait la même que celle des épisodes de la biche de Sertorius » (Ibid., p. 110-111).

Diouzh lenn e komprener ervat ne oa ket aheul ar c'harv unan dister. Reiñ a ra Maia-Bessa deomp an displegadur a rae diouer betek-hen met a oa engortozet hag a gadarn dalc'h relijiel al loen-se e-touez an Hittited:

« De fait, le cerf était considéré comme l'ancestrale mythique des Celtes et Germains, car il est l'un des symboles les plus connus de la fécondité, comme l'animal funéraire et le guide des morts. C'était la chasse préférée des rois et des héros; sa mort dans le cours d'une chasse se rapportait symboliquement à la fin tragique des héros. Enfin, pour convaincre de l'importance du cerf, il suffit de nous rappeler la lutte très dure et prolongée de l'église contre les rituels de déguisement du cerf (*cervulo facere*). Sans aucun doute le cerf avait une importance religieuse dans l'ambiant populaire » (Ibid., p. 111-112).

Kement-se hon eus merzet ivez en ur studial Cernunnos. Adkavout a reomp emzalc'h an Iliz Roman ouzh ar maskaradegoù a gejj en-dro gant ar stourm renet ganti ouzh Cernunnos lakaet da Satan. Setu testeni un eskop eus Barcelona :

« Selon Pacianus, évêque de Barcelone dans la seconde moitié du IV<sup>e</sup> siècle, les masques qui représentaient le cerf avaient également un caractère magique. Alors le culte du cerf dans l'Hispanie avait un sens funéraire, et un caractère érotique. Son opuscule titré *Ceruus* avait disparu. Selon l'évêque, il s'agit d'une vieille coutume hispanique de se déguiser avec la peau du cerf ou d'autres animaux, comme l'agneau ou génisse. Ils portaient sur la tête les cornes du cerf pour se prêter à des pratiques immorales. Cette coutume n'était pas exclusive de l'Hispanie, car elle a laissé des traces en Gaule et dans toutes les régions de l'Empire » (Ibid., p. 108-109).

Ar pezh ne lavar ket Pacianus, marteze peogwir n'hen goar ket eo :

« Depuis les premiers siècles de l'ère chrétienne, la fête des calendes de janvier s'accompagnait de cérémonies qui ne sont pas attestées auparavant. [...] En Occident, et plus précisément en milieu celtique et germanique, nous trouvons l'usage de se déguiser en animaux et de laisser des offrandes nocturnes de nourriture, destinées à d'invisibles êtres féminins, sur des tables dressées à cet effet. [...]. Aucune personne censée ne pourrait le croire — c'est de nouveau Césaire d'Arles<sup>356</sup> qui parle —, mais il existe des individus saints d'esprit qui se déguisent en cerfs (*cervulum facientes*) ; d'autres endossent des peaux de brebis ou de chèvres, d'autres encore se dissimulent derrière des masques d'animaux ( « *alii vestiuntur pellibus pecudum, alii assumunt capita bestiarum* »), et ils sont remplis de joie parce que, ayant pris un aspect bestial, ils ne semblent plus des hommes (« *gaudentes et exsultantes, si taliter se in ferinas species transformaverint, ut homines non esse videantur* »). Dès le milieu du IV<sup>e</sup> siècle, nous trouvons des interdictions de ce genre qui, à côté des cerfs, mentionnent habituellement la génisse (*vetula*) et, dans ce cas, peut-être, la jument (*hinnicula*) » (Ginzburg, 1992, p. 180-181).

Da gentañ e c'heller dispartiañ etre al loened doñv : dañvadez, givri, hag an hini gouez : ar c'harv, hag ivez notenniñ an darempred d'ar c'houlz-mañ eus ar bloaz gant ar marv hag ar struzh. N'eus keal ebet amañ d'ober war-dro kudennerzh Carlo Ginzburg<sup>357</sup>, koulskoude ez eo hennezh pervezh a-walc'h evit notenniñ e c'hoarvezh an holl gement-se d'an oadvezh kristen. Un dra c'hoazh hon dedenn a-galz eo ar bitailh lezet war daolioù aberzhet da biv ? « Da boudoù gwregel diwelus » evel ar *Matronae*<sup>358</sup> geltiek... pe *Mathair na groidhi-si* da skouer ?

« Selon l'opinion de saint Isidore, qui avait recueilli une grande abondance de données sur ces prêtres, la coutume du déguisement avec la peau des animaux était très développée en Hispanie. Une série de mascarades, paraissant remonter au temps des fêtes indigènes de type magique, se sont prolongées jusqu'à nos jours, comme les fêtes décrites par saint Pacianus au IV<sup>e</sup> siècle.

---

<sup>356</sup> tro 470 – 542, Kent Krist [[http://fr.wikipedia.org/wiki/Césaire\\_d'Arles](http://fr.wikipedia.org/wiki/Césaire_d'Arles)]

<sup>357</sup> Dav e vefe da gentañ sonteal reizhder skridoù mammenn Césaire d'Arles hag Isidore, na gomprenont ket dre ret ar pezh a zeskrivont. Soñjal a ran er c'harv, pa 'z eo gwregel al loened all.

<sup>358</sup> Ginzburg, 1992, p. 180

Les corridas de taureaux, si on accepte la thèse défendue par A. Álvarez de Miranda, sont des rituels magiques en rapport avec la fécondité féminine. En Lusitanie, le culte du cerf et du taureau sont la preuve typique des rituels magiques de la fécondité, à l'époque préromaine » (Maia-Bessa, 1999, p. 109).

Bete gouzout e vefe heñvelaet strujusted al loened gouez ha doñv ouzh hini an douar hag ouzh hini ar merc'hed. Arabat disoñjal ez omp aet tre en ur bed all hiviziken, ur bed roman e relijion gristen<sup>359</sup>, m'eo reverziet holl an hengounioù kent.

Gouzout a ouzomp ivez e oa ken pouezus an azeul-se evit an dud edo o vevañ e dibenn mare ar parkoù-jarl, pe d'ar mare m'edo ar C'hermaned hag ar Gelted o kenvevañ, da lavaret eo kent donedigezh ar c'hentañ Kelted en Iwerzhon<sup>360</sup>. Klasket e vo spisaat poentoù fonologel ar mare-se diwezhatoc'h pa vo gwelet tremen ar Gelted eus an Douar-bras da Inizi Breizh-Veur. Kement-se evidomp a bounnera e gwir hon teorienn, rak didorr eo bremañ ar chadenn koulz lavarout etre Maikop ha mare ar Romaned evit a sell ouzh azeul ar c'harv en Europa.

Bremañ, o paouez emamp lenn e oa stag azeul ar c'harv hag an tarv ouzh azeulioù 'hud' a strujusted. Perzh an azeul-se a zo bet kontet e pennad ar c'harv profet gant ul luzitanian da Sertorius<sup>361</sup>. Da eo resisaat eo bet saveteet gant Spanus an heizez o paouez dozviñ, diouzh ar chaseourien. Da geñver an darvoud-se e vez roet deomp un alc'hwez evit daremprederezh ar vBarbared gant an natur ouez :

« L'animal sauvage comme les végétaux participaient directement au monde divin. Chaque prélèvement de ce capital divin sur terre répondait à des règles et faisait l'objet de contrepartie » (Ibid., p. 210).

---

<sup>359</sup> [...], le christianisme devient religion d'État, avec Théodose, en 380 (Challand, Mousset, 2000, p. 30).

<sup>360</sup> Schmidt, 1979, p. 190

<sup>361</sup> Maia-Bessa, 1999, p. 155

Ar bed-se a zo diaes deomp e gompren rak n'eus kemm ebet etre ar sul hag ar pemdez (sagr ha disagr) : tout an devezhioù zo sakr. An natur zo nevet. Gwelet eo bet an dra-se ganeomp a-zivout an dToungoused.

Aze e kompren gwelloc'h e oa stag al loen ouzh un den, pe ouzh ur spered, e stumm ur vaouez. Un emziskouezadur n'eo ken. N'eo ket al loen a zo pouezus met ar pezh a ziskouez. Da eo merzout da gentañ, e komzer en-dro eus ur sevenadur hemolc'herien. Berr-ha-berr, sakr e oa al loened-karv<sup>362</sup>. Komzet eo bet uheloc'h eus Artemiz he c'harr stlejet war-bouez kirvi e Gres. Hervez doare ne oa ket gwall zisheñvel e Luzitania :

« L'existence d'une divinité lusitanienne équivalente à Artemis ou Diane a été extraite du fameux épisode de la biche offerte à Sertorius, narré par divers auteurs. En effet, Sertorius, profond connaisseur du milieu indigène, sait l'emprise de la superstition sur les Barbares. C'est alors qu'il imagine de se faire accompagner d'une biche blanche. Par ce présent, qu'il attribuait à Diane, il frappait l'imagination des populations qui le croyaient ainsi en relation directe avec les dieux. Mais le culte ne s'adresse pas à l'animal sacré, ou pas seulement à lui » (Ibid., p. 422).

Tennañ a ra gounid eus kredoni an dud evit ober dezho krediñ e talvez e drec'hioù da Artemiz/Diana :

« La liaison entre la *Victoria* et la nature divine de celui qui la provoque est éclatante. Sertorius, quand on retrouve *miraculeusement* la biche perdue au cours d'une bataille, se voit qualifié, au milieu d'applaudissements et de cris, d'homme divin et chéri des dieux » (Ibid.).

Al loened gouez dre vras e-giz omp o paouez menegiñ a oa lod eus perzhioù nevet an natur. Anavezet eo ne oa savadur ebet gant ar Gelted, etre tud all, evel temploù pe ilizoù, evit mont e darempred gant nerzhioù meur ar vuhez. An natur a zo a-berzh an nerzhioù-se e stumm loened pe plant, tud pe speredoù :

---

<sup>362</sup> Maia-Bessa, 1999, p. 423

« Cette appartenance divine faisait, de chaque bête sauvage, un animal sacré et il est vain de vouloir, comme cela a été tenté, privilégier telle espèce au détriment des autres. Les quelques fragments, les échos lointains de la mythologie celtique qui sont parvenus jusqu'à nous, accordent une place particulière au sanglier, représentant la force et figurant sur les enseignes guerrières, mais aussi au cerf symbolisant également la puissance virile, au corbeau, oiseau de guerre et de mort, au serpent, animal chthonien par excellence. Mais il est clair que chaque animal avait un rôle soit auprès des dieux, soit dans la mythologie ou encore dans la magie » (Ibid., p. 211).

Kompren a reer gwelloc'h perzh sakr ar chase bremañ :

« Chaque prélèvement de ce capital divin sur terre répondait à des règles et faisait l'objet de contrepartie. Il faut croire que la chasse, par conséquent, comme dans beaucoup d'autres sociétés antiques, était réservée à la noblesse, plus proches des dieux que le reste du peuple et qui pouvait s'offrir financièrement ce luxe » (Ibid. p. 210).

Ha neuze, al loened doñv a gemer o lec'h e-barzh an aozadur :

« Le sort réservé à l'animal domestique s'inscrit donc dans un ensemble de conceptions qui expliquent le rôle de l'homme dans la nature et les rapports entre la nature et la culture placés dans une perspective théologique : l'homme ne peut offrir aux dieux que ce qu'il a entièrement ou partiellement produit. Ces croyances, comme on vient de le voir, sont probablement d'origines indo-européennes. Elles sont en tout cas antérieures à la création des grands sanctuaires qui dès leur origine respectent ce schéma sacrificiel. Au-delà, elles traduisent également un ensemble de croyances concernant le monde animal sauvage sur lequel il ne nous reste aucun document » (Ibid., p. 209).

Ar prederioù-se a zo talvoudus bras evidomp rak e tiskouezont diankoù war dachenn ar relijionoù rak-kristen en Europa, seul vui ma azpigner en amzer gent. Pa ziskenner en amzer, er c'hontrol ez eer war-du un unvaniezh bennak eus an emzalc'hoù relijiel :



« Pour reprendre les termes de César qui expliquent la conception gauloise du sacrifice, humain notamment - le sacrifice d'un animal domestique doit racheter la mort des animaux sauvages. On a là très vraisemblablement la trace du caractère de l'animal sauvage, qui probablement existait aussi parmi les lusitaniens » (Ibid., p. 209).

En em gavomp amañ e-tal kealioù pouezus e buhez pemdeziek al Luzitaniz, a oa bet disoñjet abaoe pell gant ar Romaned o sevenadur emdroetoc'h evel-just, hag a gresk hon anaoudegezh eus tro-spered ar Gelted, hag o darempredoù gant bed an natur, a vez gwelet pe ne vez ket.

### *An tarv*

Kontrol d'ar c'harv, n'eo ket an tarv ul loen gouez a vev er c'hoadoù. Ul loen doñv n'eo ket e gwir ivez.:

« L'existence du culte du taureau dans la péninsule était attesté par un texte de Diodore, dans lequel l'écrivain affirme que dans l'Ibérie les vaches étaient des animaux sacrés » (Ibid., p. 112).

Ur gudenn termenadur a sav. Komzet e vez eus an tarv gant ar mesaer a dalvez evitañ evel oriner an tropellad. Ar vuoc'h a ziskouez sellboent ar saver chatal, gant al laez hollbouezus evitañ. An ejen a zo diouzh sellboent ar gounider a levia ar soc'h. Bremañ e talvez an termenadur implijet diouzh doare ar gevredigezh, hag istor e emdroadur :

« Les documents les plus importants concernant le culte du taureau sont les sculptures qui représentent les bovins ou cerfs, ce dernier animal appartient au même cercle que le taureau » (Ibid.).

Adkavout a reomp amañ anat ar pezh a oa bet gwelet a-zivout an daou loen-se : karv ha tarv gant an Hittited, hemolc'herien Sibiria mesk-ha-mesk gant mesaerien Kreiz Azia evit doare :

« Le taureau était considéré comme le dépôt de la fécondité et comme l'objet de virtualité apotropaiques, qui représentait un stade délié de la mentalité magique, ayant un sens figuré. L'un des traits caractéristiques de la religiosité Ibérique est son caractère pragmatique - rentrer en contact avec la divinité pour obtenir les faveurs tangibles -. Ce pragmatisme paraît aussi être une note distinctive du culte aux bovins de l'Hispanie. Son utilité s'inscrit dans la magie. Cependant, le culte du taureau est un culte pré-indo-européen faisant son apparition dans un moment nettement indo-européen. Le culte du taureau était lié aux populations pratiquant l'élevage, à la fécondation et à la prospérité du bétail » (Ibid., p. 113).

Dre rak-Indez-Europek amañ e c'heller intent Kourganiz.

Reiñ a ran da lenn amañ ur pennad war-benn an tarv, a zo dedennus hag a zispleg ivez tu pe du talvoudegezh dibar al loen-se e-touez an Indez-Europiz :

« Le taureau est un facteur magique qui octroie la fécondité. Il existe également dans la Péninsule des mythes et des rites qui se réfèrent à la puissance génétique du taureau et à son rapport avec la femme. Ces légendes sont une claire allusion magique à la virtualité de la sculpture du taureau et à la fécondité, en tant que médicament contre la stérilité de la femme.

Dans l'Estrémadure existait une coutume nuptiale qui consistait à arracher un taureau de l'abattoir deux jours avant le mariage; les jeunes parcouraient la ville avec le taureau attaché par les cornes jusqu'à la maison de la fiancée. Le taureau est alors tué par le fiancé, qui a piqué une paire de banderilles décorées par la fiancée. La dispersion du sang du taureau paraît aussi avoir une interprétation magique, il s'agit d'étendre jusqu'à l'épouse le contact avec l'animal, ce qui augmenterait au maximum les attributs de la fécondité.

On peut difficilement ignorer la signification rituelle de ces corridas nuptiales. La ténacité de la participation de la femme aux corridas paraît signaler qu'elles sont les parties le plus intéressées à l'action. Dans les corridas modernes, il existe une série d'éléments rituels empruntés à ceux du taureau nuptial. Le jeu de la corrida survit, masqué, dans les éléments de l'ancienne fonction rituelle (de la cape), le caractère éminemment conservateur du rite populaire; il en est de même avec le phénomène des banderilles » (Ibid, p. 114-115).

Dre zegouezh e kavomp amañ un displegadur da orin ar gKorida.

### *Hemolc'hiñ*



**Skeudenn 70: Karr-gouestl. Hemolc'hiñ ur moc'h-gouez<sup>363</sup>**  
[[http://www.uwm.edu/Dept/celtic/ekeltoi/volumes/vol6/6\\_6/marco\\_simon\\_6\\_6.html](http://www.uwm.edu/Dept/celtic/ekeltoi/volumes/vol6/6_6/marco_simon_6_6.html)]

Hemolc'hiñ a zo un ober kevrinus, etre hud ha relijion, n'eo ket neptu. Ar Mabinogion a zo aze evit hon darboellañ e kaver a-dreñv pe en tu all d'al loen hemolc'het ur spered n'emañ ket gwall zisheñvel diouzh ur spered-mamm. En hevelep rummad menozioù ez eus tu d'en em c'houlenn hag-eñ ne veze ket ivez un talvoudegezh hud pe relijiel evit ar re a yae noazh er brezel, dibunañ nested o hendadoù ha klask spontañ an enebourien. Daou sevenadur disheñvel o kenglotañ.

War ar skeudenn uheloc'h e welomp ur c'harr adarre n'eo stlejet gant loen ebet, un tammig evel hini Strettweg, met a denn d'an hemolc'hiñ, gant kleier a-istribilh evit pellaat ar gwall speredoù emichañs.

---

363 Figure 22. Votive cart from Mérida<sup>363</sup> with a boar hunt. Musée des Antiquités Nationale de St. Germain-en-Laye, Paris.

(Photo: RMN n° 95CE595, R.G. Ojeda).

### 3.4 - KELTED

Ar pezh a zo dedennus evit ma vije gwirheñvel penn-teorienn al labour-mañ, eo diskouez ez eo an hevelep tud o deus douget kult ar c'harv adalek Sibiria betek Maikop hag Usatovo, hag ar re a vo kavet diwezhatoc'h en Hungaria, Aostria, Bavaria, Breizh-Veur hag Iwerzhon. Evit kregiñ al lodenn-mañ eus hon enklask n'eus ket gwelloc'h da ober eget selaou Marija Gimbutas a gomz eus prantad ar Gobedoù Kloc'h, deuet goude hini ar Priaj Kordennet hag hon doa dilezet evit mont da studial murengravadurioù Skandinavia ha re ar Val Kamonika hag ivez hini Luzitaniz Iberia.

#### *Hungaria*

« The Bell beaker complex, an offshoot of the Vučedol bloc (more precisely, of the Zók-Makó group in Hungary) continued Kurgan characteristics. The Bell Beaker people of the second half of the third millenium B.C. were vagadondic horse riders and archers in much the same way as their uncles and cousins, the Corded people of northern Europe and Catacomb-grave people of the North Pontic region. Their spread over central and western Europe to the British Isles and Spain as well as the Mediterranean islands terminates the period of expansion and destruction » (Gimbutas, 1970, 184).

Degas a reomp pennad-mañ Anthony da goun en-dro a oa bet meneget diagent hag a buk dres war ar prantad a verk hervezomp dibenn ar gwagennoù ensilañ ha derou an Hen-Kelted. Ma vije ur gentel da ober diwar-benn ar Kelted e tlefe hounnez kregiñ gant pennad-mañ Gimbutas hag Anthony:

« The many thousands of Yamnaya kurgans in eastern Hungary suggest a more continuous occupation of the landscape by a larger population of immigrants, one that could have acquired power and prestige partly just through its numerical weight. This regional group could have spawned both pre-Italic and pre-Celtic. Bell Beaker sites of the Csepel type around Budapest, west of the Yamnaya settlement region, are dated about 2800-2600 BCE. They could have

been a bridge between Yamnaya on their east and Austria/Southern Germany to their west, through which Yamnaya dialects spread from Hungary into Austria and Bavaria, where they later developed into Proto-Celtic » (Anthony, 2007, p. 367).

Echu gant Yamnaya, ha zoken gant ar Gobedoù Kloc'h, e kreiz Europa d'an nebeutañ. Bremañ, goude degaset koun en-dro eus an dud-se, aet pelloc'h en enezennoù pergen, emaomp degouezhet en ur dremen dre Unetis hag an Tumulus, e prantad tud ar Parkoù-Jarl a buk ar wezh-mañ dres war ar gKelted hag o frantadoù emdreiñ a grog gant o donedigezh amañ eus reter Hungaria:

« The cradle of the Celtic, Italic, Venetic, Illyrian, and perhaps Phrygian cultures must be looked for in the Corded and the Early Bronze Age Únětice culture of central Europe. The great expansions of the central European culture at the end of the 15<sup>th</sup> century or c. 1400 BC and at the end of the 13<sup>th</sup> century or c. 1200 BC diffused Illyrian and Venetic to the Apennine Peninsula and the Balkans, Italic to Italy, while Phrygian and Armenian spread to Anatolia. The Late Bronze Age-Early Iron Age expansion of the western central European Urnfield group brought Celtic to France, Spain, and southern Britain » (Gimbutas, 1997, p. 31).

O paouez emaomp komz eus degouezh ar Gelted e ledenez Iberia ken abred ha 900 K.K. hervez lod. Evit a sell ouzh Breizh-Veur, n'eo ket hepken e kreisteiz ar vro e vo gwelet alouberien:

« According to Archaeology and Prehistory, the Celts descend from a mixture of the Bronze Age Tumulus Culture (1550-1250 BC) and the Urnfield Culture (thirteenth century BC). Originating in what is now Eastern France, North Alpine Switzerland, and South-Western Germany, they spread over the whole of Europe and Asia Minor during the Hallstatt (from the eighth century) and La Tène (from the fifth century) periods of the Iron Age » (Renfrew, 1990, p 239-240).

Diwar-benn Inizi Breizh-Veur bremañ:

« The date of the first Celtic settlement in Ireland is uncertain; in N.K. Chadwick's opinion it may go back to the Bronze Age before 1000 BC » (Ibid.).

A-raok treuziñ Mor Breizh, e rankomp chom war an Douar Bras a-benn imbourc'hiñ ar roudennoù karveg a zo bet kavet di. Goude an Hittited, eo bet studiet ganeomp Skandinavia, Val Kamonika ha Luzitania. E Galia e vo a-walc'h deomp gwelout un nebeut skouerennoù a-berzh al Listri-Boued gwirheñvel a ya da gadarnaat ar pezh a zo bet lavaret a-gent. Krogomp evelato gant un alberzh eus istor ar Gelted eus Hallstatt hervez an arkeologiezh avat:

« The first immigrations to the Iberian Peninsula, to the English channel, and probably to England as well, took place during the Hallstatt period in the eighth/seventh century BC. The latest Hallstatt chieftains' tombs and the early La Tène culture, expanding to the north into the territory between Champagne and the Rhine, Nahe and Mosel are followed by La Tène B—C Culture (fourth to second century BC) with so-called 'Flachgräber-friedhöfe' or 'flat' cemeteries. [...]. This period is marked by the widest expansion of the Celts, who had invaded Italy, the Balkan Peninsula, and Asia Minor and had settled in Bohemia, Upper Silesia and Hungary. The conquest of France is reflected in its name, Gaul. Celtic migrations of the La Tène period reached Britain, Ireland and Spain, encountering older Celtic strata in the population in Ireland and on the Iberian Peninsula » (Renfrew, 1990, p 239-240).

### *Cernunnos Galia*

En hor c'hask eus roudoù kirvi e Galia ne vimp ket souezhet o welout e vez kevredet alies al loen-se gant Cernunnos. O vezañ ma komzomp amañ eus delwenoù e c'heller devesañ en em gavomp en ur prantad emdroet, da lavaret eo gant an delwenn-mañ er c'hentañ kantved K.K.:



**Skeudenn 71: Triad doueed nevedenn ar Bolards<sup>364</sup>**

Musée de Nuits-Saint-Georges (Deyts, 1992, p. 28).


Ni a zo dedennet dreist-holl gant an tarv dindan war ar c'houriblenn, en em gav enebet, ma lezomp a-gostez al loened bihan all, ouzh ur c'harv, hep disoñjal an tamm struj e-kreiz an daolenn n'eo ket gwall zisheñvel diouzh ur wezenn (-vuhez ?) a zegas koun deomp eus siell Maikop evit a sell ouzh an arouezelezh, met ivez eus ar struj war korfoù kirvi Anatolia Hittited ar 14<sup>vet</sup> kantved K.K.

Adkavout a reomp dindan, war maen-sonn Reims an hevelep arouezioù. Ma 'z eo dispartiet an tarv hag ar c'harv ar wezh-mañ n'eo ket gant ur wezenn met gant greun hervez Simone Deyts. Ne c'heller ober nemet keñveriañ an ed gant struj an douar, elese madoù pourvezet gant an natur, un tammig evel ar

<sup>364</sup> Triade de divinités des Bolards. En haut, de gauche à droite : une déesse mère avec patère et corne d'abondance un Genius avec corne d'abondance également, coiffé d'une couronne crenelée ; un dieu à ramure de cerf triface. Au-dessous, une frise d'animaux taureau, chien, lièvre (?), sanglier (?) et cerf. H. 0,47 m.



chaseourien, pourvezet loened dezho gant ar Spered-Mamm. An hevelep menoz ez eo atav hini mamm natur pourvezerez.



**Skeudenn 72: Cernunnos, Reims<sup>365</sup> (Kent an eilvet kantved G.K.)**  
(Deyts, 1992, p.

Amañ e tiskouez ar sevenadur war an delwenn bezañ Romanekaet, met war gaoter Gundestrup n'eo ket c'hoarvezet an darvoud c'hoazh. Ur bed m'emañ hollvezant al loened ennañ, an tarv hag ar c'harv adarre e-kichen Cernunnos :

« Nous l'avons vu plus haut le Cernunnos du chaudron de Gundestrup semble régner, au Ier siècle avant J.-C., sur un domaine animal d'où se détachent le cerf et le taureau qui se tiennent immobiles à sa droite. Il est superbement coiffé d'une ramure de nombreux andouillers empruntée à un cerf en pleine maturité » (Deyts, 1992, p. 37).

---

<sup>365</sup> Stèle de Reims avec Cernunnos entre Apollon et Mercure. H. 1,25 m. Musée Saint-Rem





**Skeudenn 73: Cernunnos, Gundestrup<sup>366</sup>**  
(Birkhan, 1999, p. 252).

N'eo ket hor pal amañ studial e gwir an azeul pe azeulioù karv pe Cernunnos Galia, met dispenn ar roudoù anezho hepken. Gwelet hon eus abaoe ar Val Kamonika, e kaver e Galia un niver bras a « simulakroù » hag a zelwennoù, a ziskouez mat pegen kreñv eo bet an azeulioù-se e-touez ar Gelted. Cernunnos a hañval bezañ ar stumm den-heñvel a zo gouest da gendeuziñ pe da vont dreist an daou loen kentañ, karv ha tarv o aroueziañ an daou rummad azeulioù pennañ a ya da sevel sevenadur ar Gelted gentañ, ar chaseourien hag ar vesaerien, war c'horre ur c'hondonad gounideien (saverien chatal) evel just. Luziet eo Cernunnos rak n'eo ket kevatal da azeul ar c'harv mui hini an tarv, met talvezout a ra muioc'h eget sammad an daou loen-se. Ur gammed nevez eo etrezek un arouezelezh denheñvel hiviziken hag uheloc'h a dremen dreist ar gwrizenioù emañ o vleuniañ diouto. Cernunnos a deuio da vezañ diwezhatoc'h Satan an Iliz. Menoziad an doueelezh a gaver gantañ, gourel eo, koazezet, kabet gant kerniel karv, hep disoñjal an torc'h nag an naer e benn tourz, evel tad pe mestr al loened gouez. En em c'houlenn a reomp hag-eñ ne vijemp ket gant Cernunnos hag ar gaoter dre vras, o tostaat ouzh menoziad ur

<sup>366</sup> Bassin de Gundestrup (Danemark). Plaque intérieure (A) à la divinité au bois de cerf (Cernunnos), entourée d'animaux. Première moitié du Ier siècle av. J.-C. Hauteur 200 mm. Copenhague, Nationalmuseet

religion e gwir ? Mestr war al loened a vefe gwell marteze. Kement-mañ a vez displeget deomp gant Ivar Paulson : evel gant an dud e bed an hemolc'herien, ez eus daou ene gant al loened, a zo anvet « âme libre » et « âme vitale » gant an oberour<sup>367</sup>. Kent ha mont da hemolc'hiñ e ranker mestroniañ eneoù ar ouezeri ez eur mennet da dapout evit mirout ouzh eneoù al loened lazhet da vezañ o kantreal amañ hag ahont. An ene dieub a zo ivez ene gwarezus al loen:

« [...] the spirits of the species generally take on the collective name of their species » (Paulson, 1964, p. 214).

An holl draoù-se zo c'hoarvezet pell zo:

« [...] the belief in the animal soul belongs, in the history of culture, to a deep-lying stratum of hunter culture which has faded or disappeared wherever planting or agriculture have been superimposed on it » (Ibid., p. 212).

Ne gomzer ket amañ eus al loened doñv(aet) a vez kollet kalz eus o galloud nevet ganto evito da vezañ miret o zalvoudegezh relijiel en azeulioù hag er mojennoù :

« The cattle-raising nomads of central Asia together with their offshoots in North Asia (Turkic and Mongolian tribes) fall outside the limits of our investigation. The hunter economy has survived among them only in small enclaves (in the Altai and Sayan mountains) which can be traced ethnogenetically to an alien, autochthonous substratum of population which was Samoyedic and Ketic in origin » (Paulson, 1964, 208).

Menoziad gwarezour ar ouezeri a gaver e orin e ene al loen evit darn. Ar gredenn e spered ar rummad-loen a zo bet dilezet pe ankounac'het penn-da-benn, nemet e lec'hioù distro :

« But in the isolated mountain regions of the Old World and in the mountain world of the Scandinavian peninsula, remnants of the belief in the guardian

---

<sup>367</sup> (Paulson, 1960, p. 183). Ni hon eus graet gant 'Dream soul' ha 'Body soul'.

spirit of the species have been remarkably well preserved until the present day  
» (Ibid., p. 214).

Setu penaos eo bet troet ar c'hredennoù hemolc'hiñ gant tud n'o deus ket  
disoñjet anezho en un doueelezh uhel evel hini Cernunnos, kredabl :

« It is these deities of game—the really great "masters" and "mistresses" of  
animals—who have up to now been the primary objects of research. In my  
research on North Eurasia I have been able to show, in a number of instances,  
that various higher gods of the game have developed out of the guardian spirits  
of especially important or prominent kinds of animals » (Ibid.).

### *Harappa*

Kemer a ra Ivar Paulson ur skouer lec'hiet e sevenadur an Indus :

« [...] in Haramosh<sup>368</sup>, the central mountain region of Asia, the great fertility  
goddess was also a goddess of wild animal » (Ibid., p. 212).


Un dra gaer eo ar skouer-se rak kavout a reer e sevenadur Harappa un  
doueelezh anvet gant Possehl an « tres e gern bual<sup>369</sup> » :

« Plusieurs millénaires avant notre ère, un sceau de la vallée de l'Indus  
représente un dieu à la face simiesque, aux grandes cornes recourbées, assis en  
tailleur et entouré d'animaux sauvages : lion, éléphant, rhinocéros, bovidé aux  
cornes immenses. Au registre inférieur, des quadrupèdes. C'est déjà, comme le  
[C]ernunnos du bassin, un maître des fauves et un protecteur du cheptel »  
(Duval, 1976, p. 25).

---

<sup>368</sup> Karakoram (Pakistan)

<sup>369</sup> (Possehl, 2002, p. 143).



**Skeudenn 74: “Tres e gern Bual”, Harappa ( 2300 K.K.)<sup>370</sup>**  
(Possehl, 2002, Fig. 3.2, p. 59)

Dre an doare dezrann kaset da benn gant Ivar Paulson, ouzhpenn studiadennoù all disheñvel o sellboent, e c’heller kavout un asez diskoulm da heñvelder souezhus an « Tres e gern bual » bloaziatet tro 2.300 K.K. e Harappa, gant hini Cernunnos eus ar c’hantved diwezhañ K.K. e Gundestrup (Danmark), warbouez stumm ar c’hornioù :

« Cattle were already domesticated in this area from the fifth millenium B.C. and were extremely important in the economy of the Indus Valley civilization » (Possehl, 2002, p. 29).

Ar c’hounideien-se n’o deus ket ankounac’haet spered hemolc’herien o hendud, ma ‘z eur a-du evit displegañ dalc’h koazezet an dudenn gant hini an hemolc’herien dre vras, evel kinniget deomp gant Ann Ross, dreist-holl pa ouzer :

---

<sup>370</sup> Siell (niv. 420) ar « Proto shiva » pe Mahayogi.

« Early forms of languages like Munda or the Altaic group might also fit as possible languages spoken by the peoples of the Indus Age » (Ibid., p. 248).

Kement-se a ro da grediñ e vije bet levezonioù diavaez gant tud o tont eus menezioù an Altay. Setu bremañ un evezhiadenn gant Vendryes a ro harp deomp war an dachenn deorikel avat :

« Lorsqu'on constate des croyances analogues comportant des rites et des cérémonies semblables dans diverses régions séparées à date historique par de vastes espaces qui excluent la possibilité d'influences réciproques, on peut croire que ces croyances remontent à une période d'unité primitive et qu'elles représentent un héritage commun traditionnellement conservé » (Vendryes, 1997, p. 22).

Brav kaer e tere ar frazenn-mañ da heñvelder « Tres e gern bual » ouzh Cernunnos kaoter Gundestrup. Reiñ a ra an oberour da heul skouer an Indez-Iraniz hag ar metou Keltiek - Italek evit displegañ o heñvelderioù dre aspiñat d'al live Indez-Europek boutin.

Ne vo ket tu deomp neoazh kas imbourc'h Harappa pelloc'h er studiadenn-mañ dre aon bout er-maez danvez. Distromp kentoc'h war-du Cernunnos teirdremmek maen-sonn ar Bolards, e-giz ma oa teirdremmek marteze<sup>371</sup> « Tres e gern bual » Harappa :

---

<sup>371</sup> There is claim that this figure on seal 420 is three-faced (Possehl, 2002, p. 141).



**Skeudenn 75: Cernunnos trifleg, Bolards<sup>372</sup>**  
(Deyts, 1992, p.

A-gent dont da wiskañ neuz ur gour teirdremmek, ne voe ar skeudenn a vo anvet Cernunnos diwezhatoc'h met un hanter-gour evel er Val Kamonika da skouer eus Naquane prantad II ar Val Kamonika (war-dro -3.000) hervez Anati, da lavaret eo dibenn an neolitik. Rediet mat omp da gemer e gwir karv Paspardo eus prantad III A (c'houeorvezh -3200 — - 2500), n'emañ gwall bell eus dibenn ar prantad II. War-sav edo er penn kentañ adalek ar 7<sup>vet</sup> kantved K.K. Diwezhatoc'h e vo diskouezet en e goazez<sup>373</sup> war gaoter Gundestrup. Gallout a reer lakaat azeul Cernunnos da gellidañ ken abred hag ar seizhvet kantved K.K. eta, na vefe hennezh hervezomp met hini un azeul karv emdroet adalek an tremen eus an neolitik d'ar c'houeorvezh betek an houarnvezh kreiz. Adalek ar mare-se ez eus tu da heuliañ c'hoazh treuzneuzadurioù tudenn bennañ an azeul, betek kaoter Gundestrup eus ar c'hantved kentañ K.K., pe hini aoter Reims kent an eilvet kantved G.K. Gant an diskoulm-se e c'hellomp klozañ war zivout an azeul karv er Val Kamonika<sup>374</sup>.


---

<sup>372</sup> : Stèle des Bolards détail du Cernunnos triface.


<sup>373</sup> An holl glaskerien n'int ket a-du evit lavarout e tiskouez an div skeudenn an hevelep tudenn.

<sup>374</sup> A-hed studiadenn ar Val Kamonika omp bet rannet etre daou levr Anati, embannet e 1960 ha 1982. En embannadur diwezhañ ne ra anv eus azeul ebet koulz lavaret er Val kamonika, pe e vefe hini an ejen pe hini ar c'harv. Mat a gavomp enta klask bodañ dalc'had an daou embannadur pouezus-mañ.

Bremañ, anat eo ez eo kaoter Gundestrup ur prantad emdroet eus azeul Cernunnos d'an nebeutañ, hep komz eus ar skeudennoù all. Er c'heñver-se eo spletus lenn abegadenn Birkhan:



A



B

Fig. 68. Scène de prière ou de danse autour du dieu cerf.

### Skeudenn 76: Hanter loen, hanter den, Val kamonika

(A. Green, 1997, p. 91. B. Anati, 1960, p. 171 et 1982, p. 176<sup>375</sup>)

« The derivation of such religious pictorial motifs from oriental models of course pose the question of to what extent not only the motifs but also the meaning was taken over, or whether such pictorial motifs were invested with new religious interpretations » (Birkhan, 1999, p. 88)

### *Skuthed*

Dre reterel e venn Birkhan lavarout Trakhed, Skuthed pe Gresianed. Evit a sell ouzh ar Skuthed(-roueel) d'ar mare-se n'eo ket diaes peogwir, etrezo hag a zo degouezhet etre Kaokazia ha Krimea, en tu-hont d'ar menez Karpat war-dro ar c'hwec'hvet kantved K.K. hag an alouberien geltiek betek Galasia (Anatolia) tro an trived kantved K.K., e kaver an Trakhed hag ar C'hresianed en tu-mañ enta d'ar menez Karpat. Ma vije bet levezonet arz ar Gelted e kreiz o brud gant

<sup>375</sup> A. Rock carving of the 7th c. B.C. from Camonica depicting a figure, half-man, half-stag, with emphasis placed on the antlers (Green, 1997, p. 91). B. Scène de prière ou de danse autour du dieu cerf (Anati, 1960, p. 171) et Scène de culte du cerf de la période II. Naquane, roche 14 (Anati, 1982, p. 176).

tresoù reterel an dTrakhed hag ar c'hGresianed, n'eus souezh ebet. Diaesoc'h e vije da demoù mitologel zo bezañ bet amprestet gant an Drouized digant reteriz:

« La facture, ainsi que les costumes, permettent de rattacher l'objet de manière convaincante à l'art dit istro-pontique du milieu thraco-gète du sud-est de l'Europe de la première moitié du Ier s. av. J.-C. » (Kruta, 2000, p. 652).

Hervez Venceslas Kruta e vefe abegiñ orin keltiek an dra evit un orin Trakhek, mont re bell ganti :

« En effet, le traitement très particulier des coiffures et des barbes des divinités ne trouve des analogies que dans le milieu celtique laténien, où il peut être suivi depuis le Ve s. av. J.-C., et n'a été jusqu'ici jamais attesté en milieu thraco-gète » (Ibid.).

Met e-pad ur prantad abretoc'h eo bet an daou sevenadur, Keltiek ha Skuthek e darempred an eil gant egile, da lavaret eo e-pad an Houarnvezh pa veze Hallstatt sevenadur meur Europa, ha stepennoù Ukraina a-hed ar Mor Du ur c'hevre etre ar C'haokaz gant sevenadur ar C'hoban, hag Europa<sup>376</sup>. Met komz a ra an oberour-mañ dreist-holl eus traezoù Hallstatt bet kavet en Ukraina e-ser gant traezoù Skuthek, o tiskouez pegen pell e veze klevet levezon sevenadur meur ar mare en Europa. Komz a ra eus :

« Les plaques de métal caractéristiques en forme de triangle composé de trois cercles habituellement exécutés en or se rencontrent fréquemment dans nos kourganes scythiques. Nous en avons dans la civilisation de Hallstatt. Les longues épingles à cheveux aux têtes quelquefois compliquées sont caractéristiques pour le Caucase et le Zakavkasié (pays au-delà du Caucase), aussi bien que pour Hallstatt. On en rencontre un assez grand nombre dans la civilisation scythique antérieure du territoire de l'Ukraine » (Makarenko, 1930, p. 43).

---

<sup>376</sup> Makarenko, 1930, p. 44



Ar frazennoù-se ne vennont tamm ebet e vije bet an traezoù degaset gant ar Skuthed d'ar Gelted. En enep zoken :

« La présente étude n'est qu'une indication de l'existence en Ukraine d'une civilisation ayant des liens étroits avec la civilisation la plus grande et la plus puissante de l'Europe Centrale, avec celle de Hallstatt. » (Makarenko, 1930, p. 23).

Zo-mui-ken, pa fell da Rice diskouez nerz levezon arz ar Skuthed war Europa ar grenn-amzer en ur kemer skouerenn karv bered Sant-Paol Pl. 54, e skriv kement-mañ:

«Un de ces monuments, originaire du cimetière de Saint-Paul et conservé aujourd'hui au musée de Guildhall à Londres, représente un cerf typiquement scythe. La pose de cet animal n'avait pas beaucoup changé au cours des mille cinq cents années durant lesquelles ce motif fut utilisé par les Scythes. Le dessin de la musculature est ici, à peu de chose près, le même que celui des reliefs de Alaça Hüyük, de quelque deux mille cinq cent ans plus ancien » (Rice, 1958, p. 202).

Mont a ra da glask patrom ar c'harv skuthek gant an Hittited :

« L'extrémité d'un animal deviendra ainsi attribut d'un anise. Selon Frankfort, les Scythes auraient emprunté cette convention au Louristan. Mais, dans ce cas, le Louristan doit lui-même l'avoir prise aux Hittites, qui n'hésitaient pas à faire de la tête d'un animal la queue d'un autre. [...] Il n'est pas invraisemblable que les Scythes aient emprunté cette idée directement aux Hittites; les tombes royales découvertes par Kuftin a Trialeti, a quelque cent cinquante kilomètres de Tiflis, ont livré en effet quantité d'objets d'or et d'argent dont certains sont clairement d'origine hittite. [...] La plus part des animaux du répertoire scythe étaient apparus dès le IV<sup>e</sup> millénaire dans l'art des grandes civilisations » (Ibid., p. 153).

Anzavout a ra an oberour :

« Le problème des origines du style animalier scythe est extrêmement compliqué, car les indices mènent en un nombre infini de directions » (Ibid., p. 154).

Ur roudenn brizius evidomp eo hini Maikop dre an Hittited :

« Un style animalier fleurit également dans le Caucase bien avant l'arrivée des Scythes. C'est dans les tombes royales de Maikop, qui datent du III<sup>e</sup> millénaire, qu'apparaissent pour la première fois les plaques d'or destinées à être cousues sur les vêtements. Les statues votives en bronze de Maikop, représentant des taureaux et des cerfs, témoignent d'un style qui influencera les plus anciens exemplaires de l'art animalier trouvés jusqu'à présent en Anatolie, les statuettes préhittites d'Alaçá-Huyu » (Ibid., pp. 154-155).

Difraostet eo bet an dachenn, hini Cernunnos, anavezet evel keltiek hag hêr d'un azeul karv hon eus dispennet e roudoù betek Maikop ha neuze gant an Hittited. Bremañ e c'heller mont larkoc'h gant hon enklask ha treiñ war-du Inizi Breizh Veur.

O paouez omp lenn e kave da N.K Chadwick e c'helle Iwerzhon bezañ bet trevadennet a-gent 1.000 KK. Ar gudenn-se emamp o vont da studial bremañ.

### 3.5 - INIZI BREIZH VEUR

#### A. BREIZH VEUR

##### *Ragistor*

Goude ma 'z eus tu da lavarout n'eo bet morse poblet a-walc'h Inizi Breizh Veur evit reiñ buhez d'ur spered relijiel ken stank ha birvidik ha bezañ barrek da c'henel marzhoù hollvedel evel re Sibiria, arabat e vije krediñ ne oa den ebet o vevañ di er Paleolitik :

« It should always be remembered that, even if nothing comparable to the wonderful works of art, which are the glory of southern France and northern Spain, has so far been discovered, industries attributable to nearly all the various early cultures do occur in Britain » (FICPPS, 1932, p. 1).

Neoazh, ret eo gouverkañ ne c'hell dont eus ar prantadoù-se mammenn den ebet a vije bet ganet diouti un azeul karv bennak. Zoken, evit a sell ouzh ar Paleolitik Abred (pe Izel), d.l.e. Mousterian, Acheulean, ez eus tu da lenn, diwar-benn al Lower Summertown-Radley Terrace er mareoù-se :

« Much Mammouth, though no Reindeer occurs » (Ibid. p. 8).

Ha kenderc'hel a ra an diskan-se heñvel a-hed ar Paleolitik Uhel :


«The Upper Palaeolithic cultures are somewhat poorly represented in Britain » (Ibid., p. 11).

« It is doubtful whether Solutrean man ever seriously invaded this country » (Ibid.)

« No true Magdalenian industry has yet been found in this country and only a few undoubted Magdalenian tools » (Ibid.).

« Upper Palaeolithic works of art are extremely rare in this country. No cave art has yet been discovered. [...] sculptures have never been found, and engravings are most uncommon » (Ibid., p. 12).

Koulskoude eo reizh menegiñ trolinenn den Creswell Crag :



**Skeudenn 77 : Den Creswell Crag**  
(FICPPS, 1932, p. 12)

« It consists of a piece of bone on which is engraved the figure of a man in exactly the same style as that used in making the human figures found on the ceiling at Altamira under the famous frieze [...]. These have always been considered to be Aurignacian in date; here is further confirmation » (Ibid., p. 13).

Gant ar Mezolitik e c'hoarvez daou dra : mont a ra da get anevaled ar prantadoù kent hag ouzhpenn, aloubet eo an tolead gant tud nevez, un tammig evel er Val kamonika e-giz m'eo bet gwelet a-ziagent :

« Great changes in the climate took place in Britain at the end of Quaternary times, and the Pleistocene fauna disappeared never to return. In the succeeding Mesolithic period several distinct cultures appeared, and while some of the industries were at least in part due to the persistence of late Palaeolithic (Creswellian) cultural elements, others seem mainly to have been the work of

foreign immigrants, apparently from Belgium, who at this time invaded the country » (Ibid.)

Gouzout a reomp e oa an dud-se Tardenoaziz eus Beljia :

« [...] Mr. Francis Buckley, [...] has shown the exact similarity between the earliest Mesolithic industries found there and those of Tardenoisean age in Belgium » (Ibid., p. 15).

Gouzout a reomp ivez eo bet kavet an dud-se betek Bro Skoz :

« The fact that these later Mesolithic industries have been found [from Scotland to near Land's End] frequently more or less associated with early Metal Age objects has suggested the idea that the true Neolithic culture in this country occupied only a very short period, and that in out of the way districts our late Mesolithic cultures survived until the early Bronze Age » (Ibid.).

Uheldirioù Bro Skos a zo toleadoù distro. O tiskouez emamp eo tremenet an toleadoù-se eus ar mezolitik d'an aremvezh gant un tremen berr hepken dre an neolitik. Gwelet e vo diwezhatoc'h pegen pouezus e vo evit hol lavar ar spisadenn-se.

Menegomp memestra un argadenn bennak eus sevenadur Maglemose o tont eus ar broioù Baltek enta :

« Incidentally it seems probable that the engravings found on pieces of flint crust at Grime's Graves may be due to the influence of the 'Arctic' culture, which itself has a root in that of Maglemose; the specimen from Grime's Graves is therefore to be compared with the rock-engravings at Böla, Bögge, &c. » (Ibid.).

Komzet hon eus eus murengavadurioù Böla pe Bohusla pergen e bro Sued er pennad a-zivout Skandinavia.

### *Uheldirioù bro Skos*

Un dra anat hag a dalvez ar boan resisaat memestra eo ar rannet m'emañ Breizh Veur etre an Izeldirioù hag an Uheldirioù, Bro Skoz an Hanternoz a-bezh o vezañ uhel an douaroù eno. E-giz-se e komprenet gwelloc'h perak e c'hell ar sevenadurioù nevez o tont eus an douar-bras c'hoari o mestr war an douaroù izel, pa vezont lonket peurliesañ en tiriou uhel gant an enbroidi.

Hollbouezus evidomp eo ar menoz-mañ displeget fraezh gant aozerien al levr :

« The first invasion of which we can form a clear picture is that of the Beaker-folk<sup>377</sup>, whose intensive occupation was confined to southern and eastern Britain. The next racial movement was probably that which brought in the Late Bronze Age<sup>378</sup>; only southern and eastern Britain were effectively occupied, as the ceramics of the period show » (FICPPS, 1932, p. 17).

Hag evit distreiñ d'an Douaroù Uhel :

« From the seventh or sixth century B.C. onwards to the coming of the Romans, successive movements of iron-using folk into the same area of Britain are apparent; but there is very little evidence of the effective presence of the iron culture in the Highland Zone until the Christian era » (Ibid.).

Ar prederioù-se a vo implijet ganeomp pa vo komzet eus azeul ar c'harv, pa ouzer ouzhpenn eo vije bet douget azeul Cernunnos kerkent hag an houarnvezh. Menegiñ a reomp ar frazenn-mañ ivez rak talvezout a vefe bezañ brudet muioc'h :

« Finally, the Anglo-Saxons in the fifth and sixth centuries extended their conquests over the whole of the Lowland Zone; beyond that area their progress was exceedingly slow, and there is evidence of fusion with earlier elements rather than replacement » (Ibid., p. 18).

---

<sup>377</sup> Gobedoù-Kloc'h

<sup>378</sup> En Iwerzhon da heul

Arabat disoñjal ivez evit klokaat hon anaoudegezh eus doare emdreiñ an Douaroù Uhel, ez eus un hent all dre vor etre Iwerzhon ha Breizh-Veur, betek Skandinavia, a oa aet gantañ tud sevenadur ar Mein Meur.

Gant ar frazenn-mañ e vo tu klozañ an diviz :

« The Highland Zone of Britain then receives influences from the west by sea as well as from the east by land; the former may under certain circumstances be very powerful. In the third millennium B.C. the megalithic civilization seems to have developed along this traffic route; it occupied the Highland Zone from Cornwall to Caithness.

[...]. Seaborne traffic declined in the Middle Bronze Age; this decline, and the invasions of the Late Bronze Age, closed the period when the British Isles were in the van of western European civilization » (Ibid.).

Evit krennañ e c'hellomp lavarout n'eo deuet alouber ebet etre ar Gobedoù Kloc'h hag an Aremvezh diwezhañ, petra bennak ma oa anavezet ar metal e Bro Skoz adalek an aremvezh kentañ, goude dezhi bezañ aet e-maez eus ar mezolitik dre un tremen berr en neolitik. Evit an holl abegoù-se e komprener gwelloc'h henouriezh Bro Skos a zo un tammig evel Sibiria, ur gwir neved evidomp.

### *Kaledonia*

Gallout a reer spisaat bremañ dibunadur an darvoudoù rak-istorel-se. Emaomp o vont da studial da gentañ pennad Stuart Piggott "The archaeological background" embannet gant F.T. Wainwright e "The problem of the Picts", ma tispleg deomp :

« By about 1500 B.C. agricultural colonies had been established along the Atlantic sea-ways for four or five centuries and, if wholly stone-using in their earliest phases, had soon become involved in the trade and production of copper, bronze and gold for tools and adornment. The settlements of these

people are mainly marked today by their monumental family vaults, or chambered cairns, in the Hebrides, Orkney, Shetland, and (as a result of traffic up the Great Glen) in the North Sea area round Inverness and northwards to Caithness. Such tombs appear to belong to the first stages of colonisation by immigrant groups of Iberian and West French antecedents » (Wainwright, 1955, p. 55).

Anavezout a reomp amañ tud an Neolitik, koulz an Neolitiked A, hag ar Beziou-Trepass, a ouzomp ervat int aet betek Skara Brae :

« Connections with Ireland, direct or indirect, are implied by the occurrence on vessels from Skara Brae and from several sites in southern England of motifs that can be matched precisely in the art of the Boyne passage-graves. Indeed, circumstantial evidence suggests that the passage-graves of the Maes Howe group in Orkney, closely linked with the Boyne group, were built by the communities who used grooved ware » (Renfrew, 1974, p. 118-119).

Ha gouzout a reomp endeo eo aet an Neolitiked A, betek Bro-Skos. An dud-se "staliet a-hed an hentoù-mor Atlantel, abaoe 4 pe 5 kantved", a gomz Piggott diwar o fenn a oa deuet dezho anaoudegezh ar metal gant tud tremenet da Iwerzhon :

« [...] the early establishment of centres of metal-working in Ireland, at least by 1700 B.C<sup>379</sup>. or so, was soon to bring the Atlantic province of Scotland, as well as areas outside it, within the ambit of a common Hiberno-Scottish school of metallurgy » (Wainwright, 1955, p. 55).

N'hon eus ket disoñjet ivez frazenn Herity a lavare :

« Defilement came soon enough, with the rush of new, Food Vessel people, burying in the single rite of the Early Bronze Age, who wished to establish a place for their dead with these gods of an outworn but most prestigious cult.

---

<sup>379</sup> S.O. COLES



Beaker people had come, but only on pilgrimage, squatting in the shadow of the sacred cairn, converting the last of the passage grave people at Monknewtown to a new, central European way of burial, and circling the tombs of Newgrange 4 and Ballynahatty with their massive embankments, New Grange itself, Moyadam and Ballynoe with their peristaliths » (Herity, 1974, p. 186-187).

Heuliet eo bet enta ar Gobedoù Kloc'h gant al Listri-Boued en Aremvezh kentañ. Setu ar pezh a zispleg deomp Piggott diwar-benn darvoudoù ar prantad-se :

« Within the first quarter of the second millenium B.C., and currently with much of the Atlantic colonisation just described, eastern Scotland was, in common with eastern England, also receiving immigrants from the North Sea area, coming from homelands likely to have been in the main between the Elbe and the Rhine » (Wainwright, 1955, p. 55).

An drevadennerien-se, marc'hadourien war varc'h o doa anaoudegezh eus ar metal daoust ma ne veze ket greantet ganto, a vezie o re varv unan hag unan e-barzh poulloù riblet gant mein-plat e stumm kestoù. Setu neuze an doare e tolead Bro Skos:

« In Europe the cultures ancestral to these in Britain had affiliations with the Warriors Cultures widely spread from northern Europe to the south Russian steppe, and a case has been made for regarding such cultures as representing an early dispersal of peoples speaking Indo-European dialects.

These then were the cultural components about 1500 B.C. in the area later to be that of the Picts : surviving hunter-fisher traditions of Mesolithic origin, mingled with intrusive agricultural economies ; a powerful element represented by the single-grave burials ; and, especially in the north of the area, an Atlantic-derived component » (Ibid., p. 56).

Evit klokaat an daolenn e rankomp mont da c'houlenñ o ali gant arbennigourien:

« The first of these phases is bound up with the appearance in Britain, primarily southern and eastern Britain, of Bell Beakers from the Middle Rhine region (Clarke 1966). The makers of such Beakers were in contact with nineteenth and eighteenth-century developments in Saxo-Thuringia, and in the upper Danube valley, where what is referred to as the Early Bronze Age was in existence in Christlein's Phases 1 and 2 (Christlein 1964). [...]. The recognition of Bell Beakers of this character in Ireland suggests it is likely that penetration to the west was swift. Other groups had descended on eastern Britain as far north as the Moray Firth by the early seventeenth century, and it appears that metal-working was present in Ireland and in southern England within the eighteenth century, and in northern Britain at the same time or, more likely, shortly after » (Coles, 1968-1969, p. 69).

Digenvezet hon eus ul luskad aloubiñ etre dibenn an Neolitik ha derou an Aremvezh eus tud o tont eus Europa an Hanternoz anvet Gobedoù Kloc'h ha tud all diwezhatoc'h gant o Listri-Boued. Gouzout a reomp ivez eo bet kavet an dud-se betek Iwerzhon. Stag eo ar re-se ouzh ar metal hag an aour en Iwerzhon. Deiziataet tro 1700 pe abretoc'h gant Hubert. Ur yezh Indez-Europek a vez komzet ganto.

## B. HEN-GELTED

Goude bezañ taolet ur sell hollek war Breizh-Veur emamp o vont da zistreiñ war an douar-bras ma vo adkavet an Indez-Europiz e lec'h ma oant bet dilezet diagent :

« In the early Bronze Age she [Ireland] stays, as it were, half-way between the Iberian and the Teutonic world. The cultural influences came from the south-west and were handed on to the northern Continent. It was mainly through North Britain that this current passed » (Mahr, 1937, p. 391).

Un darvoud pouezus zo vont da c'hoarvezout :

« In the Middle Bronze Age the Iberian influence upon Ireland gradually loses potency » (Ibid.).

D'ar mare-se e c'heller kregiñ komz eus ar gKelted kentañ marteze :

« In the Late Bronze Age [...]. The connections with Iberia are completely severed. Instead we find an overwhelming cultural influence from the northern Continent, or, to be more exact, from northern Central Europe » (Ibid., p. 391).

N'hon eus ket disoñjet eo bet aloubet douaroù Izel Inizi Breizh-Veur da gentañ :

« It was stated above that the new types reached Ireland through the medium of lowland Britain. The route across the Irish Sea is clearly indicated by the distribution of the new types in Ireland. [...], everybody who has done practical work in Irish prehistory will agree that the new types all pour in through County Antrim. [...] the socketed axes spread over the country from a starting-point in north-east Ireland. [...] the encrusted urn came via Ulster. It is the same with the swords » (Ibid., p. 392).

Tostaat a reomp bremañ ouzh prantadoù anavezet ganeomp, evel ar parkoù-Jarl da skouer, teirvet dremm aremvezh Europa, goude Unetis hag ar C'hrugelloù :

« In a similar way cemeteries somewhat approaching the description of an 'Urnfield' clearly belong to the northern half of eastern Ireland. No real 'Urnfield' seems to exist, but whatever might be compared with Urnfields was met in those parts of the country, and not far inland » (Ibid.)

Ezhomm zo emverzout ar c'hemm bras a zo c'hoarvezet d'ar mare-se :

« But it is already patently obvious that we are dealing, in Ireland as well as in Britain, with a complete volte-face of culture. And the principal new types hint at a continental focus and at a cultural and political upheaval in this focus, which, by general consent of all competent authorities, is broadly circumscribed by the term 'urnfield complex.'

It is generally admitted that the Urnfield culture of Eastern Germany (inland regions only), Western Poland, large parts of what is now Czechoslovakia, and an ill-defined part of the Hungarian plain, at about the end of our Middle Bronze Age, shows a great commotion, resulting in an expansion of certain types over large tracts of Europe. [...]. That some of the most characteristic Hallstatt elements are lineal derivatives from the Urnfield heritage is generally admitted » (Ibid. p. 393).

Adkavout a reomp gwriziennoù hanternoz kreiz Europa a zo bet klevet endeo o levezon betek Skos hag Iwerzhon, daoust ma oa bet graet anv d'ar mare-se eus ar Gobedoù Kloc'h, met arabat faziañ rak ar re-se ne oant met marc'hadourien war varc'h a anaveze ar metal :

« These dates indicate that the earliest corded beakers precede the bell beakers in northwestern Europe. The Únětice culture in central Europe, with which a real metal culture starts, immediately succeeds the Bell Beaker and the Corded period » (Gimbutas, 1965, p. 29).

Dre vras e c'heller kregiñ da ober anv adalek ar mare-se eus livenn-gein an aremvezh, gouez da Marija Gimbutas, ha merzout a-du gant Jacques Briard kellid an Hen-Geltiegezh.

#### *An aloubadennoù*

Setu an amzeriadur kinniget gant Mahr a-zivout derou ar c'heltiegezh da vat e dibenn an aremvezh en Inizi Breizh Veur:

« For all the reasons above stated I would thus fix 900 B.C. as the date at which the Late Bronze Age began in Ireland. Crawford is inclined to date his Goidelic invasion to about 800-700 B.C., and he may be right as to the arrival of the main bands themselves. But as to the earliest well-developed Late Bronze Age types the date in the Handbook, viz., 1000 B.C., seems to be nearer to the truth » (Ibid., p. 395).

Gwelet e vo diwezhatoc'h e vo roet ar c'houlzad-se gant Hector Munro Chadwick evit ar meuriadoù kentañ anavezet war douaroù Skos hag Iwerzhon. Komzet eo bet endeo eus efedoù al luskad tud-se er Val Kamonika ha Ledenez Iberia :

« This invasion movement is finally due to the Urnfield people themselves. But it is very doubtful whether more than a few small bands of them can ever have reached Britain, let alone Ireland. [...]. Already in France their traces are thinning out (although Catalonia shows a strong transplanted group) » (Ibid., p. 397).

Setu an daolenn hervez Mahr :

« Their tremendous impact upon the Tumulus Culture and generally upon all neighbouring groups, particularly also the Rhineland, created the general upheaval. But the process must have started in a gradual way before it reached the final stage. [...]. The population of this central area we need not hesitate to

identify with the early Kelts. (to what extent also the Tumulus Culture of the Danubian corridor contained Keltic elements it is as yet impossible to say) » (Ibid.)

Anvadur koshañ Kelted eo hon eus kavet betek-henn, da lavaret eo tud ar Parkoù-Jarl kentañ (marteze ar C'hruelloù endeo ?). Selaouomp aketus rak poblekadur kentañ Breizh-Veur eo goude hini berr-bad ar Gobedoù Kloc'h hag al Listri-Boued:

« [...] : I believe that the early Kelts on the Rhine and in eastern France, in Reinecke D, were under a growing pressure coming in the last instance from the Urnfield area. They sought release in a western and a north-western direction, and their D-culture began to spread to lowland Britain. Whilst this process was going on the Urnfield people finally got the upper hand and their cultural outfit replaced the Urnfield conquest and culturally transformed by the new overlords some of whom also settled amongst the old population ; other tribes moved further west ; while others still gave way completely and conquered Britain and Ireland, [...] » (Ibid., p. 399).

Gouzout a reomp eo aet darn eus an dud dilec'hiet da glask repu gant divroerien an houarnvezh e Torosad Kreiz Bro C'hall pe er Val Kamonika, a zegemero anezho goude bezañ degemeret saverien delwennoù mein-sonn :

« The bulk of the old people probably remained in their old territory. But others gave way : in a north-western direction (as we have seen), but partly also in a south-western. The latter tribes seem to have retreated into the interior of France, with their Late Bronze Age culture which was very slow to accept the new Hallstatt forms. Were they perhaps responsible for the Kelticisation of those parts of France where the megalithic heritage had still lingered on ? » (Ibid.).

Ar frazennoù diwezhañ a gas koun eus ar pezh hon eus gwelet o c'hoarvezout er Val Kamonika, hag er frazenn da heul e vrastaolenn Mahr evidomp an nerzhioù sevenadurel a vez o kevezañ en toledoù hag er prantadoù-se :

« In this struggle [between the forces of the Mediterranean world and of Europe north of the Alps] Indogermanic Europe was the final victor and the Kelticisation of Britain and Ireland denotes the final defeat of the old megalithic world in Atlantic Europe » (Ibid.).

Met distroomp kentoc'h d'ar Gelted :

« From the foregoing remarks the reader will already have guessed that I believe in a date for the Goidelic colonisation of Ireland somewhere about 900 B.C. ; that I would equate this conquest with the establishment of the main bulk of the Late Bronze Age here, and that the Goidels should have reached Ireland via Britain » (Ibid.).

Ni ivez e-pad ur mare, a-gevret gant H. Hubert hon doa soñjet er Bell Beaker evel annezidi “Goidel“ Inizi Breizh-Veur, met Mahr a gav dezhañ n'eo ket stank a-walc'h roudoù keltiek ar c'hondon<sup>380</sup> evit un hevelep diskoulm. Neuze, ar Gelted gentañ a oa dindan voustr ar Parkoù-Jarl en ur zilestrañ war aodoù Breizh-Veur, adaptet emberr ganto int neuze hag aloubiñ an enezenn hag Iwerzhon. Stag ouzh an arkeologiezh denoniel-se ez eus kudenn ar yezh evel-just a veze komzet gant an dud-se :

Ar Ouezeled hervez Mahr, a zeue eus an douar bras ha n'o doa ket kemeret perzh en tremen d'ar gweuzel :

« [...] ; en celtique, le passage à la labiale est panceltique pour la sonore simple<sup>381</sup>, mais ne s'est produit pour la sourde<sup>382</sup> qu'en gaulois et en brittonique : en regard de lit. *keturí* « quatre », lat. *quattuor*, le vieux gallois a *petguar*, le gaulois *petor-*, conservé dans l'emprunt latin *petor-ritum* « char à quatre roues »; ces dialectes ont ainsi restitué un *p*, alors que le *\*p* indo-européen avait disparu en celtique commun ; au contraire le gaélique a conservé *q* (attesté dans les inscriptions ogamiques) et en a fait *c* avant la date

---

<sup>380</sup> Mahr, 1937, p. 399

<sup>381</sup> \*b, \*d, \*g, \*gw

<sup>382</sup> \*p, \*t, \*k, \*kw

des plus anciens textes littéraires : v. irl. *cethir* « quatre ». (Meillet, 1973, p. 92).

Peogwir o doa ar Ouezeled divroet a-gent an tremen-se :

« I held (a) that the *q* Kelts came together with the Late Bronze Age from a continental homeland somewhere around the Rhine ; (b) that they came via Britain and that they landed first in north-east Ulster ; (c) that the small La Tène<sup>383</sup> invasion into Ireland was limited to the same corner of the country and that its carriers must have been small bands of British *p* Kelts who could not have arrived before 250 or 200 B.C. » (Mahr, 1937, p. 401).

Oc'h ober war-dro emaomp geneliezh denoniel ha yezhoniel Inizi Breizh-Veur, pehini a zo hollbouezus er studioù keltiek, goude ma n'eo ket hon danvez-studi kentañ. Ur resiadenn c'hoazh :

« (We must also remember that up to modern times *q* Keltic was the language of the Isle of Man, and it is a very possible hypothesis that parts of Scotland spoke a *q* Keltic dialect even before that of Dál Riada was imposed upon it. This earlier dialect it may have retained, due to its lack of communication with the Brythonic-speaking Continent<sup>384</sup>) » (Ibid., p. 401-402).

Setu bremañ an daolenn a ro Mahr deomp eus aloubadennoù an tiriou a zedenn ac'hanomp :

« (3) The megalithic invasion, heralding the Bronze Age. About 2100 B.C. Source : Iberia. Route : Brittany-Cornwall-Irish Sea.

(4) The Late Bronze Age invasion. About 900 B.C. Source : Middle (and Lower?) Rhine and Eastern, plus Northern, France. Route : Lowland Britain-Cumberland-Wigtownshire.

---

<sup>383</sup> Arkeologiezh hiziv a stal an Ulated (Érainn) en Iwerzhon tro -400, hag an Érainn (Fir Bolg, Builg, *Belgae*) tro -600 (Boucherit, 2010, p. 1, notennoù 7-11). S.O. O'Kelly, in Ó Cróinín, 2005, pp. 128-133.

<sup>384</sup> Kement-se hervezomp a stourm a-du gant ur c'hult ar c'harveg e Kaledonia.



(5) The La Tène wave. About 200 or 150 B.C.<sup>385</sup>. British Kelts, coming from Wigtownshire. Occupied only a limited district of north-eastern Ireland » (Ibid., p. 402).

Da eo ouzhpennañ kerkent eo bet lakaet anat da c'houde – prezegenn Mahr a oa bet embannet e 1937 – un doare all da rannañ an daou rummad aloubadennoù a-benn ar fin, hini an aremvezh diwezhañ tro 1000, ha re an houarnvezh A (600), B (400), ha C (100) :

« Moreover, the progress of archaeological research has tended to confirm Rhys's doctrine of the two series of invasions<sup>2</sup>. It is now generally agreed that one series (Late Bronze Age) began c. 1000 B.C. and continued at intervals for the next two or three centuries, while the second, now known as Iron Age A, began c. 600 or a little earlier. A third series (Iron Age B) is believed to have begun in the latter part of the fourth century, and a fourth (Iron Age C) in the first century (B.C.), but this last affected only the south-east of England, and need not concern us here » (Chadwick., 1949, p. 70).

Degas a reomp da goun prantadoù Anati eus ar Val Kamonika ma komze eus an tremen eus an aremvezh d'an houarnvezh etre -1000 (pe abretoc'h) hag -800<sup>386</sup>. An amzeriadur-se a zere deomp kenañ rak ne grog ar c'harv da vezañ engravet adalek ar prantad III<sup>387</sup> nemetken, da lavaret eo adalek ar mare-se, hag heuliet e vo gant skeudennoù kentañ Cernunnos gouez da Anati avat, tro 780 d.l.e. Hallstatt.

### *An alouberien*

Tu a zo da deurel ur sell a-dostoc'h ouzh an dud o deus kemeret perzh e aloubadenn gentañ Inizi Breizh-Veur :

---

<sup>385</sup> Abretoc'h e gwirionez

<sup>386</sup> S.o. p. 422

<sup>387</sup> S.o. p. 423

« During the Late Bronze Age, perhaps at its outset, about 1000 B.C. or at all events not long afterwards, a movement of Celtic peoples took place from the Continent to our islands. The names of three of these peoples have survived as the Qritani or Coritani (later known as the Picts), the Dumnoni, and the Cornovii » (Chadwick, 1949, p. xvii).

Ar brastres-se omp o paouez lakaat war wel a hañval bezañ rannet gant skiantourien all evel Henry Hubert<sup>388</sup> da skouer. Met gallout a reer gronnañ a-dostoc'h an doare tud a yae da sevel ar Gelted kentañ :

« Population pas très dense, agricole, attirée surtout par le bon sol des bandes de *loess*, défrichant au fur et à mesure les champs nécessaires, épuisant le sol et se déplaçant, ou population pastorale, sans réserves de fourrages, par conséquent dispersée: voilà la masse. Au milieu circulent des tribus de chasseurs de pêcheurs, ou de brigands, tribus guerrières et conquérantes, attirées par les forêts et par les hauteurs, ou par les rivières. Ce sont les hommes de la céramique à zones ou ceux de la céramique à impression de cordelettes, qui lui ressemble beaucoup.

Cet état de choses correspond à peu près à la région qui s'étend de la mer du Nord à la Suisse, de la vallée de la Meuse à la vallée de l'Oder. Les limites occidentales et orientales sont moins précises que celles qui ont été tracées jusqu'à présent. Cette imprécision correspond à des formations plus diffuses et plus enchevêtrées. C'est dans ce milieu que sont nées les sociétés celtiques, autour desquelles s'est cristallisée finalement toute la population » (Hubert, 1974, p. 186).

Adkavout a reomp neuze ar re Gordennet hon eus studiet un tammig abretoc'h pa vezemp o plediñ gant tolead Skandinavia. Gwriziennoù an dud-se a oa bet lec'hiet e-touez Indez-Europiz, da lavaret eo Kourganiz Usatovo hag Europiz kozh Tripolye. E Usatovo e oa bet kavet roudoù karveded. Ar gwellañ a vefe marteze advenegiñ frazenn Gimbutas a ziskouez penaos e oa bet diaraoget tud

---

<sup>388</sup> Hubert, 1974, pp. 141-142

ar Priaj Kordennet gant tud an Añforenoù Boul kent d'ar re gentañ kas ar sevenadur kourgan betek reter Iwerzhon :

« At any rate, it is apparent even at this stage of research that the emergence of the Globular Amphora culture in the North European plain is a phenomenon crucial to the question of the Indo-European origin. This culture was a decisive factor in the formation of the succeeding Corded Pottery culture which carried the Kurgan tradition to Denmark and across the North Sea to as far as eastern Ireland (see Herity 1981), to southern Sweden and Norway, to the East Baltic, and to central Russia (as the « Fat'janovo » branch) » (Gimbutas, 1997, p. 291).

Met n'omp ket rediet da chom a sav gant an Añforenoù Boull. Bez e c'heller, trugarez d'ar yezhoniezh adpignat pelloc'h en amzer betek ar yezhoù Hen-Keltiek, Indez-Iranek, ha zoken Tokarek. Anavezet eo ar gerentiezh etre ar c'heltieg had an Indez-Iraneg dre ur c'heriaoueg voutin met berr tre, stummoù gwregel ar sifroù tri ha pevar da skouer, ha gerioù ar yezh relijiel pe politik-ha-relijiel<sup>389</sup>:

« Le celtique possède deux mots pour désigner la foi religieuse, l'irlandais *crabud*, gallois *crefydd*, et l'irlandais *iress*. Ils n'ont de correspondant qu'en indo-iranien : le sanscrit *viçrabdah*, qui signifie croyant, et le pehlvi *parast*, adorateur.

Le sanscrit *çraddhā*, « la confiance dans les vertus de l'offrande », a pour équivalents le latin *crēdō* et l'irlandais *cretim* » (Hubert, p. 84-85).

An tokarianeg a zo rann eus ar yezhoù *centum* :

« Les affinités des dialectes désignés actuellement sous le nom de tokharien et du celtique sont de nature grammaticale, comme celles du celtique et de l'italique. [...]. Les Tokhariens ont vécu dans l'ambiance indienne, ont été nourris de pensée et de littérature indiennes ; leur vocabulaire s'en ressent. C'est

---

<sup>389</sup> Hubert, 1974, p. 83-84

la structure de leur langue qui invite à leur chercher des cousinages occidentaux » (Ibid.).

Ret eo chom a sav amañ un tammig evit gouverkañ naderezh souezhus Henri Hubert a raksante kerkent ha 1974, evel meneget e raksrid al levr a-hend-all, an ereoù edo o unaniñ ar Gelted ouzh Azia :

« Mais faut-il penser qu'ils aient cheminé d'Europe en Asie? L'archéologie préhistorique a noté des traces nombreuses de cheminements d'Europe en Asie à des dates qui ne s'accordent pas à celle que l'on peut assigner à la dissociation d'un groupe occidental dont aurait fait partie le tokharien. Je suis persuadé qu'il s'en est produit d'autres d'Asie en Europe, précisément à cette date. Je crois aussi que la découverte du tokharien, comme celle des inscriptions hittites, oblige à reporter vers l'Est le berceau des langues indo-européennes et que celles-ci étaient relativement différenciées avant leur expansion vers l'Occident » (Ibid.).

Krediñ a rafed lenn levr David Anthony embannet e 2007 ! Ur ger hepken a ra diouer da H. Hubert, 'divroadeg Repin' an hini eo :

« C'est vers le centre de l'Europe, probablement autour de la Bohême, que ces rapports complexes [des langues celtiques avec les autres langues indo-européennes de l'Europe] peuvent s'être trouvés réalisés presque intégralement et simultanément pendant ce temps où s'est décomposée la communauté italo-celtique. Les comparaisons qui ont été faites entre le celtique et les langues orientales de l'indo-européen, indo-iranien et tokharien, ouvrent des vues sur un passé plus lointain, sans permettre de reculer outre mesure la séparation des groupes extrêmes, et invite à déplacer vers l'Orient, où je n'essaierai pas de les retrouver, le point de jonction des groupes voisins » (Ibid., p. 85-86).

An anv Bohême-se a deu eus ar meuriad Keltiek ar vBoyaned<sup>390</sup> :

---

<sup>390</sup> <http://fr.wikipedia.org/wiki/Bohême>

« Le quadrilatère naturel de la Bohême qui constitue aujourd’hui la partie occidentale de la République tchèque fait probablement partie de l’aire initiale des peuples celtiques, avec une continuité qui permet de remonter de l’âge du fer jusqu’au milieu du IIIe millénaire av . J.-C. » (Kruta, 2000, p. 473).

Evezhiadennoù Gimbutas ha Briard diwar-benn levezon geltiek aremvezh Europa a zo neuze fur ha skiantek. En enep da H. Hubert avat, hon eus-ni klasket ober mui pe vui al labour adkavout gwriziennoù pellañ ar strolladoù yezh, daoust ma n’eo ket an Hen-Kelted hon eus klasket heuliañ diouzh o roudoù, met kentoc’h azeul ar c’harv. Evel-se hon eus dizoloet daou azeul boutin d’an Indez-Europiz kent an disrann, hini ar c’harv gant chaseourien, hag hini an tarv gant mesaerien. E-touez an Indez-Europiz-se, e-touez ar re gentañ zoken, e kement m’he deus o yezh darempredoù gant an Tokarianeg, marteze ivez an ‘Hittiteg’ dre azeul ar c’harv enlouc’het er Gouezeleg *cern*, edo o vevañ tud a vo anvet Kelted diwezhatoc’h.

### C. SKOS RAGISTOREL

Emaomp o vont da adkavout diouzh ur sellboent all ar pezh a zisplege deomp Mahr diwar-benn ar sevenadur Atlantel, a oa pennañ e levezon war aodoù kornog Europa e-pad meur a vilved betek an troc'h c'hoarvezet etre an aremvezh kreiz ha diwezhañ en Inizi Breiz-Veur. Da gentañ ez eus bet levezon sevenadur ar mein meur ken galloudus e Arvorika, Iwerzhon ha Bro Skos, ha pelloc'h emichañs :

« By about 1500 B.C. agricultural colonies had been established along the Atlantic sea-ways for four or five centuries [...] » (Ibid.).

Da lavaret eo ken abred ha 2.000 K.K. :

« The settlements of these people are mainly marked today by their monumental family vaults, or chambered cairns, in the Hebrides, Orkney, Shetland, and (as a result of traffic up the Great Glen) in the North Sea area round Inverness and northwards to Caithness. Such tombs appear to belong to the first stages of colonisation by immigrant groups of Iberian and West French antecedents » (Ibid.).

Notennomp diouzhtu pa gomz Wainwright eus trevadennerien o tont dre an hent Atlantel ez eo an dud o deus savet Gavrinis, ha goude-se lec'hioù meur Iwerzhon, NewGrange, hag ivez Skara Brae. Eno e vo enklozet ganto elfennoù eus ar broioù pennahelel :

« It is likely that the colonists arriving by the Atlantic routes found, and absorbed into their economy, a *sparse and scattered* population of stone-using hunter-fishers in the Western Isles, heirs to the ancient traditions of the Palaeolithic and Mesolithic cultures of northern Europe, and that cultures of mixed tradition ensued » (Wainwright, 1955, p. 55).

Piv 'ta a oa ar chaseourien-pesketaerien-se rouez ha strewet oc'h ober gant mein? Komzet hon eus diwar o fenn uheloc'hik : Tardenoaziz eus ar Mezolitik a oa eus an dud-se, paourat marteze met bev c'hoazh:

« Archaeology represents—perhaps misrepresents—Tardenoisians as minute groups eking out a precarious existence with an unpractical equipment and largely isolated from one another by marshes and forests. But they certainly were able to survive, if not to multiply, and succeeded in maintaining their industrial traditions even after immigrants farmers had introduced a new economy and the Neolithic Age » (Childe, 1942, p. 24).

An dud-se a sav an ere etre ar paleolitik diwezhañ ha derou an neolitik peogwir e vo kavet anezho er sevenadur Atlantel. Evit a sell ouzh Bro Skos, amañ ivez eo deuet tud, Tardenoaziz un tammig diwar-lerc'h da enbroañ :

« In the north of England many assemblages of microliths lack the micro-burin, as do the late Mendip groups ; such doubtless belong to descendants of the Boreal immigrants living in Atlantic or Sub-Boreal times. Such belated groups spread into Scotland. On sandy stretches in Tweedside and Ayrshire, and even along the Dee in Kincardineshire, assemblages of microliths, many of them geometric, attest the immigration of Tardenoisian families » (Childe, 1942, p. 24-25)

Pouezus eo disorc'h an dezrann:

« The Tardenoisian settlement of Scotland is thus late ; it may be post-mesolithic in time though the mesolithic economy was presumably kept intact ». (Ibid.)

Bremañ e c'heller komz da vat eus ar pezh a hañval bezañ e gwir ar gwellañ arguzenn evit un azeul ar c'harv kent ar Gelted en Europa ar c'hornog, da lavaret eo Star Carr, ur sevenadur eus dibenn ar paleolitik pe derou ar mezolitik

an hini eo, doare Maglemez, lec'hiet e hanternoz Yorkshire, etre 8700 K.K. ha 8460 K.K.<sup>391</sup>:



**Skeudenn 78 : Koef banheziou kirvi, Star Carr<sup>392</sup>**

[[http://www.britishmuseum.org/explore/highlights/highlight\\_objects/pe\\_prb/r/red\\_deer\\_antler\\_head-dress.aspx](http://www.britishmuseum.org/explore/highlights/highlight_objects/pe_prb/r/red_deer_antler_head-dress.aspx)]

« The abundant and well-preserved discoveries at Star Carr include a large number of antler spear heads barbed along a single edge (Fig. 11 : 1-2) as well as ‘mattock heads’ manufactured from elk antler, skin-scraping tools made from the split metapodial bones of wild oxen, bone awls or pins, and a series of red deer antler ‘frontlets’ which may have served either as hunting disguises or as head-dresses in some ceremonial activity » (Renfrew, 1974, p. 85).

Nemet dre an amzeriadur, “8770 BC until about 8460 BC<sup>393</sup>”, e weler ervat hon eus amañ aspadennoù kozh eus derou ar mezolitik pe zoken dibenn ar paleolitik, a zo bet komprenet evel maskloù evit ‘decoy runner’ evel m’eo bet gwelet pa vezed o pleustriñ an danvez-se<sup>394</sup>, pe, gwirheñveloc’h evel lodenn eus gwiskamantoù ul lid relijiel. Met n’eus hengoun ebet o stagañ al loen gant ur menoziad par da hini ur wezenn-vuhez evel e Maikop da skouer. Maskloù graet diwar al loen treizher a c’helle bezañ implijet evit mont e darempred gant

<sup>391</sup> [http://en.wikipedia.org/wiki/Star\\_Carr](http://en.wikipedia.org/wiki/Star_Carr)

<sup>392</sup> Red deer antler head-dress Early Mesolithic, about 9,500 years old From Star Carr, Vale of Pickering, North Yorkshire, England

<sup>393</sup> 9.500 hervez ar British Museum

<sup>394</sup> S.o. *Reder touell*, p. 67 ha d. h.



bed ar speredoù evit muioc'h a ouezaj da skouer, hag ereet evel-se an div lakadenn, hemolc'hiñ ha lidañ :

« Sir Grahame Clark, who excavated at Star Carr in 1949–51, found twenty-one such 'head-dresses'. They may have been worn as camouflage when hunting, or, perhaps more likely, for ceremonial purposes. Professor Clark presented the pictured example to the British Museum. It is thought that the two holes in the back of the skull enabled it to be tied to the wearer's head by a thong » [<http://www.dot-domesday.me.uk/migrate.htm>].

Gwirheñvel e veze douget ar banhezioù kirvi evel koefoù. N'eus ket anav amañ eus ur reizhiad arouezioù gwriziennet en ul loen-mamm evel e Sibiria an Evenked (Toungouz) pe hini ar gKeted evel houmañ :

« the deer-mother as Tree of Life and as source of life and death » (Jacobson, 1993, p. 47).

Evit an dToungoused hag ar gKeted e-touez henvroidi all bezañ koshoc'h eget mezolitiked Star Carr, a oa anezho Maglemeuziz e gwirionez degouezhet eno da heul teuz ar skornegi, ne hañval ket menoziad bedel ar c'harv evel loen-mamm bezañ koshoc'h eget an neolitik :

« The Evenk mythic tradition animates the powerful images of female elk and deer from the Siberian Neolithic and Bronze Ages, lending a surging vitality to the image of the female animal, to the deer wrapped around the vertical stelae, to the deer with the heads of birds and with antlers transformed into branches tipped with birds » (Jacobson, 1993, pp. 243-244).

Er paleolitik e veze kavet azeulioù all stag ouzh an ti hag an tan en oaled :

« Indeed the Ket universe, like that of so many Siberian peoples, seem threaded through with traces of a female-centered belief or with what has been called a mother cult, with roots as ancient as the Paleolithic period (Nahodil 1968 ; Alekseyenko 1977) » (Ibid., p. 187).

Ma'z eo deuet ar c'harv a-benn da enkorfañ azeul an neolitik n'eo ket estren d'ar perzh c'hoariet gantañ ergentaou e buhez an dud ma veze evito dija ul loen espar, n'eo ket hepken evit e gig :

« At Muge on the Tagus and on Tevieg and Hoëdic, two tiny islets off the coast of Morbihan, tardenoisians settled on the open shore, hunting and collecting shell-fish and leaving mounds composed of the debris of their repasts. Skeletons, some brachycranial, were buried in these midden heaps in the contracted attitude. On Tevieg and Hoëdic a little cairn was heaped over each of the corpses, which were sprinkled with ochre ; some were covered with a sort of crown of stags' antlers » (Childe, 1961, p. 7).

Resisaomp da gentañ ne oa ket tud Tevieg diskennidi tud Star Carr eus ar mezolitik uhel. Tud Tevieg eus dibenn ar mezolitik a zo Tardenoaziz deuet eus hanternoz kornog Europa (Beljia), war un dachenn douar a zo deuet da vezañ un enezenn diwezhatoc'h :

« The shores of Brittany, like those of our Narrow Sea, were in Atlantic and later times gradually sinking in the course of the Flandrian sea-transgression, which reduced many of their peninsulas to islands. On one of these, now the Île Tévig near Quiberon, a midden has been excavated whose makers lived and cooked among the shell-fish debris and left an abundant flint industry of Late Tardenoisian type, with geometric microliths, micro-burins, and transverse arrowheads, some bone and antler equipment, and numerous plain pebble tools both small and large » (Hawkes, 1940, pp. 68-69).

Evit a sell ouzh o c'hredennoù a glasker diverañ diouzh o doareoù beziañ :

« [...] ces lames à troncature s'accompagnent parfois de quelques autres outils et d'un certain nombre de lames ou d'éclats bruts, comme si l'on avait voulu doter le "voyageur" pour l'Au-delà, non seulement d'objets essentiels tout façonnés, mais encore d'une certaine provision de matière première destinée à la fabrication éventuelle d'autres pièces à son choix, indispensables à son nouvel état » (Pequart, 1954, p. 80).

Menoziad ar beajour a zere dres da hini ul loen treizher-eneoù evel ar c'harv, met ni zo rediet da venel war evezh en ur deurel pled ouzh ar pezh a zo er bez hep muiken, da lavaret eo, beajour ebet met banhezioù kirvi :

« [...], il semble dès lors qu'on puisse, avec quelque apparence de raison, concéder à ces offrandes de mandibules et bois de cerf le caractère d'attributs symboliques, d'autant plus à l'honneur que l'alimentation carnée, représentée surtout par le cerf, était plutôt restreinte et que le souvenir des "beaux tableaux de chasse" du disparu valait d'être célébré et perpétué après sa mort » (Ibid., p. 83).

Ar gredenn-se a zo ezhomm daou ene evit bout gwirvoudel. Unan stag ouzh ar c'horf paramantet er bez, egile o kantren etrezek bed ar speredoù evel e vez kavet e-touez an hemolc'herien. Met un azeul all a rank bout meneget amañ : hini an hendud eo, e-giz ma vo gwelet pelloc'h e Holm Papa Westray North (Skara Brae). Ene an den er bez a yafe en-dro da bed an hendud trugarez d'ar c'harv treizhour beziet gantañ, hep na vefe al loen perzh en azeul-se. Netra ne vir ouzhomp da veizañ an dra-se.

D'ar mare-se, tro 6.000 K.K., edo an dTardenoaziz o vevañ war an aod hag emvevañ diwar boued-mor dreist-holl, alese ar bernioù lastez-kregin (shell middens) :

« De plus, bien que nos mésolithiques aient été plus ichtyophages et mangeurs de mollusques que carnivores, ils n'en chassaient pas moins, peu ou prou, le gibier » (Ibid., p. 89).

Ur sevenadur hemolc'herien o vont da netra an hini eo. Ni a zo pell enta eus un azeul ar c'harv, ne vo ket anezhañ e-touez hemolc'herien Sibiria kent ar maenvezh a-hend-all. Padal, evit distreiñ d'hon trevadennerien o tont eus an hent Atlantel tro 4.000 – 3.500 K.K., eo ret lavarout memestra, a-zivout hemolc'hiñ karveded, ez eus un ere etre tud ar mezolitik diwezhañ, ha tud an neolitik kentañ, e stumm ur benveg evit kleuzañ er mengleuzioù hag a chomo e-pad pell (Pl. VI).

#### D. NEOLITIKED-A ha BEZIOÚ-TREPAS

Kent ha distreiñ da Skos, na zisoñjomp ket koulskoude eo bet teuzet ar chaseourien-pesketaerien diwezhañ-se oc'h ober gant mein, e-touez hon trevadennourien n'eo ket ar re eus sevenadur ar Boyne pe Skara Brae c'hoazh, met Neolitiked A. Piv e oa resis an dud-se 'ta ? Ur sell hollek evit kregiñ ganti:

« Le mésolithique vannetais paraît ainsi le substrat de base sur lequel va s'édifier la brillante culture mégalithique » (Rollando, 1961, p. 24).

Met mezolitik ar Morbihan e-unan a zo endalc'het en ur lusk sevenadurel brasoc'h hon eus kejet gantañ meur a wezh endeo, er Skandinavia gant an TRB, hag en Anatolia, gant ar c'hounideien a hemolc'he c'hoazh demmoù :

« Mais c'est en Europe occidentale que l'on a pu établir la parenté de ces monuments. Des côtes d'Espagne, le phénomène mégalithique se propage vers le Sud-Est de la France, aborde sur sa façade atlantique, remonte le canal Saint-George jusqu'en Écosse, baigne l'Est de l'Irlande et l'Ouest de l'Angleterre ; il fanchit le Cattegat pour inonder les rives baltiques du Danemark, de la Suède, de l'Allemagne du Nord » (Ibid., p. 25).

Sellomp kentoc'h ouzh lod ar sevenadur Atlantel-se a zedenn ac'hanomp :

« Today, the sheltered waters of the Gulf and of the Crach river are the centre of a great shellfish industry, as well they should be, for the shallow tidal waters invite us as *parcs à huîtres*. In this area the shellmounds of Tévéc and Hoëdic reveal that shellfish were harvested as early as Tardenoisian times (Péquart and Péquart 1954). Perhaps the very concentration of the important tombs in this area best suited to shellfish-rearing indicates dependence on this food source. It certainly serves to link the Golfe du Morbihan and the Boyne Valley much more closely » (Herity, 1974, p. 200).

Lavaromp diouzhtu evit ma vo sklaer hon diskouezadur, eo bet heuliet an Neolitiked A gant Beziou-Trepas Gavrinis a vo kiriek eus sevenadur ar Boyne. Merdeidi a-feson a oa eus pesketaerien pleg ar Morbihan :


« It was full time fishermen who provided the expertise necessary for venturing on the open sea to Ireland.

Though it is attractive to narrow down in this way the area in which these Bretons gathered to sail to the Boyne, it seems that a contingent from the triangle between Carnac, Erdeven and Ploermel also joined the flotilla. For, although the ornamented transeptal tombs of Grah Niaul and Le Rohello in the area of the Gulf itself might be sufficient to lead on to the Irish cruciform type, the tradition of Mané Bras and Mané Groh near Erdeven and of Locqueltas near Ploermel appear to be so strongly represented in the insular Irish preference for the cruciform pattern that the men of this area must have joined the gathering on the Gulf » (Ibid.).

### *Mane Vihan*

O paouez omp displegañ ne oa ket ar Beziou-Trepas an drevadennerien gentañ en Iwerzhon eus ar Morbihan:

« The passage grave builders who arrived at the Boyne mouth about 2500 B.C. were not the first neolithic arrivals in Ireland. For at least 500 years before, beginning at a conventional 3000 B.C., farmers of the earliest neolithic culture (Neolithic A) had been working the land of the northern half of Ireland from Mayo to Antrim and had penetrated into the west of Scotland. Their burial was the court cairn, a megalithic grave of two, three or four chambers joined by an imposing façade to a large open oval court in front of it. The whole tomb was enclosed in a trapezoid cairn and usually faced east » (Herity, 1974, p. 153).



134. Passage graves and related tombs in the region of Quiberon, Carnac and the Gulf of Morbihan, Brittany (tombs with ornamentation listed in italics):

- (i) Conguel, (2) Mane Bras, (3) Mane Groh, (4) Locqueltas, (5) Klud-er-Yer, (6) Mane Kerioned, (7) Kercado, (8) Le Noterio, (9) *Quelvezin*, (10) Tumulus de St Michel, (11) Le Lizo, (12) Le Luffang, (13) Le Rocher, (14) Les Pierres Plates, (15) *Mané-er-Hroëk*, (16) Mane Rutual, (17) La Table des Marchands, (18) Mane Lud, (19) l'Ile Longue, (20) *Gavrinis*, (21) Tumiac, (22) *Grah Niaul*, (23) Le Petit Mont, (24) Penhap

### **Kartenn 39 : An Neolitik er Morbihan**

(Herity, 1974, p. 201)

Kendirvi eo ar ger a zeu d'ar spered :

« The Neolithic A group of the south of Britain, cousins of this Irish group by virtue of their common ancestry in north-west France, have a similar peasant appearance and a similar pottery and stone assemblage. They are found from the Bristol Channel and Cornwall to the east coast of England » (Ibid., p. 155).

Gouzout a reomp dre vras pegoulz eo deuet tud ar Beziou-Trepas :

« These Neolithic A communities, already established in the north before the coming of the passage grave builders to the Boyne, provide a model against which to measure the range of information we can glean concerning the new passage grave arrivals about 2500 B.C. It is inevitable that the two groups will have met, with consequent borrowings and accommodations » (Ibid., p. 155).

Kement-se a ro deomp an tu da dermeniñ resisoc'h amzeriadur ar prantadoù hag an toleadoù-se :

« The Tara determinations, which indicate the centuries straddling 2000 B.C. as the time of its building and use, probably represent a phase nearer the end of the tradition. Breton determinations, meanwhile, indicate dates in the fourth rather than the third millennium for the passage graves of that region (Giot 1971, 210) » (Ibid., p. 153).

Galloud a reer mont pelloc'h zoken ha diforc'hiñ etre an div boblañs, neolitik A ha saverien beziou-trepas, a zo an div o lec'h orin e Breizh, en-dro d'ar Morbihan :

« A la pointe de Kerpenhir, au sud de la presqu'île [Locmariaquer], l'étude d'une "tourbière littorale" aujourd'hui submergée a révélé que, dès la fin du VI<sup>e</sup> millénaire av. J.-C., la région avait été vigoureusement défrichée et mise en culture ; c'est à ce jour le plus ancien témoignage de néolithisation reconnu en Bretagne » (Le Roux, 2001, pp. 16-17).

Aber al Liger a vefe al lec'h m'int deuet anezhi :

« On peut alors imaginer que les premiers colons néolithiques (venant par exemple de l'estuaire de la Loire) débarquèrent en cet endroit privilégié et que leurs descendants cultivèrent ce souvenir pendant près de trois millénaires » (Ibid., p. 17).

Evel tud an neolitik a lec'h all, evel en Anatolia, da skouer, e veze aberzet d'ar *Magna Mater* emichañs, ejen gouez :

« Presque à la même époque, sous l'emplacement de l'actuel tumulus d'Er-Grah, une fosse manifestement sacrificielle a recueilli les carcasses de deux bovins. Déjà domestiqués mais encore très proche de l'aurochs sauvage, ces animaux témoignent sans doute des tout débuts de l'élevage dans la région et leur enfouissement indique que le sommet de la presqu'île était déjà perçu comme un lieu à vocation culturelle » (Ibid.).

Ar re-se a vije aet da sevel tud Neolitik A Iwerzhon ha Skos, evel gwelet diagent trugarez da Michael Herity.

Buan-ha-buan, da heul levrig Charles-Tanguy Le Roux, ez eus tu da lavarout eo bet savet mein-meur ar Morbihan betek -4.000, ha goude-se, etre -3.800 ha -3.500 eo bet savet bez-trepas Gavrinis, pehini zo bet serret etre -3.400 ha -3.000. An dud-se neuze, a vije aet da sevel sevenadur beziou-trepas Iwerzhon, da heul o diagentidi eus an neolitik A.

Da vezañ peurglok eo ret menegiñ ali tud a gav dezho e vefe *Ana*, anv ar *Magna Mater*-se :

« The passage grave at Knockmary, County Tyrone, Ireland, is called « Annia's Cave. » Is this her name ? For this we should turn to folklore and historic sources. In folktale She appears as an Old Hag or a Giantess, but She is also identified as Ana, Annia, Anu, and Ankou. From early literary sources it is known that the Breton Ankou or Maro is « Death.» The Irish Morrígan is identified with Ana who is regarded as « Guardian of the Dead » or « Mother



of the Gods. » We can guess that these names are inherited from the megalith builders » (Gimbutas, 1991, p. 305).

Diwar-benn-se e c'heller menegiñ labourioù Joël Lecornec e Mane Vihan e Arzhon, a ro deomp un amzeroniezh a c'heller harpañ outi. Da gentañ, tro 5.000 K.K., n'eus nemet un duchenn :

« Nous avons vu que l'extrémité sud-ouest du tertre du Petit Mont a révélé une fosse de calage, peu profonde certes, mais suffisamment longue et large pour avoir reçu la base d'une grande stèle. Insistons sur le fait que le tertre fut relayé par le cairn primaire qui le recouvre, vide de toute sépulture » (Lecornec, 1994, p. 82).

Orin an dud-se a chom displann pa gomzer eus un tu eus ul levezon goude-Danubian, da lavaret eo dre reter an douar-bras :

« Les poteries qui y furent recueillies montrent un attachement des armoricains à la culture « post-dabubienne » transitant par la basse vallée de Loire ». (Lecornec, [s.d.], [p. 3]).

Met eus an tu all, al levezon anavezetañ eo hini o tont eus ledenez Iberia :

« It seems best still to adhere to the view which regards the Iberian tombs as ancestral to both the Breton and the Irish, though as yet no radiocarbon determinations are available which might be used to support this » (Herity, 1974, p. 198).

Kadarnaet e vez ar sav-poent-se gant oberourien all, da skouer:

« A simple distribution map of megalithic tombs shows that the entire Atlantic façade of Iberia was densely scattered with monuments of this general kind. When examined in detail the majority of them can be shown to belong to the passage grave tradition. Within this broad zone the centre of innovation lay in

central Portugal around the estuaries of the Tagus and Sado » (Cunliffe, 2001, p. 195).

Pe e vefe Gouedanubianiz pe Iberiz, bezet-a-vezo n'eo sevenadur an dud-se met an daou benn eus un hevelep dispac'h a zo bet deraouet en Anatolia, hini ar gounid-douar. Piv 'oar hag-eñ n'emañ ket orin an div levezon disheñvel-se eus an daou rummad tud: Neolitiked A ha Beziou-Trepas ?


Er Mane Vihan evit distreiñ d'hor prezeg, goude an duchenn eo bet savet ur garn, etre 5.000 ha 4.000 K.K.:

« Ce cairn de 50 m de long et 25 m de large, s'élevant à 8 m de haut, n'a livré aucune structure funéraire interne » (Lecornec, [s.d.], [p. 2]).

Ar garn-se a zo stag ouzh ar maen-azeul :

« Quoiqu'il en soit, à travers les quelques études réalisées, il apparaît que ces longs tumulus avaient une destination plus culturelle que funéraire. Une relation étroite existe entre ce type de monument et les stèles idoles » (Ibid.).

## PHASES DE CONSTRUCTION DU MONUMENT



**Skeudenn 79: Prantadoù sevel Mane Vihan**


(Lecornec, [s.d.], p. 4)

Ar c'hevredad-se a ziougan sevenadur ar beziou-trepas :

« L'association long tumulus – stèles idoles apparaît fort bien comme le signe avant-coureur d'un mégalithisme à dolmens à couloir, et la présence des stèles peut-être considérée comme une particularité culturelle sud-morbihannaise, antérieure à 4.000 av. J.-C. » (Lecornec, 1994, p. 83).

Pouezus eo an deziad-se kent 4.000, rak goude e vo kemm bras :

« Vers 4.000 av. J.C., de nouveaux constructeurs dressent un autre cairn au contact de la façade Sud du précédent. Cette fois, il y est installé un dolmen à couloir dont les parois mégalithiques de la chambre se développent autour d'une grande stèle-idole abattue et brisée faisant office de sol » (Ibid., [s.d.], p. 2).



### Skeudenn 80: Prantadoù sevel Mane Vihan (III, IV)

(Lecornec, [s.d.], p. 4)

D'ar mare-se e vije aet kuit gounideien dalc'hidi ar maen-azeul diavaez, a vo kavet stag diwezhatoc'h ouzh diabarzh ur garn. Diskaret ha torret eo bet ar maen-azeul adalek 4.000 K.K. E bez-trepas Grah Niaul da skouer, evel e meur

a bez-trepas all, eo bet keviet ar maen-azeul. Tro 3.800 a verk bloaziad savidigezh Gavrinis. War-dro 3.000 K.K., a verk ar mare p' eo bet klozet Gavrinis, hag an hini pa vije aet kuit d'o zro an dud-se etrezek Iwerzhon, m'o deus kejet a-c'houdevezh marteze gant o diaraogidi, an Neolitiked A.

Dedennus eo notenniñ e reer gant ar menoziad 'beziadur', goude 4.000 K.K., pa ne veze ket graet a-gent. Adalek ar mare-se, kredabl e c'heller komz eus 'marv', ha 'dindan-douarelezh'. Daoust hag ar menoziadoù nevez-se a vije penn abeg da zivroadegezh an neolitiked A ?

Distroet e vo war-se diwezhatoc'h, met graet e vez gant 'grah' e meur a zegouezh evit envel karnioù zo, evel Er Grah, pe 'Mané-er-Hroeg', 'Mane Grageux', 'Mane Groh', 'Groh Collé', pe c'hoazh 'Grah-Niaul'. Gouzout a reomp petra dalvez 'Grah' pe 'Hroeg' da lavarout : Gwrac'h pe Gwreg, Gwragez el liester. Ar ster-se ne zislavar ket marteze displegadur M. Gimbutas 'Hag', zoken ma c'hellomp ouzhpennañ ne vije ket er penn kentañ - a-gent 4.000 - an arliv-ster a varv pe a zindan-douarelezh kevreet gant ar gerioù-se. Grah-Niaul a dalvezfe evidomp kement ha 'Gwrac'h an Heol'. Er penn kentañ e veze stag ar Wrac'h ouzh diavaez ur menez, da lavaret eo ouzh menoziad an uhel hag a zere kenañ ouzh ul lec'h evel Mane Vihan. Bremañ, an holl anvioù diagent a vefe stag kentoc'h ouzh ur bez-trepas o serriñ ar wrac'h e stumm ur maen-azeul.

### *Skara Brae*

E Skara Brae e vo kavet sevenadur an dud-se, emdroet. Anavezet eo bremañ an darempred etre Skos ha tud an Arvorik. Dalc'het kont e vo eus an holl dud-se evit poblañs bro Skos :

« We may conveniently start our survey of human settlement in Scotland in the middle of the second millenium B.C., a date which may seem unnecessarily early as a prologue to the Pictish Dark Ages, but which, as we shall see, is in fact justified » (Wainwright, 1955, p. 55).

Setu an daolenn goude ar prantad omp o paouez studial e Breizh, Iwerzhon hag ul lodenn eus Skos:

« In Orkney and Shetland these cultures (as seen for instance at Skara Brae) can be recognised as specifically including elements proper to the whole circumpolar region of Eurasia and the northern coasts of the American continent, and an extension of this province southward into the eastern woodlands of Scotland can be traced, now mingled with agricultural traditions derived either from Atlantic colonists or from north-easterly extensions of southern English Neolithic cultures, which can be traced via Yorkshire to Aberdeenshire. The hunter-fisher traditions can be reciprocally distinguished as far south as the mouth of the Thames. The well-known carved stone balls of north-eastern Scotland belong to this Skara Brae type of culture » (Wainwright, 1955, p. 55).

Da eo menegiñ roudoù kirvi e Skara Brae :

« The hunting of animals must have been restricted to deer and even these may have been herded and managed – though the amount of venison consumed was minimal compared to mutton, goat flesh or beef – the latter being the most common by virtue of the carcass size of the animal. This notwithstanding, the discovery at the Links of Notland of a cluster of some thirteen articulated deer skeletons, mostly from young animals, is of interest as it may indicate culling and is certainly evidence for a tremendous waste of resources. Such 'waste' is often associated with ritual and the mass of deer antlers in the small tomb at the north end of the tiny Holm of Papa Westray should not be forgotten. The Links of Notland provides us with a deer butchery site, the bones remaining being those of the head and extremities » (Hedges, 1984, p. 205).

Evel e Teviec e kaver eta un nebeut banhezioù en ur bez bihan e Holm Papa Westray North. Setu displeg John W. Hedges :

« Nevertheless, in all of these practices can be seen an emphasis on the role of the tomb as the repository of the ancestors, and not that the goods simply

accompanied the corpse of an individual who thereafter ceased to be of significance to the living » (Ibid., p. 208).

Anavezet eo gant an oberour azeul an hendud, ar pezh n'eo ket evit hor souezhiñ peogwir ez eo poellek, met ar pezh hon eus lavaret diwar-benn Tevieg hag Hoëdic a dalvez ivez amañ : n'eus henden ebet e Skara Brae, nemet banhezioù kirvi.

Gouzout a reomp ivez e veze implijet karvken evit ober dilhad :

« There is no definite evidence that neolithic people in Orkney knew how to either spin or weave and the probability is that clothes and coverings were fashioned from skins. As has been noted, this may be one reason why animals were killed young, the skins of calves and lambs being thinner and more supple » (Ibid., p. 216).

Ha ma ne c'heller ket touiñ eus pelec'h e teue an drevadennerien gentañ – dre an hent Atlantel ? - e ouzomp diarvar an dra-mañ :

« When neolithic man first came to Orkney, around 4,000—3,500 BC, it was a virgin territory » (Ibid., p. 201).

Gouzout a reomp ivez :

« The first settlers were farmers – this is the basis of the Neolithic Revolution and all that came from it – and in such a society the bulk of the food, the largest percentage of the calorific intake, would have been from crops » (Ibid.)

### *Epipaleolitik Europa*

Emaomp o vont da lenn bremañ sellboent Marija Gimbutas war ar gudenn-se, ha pouezus eo evidomp, met ne zirouestl ket anezhi siwazh, peogwir e tave da

Sibiria hep displegañ splann<sup>395</sup> penaos e vije deuet ar skeudennoù-se ac'halese :

« The role of a deer in Old European myth was not a creation of Neolithic agriculturists. The importance of a pregnant doe must have been inherited from a preagricultural era. The northern people in the hunting stage still believe in the mother of the universe<sup>396</sup> as a doe-elk or wild reindeer—doe. Myths speak of pregnant women who rule the world and who look like deer: covered with hair and with branching deer's horns on their 'heads (Anisimov 1959: 28, 49ff.; Rybakov 1965, 2:35). In the Upper Paleolithic era, similar images probably existed all over Europe » (Gimbutas, 1984, p. 171).

Aduiñ a reomp dre vras gant an oberourez, a ro deomp un alc'hwez d'hor c'hudenn. En em gavout a reomp en Europa e-tal dibenn ur sevenadur a oa bev e-pad ar paleolitik, evel e Sibiria, ha kenstur dezhañ, met a zo aet gant hent an diwar wel tamm-ha-tamm, rak an temz-amzer o tommañ. Ni a zo test hiziv eus pazennoù disheñvel er mont da get-se e lec'h-mañ-lec'h eus Europa: Star Carr, Teviac-Hoëdic, Csépa (Hungaria) ha Skara Brae. Gant an Europiz Kozh, anezho gounideien, e vije bet adkemeret an arouezioù hemolc'hiñ hag adimplijet en ur virout ul lec'h evito en o marzhoù. Setu ma vije bet kemeret gant Mamm-douar an neolitik lec'h uhel Mamm-loen ar paleolitik, ha lakaat ar c'harveg-se en ul lec'h izeloc'h en o marzhoniezh, un tammig e-giz ar pezh zo c'hoarvezet d'ar c'harv e Sibiria p'eo deuet koulz ar chamaned<sup>397</sup>. Met an dra-se a oa kalz diwezhatoc'h. Ment vras kerniel ar c'harveg a dalvez douetus e oa marzhel al loen daoust dezhañ dougen banhezioù, evel m'eo bet displeget gant E. Jacobson. Mar deo gwir a skrivomp e vefe ar skeudenn dindan an hini goshañ eus ur c'harv marzhel – d.l.e. ur Vamm-loen kredabl – peogwir eo bet koulzadet er c'hwec'hvet milved K.K. Kalz koshoc'h enta eget ar pezh zo bet dizoloet e Sibiria betek-hen. Neoazh ne chom ganeomp marzh ebet a-benn skorañ hor martezeadenn.

---

<sup>395</sup> War-bouez ar gartenn 16 ma kaver meneget anv Afanasievo

<sup>396</sup> Talvoudus eo frazenn-mañ M. Gimbutas a gadarn orin gwregel bed an hemolc'herien.

<sup>397</sup> An darvoud-se a zo deskrevet gant Anisimov er pennad meneget gant Gimbutas hag embannet e 1959. Graet hon eus gant un droidigezh e saozneg eus ar pennad-se, embannet e 1963.



166 Stag with oversized antlers. Relief on a fragment of a storage vessel from Csépa, southeastern Hungary. Early sixth millennium BC.

Berr-ha-berr e aotre ac’hanomp an arkeologiezh da lavarout ez eo empleget ar c’harv en Europa en ul liderezh hemolc’hiñ e Star Carr, evel loen-treizher e Teviéc–Hoëdic hag evel Vamm-loen e Hungaria. Ar goulenn a zo daoust hag-eñ e vije bet eus un azeul totemek en Europa er paleo-mezolitik da vout enteuzet diwezhatoc’h e azeulioù neolitikel ? E-barzh totemiezh Sibiria ez eus ezhomm ur vamm-loen hag un azeul an hendud d’an nebeutañ ouzhpenn marzhoù. Lidoù hemolc’herien Star Carr a c’hellfe tenn d’ar jiboez pourvezet gant ar Vamm-loen, ha loen-treizher Teviéc-Hoëdic a c’hellfe ivez kas an eneoù en-dro da bed an hendud. En ur lakaat penn-ouzh-penn an holl dammoù-se e vije tu adsevel un azeul totemek hep meuriad ebet, da lavaret eo faltaziet. Gwelloc’h e kav deomp prederiañ, en ur chom feal d’ar roadoù arkeologel, edo Europa an epipaleolitik o vont war hent azeulioù totemek par da re Sibiria an Neolitik. Gant an temz-amzer o vont war aztommañ eo bet paouezet gant an hengoun-se a zo manet dioutañ dilec’hioù arkeologel strewet er stummoù hon eus kavet anezho.

Betek-hen ez eomp ali gant M. Gimbutas war-bouez he frazenn ziwezhañ peogwir, da heul displegadennoù E. Jacobson, a zo kadarnaet war murengravadurioù Sibiria, an eln eo ar Vamm-loen d’ar mareoù-se evel war speurennoù ar Val kamonika. Ne gav ket deomp enta e vije al loen diskouezet



war ar skeudenn e stumm ur c'harv an hini a zo e penn hengoun Cernunnos ar Gelted, Tarhunt an Hittited pe siell granek vMaikop. Ur skourr disheñvel eo, bet lonket gant gounid-douar an neolitiked.

### *Portugal ha Kantabria*

Met ul lec'h a zo en Europa evel kemennet uheloc'h, ma c'hell ar boblañs bezañ didorr abaoe ar paleolitik, takad Gall-ha-Kantabria an hini eo. E Altamira ouzhpenn arzh ar mougevioù magdalenian, ez eus bet kavet ivez murengravadurioù goude-paleolitikel dindan an amzer, o tiskouez loened, karveded en o zouez evel-just, a-gevret gant loened all evel kezeg da skouer ha merkoù. Ne vennomp ket studial anezho amañ, met gouest eo an akeologourien da lavarout eo stag an tresadennoù ouzh un dachennad hengounel a vez bonnet ha kontrollet gant an hemolc'herien<sup>398</sup>. E Katalogna ivez (Molí del Salt) ez eus bet kavet kirvi goude-magdalenian, un heizez marteze hag ur c'harv divanhez<sup>399</sup>, ouzhpenn ur gour skeudennaouet gant daou denn a-serzh war e benn heñvelaet ouzh kern gant an oberourien<sup>400</sup>, pe ur c'hoef. N'eus darempred ebet etre al loened murengravet hag an eskern kavet war al lec'h. Mennegomp ivez ar frazenn bouezus-mañ :

« On n'a identifié aucun composant à caractère narratif » (Díez, Vaquero, 2006, p. 467).

Gant ar frazenn-se ez eur techet da vezout n'eus marzh ebet stag ouzh al loened treset, nemet kirvi. Kement-se ne stourm ket evit azeulioù totemek a c'houlenn un toullad arouezioù e darempred an eil re gant ar re all, hag a vez displeget gant marzhoù: ur preder relijiel eo an dotemiezh, an hini kentañ, a zastum gantañ meur a azeulioù diagent.

Un tammig diwezhatoc'h e-pad ar mezolitik, ez eus daou loen pennañ a vez hemolc'het, ar c'harv hag an ejen gouez, met ivez ar c'had mui loened all. E

---

<sup>398</sup> Behrmann, Ramírez, 2009, p. 620

<sup>399</sup> Díez, Vaquero, 2006, pp. 459-461

<sup>400</sup> Ibid., p. 458

Sado Valley, e Portugal ar c'hreisteiz, n'eus ket tu da studial ar boazioù beziañ, merzout a reer koulskoude emañ bodet ar c'horfoù e gronnadoù bihan<sup>401</sup>. Met lec'hioù all a chom da duriañ war aod Kantabria dreist-holl<sup>402</sup>. E-pad dibenn ar mezolitik neuze ne gaver ket gwelloc'h eget er Morbihan, daoust m'edo an dud o vevañ c'hoazh diwar hemolc'hiñ met diwar boued-mor ivez e Kreisteiz Portugal c'hoazh. Kirvi ha *Bos primigenius* adarre a zo anavezet hag hemolc'het, digemm evel boaz. Feulster a zo bet anavezet etre an dud ha beredoù bras ivez kent na deuo an neolitik hag ar gounid-douar<sup>403</sup>.

An hevelep menoz a zeu deomp c'hoazh, hini un hengoun kaset da netra pe da dra all, bep a nebeut gant an temz-amzer o aztommañ ha live ar mor o uhelaat. Hag ar c'havadennoù a zo bet graet betek-hen en Europa a vefe un testeni eus ar stad a zo bet tizhet gant sevenadur an dud-se etre ar paleolitik hag an neolitik dre an toleadoù-se, hep na ve tu kuzhat e vo graet moarvat kavadennoù nevez. Diwar-se ne vo ket azlavaret amañ ar pezh zo bet displeget uheloc'h a-zivout Star Carr, Teviec pe Hoëdic, ha pa ne vije ket bet torret red hengounel ar boblañs amañ nag e sevenadur, en enep d'al lec'hioù kent.

Dre vras e c'heller ober anv eus an temz-amzer evit displegañ perak ez eus un azeul karv evel mamm-loen e Sibiria pa n'eus ket bet kavet hini ebet evit doare e Kantabria evit c'hoazh. D'an tremen eus ar mezolitik d'an neolitik eo aet da netra sevenadur an hemolc'herien en Europa dre an abeg ma 'z eus bet ivez ur c'hemm bras en temz-amzer, padal e Sibiria ar c'hreisteiz pe tro d'al lenn Baïkal, n'eus ket bet kemmoù bras en temz-amzer abaoe an epipaleolitik ha n'eo ket bet paouezet gant ar sevenadur hemolc'hiñ, met krog eo bet an dud gant mesa loened adalek Afanasievo (-4.700). E-giz-se e c'heller intent gwelloc'h penaos o deus bet goar an dud aozañ azeulioù a-gevret gant marzhoù totemek kerkent hag an neolitik kentañ kredabl e Sibiria (-5.800 — -4.900), ur c'houlzad a glot gant ar mezolitik diwezhañ en Europa. Met ar gudennerezh-se, daoust dezhi bout diazez n'eo ket bet studiet a-walc'h ganeomp peogwir n'eo ket kreiz el labour-mañ.

---

<sup>401</sup> Morales, Arnaud, 1990, p. 458.

<sup>402</sup> Ibid., p. 459.

<sup>403</sup> Straus, Altuna, Vierra, 1990, p. 473

Met an hevelep kudenn eo mui pe vui e Skara Brae pe inizi Orkney rak nebeutoc'h a anadurioù a gaver di eget e Teviec pe Hoëdic, a zo pazennoù all eus diskar ur sevenadur hemolc'herien en Europa an neolitik.

Met adkavout a reomp bremañ ar c'hemm sevenadurel a oa bet graet meneg anezhañ uheloc'h gant Mahr etre al lanv sevenadurel e Inizi Breizh-Veur o tont dre an hentoù Atlantel hag ar bed sevenadurel nevez o tont hiviziken eus douar-bras Europa ar c'hornog :

« Within the first quarter of the second millenium B.C., and currently with much of the Atlantic colonisation just described, eastern Scotland was, in common with eastern England, also receiving immigrants from the North Sea area, coming from homelands likely to have been in the main between the Elbe and the Rhin » (Wainwright, 1955, p. 55)

## E. PIKTED

### *Orin*

Evit studial a-grenn poblador Bro-Skos eo gwelloc'h distreiñ pell a-walc'h en amzer betek an Añforenoù Boul erziwezh a oa bet graet anv anezho a-zivout Skandinavia. Diwar an hevelep lusk sevenadurel eo deuet an dud a vo graet Kelted anezho diwezhatoc'h, met a zo anavezet dindan anv tud ar Priaj Kordennet evit c'hoazh. Sevenadur Unetis an Aremvezh kentañ a heulio ar remañ goude ma vo tremenet prantad ar Gobedoù Kloc'h hag hini al Listri-Boued :

« The infiltration of the Indo-European culture elements into Holland, Denmark, southern Sweden, southern Norway, eastern Ireland, and northeast Europe (the East Baltic, Byelorussia, and central Russia) from central Europe began during the late Globular Amphora period. It continued during the common European horizon of the Corded Pottery culture (which is the successor of the former ; Map 2). The calibrated radiocarbon chronology for this great extension in rounded numbers is 3000-2500 BC » (Gimbutas, 1977, p. 323)..

Gwelomp Petra zo c'hoarvezet goude ar Priaj Kordennet :

« After the departure of the Corded Pottery people to the northwest and northeast, the central European core further developed, entering a true metal age at c. 2200-2000 BC » (Gimbutas, 1977, p. 328).

Evel ma oa bet gwelet ganeomp pa vezemp o studial Neolitik Inizi Breizh-Veur, goude an Neolitiked A, ha tud ar Beziou-Trepas, eo tremenet buan ar Gobedoù Kloc'h ha diouzhtu war o lerc'h al Listri-Boued, ganto ar metal hep na vije bet anezho evelato metalourien :

« D'une façon générale, ils [beaker people] ont progressé du Sud au Nord et de l'Est à l'Ouest et leur progression a duré un temps assez long pour que le mobilier funéraire diffère très notablement des tombes les plus anciennes aux plus récentes. Ils se sont dispersés en avançant et sont relativement peu nombreux au Nord de l'Écosse et dans le Pays de Galles. Leur progression fut une conquête. Il est évident qu'ils soumièrent et assimilèrent les premiers occupants du pays. Ils n'arrivèrent certes pas en nombre suffisant pour modifier le type moyen de la population, dont les descendants formaient encore une notable minorité, mais ils ont été assez forts pour imposer, jusqu'à la fin de l'âge du Bronze et encore au-delà, quelques traits importants et dominants de leur civilisation » (Hubert, 1974, pp. 178-179).

Buan-ha-buan ez eus tu da grennañ dibunadur an darvoudoù da heul evel-henn :

« The Únětice (Aunjetitz) group in these territories<sup>404</sup> was characterized by a rather uniform material culture, architecture, burial rites, and social structure. [...]. By the 17<sup>th</sup>-16<sup>th</sup> centuries BC, this culture had become a military power. [...]. The Middle Danube region was the cradle of unrest which took place in the subsequent Middle Bronze Age or Tumulus period, c. 1500 BC. » (Gimbutas, 1997, 328).

Hag evit rein un tañva eus endro ar mare e-pad an aremvezh, setu ur frazenn a zere ouzh ar pleg :

« In summary, the Únětice-Tumulus-Urnfield territory was a homeland to a host of Indo-European groups, most of which are known to have developed into separate cultures and languages only after they branched from the core and were hybridized with the local substratum culture » (Gimbutas, 1997, p. 330).

---

<sup>404</sup> Southwestern Germany, Switzerland, central Germany, Upper Lausitz, Bohemia, Silesia, the Upper Vistula, southeast Poland, western Ukraine East Moravia, and Slovakia (Chlopice-Vesele group), and lower Austria gradually became more united by means of the intensive metal and amber trade (Gimbutas, 1997, p. ?

Evit a-sell ouzh ar Gelted da vat bremañ e c'heller treiñ en-dro war-du Henry Hubert :

« Bref, la séparation des peuples celtiques en deux groupes est un fait certain, de très grande importance, relié aux grands faits de la préhistoire européenne. C'est la suite de la liquidation de la communauté italo-celtique » (Hubert, 1974, p. 148).

Ar pezh hon eus ezhomm da c'houzout neuze eo pegoulz eo bet paouezet gant ar gumuniezh Italez-Keltiek. Digentañ evit ma ne vo mui arvar ebet o tiasaat hon diskouezadur, splannomp an dra-mañ c'hoazh :

« Early Urnfield expansion, linguistic evidence, and later historic developments definitely prove that the people of the Unetice-Tumulus-Urnfield culture were Indo-European speakers » (Gimbutas, 1965, p. 339).

Roet eo bet deomp an amzeriad tro 1450 K.K. evit dibennfreuz ar gumuniezh Italez-Keltiek<sup>405</sup> ; adalek ar mare-se enta, gouez da H. Hubert avat, e c'hello c'hoarvezout an disparti etre an div rannyezh *p* ha *q*, met ne lavar ket deomp pegoulz.

Evit dizoleiñ an amzeriadur-se, gwelomp kentoc'h danevell ar c'hoarvoudoù aloubiñ Breizh-Veur dre vras e-pad ar milved diwezhañ K.K :

« But all the evidence, archaeological and other, which has since come to light, seems to me to confirm his two waves of Celtic invasion. The first, which he [Rhys] called 'Goidelic'—but the terms 'Proto-Celtic' or 'Celtic A' would be preferable—coincides with the Late Bronze Age invasion, which began c. 1000 B.C.<sup>406</sup>, and affected the whole of the British Isles. The second, which he called 'Brythonic'—but I have generally called it 'Welsh'—coincides with a series of invasions in the Early Iron Age.

---

<sup>405</sup> Gimbutas, 1977, p. 339. S.o. pp. 266 ha 423-4

<sup>406</sup> Abretoc'h zoken 1600 gouez da Hubert, 1974.

The earliest of these, commonly called Late Hallstatt or Iron Age A, and datable to *c.* 600, or a little earlier, affected only the country south of the Cotswolds-Wash line and coastal districts further north. The second, commonly called Iron Age B, and datable to *c.* 300, or somewhat earlier, affected a much larger area. [...]. All these invasions seem to have come in the main from the Lower Rhine and the Maas, though they contained elements drawn from a wider area and from outposts on the French coast » (Chadwick, 1949, p. 79).

Gwelet hon eus rollad aloubadennoù Inizi Breizh-Veur e-pad ar milved kentañ K.K. Adkavout a reomp neuze ar pevar amzeriad dre vras emamp o vont da implijout rak degemeret int bet gant an toullad skiantourien arbennik hon eus studiet evel Mahr, Rhys, Chadwick, (Hubert ?), O’Rahilly zoken<sup>407</sup>. Gant ar yezh komzet eo ez eus kudennoù : K. Jackson ha T. O’Rahilly a gav dezho e veze (Gallez-)Predeneg gant an alouberien gentañ, ar bPikted. War an dachenn-se setu petra zo c'hoarvezet, gouez da Chadwick:

« Early in the first millenium (B.C.) the Celtic (Proto-Celtic) language of the Continent became subject to a labializing process, which in varying degree also affected other languages, Greek, Italic, and (very slightly) Teutonic. This was before the Iron Age invasions began. From that time we apply the term ‘Celtic B’ to Continental Celtic, including the language of all the Iron Age invaders. But the language of the earliest (Late Bronze Age) invaders was but little affected by the labializing process—which apparently did not cross the sea to them—and it may be still be described as ‘Celtic A’. Gaelic (Scottish<sup>408</sup> and Irish) is descended from Celtic A, Welsh from Celtic B « (Chadwick, 1949, p. 79).

An disrann etre an div rannyezh a vije c'hoarvezet a-gent an Houarnvezh, met diwezhat a-walc'h evit lezel digemm pe dost yezh an aloubadenn gentañ eus derou ar milved kentañ K.K. Un dra a ranker kompren gouez da H.M.

---

<sup>407</sup> Diaes eo kemer e gwir e oa Gouezeled aloubadenn an Houarnvezh C , tro 100 K.K., an hini ziwezhañ eta, kent dibenn frankiz ar C'hallianed, ar re gentañ ha nemeto o komz ur yezh keltiek e Q.

<sup>408</sup> Amañ, d'ar mare-se yezh Kaledonia, komzet gant ‘Cruthin’ hervez hon dibab.

Chadwick, eo henstummiezh ar c'heltiek A, a zo stad ar yezh komzet a-gent argerzh an diweuzadur. Kemer a ra Chadwick skouer ar Gresianeg :

« In Greek the operation of these changes was certainly complete before the seventh century (B.C.), though it may have begun as early as 1000, or even before » (Chadwick, 1949, p. 75).

Ret eo pouezañ war an dra-se rak an dislavar nemetañ eo a chom gant ur skiantour evel Kenneth Jackson da skouer a gomz-eñ eus ur c'heltieg diweuzet e *p* met digemm, a vije c'hoazh o c'hortoz dispartiañ etre Galianeg ha Predeneg, hag a zo anvet gantañ e saozneg « Gallo-Brittonic ». Da eo lavarout ne ro abeg ebet d'e deorienn, nemet abegoù yezhoniel diabarzh ar yezh :

« The evidence on the problem, now to be discussed, falls into five distinct classes. They are : (1) direct or indirect statements on Pictish by medieval writers while the language was still alive ; (2) northern Scottish names in classical sources; (3) the inscriptions of Pictland; (4) names in medieval works such as Adamnan's *Life of St Columba*, Bede's *Ecclesiastical History*, and the *Pictish Chronicle*; and (5) the modern place-names of the Pictish area » (Wainwright, 1955, p. 133).

War an elfennoù-se e vo staliet arguzennoù K. Jackson, e-giz pa ne vije ket ar yezh keltiek-se disorc'h un endro sevenadurel abaoe derou ar milved diwezhañ K.K.. Ar roudoù-yezh kentañ zo re Pytheas tro 325 K.K.<sup>409</sup>. Aloubet e oa bet Skos gant tud an eil prantad eus ar 6vet kantved K.K., a gomze marteze ar yezh Gallo-Brittonic e *p* meneget gant Kenneth Jackson. Da lavaret eo e oa trefodet ar yezh komzet gant an dud, ha chom a rae c'hoazh enni aspadennoù e *q* alouberien an aremvezh diwezhañ, Coritani h.a., hep disoñjal an elfennoù nann-Indez-Europek diagentoc'h c'hoazh. Normal eo en dije bet ezhome Colum Cille ur jubennour evit komz gant an dud-se zoken ma c'helle komz gouezelek tud zo dre doleadoù rouantelezh Dál Riata adalek fin ar 5vet pe

---

<sup>409</sup> O'Rahilly, 1999, p. 41.



derou ar 6vet kantved, da lavaret eo tost da 9 gantved diwezhatoc'h. Hen anzav a ra Jackson e-unan :

« It seems reasonable to think that this use of interpreters shows that Pictish and Gaelic differed considerably, though admittedly it does not of itself prove that Pictish was not an ancient Goidelic dialect » (Wainwright, 1955, p. 133).

Taolomp ur sell en-dro war an argerzh aloubiñ :

« It is now generally agreed that one series (Late Bronze Age) began *c.* 1000 B.C. and continued at intervals for the next two or three centuries, while the second, now known as Iron Age A, began *c.* 600 or a little earlier. A third series (Iron Age B) is believed to have begun in the latter part of the fourth century, and a fourth (Iron Age C) in the first century (B.C.), but this last affected only the south-east of England, and need not concern us here » (Chadwick, 1949, p. 70).

Adkavout a reomp evel-just ar pevar amzeriadur meneget uheloc'h. A-zivout ar yezh, hag evit diskouez e sellboent e tap Chadwick skouer ar meuriad Qritani pe Coritani :

« During the Late Bronze Age, perhaps at its outset, about 1000 B.C. or at all events not long afterwards, a movement of Celtic peoples took place from the Continent to our islands. The names of three of these peoples have survived as the Qritani or Coritani<sup>410</sup> (later known as the Picts<sup>411</sup>), the Dumnoni, and the Cornovii » (Chadwick, 1949, p. xvii).

Hervez doare e tlefe ar re-mañ bezañ Kelted e *q* :

« The variation between the initial sounds of Irish (Gaelic) *Cruithni*, etc. and Welsh *Prydain*, etc. is the same as in the case of Irish *cenn*, Welsh *pen(n)*, etc., which we noticed on p. 54. The initial sound was originally *q-*, which we might

---

<sup>410</sup> pe *Coritavi* (?) hervez Ptoleme [<http://www.roman-britain.org/tribes/coritani.htm>]

<sup>411</sup> S.O. O'Rahilly, 1999, pp. 341 d.h.

write *qu-* or *kw-*. Both the Irish and the Welsh names come from ancient forms which might be written *Quritan-* or *Kwritan-*. There is general agreement among scholars about this equation<sup>412</sup>, except perhaps in regard to the vowel which I have written *-a-*. But unfortunately the treatment of the subject has usually been accompanied by futile speculations about the meaning of the name, which have tended to obscure the really important problem raised by the double use of it in Welsh. This problem, however, is not limited to Welsh usage » (Chadwick, 66-67)

Setu displegadur O'Rahilly evit orin an anv Coritani bremañ :

« Rather, I suggest *Priteni* is probably akin in sense to the cognate *Quariates* (See p. 147 f.). Compare *Cruithne* (<\**Kvriteniā*), the name of a daughter of Lōchān, the mastersmith, and wife of Finn mac Cumail (RC v, 200, § 15) » (O'Rahilly, 1999, n°1, p. 341).

Ar souezhusañ eo notenn O'Rahilly hag an displegadur a ro eus ster ar ger *Cruithne*, dreist-holl goude lennet evezhiadenn Chadwick war ar poent-se<sup>413</sup>. Hervez O'Rahilly enta e vije deuet an anv Cruithne, gwreg da Finn mac Cumail eus unan eus merc'hed Lōchān ar penn-gov. Hep dianavezout henouriezh vitologel an dudenn e ouzer n'eo ket ken kozh rummad mojennoù kelc'h Finn hag ar re all :

« The evidence of this and similar early references to Fionn goes to show that in the eight, ninth and tenth centuries, when tales of the Mythological Heroic, and King cycles were flourishing, Fionn, though well known to men of learning, was confined in their learned lore to short anecdotes connecting him with fighting, hunting, wooing, and otherworld incidents all over Ireland » (Murphy, 1961, p. 11).

---

<sup>412</sup> Abeg a vez kavet en etimologiezh-se gant Dr. Tomlin [<http://www.roman-britain.org/tribes/coritani.htm>]

<sup>413</sup> Re ziwezhat siwazh eo deuet er-maez levr O'Rahilly *Early Irish history and mythology* evit bezañ bet studiet gant H.M. Chadwick. Falc'het gant ar marv, n'en doa ket bet tro hennezh zoken da adwelout e levr *Early Scotland* kent an embann. S.o. Introduction / N. K. Chadwick (Chadwick, 1949, p. xiii).

Displegadur H.M. Chadwick a hañval deomp bout gwirheñveloc'h. Diaes eo ijinañ e vije anvet tud ur meuriad eus ar bloavezioù mil K.K. diwar tudenn ur vojenn lakaet diouzh ar c'hiz adalek an trivet kantved eus hon amzer, anavezet hepken gant an dud desket. Poellekoc'h displegadur hon eus kavet a-berzh Henry Hubert :

« Les Cruithnig sont les Pictes, qui formaient dans la grande île un peuple distinct, occupant tout ou partie, mais partie principale de la Calédonie, avant le moment où les Scotti, c'est-à-dire les Irlandais, les Gaels, vinrent s'y établir et se tailler un nouveau domaine à leurs dépens. En Irlande, les Pictes occupaient une grande partie de l'Ulster ; ils y étaient si nombreux qu'ils y devinrent prépondérants. Il y avait en Connacht des communautés Pictes près de Cruachain, la capitale ; il y en avait en Munster, en Meath et en Leinster. Les Cruithnig d'Irlande sont appelés *Picti* dans les annales irlandaises. Les Pictes de Calédonie sont appelés *Cruthini* ou *Cruthini populi* dans la vie de saint Colomban par Adamnan (750) et la liste irlandaise des rois pictes commence par un fondateur éponyme *Cruidne* (751) » (Hubert, 1974, pp. 205-206).

Un anv hengounel eo Cruithne (Cruidne) a gaver en daou rummad rolloù testeniekaet gant H. M. Chadwick a zo hervezañ kozh ha gwirion. Seul souezhusañ eo kavaden O'Rahilly<sup>414</sup> pa vije anavezet anv an den a zo bet anvet ar meuriad dioutañ, ha ma kaver Cruithni dre pevar c'horn ar vro. Gwelloc'h anadenn a gaver gant skiantourien all :

« The wide distribution of the names *Cornovii* and *Dumnonii*, like that of *Qritani*, is very remarkable. It is to be observed that all the regions in which they are found lie outside the area of Iron Age A culture<sup>415</sup>. That must mean, I think, that all the three peoples were settled in the country before the invasion which introduced this culture. Their wide distribution accords with the fact that

---

<sup>414</sup> O'Rahilly, 1999, p. 341

<sup>415</sup> It seems to have swept over the south-eastern half of England; [...]. In short the Thames valley and the region south thereof were the districts most affected by the new culture (Chadwick, 1949, p. 74). Kevatal d'ar vBolged pe Erainn en Iwerzhon [...] they are especially associated with the south of Ireland ; compare the frequent expression *Érna Muiman*, 'The Érainn of Munster'. (O'Rahilly, 1999, p. 80).

the previous invasion, or series of invasions, in the Late Bronze Age, was on a much greater scale and affected the whole of the British Isles. It may represent conquests made by contingents or parties of adventurers from the three peoples » (Chadwick, 1949, p. 76).

Lakaomp ouzhpenn ar frazenn-mañ a zispleg deomp eo bet roet d'an enezenn a-bezh anv an alouberien gentañ gant an alouberien ouzh o heul :

« The Qritani were apparently the most important; for their name was taken—in labialized form (*Pritan-*)—by the Continental Celts, including the Iron Age invaders, as a general term for the whole country and its inhabitants » (Ibid., p. 79-80).

Ann Ross a bourvez ac'hanomp gant un arguzenn ken kreñv all :

« It is also just possible that the people known as the Cornavii from Caithness, referred to by Ptolemy (second century A.D.), were people who venerated the stag or other horned beast and the deities associated with them rather than being, as generally asserted, the 'Promontory Dwellers', which seems less likely » (Ross, 1967, p. 334).

Pe e vije dougerien azeul ar c'harv keltiek o yezh kent an diweuzadur pe Gallez-Predenek, un dra n'heller ket dianavezout eo ar roudoù yezh nann-Indez-Europek en Inizi Shetland dreist-holl a c'hell bezañ bet hini an Neolitiked A tremenet e Skos pe aet war-du Skara Brae, rak ar re-se a gomze ur yezh nann-Indez-Europek hep mar ebet. Setu neuze an daolenn kent aloubadeg 1000 K.K. An dra-se a zo akord gant ali Stuart Piggott war an danvez :

« These then were the cultural components about 1500 B.C. in the area later to be that of the Picts : surviving hunter-fisher traditions of Mesolithic origin, mingled with intrusive agricultural economies ; a powerful element represented by the single-grave burials ; and, especially in the north of the area, an Atlantic-derived component » (Wainwright, 1955, p. 56)

Evit ar Gobedoù Kloc'h pe al Listri-Boued, a verk dibenn teorienn prantadoù ensilañ Marija Gimbutas, ar re-se a gomze ur yezh pe yezhoù Indez-Europek<sup>416</sup>.

Sellomp pishoc'h ouzh sellboent O'Rahilly bremañ. An evezhiadenn-mañ evidomp-ni a zo diazez :

« The Cruthin or Priteni are the earliest inhabitants of these islands to whom a name can be assigned. In early Christian times, when the origins of the different ethnic strata of the Irish population were well remembered, the Cruthin of Ireland must have been conscious of the fact that their ancestors had inhabited the country before the coming of the Bolgi<sup>417</sup> and the Goidels<sup>418</sup>. If that was so, we may reasonably infer that, when the Irish literati first began to interest themselves in the various invasions of Ireland that had preceded the invasion of the Goidels, the first of their invasion-stories told how the Cruthin came to Ireland, and how some of them afterwards spread from Ireland to Britain » (O'Rahilly, 1999, p. 342).

Evit O'Rahilly koulskoude ne gomze ket ar Priteni ur c'heltieg e *q* :

« The Cruthin (Priteni), after whom these islands were known to the Greeks as 'the Pretanic Islands '. In early historical times they preserved their individuality best in the North of Britain, where they were known to Latin writers as *Picti* » (O'Rahilly, 1999, pp. 15-16).

Met displegañ a ra an emdroadur yezh en ur mod all :

« *Cruthin* (gen. *Cruthen*, LL 41 e 12) represents an earlier \**Kvritenī*, which is a Goidelic borrowing of \**Pritenī*, preserved in Welsh as *Prydyn*, 'Pictland'<sup>1</sup>. The

---

<sup>416</sup> « ... the Bell Beaker people, whose presence in western Europe between c. 2500-2000 BC is well-attested. The Bell Beaker culture very likely started in the kurganized territories of Serbia, and its push into western Europe completed the restless period of migrations of warrior folk before cultural stabilization and new formation of cultural groups, known in later times as separate Indo-European speakers » (Gimbutas, 1977, p. 366).

<sup>417</sup> Fír Bolg, Érainn.

<sup>418</sup> Tro -50.

usual form of the name in Irish is *Cruithni* (an *-io* stem ; cf. p. 31, n. 3), or *Cruithnig* (pl. of *Cruithnech*, adj. and sb.) » (O'Rahilly, 1999, p. 341).

Skrivañ a ra pelloc'h:

« The Goidels, the latest of the Celtic invaders, and the only Q-Celts among them. They reached Ireland direct from Gaul, and their arrival cannot have been much anterior to the extinction of Gaulish independence (50 B.C.) » (O'Rahilly, 1999, pp. 16-17).

Dre chañs, hon eus kaver ar pennad-mañ evit lakaat an traoù war o rez :

« What does appear from various references cited by O'Rahilly is the presence in Ireland of at least three ethnic groups: Cruthin (or Cruithni) who were mainly in the north-east and plainly akin to the Picts of Scotland (also called Cruthin) ; Erainn, who were mainly in the south-west and in the south-east corner (Déisi); and Goídil (*Cland Míled*) who reigned over Tara, Cashel and Croghan and were the dominant people in the early historic period. 'Whether the Laigin were a distinct people or merely a Goidelic tribe is not clear to us.

We think it more likely that Goidelic was first established in Ireland, and that Brythonic tribes made settlements there, just as Irish settlements were made in Wales both north and south. [...]. Moreover, an unknown proportion of the Irish vocabulary may be non-Indo-European, an inheritance from pre-Celtic times<sup>419</sup>. The Cruthin and the Erainn<sup>420</sup>, being earlier immigrants than the Goídil, probably spoke Q-dialects. However, it is right to say that no certainty seems attainable in the matter » (Dillon, Chadwick, pp. 5-6).

En diwezh, ober a ra Dillon ha Chadwick gant *Cruthin*, pa ra O'Rahilly gant *Priteni*, ar stumm *Cruthin* o vezañ un amprestadenn evitañ. Anzavout a ra hemañ eo bet ar *Priteni* o ren da gentañ war Inizi Breizh-Veur, studial a ra douaroniezh Iwerzhon Ptolemaena ro anv ebet e *q* gwir eo, met diouzh an tu all,

---

<sup>419</sup> Neolitiked A mui Beziou-Trepas. Yezh ar Gobedoù-Kloc'h hag al Listri-Boued a oa Indez-Europek.

<sup>420</sup> An Érainn o vzañ alouberien an Houarnvezh A (tro 600 K.K.), a zlefe bezañ komzet ur c'heltiek gweuzet e *p*.

ne rann grik ebet eus douaroniezh Breizh-Veur an hevelep Ptoleme. Ha dreist-holl n'eo ket e arguzereh evit displegañ evezhiadenn-mañ E. Barry :

« Perhaps the best comparison of MAQA is with Caesar's Belga, Volca, from which words we may conclude that forms like MAQA were current in Celtic both in the north and in the south of Gaul, fifty years before the Christian era » (Barry, 1895, p. 350).

Gouest omp a-vremañ da sevel ur menoz dre vras eus aloubadennoù Iwerzhon gant ar pobloù hag o amzeriad diouzh sav-poent O'Rahilly, goude bezañ lennet alioù skiantourien all :

« From this one may reasonably infer that the Priteni were the ruling population of Britain and Ireland at the time when these islands first became known to the Greeks. The Greek colony of Massalia was founded shortly after 600 B.C. and we need have little doubt that the Massaliots became acquainted with Britain and Ireland, whether by actual voyage or only by hearsay, in the course of the sixth century. In the account of Ireland preserved by Ptolemy, which we have dated *ca.* 325 B.C., the ascendancy of the Priteni has given way to that of the Érainn or Bolgi. It would thus appear that the overthrow of the Priteni by Bolgic invaders took place within the sixth-fourth centuries B.C. » (O'Rahilly, 1999, p. 84).

Met un oberour a rank bezañ meneget bremañ evit ma vo treset ganeomp un daolenn hollekoc'h eus kudenn yezh ar bPikted, pe Goideled e-giz ma vezont anvet gant Mahr. An den-se a anavez tud ar C'hrugelloù evel Kelted da vat:

« According to Archaeology and Prehistory, the Celts descend from a mixture of the bronze Age Tumulus Culture (1550-1250 B.C.) and the Urnfield Culture (thirteenth century B.C.) » (Schmidt, 1979, p. 190).

Da heul, e ra meneg an oberour eus sav-poent N.K. Chadwick a zo bet gwelet ganeomp hag a ro 1000 K.K. pe diagent evel mare an aloubadenn gentañ. Evit Iberia e ranker gortoz Hallstatt, tro 800 pe 700 K.K., hag evit Bro Saoz 600

K.K. Ouzhpenn-se, ne glot ket teorienn O’Rahilly gant henadur Iwerzhoneg Kozh :

« From a relative-chronological point of view, the separation of CI<sup>421</sup> must have taken place after the development of *m/n* but before the transformation of *\*kw/\*ku* to *p* in Gaulish » (Ibid., p. 199).

Ar C’heltiberianeg a zo bet disrannet diouzh an HenGeltiek goude an disrann eus ar Goideleg diouzh an HenGeltiek, hag a glot gant aloubadenn Skos hag Iwerzhon a-gent 1000 K.K :

« The separation of Goidelic from Proto-Celtic took place before the separation of CI, [...] » (Ibid., p. 202).

Disrann ar C’heltibereg diouzh ar Galianeg a c’hoarvezo tro 800, 700 K.K., d.l.e. tro Hallstatt :

« The development of *\*kw/ku* to *p* in Gaulish is relative-chronologically later than the separation of both Goidelic and CI. » (Ibid., p. 202).

Amañ e komzer eus ar Predeneg hag ar Galianeg, a zlefe klotañ gant aloubadennoù kentañ ar Bredeniz tro 600 enta. Setu d’an nebeutañ an daolenn a gemeromp da skouer.

Gant al leurenadur-se, e-giz ma c’heller ijinañ, eo bet kaset da benn aloubadenn gentañ Inizi Breizh-Veur gant ar c’hGoideled<sup>422</sup> adalek Izeldouaroù Breizh-Veur, Cumberland ha Wigtownshire. Ar meuriadoù-se o vezañ anvet Coritani, Cornovii, ha Dumnoni. Gwelet e vo diwezhatoc’h petra eo deuet an doare da vezañ gant an Uí Néilled.

---

<sup>421</sup> Celtiberian

<sup>422</sup> Da lavaret eo evidomp, ar re a gomze ur c’heltiek e *q*.



## *Lignezelezh*

Goude kudenn ar yezh, ez eus ur gudenn all hini al lignezelezh :

« Importantly, many of the records left us by these non-Indo-European cultures show that in addition to speaking languages that were non-Indo-European, these cultures had social structures and religions that were traced to Old Europe (For instance, the Pictish system of kinship, practiced until 842 AD, was matrilineal, another custom preserved from Old Europe) » (Gimbutas, 1977, p. 370).

Ma 'z eo staliet mat kudenn ar yezh gant Schmidt, un dra all eo degemer bloc'h arguzerezh M. Gimbutas mammlignezelezh Europa Gozh :

« The people of Scotland before the coming of the Celts must, after all, have spoken *some* language, and that language must almost certainly have been a non-Indo-European one » (Wainwright, 1955, p. 152).

An dra-se hon eus gwelet dija gant Herity a zisplege e oa aet kuit tud An Neolitik A da Skos (Herity, 1974, p. 153), ha goude tud ar Beziou-Trepas war-du Skara Brae hag Orkney (Renfrew, 1974, pp. 118-119). Kement-se evit arguzenniñ evit mad an Indez-Europeg komzet :

« While it is abundantly clear that a formal religion and a deep appreciation of the visual arts existed, the details remain shadowy. That a flexible and subtle language was spoken is equally clear. It is further evident that an anthropomorphic god and goddess were worshipped in a religion which emphasized to the point of fetishism the principle of fertility in the house of the dead » (Herity 1974, p. 185).

Kement-se a denn an dour diwar prad auidi mammlignezelezh peurunvan an Neolitiked. Ar pezh a oa gwir e Europa Gozh sevenadur Vinča 5000-4500<sup>423</sup>

---

<sup>423</sup> Gimbutas, 1991, p. 209

BC da skouer, ne oa ket gwir ken evit Bezioù Trepas Gavrinis 3.800-3.500<sup>424</sup> K.K. evel gwelet pa ouzer eo bet douaret ar maen azeul gwregel. En tu-hont da se n'eo ket an talbenn atlantel darn eus Europa Gozh :

« It is commonly assumed that the matrilinear succession of the Picts was a pre-Celtic or non-Celtic characteristic which they had taken over from earlier inhabitants of the land. Indeed, it is commonly held to be non-Indo-European. These propositions, however, seem to me very doubtful » (Chadwick, 1949, p. 92).

Ma veze an Neolitiked A e Kaledonia oc'h azeuliñ ur Vamm douar e stumm ur maen sanket en douar evel diskouezhet e Mane Vihan (Skeudenn 80) sed ar pezh a zo gortozet ganeomp. Met ne vir ket an dra-se d'an alouberien gentañ, Cornovii, Coritani ha Dumnonii da gaout int ivez doareoù mammligazel gant o meuriad.

Reiñ a reomp amañ arguzenn Jackson :

« Several considerations suggest that the pre-celtic element in eastern Pictland must have been fairly strong, in spite of the frequency of Gallo-Brittonic place-names. One is the way in which the Celts evidently took up the aboriginal custom of succession through the mother; for, in spite of attempts which have been made to show that this custom is Celtic or at any rate not inconsistent with Celtic practice, it remains the case that though among the Celtic as among other Indo-European peoples inheritance could pass through the female as well as through the male, anything like what seems to have been the Pictish systematised succession exclusively through the female is quite unknown in Celtic tradition, and quite contrary to it.<sup>1</sup> » (Jackson, *in* Wainwright, 1955, 152-153).

Setu da heul an notenn:

---

<sup>424</sup> Le Roux, 2001, p.30

« <sup>1</sup> Efforts to prove that the Pictish succession was not exclusively matrilinear, or that alternatively the Celts did practise matrilinear succession, are examples of disingenuous special pleading and distortions of the Irish law of succession, misinterpretations of Celtic literature, and have completely failed. Cf. T. F. O'Rahilly (1946), 367n, for references » (Ibid.).

Setu bremañ notenn O'Rahilly meneget gant Jackson :

« At the same time one may readily concede that, as the Priteni or Picts were, to all appearances, the first Celtic invaders of these islands, their vocabulary and nomenclature were more susceptible to the influence of the pre-Celtic inhabitants than were the dialects of the later Celtic invaders, such as the Belgae and the Goidels. So the Pictish custom of reckoning royal descent through the mother is regarded by not a few scholars as a pre-Celtic survival. (In the last century of Pictish independence this custom admittedly shows signs of breaking down, under Scotie influence.) Fraser, who minimises unduly the evidence of Pictish filiation through the mother, denies that the Pictish system of succession differed essentially from that which prevailed in Ireland and Wales [...]. Earlier d'Arbois de Jubainville had expressed himself to the same effect (RC xxiii, 359; xxv, 206). But it seems impossible to reconcile this view either with what Bede and Irish authors tell us of the Pictish system of succession » (O'Rahilly, 1999, n 5, p. 367).

Pa lenner a-dost e tispieg deomp O'Rahilly ez eus mammlignezelezh e-touez ar bPikted peogwir e vez disteraet ar boaz-se betek re gant Fraser. Ne zispieg ket O'Rahilly e teu mammlignezelezh ar bPikted eus rak-Indez-Europiz Bro Skos. Met peogwir int bet an alouberien gentañ, e c'hell o yezh bezañ bet levezonet gant ar vroidi-se. Ha reiñ da intent m'eo bet levezonet o yezh, o reizhiad dimeziñ ivez. Jackson e-unan a lavar ne dremener ket evel-se eus an eil reizhiad d'eben. War ar marc'had, n'eo ket alies e vez lakaet gizioù ar re aloubet war an alouberien, c'hoazh pa vije anezho nemet brientinien brezel, met a-veuriadoù e oant deuet :

« Nous avons au contraire quelques raisons de croire qu'ils [les Pictes] étaient un peuple de Celtes, encadrant sans doute une forte proportion d'étrangers et d'aborigènes, mais ni plus ni moins sans doute que les autres peuples celtiques » (Hubert, 1974, p. 209).

E-touez an dud-se ez eus hemolc'herien a c'hellje-i bezañ mammlignezel. Gouzout a reomp ivez ez eus hemolc'herien en Iwerzhon, ar Fianna e Connaught pergen. Padal, diwar-benn mammlignezelezh ar bPikted, ret eo ober ton da arguzenn Chadwick a veneg ur c'hemm eus mamm- da dadlignezelezh bet c'hoarvezet n'eus ket pell :

« Now these genealogies are—without exception, I think—patrilinear. [...]. In some cases indeed there are discrepant accounts of their paternity. Such evidence seems to me to suggest that, in spite of the genealogies, a change from matrilinear to patrilinear had taken place quite recently » (Chadwick, 1949, p. 93-94).

Kement-se evitañ a zo enskrivet er rolloù anvioù roueed Skoz hag Iwerzhon, hag a ziskouez bezañ kozh ha gwirion. Goude ur prantad entremar ma hañval ar bPikted pe Iwerzhoniz ivez termal etre an eil reizhiad pe eben, e tro erfin an dud d'an tatlignezelezh. Reiñ a ra deomp Chadwick un amzeriad zoken :

« As regards the main question, however, it is clear that patrilinear succession came into use early in the ninth century, or possibly (in one case) as early as 782. The fact that no instance can be traced among the thirty-three kings whose fathers are recorded before that date leaves no room for doubt that such succession was contrary to the native law of the Picts » (Chadwick, 1949, p. 90).

Ma 'z eo c'hoarvezet an tremen a vamm- da dadlignezelezh da goulz an tremen eus an aremvezh d'an houarvezh e Galia, a ro deomp un alberzh eus henadur boazioù annezidi an Uheldirioù e Skoz. Henri Hubert a ro deomp un deiziad all gwiriet ha tostoc'h ouzhomp :

« Au temps de Bède le Vénérable, c'est-à-dire au VI<sup>e</sup> siècle, la succession dans les familles royales des Pictes se faisait plutôt en ligne féminine qu'en ligne masculine » (Hubert, 1974, p. 207).

Un dra all hag a ziskouez e oa ar vammlignezelezh ar reizhiad gentañ, eo testeni Tacite e-touez ar C'hermaned hag ar bPikted ivez :

« Ce mode de succession créait des relations particulièrement étroites entre les enfants et les frères de leur mère. Tacite l'avait remarqué chez les Germains : une inscription votive, trouvée à Colchester, montre qu'il en était de même chez les Pictes, probablement même en dehors de familles royales. La voici :

Donum Lossio Veda de svo  
Posvit nepos vepogeni caledo.

« Ce don a été fait à ses frais par Lossio Veda, neveu de Vepogenus, Calédonien » » (Hubert, 1974, p. 208).

Anadenn a vammlignezelezh kent amzer Tacite a gaver c'hoazh pa ra anv Chadwick eus Galianed ar prantad emren :

« It is related by Livy, V, 34. In the time of Tarquinius Priscus, i.e. c. 600 B.C.,<sup>425</sup> Ambigatus, king of the Bituriges, had supreme authority over the peoples of central Gaul. In his time the pressure of over-population was so great that he ordered his sister's sons, Bellovesus and Segovesus, to set out and seek new homes, taking with them as many people as they could get to follow them. Omens directed Segovesus towards the east and Bellovesus to Italy » (Chadwick, 1949, p. 94).

Roudoù diazez ha diarvar a gaver enta e-touez ar C'halianed ha Kelted all eus an Douar-Bras hag an Enezenn, kement ha ma ne c'heller ket komz hepken eus un darvoud rak-Indez-Europek :

---

<sup>425</sup> It is generally agreed that his date is about 200 years too early for the Gaulish invasion of Italy.

« It seems to me therefore that the current belief that matrilinear succession was essentially non-Celtic is insufficiently grounded; succession of this kind may have been widely prevalent in the past. The same remark apply to the belief that it was not Indo-European » (Chadwick, 1949, p. 94).

Estregetañ a gomz evel-se :

« Dans l'histoire de la famille, le droit des *cognati*, parents par les femmes, s'est toujours opposé au droit des *agnati*, parents en ligne masculine L'évolution de la *gens* indo-européenne l'a évidemment amenée en Grèce, à Rome, en Irlande et chez les Gallois vers une forme où le droit des agnats l'emporte nettement sur celui des cognats, d'où il suit que les faits en question ont été considérés comme étrangers au droit indo-européen.

Mais le droit qui nous est attesté par ces faits a régné également chez les Goidels d'Irlande et même chez les ancêtres des Gallois » (Hubert, 1974, p. 208).

Zoken er marzhoù brudet e klever an arliv skoemp-se hag a vez diaes da intent a-wezhioù pa ne vezer ket kelaouet warnañ :

« Les dieux et héros irlandais sont désignés avec le nom de leur mère : Lug est fils d'Ethne, Cuchulainn de Dechtire. Le dieu gallois Gwydion est fils de Don » (Hubert, 1974, pp. 208-209).

Hep komz eus ar bPikted zoken, penaos displegañ pouez bras ar merc'hed er meuriadoù hep na vije dezho ul lec'h vras e spered meuriadoù Kelted zo ? :

« Au surplus, il semble bien que, dans la masse centrale de la Bretagne, les familles royales aient été constituées comme celles des Pictes. La reine, dispensatrice du sang et du rang, devait être l'objet d'une considération qui lui donnait, quand elle savait l'exercer, une autorité considérable, témoin cette Boudicca, reine des Icenis du Norfolk et du Suffolk, qui dirigea le soulèvement de l'an 61 contre Suetonius Paulinius » (Hubert, 1974, pp. 212-213).

Kement-se n'eo ket hep dec'hervel dreistoni er penn kentañ d'an nebeutañ, Doueez-Heol Arinna an Hittited war he gwaz an Doue-Arnev. Degasomp da goun en-dro frazennoù Franz Cumont [pp. 348-349] ma tispleg e veze Hadad doue ar gurun skeudennaouet en e sav war un tarv, hag e baradur en he sav war un heizez. Met roud a zo eus un amzer gozh pa veze an doue Teshoub en e sav war ur c'harv hag e baradur war un heizez. Gouest omp enta da desteniekaat an emdroadur karv - tarv hag heizez - heizez. A-hend-all n'eus arvar ebet ez eo Teshoub d'an nebeutañ hendad Zeus Dolichenos. Derou an emdroadur eo a gaso da Zeus pe Jupiter eus un tu ha da netra pe hogozik d'eus an tu all diwezhatoc'h peogwir e vo aroueziet ar vuhez war ar maez gant ur c'harv hepmuiken en toleadoù-se. Bividikoc'h eo tle bezañ manet an hengoun e-touez ar werin gwirheñvel.

Netra neuze ne aotre ac'hanomp da lavarout e vije bet mammlignezhel gwir herezh an Indez-Europiz seul vui gant levezon greñv ar gKurganiz tatlignezhel. An tarv eo o loen dezho. Ni a gav deomp koulskoude e ranker bout digor ha paouez da soñjal en un doare untuek. N'eo ket an eil tra pe egile. Gwell e ve meizañ a dregantadoù, pe a stadegoù. Kredabl e kaver e-touez an Indez-Europiz meuriadoù a zo manet feal d'o doueez an heol, e-keit ha m'edo meuriadoù all gant o Doue-Arnev, anvet Tarhunt gant an Hittited gozh, da lavaret eo war-dro – 2.300, hag a deuio da vezañ tamm-ha-tamm Zeus ar C'hresianed, Jupiter ar Romaned, Merkur pe Lug ar gKelted, dre un hent kenstur, peogwir eo marvet Tarhunt gant an Hittited. N'edo ket marv menoziad Arinna evit kelou-se, dreist-holl e-touez an hemolc'herien atav un tammig mirourien evel ma ouzer. Penaos a-hend-all displegañ azeul karv ar gKelted p'eo marv e-touez ha gant an Hittited ziwezhañ, ret mat e oa dezhañ bezañ bev kenstur e lec'h all? Hor preder evel-just a zo war hir dermen peogwir e ranker distreiñ betek Afanasievo en diwezh evit adkavout an elnez a oa dindan ar c'harv, hag a chom roudoù anezhi e Arinna Doueez an Heol<sup>426</sup>.

Kevezerezh a zo bet gwirheñvel etre an daou du o deus ranket kenvevañ. Memestra zo c'hoarvezet gant an dud en Europa Gozh n'int ket tremenet en un devezh eus ar vammlignezelezh d'an tatlignezelezh diwar levezon ar gKourganiz. N'eus ken sellout ivez ouzh roc'h Paspardo (Skeudenn 58) ma

---

<sup>426</sup> D'ar mare-se ivez (war-dro -3.000) eo testeniekat an tremen eus ar speredoù d'an doueelezhioù.

weler engravet keñver-ha-keñver daou rumm arouezioù, gwregel (an azeulenn) ha gourel (gouglezeoù) da skouer. Ar garvez e-unan a zo bet gourelaet a-gozh. An dra-se hon eus gwelet gant E. Jacobson evit hengoun Sibiria (adalek -2.000 d'an nebeutañ), met ivez gant M. Gimbutas evit hengoun Europa Gozh he deus lonket hengoun karveded tud Paleolitik Europa ar c'hornog. Hon hengoun Indez-Europek a zo c'hoazh un trede hini o teraouiñ gant Yamna, ennañ Mongoloided o tont eus Afanasievo e Sibiria (goude divroadeg Repin, kerkent ha -3.700) ha degas ganto un azeul karv, a ziskouez splann evit ar wezh kentañ gant An Hittited, goude ragarouezioù siell vMaikop. O paouez omp skrivañ e oa bet gourelaet an arouezioù war ar mein-bez da vare an tremen eus an neolitik d'ar c'houeorvezh, elese an tremen eus Europa Gozh da Europa Indez-Europek.

Amzeriadur an darvoudoù a zo disheñvel a lec'h da lec'h hag a c'hell rouestlañ al lennerien a zo boaz d'an displegadurioù formatet. Dav eo resisaat eo deuet tud ar c'harv da vezañ minorel tamm-ha-tamm a-douez an Indez-Europiz. War Gundestrup e welomp ar c'harv skeudennaouet evelato, daoust dezhañ bezañ neuziet den-heñvel.

An hevelep emdroadur a gaver e lec'h all :

« Seen from Allchin's perspective, the scene is very dynamic and excited; the bull is about to take a female goddess in an act that might be seen as sexual violence, and yet the clear appearance of her open, exposed genitals tells us that she is a willing partner in this deed. [...].



Figure 8.7 Gaur ravaging a female on Chanhu-daro seal number 13 (after Mackay 1943)

Possehl, Indus religion, p. 147



In the Chanhu-daro seal we have a representation of Heaven, the Bull, who is at once the consort and father of Earth; and of Earth who is at the same time the consort of the Bull, Heaven, and the mother of the Bull, her calf; and that these themes can be understood by reference to the Creation myths found in the Rgveda and Atharvaveda. It would be fascinating, but beyond the scope of this paper, to trace these themes through into the mythology of later periods of Indian thought. There is unquestionably prolific and rich material to use, both from textual and from modern ethnographic sources » (Possehl, 2002, p. 147).

Aze emamp en ur bed mesaerien – gounideien en Azia. En Europa eo c'hoarvezet an hevelep emdroadur-se da vare ar Gourganiz p'edo an dud-se o Indez-europekaat Europa Gozh ar c'hounideien. Ouzhpenn an tarv evel Tad-loen edo en o zouez ivez hemolc'herien gant o Vamm-loen gourelaet mui pe vui, ar c'harv.

M. Gimbutas a gave dezhi e teue ar vammlignezelezh eus an Europiz kozh hepken. Hepken ne larfemp ket. E-touez an Indez-Europiz e tlee bezañ bet meuriadoù manet mammlignezel, a-hend-all n'eus ket tu da gompren darvoud Ambigatus ha daou vab e c'hoar, ha n'eo ket unan dister avat. Tro 600 K.K. eo c'hoarvezet a-hervez. An dra-se hon eus lavaret dija a-zivout Sibiria, met roudoù mammlignezel amzer ar C'hallianed n'int nemet aspadennoù un amzer goshoc'h a c'heller dispenn he roudoù betek Arinna (pe zoken Maikop). Diaes eo mont pelloc'h el labour-mañ, met un dra all a c'heller azlavarout diwar-benn ar meuriadoù hemolc'hiñ hag a vefe-i mammlignezel: n'eo ket ur boazamant a vez dilezet war ar prim. Arabat tevel ivez war henadur ar bPikted en o Uheldirioù :

« The struggle between matriarchy and patriarchy evidenced in the foregoing is shown in many another Scottish Gaelic tale, not connected with the deer or the deer-goddesses. The struggle was probably a very long one, and the fortunes of war varied enormously, and with locality. Matriarchy may have lasted in one district hundreds of years after it had died out in some neighbouring district. This would be of a piece with the rest of Highland history, which is a much chequered piece of tartan. But this is a digression » (Mckay, 1930, p. 159).

### 3.6 - AZEUL KARV KALEDONIA

#### A. CAILLEACH

Ar gudenn gentañ hon eus kavet gant an azeul-karv e Skoz eo ar meskaj etre an azeulioù. Dilec'hiet e vo hor studiaden eus azeul-karv bro Skos gant ar frazenn-mañ gant Mckay a ro deomp an tu da zispartiañ etre *Cailleach* Iwerzhon hag hini bro Skos :

« Somehow or other, and at some unknown date in the past, the Irish goddess was imported into Scotland, where she became acclimatized, and canonized as *Cailleach Bheur* or *Cailleach Bheurr*. » (Mckay, 1930, p. 151-152).

Anataet e vez an dra-se gant an holl berzhioù a ya da ober temz-spered an doueez:

« As a mother-goddess, an earth-goddess, a deer-goddess, and as a goddess of the dead, the Irish *Cailleach* is clearly a very complicated character, and may perhaps be an amalgamation, the result of a prehistoric fusion » (Mckay, 1930, p. 151-152).

Lavaromp diouzhtu evit a sell ouzh kendeuzadur ragistorel an doueez e ro an oberour da soñjal deomp en neolitik omp o paouez studial. Er rollad perzhioù eus doueez Iwerzhon eo ret lemel hini ar c'harv evit ma vefe kempoell an dudenn. Ha ma ve lamet ar perzh karveg-se e chom perzhioù azeulenn an neolitik, unan a zere kenañ d'ur sevenadur gounideien : Mamm, Douar, Marv; gounideien Bezioù Trepas zoken abalamour d'an dindandouarelezh na oa ket ur perzh eus maen-azeul an Neolitiked A evel a ouzomp:

« But whereas in Scotland *Cailleach Bheur* is intimately connected with the deer, in Ireland her connection with them is of the slightest; though her assumption of deer-shape seems sufficient to warrant her character, and to associate her with the Highland deer-goddesses, one of whom, the Lochaber

deer-goddess, the *Cailleach* of Ben Breck would, upon occasion, take the form of a gray deer. (Probably all the deer-goddesses did so, but I have only the one tradition.) » (Ibid.).

N'eus ket da arvarañ pelloc'h, *Cailleach* Bro Skos a zeu eus Iwerzhon ha klask a zo bet kendeuziñ Old Women, pe Deer goddesses Skos gant *Cailleach* Iwerzhon en ur wiskañ anezhi gant perzhioù skosek hag ivez reiñ d'ar Gwragez Kozh an anv *Cailleach* e-giz pa vijent eus Iwerzhon. An taol-arnod-se zo c'hoarvezet e dibenn ar pempvet ha derou ar c'hwec'hvet kantved emichañs, da lavaret eo kempred gant aloubadeg Skos gant Dál Riata.

Ne fell deomp gwelout amañ nemet ar pezh a zisparti perzhioù Skos diouzh re Iwerzhon. Pal hor studiadenn a vo klask didoueziañ azeul ar c'harv diouzh hengoun *Cailleach* Iwerzhon hag a c'hell he-unan bezañ disoc'h kendeuziadur azeulioù disheñvel en Iwerzhon :

« The association of the fairies with deer is one of the most prominent features of that [the fairy] superstition. Deer were looked upon in the Highlands as fairy cattle ; and the common form into which a fairy woman transformed herself was that of a red-deer, and sometimes, though not so frequently, into that of a white filly » (Mackay, 1930, pp. 147-148).

Gwelet mat a reer eo arallekaet un tammig azeul ar c'harv gant un azeul all, hini ar *fairies*, d.l.e. boudiged, kornandon(ez)ed, met *witches* ivez pe 'gwrac'hed'. Diwar-benn an dra-se, hor preder nemetañ a vo didoueziañ hon azeul diouzh ar gredenn all-se hep ober war he zro nemet e vefe ezhomm evit mat hon danvez-studi.

Ar perzh anatañ a laka kemm etre an div g*Cailleach* eo ar c'harv : n'eo ket stag *Cailleach* Iwerzhon ouzh ar c'harv. Er c'hontrol ez eo disoc'h *Cailleach* un dra anvet gant Mckay "kendeuzadur rak-istorel". Ret eo soñjal e amzer an Neolitik d'hor meno, ouzhpenn gwiskadoù kredennoù keltiek rak-istorel. Ar c'hCruthin a veze kavet e hanternoz ar vro dreist-holl, met ivez e Connaught hag e Leinster.

Gwelet hon eus gant Henry Hubert e oa Cruthni<sup>427</sup> e pep lec'h en Iwerzhon: Ulster, Connacht, Munster, Meath ha Leinster, er maez eus an tachennoù ac'hubet gant tud an Houarnvezh. Hengoun Finn ivez a gaver un tammig e pep lec'h en Iwerzhon:

« Traditions of a hero of superhuman accomplishments, one of whose names was Finn, must have been known in various parts of the country; and it is possible to distinguish a Finn of Midland tradition, a Lagenian<sup>428</sup> Finn, and a Finn associated with the Érainn of Munster » (O'Rahilly, 1999, p. 275).

Pa ouzer pegen intret eo hengoun Finn gant al loen karv en Iwerzhon ez eus tu da gavout ez eus un darempred bennak etre an daou dra. Bez e c'heller ijinañ ivez e vije bet intret an eil alouberien (Érainn, Fir Bolg) gant sevenadur ar re gentañ (Cruthin). Alese an daveoù poblek d'an treuzneuziañ a blac'h da heizez.

Koulskoude e c'heller ijinañ e vije manet roudoù un azeul ar c'harv en Iwerzhon ivez, met koazhet :

« She [an Irish deer-goddess] is called *Chailleach Bhéarach*, or The Old Woman of Beare. Beare is a little island off the coast of County Cork. In “the Chase of Ben Gulbin”, she assumes deer-shape in order to lead Fionn (= Fingal) into a trap. According to a poem by Dean Swift, doubtless based on tradition, she rode in a chariot drawn by four elks with golden horns, to that extent resembling the Arcadian Artemis.

I do not know of any other Irish tale in which she is connected with deer, and though Old Irish MSS. show traces of a deer-cult,— (in one tale a woman, in order to act as a messenger, is changed into a deer),— there are very few traces of the cult in modern Irish folklore, as far as I know » (McKay, 1930, p. 151).

---

<sup>427</sup> Hubert a rae gant Pikted

<sup>428</sup> Their conquest of Ireland was but a partial one, confined for practical purposes to considerable parts of Leinster and Connaught (O'Rahilly, 1999, p. 16).

E gwirionez e kaver nemeur a roudoù kirvi en Iwerzhon, hag ar re a gaver hervez hon dielfennadur a vefe stag ouzh kelc'h Finn, a vir ennañ marteze aspadennoù eus amzer alouberien geltiek gentañ an enezenn, Cruthin, heuliet tro 600 K.K. gant aloubadenn an Érainn - Fir Bolg, evit menegiñ ar re bouezusañ.

Gwir hon eus enta da skrivañ eo bet azeul ar c'harv an hini kentañ en Inizi Breizh-Veur hag en Iwerzhon a-gent an azeulioù keltiek all, met goude azeulioù an neolitik. Cruithin a gaver e pep lec'h met dreist-holl e Co. Antrim ha Down, Connaught ha Leinster. Gouzout a reomp koulskoude eo aet an neolitiked A eus norzh Iwerzhon da gornog Skos, betek Skara Brae diwezhatoc'h, pa oa annezet ar Bezioù Trepas e-keit-se war-du ar Boyne.

Ne c'hellomp ket harpañ ouzh Lebor Gabála Érenn el labour-mañ, peogwir e vefe un diaezamant kentoc'h evidomp :

« The story of this invasion is evidently a 'learned' invention, devoid of historical value, though it is reasonable to suppose that it has displaced an earlier popular tradition which told how the Cruthin were the first people to colonize Ireland » (O'Rahilly, 1999, p. 75).

### *Síde*

Goude roet un taol-skub da rouestlad azeulioù hen Iwerzhon ha Kaledonia e c'hellomp distreiñ bremañ dezho gant frazenn-mañ Herity :

« Several hilltop cairns, many of them passage graves, were given the name *síde*<sup>429</sup> (otherworld mound) by the Celts, and many of these tombs, notably New Grange, were peopled with Celtic gods like Aenghus and the Morrigan.

---

<sup>429</sup> the word *sídh*, or *sídhe*, (pronounced *shee*) and meaning mounds, was applied also to the supernatural dwellers in the mounds and mountains (Mackay, 1930, p. 146).

Others like *Barclodiad y Gawres* and *Slieve na Caillighe*<sup>430</sup>, were connected with a Celtic hag-goddess » (Herity, 1974, p.147).

Bremañ e ouzomp, trugarez da Herity, e teu ar ger *sídhe* eus ar Gelted, evit envel bezioù trepas a veze goloet gant un tumulus pe ur garn a-wezhioù. Gouzout a reomp ivez e oa annezet al lec'hioù-se gant tud vihan :

« Unfortunately, this word *sídhe* is usually translated fairy because it is applied to the little green folk, the *dei terreni* » (Mckay, 1930, pp. 146-147).

An dud-se dindan douar a laka ac'hanomp da soñjal e Kornandoned ar Vretoned, met a zispleg deomp MacKay ne glot ket boudig (fairy) gant *sídhe* :

« But the word *fairy*, because it carries with it the idea of smallness, is an unsatisfactory translation, seeing that *sídhe* is applied to a colossal old deer-goddess as well as to a tiny green fairy woman » (Ibid.).

Ar gudenn a sav emichañs, evel omp o paouez lavarout uheloc'h, diouzh m'eo bet trevadennet Skos gant an Dalriadiz a ra gant o zermenadurezh-i evit envel ur gwirvoud a gaver ennañ tudennoù marzhoniel nevez na vezent ket kavet en Iwerzhon. E gwirionez e talvez *sídh* evit *fairies* met ne dalvez ket evit doueez-karv ramzel gozh. Daou hengoun disheñvel eo.


Tu a zo da lavarout bremañ e hañval bezañ kendeuzet ar boudiged (*fairies*), ha *Cailleach* pe Hag e-barzh marzhoù Kelted Iwerzhon, ar re gentañ goude ar c'hCruthin avat, elese ar Fir Bolg pe Érainn e kreisteiz ar vro :

« From the account of Ireland which Ptolemy has preserved, we have good reason to believe that the Érainn were the dominant power in Ireland ca. 325 B.C. At that time the name Iverni had two meanings ; it was applied to the people of Ireland (\*Īvernā, > GR. Ἰέρωνη) in general, and in particular to a body of people who were settled in what is now County Cork. The latter fact

---

<sup>430</sup> The Hill of the Witches, Co. Meath [<http://www.iol.ie/~plugin/landscap.htm>]

suggests that the Builg, who invaded Ireland from Britain, may have made their first settlements in the South of Ireland, whence they extended their power over the rest of the country, though, of course, the possibility of later landings elsewhere in Ireland cannot be excluded. It may be noted that Avienus refers to the inhabitants of Ireland as *gens Hiernorum*. Avienus' work has more sources than one, but its mains and oldest constituent is the lost periplus of a Massaliot voyager. This periplus is dated by A. Schulten as early as ca. 530 B.C., though others would place it somewhat later » (O'Rahilly, 1999, pp. 83-84).



**Kartenn 40 : Munster (Co. Cork)**

[[http://www.google.com/imgres?imgurl=http://kinsalenglish.com/images/cork\\_map.gif&imgurl=http://kinsale](http://www.google.com/imgres?imgurl=http://kinsalenglish.com/images/cork_map.gif&imgurl=http://kinsale)]

Diwar ar c'heloù-se hag o tiazazañ war danevell Ptoleme e c'heller diverañ o defe douaret ar Fir Bolg pe Erainn e kreisteiz Iwerzhon, pe resisoc'h er Munster (Co. Cork), o tont eus Breizh-Veur:

« Ptolemy's Iverni were situated approximately in what is now Co. Cork, just as the name *Érainn* is applied chiefly to the *Érainn* of Co. Cork » (O'Rahilly, 1999, p. 9).

*Sentainne Bérrí*

Gwelet hon eus e oa bet douaret ar maen-azeul anvet "Gwrac'h" e Breizh, da lavaret eo Maouez Kozh, stag ouzh ar gounid-douar, ouzh ar bioù ha neuze ouzh ar re varv, un tammig e-giz *Cailleach* Iwerzhon. Bedoniel eo *Cailleach*, pa 'z eo lec'hel er c'hontrol ar c'harv, tostoc'h ouzh ur 'greizenn dotemek' evit ober gant termenadurezh Levi-Brühl<sup>431</sup>, stag ouzh an tan en oaled diwallet gant ar Vamm varzhel (mamm-gozh, henmamm). D'ar mare-se e teu da vezañ eeünoc'h perzhioù eben diagent, hag aesoc'h he zstaat ouzh Gwrac'h, *Cailleach* pe Hag :

« The oldest Irish form of the name would seem to have been *Sentainne Bérrí* which could mean only 'The Old Woman of Beare'. In spoken Irish it is *Cailleach Bhéara* » (Murphy, 1953, p. 84, n. 3).

« The change from *Sentainne Bérrí* to *Cailleach Bérrí* doubtless first occurred colloquially among the illiterate » (Murphy, 1953, p. 84-85).

Diwar-se e c'heller skrivañ eo bet kaset kelted Dana an doueelezh Indez-Europek, dindan an douar, er rannvro m'edo o vevañ *Cailleach Bhéarra*. Ne ouzomp ket re vat piv a oa ar vaouez kozh-se :

« While traditional Irish cosmology has nothing to say of an original moment or agent of creation *ex nihilo* and *ab initio*, it privileges a cosmic, female, geotectonic power that has given shape and form to the world throughout the ages. Nature is renewed eternally in the recounting of the tales of how *Cailleach Bhéarra* impressed herself onto and expresses herself within a landscape made both vital and sacred by association with her divine and sovereign presence » (Ó Cruaiaioch, 2007, p. 29).

Gant *Cailleach* emaomp o tostaat marteze ouzh Gwrac'h Kozh an neolitiked hon doa gwelet uheloc'h gant Herity, hag a oa bet dilec'hiet dindan an douar da

---

<sup>431</sup> 1963, p. 154



vare Gavrinis gant tud ar beziou-trepas, dres evel an Tuatha Dé Danann diwezhatoc’h :

« In many ways the most prominent of these *Cailleacha* is the *Cailleach Bhéarra* or Supernatural Female Elder (‘Hag’) of Beara, one of the great peninsulas of the south—west Irish coast. Beara is the site of the legendary arrival onto the island of Ireland of the human Gaelic population, the Milesian *Gaeil*, who partially displace the mythological *Tuatha Dé Danann* from their former hegemony and cause them to withdraw from the mundane daylight realm into the subterranean and submarine realms of a sacred landscape in which they remain an immortal presence. *Cailleach Bhéarra*, the hag/mother—goddess of Beara is also known at the learned, literary level as a personification of the territorial sovereignty queen, but it is in her presence in popular tradition that her autonomous creative potential resides » (Ó Cruailioch, 2007, p. 29).

Diaes eo bezañ resisoc’h war ar pezh a denn da azeulenn an neolitik diouzh ar pezh a denn d’an hengoun keltiek.



**Kartenn 41 : Enezenn Dursey**  
[http://en.wikipedia.org/wiki/Dursey\\_Island](http://en.wikipedia.org/wiki/Dursey_Island)

Kemmesket e vije enta an daou hengoun : hini ar rak-Indez-Europiz, neolitiked anezho hep ne vefemp evit dispartiañ etre ar pezh a denn d’an Neolitiked A pe d’ar Beziou-Trepas, ha neuze hini ar Fir Bolg pe Érainn :

« At different stages and at different levels of Gaelic tradition, the figure of *Cailleach Bhéarra* has been used to represent various different clusters of cultural meaning so that we are faced with a multiplicity of forms and functions which prove very difficult to distinguish and whose historical and/or functional relationship to each other continues to be obscure to a great degree. In one viewing, *Cailleach Bhéarra* would appear to represent a version of traditions of a mother-goddess emanating from the worlds of Indo-European and even old European cosmology. In another she appears as a representative figure of the Divine Hag of the Celtic and early Irish worlds who has close connections with the sovereignty queen tradition » (Ó Cruaíoch, 2007, pp. 82-83).

Bedouriezh Gwrac'h an Heol koulskoude a aparchant ouzh Europa Gozh hervezomp kentoc'h eget ouzh Indez-Europiz; lec'hiet eo forzh penaos gant kreizteiz an enezenn :

« *Sentainne Bérrí* then is an ancient ascription of the divine female that gives her a localized mythological and quasi-political association with south-west Ireland and in particular with the Beara peninsula at whose tip lie both *Tech nDuinn* (The Bull Rock, *Donn's* house, the otherworld realm of the dead) and Dursey Island (*Oileán Buí*) a kind of headquarters location of the premier, female otherworld agency » (Ó Cruaíoch, 2007, pp. 86).

Kreñv eo al liammoù ouzh he eren gant an dindandouarelezh rak-keltiek :

« On the other hand, this Irish goddess has a decidedly chthonic side to her character. It is in her island of Beare, Co. Cork, that characters from the Land of the Dead arrive when coming to Ireland, and various funerary buildings, cairns, &c are associated with her in other parts of the country. She seems however to be a bright goddess nowadays » (Mckay, p. 151).

A-zivout *Cailleach*, pouezus eo gouverkañ e vez kavet o kadoriañ, un tammig evel Doueez-Mamm Catal-Höyük :

« ‘Tell me this. Were you ever at the Cailleach Bearea’s Chair up here in the Spellick ? It’s two rocks and a seat, just like a big armchair. My mother here will tell you the same. I heard my granny tell it that it was the Cailleach Bearea’s Chair. She never said anything more » (Mac Neill, 2008, p. 573).

Met marteze eo bet kendeuzet an daou hengoun, neolitikel *Sentainne Bérr*i ha keltiek goude eil aloubadenn an enezenn gant an Érainn.

*Dana, Ana*

Ehanomp un tammig war-benn *Dana* :

« The name *Donwy* can be related phonologically to the Irish *Danann* and also to *Dānu*, the name of a goddess who figures in the Rig Veda. In the Veda, *dānu* signifies ‘stream’ and ‘the waters of heaven’, and the same root is to be seen in the names of rivers, from the Russian Don, Dnieper, and Dniester to the Danube and to several rivers in England known as Don. The Vedic goddess *Dānu* is the mother of *Vṛtra*, the chief adversary of Indra, the king of the gods, but she is also the consort of the sovereign gods *Mitrāvarunā*. Her ambivalent role is paralleled by that of *Danann* in Irish tradition. *Danann* is the mother of the gods of Ireland and gives her name to the wizard *Tuatha*. [...]. The *Dagda* and *Ogma*, as well as *Lug*, are sometimes described as sons of *Ethniu*, and in ‘The Wooing of *Etaín*’, *Ethniu* (which also occurs as a river name) is said to be another name for *Boand*, paramour of the *Dagda* and eponym of the *Boyne*, the river which, according to the metrical *dindsenchas*, is known as ‘Roof of the Ocean’ as far as Scotland, as the *Severn* in England, as the *Tiber* in Rome, as the *Jordan* and the *Euphrates* in the East, and as the *Tigris* ‘in enduring paradise’ » (Rees, 1973, pp. 52-53.).

N’eo ket *Dana* ar gudenn e gwirionez met *Ana* an hini eo. Diskoulmet eo bet gant *Claude Sterckx*, en un doare soutil :

« *Ana* se situe étymologiquement au sein de toute une série indo-européenne d'hypocoristiques désignant la mère : hittite *an-na-aš*, grec *άννίς*, latin *anna*, etc...

Quant à la seconde forme, *Dana*, elle est apparentée à une autre série de mots indo-européens dépendants d'une racine *\*dānu*<sup>432</sup> - et dont les sens se situent autour d'une signification "fleuve, cours d'eau" : sanskrit *dā-nu-*, avestique *dā-nu-*, ossète *don*, etc... Ce terme se retrouve d'ailleurs seul ou en composition dans de très nombreux hydronymes : celtiques comme la *Donwy* au Pays de Galles, le *Don*, affluent de l'Ouse en Angleterre et sans doute aussi le *Danube*, plus lointains comme le *Don*, le *Dniepr* ou le *Dniestr* » (Sterckx, 1973, p. 7).

Abae eo deuet er maez ur c'helc'h geriadur hag a zispleg deomp kement-mañ:

« The name Danube has been connected with the Irish goddess Danu (see Tuath Dé) and the Welsh mythological ancestress Dôn, but the three names are distinct: the irish has a short *a* or short *o*, the Welsh a Celtic short *o*, and *Danube* < *\*Dānouio-* a long *ā*.

It has been suggested that the name was an early loan into Celtic from its ancient neighbour to the east, the Iranian language of the Scythians of the eastern European and central Asiatic grasslands. [...]. The Slavic river-names *Don*, *Dniepr*, and *Dniestr* are borrowings from Scythian *\*dānu*, *\*dānu apara* 'upper river', *\*dānu nazdya* 'lower river'. Although these three river-names are loans from Scythian and the Danube also flows into the Black Sea, Welsh *Donwy* leaves no doubt that Celtic and Iranian had the same inherited rivername. Despite the views of earlier scholars such as Vasmer, who took *Danube* to be Iranian in origin, a Celtic source cannot be ruled out on linguistic grounds, and the name *Dānuvius* is first attested in the Celtic-speaking western region of the Danube basin.

Therefore it is possible that *Dānuvius* is what is termed an ‘Old European river-name’ and predates the emergence of Celtic or Iranian as distinct dialects. (Peb, Cw, 2006, p. 569).

Padal, evit distreiñ da Ana, Dana, en em c’houlenñ a reer perak e vije daou anv evit un den hepken :

« Ces deux étymologies nous donnent peut-être la clef des rapports entre les deux noms de la déesse, difficiles à expliquer au point de vue linguistique. [...].

Dès lors ne peut-on penser que, dans ce cas-ci, la déesse portait originellement un nom apparenté à la racine *\*dānu-* décrite ci-dessus, et que la dévotion, aidée par l’assonance, voire par un hermétisme, lui a accolé préférentiellement l’appellation familière *\*ana* (“maman” en quelque sorte), d’où la coexistence des deux théonymes presque homophones ? » (Ibid., pp. 8-9).

Ar gwellañ displegadur eo evit ar mare. Evelato e-barzh ur pennad diwar-benn HannaHanna an Hittited e tispleg deomp an oberourez kement-mañ :

« [...] les noms des divinités HannaHanna, Halki et Miyatanzipa s’expliquent à partir du Hittite et du Louvite, mais n’ont pas d’étymologies indo-européennes » (Kellerman, 1987, p. 110).

« Le nom de la déesse Hannahanna est formé par le redoublement du substantif hittite *hanna-* c. “grand-mère” et signifie probablement “arrière grand-mère ; ancêtre”. Le mot *hanna-* appartient au vocabulaire commun du groupe hittito-louvite, cf. *xñna* “grand-mère”, mais sa ressemblance avec quelques termes de parenté dans d’autres langues indo-européennes peut être fortuite (cf. HEG : 145-6 ; von Schuler 1965 : 170-1)<sup>433</sup> » (Ibid., p. 132).

Gwir eo pa vez sellet ouzh Benvéniste<sup>434</sup>.

---

<sup>433</sup> Peogwir omp o paouez dizoleiñ an tabut-se hag eo poent bras echuiñ gant hol labour, n’hon eus ket bet amzer da vont da furchal an holl daveoù nevez.

<sup>434</sup> Sterckx, 1973, p. 6, notenn 21

« Mais le Hittite dit *anna-* qui fait couple avec *atta* « père », cf. lat. *anna*, gr. *annis* (ἀννίς), « mère de la mère ou du père ». [...].

Il est probable que les deux noms de la « mère », \* *mater* et \* *anna*, répondent à la même distinction que \* *pater* et \* *atta* pour le « père », car « père » et « mère », sous leurs noms « nobles », soutiennent des représentations symétriques dans la mythologie ancienne : « ciel-père » et « terre-mère » font couple dans le Rig Veda.

De plus, seul le groupe hittite a fait de *anna-* (luwi *anni-*) le terme pour « mère », comme *atta-* (luwi *tati-*) pour « père ». Ailleurs, le sens de \* *anna* est assez vague : lat. *anna*, faiblement attesté, semble désigner la « mère nourricière », et ne concorde pas avec gr. *annis* donné par une glose d'Hésychius comme la « mère de la mère ou du père » (Benvéniste, 1969, p. 212).

Pa vez lennet an daveennoù all gant Guyonvarc'h<sup>435</sup> (Ogam XIX, 1967, p. 489), e kaver an alamaneg *Ahn*, ha gant Pokorny (IEW, 1959-1969, I p. 37), an Armenieg *han*, hag an Illirieg *ana* etc. Diaes eo enta bezañ a-du penn da benn gant Galina Kellerman, hag a zispleg pelloc'h memestra :

« Très souvent, le nom de Hannahanna se cache derrière les logogrammes DINGIR.MAH et dNIN.TU Ces noms, parmi quelques autres (Ninmenna, Ninmah, Aruru, etc.) désignent en sumérien la déesse Ninhursag, qui, au 3<sup>e</sup> mill. av. J.C., entre dans la triade des plus grands dieux sumériens : An, Enlil, Ninhursag » (Kellerman, 1987, 130).

Alese ar menoz-mañ : daoust hag-eñ ne vije ket *Hannahanna*, *Ahn*, *Han*, pe *Ana*, stag mod pe vod ouzh anv spered mamm gounid douarel ar reter nesañ ? D'ar mare-se e vefe eus *Dana* hag *Ana* en Iwerzhon daou spered-mamm o ferzhioù damheñvel, an hini kentañ gwriziennet e bed saverien chatal stepinier kreiz Azia, egile jubennadur indez-europeg *Ninhursag* Mezopotamia e lec'h

---

<sup>435</sup> Sterckx, 1973, p. 6.

ma voe ganet er pevarvet milved ha deuet betek Iwerzhon eus Anatolia dre an aod<sup>436</sup> :

« the « lady of the stony ground » ;the « lady of the foothills » ;the « great mother-goddess »; perhaps even Mother Earth (Gimbutas 1989 : 110 ; Kramer 1964: 148). Ninhursag was the first to establish the eight plants in the paradise of the gods; when Enki, the water god and god of wisdom had them cut so that he could eat them, the outraged Ninhursag placed the curse of death upon him. She was thus associated with the gift of life and the cause of death. Ninhursag, however, was also mistress of wild animals. In her function as birth-giver, she was known as Nintur, meaning the “lady of the birth hut,” or of the cattle-pen. In her association with cattle, Ninhursag/Nintur was the source of life-giving milk ; her presence was indicated by the cow pen and the pillars or posts which indicated the all-importance entrance derness in the lovely inlaid frieze from Al ‘Ubaid, in which cows being nuzzled by their calfs are milked in the sacred cow pen, while on the other side of the gateway, marked by posts, the milk is being prepared (...). Thus Ninhursag, the mother of the gods and humanity and referred to as the mother of kings, could be characterized as a cow and referred to as a post and as the giver of milk (...). Her post thus refers to the entrance to a place of generation and sustenance (Jacobson, 1993, pp. 218-219).

A-hend-all, komzet e vez eus *Dá Chích Anann*, da skouer en Iwerzhon :

« Anu’s identification with the earth is brought out even more explicitly in the name of a Kerry mountain, ‘The Paps of Anu’, *Dá Chích Anann* » (Mac Cana, 1973, p. 85).

Klotañ a ra mat an arouezelezh gant Ninhursag, met e Skos ivez ez eus menezioù anvet evel-se, “The Paps of Jura” pe “Meikle Pap”<sup>437</sup> da skouer.

Diskouez a ra an dra-se n’eo ket stag an dreuzskeudenn gant Ana hepken. Ur c’hendeuzadur a c’hell bezañ etre un hengoun neolitik dre vras hag Ana, e

---

<sup>436</sup> Ur vartezeadenn c’hoazh eus hon perzh kement ha respont d’ur goulen n’eo ket hor c’hefridi diskoulmañ el labour-mañ.

<sup>437</sup> Lochnagar or Beinn Chìochan (<http://en.wikipedia.org/wiki/Lochnagar>).

Kerry. N'hon eus ket da studial ar goulennoù broudus-se el labour-mañ evel hon doa kemennet uheloc'h, met aesaet e vo ar studi deomp da neuze.



## B. KIRVI an UHELDIRIOÙ

Kavet e vez ivez e Bro Skoz ar menoz eus loened dreist-naturel, pe bras kenañ, un tammig evel elned murengravadurioù Sibiria, Skandinavia pe ar Val Kamonika :

« (1), That in Scottish Gaelic mythology, the deer are supernatural animals,  
(2), That only supernatural women had the ability or privilege of being able to turn *themselves* into deer, and  
(3), That witches could not turn *themselves* into deer » (Mckay, 1930, p. 148).

« All are gigantic: they are indeed the most tremendous creatures of gaelic myth » (Ibid., p. 149).

« Not one of the Highland Deer-goddesses shows any sign of domestication. No one wields distaff, pitchfork, or broom. They are all creatures of the wild. This is very significant, and suggests a very great antiquity » (Mckay, 1930, p. 150).

An dudenn-se eo a fell deomp digenveziñ eus rouestl ar folklor, rak en em glevout a ra mat-tre gant he c'heniterv eus Sibiria :

« But that the deer was once some sort of a god, as well as a divine messenger, appears from several tales, too long to give here, and in the Highlands the deer is still the fairy or supernatural animal, *par excellence*, and is, besides the particular care of the supernaturals, always feminine, never masculine, who own, herd, and milk the animals, and dote on them ». (Mckay, 1930, p. 147).

Gallout a reer daveañ d'ar Vamm-loen pa gomzer eus Maouezed Kozh Uheldirioù Skos. Un daveañ n'eus ket tu da ober evit *Cailleach* Iwerzhon. Adkavout a reomp ivez e frazenn Mckay, perzh treizher-eneoù ar c'harv pe kannad-doue, koublet gant speredoù gwregel a ra ma c'heller komz amañ eus un azeul-karv, a c'horho heizez evel en Anatolia, hag a vije o tont hervez hon

studiadenn eus neolitik Sibiria. Un heklev eo frazenn Mckay ouzh hini Anisimov :

« [...] the image of the mother-animal at first was not applied to all animals, but only to the species of the totem-animal. And this means that concepts of the so-called mythical first ancestors, constituting the center of the entire mythology of the totemists, in all probability must have borne the image of a female spirit originally: the mythical ancestress-animal.

The image of a female deity, mistress and sovereign of animals, regarded as a mother, but actually preserving only the attributes of motherhood, is a more generally, contracted form of the initial concepts of animal-totems » (Michael, Henry, 1963, p. 169).

Dre-se e c'heller ober Mamm-loen, a zo perc'hennez war loened, elese loen ar spered-mamm, heñvel ouzh mamm ar bagad kirvi e *Buile Suibhne*, hag a gaver stank a-walc'h e kontadennoù Bro Skos :

« The gigantic stature of these Old Women, their love for their deer, the fact that their dealings are almost exclusively with hunters, and the fact that each is referred to as a *beansídhe*, or supernatural woman, seems sufficient warrant for calling them *Deer-Goddesses* » (Mackay, 1930, p. 150).

Daoust hag-eñ e c'heller komz c'hoazh eus ur sevenadur chaseourien e Skos Dál riata? Ket da vat ken evel ma vez displeget gant Mckay :

« They own the deer, they drive them and herd them, and milk them. Some dislike hunters, apparently because of their depredations among their pet animals, but traditions to this effect must be modern, and must date from patri-potestal times, when the flocks of deer, once plentiful, had dwindled, and the forests in which the animals had lived had been cleared for agriculture » (Mckay, 1930, p. 149).

Kevezerezh a zo etre hemolc'hiñ ha gounid douar. Daoust hag-eñ ne vije ket an dra-se displegadur gwerzenn-mañ *Buile Suibhne* ? :

« Though many are my stags  
From glen to glen,  
Not often is a ploughman's hand  
Closing round their horns. (?) » (O'Keffe, 1913/1996, p. 79).

« The primitive hunter, living on venison, could not have thought that his divinities disapproved of his hunting, for that would have implied that he made his living in defiance of them. In other words, his goddesses must have approved of his hunting, and this would account for the fact that they are represented as benevolent, or at least harmless unless provoked » (Mckay, 1930, p. 149).

Kompren a reer re vat goude lennet ar pennad kent eo ereet don ar sevenadur hemolc'hiñ gant azeul ar c'harv. Da eo termeniñ ar ger *sídhe* bremañ :

« It may be necessary to premise that “supernaturals”, or bogles, or divinities, peopled all the natural features of the Scottish Highlands, the trees, bushes, rivers, rocks, and caves, but particularly the mounds and mountains. Presumably, those supernaturals who lived in the mounds and mountains, or underground, were the most important, for the word *sídh*, or *sídhe*, (pronounced *shee*) and meaning mounds, was applied also to the supernatural dwellers in the mounds and mountains, and is to-day, by extension of leaning applied to many kinds of creatures, both canny and uncanny. [...] » (MacKay, 1930, pp. 146).

Aze e weler mat an implij eus ar ger *sídhe* a dalvez krugel pe menez. E Skos *sídhe*, ne dalvez ket kement evit ur garn met kentoc'h ar menez e-lec'h m'edo o vevañ ar ramzez kozh. Keñveriomp gant Sibiria :

« In this scheme of a stadial genetic link of totemic beliefs and cosmological concepts among the peoples of the North, the Evenk views of the sacred clan trees and rocks—*bugady* (lit. “belonging to *buga*”)—are of special interest to us.

According to information related by the Evenks of the Podkamennaya Tunguska, in the past each clan had its own object of veneration—*bugady*. In some cases these were stones and rocks with zoomorphic features, in others trees of unusual size and form. These objects of the clan cult were the place of habitation of the clan's female spirits: the mistress of the clan lands, the so-called *dunne mushunin* (*musunin*), and the mistress-mother of the clan, the so-called *bugady enintyn* » (Michael, 1963, p. 175-176).

Gallout a reer menegiñ adarre termenadurezh Lévi-Brühl a gomz-eñ eus 'kreizennoù totemek' e l'ec'h m'emañ ar Vamm-loen o chom. Amañ e Skos e vije o chom spered gwregel ar goskoriad er menez, evel Lochaber Ben Breck da skouer :

« Accounts of these individual goddesses have come down to us in which they are represented as gigantic old supernatural women, who were supposed to own herd, and milk the deer of their respective districts. They have dealings with hunters only, though in the case of the Lochaber *Cailleach*, women used to see her as well, and used to complain that when she took the form of a gray deer, the Old *Cailleach* stole their dulse and kail. Each of these gigantic Old Women may, in the Highlands, have been thought of as the tribal ancestress, and as the earth goddess, but, in the traditions of them that have come down to us, their character is chiefly that of deer-goddesses. The only instance I have found of a tribal ancestress comes from Ireland » (Mckay, 1930, p. 168).

Evel un heklek d'hor preder diagent e tesson gerioù diwezhañ ar pennadig kent pa laka kemm McKay etre 'Hen-mamm ar Meuriad' ha 'Douez Douar'. Gouzout a ouzomp bremañ ne gomzer ket eus an hevelep sevenadur pa vezer o implijout an eil tro-lavar pe egile. An dro gentañ a zave d'ur sevenadur hemolc'herien, pa zave an eil hini d'unan gounideien. Ouzpenn, dre implij ar ger *Cailleach* er pennad-mañ e verzer mat kendeuzadur hengoun Iwerzhon gant hini Skos, adalek mare Dalriata gwirheñvel.

Gwelet hon eus e oa dedennet an douezzed-karv evel m'o envel McKay gant kirvi evel-just, hag ivez ez eo lec'hel, kontrol da g*Cailleach* Iwerzhon a zo

bedel, pourmen a ra eus Iwerzhon da Skos gant an dud, en enep d'ar Vamm Hen ken bedel all evel-just, met stag ouzh douar ar meuriad. Kement-se a zegas koun eus *Bugady mušun* a oa ivez evel an doueez-karv Skosek, spered al lec'h, hini ar goskoriad dre he anv zoken [S.o. 1.3 C HENVAMM, p. 108]:

« In the Baykal Neolithic period, it was the female elk which served as the sign of life and rebirth ; it was most certainly the shape of the Great Mother to which the dead would return along the clan rivers » (Jacobson, 1993, p. 238)

Ene an den marv a ya gant ster ar goskor evit distreiñ da Mamm Hen ar meuriad. Amañ e Skos, ar c'harv eo ar Vamm-loen :

« But whereas in Scotland *Cailleach Bheur* is intimately connected with the deer, in Ireland her connection with them is of the slightest; though her assumption of deer-shape seems sufficient to warrant her character, and to associate her with the Highland deer-goddesses » (Mckay, 1930, p. 152).

Evit termeniñ perzhioù an div zoueez, e ra McKay gant 'Deer-goddess' a dalvez evit karv an hemolc'herien, pa ra gant 'mother-goddess' evit komz eus *Cailleach* Iwerzhon ar gounideien, da lavaret eo Mamm-Douar.

Komzet e vez eus *Bugady Enyntyn* evel ur spered-mamm, da lavaret eo ur spered gwregel en em ziskouez gant neuizioù disheñvel, dreist-holl loened-mamm, a vev ar meuriad diwar o chaseal. N'eo ket heñvel ouzh un doueez-vamm a zo mamm e gwirionez evel hon eus gwelet azezet en he c'hador e paleolitik Anatolia da skouer pe ivez e ledenez Beara, stag kentoc'h ouzh ar gounid-douar. Met n'eo ket digenglotus an daou hengoun :

« Exactly when and where it arose is still very obscure, but it was from Western Asia, the South Russian plain and the valley of the Don that female figurines, commonly called 'Venuses', in bone, ivory, stone and bas-relief, often with maternal organs grossly exaggerated, were introduced into Western and Central Europe at the beginning of the Upper Palaeolithic by an Asiatic migration in what is now known as the Gravettian culture, the former Upper

Aurignacian. With the transition from food-gathering to food-production the female principle continued to predominate the cultus that had grown up around the mysterious forces of birth and generation. Woman being the mother of the race, she was essentially the life-producer and in that capacity she played the essential role in the production of offspring » (Bhattacharyya, N.N., 1999, p. 1-2).

Gant mesañ loened eo bet gwelloc'h anavezet daou benn an energiezh, gourel ha gwregel :

« But although phallic emblems became increasingly prominent from Neolithic times onwards, the maternal principle, in due course personified as Mother Goddess, continued to assume the leading role in the cultus, especially in Western Asia, Crete and the Aegean, where the male god was subordinate to the goddess. Essential in physiological fact as the conjunction of male and female is in the production of life, it would seem that at first there was some uncertainty about the significance of paternity. Therefore, as the precise function of the male partner in relation to conception and birth was less obvious, and probably less clearly understood, it is hardly surprising that he should be regarded as supplementary rather than as the vital agent in the process. Consequently, the mother and her maternal organs and attributes were the life-giving symbols *par excellence*<sup>438</sup> » (Ibid.).

Gwelet hon eus e Harappa ar prantad da heul diwar sevenadur ar vesaerien [p. 555].

N'eo ket hor pal amañ dezrann azeul-karv Kaledonia, nemet e dermeniñ dre vras, ma ne vo arvar ebet war e vezañs :

« The shifting reference from deer to woman to deer, found in many archaic Siberian mythic traditions, is vividly reflected in the Nganasan belief in a

---

<sup>438</sup> Professor E.O. James

swamp where their animal mothers live as naked women with the hair and antlers of deer » (Jacobson, 1993, p. 197).

Kemm stumm a c'hoarvezh ivez e Kaledonia:

« A folk-memory of such a practice seem to be preserved in several tales in which a hunter, who has been stalking deer observes, when putting up his gun to take aim, that the animal has changed into a woman. This happens three times. He falls in love with her » (McKay, 1930, 155).

Ur skouer eus an tres marzhel-se a gaver er vojenn « the widow's son » dastumet gant Campbell :

« The farmer said, "It was fortune sent thee here with thy gun; there is a deer that comes every night to eat my corn, and she will not leave a straw." And they engaged in the fisherman's son to stay with them, and shoot the deer; and so he stayed; and on the morrow's day he went out, and when he saw the deer he put the gun to his eye to shoot her, and the lock was up; but when he would have fired, he saw the finest woman he ever saw before him, and he held his hand, and let down the gun, and let down the lock, and there was the deer eating the corn again<sup>439</sup>.

Three times he did this, and then he ran after the deer to try to catch her.

The deer ran away, and he followed till they came to a house thatched with heather; and then the deer leaped on the house, and she said, "Go in now, thou fisher's son, and eat thy fill » (Campbell, 1890, p. 307).

Diaes eo tremen dizamant e-biou kenedgouezhioù ken kreñv etre Skos ha Sibiria :

---

<sup>439</sup> (In the other version, he went out on three successive days. On the first when he aimed he saw over the sight a woman's face and breast, while the rest remained a deer. "Don't fire at me, widow's son," said the deer; and he did not and went home and did not tell what had happened. The next day when he aimed, the woman was free to the waist but the rest was still deer; and on the third she was free; and she told the hunter that she was the king of Lochlin's daughter, enchanted by the old man, and that she would marry the hunter if he came to such a bill.)

« In the Baykal Neolithic period, it was the female elk which served as the sign of life and rebirth ; it was most certainly the shape of the Great Mother to which the dead would return along the clan rivers. With the emergence of a stock dependency brought to South Siberia by cultures coming out of the southwest and west the image of the Great Mother took on the form of a strange being, half-cow, half-woman » (Jacobson, 1993, p. 238).

Gwelout a reer n'eus kemm ebet er gredenn, nemet emdroadur da heul an doareoù-bevañ :

« It is as if the underlying object of reverence—call it the Great Mother, the Animal Mother, or the Great Goddess—had simply changed shape, from elk to cow-human, with the transformation of economic dependency from hunting and fishing to pastoralism » (Ibid.).

Kavet hon eus ur c'hendegouezh all a zo c'hoazh arouezius kenañ :

« Hunters and Witches, i.e. Deer-Priestesses.—Before setting forth on their journeys, it was customary for hunters and fishermen to visit some witch to entreat her blessings, (and probably to get charms from her), in order that their labours might be successful. On returning, they would share the game or the catch with her. They would also share with other women. It was considered the height of meanness, — wrong, even, — to refuse to share the venison or fish with a woman who asked for some, especially if she were a married woman. But witches were sometimes very greedy, and wanted too much » (Mckay, 1930, p. 153).

Lennet hon eus diwar bluenn Bogoras a zo aet e-unan er broioù-se o studial an dud ar pennad-mañ :

« An old man, one of the Eskimo at Indian Point, said to me, “It is a mistake to think that women are weaker than men in hunting-pursuits. The home incantations are stronger than those pronounced in the wilderness. In vain man



walks around, searching; but those that sit by the lamp are really strong, for they know how to call the game to the shore » (Bogoras, 1904, p. 359).

Ken heñvel ur c'hendegouezh ne c'hell ket bezañ hep ster. An hevelep kredenn varzhel e Skos hag e Sibiria, rak kreñv eo ar gredenn-se ha barzhoniel meurbet, ne c'hell ket hervezomp bezañ dre zegouezh.

Un dra all hon eus notennet hag a gadarn orin koshoc'h an azeul-karv eget aloubadeg Kaledonia gant Dál Riata :

« The Lochaber Deer-goddess was of bad omen to hunters, but protected outlaws. The outlaws in question are the Robin Hoods of the country, outlawed by the aristocrats ; the latter represent some invading and conquering race, who had promulgated game-laws and arrogated to themselves the right to hunt.

The Jura Deer-goddess would, without remorse, kill man from the neighbouring Island of Islay, as soon as set foot in Jura. But she greatly regrets defeating a Jura man, a native of her own island. Her insularity suggests longstanding interest in the country, and a rooted attachment to the soil, natural to an aboriginal goddess » (Mckay, 1930, p. 159).

Kement-se a zere dres evit trevadur Skos gant brientinelezh Dál Riata hon eus meneget uheloc'h a-zivout chaseourien o kornal. Ni a vefe er mare-se adalek dibenn ar 5<sup>vet</sup> pe derou ar 6<sup>vet</sup> kantved Hon Amzer.

Kavout a reomp gwirheñvel eo deuet azeul ar c'harv da menezioù bro Skos eus an douar-bras. Evit ar mare ne c'hellomp ket bout resisoc'h anez studial an azeul-se end-eeün. Skoret eo hol lakadenn ouzh hor studiadenn eus ar Val Kamonika. Degas a reomp da soñj en-dro frazenn-mañ E. Anati :

« A part quelques gravures datant de la fin de la période III<sup>440</sup>, presque toutes les figurations de dieu-cerf que nous avons trouvées appartiennent à la période

---

<sup>440</sup> 1200-1000 (Anati, 1960, p. 83.).

IV<sup>441</sup>; la religion du dieu-cerf s'est donc développée dans le courant du Ier millénaire » (Anati, 1960, p. 171-172).

Ar prantad-amzer-se a genglot gant prantad trevadenniñ ar c'hCruthni<sup>442</sup>, ar Gelted gentañ hervez hon studiadenn, en Inizi Breizh-Veur. An azeul-se a oa koshoc'h eta eget gweuziadur ar c'hensonennoù-korzailhenn a resteurel ur *p* e Galianeg, hag a oa aet diwar-wel e Indez-Europek, p'eo manet *q* digemm e gouezeleg. Lavarout a reomp an dra-se peogwir e vez kavet ivez azeulioù karv e Galia koulz hag en Inizi Breizh-Veur. Kement-se n'eo ket evit hor souezhiñ rak hervezomp e vefe an azeul-se ken kozh ha sevenadur Usatovo pe zoken Maikop, kement-se evel-just dizamant d'an harzoù-yezh.

#### *Mammlignezelezh hag hemolc'hiñ*

Gouez da Arthur Geddes, ne vije darempred ebet dre ret etre mammlignezelezh ha sevenadur hemolc'hiñ :

« The idea of a “matriarchate” among “a people at the hunting stage” has no substantiating example known to me » (Geddes, 1951, p. 310).

Koulskoude, n'emañ ket an holl dud a-du gant an dra-se, e Sibiria peurgetken :

« Both Sternberg and Pilsudski agree that the Ainu are the only people of north-eastern Asia among whom strong traces of mother-right are found. Pilsudski says that they are just at the stage of transition from mother-right to father-right. As traces of matriarchy he cites the superior position of women among the Ainu as compared with neighbouring tribes, e.g. the Gilyak. This is especially evident during pregnancy, when she is surrounded with every care, and even with veneration. Marriage is never by purchase. [...].

---

<sup>441</sup> 1000-800 (Ibid.)

<sup>442</sup> Priteni, gouez da O'Rahilly

Relationship through the mother is of more importance than that through the father, the maternal uncle being very often the most important member of the family ». (Czaplicka, 1969, pp. 104-105).

An Ainou a zo chaseourien-dastumourien :

« The Ainu (from the word "aynu," meaning "person" in the Ainu language) are the aboriginal inhabitants of the Kurile (or Kuril) Islands, the southern half of Sakhalin Island, and Hokkaido, the northernmost of the four major islands of Japan » (Vajda, Edward J.)

[<http://pandora.cii.wvu.edu/vajda/ea210/ainuNivkh.htm>]

Arabat e vefe ivez mont re bell ganti. Abaoe an derou e komzomp-ni eus mammlignezelezh pe tatlignezelezh en ur glask mirout a implijout uhelvammelezh pe uheldadelezh. Czaplicka a zo anavezet evit skrivañ en he burev. Kavout a ra deomp ez a Mackay dreist muzul pa zispleg deomp argerzh an tremen eus an uhelvammelezh d'an uheldadelezh :

« Such a state of society, in which all women are magical or supernatural, may have lasted for untold ages, but eventually the necessities of specialization have their inevitable result, and sacerdotal duties are allocated to small group of women. Finally a stage is reached when the small group breaks up, and its members fall away until at last only one individual is left. The original condition of society, in which all women were magical, the emergence of the group, and the shrinking of the number of the group until only one member of it is left, are all reflected in tradition » (Mckay, 1930, p. 163).

Ret e vefe hervezañ soñjal en ur bed pa veze uhel stad ar merc'hed er gevredigezh :

« The deer-cult and the deer-goddess cult date from some remote time when woman was supreme » (Mckay, 1930, p. 163).

Traezoù arkeologel Sibiria a van mut war stad uhel ar merc'hed er gevredigezh. Ar pezh a vez displeget gant arkeologourien zo eo ur stad gozh digemmesk, ha neuze tamm-ha-tamm o tiskouezh beziou zo, pinvidikoc'h eget beziou all. Pa gomzomp-ni eus ar merc'hed a oa shamanezed pe "idakon" dre natur, evit anadiñ aspadennoù marzhoniezh ur bed koshoc'h pa veze ar merch'ed ouzh e ren, ne vennomp ket e oa anezho pinvikoc'h eget an dud all (paotred). Stad a veze graet outo e-giz ma vez graet stad ouzh ar chamaned hiziv hep na vefe dre ret ar chaman un den pinvidik. Ha peogwir emamp ganti kerkoulz deomp menegiñ ivez ar frazenn-mañ gant Mckay a zo gwir enni met ivez diwir penn-da-benn :

« Now it were contrary to all the canons of mythological development to suppose that the goddess' nature and attributes fell suddenly off like a garment, and faded completely away. We may safely conclude that they were too precious to loose, and were therefore transferred to some other personage. That personage I feel sure was Cernunnos, and the evidence from the Highlands and Ireland adduced in this paper suggests in the strongest manner that the antlers, the gigantic stature, the squatting posture, and the chthonic or Flutonic character of Cernunnos had been stolen or borrowed or inherited, either from his associate goddess, or from some other female divinity or group of female divinities, own sister or sisters to the Highland and Irish deer-goddesses. He is, in short, merely a masculine transformation of a feminine divinity, merely a reflection of the change from matriarchy to patriarchy; and his subordinate associate is merely a survival of the former state of society » (Mckay, 1930, p. 173).

Ret eo lavarout eo bet darbet deomp bezañ touellet gant un hevelep menoz a-berzh Mckay, peogwir erziwezh n'emañ ket gwall bell eus ar pezh a zo c'hoarvezet e gwir pa ouzer ez eus bet ur stokadenn sevenadurel etre Europa Gozh hag an Indez-Europiz o erruout. Met ar pezh zo c'hoarvezet d'ar mare-se, hini gwagennoù ensilañ M. Gimbutas, n'eo ket ar pezh a zeskriv deomp Mckay. Adkavout a reomp amañ an tremen eus mammlignezelezh ar c'hounideien, da dadlignezelezh ar vesaerien, a zo bet studiet ganeomp

ergentaou [S.o. M. Gimbutas<sup>443</sup> uheloc'h, pp. 439, 441]. Pa eo degouezhet an Indez-Europiz gant o doueoù pep a loen arouezius gantañ, tarv ha karv, e oa c'hoarvezet abaoe pell ur stokadenn all da goulz Yamnaya, ha n'edo ket Mckay evit anavezout, etre daou sevenadur disheñvel bras ivez, hemolc'herien ha mesaerien. Gwelet hon eus diwar-bouez skouer an Hittited penaos eo manet an Doueez Arinna aroueziet gant un heizez, dreist beli Tarhunt (Teshub) Doue an arnev e-pad pell ha penaos diwezhatoc'h ez aio-hi kuit den ne oar pelec'h. Kavet e vo diwezhatoc'h un doueelezh c'hourel ar maezioù a-sav war ul loen all, ur c'harv ar wezh-mañ [Plankenn 5].

Un evezhiadenn c'hoazh kent ha mont war-raok diwar-benn doareoù meizañ an dud. Gant an Hittited, ha marteze kerkent ha Maikop, ez omp test eus dont war wel menoziad an doueelezh, a zo o tont goude hini ar speredoù a veze o ren betek-henn abaoe ar paleolitik. Un diforc'h bras a zo etre menoziad ur spered hag hini un doue. Menoziad an doueelezh a zo un disoc'h goude un hir a brantad emdreiñ eus menoziad ar speredoù end-eeün, a zo, evel m'eo bet gwelet diagent kreizon an dotemiezh evel stumm preder relijiel kentañ, diazezet war marzhoù. Kontrol mik d'an doueelezhioù, ez eo diwelus ar speredoù. Ar pezh a anavezzer anezho n'eo met ur stumm emziskouezhet, hini ul loen da gentañ ha tamm-ha-tamm o tont da vezañ ur stumm denheñvel. Evit ar spered da vezañ bevet gant an dud en o menozioù evel andon ar vuhez, gwregel enta - skouer an elnez a zere kenañ d'ar menoz - gant an tremen d'an neolitik ha pelloc'h d'ar c'houeorvezh pe d'an aremvezh dreist-holl, o deus desket an dud doareoù nevez da c'hounid o zammig boued, hag al loen kary, disheñvel diouzh an eln dre ma ne zoug banhez ebet ar barez hag e koll ar par e gerniel e dibenn ar goañv ouzh e lakaat da vezañ heñvel ouzh un elnez, a gemeras lec'h an eln. Gallout a reer ijinañ neuze ne oa ket ur gudenn evit an dud stumm diavaez ar pezh n'edo a-benn ar fin met stumm emziskouezhet ar Vamm-spered a c'han kerkoulz par ha parez. An dra-se zo gwir ivez evit an arzhañ a zo un den, da lavaret eo ur plac'h, n'eo ket marteze war an dachenn hemolc'hiñ met war zachenn ar marzh. N'en deus ket ar marzh da vezañ diouzh ar vuhez wirvoudel. Ma weler enta engravet n'eo ket karvezed met kirvi

---

<sup>443</sup> S. ivez O. Childe, p. 436

peuliesañ, n'eo ket ar marzh a zo deuet da vezañ disheñvel, met an doare bevañ, an temz-amzer, ar sevenadur, ne vir ket ouzh an dotemiezh da venel bev e menozioù an dud, betek ur poent evelato, pa gejo hemolc'herien(-gounideien) Afanasievo gant Kourganiz Yamna, anezho mesaerien(-gounideien).

Ne vennomp amañ nemet reiñ un alberzh plaenaet eus argerzh emdreiñ ar menozioù relijiel e penn an dud e-pad ar mareoù-hont. Kalonenn ar gredenn dotemek eo Mamm-spered ar Marzh a zo e darempred gant tud ar meuriad dre ar greizenn dotemek, anvet 'totem'. Pe e vefe karv pe heizez al loen murengravet n'eo ket atav a-bouez bras hervez hon dezrann. Un arouez eo atav eus spered-mamm ar marzh, a zo kemmet eus an elnez d'ar c'harv pe garvez ivez a-wezhioù.

Gant menoziad an doueelezh en enep, ez eo un dra all, peogwir ma 'z omp o paouez skivañ ez eo an dotemiezh ar stumm relijiel kentañ, d'ar mare-se ez eo an doueelezh an eil hini. Ur stumm relijiel all eo forzh penaos, a zeu da heul an dotemiezh. Stummoù emziskouezet ar Vamm-spered a zo bet loenheñvel, hanter loen-hanter den, ha neuze denheñvel. D'ar mare-se eo aet da netra ar stumm denheñvel a vaouez, evel displeget deomp gant E. Jacobson a-zivout ar Skuthed ar mor du, dindan levezon ar c'hGresianed, dre an abeg ma oa deuet enta mare an doueelezhioù, dindan stumm un den dalc'hmat, ur gwaz kentoc'h eget ur vaouez ha pa vefe hemañ heuliet gant e barez. Alese ivez perzh bras al loened o vont gant an doueelezhioù, a zegas koun en-dro eus ar mareoù kent pa veze loenheñvel stumm emziskouezhet ar speredoù. Al loened o ambroug an doueelezhioù a zo o tont hiviziken eus ur bed all, hini kozh ha damzisoñjet speredoù gwezh all. O vezañ stad nevez emdroadur ar sevenadurioù da vare an doueelezhioù Indez-Europek, a zlefe treiñ war-dro derou an trivet milved KK., arabat engortoz e vije an doueez lakaet en ur geñver gant an doue. Ar bezioù a ziskouez mat dreistoni ar baotred war ar merc'hed dre vras, ket e pep lec'h avat. En eil prantad relijiel-se, hini an doueelezhioù<sup>444</sup>, ez eo ar reizh eus ar pouezushañ evel-just.

---

<sup>444</sup> Daoust hag-eñ e c'heller lavarout e vo ar prantad relijiel da heul, an trede hini, prantad an undoueelezh, da lavaret eo plac'h ebet ken (er marzh evel-just) ?

Goude bezañ displeget an dra-se e c'heller distreiñ da bennad Mckay ha zoken a-duiñ gantañ mod pe vod : ramzeliezh kern Cernunnos a vir enni koun un amzer pa veze gwregel spered totemek ar meuriad chaseourien d'ar mare-hont. Met arabat faziañ war ar c'houlz amzer. Azlavarout a reomp eo c'hoarvezet ar c'hemm-se tri mil bloaz zo bennak, tro mare sevenadur Yamna, p' o deus kejet an div boblañs, hemolc'herien Afanasievo hag ar gKourganiz mesaerien anezho, pep a loen pennañ ganto d'an nebeutañ: ar c'harv hag an tarv<sup>445</sup>. Ur fazi all eo evidomp e pennad Mckay meneg an doueezed, peogwir d'hor meno ez eo ar Maouezed Kozh ramzel aspadennoù un amzer ma veze o ren ar speredoù. Evit digareziñ an oberour eo ret resisaat eo manet bev an aspadennoù-se e amzer an doueelezhioù.

Advenegiñ a reomp, gant an Hittited gozh ez eo ur c'harv hag ur garvez<sup>446</sup> a veze kevelet ouzh an doue hag ouzh an douez evel loen marzhel er penn kentañ holl :

« Un bas-relief hittite de Malatia en Cappadoce, aujourd'hui au Musée de Constantinople, figure le dieu Teshoub, tenant l'arc et le foudre (l'ancêtre direct du Zeus Dolichénos) debout sur un cerf qu'il conduit au moyen d'une laisse (CONTENAU, *Manuel d'archéol. orientale*, II, 1931, p. 1002, fig. 697). Il semble qu'à cette époque reculée le cerf fût consacré au dieu mâle, la biche à sa parèdre féminine » (Cumont, 1931, p. 529).

Ma veze ur roue a-sav war al loen a ziskouez mat edo menoziad an doueelezh o c'henel e-pad ar mare Indez-Europek-se. Er prantad-mañ n'eo ket bet skarzhet c'hoazh speredoù-mamm hemolc'herien Sibiria, diforc'het evelato e par ha parez. Ur momed eo eus an treuzneuziadur o c'hoarvezout a-hed ar c'hantvedoù, atav war an hevelep tu, an hini gourel, da heul emdroadurioù ar sevenadurezh. E mojennoù Kaledonia koulskoude ez eo gwregel pep tra : komzet e vez eus un Douez karveg o chom er menez, hag eus un heizez o treiñ e maouez... evel e Sibiria rak-chamanel. Ma vije manet koun eus an amzer-se e-touez meuriadoù Uheldiriel Kaledonia n'eo ket souezusoc'h eget

---

<sup>445</sup> Ar marc'h diwezhatoc'h.

<sup>446</sup> Cumont, 1931, p. 528.

Marguerite Salaün ( Marac'hid Fulup) a veze ganti en he eñvor pemzek kantved a hengoun arvorikan<sup>447</sup>.

War-bouez chaseal pe besketañ, en em c'houlenn a reer petra a veze gouest koskoriou pe meuriadoù ar paleolitik da ober evit bevañ ? Met evit a-duiñ gant Geddes, gwir eo n'eus ket ezhomm da gomz eus uhelvammelezh, nag eus uheldadelezh d'ar mareoù-se pa veze ezhomm eus an holl dud evit mont war-raok. Un intañvez ne chome ket pell o vevañ he-unan, hag intañvezed a veze kalz en ur metou hemolc'hiñ. Met e-touez meuriadoù Sibiria hon eus studiet un tammig, p'en em blije daou zen yaouank an eil d'egile, e kuitae ar paotr e familh, mont da chom e tiegezh e wreg hag en em lakaat kerkent da labourat eviti. Evit diskleriañ e garantez, en em lakae ar paotr da chaseal evit ar plac'h.

Ar ger doueezed-karv a zo bet implijet gant Mckay peogwir e oa dianav dezhañ emichañs an emdroadur a zo bet hervezomp etre keal ar speredoù ha menoziad an doueelezhioù. Ne c'hellomp ket mont pelloc'h gant an hent-se a zo muioc'h relijiel e ster hiziv ar ger hag ivez neveshoc'h eget an azeul anienel a zedenn ac'hanomp. A-walc'h eo deomp gouzout enta eo kozh ha ramzel<sup>448</sup> ar merc'hed-se hag ar c'hirvi o loen karet. :

« The gigantic stature of these Old Women, their love for their deer, the fact that their dealings are almost exclusively with hunters, and the fact that each is referred to as a *bean-sídhe*, or supernatural woman, seems sufficient warrant for calling them *Deer-Goddesses* » (Mckay, 1930, p. 150).

Gwelloc'h eo deomp ar speredoù gwregel en o stumm gouez :

« Not one of the Highland Deer-goddesses shows any sign of domestication. Not one wields distaff, pitchfork, or broom. They are all creatures of the wild. This is very significant, and suggests a very great antiquity. Their legends also are of the simplest, and read very like chapters in natural history. There is

---

<sup>447</sup> Sterckx, 2000, p. 17

<sup>448</sup> Gwelet hon eus gant E. Jacobson e tegase ramzelezh banzezioù ar c'hirvi en-dro da ramzelezh Maouezed Kozh (Mammoù-loen) ar Marzh.



nothing like a march of events or a series of adventures, leading up to a climax. This also indicates antiquity, on the principle that the more simplex the more primitive » (Mckay, 1930, p. 150).

Kement-se ne ra nemet kadarnaat ac'hanomp en hon dezrann eus emdroadur ar vuhez venozel dre vras abaoe ar paleolitik. Ni a zo o prederiañ amañ war hir dermen, n'eo ket diwar kantvedoù zoken met milvedoù. Evezhiet hon eus dija met dav hel lavarout adarre, ez omp c'hoazh amañ e Kaledonia an aremvezh, er prantad amzer kent an houarnvezh enta, a oa bet merzet gant Anati a-zivout ar Val Kamonika kement-mañ :

« Dans ce contexte, l'homme ne se considérait nullement comme un créateur, mais seulement comme un outil, un objet. Son action n'était que l'expression d'une volonté extérieure à la sienne » (Anati, 1960, p. 208).

Gant an houarnvezh eo c'hoarvezet dibenn ar prantad kroget gant kavaden an dud eus o ferzh denel, e-skoazh perzh loenel ar boudoù all en o c'hichen war an douar :

« Pendant la période néolithique, l'homme partait à la découverte de la nature et de son environnement, cherchant dans le moindre signe une signification cachée. L'homme était plus soumis à la nature, plus humble devant les phénomènes et les formes qui l'entouraient » (Anati, 1982, p. 209).

Er prantadoù-se ne oa ket bet ganet c'hoazh e spered an dud menoz ur relijion a dlefe tout an dud bezañ renet ganti war an douar.

#### *Abbots Bromley Horn Dance ha banhezioù Digeon*

Chom a ra daou dra stag ouzh ar c'harv met war ar marz da studial buan-ha-buan. The Abbots Bromley Horn Dance da gentañ :

« The dancers consist of a band of twelve, and by tradition, always male. Six men carry the six reindeer antlers, accompanied by Maid Marian, the Hobby Horse, the Jester or Fool, a boy carrying a bow and arrow, another a triangle on which he beats time, and a musician, nowadays playing an accordian, but in past years a fiddle » (Shipman, 1982, p. 3).

Kement-se n'eo ket hep dec'hervel dañsoù ar c'harv, pe e vefe en Iberia pe un tammig e pep lec'h en Europa da goulz Impalaeriezh Roma, met dreist-holl marteze banhezioù kirvi Star Carr eus derou ar mezolitik, daoust ma vez douget ar banhezioù etre o daouarn gant korollerien Abbots Bromley, ket evel koefoù war o fenn evel e Star Carr. Soñjal a reer forzh penaos e lidoù dañsal stag ouzh an hemolc'h, hepmuiken.



**Skeudenn 81: Koroll Kerniel Abbots Bromley**  
(Shipman, 1982, front.)

Ma n'eo ket stag kredabl korolloù Abbots Bromley ouzh mezolitiked Star Carr, ez eur kaset en-dro d'ur bed Indez-Europek kozh a-walc'h n'eo ket keltiek ar

wezh-mañ met German (Anglez-Saoz<sup>449</sup>) marteze, stag ouzh hemolc'hiñ atav. En em gafemp amañ morvat e-tal dibenn ur skourr all eus emdroadur an azeul-karv Indez-Europek, kenderv da hini ar gKelted, hon eus meneget da vare divroadeg Yamnaya [Kartenn 31, p. 360]. Skourr ar c'hGermaned eo an hini a zo o vont war-du ar reter, hag a dremen evidomp dre Skandinavia. Stag e vefe enta koroll kerniel Abbots Bromley ouzh ar skourr-se.

Chom a ra ivez relegoù brein eskern dek karv diskaret eus santual Digeon<sup>450</sup>, e Gallia:

« Ces restes [seule la partie antérieure de la tête a été déposée] peuvent être les déchets d'une préparation de massacres en vue de leur exposition. Cette utilisation de la coiffe du cerf est probable, mais il faut rappeler que les niveaux dont il est question sont tardifs, et postérieurs à la conquête<sup>451</sup> » (Méniel, 1987, p. 125).

Evel e ledenez Iberia emamp amañ e derou ar prantad Roman:

« D'autre part on peut remarquer que si ce sont bien des trophées qui ont été ainsi préparés, tous ne devaient pas être très impressionnants, car provenant de daguets » (Méniel, 1986, p. 112).

Rediet omp da anzavout n'eo ket gwall greñv an anadenn rak :

« Cette sélection, qui se traduit par la présence de restes de dents et de mâchoires, semble résulter de la préparation de trophées, que le mauvais état de conservation des pièces et le manque de précisions quant à leur position dans le gisement, ne permettent pas de décrire en détail. Toutefois, dans le cadre de cette hypothèse, les restes de cerfs seraient des témoins négatifs, [...] » (Ibid., pp. 112-113).

---

<sup>449</sup> [[http://en.wikipedia.org/wiki/Abbots\\_Bromley\\_Horn\\_Dance](http://en.wikipedia.org/wiki/Abbots_Bromley_Horn_Dance)]

<sup>450</sup> Green, 1992, p. 47

<sup>451</sup> Aloubadenn c'hGallia gant Kaezar.

Kavout a ra deomp eo deuet ar poent evidomp da lakaat un termen d'ar rann-mañ eus hon enklask daoust ma n'eo ket bet studiet pervezh azeul karv bro Skos omp o paouez diskouez e oa anezhañ. Hor pal ne oa ken el labour-mañ, ouzhpenn diskouez emañ lec'hiet e orin e Sibiria.

O paouez omp reiñ doare an azeul-karv en e stumm henañ eus Skos. Souezhus e vefe ma ne vije ket bet intret hennezh gant azeulioù all o tont eus sevenadurioù diagent war al lec'h pe eus Iwerzhon war-eeün, e doug an emdroadur. En ur lavarout-se e soñjomp dreist-holl e levezon Dál Riata. Ar gudenn a oa neuze diskouez ez eo deuet *Cailleach* eus Iwerzhon. Gwelet hon eus eo bet enbroet *Cailleach Bhéarach* e Skos eus Iwerzhon, ha ma ne resisa ket Mckay pegoulz. Kavout a ra deomp eo c'hoarvezet an dra-se da goulz trevadenn Dál riata adalek dibenn ar 5vet kantved K.K. diarvar.

## C. FINN

### *Demne*

Goude studiet hag anavezet azeul karv bro Skos, e c'hellomp bremañ teurel ur sell war Gelc'h Finn, a vo kavet e-barzh ivez roudoù eus an azeul-se. Krogomp gant ar pezh anatañ, da lavaret eo anv Finn e-unan a oa Demne kent dezhañ bout anvet Finn :

« Goll killed Cumall in the battle [of Cnucha [...] between Cumall and Urgriu of the Luaigni], but Cumall's wife was pregnant and bore a son. The boy was taken away from his mother and reared secretly in the forest for fear of the warriors of the Luaigni and the sons of Morna. His first name was Demne, but later he was called Finn ('fair' or 'white') » (Dillon, 1958, pp. 35-36).

Deuet da vezañ bras ez eas Demne da welout ur barzh evit deskiñ an arzh barzhonegiñ, pehini a roas dezhañ un eog a ouiziegezh a oa arabat dezhañ debriñ :

« 'The lad brought him the cooked salmon. "Have you eaten any of the salmon, lad?" said the poet. "No," said the lad, "but I burned my thumb and I put it into my mouth afterwards." "What is your name, lad?" said he. "Demne," said the lad. "Finn is your name, lad", said he, "and it is to you that it has been given to eat the salmon and you are the true Finn." Then the lad ate the salmon. That is what gave knowledge to Finn, when he used to put his thumb into his mouth and chant by means of *teinm laeda* ["chewing marrow"] and whatever he did not know used to be revealed to him. He learned the three things which make a poet sacred, *teinm laeda* and *imbas forosndai* and *díchetal di chennaib*. It was then that Finn made this poem proving his poetic skill.

Summer time, season supreme ! Splendid is color then. Blackbirds sing a full lay if there be a slender shaft of day » (Dillon, 1958, pp. 35-36).

Ar pezh omp o paouez lenn a zo an tremen eus ar stumm pobl d'ar stumm lennek, eus an hengoun d'ar skrivañ, war-un-dro evit "Finn" gant an tremen eus ar bugaleaj d'an oad gour. En ur dremen eus an eil stumm d'egile e tesk Finn barzhonegiñ, da lavaret eo sevel barzhonegoù :

« The predominance of the Fenian Cycle in the literature begins with the composition, *ca.* A.D. 1200, of a long story called *Acallam na Senórech* ('The Colloquy of the Old Men'), which is second only to the *Táin* in length. [...] the framing story here being an account of the meeting of the survivors of the Fenians with St. Patrick. [...]. Cailte wanders over Ireland with the saint and tells him the legends of the hills and woods and lakes to which they come, in the manner of the *Dinnshenchas*. [...]. Some of the tales he tells to his various hosts belong to the mythological or historical cycles, but they are mostly of the high deeds of Finn and the Fenians » (Ibid.).

Gwelet mat e vez ar pouez kemeret gant an oberenn lennegel pa veze an hengoun danevellet dre gomz betek hen, ar c'hristeniañ o vont a-gevret gant ar skrivañ. Kemmet e vez e anv d'ar bugel. Ne c'heller ket bezañ hep merzout e talvez Demne kement ha menn-karv :

« Avant de tenter de dégager le sens de ce symbole, il faut savoir ce que nous en dit la littérature irlandaise. A plusieurs reprises, le cerf y joue un rôle capital. C'est surtout le cas dans le cycle de Finn, héros du Leinster. Ses descendants s'appellent *Oisín* (« faon ») et *Oscar* (« qui aime les cerfs »). Finn lui-même porte le surnom de *Demne*, qui peut s'expliquer par une forme \**dam-nijo* (« petit cerf »). Une partie du Leinster porte le nom d'O سراige, que l'on peut traduire à peu près « peuple du cerf ». Il faut aussi penser au nom de la tribu germanique des *Chéruskiens*, dont le grand héros Arminius-Siegfried est caractérisé dans les Eddas, par des liens particuliers avec le cerf » (De Vries, 1984, p. 182).

Alioù disheñvel a gaver war-benn orin ar gerioù-se :

« Zimmer (...) has endeavoured to bring the name *Ossín* from Norse *Ásvin*. But it is of undoubted Irish origin. Names in which *oss*, 'deer,' is the first element abound. Thus we find *Os-bran* (...), *Os-chú*, *Os-fher* (...), *Os-gen*. *Ossín*, like *Ossíne*, *Osséne*, *Ossán* (...) is a pet form of any name beginning with *Oss-*. » (Meyer, 1910, p. xviii).

Weisweiler ivez a stal e deorienn war an hevelep komprenzon eus ar rummad gerioù-mañ :

« Finn und bereits vor ihm sein Vater Cumal waren die Anführer der Fiann von Leinster. In Leinster verlebte Finn seine Jugend. Hierhin führt auch die Spur seiner Ahnen mütterlicherseits. Er lebt noch fort in dem anglisierten Namen der Diözese *Ossory*. Die Bezeichnung dieses Territoriums ist wie in zahlreichen anderen Fällen identisch mit dem Namen des Volksstammes, der es bewohnte. Es genügt, an Beispiele wie Franken, Schwaben, Bayern und ähnliche, Trier < Treveri, Paris < Parisii, Bourges < Bituriges usw. zu erinnern. So bedeutet *Osraige* („*Osseirge*) eigentlich „Hirschvolk“. Nun liegt die engere Heimat Finns zwar nördlicher als Ossory; aber das Gebiet der „Hirsche“ gehört doch zum Königreich Leinster, dessen Herrschern Finn und sein Vater unterstanden, und die Bewohner Ossorys waren mit dem Leinstervolk verwandt » (Weisweiler, 1938, pp. 158-159<sup>452</sup>).

Da eo diskleriañ evit a sell ouzh *Osraige* avat ez eus dizemglev etre oberourien zo :

« *Osraige* m. pl. name of a tribe of West Leinster, occupying mod. Ossory. [...] Also *Ossairge* : *Osairgi* » (Quin, 1998, 493).

Setu ali arvarus O'Rahilly :

« Irish tradition derives *Osraige* from *os*, 'deer', < \**uksos*. The *Os* in *Os-raige* was doubtless one of the designations of the ancestor deity, and was possibly a

---

<sup>452</sup> N' anavezomp ket Alamaneg a-walc'h evit reiñ un droidigezh d'al lennerien, met danvez ar pennad ne c'hell tremen hep bezañ digomprenet a-grenn.

distinct word from *os*, 'deer'. Compare the mythical Cú Oiss, who is represented as (1) son of Nuadu Find Fáil » (O'Rahilly, 1999<sup>453</sup>, p. 10).

An notenn diwar-benn Cú Oiss hag a gas da « Jrnl. R. Soc. Antiq. Ir. 1895, p. 363 » a zo e gwirionez diwar-benn « Mac Corb, son of the son of Labtaid<sup>454</sup> ».

Ar rummad anvioù-se a denn d'ar c'harv a zo test eus an enebiezh etre an hengoun ha skiant ar mare. Displeget e vez argerzh poellekaat an dud gant Mac Neill evel-hen :

« Primitive epopee appears to be the product of a kind of rationalizing or humanizing process. The oldest forms of folklore were doubtless the nature-myth and the anecdote. In the myth, the mysterious forces of nature are deified, and the phenomena they produce appear as the wars and quarrels, the loves and procreations, the incarnations and metamorphoses of the gods. In course of time, as mythology develops, the original meaning of the events becomes obscured, until at length the whole story becomes cloudy, mystical, and irrational » (Mac Neill, 1908, pp. xliii-xliv).

Peogwir n'eo ket enta Demne lesanv Finn met e anv gwirion roet dezhañ gant e vamm ez eus tu d' en em c'houlenn hag-eñ ne vije ket un heizez eus e vamm :

« Before passing from this wholly orally preserved Fionn lore To Fionn lore preserved either wholly or at least primarily by manuscript tradition, there is an intermediary class to be considered, that is to say Fionn lore which exists primarily, it would seem, by oral tradition, but is to be found also in manuscript versions.

To this class the tradition that Oisín's mother was a deer<sup>455</sup> probably belongs, for although the tradition is also to be found in manuscript poems, those poems seem to be either too old or too rare to account for the tradition being known both to Irish and Scottish storytellers » (Murphy, 1953, p. xxi).

---

<sup>453</sup> Embannet evit ar wezh kentañ e 1946

<sup>454</sup> In Ogham stones in Kilkenny county / Barry, E.

<sup>455</sup> « One of Finn's mates was herself turned into a deer by a Druid. She gave birth to a child, half deer, half man, which was called Oisín, 'Little Deer' » (Ross, 1967, p. 335).



Da lavaret eo, an hengoun dre gomz diwar-benn mamm Oisín a zo boutin d'an div vro ha re gozh evit bezañ bet lakaet dre skrid dre ma n'eo ket anavezet gant marvailherien an div vro, a dennfe enta o gouiziegezh eus an hengoun dre skrid. An hengoun-se a vefe ken kozh ha Cruithni an aremvezh. Un eil boutinelezh a c'heller ober dezhañ deraouiñ adalek divroadeg Dál Riata. N'eo ket splann ster ar frazenn deomp. Bezet-a-vezo, meneg henadur an hengoun a c'hoari a-du gant hon displegatur eus c'hoarvoud azeul ar c'harv en Iwerzhon. Diwar ar relegoù-se eo bet savet ur c'helc'h nevez disheñvel.

Kavet e vez meneg ar vammelezh vurzhdus er barzhoneg-mañ meneget en notenn (1) gant Gerard Murphy :

« XXXII. The birth of Ossin, two quatrains on the upper margin of LL. 164:

« Mathair Dīarmata ōn dáil ingen Churric meic Chatháir,  
 is Blāi Derg din Banbai braiss māthair Ossíne amnaiss.  
 Ticed [Blāi] i rricht eilte hi comdáil na díbergge,  
 co ndernad Ossíne de ri Blāi nDeirgg i rricht eilte<sup>456</sup> » (Meyer, 1910, p. xxvi).

En hengoun e kaver meneg eus ar vammelezh vurzhdus, n'eo ket evit hor souezhiñ rak test e hañval bezañ an hengoun dre gomz da gentañ, eus roudoù un azeul-karv. N'omp ket gwall bell ivez eus Suibhne, nag eus e :

« A mathair na groidhi-si  
 rolíathadh do lenn,

---

<sup>456</sup> La mère de Diarmaid venant de la rencontre  
 la fille de Curric mac Cathair  
 Et Blai Derg la rapide d'Irlande  
 la mère rusée d'Oisín

Blai venait sous la forme d'une biche  
 (première alternative pour le vers : A la rencontre/vers les brigands  
 deuxième alternative : parmi le combat)  
 De sorte qu'Oisín fut fait  
 avec Blai Derg sous la forme d'une biche

(Trugarez da Eamon O'Ciosain evit e skoazell diziouerus)

ni fhuil damh at dheagaidh-si  
gan dá fhichead benn » (O'Keefe, 1913, p. 78).

Menegiñ a ranker ober sav-boent Mac Neill, a studi a-dostoc'h prantad tremen an hengoun dre gomz d'an hengoun dre skrid :

« We do not hear of contemporary *fiana* in the Annals. They probably belonged to no later period than the completion of the Milesian conquests, which virtually came about in the fifth century, before our contemporary political records begin. [...]. « The *fiana*, therefore, are prehistoric ; but that such a class could have been invented for literary purposes is inconceivable. Their existence is a fact preserved by a genuine and vivid, if somewhat idealised, tradition » (Mac Neill, 1908, p. xxxiv).

An hengoun meurganel, hag a zo disheñvel diouzh an hini a denn d'ar c'harv, a zo stag ouzh ar c'hGáleoín, n'eo ket koshoc'h enta ha kreiz hanterenn gentañ an trivet kantved kent Krist<sup>457</sup> :

« To sum up, the story of Fionn appears to have arisen, like most primitive hero-lore, in the region of mythology. It obtained a peculiar development among the ancient vassal race of North Leinster, the Galeoín<sup>458</sup>, who impressed on the life of the heroes the character of professional warriorship, permanent military service being a special obligation of unfree races only » (Mac Neill, 1908, xliii).

Arabat e vefe ankouaat e oa bet annezet an tolead-se eus Leinster gant Cruthin adalek o aloubidigezh e dibenn an aremvezh, ha gant Gálioín a-c'houdevezh. Hervezomp-ni e vefe tu neuze da emblegañ e marzhoniezh gouenn sujedet an Gálioín, roudoù koshoc'h eus marzhoniezh ar c'hCruthin, a-hend-all n'eus doare ebet anavezet ganeomp da resteurel roudoù poblek an azeul-karv a gaver e kelc'h Finn. Setu danevell emdroadur kelc'h Finn :

---

<sup>457</sup> « the two last Celtic invasions of Ireland, that of the Lagen and that of the Goidels, took place between *ca.* 325 B.C. and 50 B.C. » (O'Rahilly, 1999, p. 42).

<sup>458</sup> S.O. VI. — The Lagenian invasion : Lagen. Domnainn. Gálioín (O'Rahilly, 1999, p. 92).

« This cycle remained in the possession of the subject races apparently until about the tenth century. As the Milesians, though masters of nearly all Ireland, never colonized more than about one-third of the country, the remaining two-thirds continuing in the occupation of the older races and under the rule of their native kings, it is evident that this epic of a subject race had an extensive public to whose sympathies it could present a strong appeal. Thus it must have spread from North Leinster, where it first took shape, through a large part of Ireland, ultimately reaching the furthest bounds of Gaelic speech. The period I postulate for this extension is the early centuries of Milesian domination, mainly between the years 400 and 700. During this time the Fenian tradition must have been purely oral, and therefore susceptible of local development to any extent » (Mac Neill, 1908, xxxvi).

Anat deomp bremañ ez eus un hengoun marzhel o tiflukañ e Leinster :

« Nevertheless, the Fenian epic retains clear traces of its mythological beginnings. [...]. Fionn is a demigod. On his father's side, he is a hero of the ancient Gaians. His mother is the daughter and granddaughter of the gods. She was Muirenn, daughter of Tadhg son of Nuadhu. It is commonly related that this Tadhg and his father were druids. But in the *Agallamh* (see “ *Silva Gadelica*,” translation, p. 225), among the various rulers of the Tuatha Dé Danann is mentioned Tadhg son of Nuadhu *out of the beautiful sidh of Almu*. Tadhg, therefore, was one of the immortals who dwelt in underground mansions of great beauty; and more than that, Almu or Almhain, Fionn's own habitation, was itself one of those dwellings of the gods. Fionn was great-grandson of the deity, Nuadhu, whose name has been found in several pagan Celtic inscriptions in Britain » (Mac Neill, 1904, xliv-xlv).

An hengoun a welomp o sevel a zo hini ar c'hGálioín, o tont eus Galia hag o klask imboudañ o sevenadur ouzh marzhoniezh ar vro, gwirheñvel :

« Fionn, the great hunter, may also belong to the mythological period. Apollo was a god of the chase. One of the synonyms by which Lugh, the favourite deity of the Celts, was known in ancient Ireland was Conmac, ‘hound-lad,’ or

Mac Con, 'lad of hounds.' On the other hand, in its historical aspect, the Fenian epic embodies the tradition of a professional warrior-caste, to whom the chase, in a country abounding with wild animals, must have been a customary recreation. Thus the characteristic prominence of hunting in the epic is capable of a less remote explanation than the mythological one » (MacNeill, 1904, p. xlv).

O paouez omp diskouez penaos o deus ar c'hGálioïn staget o anv ouzh marzhoniezh Iwerzhon, gouez da Mac neill. Met arabat ankounac'haat an hengoun gwerinel a zo koshoc'h eget marzhoniezh dre skrid Iwerzhon dre vras. Pa vez engortozet ne c'heller ket tremen hep e welout. Da skouer, kavet vez c'hoazh un aspadenn moarvat eus un azeul karv e kelc'h Finn pe kelc'h Leinster, er vojenn anvet 'Finn and the man in the tree'. An destenn-se a zo eus dibenn an eizhvet pe derou an navet kantved<sup>459</sup>. Reiñ a reomp da heul un darn eus troidigezh Kuno Meyer :

« Then Derg Corra<sup>460</sup> went into exile and took up his abode in a wood and used to go about on shanks of deer (si uerum est) for his lightness. One day as Finn was in the wood seeking him he saw a man in the top of a tree, a blackbird on his right shoulder and in his left hand a white vessel of bronze, filled with water, in which was a skittish trout, and a stag at the foot of the tree. And this was the practice of the man, cracking nuts ; and he would give half the kernel of a nut to the blackbird that was on his right shoulder while he would himself eat the other half; and he would take an apple out of the bronze vessel that was in his left hand, divide it in two, throw one half to the stag that was at the foot of the tree, and then eat the other half himself. And on it he would drink a sip of the bronze vessel that was in his hand, so that he and the trout and the stag and the blackbird drank together. Then his followers asked of Finn who he in

---

<sup>459</sup> « The following texts belong, I think, either to the late eighth or early ninth century :—

II. 'The Quarrel between Finn and Oisín' (*Oiséne*), printed and translated below, pp. 24 if. Finn is here called *úa Báiscne*.


III. 'Finn and the Man in the Tree,' printed and translated in *Revue Celtique*, vol. xxv., pp. 344 if. The following words and forms will show its great antiquity: *mocu Birgge* 1, *mocu Daigre* 2, 4; *fortngaib* 1 ; *fritinnle* 1 ; *doinsort* 1 ; *a donicas* 1, 4 [...]. (Meyer, 1910, p. xviii).

<sup>460</sup> Servijer d'ur brizoniadez gant ar Fianed (Meyer, 1904, p. 347).

the tree was, for they did not recognise him on account of the hood of disguise which he wore.

Then Finn put his thumb into his mouth. When he took it out again, his *imbas* illumines him and he chanted an incantation and said : [Here follows another rhetoric in which the name of the person is revealed to Finn.] « Tis Derg Corra son of Ua Daigre », said he, « that is in the tree » (Meyer, 1904, pp. 347/349).

An den war varr ur wezenn d'eus un tu hag ur c'harv ouzh troad anezhi eus an tu all, a laka ac'hanomp da soñjal e siell Maikop, engravet warni ur c'harv hag ur wezenn, da gentañ. An den war varr ar wezenn a laka ac'hanomp da soñjal e murengravadurioù Skandinavia m'eo bet kaver seurt arouezioù :



**Skeudenn 82: Engravadur eus Medbo, Bohuslän**  
(Gelling, Davidson, 1969, p. 58)

Reiñ a reomp da heul displegatur Hilda Ellis Davidson :

« A very charming engraving from Medbo, in Bohuslän (Fig. 26h) shows two birds perching in a tree; but they, rather than the tree, seem to be the centre of interest. More intriguing, perhaps, is one from Tanum, in which a human figure with raised arms appears to be standing in the branches (Fig. 26g). It is tempting to regard him as the tree-spirit in human form, but this is no more than a guess. On the whole it seems that there is insufficient evidence for a separate tree-cult » (Gelling, Davidson, 1993, p. 58).

N'eus ket a-walc'h a anadennoù evit un azeul-gwez marteze, met peadra zo da zaveañ da 'Aotrou ar wezenn' [S.o. p. 315] pa vezemp o studial hengoun Sibiria goude hini Mezopotamia a-zivout arouezelezh ar wezenn vuhez ouzh ar

wezenn luc'h. Un elfenn c'hoazh da vezañ lakaet war gont hengoun Sibiria eo enta Derg Corra emichañs, evel hini engravadur Medbo, Bohuslän.

### *Vosegus Silvestris*

Tostoc'h ouzhomp e kaver ivez *Vosegus Silvestris* da vezañ tostaet ouzh Derg Corra :

« It would be unrealistic to suggest that the Irish 'Peaked Red One' is identifiable either with Vosegus or with Cernunnos in his role as nurturer of the animals, but nevertheless, it can hardly be held that the cult legends which gave rise to the symbolism of these monuments can have differed greatly from those in which this extraordinary scene, described in a later and Christian milieu, but in which the pagan details would seem to have been so faithfully preserved, originated » (Ross, 1967, p. 338).

A-duiñ a reomp gant Ann Ross pa lavar an dra-se. Gwir eo n'emañ ket re bell arouezelezh eus un den evel Vosegus diouzh unan evel Derg Corra :

« The man is Dercc Corra mac hUí Daighre, (?) 'the Peaked Red One', descendant of the flashing one, a being from the otherworld. It is noteworthy that he is distinguished by his *leaping* » (Ross, 1967, p. 336).

Setu an daveenn a ro deomp M. Greene eus Vosegus :

« A woodland, nature and hunter—god was venerated at the Le Donon sanctuary. He may be the local god of the Vosges, VOSEGUS : two images display a male deity carrying the fruits of the forest — a pine-cone, acorns and nuts — in an open bag under his arm. He wears a wolfskin and his boots are decorated with the heads of small animals. This god is both a hunter and protector of the forest and its creatures: he has a long hunting-knife at his side, a large curved chopper for smiting beasts, and a lance. But he rests his hand in benediction on the antler of a stag which stands fearlessly at his side. The gods

role as a forest-deity is enhanced by the presence of foliage » (Greene, 1997, p. 131).

E Galia er Vosges e vez graet anv eus Vosegus, ha forzh pegen tost ouzh Derg Corra e c'hellfe bezañ elfennoù zo eus an dudenn, n'eo ket an hevelep prantad ken, nag an hevelep briñsenn eus ar skourr. Koulskoude an hevelep hengoun eo eus un dudenn er c'hoadoù. E anv a zo hini un torosad menezioù ez eo Vosegus an doueelezh anezhañ. Stag eo ouzh al lec'h, evel m'emañ stag ramzeded kozh Kaledonia ouzh ur menez bennak e-lec'h m'emaint o chom. Ha ma'z eo stag an doueelezh ouzh ul lec'h, emañ stag ivez ouzh an dud a zo vevañ war al lec'h-se, da lavaret eo ouzh ur familh pe ur goskoriad, c'hoazh ur meuriad da heul. Adkavout a reomp ar c'harv, hag ar wezenn pe glasvez, evel e Maikop koulz hag e Anatolia. N'emañ ket pell Vosegus ivez eus Cernunnos Gundestrup neket marteze evel suward *Bugady Enintyn* met d'an nebeutañ diwaller loened ar c'hoadoù hag a vez hemolc'het gantañ. Kavout a reer ivez resisadurioù a laka kemm etre ar ouezeri hag al loened all, hag a ziskouez eo tremenet an azeul eus ur gevredigezh chaseourien ma ne oa nemet loened gouez, d'ur gevredigezh ma vez tud o chom er c'hoadoù, ha ma vez beniget ar c'harv met distrujet al loened gouez all. Kement-se a gas ivez da ziv skeudenn all.

Fiñv an dorn war banhezioù ar c'harveg a zegas koun eus delwennoù arem daou zen war garr Strettweg bep a zorn war banhezioù kirvi, pe ivez eus gwerzenn-mañ *Buile Suibhne* gwelet uheloc'h :



**Skeudenn 83: Vosegus gant Karv<sup>461</sup>**  
(Ross, 1967, Pl. 82a)

« not often is a ploughman's hand  
closing round their horns. (?) » (O'Keffe, 1996, p. 79).

Piv eo Vosegus ?

---

<sup>461</sup> The god Vosegus with stag attribute, Vosges, France. p. 333



« He is the god of the Vosges Forest, a HUNTER and protector of the inhabitants of the woodland : he carries weapons for the destruction of wild beasts, but he rests his hand on his stag's antlers in an attitude of benediction » (Greene, 1997, p. 221).

Arabat ankounac'haat ivez e veze laboused pintet war skourroù ar wezenn-  
vuhez, un tammig evel Fer Benn war pikoù banhezioù kirvi. Kement-se a ro un  
toulad arouezioù a grog da stummañ ur preder kempoell, evidomp da vezañ  
rediet da chom war evezh. N'eo ket hor pal amañ studial an div dudenn, Derg  
Corra ha Vosegus, nemet reiñ un alberzh eus perzhioù zo boutin etrezo ha  
kadarnaat evel-se unvaniezh ha ledander an hengoun Indez-Europek keltiek  
hag ar pouez dianavezet a-walc'h kemeret gant ar c'harv en hengoun-se. Ne  
gomzomp ket eus arouezioù all ar vojenn : kraonenn, avalenn, banne dour, a  
hañval deomp bout kalz muioc'h danzeet ha neuze diwezhatoc'h eget al lodenn  
a zedenn ac'hanomp : an den o tiskouez er wezenn, ur c'harv ouzh troad anezhi.  
Niverusoc'h ha luzietoc'h e teu ar skeudenoù all da vezañ, gant an amzer. An  
evezhiadenn-se a zere mat da Gelc'h Finn ma weler perzhioù nevez o tiskouez  
tamm-ha-tamm e-doug ar c'hantvedoù ha mont da binvidikaat tudenn an haroz  
a zo evel Vosegus hemolc'her anezhañ ouzhpenn bezañ brezelour. Distroet e vo  
war-benn Derg Corra izeloc'hig da geñver ar *Mabinogion*.

Met ur perzh all a zo manet kozh gant Finn, e vamm a zo anezhi un heizez en  
hengoun dre gomz avat. Kement-se a aotre ac'hanomp da vuzuliañ pegen kozh  
eo ar perzh-se, a zo nebeut a dra e kelc'h Finn a-bezh, met a zo ret mont war gil  
betek ar prantad etre ar c'hCruthin hag an Érainn e ragistor Iwerzhon evit  
kavout an orin anezhañ. N'eus ket da souezhiñ, rak e folklor Kaledonia e veze  
kavet c'hoazh roudoù eus ar prantad amzer digemm-se e-pad an naontekved  
kantved pa veze graet anv eus karvezed o kemer stumm maouezed, evel e  
Sibiria. Setu deuet ar poent da bouezañ war henadur pellañ sevenadur  
Kaledonia a zo dleet d'he douarouriezh evel m'hon eus gwelet uheloc'h pa eo  
bet gouverket e oa tremenet Uheldirioù Kaledonia eus ar mezolitik d'an  
aremvezh hep tremen dre an neolitik, gant an distro ma 'z eo an toleadoù-se.

Mat eo degas da soñj en-dro displegadur Mac Neill meneget uheloc'h eus ster orin ar vojenn o tont da vezañ displann gant red an amzer, zoken kevrinus, diheboell.

*Kirvi, gwez, ha Doueez kornek*


Talvezout a ra ar boan, a-gent tremen da Suibne, chom a sav war doueezhioù Enez Breizh-Veur stag ouzh ar c'herniel pe al loened gouez, rak meur a hini zo. Hervezomp, e-giz m'eo bet gwelet e Galia buan-ha-buan, e vefe an doueezhioù-se eus an eil remziad goude hini azeul ar c'harv, krog da emdreñ e mistri al loened, pe e doueezhioù denheñvel ha zoken o kavout ul lec'h etouez ar pañteon gallo-roman.



**Skeudenn 84: Kirvi er c'hoadoù<sup>462</sup>**  
(Ross, 1967, p. 161)

<sup>462</sup> 56b Relief of stags in forest from Vindolana (sic) (Chesters Museum), Northumberland. p. 161 56c Detail of Vindolana (sic) relief

Pedra zo da souezhiñ o welout ar skeudennoù-mañ engravet o tiskouez adarre div arouez anavezet mat ganeomp, ur wezenn a-gevret gant ur c'harveg, kavet e Vindolanda, war al *limes*, nepell eus moger Hadrian.



112. *Left.* Altar to *Cocidius*, Risingham, Northumberland

113. *Above.* Altar to *Cocidius*, Risingham, Northumberland

### Skeudenn 85: Karv ha gwezenn war aoter Cocidius

(Ross, 1996, p. 208)

Adarre karvedeg ha gwez war un aoter da gCocidius, war al *limes* c'hoazh. Un azeul ar c'harv emdroet eo moarvat, gant un doue ar wezh-mañ, denheñvel o tiskenn hep mar ebet eus un azeul koshoc'h oc'h emplegañ ur c'harveg, heizez pe karv :

« Finally, and also from Scotland, the name of one early tribe suggests that they may have venerated a tribal god of the stag-god type. The Cornavii, 'People of the Horn' (or 'horned ones') occupied the region which is now Caithness, when Ptolemy recorded the names of the inhabitants of Scotland in the first half of the second century A.D. [...]. . In considering the possible extension northwards of a cult of deities of the Cernunnos type, we must not forget the very faithful portrayal of the Cernunnos figure at Meigle, and late though it indubitably is, its presence there is strongly suggestive of a lingering tradition in the area of a cult of this kind » (Ross, 1967, p. 143).



**Skeudenn 86: Doueez he c'herniel kirvi<sup>463</sup>**

(Ross, 1967, p. 144)

Ma vije bet gwregel an azeul-se da gentañ a c'hell bezañ diveret eus skeudenn an doueez he banheziou arem eus Londrez (marteze), a c'hell bezañ un aspadenn a zougen testeni eus gwregelezh an azeul er penn kentañ. Ar c'herniel o verkañ enta an doare loen emleget en azeul-se. Splann eo e veze graet e bed ar marzh marteze, treset pe skrivet, gant banheziou evit merkañ, n'eo ket reizh al loen met al loen e-unan, en tu-hont d'ar gwirvoud korfadurel, karv pe heizez. Bezañ gwirheñvel n'eo ket preder kentañ ar marzh.

Met ne fell ket deomp chom re bell war 'An doueez he c'herniel kirvi' rak re nebeut a dra a anavezomp diwar he fenn evit ar poent, ha poent eo treiñ war-du ar Mabinogion ma kaver ivez karveded.

---

<sup>463</sup> 45c Antler-bearing goddess in bronze from ?Londinium

## *Mabinogion*

Loen hanterour etre an daou ved Dyfed et Annwryn setu petra a hañvalbezañ karv an hemolc'h e skourr "Pwyll, prince de Dyfed", e-giz m'eo bet testeniekaet meur a wezh a-hend-all e-kerzh hor studiadenn. Ur vaouez a zo e kreiz ar bed-se rak ar riegezh eo hi evel ma ouzomp.

Evit a sell ouzh pevare skourr ar Mabinogi : « Math, mab Mathonwy », anv a zo eus un heizez hag eus ur c'harv, met an arroud-skrid a zo hini ur c'hastiz a dalvez d'an daou vab Don, nized Math<sup>464</sup>, Gilvaethwy ha Gwydion dont da vezañ un heizez evit an hini kentañ hag ur c'harv evit an eil. Heuliet e vo treuzneuziadur an daou baotr (deuet da vezañ par ha pavez<sup>465</sup>) e moc'h-gouez ha neuze e bleizi.

Evit a sell ouzh karv Rhedynvre<sup>466</sup>, e mojenn « Kuhlwch hag Olwen », n'hon eus ket kalz tra da lavarout ivez paneve m'emañ lod a-gevret gant tri loen all : (karv), toud, erer, eog, eus temoù kontadennoù pobl renkaduret gant Aarne-Thompson; anezho marteze aspadennoù ur bed koshoc'h m'o deveze al loened-se un dalvoudegezh stag ouzh ar gozni, tost enta ouzh derou ar bed, aroueziet e spered an dud gant ur spered-mamm gwerc'hgenel. Daoust hag un darempred a vefe etre ar pezh hon eus displeget hag ar pevar loen-mañ ? E-barzh levr Claude Sterckx : "Des dieux et des oiseaux" hon eus bet ar chañs da zizoleiñ trugarez da vadelezh an oberour e-unan<sup>467</sup>, hon eus kavet ur pennad diwar-benn an erer kentañ a ziskouez ne oa ket pevar met pemp loen kentañ: ar voualc'h, ar c'harv, an toud, an erer, hag an eog a zastum an holl. An holl loened-se a zo eus un amzer, kent al Liñvadenn-Veur. Un darempred a c'heller ober gant hon azeul karv a zo anezhañ ul loen kentañ ivez, pe ul loen-mamm kentoc'h. E marzhoù Sibiria e kaver ivez ered ha brini.

---

<sup>464</sup> Roudoù a vammignezelezh a gaver amañ evel alies e Materi Breizh.

<sup>465</sup> Kavout a ra deomp ez eo avoral ar c'hoarvoud-mañ ne c'hell bezañ savet nemet en un empenn kristen.

<sup>466</sup> Lambert, 1993, p. 152.

<sup>467</sup> Levr Carlo Ginzburg ivez "*Storia notturna*", a zo bet aliet deomp gant Cl. Sterckx.



Ur pennad all a zo dedennus evidomp rak hol lakaat a ra da soñjal e Cernunnos, ha pa vefe disheñvel a-walc’h an div dudenn an eil diouzh egile. Tannet eo ar pennad eus Kuhlwch hag Olwen ivez :

« Au sommet du tertre, tu verras un grand homme noir, aussi grand que deux hommes de ce monde. Il n’a qu’un seul pied, et un seul œil au centre du front. Il a une massue de fer, et tu peux être sûr qu’elle pèse autant que peuvent porter deux hommes de ce monde, quels qu’ils soient. Il est le garde de cette forêt » (Lambert, 1993, p. 215).

Anat diouzh lenn ez eus anv amañ adarre eus un den eus ar bed all pe dindan, peogwir ez eo annezet en un duchenn, suward evel *Fer benn*, met n’eus meneg ebet amañ eus ur baeronez a vamm. Pell emañ diouzh bed Sibiria hervez doare daoust ma ‘z eo stank an arouezioù a ra d’an nen soñjal e Cernunnos :

« Il prit sa massue à la main et il en frappa un grand coup sur un cerf, qui brama de façon aiguë. Répondant à ce brame, il arriva une multitude d’animaux sauvages aussi nombreux que les étoiles du ciel, si bien que j’avais à peine la place de rester dans la clairière avec eux : c’étaient des serpents, des vipères et toutes sortes d’animaux » (Ibid., p. 216).

Met deomp-ni e kas Vosegus da goun dreist-holl, hag ivez Sucellos pe Dagda kentoc’h abalamour d’ar vataraz. Un dudenn a zo perzh e skourr predenek<sup>468</sup> ar marzhoù keltiek eo emichañs, hag a gaver en-dro e oberennoù Chrétien de Troyes. An naered ha naered-gwiber (o fennoù tourz) a zo skeudennaouet kevret gant Cernunnos war gibell Gundestrup, ha brudet peurliesañ evit bezañ gwregel o arouez. Met adarre el levr gant Sterckx, meneget uheloc’h e kaver ar frazenn a aesa al labour deomp :

« Hors de l’iconographie gauloise d’inspiration classique où l’aigle de Jupiter pourrait n’être dû qu’à cette dernière, la statue de Dampierre-les-Bouhy

---

<sup>468</sup> S.o. Sterckx, 2009, p. 115.

identifie bien le dieu aux oiseaux à Sucellos dont le caractère jupitérien de père universel est bien reconnu » (Sterckx, 2000, p. 87).

Koulz eo da heul ar frazenn gent degas da goun ez eo Tarhunt<sup>469</sup> an Hittited henden Zeus<sup>470</sup>, da lavaret eo Lug an Iwerzhoniz pe Merkur ar c'hallianed. Dav eo notenniñ ivez ez eo an doue-se Eochaidh Ollathair mab Eithliu<sup>471</sup>, a c'heller ober anezhi d'am meno kevatal marzhel Iwerzhon ouzh *Bugady Enyntyn* TOUNGOUZED SIBIRIA. Da vezañ studiet :

« A côté d'un mythologème majeur selon lequel le Principe féminin incarnant le Monde et légitimant par son union sexuelle, librement consentie et affranchie de toute loi, la souveraineté macro- et microcosmique est à la fois mère, épouse et fille, on notera aussi [...] » (Ibid., p. 86).

Daoust hag-eñ e c'heller mont ken pell hag en em c'houlenn hag-eñ ne vije ket gwerc'hgenel enta Eithliu, un tammig evel *Venus* ar paleolitik ?

Derg Corra hag a zo bet studiet uheloc'h a zo da vezañ hevelebet ivez ouzh Eochaidh Ollathair (Zeus, Jupiter) gouez da Claude Sterckx. Gouest e oa Derg Corra da lammat dreist ar pred o poazhañ! Abalamour d'an dra-se eo bet hoalet gantañ ur goantenn a oa miret evit Finn. Arouez eo ar plac'h eus Eithliu emichañs, ha Derg eus Teshoub, Tarhunt, Zeus, Jupiter, h.a.

Gwirheñvel eo dre ma toug Derg an holl arouezioù kanonel a gas en-dro d'an Ollathair. Da lavaret eo ruz<sup>472</sup> (*dearg*) eo an dudenn, pavioù ur c'harveg en deus, bouetañ a ra ur c'harv, ur bran zo gantañ war e skoaz<sup>473</sup>, kabelleo, un arouez kastrek eo hag ivez :

---

<sup>469</sup> « Un bas-relief hittite de Malatia en Cappadoce, aujourd'hui au Musée de Constantinople, figure le dieu Teshoub, tenant l'arc et le foudre (l'ancêtre direct du Zeus Dolichénos) debout sur un cerf qu'il conduit au moyen d'une laisse [...]. Il semble qu'à cette époque reculée le cerf fût consacré au dieu mâle, la biche à sa parèdre féminine<sup>469</sup> » (Cumont, 1931, p. 529).

<sup>470</sup> « The supreme male deity of the Hittite pantheon, the Storm-God of Hatti (Hittite Tarhunt<sup>470</sup>) was an Indo-European import, later identified with the Hurrian Teshub. [...]. The Storm-God of Hatti shared the great Temple at Hattusa with the supreme goddess of the land, the Sun-Goddess of Arinna. Assimilated into the pantheon from the native Hattian tradition, the Sun-Goddess was the special protector of the kingship. Her Hattian name was Wurusemu, and she was later identified with the Hurrian Hebat » (Collins, 2007, p. 174-175).

<sup>471</sup> Sterckx, 2000, p. 85

<sup>472</sup> Sterckx, 2000, p. 88

<sup>473</sup> Ibid., p. 89

« Celui qui s'enveloppe dans ce manteau peut prendre la forme, la taille et la couleur qu'il désire, quelles qu'elles soient<sup>474</sup> » (Sterckx, 2000, p. 90).

Ar wezenn vedel eo hini Derg Corra, a-us d'ar vammenn vedel a zour ar bed. Gwezenn ar skiant eo ivez, aroueziet gant kraoñ-kelvez a vez lonket gant an eog. An dour eus al lestr arem a zo evitañ hag evit an eog, ar c'harv hag a vran. Un aval a denn eus al lestr arem ivez, ma 'z eus dour (?). Arouez an dour a gaver ivez e Skutia ma 'z eo aroueziet ar vaouez a-gevret gant ur wezenn e-tal ur marc'heg gant ur c'horn-evañ<sup>475</sup> :

« Thus in each of the plaques the subject is similar : two men address each other with rytha, or male figures stand or sit on horses with raised rhyta before a seated woman. The woman may be frontal or in profile, and she may hold a mirror or a cup or vase. She may be accompanied by an alter [sic], a tree, and a horse-head » (Jacobson, 1993, p. 164).

Kement-se, ur wezh ouzhpenn evit pouezañ war an darempredoù a zo boutin etre Skutia ha Keltia, hag a vez kavet o orin e Su Sibiria. Da notenniñ ivez ez eo ar skeudenn-se eus ur vaouez an diskouezadur diwezhañ eus ar wregelezh kent dezhi mont diwar wel, rak levezon bounner ar gourelezh gresian hiviziken e Skutia.

---

<sup>474</sup> Meneget gant Bergin, 1927 (1937 ?), p. 403 *Aodh Abaidh Easa Ruaidh mise* How the gagda got His Magic Staff

<sup>475</sup> « Rhyton or horn-cup » (Jacobson, 1993, p. 162).



## D. SUIBNE

Evit tremen da Suibne e c'heller ober anv eus displegadur Murphy eus emdroadur an hengoun a vez kavet er barzhonegoù skrivet hag a zo re gozh pe dibaot evit bezañ lod eus hengoun marvailherien Iwerzhon ha Skoz. Rak ouzh ar barzhonegoù-se n'eo ket stag hini Suibne ar pennad 40 ma ro deomp e lesanv *Fer benn* peogwir n'eo ket barzhoneg ar rannbennad-se e-touez barzhonegoù koshañ an tengeran :

« Suibhne lived at the time of the battle of Magh Rath (A. D. 637). None of the poems has been said to be earlier than the eighth century ; most of them are much later » (Lehman, 1955, p. 135).

Etre an eizhvet hag an daouzekvet kantved e hañval bezañ bet skrivet an tengeran :

« The form of the Buile Shuibhne that we have is thought to go back to the twelfth century. The close quotation of some of the prose in the Cath Maighe Rath, and the inclusion there of some of the stanzas from the poems, supports this date. But if the use of later monosyllables as dissyllables indicates a text of the tenth century or earlier, the five oldest poems belong to an early stage in the development of the tale. Probably these poems go back to a time long enough after the battle of Magh Bath so that the kings were no longer clearly distinguished » (Lehman, 1955, p. 132).

Evit a sell ouzh ar rannbennad 40 setu dezrann R.P. Lehmann :

« The poem that is most likely a composite is § 40 « A bhennáin, a bhuiredháin ». This poem is the longest in all the Buile Shuibhne, sixty-five stanzas in 7 iii-5 i. The subject matter is far from homogeneous [...]. Stanza fifty-three begins the punning on *benn* » (Lehman, 1955, pp. 130-131).

Kregiñ a ra ar c'hoari-ger war "penn" gant ar poz niverenn 52, hag echuiñ gant an niverenn 60, gant ar ger *Fer benn* end-eeün e-giz pa vije bet mennet an nav

faos-se evel ur menoz hepken. Ouzhpenn-se n'eus mui nemet ul loen en 9 foz-se, ar c'harv, pa veze loened all en daou boz diagent : broc'h er poz 51 ha mouilc'hi er poz 50 :

« Old forms are scarce in this section, but in its continuation in the last seven stanzas<sup>476</sup> the poem there are again old forms » (Ibid.)

Setu da heul displegadur Lehmann :

« The variety of subject-matter in this poem, its unusual length, and the distribution of old forms suggests that it was not composed all at one time. The prose introduction to this poem can hardly be expected to prepare for the variety of topics it contains. The episodes mentioned in § 40 are the same as those in the very old § 67, but are told more briefly with the addition of other material that has no clear part in the story » (Ibid.).

En "danvez all" n'emañ ket lod anat eus an danevell, e komz Lehmann eus ar poizioù na gaver enno stumm kozh ebet a zo lec'hiet kent ar seizh poz diwezhañ, hag a gaver enno ur c'hoari gant ar ger "penn". Hervezomp ez eus anv er poizioù-se eus un azeul karv. Ma n'eus ket stummoù kozh enno, an dra-se a dalvez int bet adlakaet diwezhatoc'h en danevell, pezavare resis, kent an daouzekvet kantved<sup>477</sup>. N'eo ket dister e vije bet enlakaet poizioù diwar-benn kirvi goude ar poizioù all diwar-benn gwez Iwerzhon. Kavout a reer amañ c'hoazh kevredet tem ar gwez hag ar c'harv. Setu dezrann un den all :

« Then follows (§ 40) the longest and, in many respects, the most interesting poem in the story; it opens with a description of the trees of Ireland, after which Suibhne recounts his own sorrows and sufferings » (O'Keefe, 1913/1996, p. xi).

Ne ouezimp ket hiroc'h, nemet ez eo an dedennusañ barzhoneg en danevell hep na lavarfe deomp an embanner perak.

---

<sup>476</sup> 58-65

<sup>477</sup> Ne gavan abeg ebet da soñjal en un drevezadur pe ur falzadur. Zoken da vare O'Keefe ne oa ket anavezet studiaden Anisimov.

Darvezout ar ra ar barzhoneg hir-se dres a-gent marv ar c'h*Cailleach* pe Gwrac'h milin Loingseachan, da heul ur genstrivadeg lammat. Bez e welomp daou dra en degouezh-se, daou azeul o kevezañ an eil gant egile. Hini Dál Riada, *Cailleach* pe Gwrac'h, anezho Uladiz (Érainn pe Builg) trec'het gant ar re Uí Néill, o klask sevel ur rouantelezh all e reter Skos (Argyll). An dud-se a vije bet ganto azeul ar c'h*Cailleach* evel m'eo bet gwelet uheloc'h. D'an eil *Fer Benn*, lesanv Suibne, Cruthin anezhañ, gant un azeul karv evel hêrezh a-berzh annezidi geltiek gentañ Inizi Breizh-Veur<sup>478</sup>. Reiñ a reomp evel testeni eus hon doare gwelout ar pennad-mañ gant Miles Dillon :

« What does appear from various references cited by O’Rahilly is the presence in Ireland of at least three ethnic groups : Cruthin (or Cruithni) who were mainly in the north-east and plainly akin to the Picts of Scotland (also called Cruthin) ; Érainn, who were mainly in the south-west and in the south-east corner (Déisi) ; and Goídil (Cland Míled) who reigned over Tara, Cashel and Croghan and were the dominant people in the early historic period. Whether the Laigin were a distinct people or merely a Goidelic tribe is not clear to us » (Dillon, Chadwick, 1974, p. 5).

Cruthin eo Suibhne an tenergan evel roue Dál nAraidi, ha Conall Cernach eo henden ar meuriad :

« This is important when one remembers that Conall Cernach was regarded in Irish tradition as one of the three ancestors of the people of northeastern and central Ireland. The royal house of Dál nAraide traces its ancestry to this hero who was, moreover, the greatest head-hunter of the Irish heroes » (Ross, 1967, p.149).

*Cernach* a dalvez :

« 1 (a) *angular, having corners*, (b) *having an excrecence (?)* 2 *victorious, triumphant* » (Quin, 1998, p. 109).

---

<sup>478</sup> Breizh hag Iwerzhon

Gwelet hon eus dija pa vezemp o plediñ gant *kurala-* an Hittited, an darempred gant an iwerzhoneg *cern* "a ziskouez tal ar pevarzroadeged yaouank koeñvet gant kerniel pe banhezioù o teraouiñ". Adkavout a reomp amañ kenstroll yezh gallus an ejeneged gant ar c'harveged aet e-biou dezhañ ganeomp [S.o. 2.3 E *Karveg / Ejeneg*. Skeudenn 29, p. 294].

Ar berniad titouroù a ziskouez deomp emañ e-tal azeul ul loen karveg doare Cernunnos o paouez treiñ en un doue, pelloc'h un haroz, hervez ar mare ma taper krog en emdroadur :

« Several pieces of iconographic evidence for the cult of a horned god in Ireland come from the north, and the concentration of monuments of clear pagan import from the region stretching between Armagh and Lough Erne, suggests that this was a cult centre for pre-Christian Ireland where, amongst other deities, the horned god had his place. [...]. A second stone from northern Ireland, from Boa Island, Fermanagh, is further suggestive of a cult of horned gods in Ireland in the pre-Christian phase (p. 80) » (Ross, 1967, p. 146).

Daout hag-eñ e ranker lakaat eo bet Emain Macha Armagh lec'h meur an azeul-se? Etre Armagh ha Lough Erne<sup>479</sup> emañ lec'hiet an azeul-se :

« The iconography of Ireland, late and varied though much of it is, bears convincing witness to the presence in Ireland of a god-type similar to the Gaulish Cernunnos, whose cult was sufficiently deeply rooted and important to leave indelible traces in the later Christian tradition » (Ross, 1967, p. 148).

Bez' eus ivez delwenoù e Boa island (Fermanagh<sup>480</sup>)

---

<sup>479</sup> Ross, 1967, pp. 146, 148.

<sup>480</sup> Ibid.

## *Moling*

Bremañ, an disoc'h eus ar genstrivadeg er barzhoneg hir a zo anavezet : mervel a raio *Cailleach*, ha kristeniet e vo *Fer Benn*, da lavaret eo Suibne, e dibenn an tenergan. An dra-se a dalvez kement ha, e-giz pa lavarfe an dud: “lazhañ div c’had gant un tenn”:

« Thereafter, Suibhne rose out of his swoon and Moling taking him by the hand the two proceeded to the door of the church. When Suibhne placed his shoulders against the door-post he breathed a loud sigh and his spirit fled to Heaven, and he was buried honourably by Moling.

So far, some of the tales and adventures of Suibhne son of Colman Cuar, king of Dal Araidhe. *Finis* » (O’Keeffe, 1913/1996, p. 159).

Penaos ober evit kompren an div werzenn :

“That is not my lawful name,  
rather is it Fer benn”. (O’Keeffe, 1913, p. 81)

Un droidigezh eo ha n’hon eus diskoulm ebet met he heuliañ. Kavout a ra deomp neuze ez eo gwirion ar bomm, pezh a dalvez da lavarout e vije bet ijinet an dudenn all *Fer caille*<sup>481</sup> war batrom *Fer Benn* anv lezennel Suibne:

« Après avoir perdu la raison au cours d’un massacre dont il porte la responsabilité, Alladhán s’est perdu, affolé, dans les forêts du sud de la Calédonie. Complètement ensauvagé, il y est connu sous le nom de Fearchoille « l’Homme des Bois » et il vit dans la crainte perpétuelle d’être capturé par les gens du roi. Tout insensé qu’il soit, il n’en prédit pas moins lucidement et précisément les circonstances de sa mort » (Sterckx, 2000, p. 69).

---

<sup>481</sup> Ne lakaomp tro-bleg ebet er-maez, e kement n’edo Paganed zo tud foll diouzh sellboent Kristenien zo. Gwir eo ez eus tu da dreiñ foll pa vezer kirieg eus ul lazhadeg. Arabat disoñjal Colum Cille a zo bet kiriek ivez eus un emgann. Un doare soutilh all da stourm a-enep d’ an “Iliz Keltiek”. Met daoust hag-eñ n’edo ket foll ivez ar c’hallianed, diouzh sav-poent Kaezar ?

Da lavaret eo staget eo bet tudenn *Fer benn* ouzh un dudenn all ijinet penn-da-benn diwar ur Suibne gwirion marvet en emgann, en amboaz da imboudiñ un azeul rak-kristen warni, ha reiñ da grediñ d'al lennerien ez eus liv ar follentez gant an azeulioù rak-kristen. A-c'houdevezh ne oa ken da ober met ebarzhañ un dudenn foll all ha toull<sup>482</sup> evel *Fer caille* - nemet e vefe istorel Alladhán -, ur gwir lesanv ar wezh-mañ, kement ha reiñ muioc'h a bouez da ziboellegezh *Fer benn*, e-giz pa vije gwerzennoù ar pennad 40, daoust pegen brav e vijent kavet, alfo un den trelatet, evel Suibne e-pad an emgann. Anavezet eo en ober-se esparted ar gwerzennoù pagan, a vo lakaet da heul war anv Suibne, da lavaret eo den ebet. Met peogwir n'eus ket tu da anzavout an dra-se e oa ret kavout ur prest-anav evel Moling evit treiñ an dro-bleg en un dra wirheñvel ha c'hallus.

Er pennad-mañ e lenner pegen start eo erreet tonkad an daou zen, Moling ha Suibne. Evit skeudennaouiñ an darempred-se hon eus kavet en oberenn *The Birth of Moling and his life*, embannet gant Whitley Stokes<sup>483</sup>, ar pennad-mañ :

« At that time, then, the Yew of Ross' fell, and Molaisse distributed it to the saints of Ireland. So Moling went to ask him for some of the Yew of Ross. Of the tree Molaisse gave him the roofing of his oratory. Then Moling brought Gobbán the Wright to him to build his oratory » (Stokes, 1906, p. 281).

En tu-hont da roudoù un azeul gwez el linennoù kent, diaes eo chom hep gervel d'ar spered barzhoneg brudet Suibhne a-hervez meneget gant O'Keeffe, ma kaver ennañ ivez tudenn Gobbán :

« Of some importance too in this connexion is the curious riddling poem, ascribed to Suibhne Geilt, which exists in an Irish MS. in the monastery of St. Paul in Carinthia.

M 'airiuclán hi Túaim Inbir  
ni lántechdais bes sestu

---

<sup>482</sup> *Allaidh* a dalvez ivez da lavarout "gouez" ( Sterckx, 2000, p. 69).

<sup>483</sup> Titled *The birth and life of st. Moling*

cona retglannaih a réir  
cona gréin cona escu.

Gobban durigni insin  
conecstar duib astoir  
mu chridecan dia du nim  
is hé tugatoir rodtoig.

Tech inna fera flechod  
maigen na á.igder rindi  
soilsidir bid hi lugburt  
ose ceit udnucht nimbi »

(O'Keeffe, 1913/1996, p. xvii).

Gant J.F. Nagy e kaver an droidigezh-mañ :

« This ‘curious riddling poem’ (p. xvii), as O’Keeffe and others after him described it, does not mention Suihne but is ascribed to *Suibne Geilt*:

My little oratory in Tuaim Inbir,  
it is not a full house that is.  
with its stars last night,  
with its sun, with its moon.

Gobban hath built that  
that its story may be told to you —  
my heartlet, God from heaven,  
He is the thatcher who hath thatched it.

A house wherein wet rain pours not,  
a place wherein thou fearest not spear-points,  
bright as though in a garden  
and it without a fence around it.<sup>4</sup>

(trans. O’Keeffe, pp. xvii-xviii) »

(O’Keeffe, 1913/1996, p. 29)

Ne c’heller ket bezañ sklaeroc’h. Met anavezet eo ar c’hemmesk evel-just etre Moling ha Suibne, a c’hellfe bezañ mennet da ober d’al lenner krediñ er pezh a ve kontet dezhañ. Moling-eñ a zo un den gwirion, en defe gallet neuze sevel barzhonegoù :

« Although the general date of the tale as we have it belongs to the twelfth century, there are earlier references to Suibhne that confirm the belief that the story is earlier. The earliest of these is in the Book of Aicill which refers to his madness following the battle of Magh Rath and to the poems and stories that he left after him. O’ Keeffe believes the Book of Aicill to date from the ninth or tenth century (p. xvii) and the poem « M’airiuclán hi Tuaim Inbir » which has been ascribed to Suibhne is very likely older though the ascription may not be. St Moling’s association with Suibhne is briefly noted in the Life of Moling and there are poems ascribed to Moling and Suibhne recorded in the same MSS. Prof Kenneth Jackson assigns these poems to the eleventh century » (Lehmann, 1953-1954, pp. 289-290).

N’eus nemet an dud eeunek hag hegreidik a gred er pezh a vez kontet dezho. Na zisoñjomp ket en-dro sevenadurel ar mare : “he is no *fili* who does not *harmonize* and *synchronize* all the stories.” [S.o. p. 625].

Merzet e vez ivez ar c’hemmadur anv Taircell roet dezhañ gant "Collanach the priest<sup>484</sup>" e Molling (sic) evel m’eo bet kemmet Demne e Finn, e-giz pa vije ar c’hemmadur-anv-se ul lid-tremen eus sevenadur an hengoun dre gomz, da hini nevez ar skrid, koulz lavarout un asez badeziant a-berzh an iliz roman marteze :

« Well, my son, says the priest: What is the rage of wrath that is in thy face? »  
« Easy (to say); the evil Spectres attacked me and hunted me ». And Taircell related to him the whole story, how he had leapt the Luachair in his three leaps.

---

<sup>484</sup> Stokes, 1906, p. 267



« That is true », says the priest. « Thou art the prophesied one, whom the angel Victor foretold : thou wilt be (called) Molling of Luachair from the leaps that thou hast leapt (*ro-lingis*). » (Stokes, 1906, p. 273).

Er pennad-mañ e reer anaoudegezh gant un tem all, gwelet endeo e Buile Suibhne etre Cailleach ha Suibhne, hag a unvan an div dudenn, Moling ha Suibhne, al lammat an hini eo. Rak degouezh al lammoù a gaver ivez e Buhez Moling gant hini an tri lamm :

